

**UNIVERSITÉ EUROPEENNE DE BRETAGNE**  
**UNIVERSITÉ RENNES II**

Ecole Doctorale Humanités et Sciences de l'Homme  
Centre de Recherche Bretonne et Celtique (CRBC)  
FRE 3055

**ENSEIGNEMENT DU BRETON**  
**PAROLE, LIAISON et NORME**

Etude présentée dans le cadre  
de quatre règles de prononciation  
pour le breton des écoles

**Thèse de Doctorat en Celtique**

**Volume 1**

**Présentée par Jean-Claude LE RUYET**

Directeur de thèse : M. Francis FAVEREAU

Soutenue le 18 Décembre 2009

Jury :

M. Rhisiart HINCKS, Senior lecturer, University of Wales, Aberystwyth,  
(Rapporteur).

M. Pierre-Yves LAMBERT, Directeur de Recherche, EPHE, Sorbonne,  
(Rapporteur).

M. Hervé LE BIHAN, Professeur, Université de Rennes II.

M. Francis FAVEREAU, Professeur, Université de Rennes II.

**SKOL-VEUR EUROPEAN BREIZH**

**SKOL-VEUR ROAZON II**

Skol Doktorad Denelezhioù ha Gouiañsoù Mabden  
Kreizenn Glaskerezh Breizheg ha Kelteg (CRBC)  
FRE 3055

**KELENN AR BREZHONEG**  
**KOMZ, LIAMM ha NORM**  
prezantet e stern peder reolenn-sañ  
ewid brezhoneg ar skolioù

**Tezenn Doktorad Kelteg**

**Levrenn 1**

**Prezantet gant Jean-Claude LE RUYET**

Rener-tezenn : Francis FAVEREAU

Difennet d'an 18 a viz KERZU 2009

Juri :

Rhisiart HINCKS, Senior lecturer, University of Wales, Aberystwyth,  
(Dezrevellour).

Pierre-Yves LAMBERT, Rener-Klaskerezh, EPHE, Sorbonne, (Dezrevellour).

Hervé LE BIHAN, Kelenner, Skol-Veur Roazon II.

Francis FAVEREAU, Kelenner, Skol-Veur Roazon II.

KELENN AR BREZHONEG  
**KOMZ, LIAMM ha NORM**  
prezantet e stern peder reolenn-sanañ  
ewid brezhoneg ar skolioù

# TRUGAREKAAD

A-greiz kalon e trugarekan ar re o deus ma harpet ewid kas ar labour-mañ da benn, en ur mod bennag :

- Albert BOCHÉ, en deus ma stummet war ar brezhoneg bew ha sachet ma ewezh war reolennoù diazez sanadur ar yezh-se.
  - Francis FAVEREAU ewid boud roet o flasoù d'ar brezhonegoù-pobl hag asantet reniñ an dezenn-mañ.
  - Michel MERMET ewid boud ma c'halonekaet ha sikouret war an dachenn deknikel.
  - Thierry DHORNE ewid e harp é prientiñ an enklask (termeniñ niverad an atersidi).
  - Lukian KERGOAT ewid e alioù resiz a-zivoud urzh ar peder reolenn-diazez.
  - Guy MERCIER ewid e interest ewid sujed ma zezenn a-gaoz d'ar liamm etrezi ha sintezenn ar c'homz.
  - Inès BIENVENU ewid he labour ramzel war sevel taolennoù-jediñ ar statistikoù.
  - Jacques FISCHER-LOKOU, ewid e harp e labour gwiriekaad ar statistikoù.
  - Sarah BRICHET, he deus roet dorn din ewid sevel ar grafikoù.
  - Ivona ARZUR, ewid boud enrollet ar c'horpus KLT-W.
  - Melestradur Breizh an Deskadurezh-Stad, an Deskadurezh Katolik ; melestradur ar Skolioù Diwan, ewid boud roet din an aotre da gas ma enklask er skolioù.
  - Claudie MOTAIS, Renerez Stumdi, ha Soaz MARIA, karget ag ar "Stummadur uhel", ewid boud roet din an aotre da beurglokaad ma enklask gant ar vrazarded er stajoù savet gant o c'heveladur.
  - Tud Radio Bro Gwened : Andrea, Catherine, Cécile, Yaelle.
  - Ar renerion ha skoliataerion ar gwenodoù diwezh (Diwan, Publik ha Prevez Katolik) ewid boud ma degemeret en o skolioù ha klasoù.
  - Ar skolidi, skolajidi ha liseidi, hag iwe ar vrazarded, an oll é teskiñ brezhoneg pe bet desket ar brezhoneg gante, hag a vo brezhonegerion an dazont.
  - Brigitte HOUIVET, ma c'hompagnunez er vuhez-mañ, ewid he fasianted hag he harp e difenn ar brezhoneg, yezh he deus desket, ha hi Añjewadez.
  - Ma zud, ha n'o doa ket komprenet ataw ma c'hoant da zeskiñ brezhoneg, pa seblante ar yezh-se boud pe boud bet ur skoilh ewite war hent o buhez, da heul dismegañs vantruz ar skol e-keñver o yezh-vamm en o amzer.
  - Ma bugale, Maelenn, Soazig, Gwendal ha Morgan, ewid boud añduret momantoù diaez a-gaoz d'am studioù, hag a gomz brezhoneg gant o zad daoust d'an dra-se.
  - Maryline ha Graham FENNER, o deus kempennet ar pennad e saozneg.
  - Camille OLLIVIER, ewid an titouroù a beb sort.
  - François LEFEBVRE, ewid e harp teknikel.
- Heb ankouaad Yannig BARON, Jorj BELZ, Gilles GOYAT, Tugdual KALVEZ, Envel KERVOAS, Andrev KORNEG, Edith ha Pêr LAVANANT, Jean LE CLERC de la HERVERIE, Michel LE RUYET, Cyrille MAIRE, Pol POTARD, Lily RESSOUCHES, Jo RIO, Christophe ROPERS.

Trugarekaad a ran iwe an oll re 'm eus bet tro d'en em gavoud gante war hent ar brezhoneg, ur wezh bennag pe liezgwezh, ha nad in ket bet meneget c'hoazh. Roet o deus din un dra bennag ag ar yezh-se, pa ne vehe bet namaed ar blijadur da gomz. Mez ouzhpenn-se o doa roet, o *deus* roet d'ar brezhoneg ar pezh a gont : an amzer-vremañ.

## BERRADENN

FRANÇAIS : Le breton ne serait-il pas sous l'influence inconsciente du français, la langue toute puissante que l'on parle jusque dans le domaine "brittophone" depuis des siècles ? Comment procèdent les professeurs pour enseigner un breton fidèle à ses caractéristiques, à sa couleur à son "génie" quand ils ne savent pas toujours sur quelles particularités attirer l'attention de leurs élèves ? Quand ils n'ont peut-être pas eux-mêmes appris les bases d'une prononciation fidèle du breton ?

Dans mon étude en vue de la maîtrise j'avais posé le principe de quatre règles que l'on pouvait considérer à mon sens comme un corpus solide tant elles sont prégnantes dans la langue. Les trois premières concernent les mots en eux-mêmes : je les présenterai à nouveau dans le cadre de cette thèse. La quatrième en revanche entre en jeu en limite de mots. Ce seront les phénomènes de jonction qui seront étudiés ici, au vu de l'enquête que j'ai réalisée à leur sujet auprès des élèves du CE2 au Lycée pour dresser un état des lieux.

Que se passe-t-il à la jonction des mots ? Que se passe-t-il en breton ? Comment ces phénomènes sont réalisés à l'école ? Mon hypothèse de départ est simple : le breton des élèves est sous l'influence du français. Mais jusqu'à quel point ? Une analyse des raisons à cela est-elle envisageable ? Est-il possible de proposer une remédiation pédagogique aux professeurs, et laquelle, la définition d'une norme étant délicate en la matière, compte tenu de la disparité des situations sur le terrain ?

C'est à ces questions que cette thèse essaiera de répondre, tentant par là même de donner aux lecteurs, et d'abord aux lecteurs-professeurs, de quoi s'interroger sur les problèmes de prononciation et de réfléchir aux solutions envisageables leur permettant de concevoir les outils et la pédagogie adaptée, afin d'assurer la transmission d'une langue davantage fidèle à ses traits qu'à ceux de la langue française.

BREZHONEG : Daoust hag-eñv ne vehe ket ar brezhoneg dindan levezon diemskiant ar galleg, ar yezh ollc'halloudeg a vez komzet en-dro dezhañ a-c'houde kantvleadoù ? Penaoz e ra ar skoliataerion ewid keleñn ur brezhoneg feal d'e *ijin*, pe d'e *liw*, pa ne ouïont ket meur a wezh war besort poentoù sachañ ewezh o skolidi ? Pa n'o deus ket-int o-hunan desket a-feson reolennoù diazez sanadur\* (distagadur)<sup>1</sup> ar brezhoneg ?

Er studiadenn kaset da benn ewid ar vestroniezh em boa termenet peder reolenn a ya, da'm soñj, d'ober ur c'horpus diazez solud a-walc'h abalamour d'o statud olleg ha kentañ er yezh. An teir reolenn gentañ a c'hoari e korf ar gerioù, e diabarzh pe e fin anezhe : un adsell a vo graet doute e lodenn gentañ ar studiadenn-mañ. Ewid ar pezh a sell douzh ar bederved, e c'hoari honnañ e limit ar gerioù. Fenomenoù ar juntadur enta a vo studiet amañ, gant an enklask bet kaset er skolioù ag ar CE2 d'ar lise, ewid kenstadiñ ar sanadurioù a-vremañ en deskadurezh.

---

<sup>1</sup> Ober a rin gant ar ger **sanañ** *prononcer*, **sanadur**, *prononciation* en dezenn-mañ, resisoc'h eged ar ger **distagadur**, kentoc'h *articulation* (kAB) (< ERN-W **sañnein**).

Penaoz e c'hoari ar c'homz e juntadur daou c'her ? Penaoz e c'hoari e brezhoneg ? Penaoz e ya an traoù war ar poent-se er skol hiziv ? Kroget em eus er c'haskerezh-mañ gant un hipotezenn simpl : ema ar brezhoneg a-vremañ dindan levezon ar patrom galleg. Mez beteg pesort poent ? Ha tu a vehe d'analizañ ar perag ? Ha tu a vehe da roiñ ur patrom d'ar skolaerion, ha peheni, pa vez an norm ur meizad diaez da dermeniñ a-fed yezh hag a fed brezhoneg, ken liessort ema hennañ war e dachenn ?

Klasket e vo amañ respont d'an atersoù-se ha roiñ d'ar lennerion, da gentañ d'ar lennerion-kelennerion, peadra d'en em soñjal diwar-benn problem ar sanadur, dezhe da zivall ha da sevel benvegou efeduz ewid deskiñ d'o skolidi ur brezhoneg sanet herwez patrom ar brezhoneg, ha ked herwez patrom yezh an amezion c'hall.

ENGLISH : Is the Breton language, unconsciously, under the influence of the French language which has been used in Breton-speaking areas for hundreds of years ? How do the teachers pass on Breton in all its depth and breadth when they may not know which specific aspects to draw their pupils' attention to, and may not themselves have learnt to pronounce Breton correctly ?

In my studies for my master's degree I proposed four pronunciation rules which seemed to me to be fundamental because they occur so frequently in spoken Breton. The first three rules apply to the whole words : I will present each of these again in this thesis. The fourth, however, applies to the boundary syllables in words. That is the reason why I have chosen to study word liaisons, and I have based my findings on a survey carried out in schools, from CE2 (Year 4) classes to the end of secondary schooling (Year 13).

What happens with word boundaries ? What happens in Breton ? How do pupils voice liaisons in Breton today ? My initial hypothesis is simple : Breton speakers are under the influence of the French language, but to what extent ? Is it possible to analyse the reasons behind such a phenomenon ? Can we offer guidance to teachers when there are often several different valid pronunciation options ; and what kind of guidance ?

These are the questions I will try to answer in this thesis, and in doing so give to the readers, and especially those who are teachers, some thought-provoking material on the subject of pronunciation. I invite them to look for some possible solutions to encourage teachers to develop resources which will enable them to pass on a real Breton which is not influenced by the French language.

# PLAN AN DEZENN

## LEVRENN I

1. YEZH HA NORM.....p 19
  - 1.1. AR VARIADUR.....p 20
  - 1.2. AN NORM HAG AR YEZH.....p 42
  - 1.3. NATUR AR REOLENNOÙ.....p 68
  - 1.4. AR YEZH, UR BENVEG KUMUN.....p 79
  - 1.5. NORMAÑ EWID KELENN.....p 89
2. REOLENNOÙ DIAZEZ SANADUR AR GER.....p 113
  - 2.1. TERMENADUR : SILABENN HA GER.....p 114
  - 2.2. AN TAOL-MOUEZH.....p 120
  - 2.3. HIRDER AR VOGALENN DINDAN AN TAOL-MOUEZH.....p 170
  - 2.4. KALETADUR AR GENSONENN EN DIBENN ABSOLUT.....p 207

## LEVRENN II

3. AR LIAMMADURIOÙ.....p 268
  - 3.1. DIAZEOÙ MA STUDIADENN.....p 269
  - 3.2. TERMENADUR.....p 278
  - 3.3. AR JUNTADUR DIAVAEZ.....p 290
  - 3.4. AR JUNTADUR DIABARZH.....p 321
  - 3.5. KEÑVERIAÑ BREZHONEG-GALLEG.....p 351
4. AN ENKLASK HAG AR REZULTADOÙ.....p 366
  - 4.1. PRIENTIÑ AN ENKLASK.....p 366
  - 4.2. AR MOD-OBER GANT AN ATERSIDI.....p 376
  - 4.3. REZULTADOÙ : AR SKOLIDI.....p 384
  - 4.4. REZULTADOÙ : AR VRAZARDED.....p 416
  - 4.5. DESKAMANTOÙ AR C'HLASKEREZH.....p 441
  - 4.6. AR PEDER REOLENN : DIAZEZ AR C'HELENN.....p 475
5. KLASKEREZH A-ZIVOUD AN DOAREIOÙ-SKRIVAÑ.....p 485
  - 5.1. PALIOÙ AN ENKLASK.....p 486
  - 5.2. AOZAÑ AN ENKLASK.....p 487
  - 5.3. AR REZULTADOÙ.....p 490
  - 5.4. UR GOUNID OUZHPENN.....p 495
- KENGLOZAD.....p 501

# TAOLENN

BERRADENN .....	5
PLAN AN DEZENN .....	7
TAOLENN .....	8
PROBLEMATIK AN DEZENN .....	15
BERRADURIOÙ .....	16
DIGORADUR .....	17
1. YEZH HA NORM .....	19
1.1. AR VARIADUR .....	20
1.1.1. LIESSORTED AR YEZH .....	20
1.1.1.1. Liezlive ar fenomenoù .....	20
1.1.1.2. Lektoù ha kontinuum .....	21
1.1.1.3. Yezh kumun, yezh teknikel, yezh ofisiel .....	22
1.1.1.3.1. Ar yezh kumun : .....	22
1.1.1.3.2. Ar yezh teknikel pe c'houiañsel : .....	23
1.1.1.3.3. Ar yezh ofisiel : .....	23
1.1.1.4. Variadur : skwer ar galleg .....	23
1.1.1.4.1. Galleg ar Frañs : .....	23
1.1.1.4.2. E bed ar <i>Francophonie</i> : .....	24
1.1.1.5. Variadur : skwer ar brezhoneg .....	26
1.1.1.5.1. Ar brezhoneg ofisiel : .....	26
1.1.1.5.2. Ar brezhonegoù rannyezhel : .....	27
1.1.1.5.3. Etre an daou emañ an hanter : .....	30
1.1.1.6. Klozadur .....	32
1.1.2. BONNOÙ D'AR VARIADUR .....	32
1.1.2.1. An arall a gomz drol .....	32
1.1.2.2. Kehentiñ : bonnoù d'ar variadur .....	33
1.1.2.3. Kehentiñ e brezhoneg .....	34
1.1.2.4. Krennañ ha kompren .....	35
1.1.2.5. Gwask ar Wask .....	35
1.1.2.6. Klozadur .....	36
1.1.3. YEZH KOMZET, YEZH SKRIVET HA VARIADUR .....	37
1.1.3.1. Yezh komzet ha yezh skrivet .....	37
1.1.3.2. Fiksañ ar yezh .....	38
1.1.3.2.1. Ar yezh parfed : .....	38
1.1.3.2.2. Fiksañ memestra : .....	39
1.1.3.2.3. Ar variadur er skrid : .....	40
1.1.3.3. Diskartoù ha kengejoù .....	41
1.1.3.4. Klozadur .....	42
1.2. AN NORM HAG AR YEZH .....	42
1.2.1. AN NORMAÑ : UR GUDENN GOZH .....	42
1.2.1.1. Ar yezhadur normativel .....	42
1.2.1.2. Ar yezhouriezh deskrivuz .....	44
1.2.1.3. Distro d'ar reolennoù .....	45
1.2.1.4. CHOMSKY hag ar reolennoù .....	46
1.2.1.5. Ar pragmatik .....	48



1.2.2. GALLOUD HA KARANTEZ.....	49
1.2.2.1. Ar yezhoù, benvegoù-galloud.....	49
1.2.2.1.1. Yezh ha frankiz :.....	49
1.2.2.1.2. Yezh ha yezhoù : .....	50
1.2.2.1.3. War marc'had ar yezhoù :.....	51
1.2.2.1.4. Adkavoud ar yezh-orin :.....	51
1.2.2.2. Meizad an "uzaj" (an arver).....	52
1.2.2.2.1. An uzaj : un naoutur displann :.....	52
1.2.2.2.2. Frekañs an implij :.....	53
1.2.2.2.3. Ar Stad hag an arver :.....	54
1.2.2.2.4. An arver hag ar yezhourion : .....	55
1.2.2.3. Ar yezhoù "objets d'amour" .....	55
1.2.2.4. "Ijin" ar yezh.....	58
1.2.2.5. Yezhoù, teñzorioù da warantiñ .....	59
1.2.2.6. Klozadur .....	60
1.2.3. AN NORM HIZIW-AN-DEIZ .....	61
1.2.3.1. Patrom ha patromoù.....	61
1.2.3.2. Badumeg, standard ha norm .....	61
1.2.3.2.1. "Badumeg" : .....	61
1.2.3.2.2. Standard :.....	62
1.2.3.2.3. Norm :.....	63
1.2.3.3. Paridigezh ha disparidigezh.....	64
1.2.3.4. Kael analizañ A-M. HOUDEBINE .....	65
1.2.3.5. Klozadur .....	67
1.3. NATUR AR REOLENNOÙ .....	68
1.3.1. REOLENNOÙ GWELET EVEL FEDOÙ.....	68
1.3.1.1. Reolennoù e yezh ar sinoù.....	68
1.3.1.2. Meizad deskrivuz ha frekañs .....	69
1.3.1.3. Reolennoù ha sintezenn ar c'homz .....	70
1.3.2. AR PENNREOLENN A EMSKIANT .....	70
1.3.2.1. Ur reolenniñ diemskiant .....	70
1.3.2.2. Ar bennreolenn a emskiant .....	71
1.3.2.3. Ar reolenniñ : e natur ar lavar ?.....	72
1.3.3. KOMZ AG AR YEZH.....	73
1.3.3.1. Ar finalded hag ar foñksion .....	73
1.3.3.2. An oberiantiz meta-yezhoniel.....	74
1.3.3.3. Gramadegded, degemerusted.....	75
1.3.4. KAELOÙ AR YEZHOURION .....	76
1.3.4.1. Teorienn ha modell .....	76
1.3.4.2. Renkañ ar reolennoù .....	77
1.3.4.3. Korpusoù ha skwerioù .....	77
1.3.4.3.1. Dibabiñ : .....	77
1.3.4.3.2. An eneb-skwerioù :.....	78
1.3.4.3.3. Foñksion normativel ar skwerioù : .....	78
1.3.4.4. Klozadur .....	79
1.4. AR YEZH, UR BENVEG KUMUN .....	79
1.4.1. AN UNVANIÑ : UN DOBER EKONOMIKEL HA SOKIAL .....	80
1.4.2. AN UNVANIÑ : UR YOUL POLITIKEL.....	81

1.4.3. UR SKWER : FURMADUR HA NORMALIZADUR AR GALLEG .....	82
1.4.3.1. Kentañ mare ar Grenn-Amzer (Vved-11ved kvd) .....	82
1.4.3.2. Etre 1180 ha 1270 .....	83
1.4.3.3. A 1270 d'an Dispac'h .....	84
1.4.3.4. Ag an Dispac'h d'an amzer-vremañ .....	85
1.4.3.5. Galleg komzet, galleg skrivet .....	86
1.4.3.6. Klozadur .....	87
1.5. NORMAÑ EWID KELENN .....	89
1.5.1. PROBLEMATIK AR C'HELENN .....	89
1.5.1.1. Kelenn = simplaad .....	89
1.5.1.2. Nebeutaad ar stummoù bew .....	91
1.5.1.2.1. Ar c'heriaoueg : .....	91
1.5.1.2.2. Ar sanadurioù : .....	92
1.5.1.3. Reizhañ .....	92
1.5.1.4. Kroueñ gerioù .....	93
1.5.2. UN DOBER EWID AR YEZHOU BIHAN .....	94
1.5.3. AN EFED-BUBEN .....	95
1.5.3.1. Tezenn Vladimir BUBEN .....	95
1.5.3.2. Ar galleg ha skignadur ar skrid er boblañs .....	96
1.5.3.3. Mod-ober an efed-Buben .....	97
1.5.3.3.1. Ar fonografizm : .....	97
1.5.3.3.2. An efed-Buben war ar yezh : .....	98
1.5.3.3.3. Levezon ar skrid war ritm ar c'hemm : .....	98
1.5.3.4. Ar c'homzer hag an doare-skriv .....	99
1.5.3.4.1. An efed a-benn-kàer : .....	99
1.5.3.4.2. An efed paduz : .....	99
1.5.3.5. Limit ha talvoudegezh an efed-Buben .....	100
1.5.3.6. An efed-Buben hag an eil yezh .....	100
1.5.4. KEMPOUEZAÑ ? .....	101
1.5.4.1. Kudennoù ar re-normañ .....	101
1.5.4.2. Skol-veur hag unvaniñ .....	103
1.5.5. NORMALIZADUR AR BREZHONEG .....	104
1.5.5.1. Fabrikañ ur yezh vodern .....	104
1.5.5.2. Diwan hag ar brezhoneg er skol .....	105
1.5.5.3. Ar brezhoneg war ar marc'had en-dro .....	106
1.5.6. AR BREZHONEG, UR LAÑS PEDAGOGEL NEWEZ ? .....	107
1.5.6.1. Yezh war ar stern .....	107
1.5.6.2. Ur c'hempouez newez ? .....	107
1.5.6.3. Ur sanadur standard ? .....	109
1.6. KLOZADUR AR PENNAD 1 .....	111
2. REOLENNOÙ DIAZEZ SANADUR AR GER .....	113
2.1. TERMENADUR : SILABENN HA GER .....	114
2.1.1. AR SILABENN .....	115
2.1.1.1. Framm ar silabenn .....	115
2.1.1.2. Pad ar silabenn .....	116
2.1.2. AR GER .....	117
2.1.2.1. Un naoutur forc'helleg .....	117
2.1.2.2. Gerioù kevrenneg .....	118
2.1.2.3. Ar ger ritmeg .....	119

2.1.2.3.1. Ar group ritmeg : .....	119
2.1.2.3.2. Ar ger ritmeg : .....	119
2.2. AN TAOL-MOUEZH .....	120
2.2.1. PED TAOL-MOUEZH E BREZHONEG ? .....	121
2.2.1.1. Ur stadiad kempleg .....	121
2.2.1.1.1. Un taol-mouezh : .....	121
2.2.1.1.2. Daou daol-mouezh : .....	122
2.2.1.1.3. N'eo ket ken simpl an traoù : .....	122
2.2.1.2. Taol-mouezh ha kompren .....	125
2.2.2. AN TAOL-MOUEZH ER GERIOÙ .....	127
2.2.2.1. An taol-mouezh standard KLT .....	127
2.2.2.1.1. War ar silabenn eil-ziwezhañ : .....	127
2.2.2.1.2. An taol-mouezh er gerioù kevrenneg : .....	128
2.2.2.1.3. Kod skrivet ha sanadur : .....	129
2.2.2.1.4. An namaedennoù d'an taol-mouezh KLT : .....	130
2.2.2.2. An taol-mouezh gwenedeg .....	131
2.2.2.2.1. "Evel e galleg" : .....	131
2.2.2.2.2. War ar silabenn ziwezhañ : .....	132
2.2.2.2.3. Mez pas ataw nag e peb lec'h : .....	133
2.2.2.3. An taol-mouezh etre .....	135
2.2.2.3.1. Reolennoù arall : .....	135
2.2.2.3.2. Skwer I : brezhoneg Bothoa : .....	136
2.2.2.3.3. Skwer II : brezhoneg Lechiagad (Triagad) : .....	137
2.2.2.3.4. Skwer III : Brezhoneg Ar Gemene : .....	137
2.2.2.3.5. Skwer IV : Brezhoneg Malgenag : .....	138
2.2.2.4. Skwer IV : tro ar ger-mell amstrizh .....	139
2.2.2.4.1. Pêr TREPOS : .....	139
2.2.2.4.2. Nikolaz DAVALAN : .....	139
2.2.2.5. An taol-mouezh er gerioù é toned ag ar galleg .....	139
2.2.2.6. Pad ar vogalenn dindan an taol-mouezh .....	140
2.2.3. AN TAOL-MOUEZH ER FRAZENN .....	140
2.2.3.1. Ar gerioù taol-mouezhiet er frazenn .....	141
2.2.3.2. Taol-mouezhioù a-stok .....	142
2.2.3.3. An taol-mouezh en unanenn daol-mouezhiel .....	142
2.2.3.4. Ritm ar frazenn ha taol-mouezh .....	143
2.2.4. AN TAOL-MOUEZH : UR PREDER PEDAGOGEL ? .....	144
2.2.4.1. An erbedoù ofisiel .....	144
2.2.4.1.1. Er BOEN : .....	144
2.2.4.1.2. E testennoù Akademi Roazon : .....	145
2.2.4.2. Tri-ugent vloaz dale .....	146
2.2.4.3. Stad an traoù er skolioù .....	146
2.2.4.3.1. An enklask : .....	146
2.2.4.3.2. Ar rezultadoù : .....	147
2.2.4.3.3. Petra soñjal ? : .....	148
2.2.4.3.4. Keñveriañ Soubidigezh ha Parded : .....	149
2.2.5. KENNIG UN TAOL-MOUEZH STANDARD .....	150
2.2.5.1. Ur gudenn-gelenn .....	153
2.2.5.2. Pesort dibab ober ? .....	155
2.2.5.2.1. Simplaad : .....	155
2.2.5.2.2. Ha tu zo da choaz ? : .....	155

2.2.5.2.3. Petra gortoz ag un unvanidigezh kempouez :.....	156
2.2.5.3. Kennig : ar reolenn R1.....	156
2.2.5.3.1. An TM standard, pouez war ar silabenn eil-ziwezhañ (R2) :.....	156
2.2.5.3.2. An TM standard er gerioù a-unan :.....	157
2.2.5.3.3. An TM standard e unanennoù taol-mouezhiañ zo :.....	158
2.2.5.3.4. An TM standard er frazenn :.....	159
2.2.5.4. Ur skwer er sonennoù.....	161
2.2.5.4.1. Skwerioù er sonennoù hengounel :.....	161
2.2.5.4.2. Skwerioù tennet a <i>Kanomp hardizh</i> :.....	163
2.2.5.4.3. Ewid kanal oll war-un-dro :.....	164
2.2.5.5. Ur c'horpus frazennoù.....	165
2.2.5.5.1. An danvez :.....	165
2.2.5.5.2. Rol ar c'horpus :.....	166
2.2.5.5.3. Ar c'horpus (lec'h an TM skrivet tew) :.....	168
2.2.6. KLOZADUR.....	169
2.3. HIRDER AR VOGALENN DINDAN AN TM.....	170
2.3.1. AR SILABENN DAOL-MOUEZHJET, LEC'H AN HIRDER.....	170
2.3.1.1. Berrder ar segmantoù nann-taol-mouezhiet.....	170
2.3.1.2. Ur c'hempouez er silabenn.....	171
2.3.1.3. Heklew ar c'houiañs-se er geriadurioù.....	172
2.3.2. TRO AR YEZHADURIOÙ.....	172
2.3.2.1. An TM : lec'h an enebadur hirder/berrder.....	172
2.3.2.2. Hirder/berrder : un tres a-bouez e brezhoneg.....	173
2.3.2.2.1. Un tres bernuz :.....	173
2.3.2.2.2. Reoù minimal :.....	173
2.3.2.2.3. Steuziadur ar silabennoù didaol-mouezh :.....	174
2.3.2.3. Berrder ar vogalenn.....	174
2.3.2.3.1. Dirag ur vogalenn arall pe kensonennoù zo :.....	174
2.3.2.3.2. Dirag ur strollad kensonennoù :.....	174
2.3.2.4. Hirder ar vogalenn.....	176
2.3.2.4.1. Hirder ar vogalenn dirag kensonennoù zo :.....	176
2.3.2.4.2. Variadur an hirder :.....	176
2.3.2.4.3. Troioù amreizh :.....	176
2.3.3. AN HIRDER E GWENEDEG.....	177
2.3.3.1. Er gerioù unsilabenneg.....	177
2.3.3.2. Er gerioù liessilabenneg taol-mouezhiet evel e W.....	178
2.3.3.3. Er gerioù liessilabenneg taol-mouezhiet evel e KLT ...	178
2.3.4. MANKOÙ D'AR REOLENN.....	179
2.3.4.1. Mankoù er gerioù unsilabenneg.....	179
2.3.4.1.1. Dirag ur gensonenn simpl :.....	179
2.3.4.1.2. Dirag ur strollad-kensonennoù :.....	180
2.3.4.2. Mankoù er gerioù liessilabenneg.....	181
2.3.4.2.1. E gwenedeg :.....	181
2.3.4.2.2. Er yezh standard :.....	181
2.3.4.3. Remerkoù a-zivoud ar strolladoù-kensonennoù.....	182
2.3.4.4. Klozadur.....	183
2.3.5. AN ENKLASK ER SKOLIOÙ.....	183
2.3.5.1. Modalderioù an enklask.....	183

2.3.5.2. Rezultadoù ar c'hlaskerezh.....	185
2.3.5.2.1. Gerioù unsilabeneg (Fichenn <b>F1</b> ) :.....	185
2.3.5.2.2. Gerioù liessilabeneg (Fichenn <b>F2</b> ) :.....	186
2.3.5.2.3. Keñveriañ Soubidigezh ha Parded :.....	187
2.3.5.2.4. Keñveriañ krommenn an TM ha krommenn an hirder : .....	189
2.3.5.3. Klozadur .....	191
2.3.6. UN DIBAB PEDAGOGEL .....	191
2.3.6.1. Kelenn ar yezh evel m'ema ?.....	191
2.3.6.2. Kennig : ar reolenn R2.....	192
2.3.6.2.1. Hirder ar vogalenn dindan an taol-mouezh : .....	192
2.3.6.2.2. Soniadoù ispisial :.....	194
2.3.6.2.3. Kudenn an <b>-r/-rr</b> :.....	197
2.3.6.3. Namaedennoù .....	200
2.3.6.3.1. Nebeutaad o niver :.....	200
2.3.6.3.2. : Reolennoù ha soupted ar stern : skwerioù :.....	202
2.3.7. UN DACHENN BLAENNAET EWID AR C'HELENN ...	203
2.3.7.1. War hent ar plaennaad .....	203
2.3.7.2. Choazoù elbikaduz*.....	204
2.3.7.2.1. Gerioù zo : .....	204
2.3.7.2.2. Ar <b>z</b> leoneg :.....	204
2.3.7.2.3. : Ar <b>zh</b> :.....	204
2.3.7.3. Sklaerraad ar choazoù.....	205
2.3.7.4. Ur gudenn deknikel.....	206
2.3.8. KLOZADUR .....	206
2.4. KALETÂDUR AR GENSONENN EN DIBENN ABSOLUT ...	207
2.4.1. DIVOUEZHIAÑ AR GENSONENN EN DIBENN ABSOLUT .....	207
2.4.1.1. Termenadur.....	207
2.4.1.1.1. An neutralizadur en dibenn absolut : .....	207
2.4.1.1.2. Skwerioù diakroneg ha sinkroneg : .....	208
2.4.1.2. Ar fenomen e brezhoneg.....	209
2.4.1.2.1. Kensonenn-dibenn dous an anwioù-lec'h hag anwioù- tud : .....	209
2.4.1.2.2. Dibennoù kaled an anwioù-lec'h hag an anwioù-tud : .....	210
2.4.1.2.3. Skwerioù er yezh komzet : .....	210
2.4.1.2.4. Ar reolenn R3 : .....	211
2.4.1.3. R3 e mod da gomz skolidi ha brazarded a-vremañ.....	212
2.4.1.3.1. R3 en ur ger klewet a-liez :.....	212
2.4.1.3.2. R3 e gerioù boutin : .....	213
2.4.1.3.3. Levezon ar skrid ? :.....	214
2.4.2. AN DIVERADUR.....	215
2.4.2.1. Termenadur.....	215
2.4.2.2. Ar lostgerioù .....	216
2.4.2.2.1. Lostger ha lostger zo :.....	216
2.4.2.2.2. Roll ar lostgerioù neutr :.....	216
2.4.2.2.3. Dasparzh an dibennoù neutr : .....	218
2.4.2.2.4. An dibennoù-verb displeget : .....	219

2.4.2.2.5. Kensonennoù-dibenn dous : un dougañs e brezhoneg :	219
2.4.2.3. Remerkoù a-zivoud dibennoù zo	220
2.4.2.3.1. An dibennoù <b>-ad</b> hag <b>-at</b> :	220
2.4.2.3.2. An dibennoù <b>-en</b> hag <b>-enn</b> :	220
2.4.2.3.3. An dibennoù <b>-aj</b> hag <b>-ach</b> :	221
2.4.2.3.4. An dibennoù <b>-ted</b> ha <b>-ter</b> :	221
2.4.3. AR LOSTGERIOÙ KALETAUZ	222
2.4.3.1. Merk un -h- kozh war ar yezh	222
2.4.3.2. Roll ar lostgerioù kaletauz	223
2.4.3.2.1. Lostgerioù kaletauz verboù zo pe anvioù-gwan : ..	223
2.4.3.2.2. Dibennoù kaletauz an araogennoù displeget :	225
2.4.3.2.3. Lostger kaletauz <b>-(h)ad</b> ar muzulioù a hirder :	227
2.4.3.3. Remerkoù diwar-benn lostgerioù kaletauz zo	228
2.4.3.3.1. Ar lostger <b>-oni</b> :	228
2.4.3.3.2. Ar lostger <b>-eriz</b> :	228
2.4.3.3.3. Dibennoù-verb an doare-divizoud :	229
2.4.3.3.4. An dilostgerioù <b>-ted</b> ha <b>-ter</b> :	229
2.4.4. DASPARCH AR LOSTGERIOÙ	231
2.4.5. LEVEZON AR SANADUR WAR AR MOD DA SKRIV ..	232
2.4.5.1. Stad an traoù	232
2.4.5.1.1. Traoù luziet :	232
2.4.5.1.2. Un dibab diaez mez un diviz d'ober :	234
2.4.5.2. Diviz AR GONIDEG	235
2.4.5.3. Diviz ar Wenedourion	236
2.4.5.3.1. Yezhadur AR BAYON (1878) :	237
2.4.5.3.2. Intrudu an abad JEGOUZO :	239
2.4.5.3.3. Levezon LOTH :	239
2.4.5.4. War dachenn ar KLT	241
2.4.5.4.1. VALLEE hag Emgleo ar Skrivagnerien :	241
2.4.5.4.2. Yezhadur Louis Le Clerc :	242
2.4.5.5. GWALARN : Meurzh 1925	244
2.4.5.6. Emglew Roazon 1941 : ar Peurunvan	244
2.4.5.7. FALC'HUN hag ar Skolveurieg : 1953	246
2.4.5.8. MORVANNOU hag an Etrerannyezhel : 1975	246
2.4.5.9. Ar Peurunvan-41, mestr war an dachenn	248
2.4.6. DIGEMPOUELLDED DIVIZ 1901	249
2.4.6.1. Arguzenn ar yezhadur	249
2.4.6.2. Torridigezh ar liamm etre kod ha diskodañ	250
2.4.6.2.1. Ur reolenn a zegas diaezamantoù da lenn :	250
2.4.6.2.2. Ur rummad gerioù stank a-walc'h :	251
2.4.6.2.3. Hag ur reolenn amreolieg ! :	252
2.4.6.3. Farioù yezhouriezh	254
2.4.7. KLOZADUR	255
2.5. KLOZADUR AR PENNAD 2	256
RENABL AN TAOLENNOÙ	257
RENABL AR GRAFIKOÙ	257

## PROBLEMATIK AN DEZENN

Ewid kas ma labour da benn em eus savet ur rummad testoù : troioù-lavar, testennoù pe c'herioù da lenn. Dastumet em eus roennoù enrollet er skolioù, er skolajoù, er liseioù hag e-tal brazarded bet desket ar brezhoneg gante newez so. Ewid gelliñ roiñ klozadurioù fiziaduz em eus aterset, ouzhpenn an taolioù-añsi, 226 skoliad hag 28 brazard, ar pezh a ya d'ober ur c'horpus ag ouzhpenn 1704 fichennaoueg studiet.

Boud on bet en tri sistem-skol a glask derc'hel bew ar brezhoneg hiziw : Diwan, an Deskadurezh Stad hag an Deskadurezh Katolik. Divizet em boa muzuliañ stad an traoù war 5 live-skol : **ar CE2** (live 1), **ar CM2** (live 2), **ar 5ved** (live 3), **an 3ved** (live 4), **ar lise** (live 5). Lakaet em boa ar CE2 evel deraou an enklask, rag re ziasur e vez ar skolidi gant ar lenn er CE1 ewid studiañ gante penaoz e vez sevenet ar liammadurioù : ne vez ket liammet ar gerioù gante c'hoazh. Lakaet eo bet ar Lise evel fin ar c'hursus-skol (klasoù a gentañ ha klasoù-term). Ar live 6 (**B6**) a vo heni **ar vrazarded** aterset, ar live 7 (**B7**) heni ar vrazarded aterset un eil gwezh goude ur stummadur 3 miz gant Stumdi, pouezet (un tammig d'an nebeutañ) war afer ar liammadurioù ennañ.

Kement-se em eus graet goude boud remerket levezon ar galleg war sanadur ar brezhoneg a-hiziw er skolioù, ha goude boud en em aterset ewid gouied hirroc'h diwar-benn ar fenomen-se. Ewid-se em boa savet seizh hipotezenn :

1. N'anav ket ar skolidi sistem liammañ ar brezhoneg.
2. N'anav ket ar gelennerion ar sistem-se naket (ar pezh a zo kaoz an hipotezenn gentañ).
3. Ne vez ket gwelet gwelladenn ebed war an dachenn-se a-hed ar c'hursus-skol.
4. Anad eo levezon ar galleg war sanadur brezhoneg an deskerion a hiziw.
5. N'eo ket trawalc'h d'an deskerion kompren diwezhad reolennoù ar brezhoneg ewid chañch o sanadur (distagadur) : pouezusted -diremed ?- ar deskamant kentañ.
6. Liammet eo ar sanadur gant an doare da skriv.
7. Tu a zo da wellaad stad an traoù gant un didaktik adaz en deus manket beteg bremañ.

# BERRADURIOÙ

- **adv** : adverb.
- **ag** : anw-gwan.
- **agv** : anw-gwan-verb.
- **af** : anw-familh.
- **AH** : *Geriadur An Here*, 1995.
- **asterisk (steredennig)** : dirag ur ger e verk un direizhter (**goulenn \*da Yann**) ; goude e sinal ur ger a vo kavet e geriaoueg fin an dezenn (**dougañs\***).
- **b** : benel.
- **D** : skolioù Diwan (gwenodoù dre soubidigezh).
- **DESH** : *Geriadur* etimologel Albert DESHAYES, 2003.
- **ERN** : *Geriadur* Emile ERNAULT, ademb. 1984.
- **ERN-W** : *Geriadur* Emile ERNAULT, gwenedeg, ademb. 1983.
- **FAV** : *Geriadur* Francis FAVEREAU, 1992.
- **FAV.2** : *Geriadurig ar brezhoneg a-vremañ*, Francis FAVEREAU, 2005.
- **g** : gourel.
- **GARN** : *Geriadur* Garnier, *Dictionnaire breton*, dindan renerezh Per Jakez HELIAS, 1986.
- **GLG** : *Geriadur* G.L. GUILLOUX, 1984 (1.1), 1988 (1.2), 1992 (1.3).
- **H** : arouez a vo kavet war grafikoù zo, a verk an harzoù (liammadur ebed).
- **MH** : *Geriadur* Meriadeg HERRIEU, 1981.
- **HY** : *Geriadur* Hor Yezh, 1993, emb. 1996.
- **K** : skolioù katolik (gwenodoù dre barded).
- **LF** : *Geriadur* Léon FLEURIOT, *Dictionnaire des gloses en vieux-breton*, 1964.
- **MAR** : *Geriadur ar Matematikoù*, Jean MAROT, 2002.
- **NAL** : *Le nouvel atlas linguistique de la Basse-Bretagne*, vol.1-2, Brest, CRBC, UBO, 2001.
- **P** : skolioù publik (gwenodoù dre barded).
- **PB** : patrom brezhoneg (ar sevenidigezhioù fonologel a vez gortozet herwez ar yezhadurioù), enebet en dezenn douzh **PG**.
- **PB2** : eil patrom brezhoneg (ur mod arall degemeraduz e sevenidigezh ar liammadurioù).
- **PG** : patrom galleg (sevenidigezhioù fonologel a denn douzh mod-sanañ ar galleg), enebet en dezenn douzh **PB**.
- **PR** : *Geriadur* galleg *Le Petit Robert*, 1986.
- **RC** : *Geriadur* klotennoù Rohan-Chabot, Imbourc'h, 1982.
- **RH** : *Geriadur* Roparz HEMON, ademb. 1984.
- **STS** : *Geriadur* STEPHAN-SEITE, 1982.
- **TM** : taol-mouezh.
- **TR** : *Geriadur* A. TROUDE, 1876, ademb. 1979.
- **VAL** : *Geriadur* Fransez VALLEE, ademb. 1980.
- **vb** : verb.
- **YBAB**, *Yezhadur Bras ar brezhoneg*, Fransez KERVELLA, 1947, ademb. 1976.
- **?** : arouez a vo kavet war grafikoù zo, a verk ar rezultadoù diresiz.



## DIGORADUR

*“Ewid deskiñ sanañ e ranker tremen bloaziadoù ha bloaziadoù. Gant ar skiant e c’heller doned da benn e-korf pemp munut.”*

Eujen Ionesco, *Ar Gentel*.

Enskrivet eo ar labour-mañ diwar-benn ar liammadurioù en ur labour ledannoc’h a zo heni brezhoneg ar skol, da lâred eo ar brezhoneg a vez kelennet bremañ er skolioù diwyezheg kement hag e peb lec’h ma vez strivet ewid kelenn ar brezhoneg, pe er skol ofisiel (deskadurezh-Stad pe brevez, deuz ar skol-vamm betek ar skol-veur), pe er-maez ag an deskadurezh ofisiel e kement skol-noz ha staj a zo, digoust pe goustuz.

Brezhoneg ar skol e gwirionez, rag m’ema ar skol maen-bonn ar c’helenn yezhoù, daoust ma ne spir ket ar skol ewid lakaad ar yezh da vewañ : n’eo ket kelenn ar latin er skol en deus parraet douzh ar latin a zisparisañ a vuhez ar gevredigezh. Hag ewid kelenn e ranker simplaad ha frammañ, ha kavoud reolennoù ewid aesaad an akt pedagogel. Dre ma komzimp amañ a reolennoù, n’hellemp ket chomel heb en em soñjal un tammig diwar-benn meizad an norm hag an normalizañ, a zo dindan hon problematik. Setu perag e vo kroget gant ur brederiadenn a-zivoud an aters-se (chabistr I). En em soñjet em eus diwar-benn ar mod da reoliekaad, mar be tu, sanadur ar brezhoneg er skol, daoust pegen bruzunet e vez ar parlantoù, pe just a-walc’h a-gaoz da gement-se. Setu perag, goude boud labouret gant Albert BOCHÉ war ar gudenn-se, enni afer ar

gwenedeg, a chom ken diaez da enkorfiñ er brezhoneg ledan hiziw c'hoazh<sup>2</sup>, e oa bet termenet peder reolenn diazez. An teir reolenn gentañ (taol-mouezh, hirder ar vogalenn, divouezhiañ ar gensonenn en dibenn absolut) a sell douzh ar ger e-hunan, pa sell ar bederved (ar liammadurioù) douzh ar sintagm ha douzh ar yezh war-red. Prezantet e vo an teir reolenn gentañ-se er chabistr II.

Labour an dezenn-mañ nawazh zo bet gouestlet ez-resiz d'ar bederved reolenn, heni ar liammadurioù (chabistroù III, IV ha V). Diwar-benn an tem-se em eus graet enklaskoù er skolioù ewid muzuliañ an diskart a zo etre ar modelloù kavet er yezhadurioù ha realded ar sanadurioù war an dachenn, da lâred eo gant ar re a vez é teskiñ hag é komz ar brezhoneg a-hiziw. Gwelet e vo beteg pesort poent en deus aloubet ar galleg tachenn ar brezhoneg. En deirved lodenn e vo studiet fenomen ar liammadur (sandhi), pa brezanto ar bederved lodenn ma enklask hag ar pezh 'm eus dizoloet. Un dra a-bouez, d'am soñj, eo ar liamm a zo etre an doare-skriv hag ar sanadur : peadra d'en em soñjal diwar-benn ar poent kizidig-se. Diwar-benn ar poent-se just a-walc'h em eus lakaet ur Vved lodenn e-lec'h e vo keñveriet doareioù-skriv zo, kavet war an dachenn pe ged, ewid gouied pesort penn a ya gante er juntadurioù.

Spi am eus e vo kavet er labour-mañ peadra d'en em soñjal diwar-benn kelenn ar brezhoneg a-vremañ, na c'hell ket boud ken bruzunet ha liessort evel ma oa ewid respont douzh doberoù newez ar Vrezhonegerion, mez hag a zle nawazh, a zlehe d'an nebeutañ, gouarn ar pezh a zo dezhañ, dreist ar bruzunaj hag ar liessorted-se.

---

<sup>2</sup> Herwez remerk Envel KERVOAS, da zeiz soutenañs e zezenn diwar-benn an embannadurioù e brezhoneg ewid ar grennarded. Tezenn Roazon II, 2009.

# 1. YEZH HA NORM

*“Arabat lavaret “ober velo“. Brezhoneg fall eo. Er skol  
e vez kaozeet brezhoneg fall, a lavar Tadiğ deomp.  
Ret eo kaozeal brezhoneg mat. Eñ a ra. Tad-kozh ha Mamm-gozh a ra.  
Me a gav aesoc’h kaozeal e-giz er skol.”*

Mikael Madeg,  
*Bale n’eo ket dale...*,  
Embann Kêredol, 2005 : 42-43.

## Digoradur

Diaez eo distag ar yezh a-zoc’h an norm. Gwelet e vo amañ pegen luziet e vez an traoù, evel pa vehe an norm e natur ar yezh. Boud ema ar yezh, a lâre MARTINET, war-un-dro diazez ar soñjal (ur mod d’an den da urzhiañ e emskeudennaouiñ ag ar bed), hag iwe ur benveg-kehentiñ a bermet d’an dud en em gompren. Ha nawazh e kemm ar yezh a dermen da dermen, narenn hebkén a-gaoz ma vez kroueet gerioù newez ewid doberoù newez ar gevredigezh, mez iwe a-gaoz m’ema ar yezh ur rouedad frammoù a c’hoari kenetreze<sup>3</sup>. Gant an dud a c’houiañs hebkén marse ema ar choaz aze, pa c’hellont selloud douzh ar yezh gant daoulagad arsellerion neutr diouzh un tu, pe, diouzh an tu arall, gant re yezhadurourion normativuz, en ur mod bennag. Rag ewid peb komzer ataw, dre ma vez graet choazoù gantañ a-hed an akt a gomz, eh a ar choazoù-se o-hunan d’ober ar yezh, pa vezont lakaet ouzhpenn e ollad choazoù heniennel ar gevredigezh. Rag mar termener ar yezh evel ollad an implijoù heniennel, ar pezh a glot gant an arver\* olleg<sup>4</sup>, e kenlabour peb ezel ag ur boblañs bennag, kàer dezhañ ober, ewid sevel ar yezh-se, normet ar pezh anezhi *dre natur*.

---

<sup>3</sup> E ragskrid WALTER, 1998 : 11-12.

<sup>4</sup> « Norme : ce qui dans la parole, le discours, correspond à l’usage général », Le Petit Robert. « Des mots de chacun, une langue pour tous », titl un dastumad studiadennoù dindan renerezh F. ARGOD-DUTARD, 2007.

# 1.1. AR VARIADUR

## 1.1.1. LIESSORTED AR YEZH

### 1.1.1.1. Liezlive ar fenomenoù

Ar liezfurm, da lâred eo ar variadur\*, pe ar variezon\*, a gaver kentañ war an dachenn, setu ar pezh a zo heverk pa gomzer a yezh (LE DÛ, 2005). Kempleg-kenañ eo ar yezh, ha n'achuer ket klask sevel teoriënnoù d'hec'h analizañ ha d'he c'hompren. Setu perag en doa klasket SAUSSURE lakaad urzh en doareioù-komz a beb sort a glewe. Setu perag iwe e komzer ag ar yezh, a zo reduziñ ar liessort hag ar liezfurm d'un dra sterniet-mat, un draezenn aez da vaneñ, ur fiksiion evel ma vo gwelet pelloc'h. Ewid Denise FRANÇOIS (LUCCI, 1983) en em gav an den dirag ur liested ken braz ma ne oui ket mui penaoz urzhiañ ar arverioù a vez gwelet na da besort faktor pe luziatez faktorioù daveañ.

Ewid ar braz e vez liammet variadur ar yezh (geriaoueg, sintaks, prozodiezh) gant orin geografeg pe sokial ar gomzerion, mez iwe, ewid an heveleb den, gant e live yezh, ar pezh a vir just a-walc'h douzh termeniñ ur vodell siellet a fonografiezh ar galleg. Setu ar pezh a soñje LUCCI (1996), a roe da skwer gerioù, meur a sanadur dezhe, evel *inexact*, *août*... Kement-arall a vez kavet e brezhoneg iwe.

Mar kaver meur a sanadur d'ur ger e kaver iwe meur a c'her ewid termeniñ ar memez tra. Kavoud a ra da H. WALTER (1998 : 361-362) e vehe ur fed olleg gweled meur a c'her prezantiñ un heveleb sinifiañs, ewid ar yezhoù brasstrewet d'an nebeutañ. Mez meur a yezh vihan e c'heller kavoud enne an heveleb tres iwe, evel e brezhoneg ar gerioù a glot gant ar galleg *nuage* : **duadenn, gwennadenn, kaniblenn, kaouledenn, kastell, koabrenn, koc'henn, kogheol, kog-neñv, kogusenn, koumoulenn, lizenn, malkenn, reolenn, skaoutrenn, steñvienn, tapon-glaw, teñvaladenn**<sup>5</sup>... Klask a ra peb

---

<sup>5</sup> E geriadur FAV e vez klasket tostaad ar gerioù disañval-se douzh termenadurioù resisoc'h é klotañ gant o anvioù skiantel : *cumulus*, *cumulo-nimbus*, *cirrus* ha kement a zo.

rannyezh boud klok en he domani, ar pezh a espleg ar paot a c'herioù a c'heller renabliñ pa vez anw a sevel ur genyezh.

Mez diouzh an tu arall n'heller ket muioc'h sterniañ resiz ar rannyezhoù. Trawalc'h eo teurel ur sell war an atlasoù-yezh ewid gweled pegen displann e vez o harzoù, pa strewont o c'herioù pell a-zoc'h o zachad naturel (*statut mouvant des régionalismes*, WALTER).

### 1.1.1.2. Lektoù ha kontinuum

Ewid derc'hel kont ag ar variadur e oa bet termenet ar yezh c'hoazh evel ur *c'hontinuum* gant STEWART (1965) ha gant BICKERTON (1973), ur c'hontinuum bonnet gant ur variezon uhel (an heni cheuc'h), an *akrolekt*, hag unan izel : ar *bazilekt* (heni an dud n'int ket bet er skol, pe nebeud-tre). Etre an daou vonn-se, variezonoù arall graet *mezolekt* anezhe.

N'eo ket ar c'hontinuum namaed ollad ar variadennoù testeniekaet en ur gumuniezh-yezh bennag. Da beb pik ag ar c'hontinuum e c'heller termeniñ ur *lekt* bennag, diwar ar variantennoù dalc'het. Ar variantennoù-se zo an elfennoù a gemm a lekt da lekt. Rekiz eo renabliñ oll ar variantennoù-se (da skwer, e kreoleg an Antilhez eh a ar c'houblad *vous/tu* da *vou/ou*, ar pezh a vez klewet meur a wezh [w] pe [R] eno).

Diaez eo merañ an oll lektoù a c'hell boud : re stank ar variantennoù. Gant-se e vehe ar re-se degouezhioù dibosubl da ziskrivañ. Mez ewid aesaad o studi eh eus bet savet ur benveg adaz : an *emplegadur* (*implication*). Ne vehe ket mui a variadurioù libr. E-kontrel e vehe renet ar variadurioù-se gant reolennoù a vehe rol ar yezhourion o lakaad war-wel. Rankoud a ra ar reolennoù-se boud gouest da lâred, ewid ur c'homzer bennag en ur stadiad\* bennag, ar chañs da seveniñ ar reolenn *x* pe *y*, da lâred eo ar chañs da glewed gantañ unan pe heben a variadennoù ar variantenn-mañ-variantenn (*l'une ou l'autre des variantes de telle variable*). Rag lekt ebed ne vez komzet direol : urzh ha lojik zo e peb unan anezhe. Gant reolennoù an emplegañ ne vez ket mui ken dargouezheg\* ar lektoù : bezañs un tres bennag e parlant ur c'homzer bennag a empleg\* e vo

kavet un tres arall (pe ouzhpenn), a aparchant douzh an tresoù bet renablet ewid ar lekt-se (CARAYOL & CHAUDENSON, 1978 : 182).

Ouzhpenn an termoù-se e komzer iwe a *d/topolekt* (ur parlant staget douzh un tiriad bennag), *idiolekt* (lekt un den e-hunan), *subjilekt* (lekt subjektivel, da skwer ar yezh implijet en ur buhezskrid, LE GUERN, 1983), *sokiolekt* (lekt ur gevrenn bennag ag ar gevredigezh)...

Mard eo bet termenet ar yezh evel ur sistem sistemoù (GUILLAUME), e c'heller he gweled iwe, da heul analiz STEWART ha BICKERTON, evel ur *liezurzhaz iz-sistemoù* (*polyhiérarchie de sous-systèmes*, LE GUERN, 1983), ar pezh a enkorf da vad ar variadur enni.

Etre an akrolekt hag ar bazilekt eh eus tresoù-yezh kumun stank-meurbed. Ne c'hoari ar variadur namaed war un niver limitet a boentoù : setu perag e chom gwir an etrekompren er c'hontinuom (*ibidem*)<sup>6</sup>. E diabarzh ar c'hontinuom ne vez ket treuzet an harzoù e gwirionez, rag n'eus ket ag ar re-mañ en un doare spiz, resiz, dre ma kemm ar yezh a-nebeudigoù. N'eus namaed e-tal bevenn ar c'hontinuom, pa ne vez ket mui sur an etrekompren, e c'heller lâred e kuitaer ur yezh ewid touchañ d'un arall (YAGUELLO, 1988 : 34).

### **1.1.1.3. Yezh kumun, yezh teknikel, yezh ofisiel**

Liez a-walc'h e vez doareet ar yezh herwez ur skeul arall. Komzet e vez neuze ag ar yezh gumun, ag ar yezh teknikel pe c'houiañsel, ha deuz ar yezh ofisiel.

#### **1.1.1.3.1. Ar yezh kumun :**

Ema ar yezh kumun teskad an elfennoù a aparchant douzh izili ar gumuniezh. A-vuzul ma kresk ar gumuniezh e koll ar yezh tresoù zo a oa re strolladoù bihan. Meur a live a c'hell boud kavet er yezh kumun, ha ne gomz ket an den er memez mod gant e vamm eged gant e gelenner, er labour pe dirag ur mikro.

---

<sup>6</sup> Diwar ar lec'had <http://creoles.free.fr/cours/continuu.htm> (2008).

#### 1.1.1.3.2. Ar yezh teknikel pe c'houiañsel :

Klask a ra ar yezh-se boud krak ha resiz. Muioc'h-mui eh a war-du ar bed a-bezh, gant gerioù “etrevroadel” pa ne vez ket gerioù saozneg (*net, radar, web...*). *Geriadur ar Matematikoù* (MAROT) a ro da weled astenn lod ag ar gerioù-se : gresianeg *dikhotomia*, saozneg *dichotomy*, alamaneg *Dichotomie*, ruseg *dichotomija*, brezhoneg *dikotomiezh*, galleg *dichotomie* (p. 95).

#### 1.1.1.3.3. Ar yezh ofisiel :

Yezh ar Stad eo honnañ, a vez kavet e mod-kehentiñ ar Stad gant e gargidi pe gant ar sitoianed (yezh ar lezennoù, ar paperioù ofisiel...). Ur yezh resiz a glask boud iwe. Klewet pe lennet e vez ar yezh ofisiel er skol, er lez-varn, er mediaoù.

Eveljust ne vez ket estren ar liveioù-yezh-se unan diouzh egile, namaed eh eus a unan d'an arall tresoù a gemm hag a vez santet, er mod da sanañ pe e choaz ar gerioù.

### **1.1.1.4. Variadur : skwer ar galleg**

#### 1.1.1.4.1. Galleg ar Frañs :

Goude meur a gantvlead ema daet ar galleg da vound ur yezh unvan a-walc'h ha normet-kreñv. Ne sinifi ket e vehe daet da vound digemmaduz. Kemm a ra galleg ar Frañs dindan meur a levezon, heni ar saozneg da skwer, gant donedigezh gerioù stankoc'h-stank (*fast-food, booster, cool, jogging, Halloween, blog, zapper, subprimes, ...*), mez iwe heni re yaouank ar bannlewioù a aloub ar vro a-bezh dre an internet (*keur, keuf, vénèr, meuf, rebeu...*) ha heni ar broioù pell (Afrika, Antilhez, Kebek) e-lec'h ma vez komzet galleg gant gerioù, troioù-lavar pe tonioù-mouezh dishañval.

Mez war-un-dro e ta parlantoù-rannvro da zoned war-wel iwe, dre ar lizheradur<sup>7</sup> pe filmoù<sup>8</sup>. Diaez gouied pesort dazont a vo da stummoù lec'hel zo, dreist-oll mard int degemeret gant korn-bro Pariz, a c'hell o strewañ larkoc'h. Rag n'eo ket Pariz evel ar peurrest ag ar vro : dre mand eo ar megapol-se ur lec'h meskañ ar poblañsoù, e resev an newentioù daet a-vaez-vro hag e skign ar yezh vev war ar stern (WALTER, 1998).

Ewid komz a dachenn ledan ar galleg dre ar bed, e Frañs hag er broioù arall e-lec'h m'en deus tapet ur statud ofisiel pe damofisiel, e raer gant ar ger *francophonie*. E bed ar *Francophonie* eh a ar galleg war-raog e meur a lec'h war an douar, daoust d'e dachad bihannaad a-nebeudigoù<sup>9</sup>, ha kemm a ra buan an traoù iwe war dachenn ar standardoù hag an normoù. A-c'houde ar bloazioù 1960 e vez remerket un talañ douzh beli galleg ar Frañs, lakaet da batrom er c'holonioù, hag un talañ iwe douzh ar politikerezhioù-yezh normuz ha gwaskuz henn souten. Klasket en deus Ambroise QUEFFELEC<sup>10</sup> studial stad ar galleg dre ar bed, ha stud'ial penaoz e vez levezonet ha newesaet gant metoù yezhel peb bro.

#### 1.1.1.4.2. E bed ar *Francophonie* :

Tud ar Vro Bourlet a ra goap douzh re An Orient dre ma rizont pa gomzont brezhoneg<sup>11</sup>. Gant tud kreizteiz bro-Frañs e vez disprizet galleg an Nord a-gaoz d'e "*accent pointu*" ha meulet e-kontrel mod da gomz ar Sud<sup>12</sup>. Er Beljik eh eus ur ger ewid doareñ mod Pariz da gomz : *fransquillonner*, ar pezh a vez

---

<sup>7</sup> Aimé CEZAIRE, Edouard GLISSANT...

<sup>8</sup> Sd. berzh graet gant « *Bienvenue chez les Chtis* » , Dany BOON, 2008... hag ar gerioù evel *wassingue, biloute...* é redeg un tammig dre ar vro e 2008, ar pezh na sinifi ket e vint dalc'het pell a-walc'h ha war un dachenn ledan a-walc'h ewid boud enskrivet er yezh kumun.

<sup>9</sup> A vloaz da vloaz e vez klewet komz ag ur vro bennag a zilez ar galleg evel yezh-Stad pe yezh ofisiel. Newez so c'hoazh ar Rwanda, prest da zilezel ar galleg ha da gemer ez-ofisiel ar saozneg er skolioù, ewid tostaad douzh Kumuniezh Afrika ar Reter, enni dreist-oll broioù a ra gant ar saozneg... pe ewid abegoù politikel : troiñ kein douzh ar Frañs goude an harp he doa roet d'ar galloud hutu en doa aozet lazhadeg an d/Tutsied er bloaz 1994. Mez ewid abegoù ekonomikel iwe, é voud ma kenwerzh ar Rwanda gant broioù e-lec'h ma ren ar saozneg : Kenya, Ouganda, Afrika ar Sud, *Le Courrier International*, N° 938, 23-29 Oct. 2008 : 36.

<sup>10</sup> *Variété et variation : du français monocentré à la francophonie pluricentrique*, 2007 : 53-66, (In *Le français, des mots de chacun, une langue pour tous*, 2007).

<sup>11</sup> Herwez Camille Ollivier. (vb **riziñ**, *grasseyer*, RH, FAV, mez iwe **rezo**, **rezal**, AB).

<sup>12</sup> Red eo kompren ar ger « *accent* » amañ evel un diskart e-keñver un norm. Boud e vehe an norm enta ar yezh diaksant (YAGUELLO, 1988 : 39).



graet *raffiner* anezhañ e romanheg Bro-Suis. En Afrik e lâr an dud *chokobiter* (Burkina Fasso), *gorger...* Graet e vez eno ar “*gros français*“ ag ar galleg ofisiel, hag implij « *des gros mots* » zo komz gant gerioù pompaduz ar “galleg braz“. Yezh hag identelezh a vez tost enta, nepell enta diouzh an drapell.

E Bro-Gebek e term an dud etre daou c’hoant kontrol : diouzh un tu, na zispartiañ o yezh a-zoc’h ar galleg etrevroadel (*Conseil de la Langue française*, 1990 : 51) ha diouzh an tu arall, difenn ar pezh a zo d’ar gumuniezh kebekad ha d’he c’hoant da vestroniañ he normoù dezhi, eneb d’an alienadur sevenadurel anglo-saoz ha gall. “Je parle plus mieux français que vous et j’té merde“ a lâre ar fentour Alain Stanké.

*Nann* da c’halleg ar Frañs, *ya* d’ar galleg standard a Vro-Gebek, setu aze problematik an “amenajisted“. Mez diaez eo dezhe lakaad o sav-boent da vound mestr, lod arall é rebech dezhe o c’hebekeg mar n’eo ket o c’hebekach (“*norme québécoisante*“). Daou c’heriadur newez embannet n’o deus ket kavet ar sav esperet gant o oberourion. Petra eo ar standard-kebekeg-se : ur stumm diazezet war variantenn cheuc’h ar vro. Da lâred eo ar yezh komzet gant tud ur live-skol mad a-walc’h dezhe, ur statud ekonomikel ha sokial uhel a-walc’h iwe, ha levezonet gante emdroâdur kumuniezh Bro-Gebek<sup>13</sup>.

A-hend-arall e vez kavet fenomenoù a beb sort hiziw-an-deiz e galleg trevadennoù kozh ar Republik, en Afrik da skwer. Mar kaver broioù a rac’hwiz o istrogoù, o diferañs (Madagaskar da skwer, daoust d’ar galleg eno boud dishañval iwe) e kaver stankoc’h c’hoazh broioù arall e-lec’h ma vez gwelet ar galleg en e valigañsoù brasañ, mesket ar c’hodoù ennañ. Hag er broioù-se an dud é c’houlenn muioc’h-mui ar galleg lec’hel-se evel lod ag o henvad\*. Edan tapoud ur mod emren ema an topolektoù-se, anwioù difer roet dezhe : ***frangarabeg*** (*francarabe*) er Maghreb, ***franlofeg*** (*franlof*) er Senegal, ***fransangôeg*** (*fransango*) e Republik Kreiz-Afrika, ha zokén, gant ar re yaouank, ur meskaj teir yezh pe ouzhpenn evel ***kamfranglez*** (*camfranglais*) ar C’hameroun, pe ***nouchieg*** (*nouchi*) Aod-an-Olifant.

---

<sup>13</sup> BOULANGER, 1989 : 69 (meneget gant QUEFFELEC).

Dishañval emaint oll diouzh ar galleg akademik dre ar c’heriaoueg, dre ar fonetik ha dre ar brozodiezh : diwar an daou dres diwezhañ-mañ e vez remerket da gentañ an diferañs etre ar yezhoù (aksant “kanuz“, “mannous“, “ponner“ ; disklipe “buan pe buannoc’h“).

Meur a zoare-ober a ya da sevel an topolektoù. Lod a denn douzh levezon ar substrad : merk o sistem fonetik (*minit* e-lec’h *minute* ; *sévé* ewid *cheveux*) ; framm-silabenn ar yezh-vro (aliez KBKB<sup>14</sup>, ar pezh a zegas sanadurioù evel [t̥r̥ɛ̃] ewid *train* ; [dil̥ɛ̃t̥ɛ̃] ewid *directeur*) ; implij gerioù lec’hel. Tennañ a ra lod arall douzh choazoù emskianteg pe diemskiant : emprestoù (gerioù ur yezh arall, da skwer re ar C’horan : *hadj*, *hadith*) ; hibridadur, a zo lakaad ur ragger d’un diazez ag ar substrad, pe ar c’hontrel, da skwer e galleg ar C’hongo-Brazzaville : *boukouter bogodiñ*<sup>15</sup> (< deuz ar c’h/kitubaeg *kubukuta braeiñ*, *chakañ*, *chaokad*) ; kalkoù (lakaad ur framm a yezh ar vro da dalvezoud e galleg : *avoir la bouche trop longue* “na c’helloud derc’hel d’ur sekred”) ; kemm rumm-yezhadur (*caillou* > ag *stard*, *diaez* ; *cadeau* > adv *digoust* ; *moyen* > vb *gelloud* : *je moyen pas n’hellan ket*)...

### 1.1.1.5. Variadur : skwer ar brezhoneg

#### 1.1.1.5.1. Ar brezhoneg ofisiel :

A-c’houde Ar GONIDEG dreist-oll eh eus bet klask, ha klask zo c’hoazh, lakaad urzh er yezh gant ar re o deus c’hoant ma tahe ar brezhoneg da vout ur yezh vodern, ha zokén ur yezh-Stad<sup>16</sup>. Pa gomzer ag ar brezhoneg hiziv e komzer ag ar brezhoneg unvan, dre heg pe dre gàer, a-gaoz da stad truezeg ar yezh, digresket spontuz niver ar gomzerion e-korf an XXved kvd (BROUDIG, 2009), mez iwe a-gaoz da ezommoù ur yezh vodern, kelennet er skolioù, implijet er c’hazetennoù, er levroù, er geriadurioù ha kement hentenn-deskiñ a zo.

<sup>14</sup> KB : kensonenn-bogalenn (galleg : CV).

<sup>15</sup> Kuriuz eo memestra gweled pegen tost ema ar brezhoneg douzh ar ger-se : *bogodiñ* / *boukouter* (*détourner de l’argent*), memez ster fasibl enne o daou !

<sup>16</sup> Kavoud a rae da R. HEMON en doa roet emglew 1941 d’ar brezhoneg « ar gwir da vezañ yezh-Stad hiviziken » (2008 : 57).

Ewid c'hoazh n'eus ket e Breizh ag un Akademi a-sort gant heni Bro-C'hall. Mez goulenn zo a gement-se<sup>17</sup>. Ur remedenn a vehe douzh an “dreistfonnuster” a c'herioù a gaver bremañ war tachennoù an teknologiezhoù newez. Perzh an Akademi-se a vehe “koulz kinnig gerioù nevez d'ur bobl (*sic*) ha skarzhañ gerioù diezhomm” ha “kendeuziñ an holl c'heriadurioù en un teuliad nemetañ.”

War hent ur c'hreizennañ eh a an traoù a-fed yezh dija. Daet eo Ofis ar Brezhoneg da vout savadur ofisiel ar panellaouiñ e brezhoneg, hag ur servij kroueiñ gerioù zo ennañ (Termbret). Daet eo TES da vout ti-embann ofisiel an dafarog pedagogel, a gas e broduadioù digoust d'ar skolioù.

Komprenabl eo e ranker lakaad urzh er yezh, ewid narenn hum gavoud dirag ur re a dermoù ha dirag termoù diresiz-kenañ war ar memez tro. Ne vez ket aez ataw ober an dibab etre ar furmoù liessort. Sklaer eo pal geriadur An Here :

“Pal ar geriadur eo taolenniñ elfennoù diazez ar genyezh ha n'eo ket reiñ da c'houzout petra eo doareoù ar brezhoneg a vez komzet e lec'h pe lec'h. Setu perak ez eus dibabet sevel ur reizhiad distagadurioù a c'hellfe talvezout evit ar genyezh ha reiñ un distagadur hepken evit pep pennger.” (p. IX).

#### 1.1.1.5.2. Ar brezhonegoù rannyezhel :

Pa faote da R. HEMON sevel ur yezh bew ha modern war-un-dro, en doa savet ur geriadur, ennañ gerioù-pobl ha meur a c'her savet en e raog, da skwer gant VALLEE, MORDIERN, mez dilezet e oa bet paot mat a c'herioù gouarnet gant ar bobl.

Nawazh e chom bew ha buhezeg parlantoù lec'hel c'hoazh. Douzh ar re nebeud a c'herioù hag a vodoù da gomz dalc'het er yezh unvan e oa ur reizhañ (ur pinvidikaad !) d'ober, a c'heller gweled e geriadur hag e yezhadur Francis FAVEREAU. Kentañ-rac'h e oa pal FAVEREAU renabliñ ollad ar gerioù, ar sanadurioù hag an troioù-lavar é redeg e brezhoneg, evel ma skrive-eñv e prezantadenn e c'heriadur e 1992 :

---

<sup>17</sup> « Un akademiezh a-benn stourm a-enep ar brezhoneg hidroponek », Patrick ANNE, in kazetenn YA, Mezheven 2009, Nn 212 : 10.

“Mon propos était alors de tenter de cerner ce breton vivant et populaire, de faire le tour autant que possible d’un parler riche et réputé insaisissable (...) : photographier un usage authentique, qu’on savait déjà menacé à moyen terme, d’autant que je ne trouvais guère cette veine et cette verve dans les dictionnaires, manuels et autres ouvrages existants, héritiers certes d’une longue tradition lexicographique bretonne (...) mais où la norme écrite l’emportait par trop sur l’usage, au point que les néo-bretonnants manquaient de tout repère, et que l’on arrive parfois à ignorer, voire à nier, cet usage spontané qui est et doit rester la règle de tout linguiste, fut-il breton.” (p. V).

Diskoueziñ a ra splann ar labour-se pegen liessort ema ar brezhoneg komzet (ha skrivet) hiziw c’hoazh, rag war dachenn glok ar brezhoneg en doa an oberour kaset e enklask, gwenedeg enkontet, ar pezh a oa bet santet gant ar Wenedourion evel un araokadenn a-bouez braz : erfin e oa dalc’het kont ag o rannyezh war ar memez live hag ar re arall, erfin e oa ar gwenedeg lodeg er genyezh da vad !

Ewid ar sanadurioù, anad eo n’int ket unvan. Setu amañ un alberzh ag o liested dre un nebeud skwerioù<sup>18</sup> :

- **laezh** : [’leas], [’le:s], [’lè:s], [lɛ:x], [leax], [ljax], [laeh].
- **tj**: [ti:], [tij], [təj], [tej], heb kontiñ ar liester : [tiɛs], [tie], [tiɛt], [tijər], [tjɪr], [tjɪr], [tjɪr], [təjɪr].
- **ki** : [ ki:], [ci:], [cəj].
- **dour** : [du:r], [dawr], [do:r], [dowr], [dø:r], [døʀ].
- **petra** : [pe’tra], [pətra], [’petra], [petə], [petər], [pta], [’pera], [peə], [pəra], [pra]...
- **skuizh** : [skçi:s], [cçi:x], [skçi:s], [skçij], [scçi:s], [ççi:s], [cçi], [ççx].
- **sadorn** : [’sacɔrn], [sadɔrn], [’sadrn], [’sadurn], [’zadɔrn].
- **skañvañ**<sup>19</sup> : [skã:nã], [skã:vã], [skã:ãŋ], [skã:wã], [skãwã], [skã:a], [skãhõ], [skãũ], [skãɑ], [skã:və], [skã:wə], [skãwə], [skã:ø<sup>e</sup>], [skã’hõ], [skãfa], [skã’hãõ], [skã:hyã]...

<sup>18</sup> Geriadur FAVEREAU, 1992.

<sup>19</sup> Sanadurioù ar ger-mañ tennet ag an *Nouvel atlas linguistique de la Basse-Bretagne*, Jean LE DÚ, 2001.

Gelloud a ra ar sanadurioù boud pell a-walc'h ag ar furmoù skrivet, evel ar skwerioù-mañ bet renablet gant LE PIPEC (2007) : e Malgenag e klewer [ly:] ar pezh a vez skrivet **ludu**, [ligu'rɛn] ar ger **logodenn**, [rɪrɛk] ewid **redeg** ; e Meukon [prɛ:r] hag e Kolpo [pə'ɛr] ar ger **peder** ; e Bredewi [krwɛ'y:r] ar ger **krouadur** ; en Ardewenn [gu'ri:] ar ger **goude**.

Mez estroc'h eged er mod da sanañ ar gerioù e kaver liessorted. Variadur a gaver gant ar verboù : gant an anw-verb (**beza/bezañ/beañ/boud**) ; gant merkoù an anw-verb (**maga, magañ, magiñ, mago**) ; morfemoù an displegadur (**me a brenfe, me a brenhe, me a brenahe/a brenehe** ; diazez-verb **deu-/da-, pa zeuio, pa zay**) ; gant ar rannig emober pe kenemober **en em /hum...**

Er mod da lâred iwe (en troioù-lavar), e kaver variadur, ar pezh a c'hell degas pinvidigezh er yezh : **en ur ober ur miz / e-korf ur miz ; me zo 'vont da brenañ bara / eh an da brenañ bara ; pebezh ti braz ! / brased un ti ! / na braz an ti !...**

Pa vehe da choaz, ha daw e vez choaz meur a wezh, ha pa vehe ewid kelenn hebkén, e rankehe ar reizhour-yezh<sup>20</sup> derc'hel kont ag ar brezhoneg en e bezh, ha n'eo ket ag ur parlant hebkén. Ewid ar re o fal labourad war ar yezh a-bezh, dre zegemer war ar memez rank an oll rannyezhoù, ne c'heller ket rac'hwiz ur furm bennag e-sigur ma ta a rannyezh-mañ-rannyezh, ha pa vehe ag ar gwenedeg. Soñj VALLEE hennezh, herwez Roparz HEMON ("Ar sturienn roet gantañ, kutuilh e peb rannyezh ar pep gwellañ d'ober ar genyezh, a zo talvoudus, zoken pa n'en em glever ket atav resis a-zivout ar pezh a anver 'ar pep gwellañ' ", 2008 : 55). Aze just a-walc'h marse tachenn ar labour-urzhiañ a chom d'ober er yezh c'hoazh.

---

<sup>20</sup> Ober a rae R. HEMON un diforzh etre *yezhour* ha *reizhour-yezh* : an heni kentañ a labour ewid « mad ar skiant » hag an eil ewid « mad ar vro » (2008 : 49).

### 1.1.1.5.3. Etre an daou ema an hanter :

Gwelet e vez diouzhtu problematik ar yezh, ha peurged heni ar brezhoneg, etre ar renabliñ hag ar simplaad. Daoust hag-eñv e vehe tu da gavoud ur sav-boent distag a-walc'h ewid studial ar brezhoneg en e bezh, ewid sevel ur genyezh diwar dezougad\* peb parlant ? Chomel a ra c'hoazh hent d'ober, evel ma vo diskouezet amañ gant skwerioù renablet gant Albert BOCHÉ.

Lakaad **degemer mad** war ar panneloù-hent pe dorioù ar stalioù-kenwerzh dindan ar galleg *bienvenue*, e-sigur ma vez lâret en un tu bennag, n'eo ket 'maed degas strafuilh er yezh, pa sinifi **degemer accueillir (burew-degemer bureau d'accueil)**. **Ober un degemer mad** zo *faire un bon accueil* enta. **Hetiñ an donemad** douzh an tu arall zo rik *souhaiter la bienvenue*. Evel-se e kompren Roperzh Ar MASON ar yezh en e romant *Evit ket ha netra* :

“Du-hont ec'h anavan trolinenn voas mamm-gozh Rozenn, prim atav, ur jestr a **zonemat** ganti. An **degemer** a resevan ma lakahe da grediñ eh on Jili e-unan, mab an ti.” (Ademb. Mouladurioù Hor Yezh, 1986 : 64).

Un dra vad e vehe iwe lakaad splannder er yezh e-keñver sinifiañs morfemoù zo. Da skwer ne vez ket graet atav an diforc'h etre ar lostgerioù **-eg** hag **-el**. Ober a rae R. HEMON un diforc'h splann etre **pobleg** *populeux* ha **poblel** *populaire*, ar lostger **-eg** (**-ek** e Peurunvan-41) é verkañ “*ar pezh a zo*” (**ur gêr bobleg** = “*ur gêr e-lec'h ma vez stank ar bobl*” ; **ur segaleg** = “*ur lec'h ma kaver segal, ur parkad segal*” ; **skouarneg** = “*unan a zo braz e ziwskouarn*”, pe “*unan a vez remerket dre e ziwskouarn*”... Benel eo ar lostger-se. Mez ouzhpenn-se, (gourel neuze), e verk **-eg** anw ar yezhoù : **brezhoneg**, **galleg**, **ruseg**... **-El** e-kontrel a sinifi “relativel da”. **Poblel** enta a sinifi “*relativel d'ar bobl, populaire*. Nawazh e kaver **poblek** \**populaire* e geriadur AH hag e geriadur FAV.2. Tu zo d'en em c'houlenn petra a sinifi “**Skol poblek Pabu**”<sup>21</sup>, enta : “*Ecole populaire de Pabu*” pe “*Ecole populeuse de Pabu*” ?

---

<sup>21</sup> War ar panell dirag ar skol. Pelloc'h e kaver variadur iwe war ar mod da anwioù ar skolioù : **Skol pobleg labour douar** (Gwengamp) ; **Skol Vamm Publik Kerlohe** (Morbihan) ; **Skol Lik Kentañ Derez** (Rostrenen) ; **Skol Vamm Publik** (Rostrenen) ; **Skol Publik** (Brec'h)...

Ne oa ket bet R. HEMON beteg roiñ ur ster resis ha klokauz da **-aduz** ha da **-uz**. Gant an heni kentañ e klot ar ster a c'houdañvusted, par da **-abl**, pa glot **-uz**<sup>22</sup> gant ur ster oberiant : **komprenaduz (komprenabl)** “*aez da voud komprenet*”, *compréhensible* ; **komprenuz**, “a c'hell kompren”, *compréhensif*. E-tal un diforc'h spiz etre an daou furm (**azaouezaduz vénérable** ≠ **azaouezuz respectueux** ; **degemeraduz acceptable** ≠ **degemeruz accueillant, hospitalier**) e kaver e RH koubladoù digempouell : **digreduz** \**incroyable* (e-lec'h **digredaduz**) ; **diabeguz irréprochable** ha war-un-dro... *qui ne reproche pas* ! Hag ewid *inutilisable* e ro HEMON an daou furm : **diimplijaduz**, \***diimplijuz**. Aez eo sklaerraad an dachenn koulskoude : **diabegaduz irréprochable**, **diabeguz qui ne reproche pas** ; **diimplijaduz inutilisable**, [**diimplijuz qui n'utilise pas**, ger diimplij kredabl !]. Da heul ne vehe ket diaez sevel koubladoù frouezhuz : **difennuz prohibitif** ≠ **difennaduz défendable** ; **disec'huz desséchant (un awel disec'huz)** ≠ **disec'haduz inséchant, qu'on ne peut sécher ou assécher (gwernegi disec'haduz)** ; **maguz nutritif** ≠ **magaduz que l'on peut nourrir (loened zo n'int ket magaduz pa vezont dalc'het)**... Korvo en deus tennet MAROT ag an diforc'h-se ewid sevel *Geriadur ar Matematikou* (**diouverus déficient**, **dislavarus contradictoire**, **enklosus inclusif** mez **diorroadus développable**, **dislavaradus indicible**, **enskrivadus inscriptible**).

Liessorted ha variadur a c'hell klotañ iwe gant troioù direizh e-keñver ar yezhadur. Da skwer en dro **doned da benn a (euz)**, *venir à bout de*. Un dro dishañval a red er yezh, strewetoc'h ha kavet peurvuiañ er skrid<sup>23</sup> : **doned a-benn da (euz)**. War a seblant e ta an diw dro ag ar memez heni. Unan a ziskouez boud direizh e-keñver ar sinifiañs c'hortozet : sinifioud a ra **a-benn bremañ, diouzhtu**. **Doned a-benn da** zo neuze **doned diouzhtu da (ober udb)** : **dait a-benn da roiñ dorn din !** E-kontrel e vehe kempouell lâred **daet on da benn ag ur labour diaez**.

<sup>22</sup> Herwez Pierre AR GOW e klote an dibenn **-us** gant an dibennoù galleg **-ant (dantus, mordant)** hag **-eux (velimus, venimeux)**. Karget e oa bet a zaou ster arall (« passibilité : **-able, -ible, -ile** » ha « relation : **-el, -al, -aire** ») gant AR GONIDEC : *inévitabile* > **didrec'huz, spirituel** > **speredus**, ar pezh na oa ket degemeraduz ewid AR GOW, « à cause des équivoques sans nombre qui en résulteraient... » *Lettre à Taldir sur l'unification des dialectes*, In Revue Morbihannaise, Avril 1906, p. 159.

<sup>23</sup> Da skwer e geriadur An Here (1995 : 323).

Mar chom labour d'ober enta ewid c'hwennaad ar brezhoneg e chom iwe ur labour arall, a zo ar simplaad, etre re ha re nebeud. Mar kaver troioù mad er brezhoneg bew e c'hell tro-mañ-tro boud reizh pe reishoc'h e-keñver ijin ar brezhoneg. Un dibab d'ober enta, riskluz mez rekiz.

#### **1.1.1.6. Klozadur**

Diaez e vez derc'hel en ur stern reud ar yezhoù bew, pa vez graet *teskadoù displann* anezhe gant YAGUELLO (“ensembles flous”) ha pa vez komzet ag o *berwañs* (“turbulences”) gant HAGEGE. Ur c'hempouez diasur ataw a seblant boud neuze etre dougañsoù ar stabilded ha re an emdroâdur. E-lec'h un norm hebkén e soñjer kentoc'h, hiziw-an-deiz, eh eus meur a norm dishañval. N'eo ket red d'ur yezh bennag kaoud un norm hebkén ewid en em strewiñ er bed, evel e saozneg a-c'houde kant vloaz : n'eus ket norm etrevroadel ebed ag ar saozneg a vehe staget douzh ur variantenn bennag anezhañ<sup>24</sup>. Tra ma chomo komprenaduz ar variantennoù kenetreze e vo savet an normoù war an dachenn-se a gomprenidigezh, diwar barnadennoù-talvezoud war ar fesonoù da gomz. Herwez FÓNAGY (2006 : 69) e tegouezh ar c'hemmoù er yezh evel pebeiladurioù. Neuze, kentizh ma vez roet ur foñksion bennag dezhe pe kentizh ma vezont lec'hiet e yezh ar gevredigezh, e taont d'o zro da dapoud statud an normalded ([les altérations] “rentrent dans l'ordre”), enkorfet m'emañ er sistem-komz, heb d'an dud en em rentiñ kont a chañchamant ar sistem.

### **1.1.2. BONNOÙ D'AR VARIADUR**

#### **1.1.2.1. An arall a gomz drol**

Mar behe komzet en ur mod hebkén, ur mod *kaoulet*, gant an oll, ne vehe ket komzet ag an “aksant”, da lâred eo ag ar liwoù-yezh. Ha gant *an arall* ema an aksant. Tud nord ar Frañs a gomz ag “aksant ar c'hreisteiz“, tud ar c'hreisteiz

---

<sup>24</sup> MARTIN (1996 : p. 5) : « Il n'y a pas de norme internationale de l'anglais collant à une variété spécifique, pourtant l'anglais est la langue la plus utilisée internationalement. »



ag “aksant pinteg“ (*pointu*) tud Pariz evel ma hon eus lâret uhelloc’h (WALTER).

Splann eo da v/MARTIN e varn an den yezh e nesañ gant siloù e voazamantoù yezhel, gant e *empentel-yezh\** (HOUDEBINE “*imaginaire linguistique*”). Ha diaez eo dezhañ lenn ar realded gant gerioù nad int ket e re. Ewid ober degemer mad d’ar variadur e rank an den talañ douzh daou dra : pouez digontroll e yezh-vamm diouzh un tu hag e zougañs\* da dreuzkas e vod da weled an traoù, treuzkas emplegad\* (*implicite*) pe treuzkas esplegad\* (*explicite*) war yezh egile diouzh an tu arall : an arall ataw a gomz drol.

A-bell braz e ta ar variadur er yezhoù. Kan ar c’hog a c’hell roiñ un tañwa a gement-se dimp. Mar sellomp douzh an Douar evel ur gêriadenn c’hlobel (*Global village*, Marshall McLuhan) e c’hellomp soñjal e kan ar c’heger beb mitin e peb kornad ag ar gêriadenn-se, gant ar memez notennoù hag ar memez « gerioù » (daoust d’ar gouennoù keger boud stank a-walc’h er bed). Ar pezh a seblant boud gwir en Itali (*chichirichi* [kikiriki]) hag e Bro-Spagn (*quiquiriqui* [kikiriki]), mez nad eo ket kén e japaneg (*kokekokko*), e hollandeg (*kukeleku*), e galleg (*cocorico*). E brezhoneg e kan ar c’hog e meur a feson : **kokogog**, **kotogog**, **kog-kogog** (FAV), **kotogotogog** (HY), heb kontiñ **kokelikelo** ar sonenn<sup>25</sup>. Aze, daoust d’an dishañvalderioù, e santomp ur gerentiez e etre an treuzskrivadurioù hag ar sonioù a glaskont deskrivañ. Ne vez ket ataw evel-se.

### 1.1.2.2. Kehentiñ : bonnoù d’ar variadur

N’eo ket an etrekompren un norm, mez merk ur c’hontinuom-yezh<sup>26</sup>. Ar yezh-se e c’heller he gweled evel ur c’hod, ar pezh a c’houlenn un akord etre izili ar gevredigezh, a-sort gant an akord a liamm an dud war-gerzh pe war-roul, hag a zo *ar c’hod-hent* (LEON, 1996). Er c’hod-se e c’hellit kaoud un tamm frankiz, mez pa vez ruz ar gouloù e ranker arrest ! Setu ewid ar ger *quai* e c’heller

---

<sup>25</sup> Herwez ar sonenn « **A-benn dilun eh in d’ar foar hag e prenin ur c’hog-ge !** ». Ewid ma mamm-gozh e kane ar c’hog “**kokoriko !**“, hag ar yar, goude boud dozwet un ui “**kot-kot-kot kodâg !**“ [ko’dɑ:k].

<sup>26</sup> « L’intercompréhension n’est pas une norme mais la délimitation d’un continuum linguistique. » (MARTIN, 1996 : 6).

sanañ [ke] pe [kɛ], mez an heni a lâro [ki] ne vo ket komprenet. Ewid *yacht* e c'heller sanañ [jɔt] pe [jak] (PR) : *un yacht à quai* : [œjɔtake], [œjakake], mez an heni a laro [jat], [jakt] pe [jɔxt] ne vo ket komprenet naket.

Tu zo da weled tud é klask achap ag ar c'hontinuom a-ratozh kàer. Gant ar re yaouank just a-walc'h, a ijin yezhoù dezhe (verlaneg) ewid bonniñ o bed ha lakaad disparti etre ar bed-se ha heni ar vrazarded. E meur a vro e vez notet fenomenoù evel-se. Da skwer e komz QUEFFELEC a yezhoù remziadel (*langues générationnelles*). En Afrik ne vez ket komprenet ar yezhoù-se gant izili arall ar gumuniezh, dreist-oll pa vez kemmet ar morfosintaks ha pa vez farset ar c'heriaoueg gant gerioù dianav, pe pa vez bet roet d'ar gerioù ur ster newez na vez ket intentet gant ar c'hallegerion arall.

Kement-arall a vez remerket bremañ er skolioù Diwan, e-lec'h ma kemm ar brezhoneg war tachenoù a beb sort (fonologiezh, morfosintaks, geriaoueg).

### 1.1.2.3. Kehentiñ e brezhoneg

Mard eo bet dilezet ar brezhoneg dindan gwask ar Stad gall mez iwe a youl vad gant ar Vretoned o-hunan (LE BESCO, 1997), tu zo da lâred o deus ar radio ha dreist-oll ar skinwel c'hwitet o zaol a-c'houde ar bloazioù 1970, rag ne oa ket komprenet yezh ar mediaoù gant ar vrezhonegerion a oa stank a-walc'h c'hoazh e eil hanterenn an XXved kantvlead. Er-maez a zoerioù ar meteo e oa digomprenaduz an abadennoù-tele (LE PIPEC, 2008 : 52), ar pezh a rae dezhe da santoud ne dalveze ket o yezh kalz a dra : ur sort taol-ar-marw roet d'ar brezhoneg goude degvleadoù diskar !

Herwez MORVANNOU (1980 : 576, T2), n'eus ket tu d'an dud en em gompren heb un tammig « ozmoz rannyezhel », ha da hetin ma vo kendeuzet ar perzhioù difer en ur *c'hwatuor a rannyezhoù*<sup>27</sup>. Bonnet e vez an etrekompren strizh a-walc'h ha red eo da beb unan strivañ ewid chomel e tachenn ar pezh a vez degemeraduz. Menegañ a rae MORVANNOU ur c'horonal e retred na oa

---

<sup>27</sup> Tro-lavar bet implijet gant Tugdual KALVEZ en e bennad « *Pour un quatuor des dialectes* » (Skol Vreizh, 1974, Nn 36 : 9-10).

ket bet komprenet gant e chelaouer a-gaoz ma'n doa sanet « *lavarette* » (evel e galleg *savonnette*) e-lec'h [la'va :rət] (enebadur etre **-ed** (dibenn anw-verb [-et]) hag **-et** (dibenn anw-gwan-verb [-ət]). Ewid AR MERSER n'en em gompren ket Gwenedourion ha KLTerion a-gaoz d'an taol-mouezh dishañval (1963, § 472). Anavet em eus ur c'helenner na ouie ket e oa un diforc'h d'ober etre **mor** ha **moc'h** ! Ha piw a ra hiziw un diforc'h sklaer etre **levrioù** (sanet liez [lerjow], [lerju]), **lerc'hioù** ha **lec'hioù**, a c'heller tostaad nawazh douzh an diforc'h a zo en alamaneg etre *Kirsche* ['kirʃə] (**kerez**), *Kirche* ['kirçə] (**iliz**) ha *Küche* ['kyçə] (**kegin**) ?

#### 1.1.2.4. Krennañ ha kompren

Techet e vez an dud da chom heb sanañ oll fonemoù ar yezh : tu ekonomikel ar gomz pemdezieg (CARTON, 1974). Evel-se e klewer [izdi] ewid *il se dit*, [tedzavny] ewid *tu es déjà venu*. E brezhoneg e kaver krennadurioù hañval : [martimonet] ewid \***ema red dezhi moned**<sup>28</sup> ; [deskos] ewid **an dra-se zo kaoz** ; [blamber] ewid **abalamour da betra** ; [ʃtɛl] pe [iʃtɛl] ewid **just evel**<sup>29</sup>. Anad eo e c'hell sanadurioù krennet a-sort-se boud ur skoilh d'an etrekompren, pa ne vez ket ur mod boutin da sanañ.

#### 1.1.2.5. Gwask ar Wask

Boud eh eus ur moull da beb tra, a lâre ma zad-kozh. Ur faktor arall a c'hoari ewid bonnañ ar variadur : heni an deknografiezh, da lâred eo teskad ar benvegoù a ya da roiñ fetisted d'ar yezh : ar moullañ, ha da heul ar levroù ha peb tra moulllet.

“La technographie ne s'accommode pas facilement d'une approche variationniste. Or la réduction qu'elle véhicule, presque naturellement, entraîne une volonté de normalisation.” (SWIGGER, 1997 : 66).

<sup>28</sup> Frazenn direizh, skwer ur fall-implij ar verb **ema**, na c'hell ket boud kavet e penn kentañ ar frazenn namaed heuliet gant ar stumm oc'h ober pe gant ur lec'h. Gwell e vehe amañ : "**red eo dezhi moned**".

<sup>29</sup> Ar skwer-mañ roet gant A. BOCHÉ.

Da gentañ, ha gant an oll sistemoù-skriv emdroet, e vez treuzskrivet *linennegezh* (*linéarité*) ar c’homz, herwez AUROUX (1994 : 159) hag a verk kement-mañ, dre venegañ LEROI-GOURHAN : kent ijinerezh ar skritur e implije an den e zorn ewid fabrikañ hag e fas ewid komz ; goude e taas an traoù da gempouezañ (p. 166). Un dra abstred eo ar skritur, hag ur bern tresoù ag ar c’homz a vez kollet ennañ : ha mouezh Yann pe heni Paol a vo, an diston, ar pouez-mouezh, ar ritm, an tawoù, ar brozodiezh... Paot mat ag ar variezon a vez kollet gant ar skrid. Ne sinifi ket n’hell ket ar moullañ gouarn tresoù a vehe bet gwell skarzhañ, beteg ober (LEON, sd. § 1.4.3.3., p. 84).

Donedigezh ar moullañ eo a lakaas an traoù da fichal e mod da skriv ar galleg ha yezhoù arall Europa, ha n’eo ket dister e istoer ar brezhoneg, zokén en istoer kentaouel. Doberoù Diwan a-fed levroù-keleñn, dreist-oll pa oa bet anw a gas an traoù war dachenn ar skolaj, a lakaas an dud da ziviz un doare-skriv hebkén da fin ar bloazioù 1970 (KERGOAT).

#### **1.1.2.6. Klozadur**

Dirag emdroâdur prim-spontuz stad ar brezhoneg hiziv, e klasko ar yezh sur awalc’h, mar gell treuzvewañ ha padoud, kavoud ur c’hempouez newez, goude ar prantad diasur-braz omp é vewañ a-c’houde degadoù. Hiziv-an-deiz nawazh e vez strewet ledan ar vrezhonegerion en ur lijor frank-mat (Breizh ha kalz pelloc’h, gouest da gehentiñ dre Internet). Kredabl e kendeuzo ar rannyezhoù hengounel, fenomen war ar stern er skolioù dija, hag er mediaoù. Mar yay war nebeutaad an diforc’hioù etre ar rannyezhoù eh eus da empentiñ e chomo kumuniezhoù strewet amañ-ahont, kustum d’en em gavoud : n’eo ket sur enta e tispariso ar modoù dishañval da gomz brezhoneg. Tra ma vo etrekompren ne vo ket aze ur c’hall ewid ar yezh.

### 1.1.3. YEZH KOMZET, YEZH SKRIVET HA VARIADUR

#### 1.1.3.1. Yezh komzet ha yezh skrivet

Er yezh, fasibl evel pa vez anw a gri ar c'hog, e kaver ar c'homz da gentañ tres, rag ne za ar skrid namaed goude, evel skeudennaouiñ grafik ur realded soneg (MARTIN, 1996 : 10)<sup>30</sup>.

Ar variezon a vez kavet er yezh komzet a gav he far er yezh skrivet iwe. Pa ne vez ket skrivet ur yezh e chom honnañ er-maez ag an normoù, herwez YAGUELLO (1988 : 23). Daoust ma kaver hiziw c'hoazh muioc'h a yezhoù komzet hebkén eged a yezhoù komzet ha skrivet<sup>31</sup> e tenn ar yezhoù a anavezomp en-dro dimp d'an eil re, enkontet ar brezhoneg er re-mañ.

Mez a-liez e chom a-dreñv ar mod da skriv e-keñver ar mod pe ar modoù da gomz (JESPERSEN<sup>32</sup>). Degouezhoud a ra d'ar skritur lakaad stummoù kozh ar yezh da badoud, mez iwe e c'hell d'e dro poueziñ ha lakaad ar sanadur da gemm<sup>33</sup>. Ouzhpenn-se e tiskouez ar skritur goulenn ur menier emrenerezh, dre ma vez diskouezet d'ar lagad<sup>34</sup>. Ha dreist-oll, pa ne vez ket anavezet ar ger, e lenn an dud ar pezh a zo skrivet.

Daoust da-se e weler c'hoazh ouzhpenn un doare-skriv war an dachenn, pa vez anw ag ar brezhoneg. War hent an unvaniñ eh a an traoù nawazh, dre ur redi-kevredigezh.

---

<sup>30</sup> Gwir an asuradenn-se pa gomzer ag ar yezh-vamm, mez ne vez ket mui ataw pa glask un den deskiñ ur yezh estren : neuze e krog hennañ liez gant ar skrid.

<sup>31</sup> Pierre MARTIN, *op. cit.* p. 10.

<sup>32</sup> « Nowadays greater importance is attached to representing the same word always in the same manner, while the same sound may be differently written in different words. (...) As the spoken forms of words tend continually to change, this would mean that older, extinct forms of words could continue to be written long after they had ceased to be heard. » (1954 : 2).

<sup>33</sup> Menegiñ a ra Rhyshiard HINKS sanadur [ej] ar ger kembraeg *ei* (**e/he**) abalamour d'ar skritur, e-lec'h ma vehe bet gortañ [i] (prezegenn e ERMINE, Roazon, 07.04.2008).

<sup>34</sup> « La graphie (...) revendique une autonomie fondée sur la fonctionnalité visuelle. » In André COLLINOT (Collectif), *Le français à l'école*, 1999 : 114.

### 1.1.3.2. Fiksañ ar yezh

#### 1.1.3.2.1. Ar yezh parfed :

Arabad touch en daolenn kén pa vez-hi peurachu. Hañval douzh ar reolenn-se e c'hell tud soñjal ema daet ar yezh, pe ar yezh hunvreet gante, o yezh-dave, da voud parfed. Lod a lâr ema glan ha disi<sup>35</sup>. Neuze e ranker selled douti gant doujañs ha chom heb he c'hemm. Komz a ra MESCHONNIC (1997 : 193) a seksualekâdur ar skeudenn : komzet e vez a yezh c'hlan pa n'eo ket bet honnezh ebarzhet gant elfennoù estren. Ha roiñ a ra da gompren, a-fed yezh, an dra-mañ : pa glot kleñved ar c'hlanded gant ar soursi-yec'hed, ne ziskouez ar yezh aze namaed kleñved a-benn ar fin.

Mez n'eus ket tu da sterniañ ur yezh da vad, rag m'ema ar yezh ur sistem distabil, ur sistem digempouez (CARTON, 1974 : 70). Na boud e kave da VOLTAIRE e oa bet "fikset" ar galleg da vare Loeiz ar XIVved, e skrivas V. HUGO "une langue ne se fixe pas" en e ragskrid da "Cromwell" (1827) ha kadarnaet e oa bet e sav-boent gant LITTRÉ ("La notion de fixité est fausse", ragskrid d'e c'heriadur) ha gant an Akademi ("Fixer une langue est impossible", ragskrid geriadur 1878), daoust da c'heriadurioù honnañ boud dalc'het war he c'hemmoù par ma c'helle.

Rag en despet da-se e klask an den nawazh talañ d'an amzer ha frenañ ar c'hemmoù, da lâred eo an emdroâdur, liez ewid gouarn glanded ar yezh, gant, ewid honnezh, ar risk a goll e lec'h er bed da zoned. Ewid MESCHONNIC n'eo ket ar youl-se namaed paourentez an ijin<sup>36</sup>. Ur vojenn e vehe neuze klask fiksañ ar yezh.

---

<sup>35</sup> « Le breton est une langue immaculée qui n'a jamais proféré ni doutes ni blasphèmes. » Meneget gant Hervé Guillorel, *La qualité de la langue*, 1995 (In MESCHONNIC, *op. cit.* p. 194).

<sup>36</sup> « Modérer l'écoulement c'est l'aspect pauvre du génie. » (1997, 187-191).

#### 1.1.3.2.2. Fiksañ memestra :

Gant an doare-skrivañ dreist-oll e weler ar freñ douzh an emdroâdur é labourad. Ar skrid an heni eo a zalc'h pell gant furmoù aet da ged gwerso er c'homz.

Er Grenn-Amzer e oa meur a vod da skriv kentoc'h eged dizurzh. Doned a rae liested an doareoù-skriv a hengounoù skolioù pe ti-moullañ zo, ha herwez natur ar levroù pe ar lennerion e c'helled notiñ furmoù dishañval (CHAURAND, *op. cit.*, p. 26).

Beteg ar XVIIved kvd ne oa ket bet klasket liammañ stard doare-skriv ha sanadur. Mez adal neuze e remerker ur c'hemm e politikerezh ar Stad :

“L’orthographe, comme sur bien des points la langue elle-même, tend à se fixer et à se normaliser de façon plus stricte. Les lettres patentes au terme desquelles un caractère officiel est donné à l’Académie française, chargée par Richelieu de codifier le lexique et la grammaire, ne sont qu’une des manifestations de cette tendance.” (*op. cit.*, p. 66).

Adal 1833 (lezenn GUIZOT) e oa aet an doare-skriv dindan beli ar Stad e Frañs, ewid ar baotred d’an nebeutañ (ne oa ket bet anw ag ar merc'hed er lezenn, laosket d’ar seurezed). Adal neuze, da heul un dougañs ganet en Dispac’h, ha beteg fin an XIXved kvd, e oa bet reutaet an traoù war dachenn ar skrid. Neuze e oa bet rediet ar vistri, stummet er Skolioù *Normal*, da dremen ur breved (*brevet de capacité*) ewid diskoueziñ o anaoudegezh e tachennoù ar yezhadur hag an doare-skriv. Da heul e vezent karget a zeskiñ d’ar Fransizion vihan ar ouiañs-se, dezhe d’o zro da dremen ar *santifikad* (savet ged Victor Duruy e 1866 hag ollekaet e 1882 gant Jules Ferry) : ar *santifikad*<sup>37</sup> a oa neuze alc’hwez ar bed modern, heni ar melestradur da gentañ<sup>38</sup>.

---

<sup>37</sup> Goude d’ar Gomunion ha d’ar Goñfirmasion boud roet da 12 ha 13 vloaz gant an Iliz d’ar grennarded, e vez heverk notiñ an arliw relijiel bet lakaet e brezhoneg war ar ger *certificat*, a veze tremet da 14 vloaz : ha ne oa ket an teir amprouenn-se ar *viatic* (ar bejadur) a dalveze da alc’hwez d’ar c’hrennard da grogiñ gant e vuhez-vrazard ?

<sup>38</sup> Herwez Guy ANTONETTI a ouie an diw drederenn ag ar goñskried lenn, skriv ha koñtiñ e 1848 (*Louis-Philippe*, Paris, Fayard, 1994 : 711) (Internet/*Loi Guizot*/Wikipedia).

Gant-se un efed fallon, dic'hortozet hervez PERRET (2008 : 141) : blokañ emdroâdur ar skrid. Ha treuzfurmatur ar pezh na oa namaed ur benveg en un c'hult da lidañ. Ha da venegañ *skrivadeg Bernard Pivot*, kenstrivadeg doare-skriv savet beb bloaz, a riell ar mod da skriv hag a stank an hent d'ar c'hemmoù red. Ha petra a c'hell ar Vretoned soñjal, d'o zro, ag ar skrivadeg arall, savet war ar memez patrom gall, a laka an dud da zeskiñ furmoù brezhoneg skrivet pa ne vez ket doare-skriv ofisiel ebed e Breizh<sup>39</sup> ?

#### 1.1.3.2.3. Ar variadur er skrid :

Daoust da se n'eo ket ar galleg dalc'het penn-da-benn gant an unfurmelezh. War dachenn ar skritur e kaver ennañ etre 10 ha 15% a variadur en doare-skriv arverel (*orthographe d'usage*). Da skwer *clé/clef*, *cuiller/cuillère*, mez iwe [lo:z] skrivet *lauze*, *lause*, *lose*, *loze*, heb ankouaad *llose*, roet en e vod katalaneg gant Claude SIMON (« *Le Tramway* ») (ENCREVE, BRAUDEAU, 2007 : 107-121).

E brezhoneg e vez disañvalloc'h an traoù c'hoazh, peogwir e vez embannet levroù e meur a zoare-skriv (re sur a-walc'h amañ ewid ar c'heleñn). Da skwer **ewid/evit/aveit/aveid** ; **klaoustre/kouchtele/kaoustle** ; **hini/hani/heni...** Nawazh e vez kavet furmoù skrivet unvan, daoust d'ar sanadurioù boud disañval : **kig** [kik], [tʃətʃ] ; **petra** [petra], [pətra], [pətɛ], [petə]... Etre re a strizhted ha re a laoskentez e vo kavet ar c'hreiz marse...

Daoust d'ar furmoù boud bet fikset e-pad pell e c'hell boud rekiz degas un tamm kempenn dezhe abalamour da variadur ar c'homz :

“C'est l'évolution des modes de langage qui peut rendre nécessaire le réglage périodique d'une langue littéraire commune, ainsi que de l'orthographe, s'essoufflant à refléter des évolutions sonores trop rapides.” (HAGÈGE, 2000, 151-152).

---

<sup>39</sup> « La dictée en langue bretonne (...) cet événement (*sic*) majeur autour de la langue bretonne » (Pol Brezhoneg Skol an Emsav, [www.sae.bzh@wanadoo.fr](mailto:www.sae.bzh@wanadoo.fr)).



### 1.1.3.3. Diskartoù ha kengejoù

Stank braz eo enta ar furmoù dishañval er yezhoù, dre gomz ha dre skrid. Liez nawazh e kaver iwe gerioù, hag a seblant da gentañ boud ag ur c'horn-bro bihan a-walc'h, a vez kavet, goude klask, e korn-broioù arall. Menegañ a ra H. WALTER ar verb *haricoter*, ger a vez klewet e parlantoù oil kornôg Frañs kement hag er Champagn, a sinifi 1) labourad kalz ewid nebeud a c'hounid ; koll e amzer, mez iwe 2) marc'hata. Ne lâr ket e vez klewet er Vro-Bourlet iwe, e-lec'h ma sinifi ar memez tra (ster 1) dindan e furm brezhonekaet **harikotad** (A. BOCHÉ), notet *arigotein*, *alligotein* gant ERNAULT.

E Frañs e vern kalz pouez Pariz. Mez n'eo ket ar Parizian-tip ar Parizian a-orin, ganet e Pariz, mez ar Parizian adoptet, daet ag ur rannvro bennag pe ag estrenvro da chom ha da labourad eno, hag a zistroay da dremen e leve en e vro-orin. Mar kont kement galleg Pariz e buhez ar galleg dre vraz e ranker derc'hel kont iwe ag ar pezh a zegouezh aze : klewet e vez e Pariz paot a c'herioù n'int ket gerioù an Akademi. Pere en em silo e galleg Pariz ha pere a dapo ur statud ofisiel goude-se zo diaez da ouied. Daoust da-se, pa wele CHAURAND nawazh e yae ar diforc'hioù rannvroel war steuziañ (1969 : 107) e wele H. WALTER aze un dachenn frouezhuz da zifraostiñ (1988 : 360-363).

Neuze, ne vez ket tonket ar gerioù da chomel ataw gerioù lec'hel. Lod anezhe marse, gant monedone an dud, a c'hell toullañ hent ha kengejañ diwezhatoc'h en ur ger vraz bennag ha goude-se en em strewañ ledannoc'h c'hoazh. Ar pezh a zo, pa dap ar gerioù ur rol bennag er yezh, e kemeront a-liez lec'h ur ger arall a gollo marse e blas. Mar bez enkorfet gerioù newez beb bloaz er geriadurioù e vez tennet iwe lod arall a-gaoz ma seblantont daet da voud diamzeret (PERRET, 2008 : 109-111). Tres ar vuhez (an emdroiñ d'an nebeutañ) war ar yezh enta, pa vez skarzhet an elfennoù achu o amzer gante gant ar re newez.

N'eo ket trawalc'h ouzhpenn-se d'ar gerioù boud newez-savet, ewite da chom pell er yezh. Herwez Roparz HEMON<sup>40</sup> nen doa ket VALLEE kalz a fiziañs er gerioù newez-savet gantañ ha MORDIERN, da heul "skouer Ar GONIDEG

---

<sup>40</sup> R. HEMON, 2008 : 56.

hag e ziskibion”. Krediñ a rae ne badehe ket kalz anezhe, mez red o sevel memestra “pa ne vefe nemet da enebñ ouzh pleg fall ar vrezhonegerion, techet ha ma’z int da gemer gerioù gallek, treuzwisket pe dic’hizet mui pe vui.”

Mez n’eo ket war dachenn ar c’heriaoueg hebkén e kemm ar yezh. E don-donnañ e frammoù, e ster ar gerioù-benveg da skwer e kemm an traoù iwe, evel ewid an araogenn c’halleg *sur*, a vez implijet muioc’h-mui e-lec’h à dirag un anw-kêr : *Je vais sur Paris demain / Il habite sur Marseille depuis trois mois / Ils ont un appartement sur Brest...* Kement-arall a gaver er brezhoneg a-vremañ iwe, dindan levezon ar galleg a-liez : **goulenn \*da** (e-lec’h **goulenn gant/digant**) ; **me zo bet \*da Vrest** (e-lec’h **me zo bet e Brest**) ; **red eo \*ober diwall** (e-lec’h **red eo diwall**) ; **ur \*re sizailh** (e-lec’h **ur sizailh une paire de ciseaux**)...

#### 1.1.3.4. Klozadur

Daoust da arwez liezliw ar yezh e chom honnañ ur benveg kumun, gouest da c’heriañ an eskemmoù-komz etre ar gomzerion. Mez n’eo ket moned re bell soñjal e ya a-stur kemplegded ar gevredigezh ha kemplegded ar yezh. Hag evel e weler galloudoù-urzhiañ war-labour er gevredigezh, e c’heller gortoz galloudoù hañval war-labour er yezh iwe.

## 1.2. AN NORM HAG AR YEZH

### 1.2.1. AN NORMAÑ : UR GUDENN GOZH

#### 1.2.1.1. Ar yezhadur normativel

War a seblant e oa daet ar yezhadur goude ijinadenn ar skritur<sup>41</sup>, ha dre-se marse ema chomet staget a-c’houde douzh ar yezh skrivet. Roudoù a gement-se

---

<sup>41</sup> « ...D’ailleurs, le terme *grammaire* vient de *grammè*, qui désigne le caractère écrit. » MAINGUENEAU, 1996 : 10.

zo bet kavet gant an Akkadianed (II<sup>o</sup> milvlead kent JK) ha gant an Indianed dre ar sanskriteg (Vved kantvlead kent JK).

Ar C’hresianed iwe a studie o yezh, gwelet gante evel ur benveg da analizañ ewid tenniñ ar mad anezhañ<sup>42</sup>. Mez o fal a oa dreist-oll roiñ reolennoù, dre ober an diforc’h etre ar stummoù kerreizh ha digerreizh. Ar pezh zo bet graet anezhañ Skol Aleksandria (II<sup>o</sup> kvd kent JK), dirag pobladoù trec’het gant Aleksandr ar Meur ha meur a rannyezh gresianeg gante, he doa klasket ur yezh kumun, diazezet war c’hresianeg Homer. Diwar an analogiezh o doa kaset o labour war-raog : ewid ar Skol-se e c’heller hañvallaad oll fedoù ar yezh douzh un nebeud reolennoù simpl a-walc’h. Eleze an naouturioù a **norm** (= respet ewid an daveoù) hag a **fari (fazi)** : rekiz skarzhañ ar fedoù na c’helled ket boutañ er modelloù bet kavet ha lakaet.

Herwez SWIGGER (1997 : 66) e oa bet savet an henyehadur war dri c’hriter : ar c’hategorizañ, studial ur yezh hebkén, hag an normañ. Ha chomet braz da heul pouez ar patrom-se er yezhouriezh kornôgel. Da skwer, en Hen-Amzer, e veze liwet ar stummoù rannyezhel adal ar *c’h/koine*, da lâred eo ar standard, ha gweled enta evel stummoù diarroudennet, distreset, implijet e-lec’h stummoù ar *c’hoine*, narenn stummoù emren<sup>43</sup>.

Pell e chomas ar latin ur skwer ag ar yezh normet, ar vodell da heuliañ, hag ar yezhoù-pobl etaltañ yezhoù izelloc’h, reolenn ebed enne : aze an diforc’h a veze graet gwezharall etre *sermo litteratus* reolieg ha *sermo vulgaris* direol (Leonardo BRUNI<sup>44</sup>). Mez yezh ar bobl a dapas gounid, tamm ha tamm war ar latin. En Itali, en e yezhadur italianeg (troioù 1450) e klaskas Leon Battista ALBERTI diskouez reoliekâdur ar yezh-pobl. Ewid RAMUS (*Grammaire*, 1572 : 30), a-du war-se gant Platon, Aristoteles, Kikeron, e oa ar bobl mestr war e yezh<sup>45</sup>. Mez kilañ a raas ar labour-se dirag ur soursi arall : kavoud ur patrom lennegel<sup>46</sup>.

---

<sup>42</sup> Idem.

<sup>43</sup> Meneg a ra SWIGGER labour HAINSWORTH (1967) ha VERSTEEGH (1986).

<sup>44</sup> In SWIGGER (1997 : 137).

<sup>45</sup> [Le peuple] « est souverain seigneur de sa langue et la tient comme un fief de franc aleu. »

<sup>46</sup> In SWIGGER (1997 : 167).

VAUGELAS (1647) e oa diazezet e remerkoù war arselloud feson da gomz tud desketañ ar lez (“*la partie la plus saine de la cour*”), keñveriet douzh feson da skriv skrivagnerion wellañ e amzer (“*la plus saine partie des auteurs du temps*”). Ur c’helenn normativel eo ur sort yezhadur, diazezet war istimadur ar pezh a veze santet boud braw pe zivalaw. Rag unan normativel eo ar yezhadur hengounel pa sav reolennoù kentoc’h eged kenstadañ fedoù (SAUSSURE, 1916 : 118). Ha boud e oa iwe disiplinoù normativel, ewid Sylvain AUROUX, ar pezh a veze gwezhall ar retorik, ar yezhadur hag ar lojik. Ne oa ket o fal deskriñ realded ar yezh mez taolennañ ar pezh a zlehe boud pe ar pezh a zleer ober, da lâred eo *arzoù* en ur mod<sup>47</sup>.

### 1.2.1.2. Ar yezhouriezh deskrivuz

Er Grenn-Amzer en doa kroget tabut ar gouiañsoù normativel. Mez gant an XVIIIved kvd e oa daet an enebadur etre an norm hag ar c’houiañs, hag an dra-se dre arsellerion ar yezh. Neuze e klaskas ar yezhadur gouied “penaoz e komzer pa gomzer evel ma komzer” (“*savoir comment on parle quand on parle comme on parle*”). Nawazh e oa diaezamantoù war an hent rag n’eo ket un dra simpl dilezel an normativelezh pa oui an den war-un-dro pegen koñvañsionel e vez dre natur ar fenomenoù yezh (AUROUX, 1998).

Komz a ra AUROUX a lizidanted ar yezhouriezh a-zivoud an tem-se. Goude un hir-amzer a c’hramadegoù normativel e oa bet un amzer merket gant an deskriñ hebkén, ewid ar pezh a selle douzh ar c’houiañs : arselloud ar fedoù, o deskriñ ar sklaerrañ ma c’helled, sed aze ar pal. Da heul F.A. WOLF (1777) e klaskas an dud labourad dreist-oll diwar an testennoù (o renabliñ, o esplegañ). Mez dre-se eh ae ar filologiezh - anw an emsav-se<sup>48</sup> - pelloc’h eged tachenn resiz ar yezh, rag studial a rae an istor lennegel, ar c’hizoù, ar lezennoù, ha se dre he hentenn dezhi : ar c’hritik. Boud re staget douzh ar skridoù (ar skridoù gresianeg pe latin ogozig ataw) eo ar rebech a c’heller ober d’ar filologiezh (SAUSSURE, 1916 : 14).

---

<sup>47</sup> « La logique n’est pas une science, c’est un *organon*, un instrument, dans la tradition aristotélicienne. La rhétorique est l’art de manipuler son auditoire par le moyen du langage. La grammaire est l’art de bien parler. » (AUROUX, 1998 : 225).

<sup>48</sup> **Filologiezh** herwez FAV ; **lizheregouriezh** herwez RH.

Ur paz arall a voe graet gant Rasmus RASK (1787-1832), F. BOPP (1791-1867), ha d'o heul gant tud evel J. GRIMM (e 1819), A. SCHLEICHER (e 1861). Dre geñveriañ meur a yezh etreze, ar sanskriteg enkontet, newez dizoloet, e tegasas ar skol-se meur a dra newez (meizad an “**indo-europeeg**“ a voe krouet ganti). Mez abalamour ma ne oa ket bet termenet spiz a-walc'h pal he studi ganti, ne zaas ket da benn a sevel ur c'houiañs wirion, herwez SAUSSURE ataw.

Red e oa bet gortoz 1875 ewid d'an dachenn boud sklaerraet, gant embannadur *La vie du langage*, gant WITNEY. Diwar ar studioù savet a-zivoud ar yezhoù romaneg, e oa daet d'ar c'hompren e oa liammet ar fedoù-yezh kenetreze a-hed an ahel istorel, hag e oa ar yezh ur produ a spered-stroll ar gomzerion.

Gant Ferdinand de SAUSSURE e voe diazezet splann reolennoù ar yezhouriezh. Chom a ra e *Cours de linguistique générale* (1916) bon ar yezhouriezh newez he doa savet meizad ar **vodell** (DESSAINTEs, 1971 : 200). Labourad a ra ar yezhouriezh-se gant komzoù gwirion an dud, kentoc'h eged gant ar skridoù namaete, ha ne chom ket staget douzh ur yezh hebkén, evel ma ra ar yezhadurioù.

### 1.2.1.3. Distro d'ar reolennoù

Arabad krediñ nawazh e oa achuet gant ar reolennoù. Ar re-se, ken anad pa vez anw a implij ar yezh, pa ranker kelenn an implij reizh, a ziskouez iwe eh eus anezhe pa seller douzh ar yezh evel m'ema, a-benn da gompren e pesort mod eh a war-raog.

Ewid LEVY-BRUHL (1903) e oa ar yezhourion ar re gentañ o doa bet ur c'houiañs denel nann-normativel<sup>49</sup>. Da gentañ e oa bet lakaet e oa pal ar yezhadur skiantel *esplegañ* an arver er yezh, narenn henn fiksañ. Ha strivoù ar yezhourion a oa dreist-oll diskoueziñ pozitivelezh o skiant ha kas war-lerc'h ar **gourc'hemennizm** (*prescriptivisme*) (AUROUX, *opus cit.*, p. 234). Ha nawazh

---

<sup>49</sup> E AUROUX, *opus cit.*

er XIX<sup>ved</sup> kvd e voe komzet ag ar meizad *lezenn*, ar pezh a oa dislavaruz un tamm : ha n'eo ket kar ar ger *lezenn* douzh ar ger *reolenn* ?

Gouiañsoù ar lavar o deus graet araokadennoù braz a-c'houde 1950. Da heul SAUSSURE hag ar strukturalism, gant ar yezhadurioù *distribusionel* (Zellig HARRIS), *jenerativel* (Noam CHOMSKY), gant ar *foñksionalism* (MARTINET), gant yezhouriezh ar *prezeg* pe an *enoñsiañ* (Emile BENVENISTE, Roman JAKOBSON), gant ar *psikomekanik* (Gustave GUILLAUME hag Antoine CULIOLI d'e heul), ar *glosematik* (Louis HELMSLEV), ar *pragmatik* (Charles MORRIS, AUSTIN, SEARLE) eh eus bet ledannaet a-galz komprenidigezh ar yezh hag ar c'homz.

Savidigezh teorikel ar yezhadurezh kentoc'h eged framm ar yezh a zo kaoz, ewid AUROUX, a steuziadur an normativelezh : ar yezhouriezh an heni eo a ra *heb* ar fenomenoù normativel. Ha peogwir e vez kavet reolennoù memestra e sinifi ema ar reolennoù *er* yezh. Ne vehe ar yezh namaed teskad ar c'hustumoù heritet hag ar reolennoù empledad degemeret gant tud é kenveañ : ar reolennoù-sen eo a vehe esplegataet\* gant ar yezhadurourion goude (LE DÛ & al., 2005 : 55).

#### 1.2.1.4. CHOMSKY hag ar reolennoù

Tu zo da selloud douzh ar yezhadur evel douzh un anaoudegezh teorikel ag an normoù (pe un deskriadur anezhe), da lâred eo un teskad *barnadennoù-degemer* (*jugements d'acceptabilité*) (AUROUX, 1998 : 248).

Ar rebech bet graet d'ar strukturalism zo boud chomet re stag douzh ar yezh evel traezenn dizepant (studial ar yezh enni he-hunan hag ewiti he-hunan<sup>50</sup>), ha neuze leuskel er-maez ag ar studi fenomenoù arall a vez dalc'het kont anezhe just a-walc'h gant *an enoñsiañ* pe *ar pragmatik*.

---

<sup>50</sup> « La linguistique a pour unique et véritable objet la langue envisagée en elle-même et pour elle-même. » (SAUSSURE, 1916 : 317).

Gant CHOMSKY ne oa ket mui ar yezh ur sistem sinoù (keñverioù a beb sort etreze), mez ur sistem reolennoù, ha gante gouest ar c'homzer da sevel ha da gompren un niver infinit a frazennoù nen doa ket biskoazh na savet na klewet e-raog (eleze an anw a *yezhadur jenerativel*, gouest da “jeneriñ”, da sevel an oll frazennoù). Tra ma oa ar fonologiezh maen-bonn pa maen-diazez ar strukturalism, e lakae CHOMSKY ar frazenn e-kreiz e savadenn. Gantañ e oa ar sintaks an heni eo a oa mestr war ar c'hehentadur.

Herwez CHOMSKY e rank teskad reolennoù ur yezhadur bennag boud gouest da aozañ frazennoù degemeraduz ewid ur strollad roet, a-hend-arall n'eo ket adaz. Ha petra eo un enoñsiad degemeraduz : “un enoñsiad bet savet, pe unan a c'hellahe boud savet, gant ur c'homzer ganet er vro, hag a vez pe a vehe degemeret evel un enoñsiad ag o yezh gant komzerion ganet er memez bro<sup>51</sup>.” Mez reolennoù CHOMSKY n'int ket reolennoù emskianteg<sup>52</sup>, ha n'int ket graet ewid an dud : ur savadur teknik int, tra toud (komz a ra CHOMSKY ag ur c'homzer *ideel*). Mez dre m'ema standardekaet kalzig spas yezhel hor sevenadurioù (gant ar benvegoù-yezh, ar skol hag ar c'hehentadurioù masel) e c'hell e dezenn boud tostig a-walc'h koulskoude douzh produadurioù komz un darn vraz ag an dud. Ar yezhouriezh enta a laka war-wel ar reolennoù a ziskouez penaoz eh a ar yezh war-raog. Lâred a ra ar pezh a zegouezh ingal enni. Rag ar c'homzer e-hunan, gant e anaoudegezh emskianteg pe ziemsyant a reolennoù e yezh, a c'hell barn ur frazenn bennag ha lâred ema ar frazenn-se unan yezhadurel pe ged, unan degemeraduz pe ged. Daoust da-se n'eo ket pal ar yezhouriezh reolenniñ ar parlant.

Daet e oa JACOBSON war asuradennoù CHOMSKY en doa klasket sevel “un deorienn nann-semanteg groñs ag ar framm yezhadurel”. Ewid JACOBSON (1963 : 197-205) eh eus un diforc'h braz etre an *absurdiezh* hag an *angramadegded*. Gant ur frazenn sañset absurd a-sort gant “Colorless green

---

<sup>51</sup> Herwez LYONS, 1968, meneget gant AUROUX, *opus cit.* p. 247.

<sup>52</sup> « La connaissance peut être inconsciente et inaccessible à la conscience. (...) L'introspection ne peut nous apprendre que nous connaissons (...) ou utilisons certaines règles ou principes de grammaire ; ou bien que l'utilisation du langage implique des représentations mentales formées par ces règles et principes. A tout cela nous n'avons aucun accès privilégié. » (1985 : 122).

ideas sleep furiously” (“**Gant fulor e kousk ideoù glaz diliw**”) e c’hell an den hec’h analizañ (kaoud ur verb, ur rener, un adverb...enni), hag en em c’houlenñ hag-eñv ema gwir ar lavarenn. E-kontrel, e gwersion di-ster pe di-benn ur frazenn evel “*fin toucher semble à cela sa*” pe “**e gant kousk diliw glaz fulor ideioù**” e vehe dibropoz goulenn ha gwir pe faos eo ar lavarenn : n’eus ket aze titour semanteg pe steroniel ebed. Ar pezh a vez kavet sklaer en-dro pa vez respetet ur serten urzh : “*Cela semble toucher à sa fin*”. Diskoueziñ a ra ar skwerioù-se e rank ar lavar en em harpañ war gategoriennoù gramadeg<sup>53</sup>.

#### 1.2.1.5. Ar pragmatik

Bremañ e ouier o deus an oll dud ar memez diazezoù lojik a-fed yezh : n’eus namaed ar framm yezhadurel a chañch a yezh da yezh. Dirag un eil yezh neuze, ar pezh a zo estren d’an desker n’eo ket ‘maed ar c’horreenn anezhi, pandeogwir e anav he frammoù don dija (DALGALIAN, 2000 : 148).

Dre lakaad war-wel an aktoù “*illocutionnaires*”<sup>54</sup> en doa AUSTIN, saver ar pragmatik, diskouezet ur rummad reolennoù arall a ya war-raog er vuhez sokial. Hag ouzhpennet e vez ar reolennoù-se douzh ar reolennoù sintaksel ha semanteg (steroniezhel). Gant reolennoù iwe e vez renet an aktoù-se graet dre ar c’homz, just evel ar re graet er c’hoarioù. Setu da skwer ur reolenn ag an arsanañ\* (*une règle de l'affirmation*) herwez RECANATI (1981 : 19) : ewid arsanañ un dra bennag e ranker krediñ er pezh a arsaner, hag ur gaouiataer bennag, pa savehe un arsanadenn nann-gwirion, en em lakahe er-maez ag an c’hoari, dre ma nen dehe ket sentet douzh reolennoù ar lavar<sup>55</sup>.

---

<sup>53</sup> Meneget ar pennad-se war ar lec’had : <http://orthographe.free.fr/xjack.html>.

<sup>54</sup> Da skwer pa denn ar c’homz da naouturioù sinalet gant gerioù evel : **aliañ, atersiñ, belziñ, berzañ, dikriañ, disklaeriañ, gourc’hemenn, grataad, ordren...**

<sup>55</sup> « C’est une règle de l’affirmation qu’il faille, pour affirmer quelque chose, croire ce que l’on affirme, et le menteur qui fait une affirmation non-véridique ne joue pas le jeu et enfreint les règles du discours. »



Gant an aktoù “*illocutionnaires*” en em laka ar c’homzer en ur rol bennag, hag àr-un-dro e ro-eñv ur rol klokamantel\* d’egile. Da skwer, pa ro ar c’homzer un urzh d’unan bennag, e laka da ouied d’e chelaouer e c’hoant da weloud hennezh d’ober ar pezh ema é c’hortoz anezhañ. Ar pezh a sinifi en em sant kreñv a-walc’h da c’houlenn an dra-se g’egile. Rol *ar superior* eo ar rol sokial skeudennaouet amañ gant skwer an urzh.

## 1.2.2. GALLOUD HA KARANTEZ

### 1.2.2.1. Ar yezhoù, benvegoù-galloud

#### 1.2.2.1.1. Yezh ha frankiz :

“A-viskoazh he deus ar yezh hambrouget ar galloud” a skrive Antonio de Nebrija e dedienn e yezhadur da Isabella a Gastilha<sup>56</sup>. A-bouez braz ema bet ar yezhoù er gevredigezh. A-hed an Istor emaint bet gwelet evel armoù-brezel, benvegoù graet gante gant ur galloud bennag ewid kemer e greñv war poblañsoù arall. Beteg troc’hañ teodoù maouezi ar poblañsoù trec’het, ewid parraad doute a zeskiñ o yezh d’o bugale. Ar pezh a ziskouez e vez sellet liez douzh ar yezh evel ur sin a frankiz :

“Ha setu penaos eo bet dasorc’het Breizh.

- [Bimbochet] Dre he yezh ?
- [Donalda] Dre he yezh hebkén, hag o kas kuit yezh an estren. (R. HEMON, *An Aotrou Bimbochet e Breizh*, [1927], Lesneven, Hor yezh, 1990 : 30).

Ewid distruj ar frankiz-se ha yawañ ar bobl a-feson e ranker lemel he yezh diganti. Tezenn Nicolaï MARR an heni a oa, e kreiz an XXved kvd : ur benveg-galloud eo ar yezhoù, a ziskouez ataw rannidigezh ar gevredigezh dre glasoù sokial. Ne oa ket bet dalc’het e dezenn gant Staline, na wele ket ar yezh

---

<sup>56</sup> In MESCHONNIC, 1997 : 238.

evel meizad dreistframm ar marksim, ha na wele ket muioc'h he liammoù gant ar c'hlasoù sokial<sup>57</sup>.

Gouied a reas nawazh Republik Mustafa KEMAL, ganet war ludu an Impalaerezh otoman, c'hoari gant ar yezh ewid modernaad an Turki herwez kriterioù ar bed kornôgel ha roiñ dezhi un identelezh newez, distag a-zoc'h an heni a oa a-gent. Mar oa an adreizh-yezh\* unan hebkén ag ar c'hempennoù kaset da benn gant Ataturk, ne voe ket an heni disterrañ rag, herwez Altan GÖKALP<sup>58</sup>, ema ar yezh hag an alfabet unan ag an araezioù\* galloudusañ ewid stummañ an identelezh-stroll (*hevelebiezh strollennel*, IMB.).

#### 1.2.2.1.2. Yezh ha yezhoù :

Meur a live a gaver e diabarzh peb yezh : yezh ar maezoù ≠ yezh kêr ; yezh lennegel ≠ yezh pobl ; yezh ar bannlew... Mez ouzhpenn-se e vez liezyezh ar Stadoù, peurliesañ, daoust d'ar Galloud Politikel, a-vepred, klask lakaad ur yezh hebkén da dalvezoud, diw d'ar muiañ. Liezyezh e vez ar Stadoù peurvuañ, rag ne oa namaed 192 Stad ba'n ONU e 2008, ewid 6700 yezh ar bed. Ouzhpenn ar galleg, yezh ofisiel, eh eus pemp yezh vroadel er Senegal, mez 248 er C'hameroun hag ouzhpenn 250 e Republik Demokratik ar C'hongo. Un namaedenn war an Douar eo an unyezhegezh enta, ar pezh na oui ket ar C'halled gwezhave. Setu perag e soñj Louisa Aït HAMADOUCHE e vehe tonket an den da vout e darempred gant *yezhoù*, ha n'eo ket gant *ar yezh*<sup>59</sup>. Diouzh an tu arall e remerker bremañ, dre ar beajoù hag an tourizm (an touristerezh), skignadur gerioù a zo daet da vout kumun d'ar muiañ niver ag ar yezhoù pennañ : ur 400 ger bennag zo bet renablet e 20 anezhe, evel **bank, camera, dollar, OK, soda, sport, taksi, whisky**<sup>60</sup>... Mez ne vir ket an dra-se douzh ar stourm etre ar yezhoù.

---

<sup>57</sup> P. MARTIN, 1996 : 13.

<sup>58</sup> In *La planification linguistique dans la Turquie républicaine : une utopie réussie ?* Prezegenn e Séminaire de la Bretagne Linguistique, Brest, 28.03.2009.

<sup>59</sup> *Le Courier International*, Hors-Série, Mars-Avril-Mai 2003 : 27-28.

<sup>60</sup> Diwar *Langues dans le monde*, dre ar lec'had :

<http://www.villemin.gerard.free.fr/Langue/LangMond.htm> ha lec'had Jacques LECLERC :  
<http://www.tlfq.ulaval.ca/axl/index.shtml>

#### 1.2.2.1.3. War marc'had ar yezhoù :

Helebini\*, kevaezerezh\*, heli-gentañ\* ha hale-grap\* zokén a weler war dachenn ar yezhoù er bed. Diskoueziñ a ra niver ar lezennoù-yezh pegen kizidig ema problem an darempredoù etre ar yezhoù e diabarzh peb bro hag etre ar broioù. Diaez eo d'ar galleg (400 milion a gomzerion dre ar bed, evel ar spagnoleg) gouarn e statud a yezh ofisiel an ONU e-tal ar saozneg (1980 M), ar chineg (1250 M), an hindi hag an ourdou (1150 M).

E broioù zo, gant ar rummoù trec'h, e vez sellet douzh ar yezhoù lec'hel (topolektoù) evel ur merk a zisfiziañs, ur merk a sektarizm. Setu perag, e lod ag ar broioù afrikan, e c'heller gweled ar galleg (yezh daet ag an diavaez, neutr war dachenn ar yezhoù-bro), evel ar liamm dreist-lektoù gouest da genstagañ izili ar broadoù o deus anavezet brezelioù kenelel\* (Republik Kreiz-Afrika, Aod-an-Olifant, Kongo-Brazzaville)<sup>61</sup>. Setu iwe ar rol en dehe karet kemer an esperanteg, - yezh utopiel -, pell ag he c'hazeg c'hoazh gant un daou vilion bennag a gomzerion hebkén.

#### 1.2.2.1.4. Adkavoud ar yezh-orin :

Mojenn ar yezh namaeti nawazh, heni an unyezhegezh, zo meneget er Bibl. “Ober a rae an Douar a-bezh gant ar memez yezh hag ar memez gerioù.”<sup>62</sup> Ha ne oa ar liezyezhegezh daet da heul mojenn Tour Babel namaed un drougvallozh kaset gant Doue. N'eo ket a-gaoz da bec'hed an denion, ar pec'hed a orgouilh, ar pec'hed a lorc'h, mez a-gaoz ma oa ar yezh namaeti-se arouez unvanidigezh an denelezh, tizhet gant arver ur yezh namaeti. Ur yezh a lakae an denion da dostaad an eil douzh egile, da gamaradiñ, da genlabourad, d'en em gompren kenetreze, herwez Géza REVESZ<sup>63</sup>. Ur fari olleg ewid Doue, mez iwe ar risk pennañ, rag “netra bremañ ne vo maez ag o galloud”. Yezh, galloud : a-werso e anav mab-den ar liamm etre an daou dra.

---

<sup>61</sup> Ambroise QUEFFELEC, *Variété et variations du français monocentré à la francophonie pluricentrique*, in *Le français : des mots de chacun, une langue pour tous*, Les Lyriades, Rennes, PUR, 2007 : 53-66.

<sup>62</sup> Geneliezh, 11, 1-9.

<sup>63</sup> Meneget gant Andrea CAMILLERI, *Le Courrier International*, HS, 2003 : 11-13.

Adkavoud ar yezh-orin, pe d'an nebeutañ bihannaad niver ar yezhoù, beteg mougañ ar re na blijont ket d'ar Galloud, setu ar pezh a vez klasket ober e meur a vod. Ha c'hoari a ra an normañ war an hent-se, dre ma plaenna an diforc'hioù.

### 1.2.2.2. Meizad an "uzaj" (an arver)

#### 1.2.2.2.1. An uzaj : un naoutur displann :

Boud e vehe, er gevredigezh, ur c'houstiañs-yezh, a vehe remerket dre an emzalc'hoù kerreizhuz\* hag ar barnadennoù kevrvuz\* : ne vez ket tu da sevel frazennoù ar yezh ne vern penaoz, ne vez ket tu da sanañ ar gerioù ne vern penaoz heb boud barnet gant ar chelaouer (Sd. § 1.2.1.4., p. 50). Ur mod a vehe da gomz ar yezh, ha na boud ne vehe ket ar mod-se "kaoulet", gant liesfurm m'ema, e chom etre bonnoù degemeret gant an darn vuiañ ag ar gomzerion : setu aze geriet an uzaj, pe an arver.

Herwez an Akademi C'hall "l'usage, en matière de langue, est plus fort que la raison" (Ragskrid da c'heriadur 1718) "et le modeste i de *oignon* est ainsi érigé en rempart de la civilisation occidentale."<sup>64</sup> Ewid Georges GALICHET (1949) e ranker roiñ da beb ger un dremm digemm, a aotre un anavezadur prim : setu aze stabilded an arver<sup>65</sup>. Evel-se e oa soñj Roparz HEMON<sup>66</sup> ha heni KERVELLA<sup>67</sup> e-keñver ar brezhoneg, ha beteg re kredabl...

Menegañ a ra AUROUX keveladurioù gramadegel demokratel, savet gant yezhadurourion c'hall e diwez an XVIIIved kvd ha deraou an XIXved kvd, e-

---

<sup>64</sup> André GOOSSE, *La nouvelle orthographe*, Paris, Duculot, 1991, meneget gant MESCHONNIC, 1997 : 232.

<sup>65</sup> « Assurer à chaque mot une physionomie stable qui permette une identification sémantique immédiate », in MESCHONNIC, 1997 : 233.

<sup>66</sup> « Ainsi, en 1928, R. HEMON signale dans sa présentation de *Prinsezig an Dour*, édité par Gwalarn : « Changer continuellement la forme des mots ne peut amener que le découragement des lecteurs », Gwalarn Nn 14, p. 98 », meneget gant Hervé CADIOU, *La Bretagne Linguistique*, Vol. 3, 1986-1987, p. 119.

<sup>67</sup> « Ma ne vefe bet ar brezhoneg nemet ur yezh tud desket hor bize gellet kemm an doare-skrivañ ; hogen pa vez ret ober levrioù-pobl ha levrioù-bugale n'eo ket klask lakaat an dud da sodañ o klask divinout ar pezh a zo merket eo ; rak netra ne hegas muioc'h eget gwelout div wech un hevelep ger skrivet e daou zoare disheñvel. Poent eo erfin d'un nebeud leueoù aheurtet kompren kement-se... » (KERVELLA, 1993 : 46).

lec'h ma veze choazet ar stummoù dre vouezhiañ. Tu zo d'en em c'houlenn war pesort patrom e veze hag e vez c'hoazh diazezet choazoù an ensavadurioù karget ag ar yezh. Penaoz e vez termenet live uhel pe live-skwer ur yezh ? Yezh ar lez evel da amzer VAUGELAS, yezh klasoù desketañ ar gêrbenn evel ma tiskleria LEON, yezh ar rannvro Ile-de-France, pe yezh strollad-mañ-strollad ar bobl ? Ar pezh a zo degouezhet, e galleg d'an nebeutañ, eo an dramañ : moned a reas an arver da norm, hag an norm da dalvoud. Nen dehe an arver ster ebed a-fed doare-skriv, netra da weled gant an *droed kustumel* (*droit coutumier*, IMB) mez gant ar lezenn, dre ma vez enskrivet e geriadur an Akademi C'hall, ha degemeret da heul gant ar geriadurioù boutin, kerreizherion an tier-embann hag ar skolaerion (CERQUIGLINI, 1995 : 60-61).

Da heul ar mod-se d'ober ne gaver ket arverioù dishañval mez farioù, pe kentoc'h *faotoù* (*fautes*) : an arliw moralel roet d'ar ger-se é tiskoueziañ pegen grevuz e vez santet aze ar mank a-zivoud ar vodell ofisiel (*ibid.*). Nawazh ne vez ket liez choazoù an doare-skriv namaed un afer a vuiañ-niver, pa vouezhia an Akademidi da ouied pesort furn a vo dalc'het (*op. cit.* p. 111).

#### 1.2.2.2.2. Frekañs an implij :

Gwelet e vo (§ 1.3.1.2., p. 72) e vez ariet an arver (an uzaj) douzh frekañs an implij. An troioù pe ar sanadurioù liesañ produet (er metoù lakaet da skwer !) a yay da vodell pe da norm. Diwar-se e c'heller, da skwer, chom heb notiañ sanadur fonetikel gwenedeg ar ZH e geriadurioù brezhoneg zo, daoust m'ema bet ar ZH degemeret *ez-ofisiel* en doare-skriv ha waet ouzhpenn da arouez Breizh douzh penn-a-dreñv an otoioù<sup>68</sup>.

Mez a-benn ar fin e vo ar yezh ur c'hemmesk graet ataw etre modoù-komz liessort hag ur vodell ideel, ar yezh “wir“, ar yezh “vad“, ar pezh a ro da soñjal

---

<sup>68</sup> Tu zo d'en em c'houlenn neuze petra eo dazont ar ZH, pa ne vo ket mui rezon ebed d'henn skriv goude steuziadur ar sanadur gwenedeg...

eh eus modelloù arall, ken bew ha tra, gwir venvegoù-kehentiñ etre ar gomzerion, gallegerion pe ged<sup>69</sup>.

#### 1.2.2.2.3. Ar Stad hag an arver :

N'eo ket ar yezh ur c'hoñvañsion mez kentoc'h un ensavadur, evel ar galleg da skwer, a zo bet hag a zo bepred *yezh ar Stad, furm a ya d'ober ar vroad c'hall a-c'houde le Strasbourg e 842* (BALIBAR, 1985). Bernoud a ra neuze d'ar Stadoù soursial douzh yezh pe yezhoù ar vro<sup>70</sup>. Ha liez, pa lezenn ar Stadoù, e normalizont e mod pe vod. Resisaet eo bet mod-ober ar Stad ewid unvaniñ ar yezh gant HAGÈGE (2000 : 151-152) :

« L'entreprise d'édification de normes linguistiques communes n'est pas une exclusivité de l'Europe, mais c'est là qu'elle est la plus précoce et la plus étendue. Cette entreprise porte la marque de la volonté des hommes. Car les langues, bien qu'à un niveau très supérieur de complexité, sont aussi des espèces vivantes. Elles tendent indéfiniment à proliférer sous l'apparence d'un projet cohérent qui en organise la turbulence. La diversification est dans leur nature. Celles qui, en Europe, ont connu une fortune particulière sont les mêmes qui ont été façonnées par un pouvoir intellectuel, ou politique, ou par les deux à la fois, non sans le soutien d'un certain dynamisme économique. (...) Les langues les plus fragmentées en variétés dialectales se trouvent être celles que le hasard d'un destin singulier n'a pas associées à un Etat-nation politiquement unifié et indépendant. »

Mez penaoz bennag e vez kaset an traoù e vez a-liez an normañ un c'hoari gant an naoutur a arver, termenet diouzh e soñj gant ar Galloud Politikel (pe ur Galloud Sevenadurel bennag), dre dennañ douzh e du ar pezh a gadarn e vennozh<sup>71</sup> (REY, 1972).

---

<sup>69</sup> Sd. Collectif (& Alain REY), *Leksik des Cités*, Fleuve Noir, 2007, 384 p.

<sup>70</sup> « Aux périodes où la conscience nationale se reconnaît le plus fortement dans une culture et dans la langue qui l'exprime, alors vient à se résoudre la tentation [pour l'Etat] d'intervenir sur son cours « naturel ». » (HAGÈGE, 1985 : 195).

<sup>71</sup> « En matière de langage, la construction idéologique de la norme repose tout entière sur le concept habilement manié "d'usage". »

#### 1.2.2.2.4. An arver hag ar yezhourion :

Kentoc'h eged kennig ur patrom termenet diwar ur skwer bennag, e klask ar yezhouriezh bremañ deskrivañ ar yezh evel m'ema. Mez n'eo ket ar sav-boent-se heb dañjer, rag diniver e tiskouez ar fedoù-yezh boud ha tu zo d'en em goll enne, dreist-oll pa vez anw a gelenn. Etre an emzalc'h deskrivuz-se, skiantel-reizh, hag an dibaboù hag ar choazoù a ranker ober pa gomzer a gelenn e vez kavet lec'h ur preder braz. Anw a vez ag ar variadur, ha beteg re aliez, pa zegouezher war dachenn an deskadurezh : rag komz ag ar variadur er skol a c'houlaka eh eus bet termenet un arver-dave da gentañ. Mard eo ar yezh un ideel, ur fiktion, e-keñver kemplekter ar furmoù hag ar modoù da gomz, e chom un ideel red, un dave red<sup>72</sup>. Ur wir gudenn a zo aze, a glaskin donnaad er § 1.3., p. 71.

#### 1.2.2.3. Ar yezhoù “objets d'amour”

Gant dipit, war a seblant, e ansav HAGÈGE (1985) n'eo ket ollvedel ar garantez ewid ar yezhoù<sup>73</sup>. Lod a gar gwell ar yezh-mañ-yezh. Lod ne garont ket ar yezhoù, zokén o yezh-vamm. Lod ag ar Vretoned o deus dilezet heb keuz ar brezhoneg dre ma ne gavent ket netra priziuz ennañ, hag un tamm disprizañs douzh ar yezh a veze santet pa veze lâret ne yae ket pelloc'h an den gantañ eged limit e barrez<sup>74</sup>.

Herwez SAPIR ha WHORF e vez stummet ar bred gant ar yezh. Ha muioc'h c'hoazh : anavoudegezh pe analiz ar bed a vez heget, rediet gant ar yezh. Mez traoù sevenadurel int a-hend-arall, ha moned da zizoloiñ ur yezh, daoust ha n'eo ket digoriñ un nor war ur bobl hag ur sevenadur dishañval ? Dedennet-groñs e vehe an dud (lod ag an dud d'an nebeutañ) gant ar sevenadurezhioù a vez divinet a-dreñv liessorted vraz ar yezhoù : rag ma aparchant ar yezhoù douzh ar c'hevredigezhioù a ra gante, ha dre-se rag ma vezont un alc'hwez e

---

<sup>72</sup> GARDES-TAMINE, 1990 : 6.

<sup>73</sup> “L'amour de la langue, source évidemment de ridicule lorsqu'il s'affiche” (MILNER, 1978, meneget in MESCHONNIC, 1997 : 57).

<sup>74</sup> Sd. BROUDIG, 2009 : 158. Diskoueziñ a ra an enklask eh eus 64% ag ar Vrezhonegerion a gred ema ar brezhoneg ur yezh didalvoud pe diamzeret.

termenadur ar c'hevredigezhioù-se. Ewid peb sevenadurezh e vo ar sevenadurezh arall un eston ataw<sup>75</sup>.

Mez ar garantez ewid ar yezhoù a c'hell boud an heni a vager ewid ar yezh a gomzer a-vihanig. Ha n'eus netra re vraw ewid ar garantez. Setu perag marse e vehe dibabet furmoù zo, kentoc'h eged furmoù arall ; setu penaoz e vehe, a nebeudigoù, savet ur yezh "keneduz". Skrivagnerion, prezegourion (predegourion iwe, en o amzer ataw), kazetennerion, tud ar mediaoù a-vremañ a c'hell roiñ he lec'h uhellañ *d'ar yezh ag an dibab-se*. En he c'heñver e vo ur feson ordinel pe boblel da gomz, hag er yezh boblel liveioù dishañval c'hoazh. Ha n'eo ket ar gerioù a ra diouwer ewid doareañ ar liveioù-se, zokén e brezhoneg. Gelloud a ra ur yezh boud *braw*<sup>76</sup>, *divalaw*, *chik*, *cheuc'h*, *flour*, *plijuz*... pe e-kontrel *displijuz*, *divourrabl*,... War dachenn ar brezhoneg e vez komzet a *drefoedach*, a *dunodo*, a *roazoneg*, a *wenedeg*, hag ouzhpenn a *wenedeg izel* hag a *wenedeg uhel*, ha ne liwan aze namaed beg ar wezenn ! Da VALLEE ha MORDIERN e rebeche HEMON boud "diseblant-kaer ouzh ar gened" a-fed brezhoneg (HEMON, 2008 : 56).

Mez ataw, ne vo meizad ar *yezh vraw* klewet gant komzerion desket namaed ur vodell e-mesk modelloù arall, na boud e vo bet roet dezhi ur statud dreist ar re arall (MARTIN, 1996).

Herwez MESCHONNIC (1997) ne oui ket an dud lâred perag e kavont braw ur yezh, mez n'hellont ket parraad ag henn lâred. Ne vehe kenedadur (*esthétisation*) ar yezh namaed ur variantenn heniennel, istorel pe sokial (p. 143). Kavoud a rae vil ar Mistrigened lod ag ar gerioù. En XVIved kvd e wele an dud brawitez ar galleg e emdroâdur e c'heriaoueg, e hellenekâdur ar gerioù, hag er gerioù newez-savet. Mez er XVIIved e klasker kentoc'h en em zijabliñ a grouadennoù an XVIved ewid lakaad war-wel ar c'halite, an arliw, ar c'hlanded. FURETIERE e kave dezhañ kement-mañ, pa geñverie ar yezhoù european :

---

<sup>75</sup> E HAGEGE, *L'homme de parole*, p. 298.

<sup>76</sup> « **Tud Baod, re-se a gomze braw a'kent !** » Henriette JULÉ, ganet e 1927 er Restoù-Vihan e karter Kergonan, parrez Langidig, 4 km a vourc'h Baod.



“La langue Latine est la plus générale ; la langue Française la plus douce ; la langue Espagnole la plus grave ; les langues Germaniques et Septentrionales les plus rudes”. (MESCHONNIC, p. 157).

Ha peb unan gant e santimant, evel Charlez QUINT c’hoazh, en dehe komzet galleg douzh ur mignon, alamaneg douzh e jao, italianeg douzh e vestrez, spagnoleg gant Doue ha saozneg douzh ar laboused (BEAUZEE) ; pe evel BONHOURS e kave dezhañ n’eus naturelloc’h na unanetoc’h yezh eged ar galleg, rag ewitañ e riot an Alamanted, e ezrevell\* ar Spagnoled, e hirvoud an Italianed, e c’hwitell an Anglezed : kavoud a rae dezhañ n’eus namaed ar C’halled ewid komz a-benn ar fin ! (in MESCHONNIC, *op. cit.* p. 157). É komz ag e yezh alaman en doa risklet HARSDÖRFFER war dachenn ar lirizm p’en doa skrivet :

“Taranal a ra [an alamaneg] gant an oabl, teurel a ra luc’had gant ar c’houmoul prim, flemmañ gant ar grizilh, c’hwitellad gant an awelioù, skumenniñ gant ar gwagennoù, trouzal gant ar potailhoù, dassoniñ gant an aer, tarzhal gant ar c’hanolioù (...), miaouiñ evel ar c’hazh, graganad evel ar waz (...). E peb tra a c’hell trouzal e komz an natur hon yezh alaman, setu perag e voe stank ar re o doa lâret nen doa ar c’hentañ den Adam gellet komz namaed hon parlant.”<sup>77</sup>

Ewid Rémy de GOURMONT e oa rekiz studial penaoz e c’hell ar galleg emdroiñ en ur ouarn e gened, da lâred eo e c’hlanded-orin. Kavoud a rae dezhañ e oa vil-abominabl ar gerioù estren, beteg boud mezh ar galleg zokén, pa ne oa ket gouest hennezh d’o lonkañ (“la honte de notre langue, si l’usure ou l’instinct populaire ne parviennent pas à les franciser”) (*op. cit.* p. 149).

Neuze e vo tu d’ar re a gar ar memez yezh da ouarn ar garantez-se ewite, evel ur sin etreze, sin o renk er gevredigezh ; petramant e klaskint lodañ o flijadur dre lakaad an darn vuiañ ag o c’henvroidi da dapoud ar live-yezh-se gant sikour ar Stad, ar Skol, pe ar skinwel, evel “Mestr CAPELO” a renas e-korf

---

<sup>77</sup> Georg Philip Harsdörffer, *Frauenzimmer Gesprächspiele*, 1641, meneget gant Umberto ECO, 1994 : 120. Klozadur faos, ewid ar Geltomaned d’an nebeutañ, peogwir e oa ar brezhoneg an heni oa, ar yezh a veze komzet er baradoez war an Douar !

ugent vloaz ur 5000 bennag a abadennoù ewid esplegañ finesaoù ar galleg d'an dud (CAPELOVICI, 1992 : 10).

Ar garantez-yezh ne spir ket nawazh ewid kas ar yezh pelloc'h. Herwez MESCHONNIC (*op. cit.* p. 50) ne vez ket komzet kement ag ar garantez-yezh namaed pa vez kendrec'het an dud ema ar yezh en enkadenn pe en arvar. Ha da venegiñ Michel SERRES :

“La langue française souffre, (...) entrée depuis vingt ou trente ans dans un moment de grande douleur.”

N'heller ket komz a garantez-yezh heb komz a vrawitez, anad eo, mez heb komz iwe ag ar pezh a ra disparded ar yezh garet : hec'h “ijin”.

#### 1.2.2.4. “Ijin” ar yezh

“Ijin ar yezh”, un droienn verket gant ar relijiusted, é toned a-bell deuz font latin ar lenneion, ewid BALIBAR ( 1985 : 149) ; diazez ar yezhadur normativel ewid DELESALLE & *al.* (1986 : 313). Ewid G. de TARDES (1898) e vehe an ijin stroll, ijin ar pobloù, fonksion ha narenn faktor ag an ijinoù heniennel<sup>78</sup>. Herwez MESCHONNIC ema *ijin* pe *garakter* ar yezhoù un arwez\* ag an debat kozh etre natur ha sevenadur, etre hennvoud\* hag istoer (p. 21). Kavet e vez e geriadur an Akademi (1835) : “Le génie d'une langue, le caractère propre et distinctif d'une langue. Le génie de notre langue est la clarté.” Ha kavoud a ra braw Michel SERRES “la prose abstraite, instruite et belle<sup>79</sup>.” Nawazh ne vez ket direbech an ijin-se, pa c'hell ar yezh sklaer moned d'an displanned, aratozh pe ged, evel e yezh ar ouizieion, langaj kuzh dre red ; pe e yezh an dud-a-lezenn, testennoù forc'helleg a c'heller roiñ meur a ster dezhe hag a laosk d'an heni karget ag o lakaad da arveriñ da ziviz ar pezh ar gar (MESCHONNIC, p. 184).

<sup>78</sup> Meneget in DELESALLE & *al.*, 1986 : 313.

<sup>79</sup> Michel SERRES, *Eloge de la philosophie en langue française*, Fayard, Paris, 1995 : 60.

Ewid MORVANNOU, é komz ag ar brezhoneg, n'eo ket ar skrid namaed ur skeudenn diliw ag ar yezh komzet, “ar gwir brezhoneg”, na gar ket ar gerioù abstret hag a vag e soñjoù gant skeudennoù fetiz. Ha beteg ober, kuit a soviñ ur yezh ken pinvidig ha ken azaou\*, ken keheladuz\*, daw eo dimp soviñ ar gwellañ anezhi : hec'h *ijin* dezhi he-hunan (1980 : 638-640).

“Peu de science bretonne éloigne de la langue parlée, beaucoup y ramène. Il n'y a pas à opposer un breton académique à un breton parlé, populaire, qui serait en instance de devenir un patois. Le breton écrit ne sera authentique que s'il respecte les tendances profondes qui se révèlent dans la langue parlée et s'il admet de s'y conformer.”

Mez marse n'eo ket *ijin* ar yezh namaed heni ar skrivagner, ar pezh a ra ag e yezh, daoust dezhañ boud dalc'het iwe ganti. Setu perag e oa daet Roland BARTHES da soñjal e oa ur menier faskouriezh gant ar yezh a-gaoz ma ne oa ket tu dezhañ da lâred e galleg *le lune*, *la soleil*. En e raog o doa sellet WHORF, SAPIR ha WEISGERBER dija douzh ar yezhoù evel toull-bac'h ar soñjal, ar pezh n'heller ket heuliañ pell<sup>80</sup>.

Daoust da se e sell lod ag an dud douzh ar yezhoù evel douzh un henvad priziuz, santimant gwiwikoc'h hiziw pa ya niver ar gomzerion war-zigresk.

#### **1.2.2.5. Yezhoù, teñzorioù da warantiñ**

Anad eo e taol muioc'h-mui a dud ewezh war treuzvewañ o yezhoù bremañ : ur sin a ziskouez emaint en dañjer mar n'eo ket en argoll. Intellectualed a ra o seizh gwellañ ewid interesiñ an dud gant o yezh, pa welont honnañ dilezet gete. E 1918 e skrive MEILLET e oa ar bed é voned war-du ur sevenadur namaedkén, tra ma yae niver ar yezhoù-sevenadurezh (*langues de civilisation*) war baotaad. Tuchant kant vloaz war-lerc'h e vez chalet ar yezhourion hag an UNESCO dirag niver ar yezhoù é voned da ged : diwar an 6700 yezh a vehe komzet hiziw c'hoazh e chomehe un degvedenn anezhe hebkén a-benn

---

<sup>80</sup> « La langue est un système de possibilités, pas un système de contraintes (...). Les langues s'apprennent, ce qui serait impossible si notre pensée était complètement déterminée par notre langue maternelle (...). De plus, traduire c'est transférer le «sens » ». Collectif, *Et le génie des langues ?*, Dir. H. MESCHONNIC, 2000 : 93.

achumant hon kantvlead. War a seblant e tahe problem ar yezhoù bihan pe vinorelaet da voud heni ar bed a-bezh : rag evel ur paourraad e vez sellet bremañ douzh steuziadur ar yezhoù, fasibl evel ma vez sellet iwe evel ur paourraad (ha zokén evel un dañjer ewid an denegezh), nebeutaad ar variusted viologel (loened ha plantaj). Er Gumuniezh European zokén e remerker pegen diaez eo da Stadoù zo roiñ ur statud deread ha peadra da vewañ ha da greskaad d'ar yezhoù bihan a zo dindan o beli.

Heb moned da glask pell, pa seller douzh stad ar brezhoneg hiziw, n'eo ket bastuz a-walc'h ar labour a vez graet gant tud a volontez vad ewid arrest an diwadañ. Het un toullad tud ne vo ket trawalc'h mar ne vo ket an het-se lakaet da arveriñ dre an ensavadurioù sokial ha politikel, gant bolontez ar boblañs. A-dra-sur, e vo rol ar galloudoù politikel a-bouez braz ewid dazont ar yezhoù, mez ne raint namaed gounid un tammig amzer hebkén, mar n'eo ket a-skoaz gante bolontez ar pobloù da ouarn o farlantoù e labourint. Mez a-liez, dilezet abaoe pell gant an ensavadurioù publik, en em gav ar yezhoù bihan gant meur a stumm, meur a vadumeg, meur a feson da gomz. Ha tu zo da weloud iwe ar liested-se evel ur skoilh douzh o saveteiñ. Tu zo d'en em c'houlenn, d'an nebeutañ, mar n'eo ket an normañ ur menier da ouarn o buhez dezhe, mar klasker o lakaad da voud yezhoù ar skol.

#### **1.2.2.6. Klozadur**

Gwir a-walc'h eo ne vez ket kavet jamez emglew sklaer ebed etre an oll dud ewid en em akordiñ war ar feson da sevel ha da zistagañ ar yezh. Namaed ewid yezhoù evel an esperanteg marse, ha c'hoazh gant ar re o deus-gi savet, rag goude ur pennad amzer e vezont desket pe evel yezh-vamm pe evel eil yezh, ha doned a raont neuze evel an oll yezhoù, kaset-degaset gant ar faktorioù liessort o laka da gemm gant an amzer. Setu perag e skrive LABOV (1973) ne vez ket termenet ur gumuniezh-yezh gant un emglew disklaeriet (esplegad\*) a-zivoud

implij elfennoù ar parlant, mez kentoc'h dre un ober a-stroll gant un teskad normoù<sup>81</sup>.

### 1.2.3. AN NORM HIZIW-AN-DEIZ

#### 1.2.3.1. Patrom ha patromoù

Afer an normañ a oa bet lakaet da dem ur c'hollok, e 1995 e Brest<sup>82</sup>. E aktoù ar c'hollok e skrive Bernadette WYNANTS (p. 64) e oa anad bremañ ewid ar sokiologiezh e oa meur a vodell a normativelezh er c'hevredigezhioù a-vremañ, da skwer e tachenn an deskadurezh pe heni ar familh.

Ne vez ket daet-mat hiziw enta diskoueziñ ur spered (re) normativel : ouzhpenn ur patrom zo war ar marc'had. E Brest e oa bet klasket memestra diforc'h etre tri meizad, enne ar ger kentañ anezhe newez-ijinet : **badumeg, standard ha norm.**

#### 1.2.3.2. Badumeg, standard ha norm

##### 1.2.3.2.1. “Badumeg” :

Gant LE DÛ ha LE BERRE e oa bet savet ar ger **badum**<sup>83</sup> (gallekaet e *badume*), diwar ar brezhoneg “**ba du-mañ**“ implijet stank e Breizh : “**C’hwil lar beure, med ba du-m’ vé lar’d mintin !**“ **Ba du-mañ** a sinifi **er gêr**. En e ster ledan ema ar *badumeg* (pe an *dumaneg*) ar yezh implijet er gêr, an heni a vez komzet er familh, gant an dud tost, re ar gêriadenn, ar barrez d’ar muiañ<sup>84</sup>. Parlant namaetañ ar poblañsoù “na yaent ket d’ar Skol ha n’o deveze ket tu da dostaad douzh ar Justis na douzh ar Galloud Politikel beteg an deirved

---

<sup>81</sup> « La communauté linguistique se définit moins par un accord explicite quant à l’emploi des éléments du langage que par une participation conjointe à un ensemble de normes. » LABOV (1973).

<sup>82</sup> Bet aozet gant ar GRELB, *Groupe de recherche sur l’Economie Linguistique de la Bretagne*, Faculté des Lettres Victor Segalen, BP 814 – 29285 BREST Cedex. Tem ar c'hollok : *Badume, standard et norme : le Double Jeu de la Langue*.

<sup>83</sup> Ober a ra Albert BOCHÉ gant ar ger **dumaneg**, tost a-walc’h.

<sup>84</sup> LE DÛ, J., LE BERRE, Y., *La Bretagne Linguistique*, 1996, Vol. 10, p.16.

Republik“. Ar badumegoù, setu ar pezh a oa bet studiet gant GILLIERON hag EDMONT en o *Atlas linguistique de la France* e deroù an XIX<sup>ved</sup> kvd.

Boud ema ar badumeg ur yezh na c'hell ket an estrañjourion tapoud biken, rag ne c'hell an den namaed henn tapoud en ur bloc'h pe henn ankouaad hag henn koll ! N'hell ket boud kelennet a-dammoù kempennet ez-pedagogel, evel er skol (p. 13). Ur yezh komzet eo, mez gant reolennoù memestra : reizhet e vez ar vugale, n'eo ket ewid sujañ douzh ur vodell dreist ha maezel (*externe*) mez ewid respetiñ un emglew lec'hel.

Tu zo da remerkiñ amañ n'eus ket diforc'h-framm ebed etre ar live kentañ-se (heni ar familh beteg heni ar barrez) hag ur live uhelloc'h : na boud e vez bihan kerc'henn buhez ar badumeg, e ra an dud enni evel ma raont e gwirionez en ur gerc'henn vrasoc'h. Rag m'ema ar gêriadenn ledannoc'h dija eged ar familh, hag ar barrez ledannoc'h eged ar gêriadenn c'hoazh. Mard eo gwir n'eus ket tu da gomz aze ag ur sistem reolennoù formalizet, e ra izili ar gumuniezh-se hervez reolennoù (diemskiant pe pas), ewid respetiñ ar « c'honsensus lec'hel ». Gant ar live-mañ iwe ema dija ar reolenn *er* yezh !

#### 1.2.3.2.2. Standard :

Ne ra ket Jean LE DÛ gant ar ger **rannyezh**, abalamour ma tave d'ur meizad difer ag ar yezh : heni, mojenneg, ar yezh-orin, bruzunet gant Doue da vare Tour Babel. Ewid ar yezhourion gentañ ne oa peb yezh namaed un tamm disrannet ag ar yezh-orin-se. Da heul, e peb yezh disrannet, ne oa ar rannyezh namaed ur furm distreset ag ar yezh disrannet-se, un trefodach e gwirionez<sup>85</sup>.

**Standard** eo neuze ar ger a vez implijet e-lec'h rannyezh. Klotiñ a ra ar **standard** gant furmoù skrivet, gouest da vout komprenet gant an dud war un

---

<sup>85</sup> « ... Il se trouve que *dialecte* est un héritage de l'époque où la monogénèse des langues n'était mise en doute par aucun linguiste. De ce point de vue, toutes les langues étaient donc des membres séparés de LA langue originelle ; tout parler différencié au sein d'une langue était une « forme dégénérée », une « corruption » de cette langue, supposée avoir été parfaite lors de sa naissance. Notre point de vue est exactement inverse : ce sont la force et la durée des institutions politiques et économiques qui réduisent la diversité linguistique initiale, au cours de longs processus historiques. » LE DÛ & all., 2005 : 89.

tiriad brasoc'h eged ar barrez pa ar c'hanton. Boud e vehe ar standard ur furn nobl, goudañvuz, respetet en iliz (er predegennoù, er c'hantikoù), en teatr. Produ ar gevredigezh he-hunan, dre reoliekadur badumegoù damdost an tachad, dukelezh pe gontelezh. Eleze ar gerioù **standard KLT vs standard gwenedeg**, da skwer. Standardoù iwe, herwez LE DÛ, parlantoù an domanioù braz ag ar Frañs : normanteg, pikardeg, lorreneg, anjeweg (en nord) hag iwe, er sud, parlantoù ar Daofine, ar Langadok, ar Provañs... Dre ma oa ar standard a live uhelloc'h eged ar badumegoù, ar yezh newez komzet gant klasadoù uhellañ ar gevredigezh – gant kloer, laiked na gomzent ket latin – e veze sellet doutañ evel ur sin ag ar bed modern (soñjomp pegen kreñv e vez dedennet ar bed a-vremañ gant ar saozneg). Dre ar standardoù eh eus bet krouet lizheradurioù ag an dibab en o amzer (e yezh *oil* kement hag e yezh *oc*). Mez pouez ar standard kreiz (heni ar roue hag e lez) a zegasas ur reoliekadur arall, a dapas e varr e grez Loeiz ar XIV : tu zo bremañ, a-dal ar grez-se, da gomz ag an norm.

#### 1.2.3.2.3. Norm :

Gouestlet e vehe an norm d'ar yezh unvan, kreizennet ha laik, ar ger diwezhañ-se termenet amañ ewid komz ag ur yezh dilezet ganti mister an orin hag ar c'hlanded, ewid fokuziñ e-kontrol war an tu pleustreg (*fonctionnalité*) ha war ar barfeted staget douzh palioù istorel ar groupad<sup>86</sup>. N'hell ket ur yezh sort-se boud, en he strollad, netra namaed “mad, pinvidig, resiz hag ollvedel”. Gouestlet e vehe ar ger **norm** d'ar yezh-Stad<sup>87</sup>. Lakaet e vez da arverin\* da gentañ gant ar Stad ha gant an oll savadurioù-Stad. E-kontrol d'ar standard, ger miret ewid yezhoù izelloc'h o live politikel, e vehe an norm ur produ “ensavadurel“, ur produ ag ar Galloud.

Boud ema an norm ur sistem yezhel, bet formalizet ar gerioù hag ar yezhadur ennoñ en un teskad reolennoù mad ewid peb den war dachenn ar Stad, ne vern pesort badumeg pe standard a vehe gantañ. Gant ar Skol, ar mediaoù, an ensavadurioù e vez ledannaet implij an norm.

---

<sup>86</sup> LE DÛ, J., LE BERRE, Y., *La Bretagne Linguistique*, Vol. 10, p. 18.

<sup>87</sup> BALIBAR, R., *La Bretagne Linguistique*, 1996, Vol. 10, p. 32.

Mez liez e ta an norm da voud evel un drapell : drezi en em wel ar gevredigezh, kuit a voud staget kentoc'h douzh o zu arouezel muioc'h eged douzh o foñksion reoliekaad. Hiziw-an-deiz e vez sellet douzh an norm petramant gant hirnezh (pa seblant moned kuit ur mod bennag da gomz, ar pezh a vez santet evel “*la désintégration du verbe*”<sup>88</sup>), pe evel douzh un dra dibouez, *une fiction dérisoire* (WYNANTS, 66). Mez na boud e chañch ar yezh a nebeudigoù, hag an norm ganti, e chom honnañ diazezet ataw war parlant klasadoù uhellañ ar gevredigezh, daoust d'ar c'hemmoù diharz a vez remerket war an termen, hir pe hirroc'h. Daoust da filmoù evel *L'esquive*<sup>89</sup> ha romantoù a beb sort a ro lec'h da parlantoù ar bannlewiù e chom leun a bouez ar yezh ofisiel.

E brezhoneg e oa bet savet ar Peurunvan-41<sup>90</sup> (ha diwezhatoc'h an Etrerannyezhel) evel standard modern dreist d'an daou standard KLT ha W : standardoù doare-skriv, mez standardoù sanañ iwe evel ma welimp. Dindan doned da voud an norm ema ar Peurunvan-41 hiziw, norm namaeti enta, n'eo ket a-gaoz d'ar Stad (en doa kentoc'h klasket lakaad ar Skolveureg da voud an norm en e amzer), mez dre ar skol, ha dreist-oll ar skolioù Diwan o doa divizet ober gantañ goude un tremen gant an Etrerannyezhel<sup>91</sup>.

### 1.2.3.3. Paridigezh ha disparidigezh

Termenet eh eus bet daou live ewid ar pezh a sell douzh ar c'heñver a zo etre an den hag ar yezhoù. Ewid LE DÛ ha LE BERRE ema rejistr ar *baridigezh* (*registre de la parité*) yezh an don-donnañ, mez iwe heni an nsted, heni ar vreudiezh, an ingalded, ar c'hengred. Da lâred eo ar badumeg fasibl e Breizh, yezh komzet hebkén, an « *etrezimp* », da lâred eo *tu tomm* ar yezh.

---

<sup>88</sup> SOUYRIS, 1969.

<sup>89</sup> *L'esquive*, film savet gant Abdellatif KECHICHE, France, 2003.

<sup>90</sup> Lakaad a ran Peurunvan-41 ewid termeniñ an doare-skriv a vez kavet d'hañch a-c'houde ar bloaz 1941, heni e grouidigezh. N'eo ket tonket an traoù da chomel digemm da virviken, ha tu zo da zegas un tamm gwellaad d'ar Peurunvan-4 (ar pezh a vez graet ewid gerioù zo). Ne gollhe ket e anw, zokén gat ur c'hempenn brasoc'hig, namaed e vehe chañchet ar "*millésime*", rag ur skritur unvan a jaoj d'an dud kentoc'h eged meur a unan, kuit a gavoud ennañ un tamm soupted.

<sup>91</sup> Un tremen berr-mat, amzer memestra da dennañ ur peg-sun glaz skrivet warnañ “**Diwan, ewid ar skolioù brezhoneg**”.



War live an *disparidigezh* (*registre de la disparité*) ema an norm, *tu yein* ar c'heñver douzh ar yezh, a glot gant naouturioù evel **aotrouniezh**, **efedusted**, **reoliekadur**, **ensavadur**. Diazezet eo war ar **skrid**<sup>92</sup>. Savet e vehe bet ar yezh normet hag an doare-skriv normalizet ewid respont douzh doberoù-eskemm ar gevredigezh newez ha kempleg (WYNANTS, *op. cit.*, p. 59)<sup>93</sup>. Pa gomz an den war ar live-yezh-se e vez tu d'henn gweloud evel un ezel ag ar vroad a-bezh.

Distag e c'hell boud an daou live-se, mez krediñ a ra WYNANTS e valañs an traoù etreze. Degas a ra un tu arall da weloud an traoù : ar **stumm** enebet douzh an **norm**. Ar yezh, evel rac'h an danvez sokial, en em stumm, hag ar stumm-se an heni eo zo pal ar gouiañsoù sokial. Diwar an eskemmoù etre an dud e sav ar stummoù, da lâred eo sternioù a-ziabarzh, stabil a-walc'h, beteg "strinkenniñ", tu dehe neuze d'en em engehentiñ en-dro.

Douzh lenn niverenn *Le Courrier International*<sup>94</sup> c'houestlet da yezhoù an Douar e weler pegen bedel ema ar stourm, ewid ar yezhoù da chomel bew : ataw e komzer a normoù, a standard, a gelenn. Seblant a ra d'ar badumegoù boud heb dazont ebed, dre ma c'hoari globalizadur ar bed enebte. Anez kavoud un tu adaz hag efeduz da dreuzveañ, ne vo ket mui anezhe kent fin ar c'hantvlead-mañ, hervez ar gelaouenn-se.

#### 1.2.3.4. Kael analizañ A-M. HOUDEBINE

Klasket he deus Anne-Marie HOUDEBINE urzhiañ kudenn an normoù<sup>95</sup>. Ewiti ema an norm ur "lakaad war-wel kengej yezhel ar gomzerion". Setu perag e komz kentoc'h a *c'halleg kengejuz* (*français convergent*) kentoc'h eged a *c'halleg standardekaet* (*français standardisé*), ha nebeutoc'h c'hoazh a *c'halleg standard* (*français standard*) (p. 243). Diskoueziñ a ra an dro-lavar *galleg kengejuz* kendegezhioù (*co-occurrences*) an arverioù a beb sort a ya

---

<sup>92</sup> Komzet e vez a *panlekt* pa vez savet an norm diwar unvaniñ fesoù skriv pe komz dishañval (KERGOAT, Kentel *Stummadur uhel Stumdi*, 2008).

<sup>93</sup> « Le nationalisme répond aux exigences de la société industrielle... La codification et l'uniformisation des langues prennent ainsi part à un mouvement d'homogénéisation culturelle essentiellement réalisé par un système éducatif national. »

<sup>94</sup> Hors-Série, Mars-Avril-Mai 2003.

<sup>95</sup> HOUDEBINE, Anne-Marie, *Imaginaire linguistique et dynamique langagière*, in La Bretagne Linguistique, Vol. 10, 1995 : 239-255.

d'ober ar yezh. Neuze, pa vez komzet a standard (a norm kentoc'h genimp amañ, sd. § 1.2.3.2., p.61), e ouier eh eus ag ur sell meta-yezhel, ha doned a ra hennezh da vout muioc'h-mui normativel. Ha da heul ar standard/norm-se e ta ur lizheradur d'henn souten, un *ofis* bennag par ha kar d'an Akademi, ur burew geriaouiñ hag eveljust yezhadurioù, geriadurioù, panellaouiñ hag ur c'helennadurezh karget a skignañ ar yezh hag ar feson da selloud douti.

Ewid analizañ stad an normoù-yezh er gevredigezh he deus HOUDEBINE savet ur skeul, enni tri live normoù : *normoù objektivel*, *normoù subjektivel* (*kevrivañ\**) ha *normoù subjektivel* (*dec'hmeg\* yezhel*). Moned a ra an normoù-se d'ober ar pezh a vez anwet ganti *dec'hmegad-yezh* ar gomzerion (*imaginaire linguistique*), da lâred eo ar c'heñver a zo etre ar c'homzer hag e yezh.

- An normoù objektivel. Enne e renker an *normoù statistikel*, o fal deskrivañ an arveroù : kengej, forc'hadur, tro-war-droioù... hag iwe an *normoù sistemeg* a vo tennet ag an normoù stadegel, da lâred eo ag an arveroù.
- An normoù subjektivel : ar c'hevrivañ\*. Daou dip normoù subjektivel zo, an heni kentañ anezhe é tennañ douzh ar c'hevrivañ. C'hoari a ra an naoutur-se war zaou live : heni an *emgevrivañ\** (da lâred eo ar striv a ra peb unan da beb termen ewid dibab e c'herioù dezhañ, e droioù-lavar, e donioù, ha peb elfenn a ya d'ober e gomz) hag iwe ar c'hevrivañ a c'hell peb unan ober diwar gomz e nesañ.
- An normoù subjektivel : an dec'hmegañ (pe an empentiñ). Er rummad normoù subjektivel-mañ e renk HOUDEBINE an *normoù kehentiñ* (ar stummoù a vez dibabet gant an dud ewid boud komprenet gant ar re arall), an *normoù ideel* (ar stummoù muiañ karet a-gaoz ma vezont santet "brawoc'h", a-gaoz ma sonont kàerroc'h... : yezh ideel an den e-hunan), an *normoù arveruz\** pe *c'hourc'hemennuz* ("Ne vez ket lâret evel-se...!").

Ur fenomen diabarzh eo ezdouridigezh\* an normoù e-kreiz ur gevredigezh bennag. Evel ma labourahe, er gevredigezh, ouzhpenn an normalizadur a za ag an arver (normoù statistikel), un emzalc'h olleg meta-yezhel\* (norm

gourc’hemennuz, ideel pe gehentuz) a yahe da norm namaeti, gourc’hemennuz a-grenn (“*LA norme*“, evel ma vez lâret liez c’hoazh)<sup>96</sup>. Herwez HOUDEBINE e vehe ar yezh produ ar c’honfliktoù, rag ma vez maget gante a-c’houde he c’hanedigezh. A gamp ar re daet ar maout gante e sav an norm, a-benn ar fin. Ar pezh a laosk da zivinoud, a-dreñv dremm inosant ar sistem, tu-gin teñwel ar c’hevezerezh (*l’envers obscur des concurrences*).

Gant ar gael-se e klasko ar sokio-yezhourion gweloud splannoc’h penaoz e c’hoari an normoù e peb live ar gevredigezh. Mez n’eo ket sur e vo kavet traoù stabil memestra, rag ewid lod ema “ankavaduz“ ar yezh : ar vuhez a zo enni (dre an implij a vez graet anezhi) he laka da voud diaez ha dibosubl zokén da stabillaad.

#### 1.2.3.5. Klozadur

Meur a vod zo da dostaad douzh an normoù enta. Ne vew ar re-mañ namaed a-gaoz d’an endro distabil a zo heni ar yezh, evel ur c’hlask a stabilded pe a urzh, heni spered mab-den. Ewid MARTIN (1996 : 6) eh eus, a-fed komz, normoù stadiadel\* (liveioù-yezh), normoù broadel (Frañs, Kebek, Afrika), normoù-rannvro (nord ar Frañs/kreizteiz ar Frañs ; Montréal/Gaspésie), ha normoù c’hoazh herwez ar liveioù sokio-micherel, an oad, live an deskamant, ha zokén plac’h pe paotr<sup>97</sup>...

N’eus ket tu da dermeniñ an norm, namaed pa gomzer ag ar variadur. Ur yezh komprenaduz pe denesâuz\* d’ar muiañ niver n’hell ket boud namaed ur variezon e-mesk variezonoù arall, hag hec’h istimadur un norm e-mesk normoù arall (ar pezh a vehe gwir ewid ar yezhoù brazstrewet d’an nebeutañ). Seblant a ra da v/MARTIN, ha gelloud a raomp boud akord gantañ, ema an normoù un

---

<sup>96</sup> « Tout semble donc se passer comme si la standardisation (norme statistique) se doublait d’une attitude épi- ou métalinguistique (norme prescriptive, fictive ou communicationnelle) tendant à s’imposer comme norme prescriptive (*LA norme*, comme beaucoup disent encore). » HOUDEBINE (1996 : 254).

<sup>97</sup> Ne gomz ket ar maouezi tre evel ma ra ar wazed. Da skwer eh eus bet remerket un diforc’h etreze e implij an “-eu”-dibenn newez e galleg (“*bonjour-eu !*”, “*arrêt-eu !*”) : 13,4% gant ar baotred ha 24,6% gant ar merc’hed (LEON, 1996 : 145).

talvoudekâdur hag un implij a variadurioù zo (pas an oll) e diabarzh frammoù ur yezh bennag<sup>98</sup>.

## 1.3. NATUR AR REOLENNOÙ

### 1.3.1. REOLENNOÙ GWELET EVEL FEDOÙ

Re skañv ha re subtil eo ar sonioù, herwez Samuel JOHNSON, ewid boud renet gant lezennoù, e ragskrud e c'heriadur ar yezh saozneg (1755)<sup>99</sup>. Nawazh eh eus tu da selloud douzh ar reolennoù evel douzh fedoù. Mard eo labour ar yezhadur deskrivañ ar reolennoù heuliet « pa gomzer evel ma komzer », ne sinifi ket e vehe gourc'hemennuz ar yezhadur-se : gwir eo ar reolennoù, e-korf ar yezh emaint, ha n'eo ket gant ar yezhadur e vehent savet, rag ne rahe ar yezhadur namaed kenstadañ ur fed.

#### 1.3.1.1. Reolennoù e yezh ar sinoù

Setu amañ ur skwer ag ar c'hronolektoù\* ha deuz rol ar re yaouank e emdroadur ar yezhoù<sup>100</sup>. Er bloavezhioù 1980 o doa ar yezhourion dizoloet ur yezh-dre-jestoù é c'henel : an LSN (*langage des signes nicaraguayen*). En ur skol ewid ar vuded, ouzhpenn ar pezh a zeskent er c'hentelioù, e kehente ar vugale kenetreze dre ur sistem-jestoù dezhe o-hunan, diwar un nebeud sinoù a beb sort o doa desket en o familhoù e-raog. Kent doned d'ar skol-se e oa peb krouadur gant jestoù dezhañ, ster gante en o familhoù mez pas er-maez anezhe. Mez kentizh tolpet er skol-se un niver bastuz a vugale hag a grennarded, gi o deus savet ur sistem emdroüz a sinoù hag a reolennoù gramadegel ewid

---

<sup>98</sup> « Les normes consistent en la valorisation et en l'utilisation de latitudes de variations à l'intérieur de structures appartenant à une même langue. » (1996 : 6).

<sup>99</sup> Meneget gant J. MULLAN, *Le Courrier International*, HS, 2003 : 23.

<sup>100</sup> « Dre ar yaouankiz an hini e teu un tamm mat eus al lusk emdrein a zo e diabarzh kement yezh a zo : amprest pe krouidigezh gerioù nevez, troioù-lavar ijinet, distagadurioù o kemm, frammoù morfosintaks o tiforc'hañ... » Lukian KERGOAT, *Kentel Stummadur uhel Stumdi*, 2008.

liammañ an oll sinoù-se en ur mod sinifiuz<sup>101</sup>. Ann SENGHAS, goude boud studiet emdroadur ar lavar-jestoù-se, he deus remerket rol ar re yaouankañ, hag ewiti ema ar vugale-se dreist-oll a grou ar lavar : gi eo a sistemateka an LSN hag henn laka da voud reoliekoc’h. Na boud n’eo ket Dan SLOBIN tre a-du ewid diduziñ rol pennañ ar re yaouank-se, eh asant memestra lâred e vez astennet ar reolennoù ha stabillaet normoù ar gumuniezhañ gante. D’an nebeutañ e c’hellomp lâred n’eo ket er lavar distilhet hebkén enta e vez kavet reolennoù. Kent normañ e weler reolennoù : fedoù int, a c’heller stagañ douzh *urzh* ar bed, pa vehe ar *c’haos* un diouwer a reolennoù.

### 1.3.1.2. Meizad deskrivuz ha frekañs

A-zivoud an norm en deus CANGUILHEM kenniget diforc’hiñ ar meizad deskrivuz (*concept descriptif*) diouzh ar meizad normativel (*concept normatif*). Klotañ a ra ar meizad deskrivuz gant ar frekañs : un afer a statistikoù eo en ur mod. Diskoueziñ a ra an norm deskrivuz ar pezh a zo normal, da lâred eo ar pezh a zo reolieg, a zegouez aliez. Sklaer eo eh eus traoù reolieg en arver, mez deskrivañ an arver hebkén ne vehe ket trawalc’h, rag “ne vez ket tennet an norm ag ar grennenn : moned a ra an norm d’ober ar grennenn“.

Bastuz e rankehe boud neuze studial ur c’horpus bennag (korpus é talvezoud amañ ur rummad frazennoù tennet ag an arver). Mez dre analizañ ar fariouyezh e weler n’heller ket ober evel-se. Rag remerkiñ ur fari pe ur faot (ur mank) a c’houlaka e anavezet ar reolenn ha penaoz difariañ. Ha n’eo ket un afer a parlant chik hebkén, mez iwe a gomprenadur. Da skwer pa lâr ur c’homzer : **“Droug ’m eus da’m \*moreb ! “** Ewid kompren ar pezh a faote

---

<sup>101</sup> « ...Mais dès qu’une masse critique d’enfants et d’adolescents ont été réunis, ils ont créé un système évolutif de signes et de règles de grammaire pour relier tous ces signes de façon significative. » Herwez L. HELMUT, *Le Courrier International*, HS, 2003 : 18-19.

dezhañ lâred hag henn kerreizhañ, e ranker anavezoud ar yezh ha klask douzh petra stagañ ar **\*moreb-se**<sup>102</sup>. A-hend-arall e vo digomprenaduz.

### 1.3.1.3. Reolennoù ha sintezenn ar c’homz

Problem ar reolennoù a vern kalz ewid sintezenn ar c’homz. René CARRÉ hag e golleged o deus diskouezet e oa red sevel korpus ar reolennoù rekiz ewid kenaozañ ar c’homz en ur yezh bennag : rag rekiz-groñs eo gouied war besort reolennoù sevel ar programoù-stlennerezh.

Diskouezet o deus an diforc’h a zo etre ar yezhoù : lod a c’houlenn un niver kalz brasoc’h a reolennoù eged lod arall. Ewid ar saozneg, da skwer, e ranker kaoud ur c’horpus 500 reolenn ewid deskrivañ 20 000 ger diazez, pa ranker kaoud 50 reolenn hebkén ewid ar spagnoleg standard (1991 : 203). Un damskeud aze marse a gempleget ar yezhoù...

## 1.3.2. AR PENNREOLENN A EMSKIANT

### 1.3.2.1. Ur reolenniñ diemskiant

Herwez Philippe CARR e vez jeneralizet gant ar gomzerion ar fedoù-yezh bet desket gante, mez en ur mod diemskiant. Evel ur “lakaad dindan reolennoù” e vehe gwelet an doare-frammañ-se gant ar yezhourion<sup>103</sup>. En ur feson diemskiant enta e vehe tapet “plegoù” a-vihanig gant an dud, hag ar plegoù-se lakaet da reolennoù goude, gant studierion pe arsellerion ar yezh. Ar pezh a gadarn RECANATI (1981) pa lâr eh eus e peb empenn reolennoù zo ag an c’hoari-komz, a zo kumun d’an oll, hag ogozig dibosupl d’an dud o mestroniañ. Ewid MARTINET (1960) n’heller ket komz a foñksion an

---

<sup>102</sup> **\*Moreb** [morep], sanadur lec’hel ewid **moereb**. Mez amañ e faote d’ar c’homzer implij ar ger **morzhed**, sanet [morhet] e W.

<sup>103</sup> “Speakers, in acquiring their native languages phonologies, unconsciously acquire generalizations, which the phonologist seeks to express explicitly in the form of rules (...) The speaker’s unconscious phonological knowledge is highly structured and remarkably systematic.” CARR, 1993, 30.

elfennoù-son namaed pa za ar re-mañ diwar ur choaz graet gant ar c’homzer. Da skwer, e galleg, un hirraad hag ur c’hreñvaad graet da /p/ ar ger *impossible* er frazenn ”*Cet enfant est impossible !* “ a c’hell boud komprenet evel un imoriñ gwir pe feintet. Mez ouzhpenniñ a ra MARTINET c’hoazh :

“On doit signaler l’existence de traits phoniques qui renseignent autrui, que celui qui parle le veuille ou non, sur sa personnalité, sa place dans la société ou sa région d’origine, et qui ont droit de figurer dans une description phonologique dans la mesure où ils n’ont ces valeurs que dans une communauté linguistique particulière : en français par exemple, il serait bon de signaler l’existence pour le phonème /r/ de deux variantes principales, l’une dite « grasseyée » propre aux milieux urbains, et l’autre dite « roulée » encore très répandue dans les campagnes, bien qu’en régression .» (p. 62).

Ar soñj-se a gaver e geriadur An Here, dindan **Doare-komz**, er skwer roet-mañ : « **Diouzh he doare-komz e ouzer ned eo ket ac’hanen.**» (p. 319).

### 1.3.2.2. Ar bennreolenn a emskiant

AUROUX nawazh (1998) en em c’houlenn hag-eñv e c’hellehe ur reolenn nad eo ket anavezet gant un den bennag, ur reolenn na c’hellehe ket zokén boud komprenet gant an den-se, boud ur reolenn ag e emzalc’h yezhoniel. Disklaeriañ eh eus ag ur reolenn a zepantehe euz an emskiant pemdezieg a c’hell an den kaoud anezhi. Padal, ne sinifi ket e vo an den-se sujet douzh ur reolenn, daoust dezhi boud bet enoñsiet, ha peb unan a anav reolennoù yezhadur a vez torret gantañ ingal : daoust ha n’int ket mui reolennoù ewid-se, a c’houlenn AUROUX ?

Mez boud ema ar fari « dianaoudegezh ar reolenn e-raog boud he zorriligezh » (p. 242). Ewid AUROUX e vo graet ur fari-yezh (*erreur*) pa c’hello ar c’homzer kerreizhañ diouzhtu hag e-hunan, da skwer gant ar *lapsus*. Mez ne vo ket fari ebed pa vo dianavezet ar reolenn pe torret esprez-kàer. Setu perag e c’hell an den nac’hañ boud graet ur faot-yezh (*faute*) dre lâred e oa ur lapsus, pe dre lâred e heulia ur reolenn arall. Rag ne vehe ket faot ebed, mar gelleher

diskoueziñ eh eus ur reolenn arall. Anavezoud ar reolenn pe ged a vern kalz neuze herwez ar sav-boent-se.

Setu perag e veneg AUROUX “*ar bennreolenn a emskiant*“ (“*principe de conscience*“) pa gomzer ag ar reolennoù. Boud e vehe ar c’homz un emzalc’h a zo dindan beli reolennoù emskiant, un dra hag a gerzh gant ar moral (“*qui marche à la morale*“). Klotañ a rahe neuze ar reolennoù (hag ar farioù graet, da lâred eo pa vez lâret un dra bennag «*direizh*») gant an anaoudegezh a c’hellehe ar c’homzer kaoud anezhe.

D’ar sav-boent-se nawazh eh eus tu da arbenniñ ar fed-mañ, degouezhet er bloazioù 1970 : ur mab-bihan é c’houlenn gant e vamm-gozh, goude m’he doa honnañ goulennet gantañ moned da glask «*ar sailh wenn*» : «**Lâred a rit ar sailh wenn ? Ne lârit ket ar sailh gwenn ? Perag ?**» Ha souezhuz respont ar vamm-gozh : «**M’oar-me ? Lârit ar sailh gwenn mar karit !**” Heuliañ a rae ur reolenn heb gouied dezhi ar perag, ha ne seblante ket dezhi e vehe bet ur fari lâred en ur mod arall. Ha nawazh, hi a veze kustum da lâred **ar sailh wenn** evel ma lâre iwe **ar sailh vraz**, pa lâre nawazh **ar c’hog gwenn** hag **an den braz** (evel an dud tro-dro dezhi). Tu zo enta d’en em c’houlenn hag-eñv e c’hoari aze ar pennreolenn a emskiant c’hoazh...

### 1.3.2.3. Ar reolenniñ : e natur ar lavar ?

Rag petra soñjal a arnodad Morten CHRISTIANSEN, en doa pleustret war an deskoni prantadel (*apprentissage séquentiel*) ? Aozet en doa programoù stlennerezh (graet *agents neuronaux* anezhe, *ajantoù neuronel*), ewite da analizañ rannadoù traezoù pe aktoù, da gavoud an elfennoù distag a oa enne. Roet en doa dezhe 32 reolenn sintaksel dishañval, ha diwar-se o doa ar programoù-se desket komz ! Ne vehe ket a-bouez neuze kaoud ur c’houested sintaksel enganet ewid gelloud kehentiñ a-drugarez d’ar parlant : trawalc’h kaoud barregezh en deskoni prantadel<sup>104</sup>.

---

<sup>104</sup> « Ainsi, disposer d’une capacité syntaxique innée n’est pas fondamental pour communiquer au moyen du langage. Il suffit simplement d’être doué d’apprentissage séquentiel. » *Le Courrier International*, HS, 2003, p. 15.



Gant ar memez spered en doa Simon KIRBY klasket lakaad e brogramoù da groueñ o yezh dezhe o-hunan, ar rummadoù yaouankañ ag ar programoù é teskiñ komz dre chelaou douzh ar re goshañ. E penn kentañ an arnodad e oa bet krouet ur yezh gant peb ajant, ur yezh komprenet gantañ ha gantañ hebkén. Mez goude meur a rumm e oa daet ar gumuniezh d'ober gant ar memez reolennoù, simpl hag olleg<sup>105</sup>. Ur skeudenn, simpl marse c'hoazh, ag ar pezh a zegouezh e kumuniezhoù denel...

### 1.3.3. KOMZ AG AR YEZH

#### 1.3.3.1. Ar finalded hag ar foñksion

Un diforc'h zo d'ober etre ar pezh a zo komprenaduz hag ar pezh a zo reizh (kerreizh\*). Lod ag ar reolennoù, goude boud torret gant ur c'homzer bennag, a resev o c'hastiz diouzhtu : ne vez ket komprenet an den. Troioù-lavar zo, nawazh, a gomprenan, daoust din o c'havoud direizh ; e-kontrel, boud eh eus troioù-lavar reizh na gomprenan ket.

Pouezañ a ra FREY (1929) war ar *finalded* a zo er lavar. Ewitañ e weler ar finalded en termenadurioù o-hunan : n'eo ket ar yezh netra kén namaed ur sistem benvegoù esteurel (*moyens d'expression*) a-benn da dreuzkas ar soñjoù ; n'eo ket ar frazenn netra kén namaed ur varnadenn da vout treuzkaset d'ar chelaouer ; nag ar sin netra kén namaed un doare-ober a-benn da dreuzkas ur sinifiañs bennag d'ur chelaouer. Finalded ar yezh a vehe neuze treuzkas mesajoù.

Ar reolenn a c'hell sinifioud “ober ar pezh a zo mad”, hag ar mad boud termenet evel ar pezh a zo diouzhtu ar reolenn. Dre m'ema ar yezhadur arz ar

---

<sup>105</sup> *Idem*, p. 15.

c'homz braw<sup>106</sup> ne glask ket anezhañ lâred fedoù, mez lâred ar pezh a zle boud, ar pezh a zleer ober pa gomzer. Liammet eo an norm gant ar finalded<sup>107</sup>.

FREY a ziforc'h-groñs ar reolenn-yezhadur, a zo diwar ziviz, a-zoc'h ar lezenn-yezh, a zo naturel. Stagañ a ra ar reolenn douzh an norm hag ar lezenn douzh ar foñksion. Boud ema ar reolenn c'hramadegel a-stur gant ar lezennoù sokial, tra m'ema ar lezenn-yezh a-stur gant lezennoù ar sokiologiezh. Tu zo da dorriñ ar re gentañ (ar reolennoù gramadegel, enne kastizoù stard pe startoc'h), mez didorraduz eo an eil re. Da heul e vehe ar yezhadur normativel ur c'houiañs deskriuz tra ma vehe ar yezhouriezh foñksionel unan espleguz.

FINALDED	FOÑKSION
<p><b>Reolenn c'hramadegel</b> savet diwar ziviz (torraduz) Normoù Domani ar yezhadur normativel (deskriuz) a-stur gant ar lezennoù sokial <u>Skwer</u> : roll ar pezh a zo reizh pe direizh.</p>	<p><b>Lezenn-yezh</b> a zo naturel (antorraduz) Fenomenoù-yezh Domani ar yezhouriezh foñksionel (espleguz) a-stur gant lezennoù ar sokiologiezh <u>Skwer</u> : lezennoù fonologel.</p>

### 1.3.3.2. An oberiantiz meta-yezhoniel

Tu zo da dostaad ar bennreolenn a emskiant douzh ar pezh a vez graet anezhañ ar *meta-anavoud* (pe *hondanavoud métacognition*), “cognition about cognition“ (FLAVELL, 1981), da lâred eo ar c'houiañs pe an ober anavoudel a

<sup>106</sup> Gwezhall e sinifie ar ger *grammaire* “ Ensemble des règles à suivre pour parler et écrire correctement une langue. » Petit Robert.

<sup>107</sup> « Il y a fixation de la norme à partir du moment où il y a finalité. » CANGUILHEM, meneget gant AUROUX, *opus cit.*

sell douzh un arwez bennag deuz un ober anavoudel, pe a gontroll anezhañ<sup>108</sup>. Diskoueziñ a ran un abilded meta-anavoudel, a lâr FLAVELL, pa ouian ema diaesoc'h din deskiñ A kentoc'h eged B ; pa za din da remerkiñ e rankan gwiriekad diw wezh C e-raog boud sur eh eus ur fed gwirion anezhañ ; (...) pa santan e vo gwell din notiñ D war ur follenn bennag ewid na ankouaad anezhañ... Un ober emskianteg eo.

Komz ag ar yezh zo lodeg bar meta-anavoud : ar v/meta-yezhouriezh eo. Boud eh eus ewid-se ur v/*meta-yezh* (*hondyezh metalangue*), he fal namaetañ deskrivañ ar yezh (BENVENISTE, 1974). E peb yezh naturel eh eus ur veta-yezh. Na boud ema “komz ag ar yezh“ un oberiantiz emskianteg iwe, boud eh eus oberiantizoù diemskiant, graet *épilinguistiques* anezhe, pe c'hoazh, herwez CHOMSKY, anaoudegezh taw (*connaissance tacite*), evel da skwer ar reolennoù-yezhadur arveret gant an oll. Dre ar veta-yezhouriezh e c'hell an den deskrivañ ar yezh, mez iwe kontrolliñ ha chañch traoù zo en e feson d'hec'h implij.

D'an oad a bemp bloaz bennag e tiskouez ar vugale un emskiant meta-yezhel (LIBERMAN & al., 1974), mez abred-mat e kaver mammenn an emskiant-se, rag MEHLER (1986) en deus diskouezet e ra bebigoù pemp dewezh hebkén un diforc'h etre yezh o mamm hag ur yezh arall (GOMBERT, 1990, 31-35).

### 1.3.3.3. Gramadegded, degemerusted

Herwez CHOMSKY, diwar un niver finit a reolennoù, e c'hell an den produiñ ha kompren niver infinit frazennoù e yezh. Mez tu zo iwe d'an den sevel barnadennoù e-keñver ar frazennoù-se, herwez kriterioù a *c'hramadegded* (*grammaticalité*) pe a *zegemerusted* (*acceptabilité*). Diwar DUBOIS (1968) e roan amañ skwerioù a gement-se :

Skwer 1 : « **Ema ar paotrig é kousked ar soubenn**” : frazenn *dic'hramadegel*, é voud m'ema didre ar verb **kousked** (n'heller ket kousked un dra bennag).

---

<sup>108</sup> “La connaissance ou l'activité cognitive qui concerne ou contrôle un aspect quelconque d'une activité cognitive”. Meneget gant Sylvie LUCAS, *Etat des structurations métacognitives*. (<http://metacognition.com.ifrance.com/Partie1.html>).

Skwer 2 : « **Ema ar paotrig é lenn ar soubenn** » : frazenn *dibouell* (*anomale*), reizh e-keñver ar yezhadur, mez dre m'eh eus bet dibabet *fall* ur ger, n'eo ket mui ken reizh anezhi.

Skwer 3 : « **Ema ar paotrig é tebriñ ar soubenn gant ur morzhol** » : frazenn c'hramadegel, mez *andegemeraduz* ewid ar pragmatik.

Skwer 4 : « **Kavoud a ra mad ar paotrig ar soubenn** » : frazenn c'hramadegel, a c'hell boud faos e gwirionez (marse ne gav ket mad ar paotrig e soubenn).

Gouest eo an darn vrasañ ag ar vrazarded desket barniñ hag-eñv ema gramadegel frazennoù prezantet dezhe dre gomz, hag ouzhpenn-se barniñ o degemerusted semanteg (steroniezhel). Adal ar skol-vamm e remerker ganedigezh ar varregezh-se gant ar vugale (HAKES, 1980). Mez red eo gortoz an oad a c'hwec'h pe seizh vloaz ewid gweled barnadennoù a seblant diskoueziñ e vez diforc'het end-emskianteg ar pezh a zo kerreizh pe zigerreizh a-fed ar sintaks.

#### 1.3.4. KAELOÙ AR YEZHOURION

##### 1.3.4.1. Teorienn ha modell

Sell ar c'houiañs war ar fedoù a c'hell iwe diskoueziñ diw gategorienn nad int ket bet meneget c'hoazh : *an deorienn* hag *ar vodell* (sng *pattern*, bzg *patrom*). Herwez ROSSI (1999, 10) ema an deorienn ur c'horfad doktrinoù savet tro-dro da dermenadurioù, pennreolennoù ha kennigoù. Padal e vehe ar vodell ur gopiadenn abstret ag an dra a zo da zeskrivañ, he fal dizoloiñ framm diabarzh an dra-se. Ewid-se e ra ar vodell gant aksiomoù (*primitives* ewid ROSSI, hag a vehe simpladennoù yezh an deorienn), ha reolennoù espleguz a savidigezh (*règles explicites de construction*) pe a ziougan (*prédiction*). Simplaad beteg (pe dre) an aksiomoù a sinifi e vo formalizet, roet furn, d'ar meizadoù ha d'ar c'hategoriennoù.

Neuze n'eo ket ar vodell un dra digemmaduz. Tu zo d'he c'hemm bepred mar da ar fedoù eneb douzh ar reolennoù. Douzh an tu arall e c'heller gortoz iwe ma vo maget ha ma vo kemmet an deorienn gant ar vodell.

### 1.3.4.2. Renkañ ar reolennoù

Ouzhpenn mod analizañ HOUDEBINE (sd. § 1.2.3.4., p. 65) eh eus tu da renkañ ar reolennoù, war ar mod pragmatik, e tri rummad (BAYLON, MIGNOT, 1991, 231) :

- *ar reolennoù divariant*, na vezont ket torret biskoazh gant ar gomzerion (“*Aucun francophone ne dit “\*on venons“ ni “\*nous vient“*”, ha brezhoneger ebed a-vihannig ne lârehe kredabl “\***tri dud**“ na “\***ni a zebront**“).
- *Ar reolennoù damzivariant*, a c’heller enoñsiañ en un doare gourc’hemenn, rag torret e vezont aliez. Koulskoude eh eus tu da lenn ar fari, d’henn diskodiñ, e-keñver renk sokial ar c’homzer (*Ne dites pas “je vais au dentiste“ !*, e-lec’h ma vez barnet an dro “*au dentiste*“ evel unan bobl).
- *Ar reolennoù valigant*, pa gaver ouzhpenn ur furm é keveziñ war ar memez tachenn, ha pa vez tu da implij unan pe egile ingal, herwez an degouezh.

### 1.3.4.3. Korpusoù ha skwerioù

#### 1.3.4.3.1. Dibabiñ :

Dre vraz e vez pozitivel an arguzenniñ yezhel : gant ar *skwer* e vez kadarnaet ar reolenn. Ha gant an namaedennoù iwe pa vez anezhe, ha pa ne vezont ket re stank. Mez ne vez ket biskoazh choazet ar skwerioù ne vern penaoz. Komz a raer a barfeted ar modelloù (PEYROLLAZ & *al.*, 1954), pe a zenesausted\* hag a skeudennausted\* ar skwerioù ewid an oll lennerion, ewid ar re-mañ d’o c’hompren diouzhtu (URIEN, 1987).

Kustumet e vez ar yezhourion da dennañ o c’horpusoù pe o skwerioù ag ar skridoù. Er geriadurioù, ouzhpenn an troioù-lavar renablet gant ar geriaouer, e vez roet liez frazennoù-skwer bet skrivet gant skrivagnerion, kentoc’h brudet, merket o anwioù da heul.

Mez ne vez ket gwir ataw, e heni An Here da skwer n'eo ket bet meneget skrivagner ebed. Diouzh an tu arall e soñj yezhadurourion zo emaint arverion evel ne vern piw ha ne welont ket perag ne vehe ket tu dezhe d'ober en o oberennoù gant o skwerioù dezhe o-hunan (GARDES-TAMINE, 1990, p. 6).

Er labour-mañ em eus graet gwezh gant ur c'horpus tennet a levroù brezhoneg ha gwezh, dreist-oll ewid fichenoù ma enklask er skolioù, gant gerioù, troioù-lavar pe frazennoù choazet ganin em brezhoneg anavezet.

#### 1.3.4.3.2. An eneb-skwerioù :

Un dra a zo d'ar yezhouriezh he-hunan eo an *eneb-skwerioù*, disklaeriet evel direizh. ARISTOTELES dija en doa graet gete (AUROUX, 1998). Kavet e vez eneb-skwerioù er formulenoù evel “**lârit x, na lârit ket y**“, e-lec'h m'ema **y** un eneb-skwer. Bremañ e vez kavet ur bochad eneb-skwerioù en oberennoù a-zivoud ar yezh, ha merket e vezont neuze gant un asterisk dirag ar ger (\*). Da gentañ (1843 war a seblant<sup>109</sup>) e verke an asterisk ur furm nann-testeniekaet, mez ur furm a c'helle boud bet, ur furm a c'heller soñjal e oa bet anezhañ. Ne dalveze ket neuze an eneb-skwer a gomzomp anezhañ amañ. Hiziw e verk an asterisk “un dra dibosubl, a c'hell boud testeniekaet, mez hag a zo rac'hwizet gant an norm.”

Red eo lâred ema an eneb-skwer un direizhter, narenn ur skwer direizh. Un dra abstret eo ar skwer ; n'hell ket boud un enoñsiad anezhañ, dre ma vez roet er-maez ag ar c'hontekst. Choazet e vez ewid skeudenniñ ur fenomen, ha da heul, ur reolenn, ar gwellañ ma c'hell. Setu perag ema red dezhañ boud simpl.

#### 1.3.4.3.3. Foñksion normativel ar skwerioù :

Ne vez ket ataw newesaet ur c'horpus-skwerioù pa vez kempennet un deorienn a-newez : abegoù ideologel a c'hell c'hoari<sup>110</sup>. Mez pa vez kemmet penn-da-

---

<sup>109</sup> AUROUX, 1998, p. 95, é venegañ KOERNER, 1975.

<sup>110</sup> Gwir ar c'hontrel iwe : tu zo da lemel skwerioù zo ewid abegoù ideologel, evel bet gwelet gant ar skwerioù *gwall-duet* geriadur brezhoneg An Here, kentañ moulladur, a-sort gant « *Ne vo eus Breizh da vat nemet pa vo distrujet ar galleg e Breizh* » AH, 1995, p. 122.

benn an deorienn e vez chañchet korpus ar skwerioù iwe. Dre ma vez dibosubl taolenniñ an oll fenomenoù ha dre m'ema ar skwerioù modelloù war-un-dro, en deus o dibab ur foñksion normativel e-keñver implijerion ar yezh (AUROUX, 1998, 193). Setu perag e c'hell an den boud rebechet dezhañ degas ur sav-boent normativel pa gennig ur c'horpus skwerioù, daoust d'ar re-mañ boud prezantet evel fedoù-yezh.

#### 1.3.4.4. Klozadur

Evel bet gwelet uhelloc'h e c'heller lâred eh eus normoù emskianteg ha lod nad int ket. Studial ar yezh ne c'hell ket 'maed degas muioc'h a emskiant er gomz dre ma tenn ewezh an den war ar sujed. Gwelet hon eus iwe ema ar reolennoù-yezh traoù a c'hell an den torriñ. C'hoari a ra ar c'homzer gante, a-benn ar fin, a-ratozh kàer pe ged, mez biskoazh gant an oll war-un-dro. É komz ag ar liamm etre skritur ha yezh komzet e veneg LUCCI<sup>111</sup> ar farioù, a zo eveltañ ur lusk difer, ur lusk *heniennel* mez iwe ur lusk *stoc'het (bloket)* : ne chom roud ebed anezhe er yezh voutin, ne vezont ket degemeret gant an oll ha chomel a raont heniennel, heb dazont ebed, ewid an darn vuiañ anezhe<sup>112</sup>. Setu perag, é voud m'ema ar gomprenidigezh pal pennañ ar c'homz, e chom stabil a-walc'h patromoù ar yezh gant an dud.

## 1.4. AR YEZH, UR BENVEG KUMUN

Rankoud a ra ur benveg kumun boud aez da implij ewid an oll re o dez dober anezhañ. Dreist d'an argemmoù a vez kavet ataw er yezh e c'heller selled douzh honnañ herwez sav-boentoù dishañval : doberoù an eskemmoù ekonomikel ha sokial a sachu war un unvanidigezh *de facto*, ar galloud politikel a c'hell lakaad da bal gommiñ ar pezh nad eo ket ar yezh ofisiel, ar

---

<sup>111</sup> LUCCI, Vincent, *La dynamique phonographique actuelle dans l'orthographe française*, p. 113-126, in CHEVROT, 1996.

<sup>112</sup> Ewid an darn vuiañ anezhe, mez pas ewid an oll, ar pezh a zo trawalc'h ewid leuskel ar yezh da gemm a-nebeudigoù. Setu iwe perag e kennew an daou santimant war-un-dro : heni stabiled ar yezh ha heni he emdroadur diharz.

sol-veur e-kontrel a c'hello moned pizh gant un deskriadur ag ar yezh "evel m'ema", gant liessorted he rannyezhezhoù (pe standardoù) dishañval, gwelet evel mammenn pinvidigezh ar yezh-se.

#### 1.41. AN UNVANIÑ : UN DOBER EKONOMIKEL HA SOKIAL

Doberoù an dud a veze kustum da vevañ war domanioù strizh a-walc'h ne oant ket doberoù an dud a-vremañ a vew e kelc'hioù liJORROC'h, gant ar skol, ar mediaoù, ha gant an oll geveladurioù tro-dro dezhe, a-sort ma en em gav ar re limitet en o c'hêriadenn pe zokén en o rannvro lakaet a-gostez gant an oad, an dilabour, ar feson da vevañ. Herwez LE DÛ & al. (2005 : 9), n'eo ket ar yezhoù, braz pe vihan, traoù er-maez ag ar vuhez : boud ema peb yezh rezultad keñverioù sokial liammet-stard gant redioù ar labour hag an eskemmoù ekonomikel ha sevenadurel, ha bihannaet e vez liested-orin ar yezh gant nerzh ha padusted ar savadurioù ekonomiko-politikel a-hed an istor. Herwez LE DÛ & al. c'hoazh, n'eo ket ar yezhoù benvegoù kehentiñ hebkén, mez ouzhpenn-se benvegoù arouzel gouest da sevel identelezhioù a-liezlam (*identités gigognes*, p. 7) : yezh ur gêriadenn enebet douzh heni ar gêriadenn-nez, yezh ur rannvro bennag enebet douzh heni ar rannvro dost, yezh ur vro bennag enebet douzh yezh ar vro en tu arall ag an harzoù... E diabarzh an domani e vez gwelet daou lusk kontrel é c'hoari : diouzh un tu ur liez braz-kenañ a fesonoù da gomz, diouzh an tu arall ur striv hirbad ewid sevel ur yezh kumun. Tra heverk, kentañ eo ar liez a-fed yezh<sup>113</sup>, ha n'eus namaed gant prosesuzoù hir ha kempleg e c'heller nebeutaad ha simplaad ar liez-se.

E melting-pot ar vuhez en em vesk troioù, sanadurioù, gerioù enta beteg ober ur yezh a vez komprenet gant peb ezel ar gumuniezh, ha pa vehe hebkén ewid an doberoù-diazez pemdezieg. Mez treuzet e vez ar gevredigezh gant nerzhioù

---

<sup>113</sup> LE DÛ & al. , 2005 : « *Il est plus que douteux qu'au milieu du 1er siècle avant Jésus-Christ les divers parlers gaulois éloignés les uns des autres aient été mutuellement compréhensibles. Aucune institution politique ou culturelle n'avait alors le besoin et les moyens de diffuser un standard linguistique dans l'ensemble de la population et sur tout le territoire de la Gaule.* » (2005, 73).



arall nad int ket re an ekonomiezh hebkén hag a c'hell degas un c'hoari ouzhpenn.

#### 1.4.2. AN UNVANIÑ : UR YOUL POLITIKEL

Amañ e weler daou live dishañval e-lec'h ma vez klasket krennañ an dishañvalderioù : live yezh an *nation*<sup>114</sup> ha live yezhoù bihan ar vro. Ewid politikourion zo e c'houlenn govarnañs ar pobloù ur yezh unanet, nebeud ag argemmoù enni, un dober a lakaad ur standard da reniñ<sup>115</sup>. Gwelet e vo pelloc'hig ar strivoù graet a-hed an amzer ewid glannaad ar galleg gant yezhourion na oant ket pell a vetoù ar galloud. Termenadur ar yezh wellañ a gav e sav gant strewadur ar skolioù dre ar vro. N'eo ket gwir an dra-se e Bro-Frañs hebkén.

Mez ouzhpenn boud goveliet ar yezh ofisiel dre leuskel a-gostez, en deskadurezh, meur a vodoù lec'hel da gomz, ema kenteliuz ar pezh a zo digouezhet e Frañs goude an Dispac'h ha gant ar Republik, “unan hag anrannaduz”, evel mand eo bet analizet newez so c'hoazh gant Mona OZOUF (2009). Kult an Unan, kalon ar jakobinism, en deus treuzvewet er c'hempennadurioù degaset goude d'ar politikerezh jakobin<sup>116</sup>. Ar pezh en deus degaset disfiziañs douzh yezhoù ar Frañs na oant ket ar galleg ha stourm eneb dezhe a-bezh ar Republik. Ha p'he deus steuziet hiziw-an-deiz enebañs an Iliz e-keñver ar Republik-se (an Iliz rebechet dezhi chomel stag douzh ar yezhoù-rannvro ewid gwaskañ gwell an eneoù) he deus kavet honnañ un enebour arall : ar ***gumuniezhelouriezh*** (“*communautarisme*”), ur mod newez da zisprizañ ha da frenañ kelenn ha diorroâdur ar yezhoù bihan.

---

<sup>114</sup> Souten a rae RENAN ar c'heñver tre ar yezh hag ar vroad, in Collectif, *Et le génie des langues ?*, 2000 : 43.

<sup>115</sup> LE DÛ & al., 2005 : 73.

<sup>116</sup> « Le culte de l'Un, cœur même du jacobinisme, a survécu à l'aménagement empirique de la politique jacobine. » (OZOUF, Mona, *Composition française*, Paris, Gallimard, NRF, 2009 : 228).

Hunvre ur yezh namaeti n'eo ket d'ar broioù braz hebkén koulskoude. Tu zo iwe da emsaverion yezhoù bihan soñjal e vehe gwell kavoud ur yezh hebkén war o zachenn, ar pezh a c'hellomp skeudennaouiñ amañ gant ar pennadig-mañ, e beg Donalda, Breizhadez un dazont gortozet :

[Donalda] - “Meizet o deus Breizhuheliz a-nebeudoù e vije o gounid deskiñ ar yezh vroadel ha dilezel ar yezh all. Bremañ, ne gomzer ket mui nemet brezhoneg e Breizh-Uhel, daoust m'o deus kendalc'het ar gouerien pell amzer, e lec'h pe lec'h, da gomz trefoedachoù gallek.” (R. HEMON, *An aotrou Bimbochet e Breizh*, p. 36).

#### 1.4.3. UR SKWER : FURMADUR HA NORMALIZADUR AR GALLEG

Setu amañ da heul, ewid skeudennaouiñ klask ar c'hempouez-se, diaez da dapoud, ar pezh a c'hell boud chema normalizadur ar galleg, a-c'houde ar Grenn-Amzer<sup>117</sup>.

##### 1.4.3.1. Kentañ mare ar Grenn-Amzer (Vved-11ved kvd)

Ewid d'ur gumuniezh bennag goulenn un identelezh-yezh difer e rank dezhi kaoud ur variezon lec'hel emren dishañval diouzh ar standard, petra bennag e vehe d'ar variezon-se boud gwirion pe fantazmet (QUEFFELEC, 2007)<sup>118</sup>. Ha distag a-walc'h e oa daet ar roman a-zoc'h ar latin, e-kreiz an IXved kvd, ewid gelloud tapoud ar rank-se. Rag goude d'an aotronez frank boud desket yezh ar C'hallor-Romaned hag he frezeget, e oa bet honnezh distreset gante (CERQUIGLINI, 1995 : 14). Mez ar yezh distreset-se, enni elfennoù germaneg, dre ma oa heni ar vistri newez (yezh a-renk uhel hag a lorc'hañs enta), klewet gant ar bobl ha prezeget ganti tamm-ha-tamm, a zaas d'he zro da vound an norm.

---

<sup>117</sup> Tennet eo bet ar peb brasañ ag an taolenniñ istorel a LE DÛ & al., 2005.

<sup>118</sup> In *Le français : des mots de chacun, une langue pour tous*, 2007 : 53-66.

Leioù Strasbourg<sup>119</sup> (842), bet lakaet bremañ da orin ar galleg, a chom un arouez ag ar yezh-se, a veze komzet dre ar vro da heul ar *pax romana* ha goude bloaziadoù dindan beli ar Franked. Ar varc'hadourion ha kement foeter-bro an amzer o doa ezomm a gavoud ur yezh-diazez, latin simplaet, enni stummoù ha gerioù ar parlantoù liessort a veze kavet er prantad-se : damorantoù galianeg, frankeg pe nordeg. Ne veze ket mui lâret e komzed latin mez *romanice*, da lâred eo e-giz ar Romaned<sup>120</sup>. Beteg donedigezh ar Gapetianed, e kenvevas tri rummad yezhoù : 1) ar latin (yezh ar fonksionoù relijiel, diplomatel ha barnel) ; 2) ar parlantoù-pobl heb statud ebed, na vezent ket skrivet mez talvouduz en eskemmoù pemdezieg tost ; 3) ar romaneg-diazez, distatud iwe mez aez ewid an eskemmoù hirhed.

#### 1.4.3.2. Etre 1180 ha 1270

D'ar mare-se e kreskas ar Rouantelezh a Frañs, daet da vout ur vro c'hallouduz-braz dindan renerezh tri roue meur : Philippe-Auguste, Louis VII ha Louis IX (Sant-Loeiz). War un dro gant emdroâdur ar c'hêrioù e taas Pariz da vout ur gêrbenn veur.

Komz a raed neuze ag ar parlantoù *romaneg*, ewid o diforc'hañ diouzh ar parlantoù germaneg pe diouzh latin ar gloer. Krogiañ a reas ar lizheradur d'implij ar romaneg en 11ved kvd, mez e fin an XIIved kvd ne chome ket mui namaed daou rummad yezhoù : latin diouzh un tu ha *lingua francorum* diouzh an tu arall (daet da vout ar *françois*). Ar *lingua francorum*-se avad ne oa ket unvan tamm ebed, mez liessort bepred, enni furmoù a orin latin pe c'halianeg pe c'hermaneg, diaez d'ober ganti ewid moned pell (ar *badumoù*, LE DÛ, sd. § 1.2.3.2., p. 61).

Moned a raas ar *badumoù* da zanvez ar yezh newez é tiwaniñ, ha gant-se kemmoù helaezh da heul. Da gentañ dre reoliekaad, da lâred eo nebeutaad

---

<sup>119</sup> Goude Koñsil Tours (813), a c'houlennas g'ar veleion predegañ adal neuze pe e yezh tudesk pe e *lingua romana rustica* : setu aze deiziad ganedigezh ar galleg (PERRET, 2008 : 36).

<sup>120</sup> Tu zo da gompren un tammig ar pezh a zegouezhas er prantad-se dre soñjal er *globish* (global english), a zo ur yezh savet diwar ar saozneg/amerikaneg mez kalz simplaet, ennoñ meur a c'her ha meur a fed yezhel daet a yezhoù kentañ an gomzerion. Da skwer e vez komzet *globish* heb taol-mouezh ordinel ar saozneg.

niver ar stummoù hag ar gerioù, mez iwe nebeutaad liested ar sanadurioù mar n'eo ket liested ar fesonoù da skriv. Ouzhpenn-se e voe pinvidikaet ar yezh-se, dre voned liez da glask er latin ar pezh a rae diouwer er badumoù. Ar pezh a zegasas yezhoù unvanetoc'h e peb feodalc'h (*standardoù*, sd. §1.2.3.2., p. 61).

Perzhioù modernoc'h a veze staget douzh ar standardoù-se : o gouested da voud intentet hag implijet war domani en e bezh an dukelezh pe ar gontelezh gant tud dizesk war ar latin ; hag iwe ur statud uhelloc'h, gant ma oa stag ar yezhoù-se douzh galloudoù newez, a strewe dre ar vro ur sevenadur arnewesoc'h (dre ar gloer, ar vourc'hizion, ar re binvidikañ). Kustum e taas ar lizheradur d'ober gant ar standardoù-se ewid sevel oberennoù brudet a zegase d'o zro sanadurioù ha troioù-lavar divoaz.

#### 1.4.3.3. A 1270 d'an Dispac'h

Er Grenn-Amzer eo e kemmas ar galleg ar muiañ. Ne oa ket strewet ar skridoù er boblañs en amzer-se c'hoazh. Mar ne barra ket ar skritur douzh emdroâdur ar yezhoù e fren hennezh d'an nebeutañ. Herwez LEON (1992 : 19) ne zegasas ket ijinerezh ar moullañ an netaad a vehe bet rekiz ober er feson da skriv ar galleg, ha damhañval eo ar galleg skrivet hiziw-an-deiz douzh heni grez Philippe Auguste, p'en deus kemmet ar sanadur a galz<sup>121</sup>.

Tra ma yae ar standardoù war hent an unvaniñ e yae ar standard-kreiz war e heni iwe, dre gendeuziñ tamm ha tamm ar standardoù a renk izelloc'h. Ar pezh en deus lakaet Bernard CERQUIGLINI da skriv ne oa ket bet ganet ar *françois*-se gant ar c'hoant da lakaad ar standard-kreiz (ar *francien*) da voud mestr war ar re arall : e-kontrel e oa daet ar *françois* evel rezultad ur bleustradeg, da lâred eo un ober olleg douget da sevel ar yezh newez-se, yezh ar lizheradur ha yezh ar lenneion<sup>122</sup>. Rekiz eo gortoz Loeiz ar XIV nawazh

---

<sup>121</sup> Da skwer niver an digrafoù, an trigrafoù er galleg a-hiziw (*ai, ei / au, eau / eu / ou*) sanet hiziw gant ur fonem hebkén ([ε] / [o] / [ø] / [u]), pa vezent diftoñgennet pe driftoñgennet d'ar mare-se.

<sup>122</sup> « La genèse d'un usage écrit, traditionnel et interrégional n'est donc pas la promotion politique d'un dialecte particulier, le francien. Elle est une pratique, qui tend à constituer un français, langue des lettres et des lettrés. » B. CERQUIGLINI, in *LE DŪ & al.*, 2005 : 91.

ewid gweled ar standard-penn-se, daet da voud yezh ar Stad, éc'h aloubiñ renkoù uhellañ ar gevredigezh.

Mez prientet e oa bet an dra-se gant ar c'hemm a oa degouezhet er Rouantelezh e grez François Ier. En e raog e oa ar roue **an aotron** (*suzerain*), da lâred eo, da gentañ, un aotrou e-mesk aotrounez arall. Ur feodalc'h en deze da verañ, e-lec'h ma rente justis, e-lec'h ma tiffenne tudoù e zomani ha ma reseve kevrozioù\*. Ouzhpenn-se, evel aotron merket gant an olewiñ santel, e veze an aotron tredeog en dizemglewioù, an heni a veze e karg a surentez ar rouantelezh, kuit d'an aotrounez arall a roiñ harp milourel dezhañ (harp limitet, daou-ugent dewezh ar bloaz hebkén). Mez adginivelezh an droed roman er gevredigezh a zegasas da heul ur c'hompren newez ag ar foñksion roueel. Dija o doa lezennourion Philippe Le Bel geriet ar pennreolennoù o doa lakaet diwezhatoc'h an aotron da voud **ar soveren** : “Boud ema Roue ar Frañs soveren en e Rouantelezh... ha par da lezenn eo e youl“ (PERNOUD, 1977 : 64-67). Gant François Ier enta e oa daet ar roue (an aotron) da voud **un unpenn** (*monarque*). Gantañ iwe lakaet ar galleg da voud ar yezh namaeti implijet gant ar melestradur (*Ordonnañs Villers-Cotterets*, 1539).

#### 1.4.3.4. Ag an Dispac'h d'an amzer-vremañ

Daoust da veur a skwer é tiskoueziñ ar yezhoù-rannvro boud bet implijet gant an Dispac'herion (skritelloù e brezhoneg), a-benn ar fin e trec'has an c'hoant da unvaniñ ar Republik newez dre he yezh ha dre zistruj ar badumoù. An **tenn** (an **dennadeg**), savet gant Bonaparte e 1802, a grogas da veskiñ paotred yaouank dishañval o yezhoù. Mez rekiz e oa bet gortoz ogozig kant vloaz c'hoazh ewid gweled degemeret ar yezh-se gant an darn vuiañ ag ar Frañsizion, gant pouez ar skol dre red (lezennoù Jules Ferry, 1883), ar c'hoñje-soudard (bet ollekaet gant lezenn 1905, da heul lezenn Jourdan-Delbel a 1798), heb ankouaad rol an Iliz en ur boblad kristeniekaet a-vraz a glewe predegoù sizhunieg he beleion. E 1900 nawazh, ar pezh a ziskouez an ALF dimp, e veze barreg kêriz er yezh vroadel, mez stadiadoù dishañval a oa chomet war ar maezoù c'hoazh.

Efed ar ar brezel 14 a voe a-bouez braz ewid strewiñ ar galleg. Lemel a reas o buhez gant meur a vadumeger : brezhonegerion, euskaregerion, okitanegerion... ouzhpenn boud lakaet ar galleg da voud mestr war an talbenn e-pad pewar bloaz. An darvoud-se, ha diwezhatoc'h diorren ar bed teknikel ha heni ar mediaoù (ar post-tele er familhoù-pobl adal 1960), o deus roet d'ar galleg, hiziw-an-deiz, ar lec'h kentañ er vuhez foran. Daet eo ogozig da voud ar yezh namaeti er boblañs, daoust d'ar yezhoù rannvro é klask taliñ douzh o mougadur, ha daoust da yezhoù arall daet gant an envroidi é vewañ e lec'hioù inized (chineg e Pariz XIII<sup>o</sup> da skwer, arabeg e bannlewioù zo...).

#### 1.4.3.5. Galleg komzet, galleg skrivet

Un amzer zo bet e sinifie *gouied penaoz skriv* boud gouest d'ober ur choaz etre meur a zoare d'ober, peogwir ne oa ket lezennet-groñs ar skritur c'hoazh (BALIBAR, 1985 : 264). N'eo ket mui evel-se hiziw : un doare-skriv ofisiel ledan-strewet zo, daoust ma n'eo ket trawalc'h d'ur skritur boud stabil ewid ma vo stabil ar yezh. Rag n'eus namaed ar c'heñver etre skrid ha komz, d'un termen roet bennag, a gont, da lâred eo troidigezh ar grafem en ur soniad ha kemm-ouzh-kemm (CATACH, 1978 : 66).

Depanteg e oa sañset yezh skrivet ar Grenn-Amzer deuz ar yezh komzet, a-stur gant ali ARISTOTELES<sup>123</sup>. Teir fennreolenn a oa bet lakaet gant BOSSUET a-fed skritur : heuli mod-ober ar re a oui skriv, klask unvaniñ an arver par ma c'heller, lakaad an arver da badoud. Ferdinand BRUNOT (Trede Republik) a oa favoruz d'ur liamm sklaer etre son ha skrid, ewid ma vehe aesoc'h d'an dud deskiñ un doare-skriv simpl, kempouell ha demokratel<sup>124</sup>. Daet eo an oll strivoù ha divizoù betegzimp gant ar reizhskrivadur a-hiziw.

Ar galleg ewid-se a gemm ataw, ez-naturel, dre gomz d'an nebeutañ, pa chom diaez da zegas kemmoù ennañ dre skrid. E gwirionez e chom stabil-braz e vod da skriv ha, herwez CERQUIGLINI, nen deus adreizhadur ebed, er-maez ag ar c'hemmoù dister kenniget didrouz (“*sans aucun tapage*”) gant an Akademi, a

<sup>123</sup> « Les sons émis par la voix sont les symboles des états de l'âme, et les mots écrits les symboles des mots émis par la voix. » (In CERQUIGLINI, 1995 : 47).

<sup>124</sup> In *op. cit.* p. 39-50.

zo aet da benn e-korf pemp kantvlead, daoust d'ar pezh a soñj Jean d'ORMESSON, e kred dezhañ e vez mestr ar bobl war an afer<sup>125</sup>. Ar bobl, honnezh eo kentoc'h a c'houlenn un doare-skriv, evel ar skolaerion, a zo oll eneb d'ur simplaad, a-gaoz ma lakahe hennañ talvoudegezh o gounid da zigreskaad (BALIBAR, 1985 : 264-265)<sup>126</sup>.

Dre an XIX<sup>ved</sup> kvd eh eus bet strewet “ide dogmateg” un doare-skriv peurbaduz ha digemmaduz e Frañs<sup>127</sup>. Degaset he doa WYNANTS un arliw d'ar sav-boent-se, pa skrive :

“L'orthographe a été construite dans la modernité comme institution, c'est-à-dire comme un ensemble de normes élaborées dans l'activité sociale, soumise à une expansion spatiale et temporelle, et qui participent à la production et à la reproduction d'un système social cohérent, la France moderne. Aujourd'hui l'orthographe apparaît démembrée. Elle est un lieu de contradictions, un enjeu de conflits. L'orthographe n'est plus un principe d'unité mais d'hétérogénéité.” (*Usages et représentations de l'orthographe française*, Bretagne Linguistique, Vol. 12, 1998 : 85).

Tu zo d'en em c'houlenn, a-zivoud ar galleg, gant reud m'ema war ar skrid, mar n'eo ket é tostaad an termen ma vo red dezhañ derc'hel kont ag ar pezh a zegouezh er gevredigezh. Souezhuz memestra gweled e tal ataw an norm, daoust d'an traoù tro-dro da gemm ha da fichal (komz a ra WYNANTS a “*paradoxe de l'orthographe [dont le code] résiste jusqu'à maintenant*”).

#### 1.4.3.6. Klozadur

Ag an daolenn-se e c'heller tennañ un nebeud kenstadoù a-fed furmadur ha normalizadur ar yezhoù, a valañs etre diw zougañs kontrol, termenet gant SAUSSURE : “*esprit de clocher*”, da lâred eo an c'hoant da chomel stag douzh fesonoù lec'hel d'ober pe da lâred, hag “*esprit d'intercourse*”, gantañ an

---

<sup>125</sup> CERQUIGLINI, 1995 : 151.

<sup>126</sup> Meneg a ra aze Renée BALIBAR Blanche & Chervel (*L'orthographe* : 88) : « Plus on descend dans l'échelle sociale, plus est grande la demande d'orthographe. »

<sup>127</sup> « C'est surtout le XIX<sup>e</sup> siècle qui a, par la diffusion massive d'éditions modernisées, nivelées, contribué à répandre cette idée dogmatique et stérilisante d'une orthographe éternelle, et par conséquent immuable. » Nina CATACH, 1978 : 19.

c'hoant d'an den da kuitaad lec'h e gavell, da voned e darempred gant tudoù, broioù, sevenadurioù ha yezhoù arall. Gant LE DÛ & al., 2005, e c'hellomp derc'hel ar poentoù-mañ :

- A-bouez braz eo (pe e oa) rol ar savadurioù (skol, koñje-soudard, melestradur) e unvanidigezh ar yezh. Hiziw e ranker ouzhpennañ an Internet a ro tro d'un niver biskoazh ken braz a dud a voned e darempred an eil gant egile (dre *Facebook* da skwer), hag éc'h ober gant ur yezh war ar stern, gerioù saozneg a-liez é varellañ mui pe vui yezh-vamm peb heni.

- Lïez a-walc'h e vez gwelet an talañ etre an unvanidigezh bondougel\*, a za “ez-naturel” da heul emdroâdur an eskemmoù a beb sort, hag an unvanidigezh venedig\* lakaet da arverin gant ar Skol (Sd. kartennoù an atlasoù-yezh, evel e LE DÛ & al., 2005, ds. kartenn 1, p.30).

- É klask un norm bennag e tiskouez ar lorc'hañs sokial boud : ur patrom-yezh uhel a vez gwelet evel ur pal da dizhould gant an den e-hunan pe, a-wael, gant e vugale (p. 34) : “*parler un bon français*”, “**komz ur brezhoneg mad-tre**<sup>128</sup>”... Mez lorc'hañsusoc'h c'hoazh e c'hell ur sevenadur estren boud (“*il est allé faire un séjour à Londres pour améliorer son anglais*”).

A-gaoz d'ar c'heal diwezhañ-se marse e c'hell peb yezh kaoud ur furm uhel : kengej a rahe diouzh un tu c'hoant-unvaniñ ar galloud politikel gant c'hoant an dud da gaoud ur yezh unvan, ha pa vehe honnañ pellig a-walc'h deuz o modoù da gomz : santimant splann pe splannoc'h gant ar boblañs e rank an den mestroniañ benvegoù lemmoc'h ewid toullañ e hent er vuhez.

Hag ema lec'h an norm etre an diw duenn-se : norm naturel (emglew diemskiant pe emskianteg etre an dud) ha norm lakaet gant ur vinorelezh (galloud politikel) war ar gevredigezh.

---

<sup>128</sup> Liesoc'h c'hoazh marse e vez klewet ar frazenn-gontrel, hag e galleg ouzhpenn kement-se, e peb kornad a Vreizh : « Nous, on parle pas le bon breton ! »



## 1.5. NORMAÑ EWID KELENN

Yezh ar skol an heni eo, he fal roiñ d'ar skolidi, hed-ha-hed ar c'hursus-skol, ur vestroniezh solud ag ar yezh-Stad ha, pelloc'h, a lavarioù arall.

“Notre monde est dominé par l'information écrite ; les lettres y sont la palpitation même de la vie. Dès lors, la société attend de l'enfant qu'il maîtrise la lecture, l'écriture, les langues étrangères et les langages techniques. L'enjeu est de taille : il y va de la liberté de chacun, de la compréhension mutuelle et du savoir de tous.” (Jack LANG, *La maîtrise de la langue à l'école*, MEN, CNDP, 1992 : 4).

Ur labour war an hirdermen eo, a bad bloaziadoù, daw dezhañ boud renket ag ar simplañ d'ar c'hemplegetañ.

### 1.5.1. PROBLEMATIK AR C'HELENN

#### 1.5.1.1. Keleñn = simplaad

Tu pleustreg an normañ a vez kavet en hentennoù da zeskiñ yezhoù. Penaoz ober enta ewid lakaad ar studierion estren da voned-tre, ha gant pesort stur, e domani divent ur yezh bennag (ha n'eo ket niver ar gomzerion hebkén a ra brasted an domani-se) ? Gant ma klask ar saverion-hentennoù lakaad o lennerion da zizoloiñ ar fonnaplañ ma c'hellont ar yezh newez, ha d'o lakaad ouzhpenn, ha dreist-oll, da gomz e-korf berrig amzer (*buan hag aez* ataw, mar n'eo ket *prim ha dillo* !) e rankont ober ur choaz bernuz : pesort danvez kennig dezhe ? Pesort choaz ober e-mesk ar valigañsoù testeniekat ?

E chinezeg eh eus meur a yezh, dastumet e meur a rummad, mez ar mandarineg eo ar yezh ofisiel (*putonghua*, a sinifi “yezh kumun“ pe “standard“), diazezet war barlant Beijing, ar gêrbenn. Aet eo da yezh ofisiel e Taiwan (*guoyu*) hag e Singapour (*hanyu*) iwe. Normoù ar gêrbenn a ra he liw d'ar yezh-se, implijet ez-ofisiel er vuhez bolitikel, er mediaoù hag en deskadurezh. Komprenet e vez gant an darn vrasañ ag ar boblañs, daoust d'ur lod kàer anezhi ober gant

parlantoù lec'hel er familh pe en eskemmoù pemdezieg. Aez eo kompren pegen pouezuz ema ar standard-se ewid an unvanidigezh yezhel ha politikel, en ur vro ken braz, meur a barlant enni, diaez pe zokén dibosubl ar c'hompren etreze. Ha klask a ra ar Galloud astenn da vad e implij<sup>129</sup>.

Meur a barlant dishañval a vez kavet en Itali iwe, gwelet meur a wezh evel yezhoù distag. En XIXved kvd hebkén e oa daet an toskaneg (yezh Dante, Boccace, Petrarque ha Machiavel) da vout yezh ar vro. Ha bremañ e vez komzet an italianeg standard-se er skol, ha graet e vez gantañ iwe er mediaoù ha gant ar melestradur<sup>130</sup>.

Er Japon, ouzhpenn ar yezh aïnueg, komzet c'hoazh e nord Honshū hag en inizi Hokkaido ha Sakhalin mez war an diskar, eh eus teir rannyezh veur er japaneg : yezhoù an inizi Ryūkyū (dishañval-mat), re ar c'hornôg ha re ar reter. Mez yezh Tokyo an heni eo a zo aet da standard (ar pezh a vez kavet er levrouù-kelenn ewid an estranjourion d'an nebeutañ)<sup>131</sup>.

En ur levrig arall, *Guide de conversation français-basque*, e lenner e kaver en euskareg, evel en oll yezhoù, « des variations régionales ». Mez choazet eo bet ar parlant *navarro-labourdin* en hentenn-se dre m'ema tostig a-walc'h douzh an euskareg normalizet (*euskara batua*) alïet gant Akademi an Euskareg (*Euskaltzaindia*)<sup>132</sup>.

Tu a vehe da gavoud skwerioù arall : diaez eo d'ar saverion-hentenoù mont heb termeniñ, heb bonniñ an dachenn. Kentizh ma soñjer kelenn ar yezh e ranker ober un dibab e liessort ar parlantoù. Lodeg eo an dibab-se, dibab kentañ d'ober, er simplaad hag en urzhiañ a rank ar c'helennour ober dre vicher. Ar pezh a zo anad ewid kelenn d'an estranjerion zo gwir iwe ewid ar skolidi.

---

<sup>129</sup> GARNAUT, Anthony, *Mandarin, guide de conversation*, Lonely Planet, 2006 : 9-10.

<sup>130</sup> An italianeg standard-se zo aet d'ober danvez an hentenn-gomz *Italien, guide de conversation*, Lonely Planet, 2006 : 7-8.

<sup>131</sup> ABE, Yoshi, *Japonais, guide de conversation*, Lonely Planet, 2006, pp. 9-10.

<sup>132</sup> *Guide de conversation français-basque*, Donostia, Elkarlanean, Ademb. 2004 : 7.

### 1.5.1.2. Nebeutaad ar stummoù bew

#### 1.5.1.2.1. Ar c'heriaoueg :

Komzet hon eus dija ag ar re a furmoù a vez kavet pa vez anw a unvaniñ ur yezh : dre m'ema an unvaniñ un ober a laka meur a unander emren (a-fed yezh) en un unander brasoc'h, en em gavo an dud gant meur a c'her ewid anwiñ ar memez tra. Ar pezh a vez gwelet e galleg : e tachadoù zo e chom c'hoazh gerioù lec'hel a veze ar gerioù namaete implijet ur mare zo bet en tachadoù-se, mez gerioù arall a c'hounid tachenn warne. Da skwer ar ger brasstrewet « *gendre* » (< lat. *gener*, « gwaz ar plac'h ») éc'h aloubiñ tachenn ar ger « *beau-fils* » hag ogozig edan beuziñ heni ar ger « *fillâtre/filhat* » bewig c'hoazh e-kostez Lyon (LE DÛ hag *al.*, kartenn 17, p. 52). Ar pezh a zo heverk, ne vez ket ataw ar stumm « uhel », heni ar gêrbenn, pe heni ar lez a ra bec'h ataw diwar-goust gerioù an amvroioù. Da skwer ar ger « *docteur* » na oa ket kavet e amzer Gillieron e Frañs namaed en inizi anglo-normant, ha daet goude da vout implijet a-skoaz gant « *médecin* » (marse dindan levezon ar saozneg «*doctor*»?).

Peurliesañ nawazh e vez strewet ar furmoù standard gant ar skol, ha daoust d'ar fenomen-se goulenn amzer, e kul ar furmoù lec'hel, a ya da vout henfurmoù neuze, namaed pa vezont kemeret ewid pinvidikaad ar yezh : « *médecin/barbier/chirurgien/docteur* » a zo oll bew e galleg a-vremañ ; *metge* nawazh, ger ag an Alpoù, zo dianaw (Kartenn 447, *op. cit.* p. 299).

E brezhoneg, nad eo ket bet biskoazh yezh-Stad, n'eus ket pell-braz so en em gaver gant ar soursi a gelenn. Kavoud a rae HEMON si d'an dra-se :

“[Evit kalz Breizhiz], gallout komz brezhoneg a zo bezañ gouest da c'houlenn o hent digant un torrere-mein bennak, pe c'houlenn ur volennad sistr digant ur vatezh en un davarn. Biskoazh n'eo tarzhet en o fenn ar menoz eeun-mañ : peseurt brezhoneg a rank bezañ implijet er skolioù, er bodadegoù, war ar c'hoarilec'h, hag en holl skourroù uhelañ ar vuhez ? (...) Petore trefoedach kemer ?” (Ur Breizhad oc'h adkavoud Breizh, p. 201).

#### 1.5.1.2.2. Ar sanadurioù :

Mar geller gweled ur re a c'herioù evel ur binvidigezh ewid ar yezh<sup>133</sup>, e c'hell ur re a sanadurioù dishañval boud ur skoilh ewid ar c'hompren hag un dra direkiz ouzhpenn. Ha HEMON da zikriañ hennañ pe hennezh a-gaoz ma kaozeont evel “Matilin a Landivizio<sup>134</sup> pe Glaodina a Wigourvest” a lâr ”**icho, koumer, chilaou**” e-lec'h “**hiziv, kemer, selaou**”. Ewid HEMON e rank an dud desket komz ur yezh uhel<sup>135</sup>, hag he lakaad “er renk kentañ, reiñ dezhi sked ha lufi”, ha n'eo ket trefoedachañ “evel kouerien”. Un dlead eo e-keñver an den e-hunan hag e-keñver e genvroiz. Gant ur formulenn e c'heria rol ar vistri : “Ret eo d'ar vlenierien mont davet ar werin, n'eo ket ar werin a rank dont betek ar vlenierien.” Simploc'h e c'heller lâred e c'hell (e rank ?) an heni a oui lâred d'an heni na oui ket.

#### 1.5.1.3. **Reizhañ**

Dre ma ta ar skrid goude ar c'homz, ha dre ma heuli doberoù ar skrid reolennoù dishañval diouzh re ar parlant, en em gav ar yezhour dirag ar simplaad. Pa vez ar c'homz valigant dre natur e rank egile chom eeunnoc'h, stabilloc'h. Choaz ur live-yezh bennag, diazezet war un arver bennag (ar bobl, ur gumuniezh bennag, ar lez, ar gevredigezh cheuc'h ?) a vo d'ober. Aze e rae VAUGELAS un diforc'h etre **arver disklaeriet** (*usage déclaré*) hag **arver douetuz** (*usage douteux*), ha ma ansave e oa mestroniezh an arver etre daouarn ar bobl (“*la multitude*”), gwell chomel heb talañ re douti, e oa ar beusheñvelled (analogiezh) etre daouarn ar skrivagnerion ha dreist-oll etre re ar yezhadurourion, mistri an arz, a ranker chelaou doute<sup>136</sup>.

Ewid ar brezhoneg en em gaver dirag ur problem newez, a zo ar mod newez da lâred traoù zo gant an newezvrezhonegerion, stankoc'h-stank (gwell aze) ha

---

<sup>133</sup> Da skwer **doare/doere**. Tu zo d'ober gant **doere** ewid *nouvelle* (= **kel**, ls **keloù**) ha lakaad **doare** a-live gant **feson** (*façon, manière*). Spisoc'h neuze anw ar gelaouenn wenedeg AN DOERE, « *La Nouvelle* », netra da weled gant *la façon*. (Ouzhpenn-se e oa **doere** furm gozh ar ger, er C'hatholicon, FAV).

<sup>134</sup> « Matilin a **Landivicho** » kentoc'h ! herwez A. BOCHÉ.

<sup>135</sup> « E oll ar sevenadurezhioù eh eus un dreistnaturouriezh ag ar vertikalited a lec'hia an talvoudoù pozitivel er lein hag en diaz ar re negativel. » (« *Il existe dans toutes les civilisations une métaphysique de la verticalité qui situe en haut les valeurs positives et en bas les valeurs négatives.* ») Odon VALLET, *Le Monde des Religions*, Juillet-août 2009, N°36 : 8.

<sup>136</sup> In DELESALLE & al., 1986 : 335.

levezonet kalz gant ar galleg. Klewet e vez troioù direizh evel **gouenn \*da**, **\*ober diwall**, **dait \*aze** ha kement a zo, arver douetuz sur a-walc’h a ranker talañ doutañ... tra ma ne vo ket daet da voud an norm !

#### 1.5.1.4. Kroueiñ gerioù

Dober a vez ataw a grouiñ gerioù : ur skeudenn eo ar c’heriaoueg a binvidigezh ar yezh. War-se e vez akord an dud, mez war ar mod-sevel e c’hell sav-boentoù dishañval en em ziskouez.

Ewid R. de GOURMONT e chom braw ur yezh tra ma chom glan. Ewid-se e rac’hwize ar gerioù tennet ag ar yezhoù estren pe savet diwar wrizioù estren, gresianeg enkontet. Sevel a rae eneb da grouadennoù LINNÉ (*choeropotamos*, *hyperdolichocéphale*) : « Quelques uns de ces mots sont d’une laideur neutre et bête, les autres sont hideux, à dégouter de la science, et de toute science. » LUCCI e kav dezhañ iwe e vez daveet douzh ar lod kempleshañ ag an doare-skriv pa vez krouet gerioù : *conchyliculture*, *monachisme*, *Cgtiste*, *Bdphile/bédéphile...* (1996 : 119). Kavoud a ra da Patrick ANNE eh eus bet tapet ar memez si gant ar brezhoneg<sup>137</sup>.

“Ar yezhoù manet fraost a-hed an amzerioù (...) a rank sevel ur geriadur stank da glotañ gant ezhommoù ar vuhez a vremañ” (HEMON, 2008 : 56). Ewid ar brezhoneg e kave da HEMON en doa VALLEE hum harpet re war ar c’hembraeg ewid kempenn ar yezh. Ouzhpenn-se o doa graet VALLEE hag e gomper MORDIERN “un diforc’h kalz re spis etre dibennoù evel **adur**, **erezh**, **elezh**, **egezh**, **ouriezh**, **idigezh**”, ha “stummet re a c’herioù hir ha pounner, diaes da zistagañ, ha digened.”

Unan a broblemoù ar yezh a-vremañ eo, pa gomzer ag ar c’houiañsoù, petra ober. Ewid Jean MAROT (*Geriadur ar matematikoù*) eh eus da choaz etre daou hent pa ver é klask krouiñ da gentañ ur c’heriaoueg ewid ar skolioù : 1) sevel gerioù diwar wrizioù kelteg hebkén, pe 2) sevel gerioù en un doare

---

<sup>137</sup> “Lod [ag ar gerioù-se], gwir estredouaridi re zifetis, a vije memes gouest da spontañ annezidi sederañ hor planedenn. Da skouer “korfadurouriezh” pe “skinarouezerezh” tennet eus geriadur Roparz Hemon.” (Kazetenn YA, Nn 212, 2009).

kempouez etre gwrizioù kelteg ha gwrizioù etreyezhoù (*interlangues*) (2002 : 15). Choazet e oa bet an eil hent gantañ. Eleze furmoù evel “**globalisadur**”, “**ortogonal**”, “**regresadur**” ha frazennoù a-sort gant : “**Teorem Gödel an diglokted : mar bez nanndislavarus an aritmetik formel, neuse e vez ennañ enoñsiadoù andessidadus**” (p. 125). Mez kavet e vez iwe elfennoù warne ur liw keltekoc’h a-sort gant “**ahel**”, “**c’hoarvoudel**”, “**eeunenn**” pe tres ar brezhoneg pemdez warne : “**Lodenn anterin ha lodenn degel un niver degel.**” (p. 86).

Ur soursi arall, ankouaet meur a wezh, zo soñjal en aezamant da sanañ ar gerioù, a c’hell boud dishañval e KLT hag e W, dreist-oll er gerioù e **zh**. Hag hiziw ouzhpenn, pa ne vez ket kustum an deskerion, kustum da gomz galleg kent ar brezhoneg, da lâred eo pa ne ouiont ket penaoz ober ewid sanañ an [h] : **buhezegezhouriezh (RH)**<sup>138</sup>.

### 1.5.2. UN DOBER EWID AR YEZHOU BIHAN

Gwelet hon eus gant skwer ar galleg un normalizadur war an hirdermen. Ne sinifi ket an dra-se e tremen ataw sioul an traoù, ha stourmoù kaled a c’hell padoud kantvleadoù, evel heni an tired-kogneg degemeret e 1740 hebkén goude daou gant vloaz<sup>139</sup> ha meur a grogad, ewid merkañ steuziadur an s ragkensonenn war-dro 1066 (*beste > bête*) (CERQUIGLINI, 1995).

Ouzhpenn-se, dre ma n’eo ket ar yezh un abstretadur hebkén, produet gant ar yezhour pe ar yezhadurour, mez dre ma klot gant un douar, e-lec’h ma stourm ar sujeded ha galloudoù kenetreze, n’hell ket ar yezhadur chom heb ober gant an normativelezh (AUROUX, 1998 : 261). Dibaboù a vez rekiz ober, ha pa vez graet dibaboù e vez dilezet traoù, ha/pe e vez renkadet traoù arall.

---

<sup>138</sup> Evel-se e klexer er radio sanadurioù trefoet evel “skol \*diyek” e-lec’h “skol diw-ye-hek”.

<sup>139</sup> Christophe Plantin, mouller a d/Tours, hag en doa kavet repu e Anvers a-gaoz da abegoù relijiel, en doa, e 1567, kenniget un tired-kogneg ewid ramplas an s mud, mez henn dilezet en doa goude, gant aon a goll ur lod ag e bratiked (CERQUIGLINI, *L’accent du souvenir*, 1995, 57-59).

Ewid ar yezhoù bihan e c'hell an normañ, ouzhpenn boud un urzhiañ lakaet en un teskad displann, boud un dober ewid padoud. Diaezamant meur ar yezh vihan : ne vezont ket kelennet. Neuze ar gevatalenn : normañ ewid treuzvewañ<sup>140</sup>. Ewid HEMON ne oa ket an dibab d'ober etre an trefoedachoù. Ne oa ket d'en em c'houlenn “petore trefoedach kemer” mez sevel ur yezh kempennet, dreist d'ar parlantoù lec'hel, ha “lakaat urzh, urzh er yezhadur, urzh er geriadur, urzh en doare-skrivañ” ha “daskoriñ d'ar yezh un diazez start, dezhi da drec'hiñ er stourm ouzh yezh an estren” (2008 : 52). Nawazh e chomas feal a-walc'h douzh choaz AR GONIDEG en doa lakaet ar leoneg da ziazez, heb nawazh teurel fae war ar parlantoù arall. Sevel reolennoù, ewid lakaad urzh enta, a oa ur redi absolut ewitañ, ha pa vehe ar reolennoù-se fall-reolennoù e chomehent mad memestra dre ma oant reolennoù : “Pezh a zo a-bouez, avat, eo e vefe ur reolenn.” Ewid TRICOIRE ema splann an traoù : e eil embannadur e levr *Me a gomzo brezoneg* e ansave ema yezh ar levr ar yezh “standard”, a zo, abalamour d'an istor, ar leoneg, bet gomet an diforc'hioù brasañ anezhañ e-keñver ar rannyezhoù arall. Ansav a ra iwe ne vez ket komzet ar yezh-se e kornad ebed ag ar vro, mez ganti e c'hell an newezbrezhoneger n'em gustumañ douzh ne vern pesort parlant lec'hel (p. 10).

### 1.5.3. AN EFED-BUBEN

#### 1.5.3.1. Tezenn Vladimir BUBEN

Herwez CHEVROT<sup>141</sup> eh eus bet nebeud a studiadennoù diwar-benn efed ar skrid war ar mod da sanañ, er-maez a notadurioù berr strewet amañ-ahont e yezhadurioù pe geriadurioù zo. Vladimir BUBEN an heni eo en doa gouestlet ur studiadenn d'an tem-se a-zivoud ar galleg<sup>142</sup> (1935). Rag ma talc'h kont ar skrid ag ar c'homz, mui pe vui, e c'hoari ar skrid war ar c'homz d'e dro, er

<sup>140</sup> « *Normer pour survivre* », LE DÛ, Prezegenn e Gwened, 1990.

<sup>141</sup> Heuliet em eus amañ analiz Jean-Pierre-CHEVROT hag Isabelle MALDEREZ *L'effet Buben : de la linguistique diachronique à l'approche cognitive (et retour)* er gelaouenn Langue Française, Vol. 124, N°1, 1999, pp. 104-125 ewid prezantiñ an efed-Buben, rag ma taolenn sklaer a-walc'h ar problematik gant roennoù newez. Lennaduz en-linenn : [http://www.persee.fr/web/revues/home/prescript/article/lfr\\_0023\\_8368\\_1999\\_num\\_124\\_1\\_6302](http://www.persee.fr/web/revues/home/prescript/article/lfr_0023_8368_1999_num_124_1_6302).

<sup>142</sup> BUBEN, Vladimir, *L'influence de l'orthographe sur la prononciation du français moderne*, Bratislava, 1935, 244 p.

yezhoù alfabeteg d'an nebeutañ. Alese e komzer a *efed-Buben* pa gomzer a levezon ar skrid war ar mod da sanañ. Komzet e vez neuze a *sanadur ortografeg* pe a *ortografizm*.

Meur a c'her, e meur a yezh, a c'hell kaoud meur a sanadur, mez n'eus ket tu peurliesañ de skriv ur ger e meur a vod, herwez an doare-skriv (CHEVROT, *Orthographe et Prononciation*, 1996 : 127). Peurliesañ e not ar skrid an adfurm hir (fr. *quatre* ewid *qat'* ; bzg. **ur wezenn** ewid "**ur wenn**" W) ha gant c'hoari ar barnadennoù a zegemerusted e vez favorekaet ar sanadurioù tost douzh ar skrid, da lâred eo douzh an adfurmoù hir kentoc'h, santet neuze evel ar re cheuc'hañ (CHEVROT). Ewid BUBEN ataw ema diwar o c'hendere\* gant an doare-skriv e c'hell variantennoù zo treuziñ an amzer pe ged.

Da heul BUBEN e seblant ar c'hlaskerezh moned war-raog war an dachenn-se. Soñjal a ra an den hiziw e vern kalz ar menier mand eo bet strewet ar skritur e-mesk an dud a-hed an istoer. Da skwer ewid ar galleg.

### **1.5.3.2. Ar galleg ha skignadur ar skrid er boblañs**

Lezennoù Jules FERRY achuamant an XIXved kvd a voe ur bonn ruz ewid astenn an alfabetekâdur a-vraz er gevredigezh : gante e tapas an "*orthographe*" ur statud a enor er boblañs, n'eo ket gant ar re zesketañ hebkén mez iwe gant an oll.

Rag boud eh eus ur menier savantiz, emskianteg pe emskiantekoc'h, pa vez anw a levezon ar skrid war ar sanañ (NYROP, 1914) : braw e vez d'an den deskiñ e skiant pa gomzer ag an doare-skriv. Red eo kompren e oa daet ar galleg dre ar skrid beteg ar Fransizion, na gomzent ket toud "yezh ar republik" d'an amzer-se c'hoazh. Setu perag e veneg CHEVROT pouez pennañ "an diouwer a hengoun dre gomz" en astenn-se : neuze o doa tud zo, gwelet evel "hanter-zesket" ("*demi-lettrés*") pe "newez desket", klasket sanañ a vouezh uhel gerioù n'o doa ket bet tro da glewed biskoazh e-raog (gerioù dibaot, gerioù gouiañsel, diamzeret pe anwioù-tud).



Ha tra heverk, e-mesk an dud “hanter-zesket”-se e ranker lakaad ar vistri-skol. Beteg neuze, herwez FURET & OZOUF (1977), ne gaved namaed etre 20 ha 50% ag ar vistri-skol gante ar “*brevet de capacité*”. Dre ar skrid enta e veze anavezet dreist-oll ar yezh ofisiel gant ar vistri-se. Netra souezhuz mand eo daet da heul sanadurioù ortografeg bet strewet gante er vro a-bezh. Ouzhpenn-se e veze kustum ar vistri da sanañ kensonennoù dibenn ar gerioù da-geñver ar skrivadegoù ha da seveniñ an oll liammadurioù ewid na stenniñ lasoù d’ar skolidi (SEGUY, 1978). Ken liez all e veze ouzhpenn digejet an oll lizherennoù ewid deskiñ gwell ar mod da skriv d’ar vugale (DAUZAT, 1950), peadra da lakaad ar lizherennoù mud da voud sanet a-newez. Setu ar pezh a hegase GOURMONT :

“N’est-elle pas très curieuse, cette civilisation qui fait enseigner le français à un enfant de l’Ile-de-France par un paysan auvergnat ou provençal bardé de diplômes ? On entend à Paris des gens ornés de gants et peut-être de rubans violets dire “*sette sous*”, “*cinque francs*” : le malheureux sait l’orthographe, hélas! et il le prouve.”<sup>143</sup>

### 1.5.3.3. Mod-ober an efed-Buben

#### 1.5.3.3.1. Ar fonografizm :

Anw zo a *fonografiezh* pa vez tu da adsevel ur gomz diwar ur lizherenn pe meur a unan. Ha boud eh eus ag ar fonografiezh peogwir e vez gwelet anezhi war an tach. En aner e labourer, herwez LUCCI<sup>144</sup>, pa glasker distagañ-groñs ar liammoù pe ar c’henglotañ etre lizherennoù ha sonioù (pal an “emrenerezh” *autonomisme*). Padal, mard eh eus ur liamm etre skrid ha komz n’eo ket hennezh ur liamm univokel\* : gelloud a ra ar brazard a oui lenn adkavoud ar furm sanet dindan an heni skrivet ; mez ar c’hrouadur avad n’hell ket kavoud ar skrid da heul ar c’homz (POTHIER, 1996 : 16).

<sup>143</sup> R. de GOURMONT, *L’esthétique de la langue française*, Paris, Mercure de France, 1899, meneget in DELESALLE & al., 1986 : 305.

<sup>144</sup> In *Orthographe et prononciation*, Collectif, dir. JP. CHEVROT, LIDIL, P.U. de Grenoble, 1996 : 113-126.

#### 1.5.3.3.2. An efed-Buben war ar yezh :

Gant an efed Buben e vez favorekaet ar c'henglotoù fonografeg reoliekañ, ar pezh a c'hell degas ur c'hemm fonologel da heul. Komz a rae BUBEN a *giladenn* (*régression*) pa za war-glew en-dro ur sanadur na voe ket mui anezhañ pell zo hag a *newezadenn* (*innovation*) pa vez en un taol sanet ur lizherenn na voe ket bet sanet biskoazh.

Ur skwer ag an efed-Buben a vez gwelet gant adsanadur lizherennoù mud e dibenn (*fil̄s*, *but̄*, *dot̄*) pe e diabarzh ar gerioù (*cheptel*, *dompteur*, *obscur*, *octroyer*). E galleg ar XVIIved kvd, sanadur an s skrivet pa ne oa ket mui anezhañ e yezh ar bobl : “juque” > *jusque*, “puique” > *puisque*, “preque” > *presque* (CERQUIGLINI, 1995 : 89)<sup>145</sup>. Zokén nann-etimologel (*bascule*, *ustensile*). Ur skwer arall a skeudennaoua forc'hellegezh ar c'henglotiñ etre lizherennoù ha sonioù, evel hiziw ewid *gageure* sanet \*[gaʒœr], pa vehe da gompren *gage + ure* [gaʒy:r] ; *Auxerre* sanet [oksɛr] ; *Quimper* sanet ['kvimpə] gant an Alamanted herwez reolennoù o yezh<sup>146</sup>.

#### 1.5.3.3.3. Levezon ar skrid war ritm ar c'hemm :

Buannoc'h e ta ar c'hemmoù a-hed an amzer pa glot ur variantenn bennag gant an doare-skriv. Mez ne vez ket touchet oll c'herioù ur serienn e-lec'h ma kouezh ar c'hemm. Da skwer, daoust da *dompter* boud sanet bremañ gant ar **p** diabarzh, e vrall ar sanadurioù ewid *sculpter* (gant ar **p** pe hebtañ), pa chom mud-kàer hennañ er ger *baptême*.

Mez skwerioù zo a ziskouez e-kontrol un difonnaad d'ar c'hemmoù gant an efed-Buben. Ouzhpenn re v/BUBEN, goude studioù WYLD (1936), LEVITT (1978) e ouier e vez gorrekaet mont-war-raog naturel kemmoù fonetikel ar yezhoù da heul lezennoù ar skol red. Dre ar skrid e c'hell diforc'hoù-sanañ en arvar talañ c'hoazh, da skwer etre *pâte* ha *patte*. Tu a vehe da venegañ ouzhpenn *juin*, sanet a-liez evel *joint* gant ar mediaoù.

<sup>145</sup> Padal e noter ur skwer kontrol e galleg Pariz, e-lec'h ma vez sanet an anw-familh *Le Bras* evel le bras ([bra :]) ha n'eo ket evel e Breizh e-lec'h ma vez klewet an -s c'hoazh.

<sup>146</sup> E-kontrol diouzh ar skwerioù arall n'ema hennañ namaed ur fari-lenn nen deus kalz a chañs da badoud, taol-añsi-komz un tourist é c'houlenn e hent en ur vro dianav dezhañ.

#### 1.5.3.4. Ar c’homzer hag an doare-skriv

Herwez CHEVROT eh eus bet klaskerezh war levezon a-benn-kàer an doare-skriv war ar sanadur, klaskerezh war e levezon war an hirdermen, ha studiet eo bet iwe e efed war ar c’homz ha war ar merzoud.

##### 1.5.3.4.1. An efed a-benn-kàer :

Herwez LUCCI (1983) e hepkor an darn vuiañ ag ar lennerion ar variantennoù dishañval diouzh ar standard pa lennont a-vouezh uhel : diaez eo aze da ouied hag-eñv e c’hoari ar ger skrivet pe kentoc’h stadiad an akt a lenn. Mez lakaet en deus CHEVROT war-wel (1996) en dez ar skrid ur levezon war ar sanañ gant bugale 10-11 vloaz, heb mar na marteze, gant un test a oa lenn niveroù ar rummad 4000, lod skrivet gant chifroù, lod gant lizherennoù (4000 *vs quatre mille*) : pa lennent ar chifroù e tistagent *quat’* (75% anezhe) mez ne chome ket mui namaed 42% ag ar sanadur-se gant ar lizherennoù, an darn vuiañ ag ar vugale é sanañ an **r** neuze.

Er-maez ag an test-se en em gav liez ar gomzerion dindan klewed lenn gant an heni a lenn. Liez e vez hennañ un den a veli, skoliataer, kazetenner ag ar radio pe ag an tele. Da heul e vez kaset pelloc’h ar mod da gomz-se dre an eskemmoù sokial, ar pezh a astenn hag a gadarna ar sanadurioù ortografeg.

##### 1.5.3.4.2. An efed paduz :

Gwezhave e c’hoari an efed-Buben war an hirdermen, da skwer gant ar skol. Dsikouezet en doa CHEVROT (1998) rol ar skol e “reizhadur” ar ger “*pasque*”, an heni namaetañ gwelet evel reizh gant ar skolidi e deraou ar CP ha waet da “*parce que*” daou vloaz goude : ar vugale a sante ar furn-se evel an heni reizh a oa iwe ar re a ouie penaoz henn skriv difari.

Ar pezh a zo sur : santoud a ra ar lenner-skriver, gourdon pe zeskard, an dober sklaer pe sklaerroc’h a zerc’hel kont ag an titouroù degaset gant ar pezh a zo skrivet. Hag etre diw variantenn e choazo an heni a gloto ar gwellañ gant

heuliad ar lizherennoù skrivet, herwez studioù GUEUNIER & *al.*, (1978) ha HOUDEBINE (1985).

### 1.5.3.5. Limit ha talvoudegezh an efed-Buben

Nawazh ne c'hell ket an efed-Buben boud un alc'hwez ewid an oll gemmoù fonologel. Estroc'h egetañ a c'hell degas kemmoù, herwez CHEVROT, evel an dober a santoud ar liamm diverel etre ar gerioù : *os* pe *sens* gant un *s* sanet abalamour da *osseux* pe da *sensé*. Gelloud a ra iwe un taol-mouezhiañ newez degas kemm, ar pezh a oa degouezhet e galleg e penn kentañ an XXved kvd gant un TM-pouezañ, herwez DAUZAT (1950), hag en deus degaset un doubliñ ewid kensonennoù zo.

Diouzh an tu arall e c'heller soñjal en dehe ar skrid ur galloud pouezusoc'h eged er realded. Ewid WALTER nawazh e weler, gant ar gerioù galleg *pâte* ha *patte*, ur skwer a neutralizadur an enebadur etre an daou /A/ ha koll hirder ar vogalenn, en despet d'an doare-skrid.

En despet da-se e soñje LEVITT (1968, 1978) n'heller ket studiañ fonetik istorel yezhoù zo ewid ar diwezhañ kantvleadoù heb derc'hel kont ag ar faktor ortografeg.

### 1.5.3.6. An efed-Buben hag an eil yezh

Herwez DETEY<sup>147</sup> e kennew ogozig ataw ar *brouderoù*-klewed (*stimuli auditifs*) gant o skeudennoù skrivet. Rekiz e vehe studiañ war-un-dro ar merzoud dre gomz hag an heni dre skrid, levezonet unan gant egile, ewid derc'hel kont ag ar fed-se e didaktik ar yezhoù d'an estrañjerion, e-lec'h ma en doa DETEY & *al.* lakaet war-wel un efed-Buben ewid an eil yezh (*treuzkas etremodel, transfert intermodal*).

---

<sup>147</sup> DETEY & *al.*, *Apprentissage de la Phonologie du Français par des Japonais et Multimodalité : une didactique nécessairement cognitive*, 1er colloque international de Didactique Cognitive, Toulouse, 2005. Lec'had : <http://lidifra.free.fr/files/Detey-f.pdf>.

Merzet e oa bet problem ar levezon-se gant François FALC'HUN pa skrive, da vare an emvodoù diwar-benn unvanadur doare-skriv ar brezhoneg :

“ Un soin particulier devra être mis à repérer les différences entre les règles de la prononciation du français et celles du breton, de façon à choisir une orthographe bretonne qui assure une prononciation correcte malgré l'influence, chez les jeunes sujets bilingues apprenant le breton dans les livres, des habitudes de l'orthographe et de la prononciation du français.”  
(*Suggestions pour une entente sur l'orthographe bretonne*, 5 mai 1971, Dielloù Pêr HONORE).

Remerket eo bet, gant an deskarded, savidigezh sanadurioù difer a reolieka ar c'henglotoù fonografeg. Da skwer e tistagont an **t** (mud e saozneg) er ger *listen*.

N'eo ket neuze an efed-Buben namaed ur reoliekaad da c'herioù zo na glotont ket gant ar sistem anavezet herwez kenglotoù fonografeg olleg (CHEVROT, 1999).

Gwelet e vo just a-walc'h, gant an dezenn-mañ, beteg e-menn en deus an doare-skriv levezonet sanadur ar brezhoneg war un poent d'an nebeutañ : heni ar liammadurioù.

#### 1.5.4. KEMPOUEZAÑ ?

##### 1.5.4.1. Kudennoù ar re-normañ

Mard eo komprenaduz un normañ minimom e c'hell ur re-normañ aheurtiñ iwe.

« Le temps de Vaugelas n'est plus ; de nos jours on ne pose plus d'interdits « parce que c'est comme ça » ; nous voulons comprendre pourquoi il faut dire ainsi, quelles sont les tendances profondes de notre phonétique, et ce qui justifie, non seulement esthétiquement ou historiquement, mais du point de

vue utilitaire (fonctionnellement) les efforts que nous ferons pour parler correctement. » (CARTON, 1974 : 195).

Ewid ur yezh ken normet evel ar galleg e vez diaez chañch an normoù, ha pa vehe da roiñ un taol kempenn d'ar yezh, rag traoù digempouell helaezh a gaver e-barzh : ***un** banc public, **une** école publique... mez **un** bouton électrique...*

Tu zo da weled reolennoù zo evel ur re-normañ gant lod. Afer ar **zh**, ewid ar pezh a sell douzh an normañ skrivet, a c'hell boud lakaet da skwer amañ e brezhoneg. Ne blijas ket ar digraf-se da Vretoned zo. Ropar**z** HEMON e-hunan n'henn implijas ket ewid e anw, pa voe degemeret gant Roper**zh** Ar MASON. Daet eo nawazh da voud arouez an aliañs etre KLT ha W, skeudenn an unvanidigezh posubl. Ne voe ket kemeret gant ar Skolveureg, a gavas gwell ober gant daou zoare-skriv dishañval. Gwir a-walc'h eo e vez "tu atav da abegiñ n'eus forzh petra a zivizer diwar-benn an doare-skrivañ" (HEMON). Mez a-liez e sav abegoù abalamour d'un diouver a skiant vad iwe. Ar pezh a zo bet graet ewid ar **zh**, da lâred eo klask un hent etre, klask ar c'hendod, a vehe bet tu d'henn astenn pelloc'h, mez pas ken pell-se koulskoude : da skwer furmoù unvan evel **heni**, **kennig**, **achu**, **arru**, hanter-hent etre **\*hini/\*hani**, **\*kinnig/\*kannig**, **\*echu/\*achiw**, **\*erru/\*arriw**...

Ouzhpenn-se eh eus tu iwe da dennañ korvo ag emdroâdur ar c'houiañs ewid ober un tamm kempenn d'ur benveg savet degadoù zo.

Tu zo d'en em c'houlenn iwe mar n'eo ket tech lod ag ar vrezhonegerion ahiziw "kaozeal" herwez modoù lec'hel-kenañ, un ersav\* douzh ar pezh a vehe santet evel ur re-normañ? Beteg fariañ zokén ! Menegomp un astenn gant Gwenedourion zo da lâred (heb skriv<sup>148</sup> !) **klac'h** e-lec'h **klask**, ar pezh a vez posubl gant an anw-verb (**eh an da glac'h udb**). Siwazh e klewer bremañ **\*klac'het 'm eus, pa \*glac'han**... a zo newez er yezh, ha direkiz e-keñver ar gomprenidigezh, rag zokén e Bro-Wened e vez komprenet **klask** e peb lec'h. Dre skrid e lenner iwe bremañ, da beb an amzer, ar furn **\*achiv**, marse

---

<sup>148</sup> Ne ro geriadur MH namaed furmoù e -sk : **klask**, **klaskour**...

abalamour m'ema re bell ar furm normet **echu** ; \**aveit* e-lec'h **ewid** (pe evid), na zegas ket kalz a dra a-bouez d'ar W nawazh. Nag ar ger **bloaz**, pe **ble** e W, skrivet **blez** gant lod ag ar Wenedourion : ha lâret e vez [ble:s] en ur lec'h bennag ?

#### 1.5.4.2. Skol-veur hag unvaniñ

Redioù ar labour gouiañsel (skiantel) a c'houlenn d'ar c'hasker boud diseblant douzh ar sujed arsellet hag analizet. Pa sell hennezh douzh ar yezh enta e rank he deskrivañ en he stad gwirion, renabliñ ar fedoù ha sevel ur c'horpuz gante, kuit a dennañ lezennoù fonetikel pe yezhadurel.

E-keñver ar brezhoneg e kaver studiadennoù diwar-benn brezhoneg-mañ-brezhoneg, heni ar c'hornad-mañ-kornad<sup>149</sup>. Ar pezh a zo a-bouez braz ewid gouied pesort tresoù kumun ha tresoù dishañval a gaver ennañ.

Pa dremen an den a dachenn ar c'haskerezh da heni ar c'helenn e ranker nawazh ober un tamm kempenn ewid simplaad ar furmoù, rag n'hello ket ar skolidi deskiñ oll argemmoù an dachenn.

Pa lâr Herve LE BIHAN<sup>150</sup> he deus tremenet skol-veur Roazon, e-korf ur c'hant vloaz bennag, ag ar "*Studioù kelteg*" da "*g/Kelenn ar brezhoneg*", e verk aze un emdroâdur interesuz. Ar pezh a weler hiziv, gant an oberennoù savet gant ar skolveuridi, zo ur valañs etre kennig ur yezh simplaet ha kennig ur yezh gant meur a furm dishañval. N'eo ket sur he deus kavet ar skol-veur ar c'hempouez etre an daou vod-se da brientiñ ar yezh d'ar skolaerion c'hoazh<sup>151</sup>.

E-keñver an doare-skriv e weler iwe un diouwer a vestroniezh a-bezh ar skolveur, pa gomzer ag ar brezhoneg d'an nebeutañ. N'eo ket ar skritur "*Skolveureg*" an heni implijetañ hiziv-an-deiz, ha n'eo ket trawalc'h, war a

---

<sup>149</sup> Renabl bet savet gant LE PIPEC, 2007 : 58.

<sup>150</sup> E berradenn e brezegenn da-geñver kollok AULF Roazon (26-27 Mezheven 2009) (<http://monsie.orange.fr/aulf2009/>).

<sup>151</sup> Tu zo da geñveriañ, da skwer *Brezhoneg buan hag aes* Pêr DENEZ (1972) ha *Yezhadur ar brezhoneg a-vremañ* Francis FAVEREAU (1997).

seblant, herwez skwer an Etrerannyezhel, d'ar saver pe saverion geriadurioù boud kelenner (-ion) er skol-veur ewid lakaad o doare-skriv da dalvezoud. Evel ma vehe ar stourm war un dachenn arall, heni ar politik moarvad<sup>152</sup>. Nawazh e c'hellehe (e c'hell) ar skol-veur degas ur sav-boent neutr, peurged war ar liamm etre doare-skriv ha sanadur.

### 1.5.5. NORMALIZADUR AR BREZHONEG

#### 1.5.5.1. Fabrikañ ur yezh vodern

Nend eo ket bet ataw ar brezhoneg ur yezh a zedenne ar yezhourion. E-pad kantvleadoù e oa chomet dilezet gant pennoù-braz ar bobl, douget da gomz galleg kentoc'h, ar galleg gwelet evel yezh ar sevenadur, yezh ar galloud, yezh an dazont. Nawazh eh eus bet skridoù e brezhoneg, hag un doare-skriv evel-just.

Goude An Tad MANER, a zegasas ar **c'h** hag ar c'hemmadurioù er skrid, en doa "Tad ar Brezhoneg", Jean-François LE GONIDEG, boulc'het e penn kentañ an XIX<sup>ved</sup> kantvlead ar labour kempenn a bad hiziw an deiz c'hoazh : skarzhiñ ar gerioù galleg dired ; brezhonekaad gerioù daet ag ar galleg ; krouiñ gerioù kelteg, diwar ijin ar brezhoneg pe ar c'hembraeg, pe degemer, brezhonekaet, gerioù "etrevroadel". Mez iwe studial a-newez ar yezhadur hag ar sintaks, renabliñ an troioù-lavar, studial ar brezhonegoù lec'hel. Nend eo ket ar labour-se achu c'hoazh. Ne oa ket bet studiet-mat brezhoneg kornôg Bro-Wened, na heni Malgenag da skwer, e-raog ar mizioù tremenet.

Unvaniezh ar Skrivagnerien (1907), kaset gant VALLEE, krouidigezh Gwalarn (1925) gant HEMON ha MORDREL, emglew 1941, kennig FALC'HUN (1953), emvodoù ar bloazioù 1971-1976 ne oa dezhe oll namaed kavoud ur benveg kumun d'ar skrid ha dindan, mui pe vui, d'ar mod da c'homz.

---

<sup>152</sup> « Le problème [de l'orthographe] est plus d'ordre politique que pédagogique. » Jacques LECONTE & Philippe CIBOIS, meneget in POTHIER, 1996 : 16.



Meur a stumm a vez kavet er brezhonegva, meur a c'her ewid ar memez tra, meur a sanadur ewid ar memez ger. Mez anad iwe en em gaver gant ar memez yezh, enkontet ar gwenedeg, chomet a-gostez tamm pe damm beteg neuze. Ha mar en doa MORVANNOU implijet diw linenn a-stur e *Initiation au Breton sans peine*, unan ewid ar KLT hag un arall ewid ar gwenedeg, ema kentoc'h ewid diskoueziñ hañvalded ar yezh kentoc'h eged he dishañvalded. Mez avañtur newez ar skol e brezhoneg a chanchas an traoù.

### **1.5.5.2. Diwan hag ar brezhoneg er skol**

E 1977 e oa bet digoret ar skol diwyezheg kentañ e Breizh : kentañ skol-vamm Diwan e 1977 e Lambaol-Gwitalmeze, 5 pe 6 a vugale enni en-dro d'ur mestrskol a youl-vad. Ne ouie ket ar gerent c'hoazh, nag an dud o doa boulc'het ha dalc'het gant ar ragtres-se, e vehe bet un istoer hir.

Da heul digoridigezh Diwan, mez c'hwec'h vloaz goude (1983), e voe kroueet gwenodoù diwyezheg er skolioù publik e Lannuon, Roazhon ha Sant-Riwal ; ha rekiz gortoz seizh vloaz goude c'hoazh ewid digoradur kentañ gwenod prevez katolik e 1990 e Gwened. Gant ar brezhoneg er skol e oa daet rekiz tostaad douzh ar skridoù, daoust d'an dafarog modern boud paour-razh d'an amzer-se.

E 1977 ha beteg ar bloawezhioù 1990, pa glasked skolaerion diwyezheg, e veze tu da gavoud tud a anave ar brezhoneg madig a-walc'h c'hoazh, tud hag o doa henn klewet komzet tro-dro dezhe, gant Bretoned o c'hornad, daoust d'ar remañ boud kozh un tamm dija. Ar skolaerion-se ne oant ket bet oll furmet war ar yezh. Un anavoudegezh skañv a oa o heni liez, daoust d'ar strivoù graet war an toemm gante ewid gelloud kas o micher war-raog. Da lâred eo ne oa ket unvan an doareioù pedagogel, nag ar fesonoù da skriv. Peb unan a rae ag ar gwellañ, gant ar pezh a ouie. Pal an traoù a oa lakaad ar brezhoneg er skol, kousto pe gousto, en despet d'an diouveroù. Rekiz e oa d'ar skolaerion sevel fichenoù gant nebeud a c'herioù resiz. Braz-braz e oa an toull etre doberoù ur skol digor war ar bremañ hag ur yezh chomet gant doberoù ur c'hantvlead tremenet, ha doberoù ar maezoù kentoc'h c'hoazh.

### 1.5.5.3. Ar brezhoneg war ar marc'had en-dro

Diouzhtu e rankas an dud krogñ gant ar labour sevel gerioù newez, levroù a beb sort ewid magañ ar skolioù, ewid d'ar benvegou-se kemer lec'h ar fichennou-pedagogel a rede, roneotet pe luc'hskeudennet, a skolaer da skolaer. Diaesoc'h-diaez e oa d'ar brezhoneg chomel re lec'hel, dre ma rede stankoc'h-stank ar skridoù dre ar vro, dre ma rede iwe ar skolaerion muioc'h-mui ag ur c'hornad d'an arall, a-liez pell a lec'h o ganedigezh, ar pezh a zegase meskaj er modoù da gomz. Diouzh he zu e krogas ar skol-veur iwe e lañs newez ar brezhoneg (da heul ar strivoù a asante ar Stad d'ober ewid ar yezhoù-rannvro). Setu e voe krouet ur lisañs vrezhoneg e 1981. Tu zo bremañ da dapoud un diplom skol-veur (D.U.) goude ur stummadur 8 miz war ar brezhoneg (UCO An Aradon, UCO Gwengamp), ha tu da dremen iwe mestroniezh, DEA pe doktorelezh (Master bremañ) e Brest (UBO) pe e Roazon (UHB). Krouidigezh Stumdi ha keveladurioù aozer-stajoù hir pe hirroc'h. Beteg ar c'hreizennoù-furmañ *Keleñn/Diwan* (1997), *IUFM/Publik*, *St-Brieg* (2002), *CFP/Katolik* (2003) a veze hag a vez kumun c'hoazh d'an oll : lec'hioù da vrasañ ar parlantoù.

Gant kresk niver ar gwenodoù diwyezheg e tivizas ar Stad hag ar Rannvro sevel un ti-embann ewid pourchas danvez-keleñn d'an oll glasoù diwyezheg : *Ti Embann ar Skolioù* (1994, TES, staget douzh ar CRDP, e sez e Sant-Brieg), heb kontiñ an tier-embann kozh pe goshoc'h a labour ewid ar skolioù hag ar vugale : *Skol Vreizh*, *An Here*, *Coop Breizh*... Menegomp iwe an dewezhioù studi, ar c'hentelioù-noz, ar stajoù berr pe hir savet gant kement kevredigezh a zo (**Ar Falz**, **Diwan**, **Dihun**, **Div Yezh**, **Gevred**, **KLT**, **Merwent**, **Studi ha Dudi**...).

Mez n'eo ket trawalc'h roiñ d'ar skolaerion ha d'ar gelennerion ur furmadur 6 pe 8 miziad : re verr, anad eo, o anaoudegezh ag ar yezh ewid keleñn. Setu perag e kennig Stumdi ur "stummadur uhel" 3 miziad ouzhpenn (20 stajiad e-korf ar bloaziad-skol 2008-2009). Anw zo ag ur ragtres hañval er Skol-Veur.

Mar geller, sur a-walc'h, kaoud un tammig satisfiañs er pezh a zo bet graet beteg bemañ, anad eo e chom braz an tachad da c'hounid, heni ar c'hementad

(niver ar skolidi a chom kalz re vihan c'hoazh ewid dazont ar yezh, ha liammaet eo gant niver ar gelennerion barreg ha dijabl), mez tachenn ar c'halite iwe (gortoz muioc'h a efedusted hag a lemmted gant ar furmadurioù zo ur redi bremañ).

#### 1.5.6. AR BREZHONEG, UR LAÑS PEDAGOGEL NEWEZ ?

##### 1.5.6.1. Yezh war ar stern

Boud ema ar brezhoneg hiziv "ur yezh war ar stern" : setu aze sav-boent Albert BOCHÉ. War ar stern e gwirionez, abalamour da veur a dra : ar pezh a zo bet graet e-korf pemp kant vloaz ewid ur yezh a-sort gant ar galleg, e rank ar brezhoneg henn ober e-korf hanter-c'hant vloaz. Daoust d'ar strivoù braz ha paduz graet a-gozh gant heniennoù, ha newez so da heul gant Diwan, SADED, IMBOURC'H, PREDER, TERMBRET (mui heniennoù arall ouzhpenn c'hoazh) e chom labour d'ober. Mard eo ar sevel gerioù newez un dober red ewid kaoud ur brezhoneg a live gant ar bed a-vremañ, e chom tachennoù arall da studial ha da sklaerraad c'hoazh.

Pa oa bet lañset ar skolioù brezhoneg e oa bet lakaet ar pouez war ar brezhoneg, da lâred eo war ur yezh *na oa ket* ar *galleg*. Lakaet e oa bet ar pouez war ar sintaks, an displegadur, ar c'hemmadurioù. Niver ar pajennadoù diwar-benn an dodenn ziwezhañ-se er yezhadurioù henn diskouez sklaer : nag a strivoù gouestlet d'ar c'hemmadurioù, lakaet ogozig da arouez ha da binvidigezh dispar ar brezhoneg, e-keñver ar galleg ! Mez nag ar sanadur ?

##### 1.5.6.2. Ur c'hempouez newez ?

Termal a ra ar studioù-yezh etre an deskripañ hag an normañ. Da skwer *Dictionnaire de la prononciation française dans son usage réel* (MARTINET, WALTER, 1973) diouzh un tu ha *Prononciation du français standard* (LEON, 1978) pe *Dictionnaire de la prononciation du français dans sa norme actuelle*,

(WARNANT, 1987) diouzh an tu arall. Boud ema *Geriadur brezhoneg An Here* (1995) ur geriadur normativel evel heni Hor Yezh. Padal ema *Geriadur ar Brezhoneg a-vremañ* (FAVEREAU, 1992) ha *Yezhadur ar Brezhoneg a-vremañ* (FAVEREAU, 1997) ur renabl a stad ar yezh e fin an XXved kvd, hag ar pezh a zo talvouduz, ur bern troioù na oant ket bet dalc’het beteg poent. Ennañ e kaver ouzhpenn un elfenn a bella ar lenner ag un norm strizh<sup>153</sup> : daoust d’ar gerioù-añtre boud bet skrivet herwez ar sistem etrerannyezhel e veneg ar geriadur feson da skriv an daou sistem arall pa vez un dizemglew etreze (notet gant un <sup>x</sup> ar Peurunvan-41 ha gant un <sup>o</sup> ar skolveureg) : KET / KED<sup>o</sup> ; PERAG / PERAK<sup>x</sup> ; KESEG / KEZEG<sup>xo</sup>...

Er vuhez ordinal nawazh en em gav an dud dirag an norm pa faota dezhe c’hoari gerioù-kroaz pe skrabel, ha liez e tave ar c’hoarierion douzh ar geriadur (peheni ?) ewid en em lakaad akord. Ha moned a ra an normalizadur gant e hent ataw, mod pe vod, dre ar yezhadurioù, geriadurioù, levroù skol<sup>154</sup>, ha dre ar c’hentelioù-noz hag an testennoù ofisiel (Sd. §1.1.2.5., p. 35).

Anavoud a raer bremañ, pe dost, liessorted ar modoù da gomz brezhoneg. Ha rekiz e vo d’ar vistri kelenn an oll stummoù da vugale ar skol-vamm ? Zokén da re ar c’hentañ derez ? Zokén da re ar skolaj pe ar lise ? Ur wir gudenn, anad eo, rag estroc’h eged gant ar gerioù-se e vez renablet meur a stumm-pobl.

Nawazh, ha rekiz eo choaz etre **pelec’h** ha **menn**, da skwer<sup>155</sup> ? Tamm ebed, an heni kentañ é klotañ gant *which place ? à quel endroit ?* hag egile gant *where ? où ?* Memez tra ewid **padal/nawazh/koulskoude** pe ewid **a-gaoz ma/abalamour ma/rag ma...** Mez pesort furm gouarn etre **darondell, gwennel, gwennili, gwenniel, gwennol, gwennidell, gwennigell, siminalig, skandillig** ? Ha ken talvouduz, ken reizh int oll ? Ha kempouell eo lakaad

---

<sup>153</sup> Daoust d’ar geriadur boud deskrivuz e klask meur a wezh lakaad ar lenner da zegemer ur furm kentoc’h eged un arall. Da skwer : dindan TU eh eus bet notet an dro WAR-DU, ha ked WAR-ZU, a gaver liez a-walc’h e skridoù zo. Mez kavet e vo **war-zu** dindan WAR, war-un-dro gant **war-du**.

<sup>154</sup> Ouzhpenn 150 levr gouestlet da gelenn ar yezh herwez renabl ar lec’had [www.bibliobretagne.com/index.asp](http://www.bibliobretagne.com/index.asp). F. FAVEREAU a rae meneg, deg vloaz so dija, ag ur 370 studiadenenn bennag diwar-benn yezhadur ar brezhoneg (1997 : 8).

<sup>155</sup> Plijoud a ra d’ar Vretoned iwe implij hañvalsterioù. Henn diskoueziñ a ra ar sonennoù-pobl liez a-walc’h : **newez-hañv** implijet en ur poz, **newez-amzer** en eil.

*gwennili*<sup>156</sup> da standard ewid *hirondelle* pe vez hennezh, ez-reizh, ur furm liester ha pa vez furmoù arall ? Ha nag etre *klaoustre* ha *koustele*<sup>157</sup> ? Etre “*ouz*”, “*oc’h*”, “*douz*”, “*deuz*”, “*dac’h*”, “*dec’h*”, “*doc’h*” ?

Aze ema an dalc’h ewid choaz ar gerioù a zo er yezh dija. Mard eo re vruzunet ar yezh evel m’ema, hunvreañ neuze er yezh evel ma tlehe boud ? Klask he sevel ? Ha penaoz termeniñ ar yezh ideel-se ?

### 1.5.6.3. Ur sanadur standard ?

Ar pezh a zo splann ewid ar gerioù (bihannaad o niver pa vez re anezhe ewid termeniñ ar memez naoutur) pe ewid sanadurioù zo ag ar memez ger (bihannaad o niver iwe), daoust hag-eñv ne vehe ket d’ober iwe gant tresoù arall ? Peurged gant tresoù a dreuz ar yezh en tu-hont ag he rannoù difer, evel an taol-mouezh, evel hirder ar vogalenn, evel sanadur ar gensonenn en dibenn absolut. Hag ouzhpenn gant un tres a-sort gant heni ar liammadurioù, levezon ar galleg warnañ evel ma welimp. Ha rekiz eo kennig ur patrom ?

Lod a gennig talañ douzh ar re a laoskentez, a c’hellehe degas diaezamantoù-kompen pe displijadurioù gant ar chelaouerion (CARTON, 1974 : 196-197). Skwerioù ar yezhoù estren a ziskouez liez kenvefañs ur vodell hag oberoù dishañval. E Bro-Spagn e chom ar c’hastilhaneg ar patrom. E Frañs n’eo ket mui parlant ar lez ar vodell a-vremañ, na muioc’h modell Bro-Tours da vare kastelloù ar Liger (MARTINET, 1949). En alamaneg e vez anw ag ar “Bühnenaussprache” (“sanadur ar leuren”), teskad reolennoù akord warne arbennigourion, mez ur sanañ annaturel na vez ket klewet er vro (*op. cit.* p. 196).

Kavoud a rae da R. LAGANE e kenglot an darn vuiañ ag an enoñsiadoù radio pe tele gant an heveleb modell-sanañ, war-bouez nebeud, a-du gantañ R.

---

<sup>156</sup> Furm namaeti geriadur AH (ur **wennili** b, ls **gwennilied**), evel e RH, mez e RH e kaver ouzhpenn **gwennel**, **gwennelenn**, **gwennidell**, ls **-ed**. Gant HY e-kontrel e vez lakaet da anw-stroll, evel e FAV: **gwennili** str., **ur wennilienn**, furmoù diouzh mod-sevel an unander, pa ziskouez **gwennili** boud liester **gwennel** (sd. **bran**, **brini** ; **gouelan**, **gouelini**...).

<sup>157</sup> Kennig a ra Albert BOCHÉ **kaoustle**, furm-etre (sd. kmg *cywystl*, FAV).

QUENEAU a soñje ouzhpenn e oa bet strewet evel-se ur mod da gomz reizh pe reishoc'h (CARTON, 1974 : 200).

Red eo kompren eh eus ur vodell dija e penn peb komzer. A-nebeudigoù e sav e emskiant fonetikel ar chelaouerion ur skeudenn-skwer (*image générique*) diwar ar paot a skeudennoù bet tapet a zeiz da zeiz. Neuze e vez savet ur vodell deorikel, gwir abstretadur hag ollekâdur a ya d'ober arketip ar sanañ heniennel a vo lodeg er sanañ stroll (LEON, 1972).

Hiziw e vez erbedet liez meur a sanadur ewid ar memez ger (*paye* : [pɛ] pe [pej]). Mez na boud e vez ataw ag ar variadurioù e kav da LEON n'eo ket ar remañ ken braz-se ewid na c'helloud kennig ur patrom. Ewitañ e kennig ar mediaoù modelloù denesauz\* ha lorc'hañsuz war-un-dro, enne variezonoù degemeraduz.

A-dreñv an dra-se e kaver dober an intent : ewid ma yay ar yezh en-dro e c'houlenn ma ne vo ket re a zishañvalderioù etre ar rummadoù implijerion. Setu perag e oa daet da soñj CARTON eh eus tu da gennig, narenn normoù fonetikel, mez liveoù-yezh enne derezioù gourvennadoù\* reizhsanañ.

Ouzhpenniñ a rae CARTON e c'houlenn *sked sevenadurel* ar vro, rekiz da lod, ma vehe kelennet un arver uhel ("*usage culturellement marqué*"), heni an dud varreg a gomz diardoù ("*qui rejettent toute affectation*"). Padal, ewid ar live uhel ("*registre soigné*") e erbed implij ur parlant a lorc'hañs a c'hello an oll dezrevell<sup>158</sup>.

E gwirionez e c'hell an den ober gant meur a live-yezh hag a live-sanañ. Ober a ra CHOMSKY an diforc'h etre *barregezh* (*compétence*) ha *kurenn*\* (*performances*), ar pezh a c'heller berrdaolenniñ evel-mañ :

---

<sup>158</sup> « Donc pas de norme phonétique unique mais des registres de langue comportant divers degrés d'exigences orthoépiques. Nous préconisons d'autre part, pour le registre soigné, l'emploi d'un parler de prestige imitable par tous. » (*op. cit.*, p. 201).

BARREGEZH	KURENN
Gouested c'halluz ewid an etrekompren <u>Stabil</u> (pe war stabillaad)	Sevenidigezh real (un arver eo, e-mesk arverioù arall) <u>Valigant</u> <u>Da skwer</u> : prezegenn en ur lidroâdur enorennoù (ds. Koler an Ermin) vs ar pezh a lâr ar memez den pa gav e oto drailhet.

Tu zo enta d'an hevelep den c'hoari gant meur a live, hervez an endro sokial. Aze just a-walc'h kevredi ar skol : lakaad ar skoliad da respetiñ ar c'hodoù emplegad (*codes implicites*) :

“ C'est au cycle II que chaque enfant apprend à mieux régler ses prises de parole en fonction du contexte où elles se produisent. On ne parle pas en cours de récréation comme en classe, à un adulte comme à des camarades du même âge, à quelqu'un qu'on connaît comme à quelqu'un qu'on ne connaît pas.” (M.E.N., *La maîtrise de la langue à l'école*, 1992 : 36).

Daoust ha ne vehe ket rekiz iwe, ewid ar brezhoneg, en em c'houlenn penaos ober ewid lakaad ar skolidi da vestroniañ ar yezh-se, a zo en ur stad dishañval-braz a-zoc'h heni ar galleg ? Rag ne vez ket kavet en endro an daveoù a genlabour da sevel en o fennoù ar pezh a c'hellehe boud ur wir yezh-vamm.

## 1.6. KLOZADUR AR PENNAD 1

N'eus ket tu da gomz ag ar yezh heb komz a reolennoù. N'eus namaed dre vestroniañ un niver minimom a reolennoù e c'hell an den kaoud ur barregezh yezhel (CARTON, 1974 : 198). Ema ar reolennoù er yezh, ha peb komzer a c'hell « degemer » pe ged ar frazennoù klewet. Mez tu zo iwe d'an den, ha dreist-oll d'ur Galloud bennag, *stummañ* ar yezh, evel ma implij Alan RAUDE ar ger-se, gant e ster kentañ, a zo tost douzh *krommañ*. Gant ar yezhadurioù, ar geriadurioù, gant ar levroù-keleñn e vez dibabet ha choazet ar pezh a vo degemeret evel dîn a voned d'ober ar yezh uhel, ofisiel, ar yezh a vo

goude kelennet er skol ha strewet dre ar re o deus un tamm beli er gevredigezh.

War dachenn choaz ar reolennoù enta eh eus da labourad. Penaoz e vint choazet, diwar pesort kriterioù ? Mez iwe, penaoz e vint lakaet da arveriñ ? Pesort strategiezh sevel er skol ewid ma vint desket gant ar skolidi da vad ? Amañ just a-walc'h en em gavomp bremañ a-fed sanadur ar brezhoneg. Unan ag ar reolennoù a zo tu da lakaad da gentañ eo heni ar liammadurioù. Daet e oa soñj din da labourad war an dachenn-se goude boud gwelet diaezamantoù ar skolaerion war ar poent-se, evel skolaer ha kuzulier pedagogel ewid ar c'hentañ mez iwe en eil derez. Setu perag em eus choazet studial amañ e pesort mod e vez sevenet ar liammadurioù er skol, gant ar skolidi, ha gant ar skolaerion iwe, e-keñver sistem-orin ar brezhoneg.

Me e soñj din nawazh e vez liammet ar reolennoù etreze, e kelenn ar yezh d'an nebeutañ. Setu perag e tain en-dro war ma labour mestroniezh (2002) hag ar peder reolenn diazez sanadur ar brezhoneg. Mar bo gouestlet ganin an deirved lodenn d'ar liammadurioù ha d'o sevenidigezh war an dachenn, e roiñ bremañ da gomañs un alberzh ag an teir reolenn a c'hell en em gavoud war-un-dro e-korf ur ger.



## 2. REOLENNOÙ DIAZEZ SANADUR AR GER

### Digoradur

Ar peder reolenn a vo anw anezhe izelloc'h zo bet oll renablet er yezhadurioù. N'eo ket un dra newez enta a vo dizoloet amañ, namaed ur mod pedagogel da roiñ buhez dezhe, d'o lakaad en o lec'hioù en doare da gelenn ar brezhoneg. Ar wezh kentañ din boud klewet komz ag ar peder reolenn-mañ a oa troioù 1995 gant Albert BOCHÉ, e Baod. Prezantet en doa ar reolennoù-se evel ur c'horpus kentañ da vestroniañ ewid tostaad douzh sanadur ar brezhoneg. N'eo ket 'maed a-nebeudigoù em eus dizoloet pegen frouezhuz e oa ar feson-se d'o gweloud, dreist-oll ewid prezantiñ ar brezhoneg d'an deskerion. Rag pa grog an den en ur yezh newez e vez aesoc'h dezhañ kaoud ur braz-sell warni, ha gouied gant pesort merkoù a-bouez e tishañvalla diouzh e yezh-vamm. Evel-se e c'heller lenn kement-mañ en un hentenn japaneg, chineg, italianeg (lakaet tew genin) :

« La prononciation **ne pose pas de grandes difficultés aux francophones**. Contrairement à d'autres langues asiatiques, le japonais ne possède pas de tons et la grammaire est relativement simple. La complexité réside plutôt dans les différents registres de langue, employés pour refléter le contexte social et la hiérarchie gouvernant toute relation<sup>159</sup>. »

« La phonétique du chinois standard est relativement restreinte. **Si la plupart des sons possèdent un équivalent français, quelques consonnes, dont des occlusives (dz, dj, ts et tch), s'avèrent plus difficiles à prononcer (...)**. Un autre aspect délicat est l'existence de tons de hauteur qui permettent de distinguer les nombreux homophones. Mal prononcés, ils conduisent à des confusions<sup>160</sup>. »

« L'italien, comme l'espagnol, le portugais ou le roumain, est une langue romane. **Restée très proche du latin, elle présente de nombreuses similitudes avec le français**, dans sa grammaire comme dans son

---

<sup>159</sup> ABE, Yoshi, *Japonais : guide de conversation*, Lonely Planet, 2005 : 10.

<sup>160</sup> GARNAUT, Anthony, *Mandarin, guide de conversation*, Lonely Planet, 2006 : 11.

vocabulaire. La plupart d'entre nous, parfois même sans le savoir, possèdent déjà des connaissances en italien<sup>161</sup> ... »

Setu brasstreset ar chantier da zifraostiñ gant an neb (galleger amañ) en deus c'hoant da grogiñ gant ar yezhoù-se. Ewid ur galleger en deus c'hoant da zeskiñ brezhoneg e vehe tu da lâred iwe, kent krogiñ ganti, eh eus er yezh-se pewar zra a-bouez he diforc'h splann diouzh ar galleg : ar peder reolenn-mañ just a-walc'h, a vo komzet anezhe amañ.

Daou rummad a c'hellomp ober ag ar beder reolenn dermenet : an deir reolenn gentañ zo staget douzh ar ger, é voud ma c'heller o c'havoud o zeir en arver en ur ger e-hunan, ha pa vehe hennañ ur ger unsilabenneg. Ar bederved reolenn diouzh he zu a c'hoari pa vez ouzhpenn ur ger er gomz, peogwir e verk ar mod da liammañ ar gerioù etreze, da lâred eo ar mod ma kemm ar gensonenn dibenn-ger gant bogalenn (pe gensonenn) deraou ar ger da heul.

Er pennad-studi-mañ e vo prezantet enta an teir reolenn stag douzh ar ger : an taol-mouezh, hirder ar vogalenn dindan an taol-mouezh, divouezhiadur ar gensonenn en dibenn absolut, pa vo komzet hirroc'h ag ar bederved - ar liammadur -, a zo dres sujed an dezenn-mañ er pennad III.

Setu perag e rankan da gentañ termeniñ daou c'her a vo anw anezhe hed-ha-hed an dezenn-mañ : ar ger hag ar silabenn.

## 2.1. TERMENADUR : SILABENN HA GER

An traoù simplañ da intent a guzh aliez diaezamantoù a sav kentizh e klask an den moned donnoc'h enne. Termeniñ petra eo ur *silabenn* ha petra eo ur *ger* zo evel-se. Ne glaskin ket amañ moned re bell ganti ha roiñ a rin un termenadur a spiro d'ar pezh a zo pal ar studi-mañ.

---

<sup>161</sup> COATES, Karina et al., *Italien : guide de conversation*, Lonely Planet, 2006 : 7.

### 2.1.1. AR SILABENN

Herwez ar c’hriterioù-diazez e c’heller termeniñ ar silabenn e meur a vod : bogalenn c’hronnet gant kensonennoù (ROUSSELOT), hedad etre daou vinima-son (JESPERSEN), enebadur etre fonemoù estarzhuz (*phonèmes explosifs*) hag entarzhuz (*ph. implosifs*) (SAUSSURE), stennder war-gresk ha war-zigresk ar benveg komz (*tension croissante et décroissante*) (GARMONT, FOUCHÉ).

Er c’homz, peurliesañ, e vez tolpet ar soniadoù (ar fonoù) e unanderioù ritmeg tro-dro d’un *derc’han*\* (*noyau*) aez da glewed : ar vogalenn. Ewid SAUSSURE e oa ar silabenn un unander fonetikel etre ar fonem hag ar ger, ne oa talvoud ebed ganti namaed e-keñver ar fonologiezh (CLG, p. 144). En ur silabenn, pa gaver ur gensonenn (K) e kaver iwe ur vogalenn (B), mez ne vez ket gwir ar c’hontrel ataw. Ur vogalenn namaeti a c’hell boud silabenn, hag ouzhpenn-se ger pe frazenn zokén, da skwer ar galleg *où* ? [u]. E brezhoneg e kaver gerioù ur vogalenn enne iwe : (un) â ; o (zi).

E galleg hag e brezhoneg e vez *derc’han* ar silabenn ur vogalenn ataw. E yezhoù zo nawazh e vez lakaet ur gensonenn-heklew da zerc’han : **r** pe **l**. Da skwer e tchekeg : **Brn**, **vlk** ; en amerikaneg : **little**. Gwezhave memestra ne gaver bogalenn ebed er silabenn, dreist-oll en estlammadelloù hag e diambrozennoù ar bannoù treset : **psst ! chtt ! kkrrrk ! kssss !**

#### 2.1.1.1. Framm ar silabenn

N’eus namaed ar framm KB a vez anavezet gant an oll yezhoù, ha n’eus yezh ebed, enni frammoù-silabennoù éc’h achuoud ataw gant ur gensonenn (PIERRET, 1994 : 53). Pewar framm-silabenn a vez kavet a-liez : KB, KBK, KKB, BK. Daou sort silabenn zo, e-keñver o lizherennoù-dibenn. Komzet e vez a silabenn digor pa achu gant ur vogalenn (KB, KKB), hag a silabenn serr pa achu gant ur gensonenn (KBK, BK). Ne gaver ket ar memez silabennoù a

yezh da yezh. Setu amañ un daolenn<sup>162</sup> é tiskouez tregantad ar silabennoù herwez o framm en un nebeud yezhoù :

	Galleg	Spagnoleg	Saozneg	Alamaneg
KB	59.9	55.6	27.6	28.7
KBK	17.1	19.8	31.8	38.1
KKB	14.2	10.2	4	3.3
BK	1.9	3.1	11.9	9.8

**Taolenn 1. Framm ar silabenn e yezhoù zo**

E brezhoneg e kaver ag ar frammoù-se (KB : **ki** ; KBK : **kig** ; KKB : **dle** ; BK : **ar**) ha liez a-walc’h iwe frammoù arall (KBKK : **kalz** ; KKBKK : **skerb** ; KKKBK : **strak**, ha zokén KKKBKK : **strimp...**).

Nawazh e c’hell termenadur ar silabenn chañch a yezh da yezh. E-keñver ar fonologiezh e tiazeg ar saozneg e dermenadur war an TM, an alamaneg war ar morfemoù. Istim a ra CARTON e c’hellehe ar galleg kemer harp war dougañs ar Fransizion da lakaad peb silabenn da achuoud gant ur vogalenn<sup>163</sup> ( $\approx 60\%$  ag ar silabennoù) ewid termeniñ honnañ : [ki-lɛm] a glotehe neuze gant *qui l’aime* kement ha gant *qu’il aime* (namaed hag e vehe dober a resisaad etre an daou lavar).

### 2.1.1.2. Pad ar silabenn

Silabennoù hir ha silabennoù berr zo. Gant [r, z, v ha ʒ] da zibenn e vez hir ar silabenn e galleg : *bave* [’bā:v], *carambar* [karam’ba:r], *lèvre* [’lɛ:vr].

E yezhoù zo e tegas an hirder un diforc’h-ster pa vez klewet un diforc’h a hirder er silabenn (ouzhpenn ur liw dishañval a c’hell merkañ ar vogalenn). Da skwer : Alamg : *föhlen* [’fy:lən] (“klewed ur blaz”) ≠ *füllen* [’fylen] (“leuniañ”) ; sng: *seat* [si:t] (“azezenn”) ≠ *sit* [sit] (“azezit”).

<sup>162</sup> Herwez LEON, [1992], 1996 : 95.

<sup>163</sup> Da skwer *alimentation* sañtet troc’het evel *a-li-men-ta-tion* [a-li-mā-ta-sjō] kentoc’h eged evel *al-im-ent-at-ion* [al-im-āt-as- jō].

N'eo ket ar pad un tres stabil. Studiet eo bet ha diskouezet ne gaver ket ar memez hirder a gomzer da gomzer, mez ouzhpenn e c'hell ar pad kemm a-hed ar c'homz gant ar memez komzer. Pa lârer e vez silabennoù hir ha silabennoù berr e komzer a gehidennoù (krennennoù).

E diabarzh ar silabenn, dreist-oll dindan an taol-mouezh, e vez kempouezet ar pad etre kensonenn ha bogalenn, herwez ar patrom ***bogalenn hir/kensonenn verr*** pe ***bogalenn verr/kensonenn hir***. Setu amañ da skwer hirder ar vogalenn dindan an taol-mouezh, herwez m'ema hir pe berr, e gerioù brezhoneg bet sintezekaet (MERMET, 2006 : 300-305) :

Gerioù	Hirder (mili-eilennoù)
<b>G</b> refenn [ˈgrefen]	83
<b>F</b> esenn [ˈfesen]	86
<b>T</b> apenn [ˈtaken]	86
<b>B</b> alafenn [baˈlafen]	86
<b>P</b> ajenn [ˈpa:ʒen]	128
<b>S</b> avenn [ˈsa:ven]	128
<b>S</b> tlejenn [ˈstle : ʒen]	122
<b>H</b> igenn [ˈhi:gen]	151

**Taolenn 2. Brezhoneg : Pad ar vogalenn dindan an TM.**

## 2.1.2. AR GER

### 2.1.2.1. Un naoutur forc'helleg

Peb unan a oui petra eo ar ger, ha peb unan zo gouest da roiñ un anfin a skwerioù anezhañ. Diaez a-walc'h nawazh e chom an naoutur a c'her da resisaad ewid ar yezhourion (MARTINET, 1960).

Ewid *teorienn ar mediation* (GAGNEPAIN) e klot an term **ger** un teskad-elfennoù kenliamm\*, emren, un deroù hag un diwez dezhañ. Etre ar gerioù, liammoù furmel studiet gant ar sintaks. Komzet e vez neuze a c’h/**ger-anw** hag a c’h/**ger-verb**. Termenet e vez ar ger en e zarempredoù gant gerioù arall en ur sistem variadurioù posubl pe ged. N’eo ket trawalc’h deskiñ ar gerioù evel “tammoù” dizepant, mez rekiz eo d’ar c’helenner roiñ d’ar skolidi da anavoud ar gerioù dre ar c’hemmoù a c’hell degouezhoud enne (dre an diveradur, an displegadur hag an treuzfurmatur frazennoù). Produiñ ur ger zo diarbenn\* furm ar gerioù arall, petra bennag ma vint lakaet en e raog pe war e lerc’h : en dro-lavar /**kudenn ar gevrenn**/ da skwer, na lakaad ur ger-mell dirag ar ger-1 (**kudenn**) zo gouied ne vo ket implijet araogenn ebed dirag ar ger-2 (**ar gevrenn**) ; divizoud lakaad ar ger-2 zo gouied ne vo ket ag ar ger-mell er ger-1 (URIEN<sup>164</sup>).

Ar simplañ termenadur nawazh eo lâred ema ar ger an unander-ster bihannañ, tu dezhañ da gomutañ war ar ahel paradigmateg. Gerioù zo, ur fonem enne : fr. [u] *ou* ; bzg. [e] anw-gwan perc’hennañ (**e di**), pe araogenn (**e kêr**). Lod ag ar gerioù zo diwar ur monem, ur silabenn pe ouzhpenn enne : fr. *feu, pain, caillou*; bzg. **del, ki, labour, tabut**. Lod arall e konter enne daou vonem pe ouzhpenn : **labourer, labourerion, labourerezed**.

### 2.1.2.2. Gerioù kevrenneg

Savet diwar daou pe ouzhpenn a elfennoù emren eh a ar gerioù kevrenneg d’ober un unander-ster (*pense-bête* ; **torr-penn**). Lod zo aet d’ur ger hebkén (fr. *toujours* < *tous* + *jours* ; bzg. W *iwarh* < **an niw-c’harzh**). Diaez e vez o anavezoud meur a wezh. Sinalañ a ra LE PIPEC (2007) daou skwer : **kole** (< **kozh** + **leue**) ha **hempraz** (< **hent** + **braz**). Diskoueziñ a ra e kemm ar reolennoù a ren o sanadur<sup>165</sup> : e Malgenag, er ger **hempraz**, pa vez sanet /hænt/ ewid **hent** e-hunan e vez sanet /im-/ er ger kevrenneg, ha kement-arall gant **hanter-c’hant** : **hanter** /hãˈtir/ a ya da / hãˈtər-/. Ar c’hemmoù-se ha kemm lec’h an taol-mouezh e diabarzh ar ger kevrenneg (**hanter** /hãˈtir/ ; **hanter-**

<sup>164</sup> Kentelioù skol-veur Roazon, *Valeur : Grammaire et pédagogie du breton*. Roneotet, 46 p.

<sup>165</sup> “L’amalgame de leurs constituants de première articulation a des répercussions sur leurs constituants de seconde articulation.” (LE PIPEC, 2007 : 86).

**c'hant** /hã'tər 'hãt/) a ziskouez en deus hennañ gounidet ur statud newez emren.

### 2.1.2.3. Ar ger ritmeg

#### 2.1.2.3.1. Ar group ritmeg :

Er c'homz ne gaver ket gwall liez ar ger er-maez ag e gennarroud. Dre c'hoari an taolioù-mouezh e vez troc'het ar frazenn e strolloù emren a-fed ster : ar groupoù ritmeg. Diskoueziñ a ra peb group ritmeg boud un unander difer a-fed taol-mouezhiañ. E gwenedeg da skwer e kaver enne an taol-mouezh pennañ war ar silabenn ziwezhañ ha liez a-walc'h an taol-mouezh-krogiñ war ar silabenn gentañ. Etre an daou TM-se e steuz mui pe vui an taol-mouezhioù arall.

Lod ag ar groupoù ritmeg a gont ur ger hebkén. Lod ag ar gerioù a chom er-maez ag ar groupoù, mez ansav a ra LE PIPEC e chom diasur war ar poent-se, gant displann e vez a-liez termeniñ resiz harzoù ar groupoù. Ar pezh a zo heverk, dizepant eo ar chadennañ ritmeg diouzh ar framm sintaksel :

“ [ 'oan-me ar gos 'hañ ] euh... [ fao'te ] [ mo'ned ] é [ 'touch an o'c'hen ]  
... [ get ma 'zad ] [ ha g'ar 'jao ].”<sup>166</sup>

Ewid treuzkas ar c'hemennad e vez troc'het an enoñsiad e groupoù bihannoc'h, aesoc'h da vemorekaad pa bad ar c'homz. Nawazh e chom ar group ritmeg ur strollañ dired, staget douzh doberoù ar c'homzer : tu a vez ataw da zistagañ ar gerioù a ya d'henn ober. N'heller ket lâred neuze ema un unander-meizadel (*unité conceptuelle*).

#### 2.1.2.3.2. Ar ger ritmeg :

Komzet e vez iwe ag ar **ger ritmeg**, dishañval diouzh ar group ritmeg. Hañval douzh ur ger ordinal eo ar ger ritmeg, war dachenn ar son, ar sintaks hag ar

---

<sup>166</sup> Skwer tennet a gorpuz LE PIPEC, *op. cit.* p. 113.

ster. Ar pezh a sinifi e vo staget-stard elfennoù diabarzh ar ger ritmeg. Digant LE PIPEC ataw (p. 114-119) e kemeran skwerioù da skeudennaouiñ an naoutur-se : **un dachenn vraz** pe **un uzin a sukr**.

Er skwer kentañ, er re **dachenn vraz**, e tegas an eil ger un titour a chañch kalzig ar meizad e-keñver (**un**) **dachenn** hebkén. Heb moned nawazh beteg kemmeskañ evel e **hempraz**, peogwir e chom peb elfenn sklaer ha distagaduz (**dachenn + vraz**). Mez dilec'hadur an taol-mouezh eo an tres heverkañ, a ziskouez en em gaver amañ gant un unander brasoc'h, daou c'her ennañ. Rag ne vez ket mui taol-mouezhiet silabenn ziwezhañ ar ger gentañ, daet da vound silabenn greiz an unander newez : **tachenn** [ta'ʃɛn] > **tachenn vraz** [ta'ʃɛn 'vra:s].'

GROUPOÙ RITMEG	GERIOÙ RITMEG
[ur   'hardejad ar 'lɛh ]	[  ba yn  'yzin a 'sœk'] ]
[  laræjn 'ce  brə'ma ]	[ ʔe ʃə  'ɥələd ən  dra 'sə ] ]
[ag  ən dyd ə 'ji  dər 'plɑ:f ]	

Taolenn 3. Groupoù ritmeg ha gerioù ritmeg

## 2.2. AN TAOL-MOUEZH

Pa vez komzet ag an taol-mouezh (TM) e c'heller komz a veur a dra (DELOFFRE, HELLEGOUARC'H, 1988 : 97). E-keñver natur an TM e tiforc'her meur a unan :

- **un TM a uhelder** (*acc. de hauteur*) (graet e vez ur sav d'ar vouezh), evel e latin klasel pe e gresianeg.
- **un TM-poueziñ** (*acc. d'intensité*), evel e latin Galia, pe er yezhoù germaneg gwezhall.



- *un TM a hirder* (*acc. de longueur*), evel e galleg standard hiziv-an-deiz.

Komz a raer iwe ag *an TM-darbouezañ* (*acc. d'insistance*), a zo un dra dishañval.

E-keñver e lec'h en unander taol-moueziel e komzer iwe a *TM-krogiñ* (*accent d'attaque*), *TM pennañ* (*acc. principal*), *TM kreiz* (*acc. interne*).

E galleg e vez difich an TM, a gouezh peurvuañ war ar silabenn ziwedhañ, mez daoust da-se en deus ur rol er gomz : disverkañ a ra ar strolloù ritmeg. Ur rol disverkaduz en deus enta.

E saozneg e kave da v/BONIFACE (1877 : 21) e oa gwell kontiñ war an arver ewid gouied e-menn lec'hiañ an taol-mouezh saoz. E brezhoneg ar bobl e vez kavet liested vraz war dachenn an taol-mouezh, ha n'eo ket ar gudenn unan ag ar re simplañ da ziskrivañ.

## 2.2.1. PED TAOL-MOUEZH E BREZHONEG ?

### 2.2.1.1. Ur stadiad kempleg

#### 2.2.1.1.1. Un taol-mouezh :

Ewid tud zo, war a seblant, ne vehe e brezhoneg namaed un taol-mouezh :

- « Le breton est une langue à fort accent tonique. Cet accent se trouve d'ordinaire sur l'avant-dernière syllabe. Ex. : '**Kador, ka'doriou**. (V. SEITE, L. STEPHAN, *Deskomp brezoneg*, 6).
- « L'accent tonique est fortement marqué en breton ; il se place sur l'avant-dernière syllabe, mais il existe d'assez nombreuses exceptions. » (*Geriadur divyezhek*, Hor Yezh, 1993, 193).
- « L'accent tonique est fortement marqué. Dans un mot pris isolément l'accent tonique tombe généralement sur l'avant-dernière syllabe. » (HEMON, *Grammaire bretonne*, p. 94).

- « Ar brezhoneg a zo ur yezh a vez kreñv enni an taol-mouezh (...). Er gerioù kemeret a-hiniennoù emañ ar pouez-mouezh *war an eil silabenn diwezhañ* : **kAner, tourIbell, ostIzien, bizIed.**” (KERVELLA, *YBAB* : 49).

#### 2.2.1.1.2. Daou daol-mouezh :

Mez un dibab-keleenn eo kredabl menegañ un taol-mouezh hebkén, rag diskoueziñ a ra ar levroù iwe, ha brudet-mat eo an dra-se er metoù brezhoneg (*an Emsav*), eh eus daou daol-mouezh e brezhoneg, herwez ar rannyezhoù. Dre vraz e kaver un taol-mouezh kumun e Kernew, Leon ha Treger, hag unan dishañval e Bro-wened, ar pezh a oa bet kadarnaet gant TERNES (1970) : e-mesk ar c’hriterioù pennañ a ziforc’h ar KLT a-zoc’h ar gwenedeg, e veneg an taol-mouezh da gentañ. Akord eo war-se iwe saverion ar geriadur Garnier (*Emgleo Breiz*, 1986 : 10) :

« On distingue cependant deux grands groupes dialectaux : le K.L.T. (...) et le Vannetais. En K.L.T. parlé dans le Finistère, les Côtes-du-Nord et l’Ouest du Morbihan, l’accent tonique tombe fortement sur l’avant-dernière syllabe, tandis qu’en Vannetais, parlé à l’est de Lorient, ou il n’existe pas, ou il tombe légèrement sur la dernière syllabe. »

Gant ar Wenedourion e kaver ar memez sav-boent :

« L’accent tonique tombe sur la dernière syllabe, ce qui donne au vannetais une allure très différente de celle des autres dialectes. » (R. AR MASON, *Le Vannetais unifié*, 1943 : 8).

Ha mad eo an traoù evel-se ? Rekiz eo moned pelloc’h un tamm c’hoazh.

#### 2.2.1.1.3. N’eo ket ken simpl an traoù :

Ewid Paskal An INTAÑV (1994) eh eus “daou vod da daol-mouezhiañ ar gerioù e brezhoneg”, mez “dre vras”, ar pezh a c’houlaka en deus simplaet e daolenniñ. Degas a ra Meriadeg HERRIEU ur remerk ouzhpenn<sup>167</sup> :

<sup>167</sup> HERRIEU, M., *Le Breton du Morbihan*, 1999 : II.

« Ce qui distingue le KLT du vannetais, c'est spécialement l'accent tonique et les consonnes Z et H. L'accent tonique en K.L.T. est très souvent placé sur l'avant-dernière syllabe, en vannetais sur la dernière syllabe en général, sauf en Bas-Vannetais où il est plus ou moins mobile et moins intense qu'ailleurs.

Exemples :      KLT : **Brézel**                      **Kémer**  
                         H.V. : **Brezél**                      **Kemér**  
                         B.V. : **Brézël**                      **Këmër.** »

Herwez ar pezh a laoske M. HERRIEU da intent e vehe, etre an daou daol-mouezh pennañ-mañ, heni ar KLT diouzh un tu ha heni ar « gwenedeg uhel » (Wu) diouzh an tu arall, tachadoù e-lec'h ma vez mesket an traoù, hag e diabarzh Bro-Wened zokén (Wi).

Estroc'h egetañ a ra anw ag ar fed-se, heb boud akord war lec'h resiz an tachadoù-se :

« (Outre le KLT) il existe deux autres systèmes, tout aussi valables, mais très minoritaires, tant du point de vue du nombre de locuteurs que de l'étendue géographique : le vannetais, accentué sur les finales, et une zone tampon, à l'accent changeant. » (Divi KERVELLA, *Le breton de poche*, p. 12).

En e hentenn *Oulpan* e resisa Nikolaz DAVALAN an traoù, heb komz ag ar Wi :

« En breton l'accentuation est très énergique. L'accent tonique et d'intensité se confondent et frappe (*sic*) en général l'avant-dernière syllabe en Cornouailles, en Trégor et en Léon. En Vannetais, l'accent tonique frappe en général la dernière syllabe. (...) Il existe une région intermédiaire dans laquelle l'accentuation suit des règles plus complexes (Quimperlé, Saint-Nicolas-du-Pélem & Goélo). » (§ 3).

E 1967, Kenneth JACKSON, da heul studiadennoù F. FALC'HUN a-zivoud an ALBB, en doa merket dija ne oa ket net an traoù etre tachad an TM war ar

silabenn eil-ziwezhañ ha heni an TM war ar silabenn ziwezhañ, é voud ma kaver un domani ledan etreze, diasur an traoù, dreist-oll e tachad ar Wi<sup>168</sup>.

Goude ar studiadennoù a-zivoud ar brezhoneg komzet e parrez-mañ-parrez e vez diaez selloud douzh ar brezhoneg evel douzh ur yezh rannet e pewar lod “hengounel” a glotehe mui pe vui gant an eskoptioù, hag e taer bremañ da lâred e vehe reishoc’h gomz a deir rann, evel ma ra H-L HUMPHREYS :

« C’est une tripartition que je propose ici au lieu des divisions diocésaines traditionnelles, en fait une schématisation de certaines cartes de Falc’hun (...). Il y a deux zones polaires, souvent opposées, parfois unies : au nord-ouest le Léon, au sud-est le vannetais. Entre ces deux zones s’étend une vaste aire centrale, réunissant le Trégor, la Cornouaille, le Goëlo et le bas-vannetais, où se parle un breton moyen. C’est une zone de transition rattachée tantôt au Léon, tantôt au haut-vannetais, mais possédant souvent des caractéristiques originales. » (*La Bretagne Linguistique*, 1996, N° 10, p. 89).

Notomp e komz HUMPHREYS ag un tachad-kreiz braz-braz (*une vaste aire centrale*) pa lâre uhelloc’h Divi KERVELLA e oa « très minoritaire, tant au point de vue du nombre de locuteurs que de l’étendue géographique » ! Mez embann ema ledannoc’h tachad-implij ar KLT n’eo ket ’maed un arguzenn ewid lakaad ar sav-boent-se da arveriñ e levroù kelenn ar yezh : an taol-mouezh muiañ implijet kemeret da daol-mouezh namaetoñ en hentennoù-deskiñ. Ur feson da lakaad ar KLT (ha gouied a raomp pegen pouezuz ema lod ar leoneg e-barzh) da voud **ar** brezhoneg, dre ma ne vez ket dalc’het kont ag ar gwenedeg pa vez prezantet an taol-mouezh. Kennig a ra Divi KERVELLA ober gant an taol-mouezh muiañ anavezet, « *hag eus a bell* »<sup>169</sup>.

---

<sup>168</sup> « It seems to show in fact that the usual broad formula of ”L., T., K. with penultimate stress versus V. with ultimate stress” is really an oversimplification (...). In other words, the division between “penultimate stress in the NW versus ultimate stress in the SE” is not a clear cut-line but is a broad intermediate zone where the one type passes gradually into the other, the hesitation being most marked in the Bas-Vannetais aerea. » (JACKSON, 1967 : 81-82).

<sup>169</sup> « L’accent tonique est très important en breton, et très fort. Dans ce petit guide, nous vous donnons la prononciation et l’intonation selon le système le plus connu -et de loin- en Bretagne, présent dans un large trois-quart nord-ouest du domaine brittophone, et qui se caractérise par l’accent sur l’avant-dernière syllabe des mots (sauf quelques exceptions. (...)) Pour vous aider, nous soulignerons dans ce guide les syllabes accentuées. » (*Le breton de poche*, Assimil évacion, p. 12).

Yann-Bêr KEMENER (2002) en deus dibabet brezhoneg Kreiz-Breizh, an heni komzet tro-dro da Garaez « et plus largement dans une majeure partie de la zone bretonnante au nord-ouest de la Bretagne. » Mar meneg daou daol-mouezh, un taol-mouezh *jeneral* hag un taol-mouezh gwenedeg, e skriv er memez pajennad « **L'accent** (islinet genin) est marqué par [ ' ] devant la syllabe accentuée » heb resisaad e choaz, mez n'eo ket an taol-mouezh gwenedeg a zo bet dalc'het, anad eo.

Dre m'ema kreñv an taol-mouezh-se e c'hell ar silabenn didaol-mouezh chom heb boud klewet (DAVALAN, 2000, I : 10). Setu aze just-awalc'h an dalc'h : gelloud a ra ar c'hompren boud lakaet diaez a-gaoz d'an taol-mouezh.

### 2.2.1.2. Taol-mouezh ha kompren

Herwez HUMPHREYS e c'hell liesfurmoù ar brezhoneg boud ur skoilh ewid ar c'hompren, dre ma touch e oll frammoù ar yezh<sup>170</sup>. Tu zo da gontiñ an taol-mouezh e-barzh ar frammoù-se, rag unan ag an elfennoù-diforc'h etre KLT ha W eo. Dre m'ema kreñv an taol-mouezh-se e c'hell ar silabenoù didaol-mouezh chom heb boud klewet. Setu aze just-awalc'h an dalc'h : n'eo ket diefed an diforc'h etre an daou daol-mouezh, dreist-oll pa vez kreñv-mat an taol-mouezh KLT ha pa za d'e heul steuziadur ar silabenn ziwezhañ (“**O'r**” e-lec'h “**Ober**” ; “**amAn**” e-lec'h “**amaAnenn**” ; “**pljAd**” e-lec'h “**pljAdur**”, “**logOd**” e-lec'h “**logOdenn**”...). Neuze e vez diaez an intent ewid un den agostez Pluwigner, kustumet da zistagañ “**gobIr**”, pe unan agostez Sarhaw kustum d'e “**amonIEnn**”. E diabarzh ar gwenedeg zokén e kaver troioù diaez da gompren ewid ar re nad int ket boaz doute, da skwer ar Wi « **dès kaos** » ewid « **an drA-se zo kAos** » (Berne) ; « **marti monÈt** » ewid « **\*ema red dezhi moned** » (Langidig) pe « **té gobero da zrèbeugn** » ewid « **te a ray da zEbriñ** » (Sine).

---

<sup>170</sup> « Le breton connaît des variations géographiques considérables dans toutes ses structures, qui gênent, qui peuvent même empêcher l'intercompréhension. (*La Bretagne Linguistique*, 1996, N° 10, p. 89).

Ur skwer arall : « **Mad eo e-mod-se.** » Ewid an dro-lavar-mañ, a vez klewet liez-braz e brezhoneg, e c'hell sevel digompren iwe hervez ar mod d'he sanañ. Liez e kouezh ar rannig **e-** (didaolmouezh), ha liez iwe e steuz an **-d** dibenn er ger **mod** : « **Mad eo 'mo'-se.** » Gant un TM kreñv war ar ger **mod**, gant ma ne vez ket taol-mouezhiet **-se**, e ta an dro-lavar da vout « **Mad e' 'mo'-s'** » e Bannaleg [ 'ma:de'mɔs ], ar pezh n'heller ket kompren nag e Pluwigner, nag e Langidig nag en Alrae da skwer é vout ma n'eus ket ger \***mos** ebed e brezhoneg (nag e W nag e KLT !), na ger ebed hag a achu gant **-mos**<sup>171</sup>.

N'eo ket anad an etrekompren hervez MORVANNOU naket, dreist-oll ewid ar g/KLTerion “c'hou danvuz“, daoust dezhe boud brezhonegerion vat, é chelaou douzh Gwenedourion, a-gaoz da zilec'hiadur an TM war an dibenn-ger, a-gaoz da sanadur an H er gerioù gant ZH, sanadur dre “oe“ e darn vrasañ ag ar pezh a vez skrivet gant **oa**, ar chuchuiñ, ar staonekâdur (...) (MORVANNOU, 1980 : 373).

Tu zo da “zeroutiñ“ kement-arall ur c'homzer W enta, ha eñv brezhoneger mat iwe d'e du ! Dre skiant-prenet e ouier ne bad ket pell an digompren, gant ma klask an den moned dreist an diaezamant kentañ. Ar pezh 'aomp d'ober bremañ, dre studiañ a-dostoc'h an taol-mouezh brezhoneg.

Da gentañ e welimp an taol-mouezh er gerioù : un taol-mouezh a c'heller kaoud e peb ger sanet a-unan. Mez ne vez ket komzet gant gerioù distag : liammet e vezont er frazenn hag en destenn dre geñverioù a ereadurzh hag a vorfologiezh : er yezh komzet enta e vo gwelet c'hoari an taol-mouezh iwe.

---

<sup>171</sup> Hervez ROHAN-CHABOT, *Geriadur klotennoù*, Imbourc'h, 1982 : 117.

## 2.2.2. AN TAOL-MOUEZH ER GERIOÙ

### 2.2.2.1. An taol-mouezh standard KLT

#### 2.2.2.1.1. War ar silabenn eil-ziwezhañ :

Akord eo an dud ewid ansav e kouezh an taol-mouezh KLT war ar gerioù sanet a-unanoù pa vezont unsilabenneg hag ogozig ataw war ar silabenn eil-ziwezhañ pa vezont liessilabenneg. Stank eo an oberourion o deus kenstadet ar fed-se, da skwer Andreo MERSER (*Précis de pronociation du breton*), Roparz HEMON (*Grammaire bretonne*), Meriadeg HERRIEU, Visant SEITE & L. STEPHAN (*Deskom brezoneg*), Fanch MORVANNOU (*Le breton sans peine*), Elmar TERNES (*Grammaire structurale du breton de l'île de Groix*), TRICOIRE (*Me a gomz brezhoneg*), Pierre TREPOS (*Grammaire bretonne*), Yann DESBORDES (*Petite grammaire du breton moderne*). Ewid Louis LE CLERC (*Grammaire Bretonne du Dialecte de Tréguier*) en em gav an taol-mouezh « *dans le trécorrois (...) sur l'avant-dernière syllabe* » (namaed ur listennad gerioù renablet gantañ en *Appendice*. N'eo ket aze klok roll an dud.

Ur skwer a gement-se : brezhoneg Kastell-Paol. Herwez SOMMERFELT ([1920] ademb. 1978 : 90), e kouezh an TM war ar silabenn eil-ziwezhañ [ˈbɛ:lɛk]. Mez un TM2 kreñv a-walc'h en doa remerket war ar silabenn gentañ er gerioù 4 pe 5 silabenn enne. Ha namaednoù zo e gerioù zo : an TM war ar silabenn ziwezhañ (ds. **abred**, **a-dreg**, **bepred**, verboù e **-aad...**).

Ewid skeudennaouiñ an testenioù-se, setu skwerioù bet gwiriet lec'h an taol-mouezh enne e geriadur Hor Yezh (1994) : **aber**, **afer**, **aloubadeg**, **arlene**, **chekenn**, **gwiskamant**, **ludu**, **loustoni**.

Ar gerioù unsilabenneg e kouezh an taol-mouezh enne war ar vogalenn : **mAd**, **sOd**, **dAll**.

En diftoñgennoù, a skriv F. KERVELLA, « ez eo ar vogalenn gentañ hag a zoug an taol-mouezh hag a zo an uhelañ toniet : **loar** [ˈloar], **kreiz** [ˈkreiz], **frouezh**[ˈfruɛz]. Distaget e vez eta evel ma vije div silabenn, nemet ne zilec'h

ket an taol-mouezh pa stager ur silabenn all ouzh ar gerioù-se : **IOarioù, krEizenn, frOUezhenn**. An diftoñgennoù OA ha OUE a vez alies distaget evel ma vefent skrivet WA, WE : **koar** [ˈkwa:r], **foar** [ˈfwa:r], **c’hoant** [ˈxwãnt], **gouel** [ˈgwe:l], **pouez** [ˈpwe:s], ha hir e vez neuze ar vogalenn a pe e.  
» (YBAB : 16-17).

Mez, evel ewid an oll fedoù-yezh, ne vez ket biken eeun an traoù penn-da-benn. Moned a ra ar reolennoù a-stur gant an namaedennoù. Ha herwez KERVELLA e vez kavet “*kalzik gerioù*“ o zaol-mouezh war ar silabenn ziwezhañ. Nawazh, na boud emaint kalzig, tu zo d’o renabliñ memestra ; ar pezh a ziskouez n’int ket ken stank-se e teskad gerioù ar brezhoneg. (Sd. § 2.2.2.1.4., p. 129).

#### 2.2.2.1.2. An taol-mouezh er gerioù kevrenneg :

Er gerioù kevrenneg e heulia lec’h an taol-mouezh un nebeud reolennoù. Da skwer, herwez STEPHAN ha SEITE (1956), pa vez unsilabenneg an elfenn ziwezhañ e vez douget an taol-mouezh gant honnezh : **e-kreiz, en-dro, a-dreñv, a-uz, war-lerc’h, war-varc’h, heben, e-bed, abred, avad, a-du, a-hend-all, beteg-henn, diwar-benn, diwar-wel, evel-se, torr-penn, noz-vad, poan-gof, noz-deiz, goulou-deiz, mab-kàer, (...), karr-nij, karr-tan, karr-dre-dan, (...), maen-du, ruz-tan, gwenn-kann...**

Ne vez ket taol-mouezhiet ar rannig-diskoueziñ biken : **du-mañ, du-ze, du-hont, an ti-mañ, ar gador-se, ar parkeier-hont.**

En anvioù-lec’h diwsilabenneg a grog gant **Bre-**, **Gwig-**, **Kêr-**, **Lan-**, **Penn-**, **Plou-**, **Roz-**, **Run-**, **Ti-**, **Tre-** e kouezh an taol-mouezh war an eil silabenn : **Brelez, Kergrist, Lanserv (mez Landi), Lokrist, Pempoull, Plounez(h), Rosko, Runan, Ti-Men, Trayrin (mez Bro-Dreger, Landreger) (herwez MERSER).**

E anvioù zo, teir silabenn enne, e kouezh an taol-mouezh war an dibenn : **Dirinon, Kastellin.** Padal e kouezh an taol-mouezh war ar silabenn gentañ en



anwioù diwsilabenneg an elfenn **Sant-** enne da gentañ : **Sant-Vig** (mez **Sant-Vig** e leoneg nawazh), **Sant-Tos** (herwez MERSER).

Gerioù zo, p'en em gavont dirag anwioù-gwan pe anwioù-kadarn, a dap an taol-mouezh, dre ma tegasont un titour heverk. Da skwer an anwioù-gwan-niveriñ (**daou gi, tri zi,**...); anwioù-gwan evel **kozh, gwir, (ur c'hozh ti)**; ar ger **gwall** (adverb dirag un anw-gwan : **gwall fin**; anw-gwan dirag un anw : **gwalldaol, gwallvrud**); an adverb **re (re skuizh, re vlod)**. SEITE a veneg iwe **eil-vaer, Yaou-Bask, gwenn-vi** (1955 : 22).

Ne vez ket taol-mouezhiet ar ger-mell strizh (**ar, al, an**) mez taol-mouezhiet e vez ar ger-mell amstrizh **ur/ul/un**<sup>172</sup>.

#### 2.2.2.1.3. Kod skrivet ha sanadur :

Ne ziskouez ket ar c'hod skrivet ar sanadur. Ne vez ket sinalet lec'h an taol-mouezh e brezhoneg, evel ma vez graet e spagnoleg da skwer. Meur a ziaezamant a c'heller kavoud war ar poent-se.

Un diforc'h zo d'ober da skwer p'en em gaver gant ur ger ur strollad bogalennoù ennañ. Ur memez dibenn **-iañ** a vez gwelet e **studiañ** ha **sterniañ**, ha nawazh n'eo ket hañvalstumm o fenggefoù : **studi** ha **stern**. Lâret e vez [sty'**di**.ã] mez [**stern**jã]. Ne ra ket ataw ar skritur an diforc'h etre [i] ha [j], mez aesaad a vehe labour an deskerion implij an daoubik amañ ewid diskoueziñ an diforc'h etre **studiañ** # **sterniañ**. Ur silabenn hebkén zo e gerioù evel **skuizh** ['skyi :s], **koant** ['kwãnt], mez teir e **gwiader** [gwi'**ja** :dər] (**gwi** + **ad** + **er**); **bilienn** [bi'**li**.en] (**bili** + **enn**); peder e **baleadenn** [bale'a :den] (**bale** + **ad** + **enn**) (KERVELLA); Skwerioù zo nawazh e vez merket an taol-mouezh gant un tired-kogneg : **Kornôg, kornôgel**.

---

<sup>172</sup> Gwir an dra-se d'an nebeutañ pa vez enebet un douzh **un** niver arall (**daou, tri**...). “**Ur gountell a vank !**” (ha n'eo ket diw). N'eo ket sur e c'hoari an enebadur-se ataw : « **Prenet 'm eus un ti.** » (den ne yay da soñjal em behe gelllet prenañ daou !) (Sd. § 2.2.2.4., p. 139).

#### 2.2.2.1.4. An namaedennoù d'an taol-mouezh KLT :

- Ar rummad brasañ : Setu amañ renabl F. KERVELLA evel e *YBAB* (p. 49-54) (namaed etrerannyezhellaet un tamm evel ma raomp amañ). Ennañ e kaver adverboù, araogennoù, raganwioù, h.a. : **abred**, **ahann**, **ahalenn**, **afo**, **anez**, **antronoz**, **ataw** (taol-mouezh war arsilabenn gentañ gwezhavez), **avad**, **kerkoulz** (a-wezhioù war ar silabenn gentañ), **kreiznoz**, **kreizteiz**, **dalc'hmad** (pe **dalc'hmat**), **diabarzh**, **diabell**, **diadreñv**, **diagent**, **diaraog**, **diawel**, **digant**, **dija**, **dindan**, **diouzhtu**, **dirag**, **diwar**, **diwarlerc'h**, **dilun**, **dimeurzh**, **diryaou**, **disul**, **hebén**, **ebed**, **eged**, **emberr**, **eme**, **emichañs**, **enta**, **erfin**, **ergentaou**, **eryad**, **etre**, (araogenn ; pa vez anw-gwan-doareañ e vez sanet hervez ar reolenn olleg), **evel**, **evelkent** (**alkent**), **ewid**, **fenozh**, **feteiz**, **gwezhall**, **hanternoz**, **hebkén**, **henoazh**, **meurbed**, **moaryad**, **neblec'h**, **neked**, **nemed** (**namaed**), **nemedkén**, **nemeur**, **nepell**, **nepred**, **netra**, **ouzhpenn**, **padal**, **peadra**, **pegehid**, (« **pegeit** »), **pegoulz**, **pelec'h**, **penaoz**, **perag**, **pere**, **pesort**, **petra** (ha **petra**), **ragtal**, **trawalc'h**, **warc'hoazh** (**àrc'hoazh**), **zokén**.
- Notet en doa KERVELLA gerioù neutr e-keñver lec'h an taol-mouezh : libr e vehe an taol-mouezh enne (**ataw**, **kerkent**, **kerkoulz**, **nemed**, **petra**). Ar pezh a sinifi en doa-eñv dalc'het kont a fedoù ar yezh, na c'hell ket boud un dra en ur bloc'h. Menegomp amañ da heul rummadoù arall, gerioù direizh lec'h an taol-mouezh enne, heb moned d'o lakaad oll :
- Anwioù-kadarn zo : **abardaez**, **anaon**, **aouredal**, **Boudedew**, **katekiz** (**katechim**), **Katell**, **koukoug**, **itron**, **Mikael** (« **Mikêl** »), **gwinêgr**, **Pantekost**, **pardaez**, **pemoc'h**, **porselen**.
- Un anw-gwan : **fallagr** ;
- Stummoù ar verb **bezañ/boud** en amzer-vremañ-lec'hiañ : **emaon**, **emaout**, **ema**, **emaomp**, **emaoc'h**, **emaint**, **emeur**.
- Araogennoù « displeget » : **ganin**, **ganit** (**ganez**, **genis**), **ganeomp** (**ganimp**, **genimp**), **ganeoc'h** (**genoc'h**) ; **digantin**, **diganit**, **diganeomp** (**diganimp**), **diganeoc'h** (**digenoc'h**) ;

**douzhin, douzhit, douzhimp, douzhoc’h – diouzhin, diouzhit, diouzhomp, diouzhoc’h.**

- Anwioù-lec’h zo, diw rann enne, ur ragger (**Kastell-**, **Kêr-**, **Lan-**, **Log-**, **Maez-**, **Meilh-**, **Plou-**, **Roz-**, **Run-**, **Ti-**, **Tre-**, h.a.) hag un dibenn. War an dibenn e chom ataw an taol-mouezh : **Dirinon**, **Kastellin**, **Kerbrad**, **Kerlaz**, **Kimerc’h**, **Lanveur**, **Lotei**, **Maezmeur**, **Pleuveur**, **Plouyann**, **Rozaon**, **Runtan**, **Tirsant**, **Tregon**...
- Anwioù oberourion en **-aer** e-tal re en **-er** a vez savet e gerioù a achu gant **-où** pa **-aou**, hag er verboù en **-a**. War an **-a** dibenn-se neuze e kouezh an taol-mouezh : **pilhoù**, **pilhaouer**, **pilhaouaer** / **glaou**, **glaouaer** / **pesketa**, **pesketer**, **pesketaer** / **merc’heta**, **merc’heter**, **merc’hetaer** / **skol**, **skolaer**.

## 2.2.2.2. An taol-mouezh gwenedeg

### 2.2.2.2.1. “Evel e galleg” :

Pa vez prezantet an taol-mouezh gwenedeg e vez lâret e kouezh war ar silabenn ziwezhañ. Mez liez e vez lennet ur meneg ouzhpenn : *evel e galleg*.

« La différence essentielle entre le vannetais et le KLT est que dans le vannetais l’accent se place, **comme dans le français**, sur la dernière syllabe : **peder**, **milin** ; **pederved**, **miliner**. » (TREPOS, 1957).

« En vannetais, l’accent tonique frappe en général la dernière syllabe (**comme en français**). » (DAVALAN, 2000, § 3). (islinet genin).

Ar pezh a c’hell boud un dave skweriuz d’ar yezh anavezet ar gwellañ gant an deskerion<sup>173</sup> (galleg evel *langue-source*, yezh-vamm). Pe, iwe, un dave d’ar yezh he deus lakaet (hag a laka c’hoazh) ar brezhoneg da weled ruz war e dachenn istorel, ur si da hepkoriñ enta<sup>174</sup> ...

<sup>173</sup> N’eo ket sur e oui ar C’hallegerion e vez taol-mouezhiet ar galleg war ar silabenn ziwezhañ. Seul gwezh m’em eus komzet ag an dra-se gant meur a unan, enkontet skolaerion, e tizoloent ar problem...

<sup>174</sup> Ha neuze, mard eo hañval un disterig ar gwenedeg douzh ar galleg, ha pa vehe gant afer an taol-mouezh, n’eo ket marse ken mad brezhoneg, n’eo ket marse brezhoneg *toutafed*... (Ds. da

#### 2.2.2.2. War ar silabenn ziwezhañ :

Peurvuiañ, evel ma hon eus gwelet, e vez deskrivet an taol-mouezh gwenedeg lec'hiet war ar silabenn ziwezhañ.

« L'accent tonique porte sur la dernière syllabe, en contexte parfois sur la première, sur l'avant-dernière dans le participe passé. En fait cet accent est très faiblement marqué, ce qui donne à la phrase une musicalité très différente de celle du KLT. Cette absence d'accent a provoqué un vocalisme très différent de celui du KLT. En effet, une voyelle accentuée et donc longue en KLT devient atone et brève en vannetais : **breudeur**, *frères* (en KLT) devient **breder** en vannetais (« e » du français « je »). » AR MERSER, 1996 : 81)<sup>175</sup>.

A-du gant an dra-se e sav LE BESCO (1998 : 28) en e brezantadenn ag an taol-mouezh kavet er Gerveur :

« L'usage est de dire que les parlers du sud-ouest ont un accent sur la dernière syllabe ; encore faut-il préciser que ce n'est ni un accent d'intensité ni un accent mélodique mais un accent de longueur. C'est-à-dire que les voyelles des syllabes finales sont généralement longues ou mi-longues. Sur le plan de l'énergie articulatoire ou de la hauteur mélodique on parle recto-tono. C'est le cas à Belle-Ile comme dans la plupart des parlers du Morbihan. »

Kenneth JACKSON ne lâre ket traoù kontrel pa gomz ag ar Wi. Menegañ a ra LOTH, diaez da hennañ roiñ reolennoù ewid lec'h an TM e Wi, mez dre vraz war ar silabenn ziwezhañ memestra, namaed p'en em gav ur schwa [ə] er silabenn-se<sup>176</sup>.

Koulskoude, e Malgenag e vez kavet skwerioù ag un taol-mouezhiañ ingal war ar silabenn ziwezhañ : **merenn** /mi'rèn/, **maouezi** /mwe'zi/, **amonenn**, **paper**,

---

geñver Festival Etrekelteg An Oriant, ur pennad e Ouest-France, er bloazioù 1980 : "*Stage de breton général et de vannetais*").

<sup>175</sup> Gwir eo notenn AR MERSER ewid an **e** kentañ, didaolmouezh er ger-se e W. Mez moned a ra an eil da [e] kentoc'h : [brə'de:r]. Tu zo sinalañ amañ stumm liester standard ar ger **breur** : **breuder** (ha n'eo ket \***breudeur** : n'eo ket **-eur** ur merk liester e brezhoneg).

<sup>176</sup> « Loth remarks that though it is difficult to give rules for the place of the accent in Bas-Vannetais, it is in general on the last syllable except when the vowel of that syllable is [ə] (in words in **-en**, **-el**, **-es**, the plural **-ed** and the words in **-ted** and **-ek**...). (K. JACKSON, 1967 : 67).

**kemenerion**, hag ar pezh a zo difer a-walc'h, zokén e gerioù boutin a vez taol-mouezhiet evel e KLT e parrezioù arall a Vro-Wened : **bara**, **bugale**. Ewid Erwan LE PIPEC (2000 : 72), « le trait constant de cet accent est l'intensité. » E Baod e klewer daou vod da daol-mouezhiañ **bugale** : [by'ga:le] ha [byga'le:].

#### 2.2.2.2.3. Mez pas ataw nag e peb lec'h :

E gerioù zo gant strolladoù bogalennoù, enne **o** pe **ou**, e vez ar re-se sanet [w]. Er skwerioù-mañ enta e klewer ur silabenn hebkén : **gouel** ['gwe:l], **pouez** ['pwe:s], **c'hoar** ['hwe:r], **foenn** ['fwen], **douar** ['dwa:r], **doue** ['dwe], **roue** ['rwe]. Er ger **maouez** ne vez ket sanet an **a** er brezhoneg-pobl : ['mwe:s].

Albert BOCHÉ, a anav mat ar brezhonegoù, e kav gantañ ema dibaot, er gerioù **bara**, **labour**, **bugale**... an taol-mouezh war ar silabenn ziwezhañ a gaver e Malgenag. Ewitañ, ar strewetañ sanadur gwenedeg zo **bara**, **labour**, **bugale**, ar pezh a vez klewet er Vro-Bourlet mez iwe e Langidig, Pluwigner<sup>177</sup>. Diwar 122 gartenn an ALBB en doa FALC'HUN diskouezet e oa e Bro-Wened ur sanadur e-giz e Bro-Gernew (war-dro 13% ag ar c'horpus e Klegereg, parrez nez da Valgenag). Erwan LE PIPEC a soñj n'eo ket bet marse treuzskrivet-mat ar pezh a oa bet klewet gant Pierre LE ROUX a-gaoz d'ur meskaj graet etre an taol-mouezh-nerzh hag an taol-mouezh a hirder.

Lâred a ra P. TREPOS e vez tu d'an taol-mouezh chañch lec'h pa vez staget un dibenn d'ar ger :

« L'accent peut se déplacer, pour rester sur la pénultième en KLT, sur la dernière syllabe en vannetais, lorsqu'on forme un dérivé :

- KLT **digor**, ouvert (**i** long, **o** bref) ; **digoret** (**i** bref, **o** long).
- Vann. **tad** (**a** long) ; pl. **tadeu** (**a** bref). »

Ne vez ket gwir ataw ewid ar pezh a sell douzh ar **W** : e Langidig e vez sanet **tad** ha **tadoù** g'un **a** hir kentoc'h, ar pezh a sinifi ne zilec'h ket an taol-mouezh

<sup>177</sup> Skwerioù arall 'm eus kavet ouzhpenn e brezhoneg Langidig : **abid** ['a:bit], **addozw** ['a:do], **aviel** ['a:vjel], **kado** (prof) ['ka:do]...

er liester<sup>178</sup>. Skwerioù arall : **boloù**, **botoù**, **mizoù**, **rodoù**, **tasoù**, **tier** [‘tihjir], ... Gant an dibenn **-ig** e remerker ar memez fenomen : **tadig**, **c’hoarig**, **mabig**... Gant an dibenn **-ed** : **roñseed** [’rõ:se]. Gant an dibenn benel **-ez** iwe : **leanez** [ltã:nes], **mestrez**, **rouanez**,... E Langidig c’hoazh e vez sanet **ba(e)lon**, taol-mouezh war ar silabenn gentañ, gant un **a** hir /’ba:lõ/, ha **lo(e)roù** gant un **o** hir /’lo:row/ (levezon an **e** kredabl en daou c’her-se). Ha taol-mouezh ingal war ar silabenn eil-ziwezhañ en anw-gwan-verb : **savet**, **maget**, **debret**, **lazhet**, **staget**, **boutet**, **labouret**... Kreñvoc’h e vez santet an taol-mouezh en anwioù-gwan diwsilabenneg eged er re hirroc’h memestra : **staget** [’fta:gæt] mez **labouret** [la’bu.ræt]. Ha gwir eo an TM war ar silabenn eil-ziwezhañ en anw-gwan-verb e brezhoneg Malgenag iwe :

« **Les participes passés** sont régulièrement un point d’exception dans les présentations des parlers bretons oxytoniques, qui identifient là la seule catégorie de paroxytons. Bien que la situation m’apparaissait un peu confuse, je me suis longtemps rangé derrière l’autorité de P. Rolland, qui les indiquait comme toujours accentués sur la pénultième, hormis dans le sud-est de sa zone d’enquête (1994 t. I : 323). Car il est indéniable en effet que les participes passés fournissent les illustrations les plus abondantes de l’accent pénultième dans le breton de Malguénac (...) » (LE PIPEC, 2008 : 120).

Pascal ROLLAND (1994, kartenn 162, L1 : 322-324) a verke e c’hell ar vogalennoù boud hir pe verr petra bennag eo an TM : tu zo d’ar bogalennoù boud taol-mouezhiet ne vern pesort hirder o dez. Ha termenañ a ra teir modell taol-mouezhiañ e kornad Pondivi, A, B ha C, gant variantennoù A1 ha C1 !

Ledan eo tachenn ar gwenedeg ha dibosubl eo termeniñ ur gwenedeg komzet namaetañ, evel ma skriv LE DÛ ha LE BERRE, diwar-benn un tres arall (*Studi Nn* 15, 1980). Ne ziskouez ar arselloud gouiañsel namaed fenomenoù-yezh tro d’ar c’hevred, lod é c’hounid war dachenn ar c’hornôg pe an nord, lod arall é kuliñ dindan levezon parlantoù brezhoneg ar broioù-se pe dindan levezon gallaoueg ar reter. Mez muioc’h a gemmoù a vez notet c’hoazh dre ma tostaer douzh ar gwalarn.

<sup>178</sup> Er c’hantik brudet “ **Avel hon tadeù**...” e vez hir an **a** er ger **tadeu** : [’a:vel on **’ta**:dæ]...

Ar pezh a zo heverk : ne vez ket kavet studiadennoù forzh stank a-zivoud an taol-mouezh e gwenedeg er levroù-keleñ. Gwir a-walc’h eo a-hend-arall ne vez ket kavet naket kalz a levroù-keleñ ewid ar gwenedeg, ar re anavetañ é vould heni GUILLEVIC/LE GOFF (1901, ademb. 1986) ha heni Meriadeg HERRIEU (1976)<sup>179</sup>, diwar oberenn V. SEITE. Goude boud lennet e kouezh an taol-mouezh war ar silabenn ziwezhañ, ne gaver ket kalz a remerkoù ouzhpenn a-zivoud an tem-se : aze iwe e c’hellomp lâred d’hon tro e vez *comme en français*, rag ne vez ket komzet muioc’h ag an taol-mouezh e levroù-keleñ ar galleg, namaed marse er levroù savet a-ratozh ewid an estrañjerion.

### 2.2.2.3. An taol-mouezh etre

#### 2.2.2.3.1. Reolennoù arall :

Albert BOCHÉ (Skol Vreiz, 1973, N° 31, p. 7) a remerke hañvalder an taol-mouezh gwenedeg izel (Wi) douzh heni ar KLT e meur a c’her : **chadenn** [ˈʃa:dən], **pladenn** [ˈpla:dən], **amzer** [ˈamzər], **c’hoari** [ˈhwa:ri], **labour** [ˈla:bur], **kanal** [ˈkã:nal], **savet** [ˈsa:vət], **lâred** [ˈla:rət]...

Notiñ a rae e chom taol-mouezhiet gerioù zo war ar penngef goude un diveradur : **hado** (= **hadañ**) [ˈha:do], **haderez** [ˈha:derəs]. Degas a ra TREPOS dour d’e velin : e reter Bro-Dreger ne vez ket gwelet dilec’h an taol-mouezh pa vez savet ur ger diveret diwar ur penngef implijet stank : **bOtez**, **bOtezenn** / **pAner**, **pAnerad** / **pEder**, **pEderved** (hogen **pEwar**, **pewArved** ; **mllin**, **millIner**...).

Klotiñ a ra remerkoù BOCHÉ gant ar pezh a zo bet lâret uhelloc’h : etre un taol-mouezh splann e KLT hag unan ken splann all e W, en em gaver gant un taol-mouezh diresiz, a c’hell moned da netra evel, da skwer, er ger **kemer** : “kemër” e KLT, “tchë’mé:r”, “tchë’mi:r” pe “kë’mi:r” e Wu, mez “këmër” e Wi.

<sup>179</sup> Menegomp ouzhpenn geriaoueg gwenedeg Loeiz HERRIEU.

Moned a ra AR MERSER (1996 : 81) gant ar memez hent, taol-mouezhiet lod kàer ag ar Wi war ar silabenn eil-ziwezhañ, herwezañ, goude boud bet levezonet gant ar c'herneweg.

#### 2.2.2.3.2. Skwer I : brezhoneg Bothoa :

Studiñ en deus Lloyd HUMPHREYS brezhoneg Bothoa (1995), a zo war vevenn an tachad-etre, e-kostez tachad ar gwenedeg. Termenet en doa ar brezhoneg-se evel-mañ :

- Taol-mouezh libr.
- Taol-mouezh a uhelder (fonetikel) war ar silabenn ziwezhañ, hag a gempouez an taol-mouezh-nerzh (fonologel) pa sko hennañ war ur silabenn arall.
- Pebeiladur liez a-walc'h an taol-mouezh pennañ hag an taol-mouezh a-eil renk a-stok.
- Dirag **ket** e vez taol-mouezhiet an dibenn-verb.
- N'eus ket ag an izokroniezh er strolladoù - 'BK- (bogalenn-kensonenn), ar pezh a laka pad ar vogalenn da vout difer (p. 38).
- Ne vez ket kemmet kalz a dra e ritm ar gerioù p'en em gavont er frazennoù, mez p'en em gav un taol-mouezh-dibenn dirag ur silabenn daol-mouezhiet e tegouezh steuziadur an taol-mouezh dibenn : **pato** → **pato du** ; **heñv gana** → **'gana ket**.

« L'accent d'intensité est libre en ce que sa position par rapport aux limites du mot est imprévisible. L'accent principal peut tomber sur la dernière syllabe, sur l'avant-dernière, sur la troisième, la quatrième et même la cinquième syllabe de la fin du mot et montre une indifférence égale par rapport au début du mot. Dans la plupart des mots, une syllabe domine constamment ; dans d'autres mots, plutôt qu'un sommet accentuel, on trouve un plateau avec mise en relief de deux ou, beaucoup plus rarement, trois syllabes successives. » (HUMPHREYS, p. 58).

Mez, er statistikoù graet diwar ur c'horpus 724 stumm ennañ, seblantoud a ra rol an taol-mouezh dibenn boud disterroc'h eged an taol-mouezhiañ e deraou ar gerioù. E gerioù zo iwe e vez kavet daou daol-mouezh a-stok. Amañ iwe e noter ne zilec'h ket an taol-mouezh pa vez lakaet un dibenn d'ar ger :



**merc'hed, merc'hetad ; blewenn, blewennoù. Ar pezh na vez ket gwir ataw, da skwer er gerioù o dibenn /-'ad/, /-'ed/, pe /-'in/ : rastell, rastellad ; lapin, lapined.**

E-keñver ar pad e vez ataw berr ar silabennoù didaol-mouezh.

#### 2.2.2.3.3. Skwer II : brezhoneg Lechiagad (Triagad) :

Savet eo bet studi brezhoneg ar barrez-se gant Andre SINOÛ (1999). Notet en doa e vez taol-mouezhiet silabenn ziwezhañ ur bochad gerioù :

- Anwioù-verb : **arru**, **dimi**.
- Penngef liësilabenneg ar verboù : **dibab** (vb **dibabi**) ; **disoñj** (vb **disoñji**).
- Anwioù-gwan ur bochad verboù : **dimed** (ewid **dimezet**) ; **laked** (ewid **lakaet**) ; **arruet** /a'ry.ət/.

An taol-mouezh a eil renk (TM2) a vez remerket er parlant-se a vehe kentoc'h un heklew taol-mouezh, herwezañ.

Notet en deus iwe fedoù a dalv e peb lec'h pe dost : /tri bod/ (**tri baotr**) ; /ôn tam/ (**un tamm**) ; /an dou di/ (**an daou di**) ; /re ir/ (**re hir**) ; /pegôn teu/ (**pegen tew**). Mez /pɛvar dam/ (**pewar damm**).

#### 2.2.2.3.4. Skwer III : Brezhoneg Ar Gemene :

Ewid Malachy MCKENNA (1976) e c'hell an taol-mouezh en em ziskouez er silabenn ziwezhañ pe en heni eil-ziwezhañ pe en heni kent an eil-ziwezhañ, mez peurliesañ e kouezh war an heni gantañ<sup>180</sup>. Setu chema taol-mouezhiañ ar parlant-se savet gantañ (skwerioù ganin) :

---

<sup>180</sup> “Stress may appear in final, penultimate or antepenultimate position, but in general it appears on the initial syllable. p. 68.”

	Gerioù diwsilabenn	Teir silabenn	Peder silabenn
a	' _ _ la - hĩ (lazhet)	' _ _ _	_ _ ' _
b	' _ / _	' _ _ / _	' _ _ _ ' _ ha - ma - ra - dèó (kamaradoù)
c	' _ ' _	' _ _ ' _	
d	_ _ ' _	_ _ ' _ _	

Taolenn 4. An TM e brezhoneg Ar Gemene.

2.2.2.3.5. Skwer IV : Brezhoneg Malgenag :

LE PIPEC (2008 : 94) a ziskouez e kouezh an TM pennañ war ar silabenn ziwezhañ ; remerket e vez gant pad hirroc'h honnañ. Er ger e c'heller merzañ un hirder a eil renk (é voud ma vez an hirder brasañ war ar silabenn-dibenn) a c'hell merkañ ne vern pesort bogalenn e gwirionez, ar pezh na zegouezh ket e parlantoù ar Gwalarn. Boud eh eus iwe un TM-krogiñ, a zo un TM-nerzh berr. Roiñ a ra skwerioù deuz pad ar silabennoù e-keñver an TM.

	Silabenn	Silabenn			Silabenn	Silabenn	
<b>un a'va:l</b>	1	2	Diforc'h	<b>un a'zen</b>	1	2	Diforc'h
567 ms	110 ms	457 ms	<b>347 ms</b>	576 ms	155 ms	421 ms	<b>266 ms</b>

	Silabenn	Silabenn			Silabenn	Silabenn	
<b>un 'da'fen</b>	1	2	Diforc'h	<b>za,mes</b>	1	2	Diforc'h
576 ms	194 ms	382 ms	<b>188 ms</b>	557 ms	219 ms	338 ms	<b>119 ms</b>

#### 2.2.2.4. Skwer IV : tro ar ger-mell amstrizh

##### 2.2.2.4.1. Pêr TREPOS :

Ewid TREPOS ne dalv ket ar reolennoù roet ewid ar KLT e peb degouezh. Da skwer, eñv en doa remerket n'helle ket ar ger-mell amstrizh boud taol-mouezhiet e-kostez Gwengamp, pand eo taol-mouezh ar ger-se ur reolenn e Bro-Leon (SEITE). Ewid FAVEREAU e vez taol-mouezhiet ar ger-mell amstrizh dirag ar gerioù unsilabenneg e Poullaouen<sup>181</sup>. Ar memez tra a lâr AR MERSER : ne vez ket taol-mouezhiet ar ger-mell amstrizh, namaed dirag gerioù unsilabenneg : **ur paotr laouen**, **un ti**, mez **un demezell**, **un aneval**.

##### 2.2.2.4.2. Nikolaz DAVALAN :

En e hentenn *Oulpan* (I : 26) e tiforc'h DAVALAN ar ger-mell amstrizh (didaol-mouezh) hag an anw-gwan niveriñ (taol-mouezhiet, evel **daou**, **tri**...) : **un ti** (enebet douzh **un daol** da skwer) # **un ti** (enebet douzh **daou di**), un diforc'h hon eus remerket e gwenedeg iwe.

#### 2.2.2.5. An taol-mouezh er gerioù é toned ag ar galleg

Pa dremen ur ger ag ur yezh-orin d'ur yezh newez e c'hell boud enkorfet er yezh-mañ heb kemm ebed (Sd. galleg *suspense*, *cool*, *prime-time*...). Gelliñ a ra iwe boud « lonket » gant sistem an eil yezh (Sd. saozneg *flirt* < fr. (*conter*) *fleurette* ; *solution* ; *library*...) (WALTER, 2001). En Iwerzhon em boa klewet *crème-brûlée* ha *foie-gras* gant tud na ouient ket e oa gerioù é toned ag ar galleg, an taol-mouezh galleg chomet enne fasibl.

<sup>181</sup> *La Bretagne Linguistique*, 1996, N° 10 : 124.

E-keñver an taol-mouezh, meur a c’her daet ag ar galleg en deus kemeret liw ar brezhoneg er yezh-mañ, da skwer : **esañsouer**, **ermitaj**, **doublaj**, **katalog**, **mesajer**, **uzajer**, **rejmant**, **esañs**, **poulailher** ha zokén **etrañch** (Poullaouenn, FAVEREAU<sup>182</sup>), mez iwe **kouraj**, **tomatez**, **karotez**, **labour**, **muzik**... E gwenedeg avad emaint chomet gant an taol-mouezh war ar silabenn ziwezhañ : **tomat**, **karot**, **betrab**... (mez **labour**). Notomp er yezh ledan **porseleñ**<sup>183</sup>, **Pantekost**, **gwinégr**, **katekiz** (W **katechim**)... hag e Bro-Dreger **pato** (da skwer).

A-du’rall e c’hell an traoù chomel displann (**sosialism**, **tourist** pe **tourist**). Diskoueziñ a ra ar fesonoù dishañval d’ober war an dachenn e c’hell ar brezhoneg lonkiñ gerioù estren gant e sistem dezhañ. Ur menier soupted zo gant ar yezh aze.

#### 2.2.2.6. Pad ar vogalenn dindan an taol-mouezh

Ewid simplaad e c’heller lâred ne c’hoari ket an enebadur a hirder (bogalenn hir vs bogalenn verr) *namaed er silabenn a zo dindan an taol-mouezh*. Ahend-arall e vez berr.

Liammet-stard eo an taol-mouezh gant hirder ar vogalenn. Reolennoù resiz a c’houarn ar liamm-se. Studiet e vo donnoc’h er § 2.3., p. 170.

#### 2.2.3. AN TAOL-MOUEZH ER FRAZENN

Stag eo an ton pe ar skiltr-mouezh, dre vraz, herwez KERVELLA, douzh an taol-mouezh. War ar silabenn daol-mouezhiet e sav an ton, diskenn a ra war unan didaol-mouezh. “Trawalc’h e vo deomp enta anaout lec’hiadur an taol-mouezh evit anaout dre vras lusk ar frazenn.” (1947 : 49). Gant ma vehe anavezet an taol-mouezh ganimp ! Klasket e vo amañ taolenniñ ar pezh a vehe

<sup>182</sup> *La Bretagne Linguistique*, N° 10 : 126.

<sup>183</sup> N’eo ket bet sinalet ar sanadur-se gant FAVEREAU (1992), mez gant KERVELLA (1976 : 50).

tu d'ober ewid gelloud mordeñ aez en teskad fedoù liessort-se, en despet d'ar riskoù a zo.

Herwez HEMON e vez ariet stard ton-mouezh ar brezhoneg douzh an taol-mouezh. Hag ewid TREPOS, “plus encore que par l'opposition entre les voyelles longues et les voyelles brèves, entre les consonnes fortes et les consonnes douces, la phrase bretonne se reconnaît par l'opposition entre voyelles accentuées et voyelles inaccentuées. » (TREPOS, 1957). Renet e vez sav ha digresk ar vouezh gant ar silabennoù taol-mouezhiet. Er ger **keloù** [ˈke :lu] da skwer, e vez sanet ar silabenn **-lu** war un ton izelloc'h eged **ke-**peurliessañ. Ha santet e vez digresk e diabarzh ar silabenn daol-mouezhiet dija (dreist-oll pa vez hir ar silabenn enni, evel er skwer roet) : war un ton izelloc'h e vez sanet eil lodenn ar vogalenn **-e-** e **ke-**. Setu aze ar pezh a laka meulodi ar brezhoneg da vout dishañval diouzh heni ar galleg. (HEMON, *GB*, ademb. 1984 : 98-99).

### 2.2.3.1. Ar gerioù taol-mouezhiet er frazenn

Tu zo da daol-mouezhiañ ne vern pesort ger ag ur yezh, gant ma vo sanet a-unan. Ha tu enta da dermeniñ ez-resiz lec'h an taol-mouezh e peb ger, ar pezh hon eus klasket diskoueziñ uhelloc'h. Mez e chadenn ar c'homz avad e tro an traoù en ur mod kemplegetoc'h.

E chadenn ar c'homz e remerker e vez torret-didorret, gwallgaset d'an nebeutañ, ar sistem prezantet beteg bremañ. Lod ag ar gerioù a vez taol-mouezhiet da beb an amzer, herwez o lec'hioù er frazenn, lod arall ne vezont taol-mouezhiet biken. Taol-mouezhiet e vez ar gerioù pennañ, ar re a zegas ar muiañ a gelaouadurioù er c'homz : **anwioù-kadarn** ; **anwioù-gwan doareañ**, **niveriñ**, **amresisaad**, **goulennata**, **estlammañ** ; **adverboù** ; **raganwioù** (namaed raganwioù-gour renet) ; **verboù** ; **araogennoù** (pa vezont kombinet gant raganwioù-gour).

Mez e-kontrel, herwez renabl KERVELLA c'hoazh, kadarnaet gant heni HEMON, *GB*, 1941), ne vez ket taol-mouezhiet **ar ger-mell strizh**, **an**

**anwioù-gwan perc'hennañ, ar raganw-gour renet-eeun, ar verboù-skoazell, an araogennoù hag ar stagelloù** (namaed re hir e vehent), **ar rannigoù-verb** (namaed **en em**) hag **ar rannigoù-nac'h**. Ar pezh a espieg DAVALAN simpl a-walc'h iwe :

« ... En français, lorsqu'on va dire *la table*, on va utiliser deux accents : <sup>1</sup>*la* <sup>2</sup>*table* ['la 'tabl], le deuxième sera plus fort mais il n'annulera pas le premier accent pour autant ; en breton ce rythme est impossible, il n'y aura qu'un accent et celui-ci sera beaucoup plus énergique qu'en français, **an daol** se dira **an <sup>1</sup>daol** [ɛn 'do :l] (on entendra à peine l'article). » (*Oulpan*, I : 26).

### 2.2.3.2. Taol-mouezhioù a-stok

Goulenn a ra ritm ar frazenn ur c'hempouez pe un dasparzh reolieg a-walc'h euz an taolioù-mouezh er frazenn. Setu perag, pa zegouezh da zaou daol-mouezh en em gavoud a-sko e « skañva an hini kentañ betek steuziañ krenn alies : **un dra vat** [yn dra 'va :d], **an ti all** [ãn ti 'al], **ne ra ket** [ne ra 'ket]. » (KERVELLA).

Gant KERVELLA ataw e tesker e tegouezh ar c'hontrel nawazh, mard eo ar ger diwezhañ ur stumm unsilabenneg anavezet-mat ag ar verboù **bezañ/boud, endevoud** hag ober : **yen eo, re am eus, glav a ra.**

### 2.2.3.3. An taol-mouezh en unanenn daol-mouezhiel

Herwez ar ster eo en em stroll ar gerioù er frazenn. Er frazennoù e c'heller kavoud meur a strollad-ster :

{ (E-barzh ar mare-se) (e oa mamm o chom) (en ti bihan) (a zo just e-maes ar bourk.) } (PLOURIN, 2002 : 118).

Mez e-keñver an taol-mouezh eh eus tu da rannañ ur strollad-ster en unanennoù bihannoc'h : **an unanennoù taol-mouezhiañ**. Setu penaoz e c'heller inizañ unanennoù ar frazenn-skwer : (e-**barzh**), (ar **mare-se**), (e oa **mamm**), (**o chom**), (en ti **bihan**), (a zo **just**), (e-**maes** ar **bourk**).

En enoñsiad e tay da voud :

- { (**Bar mare-se**) ('oa **mamm o chom**) (**en ti bihan**) (**a zo just**) ('**maes ar bourk**) }.

Pe c'hoazh, en ur mod ledannoc'h :

- { (**E-barzh ar mare-se**) (e oa **mamm o chom**) (**en ti bihan**) (**a zo just**) (**e-maes ar bourk**) }.

Tu a vehe ouzhpenn da stagañ an daou strollad diwezhañ en heveleb bommlavar, ar pezh a ziskouez soupted ar yezh war ar poent-se : { ... (**a zo just**) ('**maes ar bourk**) }.

#### 2.2.3.4. Ritm ar frazenn ha taol-mouezh

Ritm ar frazenn a c'hoari enta gant an taol-mouezh, pa c'hell hennañ boud kreñv pe greñvoc'h, gwan pe wannoc'h hervez abegoù zo. Komz a ra TREPOS (1957) a ritm merket kreñv ar frazenn vrezhoneg na boud e c'hell ar ritm chañch hervez ar rannvro.

« Ce rythme est cependant très souple : la force de l'accent présente une grande variété, car à l'accent normal peut s'ajouter un accent d'insistance, plus ou moins important ; et un équilibre harmonieux est maintenu, d'autre part, entre syllabes accentuées et syllabes inaccentuées, par l'affaiblissement, ou la chute, de l'accent normal d'un mot devant un autre mot accentué. »

Roiñ a ra skwerioù :

- **DOND a rey Buan ho TAD d'ar GER.**
- **Me 'gav MAD LÊZ ; me 'gav MAD lêz TOMM.**

Skwerioù arall a gaver e KERVELLA en un destenn bet prientet gantañ ewid diskoueziñ ar ritm enni. Diskouezet e vo drezi e vez kreñvoc'h an taol-mouezh kentañ hag an heni diwezhañ ag ur bomm-mouezh (merket e vo an TM pennañ gant pennlizherennoù braz stouet, an TM2 a eil-renk gant liezherennoù bihan stouet ha tew) :

Ur **gOU**loù a **lIntre** e **beg** an **tOUr**, **pEoc**'hus-meurb**Et**, o **tegas Eñvor** an **deizioù gwechAll**. Dre **vUrzhud** e oa **chomet** war

*Enaou, rak Eno ne oa dEn ebet. Dor an tOUr, diouzh tu ar vOger, a oa dIgor. Hogen, tEñval e oa an diabArzh, netrA o lugerniñ Ennañ, nemet hirgarrezEnnoù strIzh ar prEnestr. Ar mAnac'h a dostaas ouzh Unan. PArañ a rae al lOar. Skalier brAs ar c'hAstell a oa sklerijennet hOll ha dIstro. En traOñ avAt, troad ar mEnez a oa lEUn a dUd o yUdal hag o fIñval, ha muIoc'h a oa c'hOazh o tont diouzh ar voubouAdeg a glevet o c'hournIjal er strAedoù a dro-war-drO. (Roparz Hemon –Santez Dahud).*

#### 2.2.4. AN TAOL-MOUEZH : UR PREDER PEDAGOGEL ?

Daoust hag-eñv ema an taol-mouezh un elfenn a-bouez e brezhoneg ? Tu zo d'en em c'houlenn : en he studiadenn a-zivoud koadizion Kamorzh n'he doa ket Suzanne LE ROUZIC<sup>184</sup> komzet anezhañ namaed skañvig a-walc'h e-korf ur bajennad hebkén, ha ne gaver anw ebed anezhañ dindan pluenn Mark KERRAIN en e renabl ag “*ar fazioù stankañ graet gant an nevezvrezhonegerien*” (2003). Setu amañ da gentañ un alberzh ag ar plas roet d'an taol-mouezh e testennoù pedagogel embannaet newez so.

##### 2.2.4.1. An erbedoù ofisiel

###### 2.2.4.1.1. Er BOEN :

E kannadig ofisiel an Deskadurezh-Stad (BOEN Nn 40, 11.11.1999), a-zivoud reteradurioù pedagogel ewid ar c'helenn yezhoù er CM1/CM2, e lenner e ranker, e-mesk traoù arall, “entraîner les élèves à écouter, percevoir, reconnaître, reproduire et produire des rythmes, sonorités, schémas intonatifs de la langue étudiée (...)”. Ha pelloc'h :

« L'enseignant de langue veille donc régulièrement à (...) :

- offrir de bons modèles.
- entraîner à affiner l'écoute.

---

<sup>184</sup> *Les Bûcherons de Camors*, UBO, 1987 : 354.



- entraîner à comprendre (...).
- à reproduire avec exactitude la prononciation : accentuation et rythme, schémas intonatifs, phonèmes. »

Degas a ra soñj BO an 19/06/2003 (Hors-Série N°2) deuz erbedoù *Arrêté* an 28.06.2002 a venege, en destenn ditlet « *Un entraînement régulier et méthodique* » ar pennadoù « *Fonctions langagières* », « *Lexique* », « *Syntaxe-Morpho-syntaxe et Prononciation.* »

#### 2.2.4.1.2. E testennoù Akademi Roazon :

Spiz a-walc’h e seblante boud bet sachet ewezh ar gelennerion war ar sanadur en un teul bet savet gant Akademi Roazon diwar-benn ar c’helenn brezhoneg (hag e brezhoneg), un teul anwet « *Pour une définition d’objectifs didactiques communs (Document de réflexion), Janvier 2000.* » :

« Le dernier axe enfin, intitulé Phonologie, fait référence à une préoccupation, relativement récente pour la discipline, de rigueur dans la prononciation et l’intonation. Nous savons depuis les travaux de M. Martinet que chaque langue est au carrefour de deux articulations, morpho-syntaxique et phonématique, qui font d’elle un double système spécifique absolument inaliénable. Une langue acquise qui resterait le calque exact de la langue-source tant dans sa prononciation que dans son expressivité serait à la vraie langue-cible ce qu’est une dépouille sans vie à un être vivant. » (p. 2).

Nawazh, en ur rentiñ-kont savet gant Daniel CARRÉ (gantañ karg un enseller IPR) ag un dewezh eskemmoù CM2/6ved e-pad ar bloazad-skol 2002-2003, a-zivoud ar c’helenn brezhoneg, e lenner kement-mañ a denn douzh hon sujed :

- « - Lecture (Compétences) :
  - Lire à haute voix
  - Lire un texte écrit dans une forme dialectale (autochtone).
- S’exprimer en continu devant un public :
  - Maternelle : Prononciation, Accentuation.
  - Élémentaire : Base de la syntaxe, Vocabulaire de base.
  - Collège : Consolidation et approfondissement des connaissances. »

Ne oa ket bet resisaet e neb feson ar pezh a vehe da lakaad en a-raog er lenn a vouezh uhel. Tu zo d'en em c'houlenn iwe pesort talvoudegezh pedagogel zo er palioù staget douzh peb live ar skol. Ewid ar skol-vamm, da skwer, e seblant berr un tamm pouezañ war ar sanadur hag an taol-mouezhiañ, heb anw ebed ag ar gerioù diazez da zeskiñ. Diouzh an tu arall, ne gompren ket ne vez ket mui komzet ag ar sanadur er liveioù da heul, evel ma vehe gouest ar skol-vamm da blaennaad peb tra en afer, pa ouier reizh-mat e ranker taliñ douzh pouez patrom ar galleg a-fed sanadur. Dre zistroiñ douzh ar pennreolenn a emskiant e c'heller kompren e vehe aesoc'h diskoueziñ d'ar skolidi vrasañ adonoù\* an daou sistem-yezh, ha gouied penaoz c'hoari a-youl gant unan pe gant an arall.

#### **2.2.4.2. Tri-ugent vloaz dale**

Kredabl n'eo ket bet pouezet a-walc'h war gelenn ar sanadur beteg bremañ gant ar gelennerion vrezhoneg. Evel ma skrive Albert BOCHÉ tregont vloaz so dija, e vez kelennet ar brezhoneg evel ma veze kelennet ar saozneg tregont vloaz so (*Skol Vreiz*, N° 31, 1973). War a seblant n'omp ket c'hoazh gant ar pezh a zo bet meneget uhelloc'h, da lâred eo muioc'h a rigor er sanadur hag en ton-mouezhiañ. Mar n'eo ket ur problem didaktik a-bouez hiziw, n'heller ket lâred nawazh ne veze pe ne vez ket komzet ag an taol-mouezh e brezhoneg. Meneg zo anezhañ e oll levroù-deskiñ ar yezh pe dost.

Dre m'ema hon pal resisaad an traoù war dachenn an didaktik e taolennimp amañ stad an traoù dre vraz, da lâred eo heb moned re bell ganti enta, a-benn da gennig ur sintezenn jaojabl ewid ar c'helenn. Da gentañ e klaskimp dizoloiñ an dachenn, lakaad war-wel an traoù heverk, kent geriañ ur c'hennig pleustreg.

#### **2.2.4.3. Stad an traoù er skolioù**

##### **2.2.4.3.1. An enklask :**

War-un-dro gant an enklask diwar-benn ar liammadurioù em eus klasket anavoud plas an TM e brezhoneg ar skolidi ha heni ar vrazarded newez-desket er yezh. Hag an dra-se gant ar fichenn **F2** :

F2 / rummad 1 : **teir logodenn / daou labourer / d’ar sadorn / ar paper / ar blijadur / digor / ar vugale / ar bara / ar bagadoù / ar madigoù.**


F2 / rummad 2 : **ur vanifestadeg / brasaat / kalonekaat / ar galleg / ul labourerez / tapout / ur bagad / ma santimant / ar brezhoneg / Annaig.**

Ma fal a oa amañ kaoud un alberzh ag ar realded, é voud ma santomp levezon ar galleg é labourad war an dachenn-mañ iwe. Kent kennig remedoù pedagogel douzh ur c’henstad bennag e ranker sevel ar c’henstad-se. Er roll da lenn e oa gerioù boutin a-walc’h 2, 3, 4 ha 5 silabenn (**digor > manifestadeg**).

Kudenn an tri TM hon eus renablet er brezhonegva a c’hellahe boud bet reduset da zaou er skolioù : un TM standard a vez kelennet kentoc’h gant an Emsav, heni ar KLT, daoust da heni Bro-Wened boud e stad a ziskoueziñ penn e fri e kornadoù ar Morbihan, é voud ma n’eo ket marw ar “rezistañs” eno c’hoazh. Mez e kornadoù zo hebkén : e skol Diwan Gwened ne vez ket kelennet ar W, da skwer. Engorto a zaou batrom e vehe bet tu dimp boud enta, gant ur seveniñ a rahe ar maout d’an TM standard kentoc’h.

#### 2.2.4.3.2. Ar rezultadoù :

Dalc’het eo bet kont amañ a roennoù ar CM2, ar 5ved hag ar lise.



**Grafik 1. Fichenn F2 : Skolidi (CM2+5ved+Lise).**

**An Taol-mouezh standard war ar silabenn eil-ziwezhañ.**

Diskoueziñ a ra an daolenn lod bihan an TM standard e brezhoneg ar skolidi a-vremañ (34%).

#### 2.2.4.3.3. Petra soñjal ? :

Rankoud a ran lâred n'eo ket ar rezultadoù-se namaed ur brassell war ar realded. Rag ma ne glot ket ataw ar roennoù objektivel gant ar merzoud subjektivel. Diskouezet en deus LE PIPEC (2008 : 94) n'eo ket bet uzlakaduz\* gantañ ataw ar pezh en doa klewet ag ar pezh a oa bet e gwirionez. Prouet eo bet e kred an den eh eus bet un TM-dibenn paduz pand eo bet diskouezet gant muzulioù resiz nen doa ket padet tamm ebed. Tu zo da voud touellet gant ar merzoud enta, ha ne lâran ket em eus hepkoret ar skoilh-se.


Diouzh an tu arall, mar n'em eus ket klasket resisted ar mekanikoù, tu zo da zegemer ar rezultadoù er mod m'emañ bet resevet ganin. Rag herwez MARTIN (1996 : 103) n'eo ket ar yezh nag er wagenn-son, nag en organoù-komz mez en diuz-klewed\*, da lâred eo e kustumoù-diuzañ a zo re ur gumuniezh bennag. Etre diwskouarn ar chelaouer e vehe ar yezh, iwe, pe dreist-oll.

Setu perag e soñjan e talv ar grafik-se dre ma tiskouez dimp un tuadur ponner a-walc'h : n'heller ket lâred eh eus un TM brezhoneg standard sklaer e brezhoneg ar skolidi a-hiziw. Mar san lod anezhe ar gerioù pe ar strolloù-gerioù gant un TM standard (war ar silabenn eil-ziwezhañ) e chom an darn vuiañ gant un taol-mouezhiañ a denn douzh heni ar galleg kentoc'h (ar pezh a vez "komz plad"), pa chom unanigoù é lakaad an TM en ur lec'h faltaziuz.

Implij a ran ar ger *faltaziuz* ewid daou abeg : tu zo da soñjal o deus ar skolidi-se klewet lâred e oa ag un TM e brezhoneg, mez n'eo ket en o mod-ober roiñ liw d'o brezhoneg gant an tres-se. Ne sinifiehe an TM faltaziuz-se namaed ur striv graet e-pad an atersadenn, ewid uhellaad o live-yezh dirag un estranjer, evel ma vez graet a-liez e degouezhioù sort-se.

#### 2.2.4.3.4. Keñveriañ Soubidigezh ha Parded :

Roiñ a ran gant an daolenn da heul ar rezultadoù olleg dre sistem-kelell. Ewid gwiriekad ar rezultadoù em eus implijet test ar Khi-daou (Sd. L2, § 4.3.2. p.393 ewid talvoud ha jediñ ar Khi-2).



**Grafik 2. Fichenn F2 : Skolidi (er CM2, 5ved ha Lise).  
An TM standard e peb sistem-kelell.**

<b>Grafik 2</b>	TM standard	Arall
<b>Test Khi-2</b>		
Diwan	565	511
Parded	537	1609

Rezultad :  $\chi^2 = 240.59 (1) ; p < 0.001$

Er skolioù-stad hag er skolioù katolik (sistem ar barded) n'eus ket ag an TM standard e mod da gomz an tri-c'hard ag ar skolidi (73%). Ba'r skolioù Diwan e seblant an traoù balañsiñ muioc'h : rampo eo enne an TM standard hag an taol-mouezhiañ dishañval. Ha kizidikoc'h e vehe skoliataerion Diwan douzh afer ar

sanadur ha douzh heni an TM brezhoneg ? Marse. Taliñ a ra muioc'h hennañ douzh an taol-mouezhiañ arall, mez ned eo ket ar mestr koulskoude.

Mar behe pleustret war ar poent-se gant ar vistri e vehe rekiz d'an tri-c'hard anezhe chañch o fesonoù da sanañ ar frazenn vrezhoneg !

#### 2.2.5. KENNIG UN TAOL-MOUEZH STANDARD

Ewid A. AR MERSER ema ar yezh « standard », komzet ha skrivet, leoneg kempennet un tammig :

« La langue standard n'est en fait parlée que par des intellectuels ayant appris à lire et à écrire le breton par eux-mêmes ou par des cours par correspondance. C'est cette forme de breton qui dans l'ensemble est enseignée dans les écoles. La majorité des bretonnants de naissance, qui sont pratiquement tous des personnes âgées, n'utilisent que des prononciations locales. On note cependant une certaine influence de la radio » (1996 : 10).

Se zo kaoz marse n'eo ket un dra aez moned da kennig ur feson standard da sanañ ur yezh. Marse ema dibouell ar soñj-se zokén. Klemm a ra P. LE BESCO diwar-benn an dra-se :

« Il n'y a pas de prononciation officielle standard du breton. Il n'est donc pas possible de proposer ici, comme on le fait en anglais ou en allemand une prononciation reçue, comprise, acceptée par tout le monde. Il est intéressant de constater que les dialectes anglais et allemands sont très vivants, mais qu'en matière d'enseignement l'allemand diffuse le Hochdeutsch et l'anglais le Received Pronunciation. Cette diffusion n'est pas du tout le résultat d'une quelconque hégémonie d'un dialecte sur l'autre qui n'existe pas puisque les parlors locaux précisément sont vivants. Cela se fait parce que c'est plus pratique et que cela permet aux locuteurs de dialectes non-intercompréhensibles de communiquer entre eux. (P. LE BESCO, *Parlons breton* : 35).

Ne seblant ket H. WALTER gweled an traoù er memez mod, ewid ar pezh a sell douzh ar saozneg d'an nebeutañ. E 1869 e oa bet savet ar *Received Pronunciation* (R.P.) gant Alexander ELLIS. Ur yezh *fabriket* e oa herwez ger H. WALTER, ha diazezet war arveroù gwelet evel re uhellañ, re tud ar c'hlasoù a uhelrenk kevredigezh Londrez ha gevred Bro-Saoz. Ne oa ket ar yezhoniezh tamm ebed he doa awenet ar saver, mez kentoc'h raglakadennoù sokial. Er bleadoù 1950 e oa bet enebet yezh an aristokrated (graet *U* anezhi, ewid *upper class*) douzh heni an dud arall, gwraet nann-*U* anezhi. Hiziw n'eus namaed 3% ag ar Saozon a ra gant an R.P., an darn vrasañ ag an dud é ouarniñ o liw yezh, dre ma ne vez ket mui ken kreñv ar wask a veze gwezharall. Levezon ar saozneg amerikan ouzhpenn, a zo daet da vout komprenet-mat ha degemeret, a zegas kemm d'e dro er parlant (levezon ar filmoù *made in USA*).

Nawazh penaoz tremen hiziw heb ur standard, ha pa vehe unan bihan ? Mar pad ar brezhoneg (da lâred eo mar kresk niver e gomzerion yaouank beteg ouzhpenn 100 000 d'an nebeutañ) e tay ar yezh, e mod pe vod, da vout unvan. Ar brezhoneg a vez implijet er skolioù zo ur skwer ag ar brezhoneg da zoned. Plas ar rannyezhoù a zo bihan-mat er yezh-se, zokén heni ar gwenedeg en e dachenn. Ha gwir a-walc'h eo n'eus ket kalz a rezonoù d'an newez-vrezhonegerion da gomz fasibl evel e kornad-mañ-kornad p'en em gavont kenetreze, namaed p'o dez dober pe pa fell dezhe moned e darempred gant tud (kozh peurliesañ) ar c'hornad-se.

« Si l'utilisation du parler local est logique chez un locuteur traditionnel, elle se justifie difficilement chez un néo-bretonnant qui a une approche intellectuelle de la langue. » (LE BESCO, *Ibid.*).

E gwirionez n'eo ket **hag e vo ur yezh standard pe ged** ar gudenn, mez pesort yezh standard a vo. Ha daoust ha ne vo ket an dra-se diwar-goust ar gwenedeg, en despet d'ar pezh a skrive F. MORVANNOU,

« ...un breton raisonnablement « standard », dont cependant tous s'accordent à estimer que le vannetais ne doit pas faire les frais (*Op. cit.*, p. 376).

Dindan ar ger standard-se, ar pezh a zoujer meur a wezh eo ur yezh a yahe war baourraad. E-sigur unvaniñ e vehe skarzhet ar pezh a ra buhez ur yezh, ur bouilh a stummoù, ur paot a c’herioù hag a droioù-lavar a beb sort. Ar pezh o doa graet tud Walarn, lakaad urzh e « mor ar brezhoneg », ne vehe ket mui ar labour a-vremañ, a vehe kentoc’h klask pinvidikaad ar brezhoneg unvan, roiñ dezhañ *ar liw ha jol bobl* (FAVEREAU, 1997 : 10).

Koulskoude n’eo ket afer ar standard un dra newez. Menegañ a ra J. LOTH (*Annales de Bretagne*, III, 3) intrudu Pierre BARISY (1659-1719), person an Nignel,

« [qui] a eu l’idée originale de publier un recueil de cantiques dont la langue serait, au fond, vannetaise, mais modifiée de façon à être intelligible dans toute la zone bretonnante (...). Après tout, l’idée d’un rapprochement entre les dialectes est raisonnable. Et, du temps même de P. Barisy, l’on chantait en pays de Vannes les cantiques du P. Maunoir, légèrement modifiés. Barisy voulut sans doute donner des règles et des exemples. Mais une tentative de ce genre ne peut réussir que si les principes sont acceptés par un groupe important d’écrivains et appliqués dans des livres qui s’imposent. » ( p.218).

Hag ema ar saozneg hag ar *Received Pronunciation* ur skwer ewid sevel ur standard brezhoneg ? A-dra-sur n’eo ket kevredigezh Breizh ar bleadoù 2000 hañval douzh heni Bro-Saoz en XIXved kantvlead.

Mard eo waet à-raog, war strewañ, ar standard skrivañ, perag chom heb roiñ un nebeud reolennoù d’ur standard distagañ, a vehe e bal an etrekomprenadur gant un arbouelladenn yezhoniel ha pedagogel temzet-mat ? Kalz ne vern penaoz, ne vehe ket biken un R.P. brezhoneg bennag heni klasoù uhelrenk poblañs ar vro. Amañ e vehe kentoc’h harmonizadur ur yezh-pobl a garehe kaoud ur statud gwelloc’h, hag dre an argerzh-se, gouarn e binvidigezhioù. Ar gudenn zo amañ neuze : penaoz ober ? Ha trawalc’h e vehe, ewid ar pezh a sell douzh ar gwenedeg, miroud e c’herioù difer, evel ma oa an oll akord e kollok Gwened 2002 ? Pa vo kelennet **menn** e peb lec’h e Breizh, e-tal **pelec’h**, pa vo arrestet a lâred ema ur ger gwenedeg, e vo bet graet ur paz dija. Pa vo bet



adskrivet gerioù zo ewid derc'hel kont ag o buhez er yezh (ar ger **skouer** ne glot ket gant ar W « chuér », ha lojikoc'h eo **skwer**), pa vo implijet ar stumm-etre **douzh** e-lec'h ar stumm lennegel **ouzh** (minorel kenañ er yezh) ha **doc'h** stumm W, neuze e vo bet graet ur paz arall.

Mez chomel a ray da bleustriñ war un sanadur aez da gompren gant an oll. Ar pezh a sell douzh kenaoz ar c'homz, douzh ar skol, douzh ar media.

### 2.2.5.1. Ur gudenn-geleñn

Gwelet hon eus pegen dizunvan ema an taol-mouezh er brezhonegva. Beteg bremañ n'eo ket bet pleustret a-ratozh ewid en em c'houlenn penaoz ober pa vez kelennet ar yezh, ha kentoc'h e klewer ur yezh didaol-mouezh ha plad a-walc'h, gwir skeudenn ar galleg, gant an newez vrezhonegerion, evel ma yahe an traoù brall-divrall war ar poent-se. Ha nawazh :

«Ar brezhoneg a zo ur yezh a vez kreñv enni an taol-mouezh. A bouez bras eo enta e vije dalc'het d'e verkañ reizh.» (KERVELLA, 1947).

Mard omp a-du gant KERVELLA war-se, penaoz ober enta ewid derc'hel d'an taol-mouezh goude ar pezh hon eus gwelet uhelloc'h, en ur mod pleustreg hag efeduz ? Penaoz ober ewid moned en tu arall ag an enebadur etre taol-mouezh KLT / taol-mouezh W / taol-mouezh etre ? Normañ ewid treuzvewañ : ataw en em gavo ar brezhoneg douzh troad ar vur-se. Rag kudenn ar skol, da lâred eo kudenn ar c'heleñn, a zo aze : pesort taol-mouezh lakaad en arver er skol ? Daoust hag-eñv e c'hell ar skolaerion kelenn daou, tri taol-mouezh ? Daoust hag-eñv e c'hellint-gi chañch taol-mouezh en o c'hlasoù pa vo goulennet gante chañch post, chañch departamant ? Ha n'eo ket trawalc'h dija chañch parrez ewid en em gavoud en un tachad dishañval an taol-mouezh ? Etre Langidig [amze:r] ha Pluwigner da skwer [am'zi:r] ? Penaoz en em gavo ar skolidi gant an taol-mouezhiañ baleant-se ? Penaoz en em gavont-gi ?

Un dra anad : a-c'houde ma ne za ket mui ar skolaerion nag ar gelennerion ag ar bobl vrezhoneger, e vezont tutaet er skolioù-meur pe er c'heveladurioù-

stummañ e-lec'h ma vez standard a-walc'h ar yezh desket. D'ar re o micher treuskas ar yezh e vehe tu da wellaad ar yezh kumun-se c'hoazh, war meur a boent. Tu a vehe da gennig dezhe komz ewid boud komprenet, ha dilezel un tammig o fesonoù re lec'hel da sanañ ar brezhoneg. Tu a vehe da zegas soñj d'ar re a gennig pezhioù-c'hoari d'an arwesterion ober o seizh gwellañ ewid komz difonn ha sanañ er mod gwellañ ewid boud komprenet. Ar pezh a ra VOA (The Voice of America) gant ar Special English. Savet e oa bet ar servij-se e 1959 ewid tud ar bed ne oa ket ar saozneg o yezh-vamm, ha c'hoant dezhe henn deskiñ ewid henn kompren ha kehentiñ gantañ. Ur yezh simpl eo, sanet gant ur ritm a laosk amzer d'an dud da glewed ar gerioù ha da dapoud ster ar frazennoù. Ur 1500 ger bennag a ya d'ober ar Special English a vez lennet 25% difonnoc'h eged ur prezeg ordinel. Un afer a bedagogiezh eo, a-benn ar fin, gant ur ger-stur eeun : simplaad.

“«[Special English is] used for reporting world events and describing discoveries in medicine and science (...) Special English writers use short, simple sentences that contains only one idea. They use active voice. They do not use idioms.»<sup>185</sup>

Gant taol-mouezh ar brezhoneg en em gavomp dirag ur gudenn n'hellimp ket doned da benn anezhañ heb simplaad, heb nebeutaad niver ar roennoù. Rag n'hellimp ket ar skolidi c'hoari gant patromoù liessort ha kontrel, dreist-oll ewid pezh a sell douzh an taol-mouezh, a zo un dra newez ewid gallegerion a-vihanig, evel an darn vuiañ ag ar vugale enskrivet er gwenodoù diwyezheg hiziv-an-deiz. Kennig a raimp amañ un dibab d'ober er skolioù, ur patrom taol-mouezhiañ ewid ar gerioù a-unan hag er frazennoù. Evel ma lavare Elmar TERNES, « *il s'agit plutôt de présenter un système qui puisse rendre des services pratiques dans l'enseignement du breton.* » (1977 : 181).

---

<sup>185</sup> Sd. lec'had ar BBC : [www.voanews.com/specialenglish/radio\\_programs.cfm](http://www.voanews.com/specialenglish/radio_programs.cfm).

## 2.2.5.2. Pesort dibab ober ?

### 2.2.5.2.1. Simplaad :

Gwelet hon eus eh eus tu da ziforc'h teir feson da seveniñ an taol-mouezh e brezhoneg (d'an nebeutañ) : er c'hornôg (Bro-Leon dre vraz) un taol-mouezh war ar silabenn eil-ziwezhañ, er reter (Bro-Wened kentoc'h) un taol-mouezh war ar silabenn ziwezhañ peurliesañ. Etre an daou un dachenn ledan e-lec'h ma kouezh an taol-mouezh en ur mod dizingalloc'h.

### 2.2.5.2.2. Ha tu zo da choaz ? :

Gwelet hon eus e vez reoliog a-walc'h an taol-mouezh kornôg pa vez liessort d'e du heni ar reter (e W e kaver gerioù taol-mouezhiet war ar silabenn eil-ziwezhañ evel er c'hornôg, ha gant niveruz m'emaint n'heller ket lâred emaint namaedenoù hebkén : ur pouez gwirion o deus er yezh<sup>186</sup>). E-kreiz ar vro e vez kustum an dud d'an diw feson-se d'ober, peogwir e vez taol-mouezhiet ar gerioù en ur mod mesket a glot gwezh gant TM ar c'hornôg gwezh gant heni a reter.

A bouez braz eo an dibab pedagogel a zo d'ober amañ : tu zo da leuskel ar skolaerion d'ober ar pezh a c'hellont (é vould ma ne oui an darn vuiañ anezhe na *bu* na *ba* diwar-benn taol-mouezhiañ ar c'horn-bro e-lec'h ma kelennont). Tu zo iwe da glask lakaad un tammig kempouellded e yezh ar skol.

Soñjal a ran a) n'eus ket tu da gelenn meur a feson da sanañ ar brezhoneg, enkontet ha dreist-oll marse a-fed taol-mouezh ; b) chomel heb choaz ur mod standard d'ober a zegas ur mod *galleg* d'ober, ar pezh a remerker bremañ gant an newez-vrezhonegerion ; c) kennig un taol-mouezh simpl, un taol-mouezh temzet-mat (da lâred eo na re greñv na re zister) a c'hell roiñ d'ar brezhoneg ur liw dezhañ.

---

<sup>186</sup> Trawalc'h ataw ewid boud ur pont etre an daou TM dishañvallañ.

Setu perag e soñjan e rankomp choaz. Setu perag e kennigan ur mod-ober ewid ar skolioù, ur mod-ober a dalv iwe ewid ar re o deus dober a implij ur yezh standard ewid boud komprenet gant ar muiañ niver a gomzerion ha chelaouerion.

#### 2.2.5.2.3. Petra gortoz ag un unvanidigezh kempouez :

Da gentañ, gant un taol-mouezh unvan dibabet-mat, rekiz eo ma ne vo ket an taol-mouezh-se ur skoilh war hent an etrekompren. Ar pezh a c'hellomp gortoz gantañ : ma roio d'ar frazenn vrezhoneg ur lusk dezhi, kentoc'h eged ar pleg he deus kroget da dapoud, hag a zo heuliañ rik patrom ar galleg.

#### **2.2.5.3. Kennig : ar reolenn R1**

##### 2.2.5.3.1. An TM standard, pouez war ar silabenn eil-ziwezhañ (R2) :

Mar lakaomp ur pal d'hon strivoù e vo aesoc'h gouied e-menn lakaad pouez hon labour pedagogel, en em goll er jibloù a-hend-arall. Rekiz eo derc'hel kont a realded ar yezh : ar pezh a zo heverk, an oll barlantoù a anav mui pe vui an taol-mouezhiañ war ar silabenn eil-ziwezhañ. Dre e reoliekâdur ema an TM-se an heni simplañ da gelenn, heb ma vo re greñv ha gant ma vo klewet spiz awalc'h silabenn ziwezhañ ar gerioù (lo'go:denn [lo'go:den]). Ewid-se e sonjomp e c'hell ar Vrezhonegerion en em lakaad akord war ar poent-se pa gomzint ag ar brezhoneg a zo da gelenn er skol. Evel ma skrive KERGOAT, “ar pleg paroksitonek eo an hini pennañ. Ez-istorel eo etrezek ennañ emañ ar brezhoneg o tennañ (betek e brezhoneg Gwened zoken pa vez staget dibennoù morfemoù)<sup>187</sup>”.

---

<sup>187</sup> Dielloù JCLR, in *Evezhiadennoù* (dwb. ar peder reolenn), 2005.

2.2.5.3.2. An TM standard er gerioù a-unan :

- Heuliañ patrom brezhoneg ar c'hornôg : taol-mouezh pennañ war ar silabenn eil-ziwezhañ. Ar chema-mañ, dindan, a glot gant an heni bet savet gant Ken GEORGE ewid ar c'hernoweg (1986 : 62), a ziskouezo ar patrom (**P** = TM pennañ ; **e** = TM2 a eil renk ; **o** = silabenn didaol-mouezh) :

Niver silabennoù ar ger	Chema an taol-mouezhiañ	Skwerioù
1	<b>P</b>	<b><u>pesk</u></b>
2	<b>Po</b>	<b><u>pesked</u></b>
3	<b>oPo</b>	<b><u>peskedenn</u></b>
4	<b>eoPo</b>	<b><u>labourez</u></b>
5	<b>oPo</b>	<b><u>labourezed</u></b>
6	<b>oeoPo</b>	<b><u>diorroadurioù</u></b>

**Taolenn 5. Chema an TM standard hervez Ken GEORGE.**

- Renabliñ ar gerioù taol-mouezhiet war ar silabenn ziwezhañ. Er geriadurioù hag er levroù-kelell, ewid sikour an deskerion, merkañ ar silabenn daol-mouezhiet er gerioù pe er sintagmoù-se : izlinenniñ anezhi, hervez skwer STEPHAN/SEITE en o geriaoueg : **dija**, **e-kreiz**, **paourraad**.
- Par ma c'heller, er skritur, merkiñ an TM e gerioù zo dre un ( " ) : **studi** → **studioù**, **studiadenn** ; dre un tired : **kén** [ké:n] [ˈtʃé:n] **ne rin ket kén** (da enebañ douzh **ken** [kən] : **n'eo ket ken braz-se**), **hebkén**, **zokén** ; pe un tired-kogneg evel e **Kornôg**, **kornôgel**. Tu zo d'implij an tired-kogneg iwe war an **a** er gerioù diveret ag ar verboù e **-aad** :

**brezhonekaad** → **brezhonekâdur** (sd. **glaz, glazadur** *verdure* ; *salade* # **glasaad** → **glasâdur** *verdissement*). Pa vo reizhet an doare-skriv e vo red soñjal reoliekaad kensonenn dibenn ar gerioù (herwez an diveradur) a-sort ma c'hellor diskodiñ aesoc'h hirmed ar vogalenn : **fallagr** [fa'la:kr] (< **fallagriez**h), **unan sod** ['so:t] (< **sodiñ, sodell**) (Sd. **lōd** ['lo:t] # **lōt** ['lɔt] ; **klōd** ['klo:t] # **klōt** ['klɔt]).

- Er c'helenn : sanañ sklaer a-walc'h ar silabenn ziwezhañ, ewid ma vo klewet ar ger en e bezh gant ar chelaouerion : **amanenn** [a'mã:nən] kentoc'h eged [a'mã] (chomel heb skriv **amann** enta).
- Kelenn war-un-dro ar reolenn a ren pad ar vogalenn dindan an TM :
  - o Bogalenn didaol-mouezh berr ataw.
  - o Bogalenn taol-mouezhiet hir dirag **b, d, g, z, j, v, l, n, r** (**rr** er gerioù unsilabenneg), **z(h)** (gant sanadur ar **z** KLT hebkén). E-kontrol e vez berr ar vogalenn daol-mouezhiet dirag **p, t, k, s, ch, f, c'h** (namaed e **sec'h** ha liez dirag un **-e**), **ll, m/mm, nn, rr** (e-kreiz ar gerioù), **gn, y** ha **i** kensonenn, **(z)h** (gant sanadur an **h** gwenedeg hebkén).

#### 2.2.5.3.3. An TM standard e unanennoù taol-mouezhiañ zo :

Dre ma seblantont boud strewet ledan, er-maez ag ar KLT zokén, e kemeromp amañ da ziazez renabl KERVELLA c'hoazh, goude un nebeud kemmoù en doare-skriv pe goude un nebeud remerkoù.

- pa vez kevreet daou c'her gant ur varrennig-stagañ e vir peb unan anezhe e daol-mouezh : melin-awel.
- Ne vez ket taol-mouezhiet ar rannigoù diskoueziñ : **-mañ, -se, -hont** : ar vag-mañ, an ti-se, ar vro-hont, ba du-mañ. Nawazh e ranker diforc'h etre **-se** war-lerc'h an anw-kadarn ha **-se** war-lerc'h un araogenn : **gant-se, evel-se** (hag iwe **evel-se**) h.a. Nawazh : **evel-henn, beteg-henn**. Er lavarennoù implijetañ enne **-mañ** pe **-se** war-lerc'h ur ger liessilabenneg e tilec'h an TM ennañ war ar silabenn ziwezhañ : **er mitin-mañ, kement-se**.

- Pa dalv an araogenn **ewid** da stagell ha pa vez staget douti ar raganwioù-gour **me, te**, h.a. e c'hoarvez ar memez darvoud : **ewidon-me, ewidoc'h-c'hwi**.
- Gerioù taol-mouezhiet evel raggerioù :
  - An niveroù pegementiñ (enkontet **ur, un, ul**) hag an niverpedvediñ eil : **un den, ur rod, ugent lur, an eil rumm**.
  - An anw-gwan goulennata **ped**, an anw-gwan amresiz **oll**, ar ragverboù goulennata ha keñveriañ **ken** (**ken** anw-gwan amresiz ne vez ket sanet evel ragger) ha **pegen**, an adverboù **re** ha **gwall**: **ped ki ?, ken braz, an oll dud, pegen gwenn, re bell, gwall vraz**.
  - An anwioù-gwan-doareañ (en o zouez an anwioù-gwan-kevrennañ **hanter** ha **kard**) pa vezont dirag un anw : **ur gwir vab, un hanter dorzh, ur c'hard lew, ur gwall zen, un hanter kant** (mez **hanter-kant**), **hanter noz** (mez **hanternoz**).
  - Rannig ar verboù emober **en em** : **en em glask** (liez **'n em**), pe **hum**<sup>188</sup> (W).

Ne seblant ket dimp e vehe ur skoilh d'an etrekompren derc'hel douzh an taol-mouezhiañ-se. Evel-se dija e vez santet an traoù e-kostez Langidig da skwer.

#### 2.2.5.3.4. An TM standard er frazenn :

Ewid ar pezh a sell douzh sanadur ar frazenn e brezhoneg, a-bouez eo lakaad da santoud ritm an enoñsiad ha meulodi ar yezh, diazezet war lec'h an taolioù-mouezh. Setu un nebeud skwerioù tennet a studiadennoù zo, 1) skrivet er mod mand int bet klewet gant an dastumer ha lakaet ur patrom 2) skrivet ha 3) sanet e-talte :

- « meched anawed ënō » (TERNES, Groe) → **N'em eus ket anavet anezhañ** → /'m'eus chëd **anavet anezhañ**/.

<sup>188</sup> A orin dishañval, herwez Alan RAUDE (en ur pennad diembann c'hoazh ewid *Ar Maen-Lemmañ*, kannadig Ar Falz).

- « mëzo e **kar**lad e chom » (TERNES, Groe) → **Me zo e Kerl**ard é **chom**. → /me zo e **ker**lard e **chom**/.
- « enë z deu kous » (SINOÛ, Lechiagad) → **Hennezh zo deuet kozh**. → /**henn**ez zo døt **ko:s**/.
- « me mëz **de**: bë re » (SINOÛ, Lechiagad) → **Me ‘m eus debret re**. → /me ‘m`z **de**:bë(t) **re**/.
- « ôñe z la **bu**:ri bar post » (SINOÛ, Lechiagad) → **Honnezh zo o labouriñ e-barzh ar Post**. → /**honn**ez zo o la **bu**:ri bar **post**/.

Da voned pelloc’hig gant ar skwerioù e roan amañ en-dro testenn R. Hemon, gant un nebeud kempenn d’e zoare-skriv, ar pezh na chañch ket lusk ar yezh komzet :

Ur **gOU**loù a **l**ntre e **beg** an **tOU**r, **pEuc**’huz-meurb**Ed**, o **tegas Eñ**vor an **deizioù gwezhAll**. Dre **vUrzhud** e oa **chomet** war **Enaou**, rag **Eno** ne oa **dEn** ebed. **Dor** an **tOU**r, diouzh **tu** ar **vOger**, a oa **dIgor**. **Hogen**, **tEñ**wal e oa an **diabArzh**, netr**A** o lugerniñ **Ennañ**, nemed **hirgarrezEnnoù strIzh** ar **pE**nestr. Ar **mAnac**’h a **dostaas** douzh **Unan**. **PArañ** a rae al **lO**ar. **Skalier brAz** ar c’**hA**stell a oa sklerijennet **Oll** ha **dI**stro. En **trA**oñ **avAd**, **troad** ar **mE**nez a oa **lEU**n a **dU**d o **yU**dal hag o **fIñ**val, ha **muIoc**’h a oa c’**hO**azh o **tont** diouzh ar **voubouAdeg** a **glwed** o c’**hournI**jal er **strE**doù a **dro-war-drO**.

Ha mar roan ur liw gwenedeg d’an destenn, dre lakaad hañvalsterioù e degouezhioù zo, ne vo ket chañchet ar lusk amañ c’hoazh, peogwir hon eus dibabet kelenn un taol-mouezh namaedkén, heni ar c’hornôg :

Ur **gOU**loù a **l**ntre e **beg** an **tOU**r, **pEuc**’huz-meurb**Ed**, é **tegas Eñ**vor an **deizioù gwezhAll**. Dre **vUrzhud** e oa **chomet** war **Enaou**, rag **Eno** ne oa **dEn** ebed. **Dor** an **tOU**r, diouzh **tu** ar **vAgoer**, a oa **dIgor**. **Hogen**, **tEñ**wel e oa an **diabArzh**, netr**A** é lugerniñ **Ennañ**, **namaed** **hirgarrezEnnoù strIzh** ar **fE**nestr. Ar **mAnac**’h a **dostaas** douzh **Unan**. **PArañ** a rae al **lO**ar. **Skalier brAz** ar c’**hA**stell a oa sklerijennet **Oll** ha



dIstro. En dIAz avAd, troad ar mEnez a oa lEUn a dUd é yUdal hag é fIñval, ha muIoc'h a oa c'hOazh é toned diouzh ar voubouAdeg a glewed é c'hournIjal er strEdoù a dro-war-drO.

D'am soñj n'eo ket "dislonkaduz" ar feson-se da gennig unvaniñ ar yezh, a zo un dober red ewid gelloud he c'helenn kempouell.

#### 2.2.5.4. Ur skwer er sonennoù

##### 2.2.5.4.1. Skwerioù er sonennoù hengounel :

Un dra heverk am eus bet tro da venegañ uhelloc'h : ur ritm a zo e peb yezh, er yezh lennet pe komzet. Er varzhoniezh e vez graet gant ar ritm, hag er sonennoù e c'hell lusk ar sonerezh klotiñ gant an TM : ur menier kempouelled a zo aze. Mez ne vez ket gwir ataw. Herwez Erwan LE PIPEC (2000), er c'hantikoù hag er sonennoù dastumet gantañ e kornad Malgenag, ne vez ket dalc'het kont nag a bad ar vogalenn nag ag an TM, a-gaoz m'ema an tresoù-se dindan beli ar meulodi.

Tu zo da gavoud skwerioù nawazh a ziskouez klotadur ar lusk hag an TM. Da skwer e *Gwin ar C'hallaoued* (Barzhaz Breizh), e-lec'h ma kaver gerioù unsilabenneg hebkén. En treuzskrivadur a raomp amañ e verk ar sin (°...) lusk ton ar sonerezh war ar silabenn da heul ; an arouez (°...) a verk ar silabenn e-lec'h ma kenglot lusk ha taol-mouezh :

« °Tan, °tan, °dir o °dir °Dir o °dir ha °tan tan °tan... »

An oll c'herioù taol-mouezhiet hag é klotañ gant lusk an ton, namaed **o**, **ha** hag ur wezh **tan**. Memez tra en ur sonenn anavezet madig a-walc'h er skolioù : « **E-koad Keryann** » (stumm KLT). Un ton da ganal mez iwe da gerzhed pe da zañsal a c'hell boud ar sonenn-mañ :

« E °koad Ker°yann 'z eus °delioù °faw  
°A zo °ledan, °a zo °ledan... »

Amañ e kouezh ar lusk war ar silabenn daol-mouezhiet, namaed diw wezh : war a rannig-verb **a**, didaol-mouezh er yezh komzet. Hirder ar vogalenn a vez santet iwe : berr e **koad**, **-yann** ; hir e **del-**, **led-**, **faw** [fa:], [fa:ɥ]. Setu ur skwer arall, tennet ag ur sonenn a Vro-Wened :

« Aval' -**odouar** er bil<sup>o</sup>**lig**  
<sup>o</sup>**Kig** er ba(e) <sup>o</sup>**lon**  
Ka<sup>o</sup>**rot** hag o<sup>o</sup>**gnon**  
Bet <sup>o</sup>on bet <sup>o</sup>**kailh** ha <sup>o</sup>**c'hoazh** e <sup>o</sup>**vin**  
<sup>o</sup>N'eo ket 'maed ma <sup>o</sup>**mamm** a <sup>o</sup>zo kaoz <sup>o</sup>**tin**. »

Er sonenn hengounel-se e heulia reolennoù taol-mouezhiañ ar W. Anavoud a raomp an TM war ar silabenn ziwezhañ (bil<sup>o</sup>**lig**, Ka<sup>o</sup>**rot**, o<sup>o</sup>**gnon**), hag iwe sanadur ar ger **douar**, unsilabenneg amañ ['dwa:r] e-lec'h an diwsilabenneg KLT (dou-ar). Gwezhavez e kouezh ar lusk war gerioù na vezont ket taol-mouezhiet er yezh komzet : **on**, **n'eo**, **zo**. Mestr e vez liez ar meulodi enta, mez santoud e vez soursi ar saverion sonennoù lakaad an daou dra da glotañ par ma c'hellont.

Mez n'eo ket ken heverk an traoù e sonennoù arall, daoust dezhe boud hengounel iwe. Setu skwerioù gwenedeg tennet a “*Sonamb get an Drouzerion*”<sup>189</sup> :

**A.** « Pa <sup>o</sup>oen er <sup>o</sup>**park** <sup>o</sup>é <sup>o</sup>**labou**<sup>o</sup>**rad**  
Me <sup>o</sup>**glew** ar <sup>o</sup>ve<sup>o</sup>**lin** <sup>o</sup>é rou<sup>o</sup>**lad**. » (p. 22)

Kouezhel a ra mad ar lusk er ger **park**, **glew**, **roulad**, **labourad** (hennañ war an diw silabenn a c'hell boud taol-mouezhiet e W, TM2 war **la-** ha **-rad**, TM pennañ). Mez kouezhel a ra iwe lusk ar sonenn war gerioù pe silabennoù na vezont ket taol-mouezhiet er gomz : **oen**, **é**, **ve-**.

**B.** « 'Barzh <sup>o</sup>en Tur<sup>o</sup>**ki** eh eus <sup>o</sup>ur ve<sup>o</sup>**lin**

<sup>189</sup> BELZ, Jorj, DESBORDES, Fanch, *Sonamb get an Drouzerion*, Hor Yezh, 1985.

Hag a °zo doc'h°ti teir °rod é °troiñ

Hag a °zo doc'h°ti teir °rod é °troiñ.» (p. 30)

Amañ e kouezh c'hoazh an taol-mouezh war ar silabenn ziwezhañ (Tur°ki, ve°lin) pe war ar gerioù unsilabenneg a resev an TM (°rod, °troiñ). **Doc'hti** a c'hell resev an TM war ar silabenn gentañ iwe. Ar lusk war **ur** a glot gant taol-mouezhiañ ar ger-mell amstrizh herwez KERVELLA ha SEITE, mez e gwenedeg e vez lakaet an TM war **ur** pa vez da enebañ douzh **diw**, ar pezh n'eo ket amañ (Sd. § 2.2.2.4., p. 139). Da renkiñ e vehe kentoc'h an degouezh-se gant ar lusk war **en** ha **zo**, gerioù didaolmouezh er gomz.

N'eo ket un dra anad enta lakaad ar c'homzoù da glotañ fasibl gant ar sonerezh. Ar pezh a vez dilezet re liez gant ar saverion-sonennoù a-vremañ. Tu zo da ziwall douzh ar gudenn-se memestra, ha reizhañ an traoù pa vez tu.

#### 2.2.5.4.2. Skwerioù tennet a Kanomp hardizh<sup>190</sup> :

Pa oa daet ar levrig-se er-maez en doa Albert BOCHÉ kenniget reizhañ ar pezh na jaoje ket e-keñver kenklotadur ar lusk hag an taol-mouezh (standard). Setu penaoz e oa daet da benn ag a striv (G1 a verk ar werzenn er skrid kentañ, G2 ar werzenn gerreizhet herwez kennig BOCHÉ) :

Skwer A : G1 - « Ur °mali°gorn din°dan ar °glaw...»

G2 - « Ur °mali°gornig °dan ar °glaw...»

Herwez reolennoù ar yezh standard e vehe bet rekiz lakaad an TM war **-li-** (**maligorn**), ar pezh na oa ket bet graet, peogwir e tegouezhe war ar silabenn ziwezhañ (**-gorn**). Dre lakaad an dibenn **-ig** ouzhpenn d'ar ger-se e kouezh bremañ an TM war ar silabenn eil-ziwezhañ ennañ (**maligornig**), heb distruj kempouez ar frazenn : peogwir e kouezh an TM en eil silabenn er ger **dindan** (**dindan**, SEITE) e c'heller leuskel ar silabenn gentañ didaol-mouezh da steuziañ, ar pezh a zegouezh liez er yezh komzet ('**ma** e-lec'h **ema**, ,'**el**/**vel** e-

<sup>190</sup> *Kanomp Hardizh, 51 sonenn a Vro-Wened*, IPLB Bro-Gwened, 1996.

elc'h **evel**...). Taol-mouezhiet e vez iwe ar ger-mell amstrizh **ur** evel meneget er yezhadurioù.

Skwer B : G1 « E-**kreiz** an **noz** em <sup>o</sup>eus gwe<sup>o</sup>let **ur** bou<sup>o</sup>lo<sup>o</sup>mig **du** »  
«<sup>o</sup>**Ur** bou<sup>o</sup>lo<sup>o</sup>mig **du** du **du** »  
«<sup>o</sup>**Ur** bou<sup>o</sup>lo<sup>o</sup>mig **du** »  
«<sup>o</sup>**Ur** bou<sup>o</sup>lo<sup>o</sup>mig **du** du **du** »  
« <sup>o</sup>Evel <sup>o</sup>ar **lu**<sup>o</sup>du. »

G2 «<sup>o</sup>**Ur** bou<sup>o</sup>lo<sup>o</sup>mig **du** du **du**  
**Du** e<sup>o</sup>vel ar **lu**<sup>o</sup>du. »

Ar pezh na zegouezhe ket mat aze a oa an TM war ar silabenn gentañ er ger **evel** e-lec'h [e'vɛl] ar pezh zo bet reizhet e G2. Ne oa ket bet BOCHÉ pelloc'h, mez tu a vehe bet iwe da reizhañ ar werzenn gentañ, evel-mañ (ur skwer hebkén eo) :

G2 : « E-**kreiz** an **noz** 'm eus **gwelet** **spiz** **ur** bou<sup>o</sup>lo<sup>o</sup>mig **du**. »

Ar pezh a ziskouez e vez tu da zoned da benn ag an diaezamant-se : un afer a emskiant da gentañ (red eo gouied eh eus ag an diaezamant-se) hag a bleustr goude.

#### 2.2.5.4.3. Ewid kanal oll war-un-dro :

N'eo ket mui kement-se ar c'hiz da soniñ pe da ganal er festoù evel gwezharall. Pa veze kanet da fin an eost e veze an oll a-unton, ar memez feson gant an dud da sanañ ar yezh. P'en em gav bremañ tud a beb kornad a Vreizh é pardoniñ asamblez (c'hoazh) e c'hellont kavoud diaezamantoù da beb an amzer. Da skwer er c'hantik "**O rouanez karet an Arvor**" :

O Rouanez karet en Arvor,	→ <sup>o</sup> O <b>Rouanez</b> <sup>o</sup> karet <sup>o</sup> an <b>Ar</b> <sup>o</sup> vor,
O mamm lan a druez	→ <sup>o</sup> O mamm <b>leun</b> <sup>o</sup> a <b>dru</b> <sup>o</sup> ez
Ar en douar, ar er mor	→ <sup>o</sup> War an <b>douar</b> , <sup>o</sup> war ar <b>mor</b>
Goarnet ho pugale.	→ <sup>o</sup> <b>Gouarnit</b> ho <sup>o</sup> puga <sup>o</sup> le.

Daou c’her kudeneg zo ennañ a-fed TM : **rouanez** ha **douar**. E W eh eus diw silabenn er ger kentañ [rwānes] hag unan en eil [dwa:r] pa gaver teir ha diw a-geteb e KLT : [ru’ā:nes] ha [’du:ar]. Peadra da zegas dizakordañs...

Hañval an traoù ewid ar memez abeg e heni bet savet gant person Bignan, “**Pe trouz zo war an douar**“, pe zokén er “**Bro gozh**” («<sup>o</sup>**Breizh** <sup>o</sup>**dou-**<sup>o</sup>ar <sup>o</sup>ar <sup>o</sup>sent <sup>o</sup>**kozh**, <sup>o</sup>**dou-**<sup>o</sup>ar <sup>o</sup>ar <sup>o</sup>**var**<sup>o</sup>zhed...»).

Lod ag ar gerioù ne zistresont ket ar c’han en e lusk, daoust d’ur sanadur dishañval. Da skwer ar ger **war** (en dro **war an douar**) : [war] pe [var] pe [ar]. E-kontrol, sanañ [’dwa:r] pe [’du-ar] n’eo ket ur sort. Sanañ **dou-ar** gant diwsilabenn, pa ne oa namaed unan da gentañ er c’hantik a-vro Wened, a c’houlennehe ur c’hempenn d’ar pozoù. Ar gerioù **rouanez** ha **douar** a c’houlennehe ur sanadur normalizet enne, ewid ma vehe heson ar c’han.

Unvaniñ n’eo ket dibosubl, mez goulenn a ra un nebeud emglew...

#### 2.2.5.5. Ur c’horpus frazennoù

Gant ar c’horpus a vo kavet amañ da heul e klaskimp skeudennaouiñ hon kennig ledannoc’h c’hoazh. Drezañ e vo diskouezet penaoz e c’heller nebeutaad an diforc’hioù etre gwenedeg ha KLT : goude ma vo bet unvanet an taol-mouezh e vo tost a-walc’h ar gwenedeg ewid ma vo aez an etrekompren.

##### 2.2.5.5.1. An danvez :

Divizet em eus dibab ur c’horpus 40 frazenn skrivet tennet a oberennoù dishañval, deg e peb unan anezhe :

- *Yezhadur bras ar brezhoneg*, Fransez KERVELLA, 1947.
- *Le breton sans peine*, Fanch MORVANNOU, 1978.
- *Le breton parlé vannetais*, Meriadeg HERRIEU, 1989.
- *Brezhoneg prim ha dillo*, Yann-Bêr KEMENER, 2002.

Gant ar peder oberenn-se em eus soñjet roiñ un alberzh ag ar brezhonegoù kavet war ar marc'had. Gant KERVELLA, ur brezhoneg normalizet e spered Gwalarn ha da heul emglew 1941, heb teurel fae « war pinvidigezh ar brezhoneg komzet, enkontet e vrezhoneg-eñv, etre Kernew ha Leon » (FAVEREAU, 1997 : 7). Gant MORVANNOU ur brezhoneg ledan, da lâred eo unan a venn ebarzhiñ ar gwenedeg bar jeu (dre ober gant gerioù gwenedeg, mez iwe dre an doare-skriv implijet, tostoc'h douzh ar rannyezh-se eged doare-skriv 1941). Gant Meriadeg HERRIEU dre ar gwenedeg « peurju » a vez kavet a-hed e levr. Ha gant Y-B. KEMENER erfin en deus diazezet e hentenn war ar brezhoneg komzet e-kostez Karaez, gêr a greiz-Breizh na n'ema, hag iwe brezhoneg gwalarn Breizh.

#### 2.2.5.5.2. Rol ar c'horpus :

Gant mah on é klask difraostiñ an hent hebkén em eus dibabet ar c'horpus-mañ a frazennoù skrivet. Boud ema bet ma labour gante o sanañ gant un taol-mouezh hañval, e gwenedeg kement hag e KLT. An taol-mouezh-se a c'helleher ober *an TM standard* anezhañ.

Frazennoù-enoñsiañ hebkén 'm eus dibabet, ewid roiñ ur limit d'ar renabl. Frazennoù sort-se a vez kavet stank er c'homz hag er skridoù iwe. Mez tu a vehe d'ober memez mod gant frazennoù goulennata pe frazennoù gourc'hemenn.

Enrollet em eus ar c'horpus herwez diw feson diazezet o diw war ur memez taol-mouezh, en ur gomz ledan, da lâred eo nann gwasket pe verraet evel ma c'hell ar yezh komzet boud liez.

Goulennet em eus gant Ivona ARZUR lenn e KLT. Da heul e vo klewet ar wersion gwenedeg. Dre lakaad an daou stumm tal-ouzh-tal em eus klasket diskoueziñ pesort dremm a vehe d'ur gwenedeg sanet evel-se, ha diskoueziñ pegen tost e c'hell an daou standard boud.

N'eo ket neutr boud choazet Ivona ARZUR : ganet e Bro-Leon mez daet da chom en Alrae (Morbihan), hi a anav hag a gomz gwenedeg (mod Krac'h, ewid boud resiz) kement ha leoneg. Anavoud a ra neuze ar pezh a laka an daou barlant da voud pell... ha tost war-un-dro. Anad eo e vo klasket amañ pouezañ war ar pezh a dosta an daou vod-se (ar re bellañ war gartenn Vreizh) da gomz brezhoneg. Dre m'emaint bet lakaet a-skoazañs e weler aesoc'h petra a chom difer da beb unan anezhe, nebeud a dra e gwirionez, ha ne lam ket an etrekompren tremen ag ur wersion d'an arall.

Herwez FONAGY eh eus un diforc'h etre ar c'homz bew hag ar c'homz lennet (1978, 1983) : war an ton-mouezh kentoc'h e vez frammet ar c'homz bew, ar frazenn lâret ; war an ereadurezh kentoc'h heni ar frazenn lennet. Gouied a raomp diwar-se ne vo ar skwerioù roet amañ namaed ur skeudenn ag ar realded : diaez eo, ha dibosubl zokén, gant ledannoc'h m'ema he zachenn, enkloziñ ar vuhez en ur patrom bennag. Un daveer hebkén eo ar pezh am eus dibabet, a-benn da ziskoueziñ pouez an taol-mouezh er brozodiezh. Ha mard eo bet lennet difonn un tamm ar frazennoù, ema ewid lakaad da santoud ritm ar frazenn lusket gant an taol-mouezhiañ ha pebeilañs *hirder* vs *berrder* ar bogalennoù.

Unvanet eo bet an doareioù-skriv evel ma ran en dezenn-mañ. Kavet e vo an an enrolladenn war ar CD stag, dindan an anw “**Korpus standard KLT-W**”, distag peb korpus e pewar teul dishañval. Peb frazenn zo bet enrollet diw wezh da heul : ar wezh kentañ gant Ivona ARZUR, an eil gwezh ganin. Diforc'hioù bihan zo chomet, a vo klewet e lec'h-mañ-lec'h : **o** pe **é**, **goullo** pe **goulle**, **levrioù** pe **levroù**, **gant/ged**, **dont/doned**. Tu a vehe bet da implij muioc'h a zihanvalderioù (**euz/deuz** e-lec'h **ag**, **pepheni** e-lec'h **peb unan**, **edo** e-lec'h **e oa**) mez klasket hon eus chomel tost a-walc'h douzh ar pezh a oa skrivet. Daoust d'an dishañvalderioù a chom er c'homz ([z] pe [x] e gerioù gant zh, **oa** sanet [wa] pe [we]...) e chom an daou vod aez da gompren o daou. Ne glaskan ket amañ roiñ ur patrom rik, mez ur skwer hebkén eh eus tu da ouarn liw ar gwenedeg war ar yezh unvan.

### 2.2.5.5.3. Ar c'horpus (lec'h an TM skrivet tew) :

#### - HERRIEU :

1. Ne **gompren** ket ar **pezh** a **lenn**.
2. Ne veze ket **hir** a-walc'h an **deiz**.
3. Ni a **grede** ar **pezh** en doa **lâret**.
4. **Ema** ar vugale é **skoñ** an **eil** war **egile**.
5. En em **glewed** a raent 'vel **breur** ha **c'hoar**.
6. **Troc**'het he deus he **biz**.
7. **C'hwec'h** a vugale zo **bremañ** en e **familh**.
8. **Loeiz** a vez **liez** ar **c'hentañ** ag e **glas**.
9. En **amzer** dremenet e veze graet **filajoù** dre-mañ.
10. Peb **unan** a c'hello **gweled** **neuze** gant **piw** e oa ar **wirionez** !

#### - KERVELLA :

1. **Lemenig** a voe **kaset** d'ar **skol** **adaleg** e **gentañ** bloawezhioù. (E. Berthou).
2. **Daoust** ha **laboused** a **glewan** pe ma **c'halon** o **kanañ**. (J. Riou).
3. Dec'h da **noz**, goude **koan**, en deus **Yann** **kaset** **din** ma **levrioù** en-dro d'ar **gêr**.
4. **Pêr** a **daolas** e neizh **goullo** **dreist** ar **c'hleuz**. (L. Inizan).
5. **Gwelloc'h** eo deskiñ **mabig** **bihan** eged **dastum** **madoù** **dezhañ**.
6. **Hennezh** eo a zo o **liwañ** **gewier** **deoc'h** !
7. **Gweloud** a reas **neuze** e oa **re** ziwezhad ewid **distroñ** d'ar **gêr** an **deiz**-se.
8. Ar varc'**hadourez** he deus **gwerzh**et **pesked**.
9. **Prenet** he deus **pesked** digant ar **vaouez**-se.
10. **Kenderc'hel** a rae an **awel** da vont war **washaad**.

#### - MORVANNOU :

1. **Petra** zo **amañ** **hiziw** ? **Sell** 'ta ! Nag a **otoioù** war ar **parking** !-
2. N'eo ket **achu** an **eured** **c'hoazh**, hag **ema** ar **person** é **kaniñ**.
3. **Kig-sall**, **avaloù-douar**, **saladenn**, **formaj**, **krampouezh**, **gwin gwenn**, **gwin ruz** : ur gwir **friko** zo **amañ** iwe.-
4. **Ema** **Rozenn** é **torchiñ** an **daol**, hag **ema** **mamm** é **kempenn** ar **sal**.
5. **Bremañ** **ema** **mamm** **Rozenn** ha **Ronan** é **skrivañ** ul **lizher**.
6. **Tad-kozh** n'eo ket **skuizh** **tamm ebed** : o **lenn** ar **journal** **ema**.
7. N'eo ket **braw** an **amzer** **hiziw**, n'eo ket un **amzer** ewid **moned** da **bourmen**.
8. **Setu** **amañ** **daou** **levr** : an heni **tew** zo da **Ronan**, hag an heni **moan** zo da **Rozenn**.
9. **Tri** miz ? O, n'eus **ket** ! Eüruzamant ! N'eus ket tri miz **kén** : n'eus namaed **daou** !
10. **Diwallomp** **amañ** : **Ronan** ha **Rozenn** n'int ket **fur** ; ar vugale n'int ket **fur**.

#### - KEMENER :

1. Da **gentañ** ez aomp da **brenañ** **boued**. (30).-
2. **Labour** 'm eus **d'ober**. (42).
3. Gant **bleud** **gwinizh** e vez graet **bara** pe **krampouezh**. (42).
4. **Klewet** 'm eus er **skinwel** e vo **pemp** **derez** warn-**u**gent **goude** kreisteiz. (50).
5. **Ya**, **komz** a ran **brezhoneg**, mez n'em eus ket **komprenet**. (54).
6. Ur **sac'h** **goulle** ne chom ket en e **sav**. (62).
7. **Kas** a raomp **merenn-vihan** **genimp** : **krampouezh**, **koñfitur**, **gwastelloù**, **frouezh** ha **dour**. (66).
8. **Kemer** a ran an **disheolier** hag ar **skornerez** (66).-
9. E-barzh ar **poulloù** **dour** **sklaer** e vez **kavet** **loened** **bihan** a beb **sort**. (74).
10. Me 'm eus **kavet** ur c'hrank **braz**. (74).



## 2.2.6. KLOZADUR

Herwez ar c'hazetenner Diego MARIANI n'eus netra sakr er yezhoù ; c'hoari gante eo ar pezh a gont, na boud ne vo ket disi ar pezh a vo graet<sup>191</sup>. Setu perag e skriv e bennadoù (flemmuz) en “*europanteg*”, ur yezh savet gant gerioù ar yezhoù a red er Gumuniezh European hag implijet bern war vern. Daoust hag-eñv e vehemp pell a-zoc'h hon kazeg, gant ar feson-se da sevel ur yezh newez? Daoust dezhañ boud farsuz e tiskouez an europanteg ur feson kozh a-walc'h d'ober gant gerioù estren. N'eo ket un dra newez enta, memez ewid ar Vrezhonegerion : digor a-walc'h d'ar parlantoù arall e vez o speredoù a-c'houde gwerso<sup>192</sup>. Mez beteg ur serten poent hebkén eh eus tu da ouarn ar gomprenidigezh. Komzet e vez neuze a *ziforc'h minimom* (BOCHÉ), pa gomzer a unvaniñ : e brezhoneg, klask ar stummoù (skrivet/komzet) e-lec'h ma ne chomo etre ar standard hag ar parlantoù lec'hel namaed un diforc hebkén (par ma c'heller), da skwer e vehe gwell ar stumm **kennig**<sup>193</sup> evel standard gant ma vez war-un-dro tost douzh ar sanadur '**kinnig** (un diforc'h : **e/i**), tost iwe douzh ar sanadur arall '**kannig**' (un diforc'h iwe : **e/a**). Ar pezh a vez kadarnaet gant Erwan LE PIPEC, en deus remerket ne vez ket choket ar gomzerion gant an diforc'hioù a zo etre o farlant hag ar parlantoù-nes, tra ma chom bihan an diforc'hioù-se (« *tant que ces différences restent minimes* »).

Unvaniñ an taol-mouezh n'eo ket un dra maez a dizh enta. Mez un afer a bedagogiezh eo, a dra sur.

---

<sup>191</sup> « Les langues n'ont rien de sacré. Au contraire : ce qu'il faut, c'est jouer avec elles, même si le résultat n'est pas parfait. » Diego MARIANI, kazetenner é terc'hel ur rubrikenn flemmuz er yezh 'europanteg' er gazetenn *Le Temps* (Genève) (*Le Courrier International*, Mars-Avril-Mai, 2003 : 43).

<sup>192</sup> « Depuis bien longtemps les bretonnants avaient pris l'habitude d'accepter, dans certaines circonstances, d'entendre un breton assez différent de celui qui leur servait habituellement. » (HUMPHREYS, 1995 : 14).

<sup>193</sup> Tu a vehe da gomz amañ ag ar stumm standard evel ag un “archistumm”, evel ma komzer ag an archifonem. Da skwer emma /E/ un archifonem rag ma not ollad perzhioù ar fonemoù /e/ ha /e/ a c'hell boud neutralizet e degouezhioù zo (*événement/événement...*). Neuze e vehe KENNIG an archistumm a neutraliz enebadur an daou stumm **kinnig** ha **kannig**.

## 2.3. HIRDER AR VOGALENN DINDAN AN TM

Gouied a raer, gant Linda SHOCKEY hag Anthony WATKINS (1995) ema ar merzoud yezhel ur fenomen globel : merzet e vez tresoù difer ar fonemoù mez iwe o c'henarroud (lusk, ton-mouezh, dasparzh). Anavoud a ra an empenn an degouezhioù posubl. Setu perag e c'hell an den intent frazennoù zo, daoust pegen fallsanet pe distreset e c'hellont boud. Etre 16 ha 16000 Hz e klewehe an den, mez kentoc'h etre 60 ha 10000 HZ goude 10 vloaz. Gant ar c'hensonennoù e krog ar vouzarded, tro-dro da 4000 Hz. Setu perag e klew ar re vouzar ar bogalennoù hebkén (izelloc'h o frekañsoù mez kreñvoc'h o nerzh eged heni ar c'hensonennoù). Setu perag e c'hell ur frazenn evel “*j'ai vu l'eau*“ boud komprenet “*j'ai du veau*“.

Rekiz eo ma pado ur son an amzer rekiz ewid ma vo klewet ha merzet gant ar chelaouer. Kentoc'h e sant hirroc'h ar skouarn ar sonioù berr ha berroc'h ar sonioù hir. Gouied a raer bremañ e vez pad ordinel ur silabenn didaolmouezh (adal 8 da 15 cs) ur pad rekiz ha bastuz ewid ar c'hlewed boutin (LEON, 1992 : 43).

### 2.3.1. AR SILABENN DAOL-MOUEZHET, LEC'H AN HIRDER

#### 2.3.1.1. Berrder ar segmantoù nann-taol-mouezhiet

Heverk eo ar liamm etre an TM ha hirder ar vogalenn a zo dindan. E brezhoneg (KERVELLA, *YBAB* : 12-13, 26-27 ; HOR YEZH, 1996 : 214) e c'hell peb bogalenn boud berr pe hir, mez n'eus namaed dindan an TM e c'hell ar vogalenn boud hir gwezhave, rag a-hend-arall, pa vez didaol-mouezh, e vez berr<sup>194</sup>. E saozneg e remerker ar memez fenomen : *to loose* [tu 'lu:z], *quickly* ['kwik li]. E galleg (CARTON, 1974 : 104) e vez hirroc'h ar vogalenn dindan an TM : *papá* (etre 5 ha 10 cs). Depantoud a ra pad ur vogalenn a hirder ar ger a zo da sanañ : berroc'h **-a-** hag **-u-** er ger *Nabuchodonosor* eged er ger *abuser*.

---

<sup>194</sup> « L'opposition [des voyelles longues/brèves] ne fonctionne que sous l'accent, puisque toutes les voyelles inaccentuées sont brèves. » A. SINOÛ, 1999.

Herwez DELATTRE e vez berraet ar vogalenn dre ragsoñjal er striv a vo d'ober da heul.

### 2.3.1.2. Ur c'hempouez er silabenn

Gant ar yezhouriezh e ouier e kouezh an tres a hirder war ar silabenn daol-mouezhiet. Neuze e vez hir ataw ar silabenn dindan an TM, ha pa ne vez ket hir ar vogalenn e vez hir ar gensonenn a za war he lerc'h. Da lâred eo, dindan an TM e kenglot an hirderioù herwez daou vod : bogalenn hir / kensonenn verr petramant bogalenn verr / kensonenn hir.

Hir ar silabenn daol-mouezhiet enta, hag ur c'hempouez a vez enni etre ar vogalenn hag ar gensonenn : mar gell ar vogalenn boud hir pe verr e c'hell ar gensonenn boud hir pe verr iwe. Er silabenn daol-mouezhiet e vez renet hirder ar vogalenn gant ar pezh a za d'he heul : kensonenn ebed ( $\emptyset$ ), kensonenn verr (Kv), kensonenn hir (Kh) pe meur a gensonenn (KK), herwez an daolenn-mañ :

- Bogalenn hir \_\_\_\_\_ + kensonenn ebed (Bh +  $\emptyset$ )
- Bogalenn hir \_\_\_\_\_ + kensonenn verr (Bh + Kv)
- Bogalenn verr + \_\_\_\_\_ kensonenn hir (Bv + Kh)
- Bogalenn verr + \_\_\_\_\_ meur a gensonenn (Bv + KK)

Evel-se, gant an ( : ) anavezet, e c'heller notiñ hirder ar vogalenn (ds. [i:]), pe heni ar gensonenn (ds. [n:]):

- Bh +  $\emptyset$  : **ki** ['ki:], **fru** ['fry:].
- Bh + Kv : **kan** ['kã:n], **logodenn** [lo'go:den], **tad** [ta:t].
- Bv + Kh : **kann** ['kãn:], **tapoud** ['tap:ut], **tenn** ['ten:].
- Bv + str.K : **mestr** ['mest<sup>t</sup>], ['mest], **trist** ['trist] ['trift].

### 2.3.1.3. Heklew ar c'houiañs-se er geriadurioù

N'eus ket ken pell-se e vez kavet notadurioù fonetikel er geriadurioù brezhoneg<sup>195</sup>. Er re henn implij nawazh (ds. Hor Yezh, 1996, FAVEREAU *Geriadurig*, 2005) ne vez ket roet hirder ar gensonenn er silabenn daol-mouezhiet. N'eus namaed e heni An Here (1995) e vez gwelet ar merk-se.

Mard eo reizh, ez-gouiañsel, notiñ hirder ar gensonenn, ema trawalc'h d'an den, ez-pleustreg, anavoud hirder ar vogalenn ewid sanañ ur ger ha respetiñ lezenn an hirder, abalamour d'ar c'hempouez e diabarzh ar silabenn. Hag ataw e vez tu da anavoud hirder ar vogalenn : hir e vez gant an (:) d'he heul, ha berr heb ar merk-se. Ez-naturel neuze e ta hirder ar gensonenn da heul herwez an daolenn uhelloc'h : **B verr- K hir / B hir – K verr**. Setu perag ne veze ket sinalet hirder ar gensonenn daol-mouezhiet er yezhadurioù kent fin ar c'hantvlead tremenet.

A-hend-arall, er gerioù unsilabenneg é achu gant ur vogalenn digor (dle. netra war o lerc'h er silabenn) e vez merket an hirder gant FAV, AH, HY : ['le:] ewid **le**, ['kri:] ewid **kri**, [tra:] ewid **tra**.

## 2.3.2. TRO AR YEZHADURIOÙ

### 2.3.2.1. An TM : lec'h an enebadur hirder/berrder

D'ar silabenn eo e ro an TM enta un tres a hirder<sup>196</sup>, ha kempouezet e vez an hirder enni etre ar vogalenn hag ar gensonenn. Ar pezh a sinifi ne vez ket hir ataw ar vogalenn, daoust dezhi boud taol-mouezhiet. Mez an enebadur hirder/berrder ne c'hoari namaed dindan an TM. Amañ ne gomzimp ket a

---

<sup>195</sup> Skrivet e oa bet sanadur ar gerioù gant an API e geriadur FAVEREAU (1992, notet meur a sanadur testeniektaet er rannyezhoù) ha da heul e geriadur HOR YEZH (1994) ha heni AN HERE (1995, ur vodell hebkén roet peurliesañ en daou-se).

<sup>196</sup> Un ali dishañval a glewer gant ROLLAND (1994, T1 : 322-324) pa lâre e vez hir pe berr ar vogalenn en despet ag an TM e brezhoneg kornad Pondivi. Mez disterraad a ra e veneg pelloc'h, rag ewitañ, pa vez bogalennoù dishañval o hirder er memez ger, e vez douget an TM de gouezhañ war ar vogalenn hir.

hirder ar gensonenn, mez ha heni ar vogalenn hebkén, a vez merzet muioc'h (sd. § 2.3., p. 170-171).

### 2.3.2.2. Hirder/berrder : un tres a-bouez e brezhoneg

#### 2.3.2.2.1. Un tres bernuz :

N'eo ket mui aparchantuz tres an hirder e galleg, rag ne gaver ket mui reoù enebaduz e-lec'h ma vehe an tres-se karget a ster. E brezhoneg, e-kontrel, e vern kalz an hirder dre ma c'heller kavoud meur a re enebaduz. Kavoud a ran talvouduz menegañ amañ Per DENEZ a gomz ag ur *reolenn diazez* :

« Ur reolenn diazez a zo e brezhoneg, o koublañ vogalenn ha kensonenn en ur framm strizh evit pezh a sell ouzh an hirder, ur reolenn a zo anezhi, hervez Kenneth Jackson, abaoe ar Vvet kantved : ar reolenn a lavar e kaver atav, dindan an taol-mouezh, ur vogalenn verr dirak ur gensonenn divouezh, hag ur vogalenn hir dirak ur gensonenn vouezhiet. Da skouer : **pakañ** (gant **-a-** berr) / **bagad** (gant **-a-** hir) (...). Eus ar pouezusañ holl eo ar reolenn-se evit ar re a gelenn ar yezh, evit boazañ an deskarded da lakaat an hirder evel m'eo dleet.» (*Hag adarre... an doare-skrivañ*, p. 27).

Douzh an tu arall e ro TM ha hirder ur muzik difer d'ar brezhoneg. Setu perag e arbouez Hor Yezh (1996 : 214) : « *La différence entre voyelles longues et voyelles brèves, dans les syllabes accentuées, doit être soigneusement marquée.*»

#### 2.3.2.2.2. Reoù minimal :

E brezhoneg eh eus tu da enebañ meur a re, liez gant gerioù unsilabenneg evel **kiz/kis** ; **klod/klot** ; **loj/loch** ; **lod/lot** ; **mad/mat** ; **pad/pat** ; **ran/rann** ; **ruz/rus** ; **son/sonn**, **strob/strop**. Heb kontiñ reoù daet newez so dre enkorfadur gerioù galleg : **kol**<sup>197</sup> [ko:l] /**koll** [kɔl], **bag** [ba:k] /**bac** /[bak] (= **bachelouriezh**)...

E gerioù liessilabenneg e c'heller iwe kavoud reoù enebaduz :

---

<sup>197</sup> E Langedig e implijer **kol** *colle* e-lec'h **peg**.

**labous/lapous ; maget/maket ; raned/ranned ; ranig/rannig ; tazoù/tasoù ; lagad/lakad**<sup>198</sup> ...

#### 2.3.2.2.3. Steuziadur ar silabennoù didaol-mouezh :

E *Yezhadur ar brezhoneg a-vremañ* (FAVEREAU, 1997) ne gaver pennad ebed goustlet d'an taol-mouezh, namaed menegoù e lec'h-mañ-lec'h<sup>199</sup>. Mez roet e vez da weled c'hoari an TM gant ar skrabigoù helaezh a vez implijet er skwerioù : « goût 'walc'h 'rez (298) < **gouzoud a-walc'h a rez** » ; « 'oamp 'tont 'maez deus un hent strizh (318) < **e oamp o tont er-maez deuz un hent strizh** » ; « debr' a ra Iwan n'añ (326) < **debriñ a ra Iwan anezhañ** ». Ar pezh a ziskouez levezon an TM war ar yezh, e parlantoù zo, a c'hell lakaad diaez ar c'hompren pa ya beteg maskañ ar silabennoù didaolmouezh (Sd. § 2.2.1.2., p. 125).

#### 2.3.2.3. Berrder ar vogalenn

##### 2.3.2.3.1. Dirag ur vogalenn arall pe kensonennoù zo :

Herwez KERVELLA, daoust d'un darn vraz ag ar bogalennoù taol-mouezhiet boud hir, e c'hell un darn arall boud berr nawazh. Peurliesañ e vez berr ar vogalenn daol-mouezhiet :

- dirag ur vogalenn arall : **aotre** ['aotre], **kleiz** ['klei(s)], **moal** ['mwa:l].

- dirag kensonennoù evel **f, s, ch, gn, y**, ha **k, p, t** : **stouf** (pe **stouv** AH : neuze hir ar vogalenn : ['stu:f]), **kas, chas, tach, mogn, nay, stok, krap, trot**.

- dirag an **m**. Notiñ a ra KERVELLA ne zegas ket netra ouzhpenn an **mm** er skritur « o vezañ ma ne gaver nemet vogalennoù berr dirak **m** » (p. 36).

##### 2.3.2.3.2. Dirag ur strollad kensonennoù :

Berr e vez iwe ar vogalenn pa za d'he heul ur strollad kensonennoù (HEMON, *Grammaire bretonne*), eveljust dirag kensonennoù doubl : **ll, nn, ss** : **fall, kann, dason** (ewid **mm** ha **rr**, selloud izelloc'h).

<sup>198</sup> **Lakad = lakaad**. Ur furm rannyezhele eo **lakad**. Mez n'heller ket ober gant **lakaad** amañ, rag taol-mouezhiet eo hennañ war ar silabenn ziwezhañ : [la'ka:t].

<sup>199</sup> En Indeks ne gaver namaed « *accent de l'article indéfini* » (33).

Rekiz eo resisaad ar poent diwezhañ-mañ, rag ne c'hoari ket ur sort ar c'hensonennoù a-stroll war berrder ar vogalenn a zo en o raog. Da gentañ e ranker lakaad a-gostez un nebeud grafemoù :

- evel **-ch**, a verk ar fonem simpl [ʃ] (**tach** [taʃ:]);
- evel **-ñ**, nad eo ket ur fonem mez ur sin diakritik a verk friadur ar vogalenn a zo e-raog. Er strolladoù a-sort gant **-ñch**, **-ñs**, pe **-ñv** n'eus namaed ur gensonenn e gwirionez : ar **-ch** /ʃ/ (**mañch** [mãʃ:]), an **-s** /s/ (**chañs** [ʃãs:]), pe ar **-v**, a ya liez da vogalenn er lec'h-se : **eñv** [ɛ<sup>o</sup>], **kañv** [kã<sup>u</sup>].
- evel **-gn**, a verk ar fonem [ɲ] pe [ŋ] (sd. § ).
- evel ar **-zh** (a-hunan), herwez e zaou sanadur KLT pe W.

Setu amañ skwerioù a gement-se : **-fl** (**nifl** [nif<sup>l</sup>]), **-fr** (**koufr** [kuf<sup>r</sup>]), **-kl** (**rikl** [rik<sup>l</sup>]), **-kr** (**sukr** [ˈsykr]; **-lch** (**gwelch** [gʷɛlʃ]), **-lc'h** (**dalc'h** [dalx]), **-lf** (**kelf** [kɛlf]), **-lm** (**oulm** [ulm]), **-lt** (**kelt** [kɛlt]), **-ltr** (**skiltr** [skilt<sup>r</sup>]), **-lv** (**galv** [galv]), **palv** [palv]), **-mp** (**kamp** [kãmp], **pemp** [pem<sup>p</sup>]), **-mpr** (**kampr** [kãmp<sup>r</sup>]), **-mz** (**ramz** [rãms]), **-nk** (**strink** [strĩŋk]), **-nkl** (**kinkl** [kĩŋkl]), **-nkr** (**lenkr** [lenk<sup>r</sup>]), **-nt** (**kant** [kãnt]), **-ntr** (**kentr** [kent<sup>r</sup>], **sant** [sãnt]), **-pr** (**gopr** [gop<sup>r</sup>] mez [ˈgo:pr] HY), **-pt** (**bourrapted**<sup>200</sup> [buˈraptet]), **-rb** (**mourb** [murp], **verb** [vɛrp]), **-rch** (**furch** [fyrʃ], **parch** [parʃ]), **-rc'h** (**lerc'h** [lɛrx:]), **marc'h** [marx]), **-rd** (**lard** [lart]), **-rf** (**korf** [kɔrf]), **-rg** (**karg** [kark]), **-rgn** (**lorgnezh** [ˈlorɲes] [lorɲɛx]), **-rk** (**park** [park]), **-rl** (**jarl** [ʒarl], **sparl** [sparl]), **-rm** (**arm** [arm]), **-rn** (**barn** [barn], **forn** [fɔrn]), **-rp** (**harp** [harp]), **-rs** (**fars** [fars]), **-rt** (**tort** [tɔrt]), **-rz** (**harz** [hars]), **-rzh** (**barzh** [bars] [barx]), **-sk** (**fresk** [fresk], **klask** [klask]), **-skl** (**faskl** [faskl]), **-st** (**prest** [prest] [pref<sup>t</sup>]), **-stl** (**bestl** [best<sup>l</sup>]), **-str** (**lestr** [lɛstr]; **distruj** [ˈdistryʃ]), **-tl** (**titl** [tit<sup>l</sup>])...

<sup>200</sup> A-zivoud ar strollad-kensonennoù **-bl + ted**, e-lec'h skriv **-blded**, e vehe tu da simplaad e **-pted** evel ma ra ar gwenedeg : **bourrapted** (Sd. *Bourrapted en tiegeh*, JM. Heneu). Neuze **amiabl/amiapted**, **nobl/nopted**, **soupl/soupted**... (Sd. L2, § 3.4.5.2., p. 346).

#### 2.3.2.4. Hirder ar vogalenn

##### 2.3.2.4.1. Hirder ar vogalenn dirag kensonennoù zo :

Hir e vez ar vogalenn dirag ar gensonennoù **b, d, g, z, z(h)** (sanadur KLT), **j, v, l, n, r, w** (sanadur [ɥ]), ar pezh a vez remerket er gerioù un- pe liessilabenneg :

- **pāb, tād, bāg, nōz, stāj, sāv, kāz(h)** ; **glāw**.

- **lābour, pābig, tādīg, tādou, bāgou, māger, bugāle, nōziad, kāz(h)ig, skolājiad, sōvet,**

##### 2.3.2.4.2. Variadur an hirder :

N'eo ket an hirder un tres rik ha stabil. E rummad ar bogalennoù hir e c'hell KERVELLA diforc'h :

- bogalennoù hir-tre (...) : **a-wēl, briz(h), brūd, dū, ebēd, gōr, hēnozh, kār, kenññ, lōus, mīb, pēr, tī.**

- bogalennoù etre, pa za ur silabenn arall goude : **brūdet, gōret, kērent, lōuzañ, mībion, tīez, (...).**

Nawazh, ne verkin ket amañ an diforc'h-se, rag n'o ket ar yezh un dra *gaoulet*. Seblant a ra din, gant ma vez anavezet lec'h an TM er gerioù ha hir pe verr ar vogalenn enne, e ta ar yezh da gavoud he ritm en ur mod ez-naturel a-walc'h. Da lâred eo, pa vez merket hir-tre an **a** er ger **tad**, da skwer, e vez sanet berroc'h er ger **tadig**, mez santet e vez an hirder ataw memestra. Un diforc'h a vehe da zoujañ doutañ koulskoude er yezh artifisiel, ewid tostaad douzh he liw er gomz.

##### 2.3.2.4.3. Troioù amreizh :

Pa dremener ag ur ger unsilabenneg hir ar vogalenn ennañ d'ur ger diveret diwsilabenneg e-lec'h ma chom an TM war ar memez silabenn, e c'hell an tres hir moned da verr.

- Gant r/rr : N'eo ket anad ar sanadur gant **r**. Da skwer ne vez ket kavet diforc'h ebed etre **kar** ha **karr** ([ˈka:r] o daou) ; etre **tor** [ˈto:r] ha **torr** [ˈtɔ:r] pe etre **kor** [ˈko:r] ha **korr** [ˈkɔ:r] n'eus namaed un diforc'h a zigordet ar



vogalenn, narenn un tres a hirder. Sinaliñ a ra KERVELLA ewezhiadennoù d'ober dirag **rr**, e-lec'h ma vez hir peurliesañ ar vogalenn er gerioù unsilabenneg (evel dirag **r** enta) : **berr, torr, karr**, pa za da voud berr er gerioù diveret liessilabenneg : **berrig, torret, kirri**.

- Gant un dibenn o krogñ gant ur gensonenn : Kemm a ra iwe ment ar bogalennoù pa vez staget douzh ar ger un dibenn é krogñ gant ur gensonenn : **blōd > blōted** (< **blod + ted**).

- Gant an dibennoù kaletauz : Ar memez fenomen a c'hoarvez pa ne vez ket hewel ar gensonenn, evel en dibennoù **-oc'h, -añ** hag **-ad** (dereziou uhelloc'h, uhel hag estlammañ an anw-gwan hag an anw-verb) hag **-a** (dibenn verboù) hag a grog e gwirionez gant **h** (...), hag a zo, a-gaoz da gement-se, dibennoù kaletauz (sd. § 2.4.3., p. 222) : **glāz, glāsañ, glāsoc'h** ; **sēc'h, sēc'hañ, ar sēc'hañ** ; **peskēduz, peskēta** ; **nōbl, nōploc'h**.
- Ewid KERVELLA, goude **l, n** ha **r** nawazh ne zegouezh ket an darvoud-se ha chomel a ra hir ar vogalenn (ha blod ar gensonenn) : **“blin, blinoc'h** [ˈbliːnoc] ; **dour, दौरa** [du:ra]. War ar poent-se nawazh ne asant ket ar Skolveureg nag an Etrerannyezhel a zoubl **l, n** pe **r** dirag an dibennoù kaletauz : **dourra, brasaad/brassaad, bihannañ, uhelloh/uhelloc'h...**

### 2.3.3. AN HIRDER E GWENEDEG

Merket e vez an hirder e gwenedeg iwe. Daoust d'an diforc'h a vez remerket e W e-keñver ar KLT a-fed taol-mouezh e vez kavet iwe un tres a hirder er rannyezh-se.

#### 2.3.3.1. Er gerioù unsilabenneg

Er gerioù unsilabenneg e vez hir ar vogalenn peurliesañ iwe : **braz** [ˈbra :s], **c'hwen** (à la renverse) [ˈhʉẽ :n], **krib** [ˈkri:p], **mud** [ˈmy:t], **plad** [ˈpla:t], **sod**

[ˈso:t], **tad** [ˈta:t]... mez berr e **bras** (*pâte à crêpes*) [ˈbras], **c’hwenn**<sup>201</sup> (*puces*) [ˈhʊɛn], **ka(z)h** [ˈkax], **lip** [ˈlip], **tap** [ˈtap]... ar pezh a glot gant ar reolenn.

### 2.3.3.2. Er gerioù liessilabenneg taol-mouezhiet evel e W

Er gerioù liessilabenneg, e-lec’h ma kouezh sañset an TM war ar silabenn ziwezhañ, e vez santet splann an hirder iwe, dreist-oll er W uhel a-gostez ar mor (Wum): **amanenn** [aməˈnɛn] (Sine), **amzer** [amˈzi:r] (Pluwigner), **azenn** [aˈzɛn:], **babiol** [baˈbjo:l], **barbot** [barˈbɔt], **boulouz** [buˈlu:s], **chapel** [ʃaˈpe:l], **distruj** [disˈtry:f], **gourzod** [gurˈzo:t], **kegel** [kəˈge:l], **kesten** [kəʃˈtɛ:n], **pitouch** [piˈtuʃ], **pourmen** [purˈmɛ:n], **restaj** (*restajou*) [resˈta:f], **tremen** [treˈmɛ:n]...

### 2.3.3.3. Er gerioù liessilabenneg taol-mouezhiet evel e KLT

An anw-gwan-verb an heni eo a vez taol-mouezhiet ingal war ar silabenn eil-ziwezhañ e W, zokén e Malgenag e-lec’h ma kouezh an TM ogozig ataw war ar silabenn ziwezhañ (LE PIPEC, 2008) : **dēbret** [ˈdɛ:bət], **digōret** [ˈdigo:rət], **māget** [ˈma:gət], **sāvet** [ˈsa:ʋət].

Mez a-hend-arall, da skwer e Pleurdud (BOCHÉ), e Langidig e vez kavet un nebeud gerioù arall taol-mouezhiet evel e KLT herwez ar memez reolennoù e-keñver hirder/berrder : **bara** [ˈba:ra], **bemnoz** [bemˈno:s], **bourrabl** [ˈburap], **bugale** [byˈga:le], **gortoz** [ˈgɔrtɔs], **kamot** (Langidig, = *fank*) [ˈkamɔt], **koublad** [ˈku:blat], **labour** [ˈla:bur], **perag** [ˈpeˈra:k], [ˈpre:k], **podad** [ˈpo:dat], **podou** [ˈpo:dɔw], **prosez** [ˈproses], **yec’hed** (sd. **yec’hed mat** [ˈjemat] e Langidig)...

---

<sup>201</sup> Setu perag e ranker skriv **c’hwenn** (> **c’hwennenn** *puce*) gant daou **n**, a zo dishañval a-zoc’h **c’hwenn** (*à la*) *renverse*.

## 2.3.4. MANKOÙ D'AR REOLENN

### 2.3.4.1. Mankoù er gerioù unsilabenneg

#### 2.3.4.1.1. Dirag ur gensonenn simpl :

E gerioù unsilabenneg zo e ranker sinaliñ traoù direzh. E kornad Langidig da skwer e kaver gerioù sanet “direizh“, gwezh e-keñver an hirder, gwezh e-keñver ar berrder :

- berrder “direizh” : **beg** [ˈbek], **deg** [ˈdek] (sanadurioù strewet a-vraz e Breizh), **bleud** [ˈblət] (Langidig), **gwan** [ˈgwan], **meud** [ˈmæt] pe [ˈmøt], **prez** [ˈpres], **reud** [ˈrət] pe [røt] (Plozeved, Langidig), **tud** [ˈtət] a-liez...

- hirder “direizh” : **chas** [ˈʃaːʃ], **lenn** [ˈlɛːn], **all** [ənˈɑːl] (e Pluwigner)...

E kornad Baod-Langidig e vez enebet [ˈlɛːn] *lire* douzh [ˈlen] *étang*, (sd. kmg *darllen to read*), mez n'eo ket rekiz gouarn daou c'hrafem (\***len** ha **lenn**), rag spirañ a ra ar stumm /ˈlen/ a vez komprenet aez a-walc'h (Sd. MH **lénn** # **dén**).

Daoust da akord FAV, AH, HY ewid roiñ ar sanadur [ˈmy:t] ewid **mud** ha [røːs] ewid **reuz** e c'heller klewed [ˈmyt] pe [røːs] e lec'hioù zo<sup>202</sup>. Sinalet e vez nawazh berrder ha hirder war un dro ewid gerioù zo : [ˈgut] kement ha [ˈgu:t] (FAV) ewid **gou(z)oud** ([ˈgu:(zu)t] AH, [ˈgu:zut] HY, FAV) ; [ˈguk] kement ha [ˈgu:k] (FAV) ewid **gou(z)oug** ([ˈgu:(zu)k] AH, [ˈgu:zuk] HY, FAV)... HY a gennig [ˈva:k] ewid **vak** (FAV [vak] & a-w. [-a :-] ; AH [ˈvak:]). Un heveleb dizemglew a gaver ewid **kraf** ([ˈkra:f] ewid HY ha [ˈkraf:] ewid AH, FAV) ; ewid **kof** ([ˈko:f] HY, FAV ha [ˈkof:] AH, FAV) ; ewid **prof** ([ˈpro:f] HY – sinal a ra FAV ur sanadur liester [provu]- ha [ˈprof:] AH, FAV ; ewid **stouf** ([ˈstu:f] HY ha [ˈstuf] AH, FAV. Mez akord an tri geriadur ewid berrder ar vogalenn e gerioù arall a-sort gant **kef** [ˈkef], **ouf** [ˈuf] pe **tuf/tufañ** [ˈtyf]/[ˈtyf:ã].

Gant ar rannyezhoù e c'heller en em gavoud gant daou stumm er yezh komzet ha skrivet, unan gant ur gensonenn-dibenn divouezh, hag egile gant unan vouezhiet. Gwezhave gant ar memez ster, da skwer ar stummoù **loch** [ˈlɔʃ] ha

<sup>202</sup> [røːs] ewid **reuz** e Plozeved (Gilles GOYAT).

**loj** [ˈloːʃ] *cabane, hutte* ; *niche*<sup>203</sup>. Gwezhave gant ur ster dishañval : KLT **pech** [ˈpeʃ] (FAV) ha W **pej** (MH **péj**) ([ˈpeː ʃ] *piège*. E KLT e vez enebet **pech** *piège* douzh **pechez** *pêches*, pa vez enebet gant an tres a hirder hebkén **pej** *piège* douzh **pech** *pêches* e W : [ˈpeʃ] # [ˈpeː ʃ].

#### 2.3.4.1.2. Dirag ur strollad-kensonennoù :

Ewid ar vogalennoù heuliet gant ur strollad-kensonennoù (sd. § 2.3.2.3.2. p.174 & § 2.3.4.3. p.182), da skwer gant **-ñs** ha gant ar strolladoù **-bl**, **-br**, **-dr**, **-gl**, **-gr**, **-rw**, **-vl**, **-vn**, **-vr**, **-zt** (a grog gant ur gensonenn vouezhiet) e sav gwezhave dizemglew etre ar geriadurioù, evel un heklew da valigañs ar yezh komzet :

**-ñs** : **dañs** : [dãs] (FAV, HY), mez [dã·s·] (AH) ; **dins** [ˈdĩs] HY, [dĩs] FAV, mez [ˈdĩ·s·] AH ; **foñs** [fõs] FAV, mez [ˈfõ·s·] AH ha [ˈfoːs] HY.

**-bl** : **jibl** ([ʒibl] FAV) ; **nobl** ([nɔbl] [nob] FAV, [ˈnop(l)] AH mez [ˈnoːpl] HY ; **ribl** ([ribl][riːp] FAV, [ˈrip(l)] AH mez [ˈriːpl] HY ; **sabl** [ˈsaːbˀ] FAV (ø e AH, HY) ; **soubl** [ˈsubl] ha [zuːp] FAV, [ˈsuːpl] HY.

**-br** : **dibr** [ˈdip(r)] AH, [ˈdibr] FAV, mez [ˈdiːpr] HY ; **libr** [libr], [lip] FAV, mez [ˈliːpr] HY ; **pebr** [pebr], [pep] FAV, [ˈpepˀ] AH, mez [ˈpeːpr] HY.

**-dr** : **sedr** [sɛdr] FAV ; nann meneget e HY ([sɛː tr] a vehe gortañ perchañs).

**-gl** : **magl** [makl] (FAV) ; nann meneget e HY e-lec'h ma vehe bet [maːkl] herwez lojik ar geriadur-se.

**-gr** : **hagr** [ˈhagr] (FAV) mez notet iwe [ˈhaːkr] (HY, FAV).

**-rv/-rw** : (**karv/karw**, **marv/marw**). Moned a ra ar **v** pe ar **w** da vogalenn ([ˈkaːro]), da hanter-vogalenn ([ˈkarw], [ˈkarʷ]) pe chomel a ra kensonenn [ˈkarf] (FAV). Berr e vez ar vogalenn enta pa vez kensonenn pe hanter-vogalenn ar **v/w**, ha hir pa vez bogalenn.

**-vl** : **nivl** [nivl] (FAV). Tu a vehe da sanañ un i hir amañ [ˈniːfl] (Sd. **eoul**, « **ivl** » e Langidig ha sanet [ˈiːf]).

<sup>203</sup> Tu zo da ouarn an daou stumm evel hañvalsterioù, mez tu a vehe iwe, en ur yezh unvan ha pinvidikaet, roiñ da **loch** ar sterioù meneget pa vehe gouestlet ar stumm **loj** da **loj an arzourez** (da skwer). Idem ewid **tok** ha **tog** : kennig a ra A. BOCHÉ ma vehe dalc'het **tok** ewid *chapeau* (ster ledan) pa vehe roet da d/**tog** ur ster skeudennet kentoc'h (**tog ar bern-plouz**).

**-vn** : er ger **evn**, da skwer, e kaver meur a sanadur : **v** kensonenn [evn], **v** hanter-vogalenn ([ew̃n], [əṽn]), pe **v** aet da netra ([ɛ̃:n], [i:n]) (FAV).

**-vr** : **gavr** [gavr], [ˈgavr], [ˈgo:r] FAV, [ˈgavr] HY, [ˈgaːr] AH.  
Diouzh e du e sinal TREPOS bogalennoù hir e leoneg dirag strolloù kensonennoù evel **st-** ha **str-** : **mestr**, **tost**, **treust**<sup>204</sup>... ar pezh a ziskouez luziadur an traoù.

### 2.3.4.2. Mankoù er gerioù liessilabenneg

#### 2.3.4.2.1. E gwenedeg :

E gwenedeg, e meur a c'her, pa gouezh an taol-mouezh war ar silabenn ziwezhañ, e steuz tres an hirder er vogalenn, a vez sanet berr ataw neuze : **brasaad** [braˈsat :], **bre(z)honeg** [brehoˈnek :], **bugad** [byˈgat :], **dañjeruz** [dãʒeˈrys :], **eskob** [esˈkɔp :], **frankaad** [frãˈkat :], **frankiz** [frãˈkis :], **golc'hed** [gɔlˈhet :], **Jozeb** [ʒoˈʒep :], **labourad** [labuˈrat :], **marmouz** [marˈmus :], **moereb** [moˈrep :], **mouched** [muˈʃet :], **naonteg** [nãˈtek :], **nedeleg** [nãdãˈlek :], **Pariz** [paˈris :], **touseg** [toˈsek :]... Direizh iwe sanadur ar ger **mantell** [mãˈte:l], sanet evel **chapel** [ʃaˈpe:l], en desped d'an **ll**, a c'houlennehe un **e** berr ; ha direizh sanadur ar ger **kafe**, taol-mouezhiet war ar silabenn gentañ [ˈka:fe], mez gant un **a** hir dirag **f**, e-lec'h ma vehe gortañ unan berr kentoc'h (Langidig + Wi). **Falc'h** (standard [ˈfalx] AH, HY, FAV) a vez sanet [ˈfa:l] e Langidig, goude steuziadur ar [x] (FAV [fal<sup>h</sup>], (enebet douzh **falz** [ˈfals] ).

#### 2.3.4.2.2. Er yezh standard :

Dirag ur strollad-kensonennoù a grog gant ur gensonenn vouezhiet e arver iwe ar reolenn, herwez ar geriadurioù : **-zy** (**lez** [ˈle:s] > **lezvab** [ˈlezvap], **levamm** [ˈlevãm]) pe **-zvr** (**lez** [ˈle:s] > **levreur** [ˈlevrøʀ] FAV, AH, [ˈlevrœr] HY) ; **sedrez** [ˈsɛdrəs] FAV ; **-zwr** : **lez** + **gwreg** > **lezwreg** [ˈlezwrek] FAV, AH.

Mez ne vezont ket akord ataw dirag strolladoù-kensonennoù evel :

<sup>204</sup> Pierre TREPOS, *Grammaire bretonne*, 3<sup>o</sup> emb. Emgleo-Breiz/Brud Nevez, 1994.

-**bl** : **poblañs** [ˈpoblãs] FAV, [ˈpoblãs] AH, mez [ˈpo:blãs] HY ; **poblel** [ˈpoblɛl] FAV, [ˈpoblel] AH, mez [ˈpo:blɛl] HY ; **soublañs** [ˈsublãs] FAV, (ger nann-meneget gant AH ha HY mez sd. **soubl** [ˈsu:pl] HY).

-**dr** : **didro** [ˈdidro] AH, FAV, mez [ˈdi:dro] HY ; **didrouz (didrous)** [ˈdidrus] FAV, AH, mez [ˈdi:drus] HY.

-**gr** : **fallagr** [faˈlɑkr] FAV, AH, mez iwe [faˈla:kr] (FAV, HY) ; **digresk**[ˈdigresk] FAV, AH, mez [ˈdi:gresk] HY.

-**br** : **sabrenn** [ˈsabɾɛn] FAV, AH, (+ [ˈsabɾɛn] FAV), (HY ø), **a** berr er ger-se evel e **saprenn** enta (ewid **sapr** [ˈsap:] AH<sup>205</sup>).

Er yezh a-vremañ, daoust ma vez lâret **Bro-C’hall** (**a** berr) gant ar memez tud, e vez klewet liesoc’h-liez un **a** hir er ger **galleg** gante (“ ar ’ga :lek”).

### 2.3.4.3. Remerkoù a-zivoud ar strolladoù-kensonennoù

Da ziwall zo ewid un nebeud gerioù e-lec’h ma en em gav ar vogalenn dirag ur strollad kensonennoù.

-**zt** : moned a ra **zt** da [st] er gomz dre heñvellaad, ha kement-se notet er skrid peurvuañ : **glaz** (*Puv glas*) [ˈbra:s], **glazig** > skrivet **glaster** herwez ar sanadur [ˈbrastɛr] FAV, AH, HY ha **glaster** pe **glazder** gant STS ; **kriz** > **krizder**<sup>206</sup>/**krister**, STS ha **krizder** [krijdɛr] [krizder] [krister] FAV, [ˈkri(z)dɛr] FAV, AH.

- **gopr** : ur gudenn-skritur zo er ger **gopr**, a rankehe boud skrivet **gobr**, herwez FAV<sup>207</sup>, ar pezh a glot gant ar sanadur “direizh“ meneget gant HY [ˈgo:pr]. Daou verb a vehe neuze, diveret : \***gobrañ** pe **gopraad** (un dibenn kaletauz eo **-aad**, sd. § 2.4.3. p. 222) : \***gobret on bet / gopraet on bet**. Padal e veneg AH [ˈgɔp(r)] hag ar verb **goprañ** hebkén.

- **sakr** : ouzhpenn-se nawazh e kennig HY traoù direizh : **sakr** [ˈsa:kr]

<sup>205</sup> Etre AH ha FAV e vehe rekiz dirouestliñ ster ar gerioù **sapr/sap/sabr** : pa vez akord an daou c’heriadur ewid lakaad **sapr** [ˈsap(r)] *sapins*, e kavomp **sap** [ˈsap] ewid *sève* gant AH ha **sabr** [sa:br] e FAV. E geriadur GUI e kavomp **sap du sapin** ha **sapreg sapinière**. Kennig a ra A. BOCHÉ **sap** ewid *sapins* (**ur sapenn**), ger daet dre ar galleg kozh *sap* ag ur glg \**sappos* (DESHAYES, 2003) ha waet d’ober gant ar ger latin *pinus* ar ger galleg *sapin* (PICOCHÉ, 1992) anavezet iwe e gwenedeg ((**gwez-**)**sapin, ur sapinenn**). Neuze e vehe : **sap** [ˈsap] str. - **enn sapins, sabr** [ˈsa:pʰ] *sève*.

<sup>206</sup> Pa ne vez ket sanet ar **z** (z leoneg amañ) e vez hir an **i** : [kri:der]. Ur sanadur leoneg eo a verk ar furm **krister**.

<sup>207</sup> **Gopr** (*gobr* 1499), vx-br. *uobr*, kern. *gober*, kmg *gwobr* (DESHAYES, 2003).

e-lec'h ma merk AH ['sak<sup>t</sup>] ha FAV [sakt]<sup>r</sup>+ [sa:g<sup>t</sup>].

#### 2.3.4.4. Klozadur

Kavet e vez mesket enta sanadurioù a heulia ar reolenn gant lod arall n'o heuliont ket. A rannyezh da rannyezh e c'heller ober ar memez kenstad : na boud e kaver un dougañs ewid ar reolenn dermenet e remerker sanadurioù liessort, a nac'h ar reolenn. Ne vir ket an dra-se a gelenn ar reolenn e yezh ar skol, rag zokén e lec'hioù ma vez kavet un nebeud direizheterioù e kaver dreist-oll reoliegtes. Da skwer :

- er Vro Bourlet : berr ar vogalenn e **beg, reud** ha **tud**, mez hir e **bag, blod, den, mab, mad, plad, pleg, sod** ['zo:t], **stag**... (herwez A. BOCHÉ).
- er Porze : berr ar vogalenn e **beg, pleg, tud**, da skwer, mez hir e **bag, blod, (bar' blod), mab, mad, mud, sod** ("un den zod"), **peg, reud, tad**... (herwez A. NOAC'H).

Ar pezh a zo heverk : ne vez graet diforc'h ebed er yezh etre anw-gwan hag anw-kadarn e-keñver an hirder ! Kent en em soñjal diwar-benn kudenn ar c'helell, petra eo stad an traoù war dachenn ar skol hiziv ? Penaoz e vez dalc'het kont ag ar reolenn-se er skolioù diwyezheg ? Ha tu zo da gomz a reolenn zokén ?

#### 2.3.5. AN ENKLASK ER SKOLIOÙ

##### 2.3.5.1. Modalderioù an enklask

War-un-dro gant an enklask war dachenn ar liammadurioù, em eus savet diw fichenn difer, o fal roiñ un alberzh a sevenidigezh ar Reolennoù I ha II (R1, R2), diwar-benn an taol-mouezh ha diwar-benn hirder ar vogalenn dindan an TM (fichenn **F1** ewid gerioù unsilabenneg hag **F2** ewid gerioù liessilabenneg). Setu danvez ar fichenoù-se (daoust ma oa bet roet danvez F2 uhelloc'h dija) :

F1 / rummad 1 : 1) **kloz**, 2) **klos**, 3) **an noz**, 4) **ur bos**, 5) **ar bobl**, 6) **prop**, 7) **ar grip**, 8) **ho krib**, 9) **tal**, 10) **dall**.

F1 / rummad 2 : 1) **lod**, 2) **ur rod**, 3) **an trot**, 4) **Spot**, 5) **ar staj**, 6) **un tach**, 7) **ur pej**, 8) **un tech**, 9) **kan**, 10) **kann**.

F2 / rummad 1 : 1) **teir logodenn** / 2) **daou labourer** / 3) **d'ar sadorn** / 4) **ar paper** / 5) **ar blijadur** / 6) **digor** / 7) **ar vugale** / 8) **ar bara** / 9) **ar bagadoù** / 10) **ar madigoù**.

F2 / rummad 2 : 1) **ur vanifestadeg** / 2) **brasaat** / 3) **kalonekaat** / 4) **ar galleg** / 5) **ul labourerez** / 6) **tapout** / 7) **ur bagad** / 8) **ma santimant** / 9) **ar brezhoneg** / 10) **Annaig**.

E gerioù unsilabenneg ar fichenn **F1** em eus klasket gouied : a) hag-eñv e veze sevenet hirder ar vogalenn ; b) ma c'hoarie ar skolidi gant an enebadur hir/berr c'hoazh, a verk un diforc'h-ster er c'houbladoù **kloz/klos**, **ar grip/ar grip**, **pej/pech**, **kan/kann**, **bos/pez...** ; ha c) mar beze neutralizet an enebadur mouezhiet/divouezhiet en dibennoù absolut (Sd. § 2.4.1., p. 207).

Adal ar CM2 em eus kaset an enklask. Kent enrolliñ ar skolidi kement hag ar vrazarded em boa kenniget dezhe lenn ar fichenoù a vouezh izel da gentañ, ha goude c'hoazh goulenn ganin sinifiañs ger-mañ-ger dianav. Daoust d'un nebeud atersoù savet er skolioù em eus remerket e chome ar skolidi heb gouied resiz sinifiañs an oll c'herioù. Meur a wezh e c'houlenn gant ar re a zisklaeriae kompren peb tra, hag-eñv e anavent ster gerioù zo (e gwirionez ar gerioù an nebeutañ anavezet gant ar skolidi arall a grede goulenn ganin) : ds. an diforc'h etre **kloz** ha **klos**, dispiz ewid kalz, pe sinifiañs **bos**, **krib**, **tach**, **pej**, **tech**, **kann**. Lîez-mat ne veze ket anavezet resiz ster ar gerioù-se gante. Kennig a raen dezhe goulenn ewid gerioù arall, kenkaz e vehe chomet anezhe, mez peurliesañ ne yae ket an traoù pelloc'h gante (rag dibaot braz ar re a ziskoueze kuriusted en afer) ha neuze e veze enrollet o lenn.

Soñjet em boa e vehe bet aesoc'h lenn “reizh“ ar gerioù pa vehe anavezet-mat o sinifiañs. Diouzh an tu arall, na boud en em gav ur lenner bennag dirag ur ger dianav e c'hell, pe e rankehe gelloud, “diskodiñ“ ar pezh a zo skrivet, mar anav




ar reolenn, mar goui penaoz eh a ar yezh war-raog (LUCCI, 1996 : 113-126)<sup>208</sup>. Er gerioù unsilabenneg e vez splann an traoù kement hag er gerioù liessilabenneg, peurliesañ. War an tach em eus remerket un dizingalded vraz etre ar skolidi, pa ne vez ket etre ar skolioù pe oad ar sujedoù. Ar pezh a zo bet kadarnaet gant ar statistikoù (Sd. L2, § 4.3., p.384 ha § 4.4., p. 416).

Staget em eus amañ ar reolennoù R1 (taol-mouezh) hag R2 (hirder) abalamour d'o liamm stard er gomz : ne dalv lezenn an hirder namaed dindan an TM. Mar kouezh an TM war vogalenn namaeti ar gerioù unsilabenneg choazet en enklask, e ranker gouied pesort silabenn zo bet taol-mouezhiet gant ar sujed er gerioù liessilabenneg.

### 2.3.5.2. Rezultadoù ar c'hlaskerezh

#### 2.3.5.2.1. Gerioù unsilabenneg (Fichenn F1) :




**Grafik 3 . Fichenn F1: Skolidi (ag ar CM2 d'ar Lise).  
Lod an hirder sevenet kentoc'h reizh er gerioù unsilabenneg.**

<sup>208</sup> « La compétence phonographique du lecteur lui permet d'oraliser un terme qu'il n'a jamais lu, dont il ne connaît pas le sens, qu'il n'a peut-être jamais entendu (ex. : *nymasse*, *meaucidanne*) » in *Orthographe et prononciation*, Coll. sous la direction de JP. CHEVROT, Lidil, P.U. de Grenoble, p. 114.

Da gentañ e tiskouez ar grafik-mañ ur sevenidigezh ogozig unvan ag an hirder, a glot kentoc’h gant patrom ar brezhoneg (71%). Estonuz ar rezultat-se, a lakahe da soñjal e oui pe e sant ar skolidi petra eo an tres a hirder er gerioù brezhoneg unsilabenneg. Tu zo da soñjal e c’hell ar mod da brezañtiñ ar gerioù boud kaoz iwe ag emzalc’h-sanañ an atersidi : lakaet em boa gerioù daou ha daou, enebet dre ar skritur gant un tres a hirder (**kloz ≠ klos ; ar grip ≠ ho krib ; tal ≠ dall...**). Dre ma oa bet skrivet ar c’houbladoù-gerioù a-heul, ha dre ma laosken amzer da beb atersad da raglenn ar fichennoù, en deze peb unan an tu da gompren e oa aze un dra da ziwall, na boud e tisklaerie lod ne anavezent ket mui ar reolenn, mez gouied a raent e oa aze unan é c’hoari (**P2PvLuF1**). Ewid lod nawazh n’eus diforc’h ebed etre **kan** ha **kann**, da skwer **D3KeRoF1**. N’eo ket sur neuze e vehe mestroniet an enebadur-se mar ne vehe ket bet prezantet ar fichenn **F1** er mod-se.

#### 2.3.5.2.2. Gerioù liessilabenneg (Fichenn F2) :



**Grafik 4. Fichenn F2 : Skolidi (ag ar CM2 d’ar Lise).**


**Lod an hirder sevenet kentoc’h reizh er gerioù liessilabenneg.**

Ar pezh a lâren uhelloc’h a seblant boud gwir amañ, pa vez anw a lenn gerioù liessilabenneg. Ne vez ket mui sevenet an tres a hirder herwez patrom ar

brezhoneg (23% hebkén er gerioù liessilabenneg). Tu zo da lâred n’eus ket mui a dres an hirder er gerioù liessilabenneg e brezhoneg ar skolidi a-vremañ, namaed damorantoù anezhañ.

### 2.3.5.2.3. Keñveriañ Soubidigezh ha Parded :

Gerioù unsilabenneg : Klasket em eus gweled hag-eñv eh eus un diforc’h etre an daou sistem diwyezheg gant ar gerioù unsilabenneg. Ewid-se em eus keñveriet o rezultadoù dre gontiñ daou live e fin ar red-skol : 3ved ha Lise.




**Grafik 5. Fichenn F1 : Skolidi (3ved ha Lise).  
Keñveriañ Soubidigezh ha Parded a-fed hirder.**

Ne ziskouez ket ar **Grafik 5** kalz a ziforc’h etre an daou vod da gas an diwyezhegezh war-raog : hañvalidigezh a noter kentoc’h dre vraz. Diskoueziñ a ra an oll skolidi anavoud ar mod da sanañ, dre vemoer-gomz pe dre ziskodañ ar skrid (**kloz** vs **klos** ; **rod** vs **trot** ; **staj** vs **tach**...).


Implijet em eus an dro-lavar “kentoc’h reizh” a-gaoz ma vez tanaw a-lïez an diforc’h etre hirder ha berrder e komz an atersidi. Da lâred eo n’eus graet aze, en analiz ag an enrolladennoù, namaed notiñ ma santoud. Kredabl e vehe tu da bizmigañ. Arabad selled douzh ar resultat evel douzh un dra absolut enta, mez kentoc’h un dougañs.

Gerioù liessilabenneg :



**Grafik 6. Fichenn F2 : Skolidi (ag ar CM2 d'ar Lise).**  
**An hirder er gerioù liessilabenneg : Soubidigezh ha ParDED.**

Daoust d'ar patrom brezhoneg boud nebeud heuliet e peb sistem, e seblant d'ar soubidigezh talañ gwell douzh diverkadur an hirder : ur 43% bennag er skolioù Diwan douzh ur 36% bennag er skolioù dre barded.




**Grafik 7. Fichenn F2 : Skolidi (ag ar CM2 d'ar Lise).**  
**Hirder : keñveriañ Soubidigezh (Diwan) ha ParDED.**

Gant ar c'hrafik a-uz e gweler stad disañval sevenidigezh an hirder e peb sistem-keleñn. Rag mar kaver 40% a vogalennoù taol-mouezhiet kentoc'h reizh an hirder enne er skolioù Diwan, ne gaver ket namaed 15% er skolioù dre barded. Boud eh eus aze unan a dresoù heverk ar brezhoneg en arvar a voned da ged, mar ne bled ket muioc'h ar skol war ar gudenn-se. Levezon ar galleg zo dindan ar c'hemm-se, é voud ma ne vez ket mui gant ar skolidi, na liez muioc'h gant ar skoliataerion, ur patrom brezhoneg a-sort gant an heni a vez tu da dapoud gant ar yezh-vamm (a vez ar galleg hiziv-an-deiz ewid an darn vuiañ).

#### 2.3.5.2.4. Keñveriañ krommenn an TM ha krommenn an hirder :

Er **Grafik 8**, tennet a roennoù stag douzh ar fichenn F2, em eus keñveriet an TM hag an Hirder. Feur sevenadennoù an TM standard (krommenn ar lein) ha feur sevenadennoù hirder ar vogalenn dindan an TM (krommenn an diaz).

Er lejant e verk ar lizherennoù ar sistemoù (**D** = Diwan, **K** = skolioù prevez katolik, **P** = skolioù publik) hag ar chifroù ar live-skol (**2** = CM2, **4** = 3ved, **5** = Lise).



**Grafik 8. Fichenn F2 : Skolidi (ag ar CM2 d'ar Lise).**

**Keñver etre TM ha hirder ar vogalenn.**

Diskoueziñ a ra ar **Grafik 8** eh eus ur liamm stard etre an TM hag an Hirder : a-stur e vez an diw grommenn adal ar CM2 d’ar Lise. Gwelet e vez iwe en deus seveniñ an TM ur feur tro-vad\* kreñvikoc’h ataw eged an Hirder. Dre m’ema uhelloc’h krommenn an TM e c’heller soñjal e tenn an TM an Hirder d’e heul : pa vez lec’hiet-mat an TM e vehe anavezet gwell pad ar vogalenn.

Gant ar **Grafik 8** e weler iwe an diforc’h etre ar skolioù, diforc’h a c’hell boud brazig a-walc’h. Digant ar c’hrommennoù-se e chom diaez lâred eh a an traoù war wellaad gant ar live-skol. Direol e seblant an traoù boud war an dachenn. Ewid ar live 2 (CM2) ha 4 (3ved) e seblant d’ar soubidigezh (Diwan) doned da benn gwell eged sistem ar barded, da arveriñ douzh ar reolenn R1 hag R2, gant un diskart braz en 3ved. Er lise e vez gwelet un diforc’h braz-braz etre ar sistemoù : mez arabad tennañ klozadurioù re brim ! D’ar live-se n’he deus ma enklask aterset namaed 5 lisead ewid Diwan, 4 ewid ar liseoù katolik ha 9 ewid ar liseoù publik. Padal e c’heller soñjal e c’hell an traoù boud liammet gant soursi ar gelennerion da bouezañ war ar sanadur pe ged, hag iwe gant ar patrom a lakaont da dalvezoud en o c’hlasoù.

<b>TM standard</b> war ar silabenn eil-ziwezhañ	CM2	3ved	Lise
Diwan	29%	75%	60%
Katolik	26%	24%	79%
Publik	21%	17%	30%

**Taolenn 6. Dasparzh an TM standard  
hervez ar live ha hervez ar gwenodoù.**

### 2.3.5.3. Klozadur

Ewid klozañ e c'hellomp lâred daou dra :

- 1) kollet eo bet dre vraz an enebadur etre bogalennoù hir ha bogalennoù berr, dreist-oll e sistem ar barded. Dister eo an damorantoù a chom anezhañ er skolioù-Stad hag er skolioù publik (15%). Gwellikoc'h e tal Diwan douzh ar c'holl-se (38%).
- 2) ur liamm heverk a seblant boud etre an TM ha hirder ar vogalenn dindan an TM. Da gentañ, pa vez lakaet an TM war ar silabenn eil-ziwezhañ e seblant d'ar skolidi roiñ d'ar vogalenn he hirder reizh. E-kontrol, pa ne vez ket pouezet war ar silabenn eil-ziwezhañ, mez war un arall, pe pa ne vez ket taol-mouezhiet splann ar gerioù, ne gaver ket enebadur splann naket gant ar bogalennoù. Un indis marse ewid kelenn ar peder reolenn en ur bloc'h, d'an nebeutan amañ R1/R2.

### 2.3.6. UN DIBAB PEDAGOGEL

#### 2.3.6.1. Kelenn ar yezh evel m'ema ?

Petra a sinifi hiziw lâred e tleer “kelenn ar yezh evel m'ema“ a vez klewet meur a wezh ? Evel m'ema ? Pe evel ma oa ? Evel e tlehe boud ? Daveañ d'an amzer dremenet ne c'houlenn ket moned pell a-dreñv : ugent vloaz zo trawalc'h. Stad ar yezh kent moned d'ar skol ar liseidi bet aterset ganin. Er yezh-se e oa bew c'hoazh, en e dachad ataw, an TM war ar silabenn ziwezhañ. Bew iwe an enebadur a hirder gant ar bogalennoù, zokén e W (**bugã : le, bã : ra, k ò : let, kollet...**). Daoust hag-eñv e ranker kelenn ar yezh-se “evel m'ema“ (evel “**ma oa**“ neuze) en hor soñjoù, pe kelenn ar yezh “evel m'ema“ er skol a hiziw ?

Restajoù zo c'hoazh a skeud “ar yezh gozh“. Un dibab zo d'ober enta : en em leuskel da voned war hent ar striv bihannañ ha neuze favorekaad levezon ar galleg war an dachenn, pe kemer harp douzh ar roudoù-se a chom c'hoazh, ewid adsevel ar sistem war ur patrom sklaer hag olleg.

### 2.3.6.2. Kennig : ar reolenn R2

#### 2.3.6.2.1. Hirder ar vogalenn dindan an taol-mouezh :

Mar lakaomp e rank ar skol ober ur choaz, ar gwellañ d'am soñj e vehe roiñ un alc'hwez simpl d'an deskerion, mez un alc'hwez feal da vod-ober ar brezhoneg war-un-dro. Ha peogwir e kaver meur a vod-ober, evel bet gwelet uhelloc'h, choaz an heni feallañ da "ijin ar yezh", da lâred eo amañ an heni a vez gwelet é treuziñ ar yezh e peb lec'h e brezhoneg, daoust dezhañ boud diglok pe distummet e meur a lec'h pe e meur a zegouezh. Seblant a ra din e ranker amañ lakaad da eil reolenn diazez sanadur ar brezhoneg (reolenn eeun), hirraad ar vogalenn daol-mouezhiet dirag **b, d, g, z, j, v\***<sup>209</sup>, **l, n, r (rr\*** meur a wezh) ha **z(h)\***, pa chomo berr dirag **p, t, k, s, ch, f\*, v\*/w\*, c'h\*, gn, ll, nn, m/mm, ilh, (z)h\***. N'eo ket un dra newez er yezh ha test eo ar geriadurioù a gement-se, akord war an hirder en despet da valigañsoù diwar-benn digoradur ar bogalennoù, nad eo ket un tres aparchantuz (ez-reizh). Tu a vo da zaveañ d'ar c'horpus frazennoù am eus dastumet (Sd. § 2.2.5.5.3. p. 168) hag enrollet (CD : **Korpus standard KLT-W**). Setu skwerioù ag ar liamm etre hirder ar vogalenn ha natur ar gensonenn a za d'he heul :

#### Bogalennoù hir :

Gerioù	Geriadur FAV	Geriadur AH	Geriadur HY	Kennigoù
<b>mab</b>	[ma: p]	[ˈma: p]	[ˈma: p]	[ˈma:p]
<b>pabor</b>	[ˈpa: bor]	[ˈpa: bɔr]	[ˈpa: bɔr]	[ˈpa:bor]
<b>pod</b>	[po: t]	[ˈpo: t]	[ˈpo: t]	[ˈpo:t]
<b>podad</b>	[ˈpo: dət]	[ˈpo: dat]	[ˈpo: dat]	[ˈpo:dat]
<b>bag</b>	[ba: k]	[ˈba: k]	[ˈba: k]	[ˈba:k]
<b>pagan</b>	[ˈpa:gã̃n] [ˈpagã̃n]	[ˈpa: gã̃n]	[ˈpa: gã̃n]	[ˈpa:gã̃n]
<b>braz</b>	[bra: s]	[ˈbra: s]	[ˈbra: s]	[ˈbra:s]
<b>brazez</b>	[ˈbra: zɛs]	[ˈbra: zes]	[ˈbra: zes]	[ˈbra:zes]

<sup>209</sup> Amañ e verk an (\*) kensonennoù meur a sanadur dezhe. Namaedennoù a c'heller kavoud enta. (Sd. § 2.3.6.2.2., p. 194-197. Ewid **rr**, sd. § 2.3.6.2.3., p. 197).



<b>su</b> <u>j</u>	[sy: ʃ]	[ˈsy: ʃ]	[ˈsy: ʃ]	[ˈsy:ʃ]
<b>su</b> <u>je</u> d	[ˈsy: ʒɛt]	[ˈsy: ʒɛt]	[ˈsy: ʒɛt]	[ˈsy:ʒɛt]
<b>di</b> <u>ve</u> nt	[ˈdi: vɛn-t] [divɛn-t]	[ˈdi: vɛ̃nt]	[ˈdi: vɛnt]	[ˈdi:vɛnt]
<b>di</b> <u>vi</u> z	[ˈdi: vis] [divis]	[ˈdi: vis]	[ˈdi: vis]	[ˈdi:vis]
<b>so</b> <u>n</u>	[sõ: n]	[ˈsõ: n]	[ˈsõ: n]	[ˈsõ:n]
<b>so</b> <u>ne</u> r	[ˈsô: nɛr]	[ˈsô: nɛr]	[ˈsõ: nɛr]	[ˈsõ:ner]
<b>ga</b> <u>r</u>	[ga: r]	[ˈga: r]	[ˈga: r]	[ˈga:r]
<b>ga</b> <u>ri</u> d	[ˈga: rit]	[ˈga: rit]	[ˈga: rit]	[ˈga:rit]

Bogalennoù berr :

<b>Gerioù</b>	<b>Geriadur FAV</b>	<b>Geriadur AH</b>	<b>Geriadur HY</b>	<b>Kennigoù</b>
<b>g</b> <u>up</u>	[gyp]	[ˈgyp:]	[ˈgyp]	[ˈgyp]
<b>ta</b> <u>p</u> oud	[ˈtaput]	[ˈtap:ut]	[ˈtaput]	[ˈtaput]
<b>tr</b> <u>o</u> t	[trõt]	[ˈtrõt:]	[ˈtrõt]	[ˈtrõt]
<b>kl</b> <u>o</u> tenn	[ˈklõtɛn]	[ˈklot: ɛn]	[ˈklõtɛn]	[ˈklõtɛn]
<b>to</b> <u>k</u>	[tok]	[ˈtok:]	[ˈtok]	[ˈtok]
<b>pa</b> <u>k</u> ad	[ˈpakat]	[ˈpak:at]	[ˈpakat]	[ˈpakat]
<b>do</b> <u>u</u> s	[dus]	[ˈdus:]	[ˈdus]	[ˈdus]
<b>pl</b> <u>a</u> senn	[plasɛn] [plasen]	[ˈplas:ɛn]	[ˈplasen]	[ˈplasen]
<b>ta</b> <u>ch</u>	[taʃ]	[ˈtaʃ:]	[ˈtaʃ]	[ˈtaʃ]
<b>fi</b> <u>ch</u> enn	[ˈfiʃɛn]	[ˈfiʃɛn]	[ˈfiʃɛn]	[ˈfiʃɛn]
<b>ou</b> <u>f</u>	[uf]	[ˈuf:]	[ˈuf]	[ˈuf]
<b>tuf</b> <u>a</u> ñ/ <b>tuf</b> <u>a</u> d	[ˈtyfəl][ˈtœf-][-ɛɲ][-o]	[ˈtyf: ã]	[ˈtyfat]	[ˈtyfat]
<b>mo</b> <u>gn</u>	[mõɲ]	[ˈmõɲ]	[ˈmõɲj]	[ˈmõɲ]
<b>o</b> <u>gn</u> on	[ˈoɲõn]	[ˈoɲõn]	[ˈõɲjõn]	[ˈoɲõn]
<b>fa</b> <u>ll</u>	[fal]	[ˈfal]	[ˈfal]	[ˈfal]
<b>pa</b> <u>ll</u> enn	[ˈpalɛn]	[ˈpal:ɛn]	[ˈpalɛn]	[ˈpalɛn]
<b>br</b> <u>en</u> n	[brɛn]	[ˈbrɛn]	[ˈbrɛn]	[ˈbrɛn]
<b>me</b> <u>nn</u> ad	[ˈmɛnət][menat]	[ˈmɛn:at]	[ˈmɛnat]	[ˈmɛnat]

<b>plom</b> <sup>211</sup>	[plôm]	[ˈplôm:]	[ˈplôm]	[ˈplôm]
<b>plomer</b>	[ˈplômər]	[ˈplôm:er]	[ˈplômər]	[ˈplômer]
<b>tamm</b>	[tām]	[ˈtām]	[ˈtām]	[ˈtām]
<b>mailh</b>	[maʎ]	[ˈmaʎ]	[ˈmaʎ]	[ˈmaʎ]
<b>mailhur</b>	[ˈmaʎyr] [majyr]	[ˈmaʎyr]	∅	[ˈmaʎyr]

An heveleb reolenn a arver er gerioù liessilabenneg taol-mouezhiet war ar silabenn ziwezhañ : **perag** [peˈra:k]...

### 2.3.6.2.2. Soniadoù ispisial :

Dirag **f dous**, **v** dibenn (pe **w**), **c’h**, **rr**, ha **z** leoneg e kaver meur a gennig. Setu un alberzh ag ar gudenn en taolennoù-mañ :

Gerioù	Geriadur FAV	Geriadur AH	Geriadur HY	Kennigoù
<b>-f*</b>				
Anw zo amañ ag an <b>f dous</b> sanet etre [f] ha[v] e lec’hioù zo (Bourc’h-Wenn, FALC’HUN), ha ked ag an <b>f</b> a gaver e gerioù evel <b>kef</b> ha <b>tuf</b> da skwer (Sd. § 2.3.2.3. p. 174). Ewid yezh ar skol e kennigan ur reoliekâdur, dle. bogalennverr dirag <b>f</b> skrivet, e peb degouezh (Sd. FAV pe AH).				
<b>kof*</b>	[kof]	[ˈkof:]	[ˈko:f]	[ˈkof]
<b>kraf*</b>	[kraf]	[ˈkraf:]	[ˈkra:f]	[ˈkraf]
<b>prof*</b>	[prof] (mez [ˈpro:vu])	[ˈprof:]	[ˈpro:f]	[ˈprof]
<b>skaf*</b>	[skaf]	∅	∅	[ˈskaf]
<b>-v/-w</b>				
Un diforc’h zo d’ober etre ar-v/-w dibenn hag ar -v/-w- diabarh. - <b>-v /-w dibenn-ger</b> : Ar <b>v</b> dibenn (pe <b>w</b> dibenn) a ya peurliesañ da vogalenn pe da hantervogalenn. A rannyezh da rannyezh e weler e zistabiled. E diabarzh ar gerioù e c’hell chomel hantervogalenn pe moned da gensonenn kentoc’h. Setu perag e oa chomet pell amzer perzhidi ar bodad-labour war an doare-skriv da zirouestliñ ar gudenn-se, ewid roiñ un diskloom deread dre ar skritur. A-du e oa daet an dud a-benn ar fin ewid skriv un <b>w</b> e fin ar gerioù, ha leuskel ur <b>v</b> en diabarzh. E gwenedeg d’an nebeutañ e chom peurliesañ [v] ( <b>sav/savet/sevel</b> : [sɑv][,ˈsa:vət][sɑvəl], mez <b>sovet</b> [ˈso:vət]). E meur a dachad nawazh, pa vez bogalenn/hanter-				

<sup>211</sup> Dirag un **m** evel dirag un **mm** e vez berr ar vogalenn ataw (Sd. § 2.3.2.3.1. p. 174).

vogalenn en dibenn e klewer <b>v</b> en diabarzh : <b>bew/bevañ/ bevet</b> : ['bew]['bɛ:vã]['bɛ:vet].				
<b>kaw</b> (kav)	[kaw][kaʷ][ka:f]	['ka <sup>o</sup> ]	['kaw]	['kaw]
<b>piw</b> (piv, piou)	['piw][piʷ] [pi:ː][pju:] [peu]	['pi <sup>u</sup> ]	['piw]	['piw] ][piʷ]
<b>glaw</b> (glav, glao)	[glaw][gla:ːː] [glaʷ][glo:]	['gla <sup>o</sup> ]	['glaw]	['glaw]
<b>taw-</b> (tav-)	[taw][taʷ][ta:ːː]	['ta <sup>o</sup> ]	['ta:v]	['taw]
<b>tewel</b> (tevel, tawiñ)	[tawɪp][taʷɛp] ['te wəl][ ['te:vəl]['təʷ:el]['ta:əl]	['te :vəl]['teʷ:el]	['te :vəl]	['te :vəl]['teʷ:əl] ['taʷɛp]
<b>tavarn</b>	['ta:varn] [tavarn] ['tawərn] ['təvərn]	['ta :vərn]	['ta:vərn]	['ta:vərn]
<b>gov</b> <b>govel</b>	[go:ːː][goːːː][gu:] ['go:vəl][govel] ['goəl][gwel] [gu:l] [gwel][gwil]...	['go:]	['gow]	['gow]
<b>rew</b> (rev)	['rɛw] [rɛ:ːː] ['rɛʷ] ['rɛ <sup>o</sup> ] [rjaʷ] [reaw] (+ ['rɛ:ʷ] jclr/Lgg)	['rɛ <sup>o</sup> ]	['rɛw]	['rɛw]
<b>sav</b> <b>pavez</b>	[sa :ːː][saw][saʷ] ['pa:və]['pa :vɛs] (+ [paʷɛr])	['saw] ['pa :ve(s)]	['saw] ['pa :vɛs]	[sa :ːː][saw][saʷ] ['pa :ve(s)]
<b>glaw</b> (glav)	['glaw][gla:ːː] [glaʷ][glo:]	['gla <sup>o</sup> ]	['glaw]	['glaw]
<b>tevenn</b>	['te:vɛn]['te:wən]	['te:vɛn]	['te:vɛn]	['te:vɛn]
<b>diwan</b>	['diwãːn][diwãːn]	['diw:ãːn]	['diwãːn]	['diwãːn]
<b>-c'h</b>				
Dirag <b>c'h</b> e vez berr ar vogalenn peurliesañ, mez kennig a ra HY ur vogalenn hir dalc'hmat, pa not AH unan hanter-hir. Kennig a ran amañ ar sanadur standard, berr ar vogalenn dirag <b>c'h</b> -				

<sup>212</sup> Mard eo reizh e FAV kavoud arouezioù fonetik evel /fi/ pe /y/, e kavan gwell implij an arouez /h/ hebkén amañ ewid notiñ blotâdur an /x/ etre diw vogalenn. Trawalc'h gouied eh a /x/ da /h/ pa vez blotaet ewid sanañ reizh en ur mod standard. Dre skiant-prenet e ouian e vez gwell ober gant an nebeutañ a sinoù ma c'heller. An dibab-se zo bet graet gant AH iwe.

dibenn ( <b>bouc'h, loc'h, moc'h, plac'h...</b> ). E diabarzh ar ger e vlota ar [x] ewid moned da [h] ( <b>plac'h</b> ['plax] >>> <b>plac'hig</b> ['plahik]) <sup>212</sup> .				
<b>bac'h</b>	[bax]	['ba·x·]	['ba:x]	['bax]
<b>bac'hañ</b>	['bahə][bahip]	['bah:ã]	['ba:ɣã]	['bahã]
<b>bouc'h</b>	[bux]	['bu·x·]	['bu:x]	['bux]
<b>bouc'hal</b>	['buhal]	['buh:al]	['bu:ɣal]	['buhal]
<b>moc'h</b>	['mɔx]	['mo·x·]	['mɔ:x]	['mox]
<b>moc'hach</b> (- aj)	['mohəf]['mo:fiəf] [mohəf]	['moh:aʃ]	['mo:ɣəf]	['mohəf]
<b>sac'h</b>	[sax], a-w. [za :x] ['sahat]	['sa·x·]	['sa:x]	[sax]
<b>sac'had</b>	['sahat]['zahət], a-w. ['za:fiət]	['sah :at]	∅	['sahat]
<b>-z leoneg</b>				
<p>Gant ar <b>z leoneg</b>, en dibenn-ger pe e diabarzh ar ger, e vez sklaer a-walc'h an traoù ewid ar re a anav mat ar yezh. Ewid ar re arall, an deskerion da skwer, e ranker roiñ un tamm sikour dezhe. Kavet en doa an Etrerannyezhel un diskloom d'ar gudenn-se dre implij an <b>-ss</b> etre diw vogalenn ewid merkiñ ar soniad [s] (en em gav peurliesañ e gerioù daet ag ar galleg evel <b>doussig &gt; douss</b>, <b>plassenn &gt; plass</b>, <b>klassoù &gt; klass...</b> pe gerioù gant <b>-s</b>-dibenn (<b>bras, lous...</b>), enne un dibenn kaletauz evel <b>brassaad/brassañ/brassoc'h-loussaad/loussañ/loussoc'h...</b> Implij an daou s a gase an Etrerannyezhel da lakaad an s etre diw vogalenn da dalvoud [z] evel e <b>rosenn, nosiad, pasenn...</b> Goude ur vogalenn e verke ar <b>-z</b> ar <b>z leoneg</b> hebkén, mud peurvuiañ (<b>karantez, menez, ruz...</b>). Mez ne gavas ket sav ar c'hennig-se. War a seblant e vez gwelet ur sistem arall é c'hoari, kempouezet gwell dre ma ne ya ket eneb douzh an doareioù-skriv implijet a-vraz, heb dezhañ koulskoude moned pell a-walc'h d'am soñj : implij <u>krommelloù</u>, ar pezh a vez kavet e FAVEREAU, 2005 (<b>krei(z) craie # kreiz centre...</b> mez pas ataw (<b>menez, ruz ...</b>). E geriadur An Here e vez implijet ar c'hrommelloù iwe, mez en notadur fonetik hebkén : <b>ruz</b> ['ry: (s)]. Mar behe lakaet krommelloù 1) e gerioù-añtre ar geriadurioù ewid sinaliñ ar <b>z leoneg</b> (heb astenn ar mod-ober-se er skridoù-plaen) hag iwe 2) en notadur fonetik e vehe sklaer an traoù heb trubuilhañ an doare-skriv (e-kontrel douzh ar pezh graet gant an Etrerannyezhel), ha heb diaezamant ebed ewid ar yezh. Gant digoriñ ur geriadur bennag e vehe gouiet diouzhtu pesort <b>z</b> zo er ger-mañ-ger ha gouiet ouzhpenn an diforc'h a zo etre gerioù hañvalstumm a-sort gant <b>keu(z) regret # keuz fromage ; kriz crise # kri(z) cru, rus russe # ruz traîne # ru(z) rouge...</b></p>				
<b>ru(z)</b>	[ry:] [ry:s]	['ry: (s)]	['ry:s]	['ry: (s)]

<b>me(z)w</b>	[mew][ <sup>ˈ</sup> me : <sup>ˈ</sup> ː] [ <sup>ˈ</sup> mezɥ] [ <sup>ˈ</sup> mɛ:ze] [ <sup>ˈ</sup> meho][mɛɥ] [mjau]	[ <sup>ˈ</sup> mɛ <sup>o</sup> ]	[ <sup>ˈ</sup> mɛzɥ]	[ <sup>ˈ</sup> mew][ <sup>ˈ</sup> mezɥ] > [ <sup>ˈ</sup> me(z)w]
<b>kri(z)añ</b>	[ <sup>ˈ</sup> kri:zə] [krisjə] [- ʃa][ <sup>ˈ</sup> kri:zɛɥ][-o]	[ <sup>ˈ</sup> kri:(z)ã]	[ <sup>ˈ</sup> kri:zã]	[ <sup>ˈ</sup> kri:(z)ã]
<b>-zh</b>				
<p>Sinaliñ a ra ar <b>zh</b> ur son doubl (<b>z</b> pe <b>h</b>) a oa bet degemeret ez-ofisiel en doare-skriv e 1941, ha daet da vout arouez ar Peurunvan zokén (“<i>skrivan e zh</i>”, “<i>skrivañ e zedacheg</i>”). Gwell e vehe neuze kennig an daou sanadur er geriadurioù : mar ne gont ket an <b>h</b> er <b>zh</b>, tu zo d’en em c’houlenñ perag gouarn an arouez-se. Ne chomehe ket namaed trabas gantañ, mar ne ra ket den an diforc’h e fin ar gerioù etre <b>blei(z)</b>, <b>kreiz</b> ha <b>Breizh</b>. Nawazh e verk ar <b>zh</b> unvanidigezh ar KLT hag ar W (&gt; <i>KLTG</i>). Un dibab “strategiel” d’ober enta aze, a rank boud eilet gant un dibab pedagogel : rekiz e vehe kelenn an diforc’h etre ar gerioù-se, dishañval dre o doare-skriv, d’an oll. Mar ne gaver namaed ur sanadur d’ar <b>-z boutin</b> eh eus daou d’ar <b>-(z)</b> (<b>z leoneg</b> : /z/ pe netra) ha daou d’ar <b>-zh</b> (&gt; /z/ pe /x/).</p> <p>Setu perag e vehe gwell ober gant ar <b>zh</b> ar pezh a vez graet gant ar <b>z leoneg</b> : lakaad heverk an daou sanadur. Gant krommelloù e sinal AH e c’hell boud mud ar (<b>z</b>) (ar pezh a zegouezh peurliesañ), tra ma ne veneg namaed sanadur ar <b>z</b> er c’houblad <b>zh</b>. E-lec’h ma vez tu da gennig [<sup>ˈ</sup>bɛ(z)w] ewid <b>bezv</b> (<b>bezv</b>) ne vehe ket diaesoc’h kennig [<sup>ˈ</sup>ka:s] ha [<sup>ˈ</sup>kax] ewid <b>kazh</b>.</p>				
<b>kaz(h) KLT</b>	[ka:s]	[ <sup>ˈ</sup> ka:s]	[ <sup>ˈ</sup> ka:s]	[ <sup>ˈ</sup> ka:s]
<b>ka(z)h W</b>	[kax]	∅	∅	[ <sup>ˈ</sup> kax]
> <b>KAZH</b>				> [ <sup>ˈ</sup> ka:s] & [ <sup>ˈ</sup> kax]

### 2.3.6.2.3. Kudenn an -r/-rr :

Hir e vez ar vogalenn dirag un **-r**, akord an tri geriadur war-se er gerioù unsilabenneg (**ber**, **dor**, **hir**, **kar**, **klor**, **lur**, **mir**, **mor**, **per**, **Pêr**, **sur**, **tir**...). N’eus namaed ewid **gar** e veneg FAV (mez eñv hebkén) un diforc’h etre **ar c’har** [ga:r] *la jambe* hag **ar gar** [gar] *la gare*. Hir ar vogalenn er gerioù liessilabenneg c’hoazh<sup>213</sup> : **berad**, **burew**, **dîri**, **hîviz**, **lore**, **merenn**, **labourad**, **spered**...

<sup>213</sup> Na boud e sinal FAV, ouzhpenn, stummoù enne ur vogalenn verr iwe, fed a zo liammet eveljust gant lec’h an TM e kornadoù zo a Vreizh.

Dirag **-rr** e vez hir ar vogalenn ataw, (HY, AH), namaed ewid **torr**, an tres a hirder é tegas aze un diforc'h fonologel (Sd. an daolenn izelloc'h). E-kontrel e ro FAV ur sanadur berr *kentoc'h*, mez menegañ a ra ouzhpenn un tres hir iwe, “a-wezhioù” pe “aliez”.

Enebet e vez gerioù a-goubladoù er skritur gant **-r/-rr** : **bar/barr, ber/berr, kar/karr, kor/korr, mar/marr, mir/mirr, tor/torr**. Daoust hag-eñv e vez aparchantuz an hirder er c'houbladoù-se ? N'eo ket anad tamm ebed, herwez an daolenn da heul.<sup>214</sup>

Tu zo da gavoud ur ger gant un **-r** heb un eneb gant **-rr** (**bir, dir, dor, fer, hir, kler, ler, mur, per, tir...**) mez nebeutoc'h a c'herioù gant **-rr** heb o far gant un **-r**, evel **barr/bar** ha **serr/ser**.

Simplaad aze c'hoazh ne vehe ket gwallgas ar yezh mez plaennaad an hent dirag an deskerion, ha kennig a ran sanañ hir ar vogalenn dirag **-rr** evel dirag **-r** e peb degouezh, er gerioù unsilabenneg :

( √ : sin a verrder ; — : sin a hirder).

Gerioù unsilabenneg	Geriadur FAV	Geriadur AH	Geriadur HY	Kennigoù
<b>barr</b>	√ (a-w. —)	—	—	—
<b>ber</b>	—	—	—	—
<b>berr</b>	√ (a-w. —)	—	—	—
<b>kar</b>	—	—	—	—
<b>karr</b>	√ (alies —)	—	—	—
<b>kor</b>	—	—	∅	—
<b>korr</b>	√ (a-w. —)	—	—	—
<b>mar</b>	—	—	—	—
<b>marr</b>	√ (a-w. —)	—	∅	—

<sup>214</sup> Tu zo da ziforc'hiñ **ber** ha **berr** dre zigordet ar vogalenn ([<sup>h</sup>be:r] / [<sup>h</sup>be:r]) evel ewid **tor** ha **torr** ([<sup>h</sup>to:r] / [<sup>h</sup>to:r]).

<b>mir</b>	—	—	—	—
<b>mirr</b>	˘	∅	∅	—
<b>serr</b>	˘ ha —	—	—	—
<b>tor</b>	—	—	—	—
<b>torr</b>	˘ (alies —)	—	— (ag) ; ˘ g	—

Padal eh a peurliesañ da verrder, er gerioù liessilabenneg, an hirder a gaver er gerioù unsilabenneg. Mar bez hir an **-a** er ger **karr** e vez berr an **-i** e **kirri**, da skwer. Setu neuze un enebadur é sevel etre an daou rummad gerioù liessilabenneg (war-bouez nebeud), ar re gant un **-r** enne hag ar re gant **-rr**. Ne vehe ket ur reoliekaad diaez d’ober amañ kennebeud.

A-hend-arall, pa vez koubladoù a-sort gant **karez/karrez** e ro ar reolenn an tres-diferiñ sklaer ([ˈka:re(s)] # [ˈkare(s)] ).

Gerioù liessilabenneg	Geriadur FAV	Geriadur AH	Geriadur HY	Kennigoù
<b>barrenn</b>	[ˈbɑrɛn] ˘	[ˈbɑr:ɛn] ˘	[ˈbɑrɛn] ˘	[ˈbɑrɛn] ˘
<b>berad</b>	[ˈbe:rat] —	[ˈbe:rat] —	[ˈbe:rat] —	[ˈbe:rat] —
<b>bourrañ</b>	[ˈburə] [ˈbu:ri] [bureɲ] ˘ pe —	[ˈbur:ã] ˘	[ˈburã] ˘	[ˈburã] ˘
<b>karer/karet</b>	[ˈka:rɛr] —	[ˈka:ret] —	[ˈka:rɛr] —	[ˈka:rɛr][ˈka:ret] —
<b>karreg</b>	[ˈkarek] a-w. [ˈka:rək] ˘ pe —	[ˈkar:ɛk] ˘	[ˈkarek] ˘	[ˈkarek] ˘
<b>kere</b>	[ˈke:re] [cere] — pe ˘	[ˈke:re] —	[ˈke:re] —	[ˈke:re] —
<b>karrez</b>	[ˈka:rə] [kare] [ˈka:rɛs] [ˈka:re] — pe ˘	[ˈkar:ɛ(s)] ˘	[ˈka:rɛs] ˘	[ˈka:rɛ(s)] ˘

<b>maire</b>	[ˈma:rə] [mare] — pe <sup>˘</sup>	[ˈma:re]	[ˈma:re]	[ˈma:re]
<b>mourrenn</b>	[ˈmuren] [ˈmu:rən] [muren] — pe <sup>˘</sup>	[ˈmur:ɛn]	[ˈmuren]	[ˈmuren]
<b>mijour</b>	[ˈmi:rur] [mirur] — pe <sup>˘</sup>	[ˈmi:rur]	[ˈmi:rur]	[ˈmi:rur]
<b>mourrou</b>	∅ (sd.mourrenn) — pe <sup>˘</sup>	[ˈmur:u]	[ˈmuru]	[ˈmuru][-ow]
<b>serriñ</b>	[ˈseri]	[ˈser:i]	[ˈseri]	[ˈseri][-aŋ]
<b>torad</b>	[ˈto:rət] [torat] — pe <sup>˘</sup>	[ˈto:rat]	[ˈto:rat]	[ˈto:rat]
<b>torrer</b>	[ˈtɔrɛr]	[ˈtɔr:ɛr]	[ˈtɔrɛr]	[ˈtɔrɛr]

### 2.3.6.3. Namaedenoù

Diaez eo kavoud ur reolenn heb namaedenoù, a-fed yezh d'an nebeutañ. Moian zo klask nebeutaad o niver, mez tu zo iwe da ziskoueziñ soupted war an dachenn.

#### 2.3.6.3.1. Nebeutaad o niver :

N'eo ket hirder ar vogalenn dindan an TM un dra eeun er yezh komzet ha n'hell ket honnañ boud reoliekaet da vad e stern reud reolennoù strizh. Gwelet hon eus e kennew sanadurioù dishañval ag ur geriadur d'egile, da skwer ewid **pebr**, a vez berr an **e** ennañ dre-oll herwez geriadurioù FAV hag AH. Nawazh e kennig HY [ˈpe:pr] gant un **e** hir, ar pezh a glot gant ar **b(r)** da heul.

Meur a wezh ne glot ket ar skritur gant ar sanadur, da skwer ewid **nes proche** sanet [ˈne:s] e peb lec'h, ar pezh a c'houlennehe ur **-z** dibenn (**nez** e Skolveureg, GARN). E FAV, AH, HY, MH e vez enebet **nes** douzh **ne(z)** [ˈne:(s)] str. **-enn lentes**. Padal ne vez ket kavet diforc'h-skrid ebed e reoù arall (**keuz fromage/keu(z) regret ; ruz traîne/ru(z) rouge**).



Meur a wezh ne glot ket ar sanadur kenniget gant ar skritur, da skwer **sakr** : [ˈsa:kr] e HY. Mez komz a ran amañ a yezh ar skol, ur wezh arre, a c’hellehe ober gant stummoù simplaet o sanadur na lamehe ket netra d’ar c’hompren. Setu en daolenn-mañ skwerioù a gement-se :

Gerioù	Geriadur FAV	Geriadur AH	Geriadur HY	Kennigoù
<b>nakr</b>	[nakr]	[ˈnakr]	[ˈnakr]	[ˈnakʳ]
<b>nivl</b> <sup>215</sup>	[nivl]	∅	∅	[ˈni:fl] <sup>216</sup>
<b>pebr</b>	[pebr]	[ˈpeb(r)]	[ˈpe:pr]	[ˈpe:pʳ]
<b>sakr</b>	[sakr]	[ˈsakr]	[ˈsa:kr]	[ˈsakʳ]
<b>brazlenn</b>	[ˈbrazlɛn]	[ˈbrazlɛn]	[ˈbrazlɛn]	[ˈbra :zlɛn]
<b>dichek</b>	[diʃɛk]	[ˈdiʃɛk]	[ˈdi:ʒɛk]	[ˈdiʃɛk]
<b>didro</b>	[ˈdidro]	[ˈdidro]	[ˈdi:dro]	[ˈdi:dro]
<b>didrouz</b>	[ˈdidrus]	[ˈdidrus]	[ˈdi:drus]	[ˈdi:drus]
<b>fallagr</b>	[faˈlɑkr] [faˈla:kr]	[faˈlɑkr]	[faˈla:kr]	[faˈla:kr]
<b>gwinegr</b>	[gwiˈnɛgr] [gwiˈnɛ :gʳ]	[gwiˈnɛk(r)]	[gwiˈnɛ :kr]	[gwiˈnɛ :kʳ]
<b>nivlenn</b>	[ˈnivlɛn]	[ˈnivlɛn]	∅	[ˈni :vlɛn]
<b>poblañs</b>	[ˈpoblɑ̃s]	[ˈpoblɑ̃s]	[ˈpo:blɑ̃s]	[ˈpo:blɑ̃s]
<b>poblel</b>	[ˈpoblɛl]	[ˈpoblel]	[ˈpo:blɛl]	[ˈpo:blɛl]
<b>soublañs</b>	[ˈsublɑ̃s]	∅	∅	[ˈsu:blɑ̃s]

Pa vez testeniekaet ur sanadur feal d’ar reolenn, perag moned da zistruj ar sistem dre lakaad en a-raog, er skol, an heni na sent ket doutañ ? Er gerioù evel **mud**, **reuz**, **treud** ha kement a zo, na boud e kaver sanadurioù testeniekaet gant ur vogalenn verr enne, e vez kavet iwe sanadurioù testeniekaet gant ur

<sup>215</sup> Kennig a ran amañ ober un diforc’h ster ha skritur etre **nivl** g *nébulosité* [ˈni:fl] (> **nivlenn** [ˈni:vlɛn] *voile de brume* (JCLR) ; *bruine*, ha **nifl** ag *élégant* (FAV).

<sup>216</sup> ... ha [nifl] ewid **nifl**, eveljust (sd. an notenn diaraog).

vogalenn hir<sup>217</sup> a glot gant ar sistem. Simpl ha kempouell eo (pe a vehe) astenn ar sanadurioù feal d'ar reolenn (tra ma ne vo skoilh ebed degaset war dachenn ar c'hompren), kentoc'h eged bruzhuniñ ha moned war dachenn ar gempleget, na zegas netra a vad da gelenn ar yezh.

#### 2.3.6.3.2. : Reolennoù ha soupted ar stern : skwerioù :

Kàer klask simplaad, ataw e chomo fedoù-yezh er-maez ag ar reolenn. Gant ma vint dibaot a-walc'h e c'hello ar vistri kaoud un dachenn difraost diragze. Tu zo da sinaliñ amañ gerioù a c'heller lakaad dindan ar reolenn pe ged : **digâs** ha **divlaz**.

Diskoueziñ a ra **divlaz** ([ˈdivlaːs] [divlas] FAV ; [ˈdivlas] AH ; [ˈdiːvlas] HY) boud difer dre ma vez kavet ennañ, e lec'hioù zo, ur vogalenn hir nad eo ket dindan an TM : [ˈdivlaːs] (FAV). Diveret eo **divlaz** ag ur ger implijet stank a-walc'h er yezh, **blaz**, ger forc'helleg un tamm a sinifi war-un-dro *goût* (ger gourel neuze : **ar laz**) hag *odeur* (ger benel amañ : **ur laz fall**). **Blazañ** a c'hell sinifioud war-un-dro *roiñ saour* d'ur meuz bennag (AH) pe *flaeriañ pestiñ*. Roiñ a ra MH **fallvlazein**, mez **blazein (blaziñ)** zo iwe, memez ster ha **fallvlaziñ** (e Langidig da skwer). Kreñvaet e vez a-liez an TM ordinel a gouezh war ar ger **blaz** gant un TM arbouezañ, dreist-oll en eil degouezh : “**Bla::ziñ a rae e di getoñ, m'her lâar deoc'h!**“. Ouzhpenn-se e c'hell ar ger **divlaz** boud tostaet douzh ar ger **diblas** [ˈdiblas]. Setu perag e c'heller kennig amañ ar sanadur [ˈdivlaːs] hag a chom sklaer a-walc'h etre [ˈdivlaːs] ha [ˈdivlas].

Un ger arall damhañval douzh hennezh eo **digâz** [ˈdiːgaːs] *indifférent* ; *impassible* ([ˈdigas][ˈdegas][ˈdiːgas][ˈdiːgas][ˈdjes] FAV ; [ˈdiːgas] AH ; [ˈdiːgas] HY) (# **degas** *amener, apporter* [ˈdeːgas] [ˈdiːgas] [ˈdiːgas] FAV ; [ˈdeːgas] [ˈdiːgas] AH ; [ˈdeːgas] HY # **digas** [ˈdigas] *trimbaler (kas ha digas)*). Kar eo **digâs** d'ar ger **kâs** [ˈkaːs] *haine, aversion*, da dostaad douzh **kas** [ˈkas] *envoyer*, ha douzh **kaz** [ˈkaːs] *cas (ober kaz)*. Kennig a ran amañ ouzhpenn ober an diforc'h er skol etre ar raggerioù **di-** ha **de-** n'o deus ket ar

---

<sup>217</sup> Da skwer ewid **mud** [ˈmyːt], e Langidig, er Vro-Bourlet mez iwe er Porze... (herwez A. BOCHÉ).

memez sinifiañs<sup>218</sup> : **digâz** *indifférent ; impassible* [’di:ga•s] / **degas** *amener, apporter* [’de:gas].

## 2.3.7. UN DACHENN BLAENNAET EWID AR C’HELENN

### 2.3.7.1. War hent ar plaennaad

Herwez COLLINOT & *all* (1999 : 127) n’eo ket neutr labour ar yezhourion, daoust dezhe boud ar muiañ “objektivel“ ma c’hellont, ha p’en doa klasket SAUSSURE lakaad urzh er yuc’h fedoù-yezh mesket (“*amas hétéroclite*“) nen doa ket gellet chomel heb leuskel a-gostez ur maread fedoù é tennañ douzh ar variantennoù heniennel ewid sevel meizad ar *yezh*, ar *yezh* é voud neuze ur savadur ideel, un ijinadenn deorikel.

N’hell ket ar saverion yezhadurioù ha geriadurioù renabliñ ar *yezh* en he fezh, ha dibaboù a raont en ur mod bennag. Gwelet hon eus en taolennoù ha skwerioù roet uhelloc’h un diforc’h etre ar geriadurioù, re FAVEREAU é klask roiñ ur skeudenn ledan ag ar *yezh*, re An Here ha re Hor Yezh é kerzhed didro war hent an normañ. Geriadur Hor Yezh (1993, ademb. 1996) an heni a zo aet ar pellañ war hent ar reoliekâdur a-fed sanañ :

« Nous proposons une prononciation qui se veut la plus standard possible. Elle est transcrite selon les normes de l’Association Phonétique Internationale (IPA). Nous nous sommes limités à une seule proposition de prononciation. Elle correspond à la plus courante et la plus généralement admise, conforme à la tradition et à l’étymologie. Nous avons privilégié les prononciations les plus larges et les plus soignées. » p. 213.

Gwelet hon eus uhelloc’h o doa tud HY klasket lakaad ar sanadurioù kenniget en o geriadur da glotañ gant ar skrid : [’be :k] ewid **beg** ; [’po:blâs] ewid **poblañs** ; [’po:blɛl] ewid **poblel**, da skwer. Choazoù graet ne heuliont ket hent

---

<sup>218</sup> **Di-** : ragger-forc’hiñ ; **de-** : ragger-tostauz (herwez HEMON, Dict. B/F –F/B, 1985 : 14).

ar simplaad nawazh, ha diskoueziñ a ra lod arall mennozhioù a c'hell an den sevel enebte.

### 2.3.7.2. Choazoù elbikaduz\*

#### 2.3.7.2.1. Gerioù zo :

Kuriuz e kavomp neuze sanadurioù arall kenniget gant HY hag a ziskouez boud kontrol douzh ar pennreolenn disklaeriet. Menegomp amañ **dichek** [ˈdi:ʒɛk], ur sanadur nad eo ket bet notet gant FAV (a verk [ˈdiʃɛk]), na gant AH ([ˈdiʃ :ɛk]). Dalc'het eo bet iwe gant an **f** gwan [f]<sup>219</sup>, dishañval diouzh [v] e gerioù evel **difenn** [ˈdi: fɛn] (FAV [ˈdifɛn] hag AH [ˈdif: ɛn]) ; **difrom** [ˈdi:frɔ̃m] (FAV [ˈdifrôm]). Ha ne c'houlennehe ket « *la prononciation la plus standard possible* » kennig ur sanadur fonetikel aze, feal d'ar skrid ?

#### 2.3.7.2.2. Ar **z** leoneg :

Douzh lenn sanadurioù gerioù zo, enne ur **z leoneg**, a-sort gant **be(z)**, **go(z)**, **ru(z)**, en em c'houlenn a ran mard eo [ˈbe :s], [ˈgo :s] pe [ˈry :s] « *les prononciations les plus larges* », é voud ma kaver strewetoc'h [ˈbe :], [ˈgo :] ha [ˈry :]. Setu aze ur skwer splann a *garoud-ar-leoneg* a zo merk geriadur Hor Yezh.

Marse eh eus, heb moned eneb d'un normalizañ *minimom*, ur mod arall da daolenniñ ar yezh hiziw. Gwelet hon eus en deus digoret geriadur An Here an nor d'ar spered-se dre lakaad ar **z**-se etre krommelloù en notadur fonetikel, a zo un araokadenn memestra (**ruz** [ˈry:(s)]). Kennig a ran en-dro amañ ouzhpenn ma vo lakaet ar c'hrommelloù e gerioù-añtre ar geriadurioù : RU(Z), AZE(Z)AÑ.

#### 2.3.7.2.3. : Ar **zh** :

Memez mod e kavan domaj n'eo ket bet sinalet e-korf geriadur Hor Yezh na kennebeud e heni An Here sanadur ar gwenedeg er gerioù gant **zh** (Sd. an

---

<sup>219</sup> Meneget gant FALC'HUN (*Le système consonantique du breton*, 1951).

arouez-vro **BZH**), é voud m'ema an digramm-se ur sin doubl a verk ez-ofisiel e doare-skriv 1941 daou sanadur dishañval (Sd. **zh** p. 197). Ewid ar pezh a sell douzh hirder ar vogalenn dindan an TM e tegas ar **zh** diw sevenidigezh ken talvoudeg unan hag heben : hir dirag ar **z** pa vez sanet hennañ er mod KLT da gomz, mez berr dirag an **h** e brezhoneg Gwened. Kement hag ur **c'h** e talv ar **zh** e W ha kement hag ur **z** e KLT. E gwenedeg e vez sanet **kazh** ['kax] evel **plac'h** ['plax], berr an **a** enne o daou, ha n'eus ket tamm diforc'h-sanañ ebed etre **bazh** ['bax] ha **bac'h** ['bax]. E KLT diouzh an tu arall ne vez ket santet an diforc'h kennebeud etre **pizh** ['pi :s] ha **piz** ['pi :s], etre **kazh** ['ka :s] ha **kaz** [ka :s], hir an **i** pe an **a** enne.

### 2.3.7.3. Sklaerraad ar choazoù

Daou dra dishañval zo amañ :

- 1) kennig ur sanadur hebkén evel standard er skol, kentoc'h eged meur a unan (ewid **mud**, kennig kentoc'h ['my :t] e-lec'h ['myt] pe zokén ewid **beg** kennig ['be :k] e-lec'h ['bek]) : ne vo ket diaez d'ar skolidi deskiñ an namaedennoù (dreist-oll pa vo ar gerioù-se liezimplied, evel **beg**), mez parraad a ray ar bennreolenn-se a glewed sanadurioù direizh groñs e gerioù evel **tad**, **plad**, **pod**, ha diwall mat douzh an enebadurioù hir/berr a zo stank a-walc'h e brezhoneg (**son/sonn**, **klod/klot**, **lud/lut...**).
- 2) roiñ da ouied er geriadurioù an diw feson da sanañ a zo bet degemeret er skritur gant ar **zh**.

Ur choaz pedagogel a c'hell an heni kentañ boud, mez unan politikel iwe eo an eil. Chom heb merkañ ar sanadur W ['kax] da skwer e-tal an heni KLT ['ka :s] ewid ar pezh a vez skrivet **kazh** zo sinifioud nen deus arouez ar **zh** talvoudegezh ebed : n'eus namaed ar **z** a gont ennañ. Perag gouarn ar **zh** er yezh neuze ? Ken simpl e vehe henn tennañ diouzhtu, e-lec'h degas un diaezamant ouzhpenn<sup>220</sup>. Neuze skriv BZ (e-lec'h BZH) da arouez **Breiz** ha

<sup>220</sup> Pa ne vez ket kelennet an daou sanadur, da lâred eo pa ne vez ket kustumet an dud (ha da gentañ ar skolidi) da glewed an daou vod da sanañ ar gerioù gant **zh** e chom digomprenaduz ar sin-se. N'eus rezon ebed da skriv **Breizh** ha **feiz** ma ne vez lakaet da glewed namaed ar **z** enne o daou ataw (e L d'an nebeutañ). Tu zo da lâred **Breih** ['brɛx] ar pezh n'eo ket posubl gant

peb tra da heul. Da betra kargañ ar skritur a sinoù didalvez ? N'eo ket an dra-se a c'houlennan, mez mar n'eo ket kelennet e peb skol talvoudegezh ar **zh** e tegouezho an dra-se un deiz bennag...

#### 2.3.7.4. Ur gudenn deknikel

Liammet eo an diw reolenn diazez R1 hag R2 : er silabenn daol-mouezhiet, ataw hir, e c'hell ar vogalenn boud hir pe verr, en ur c'hempouez gant ar gensonenn a za d'he heul (sd. § 2.1.1.2. p. 116). Gwallgaset eo nawazh ar gempouellded am eus prezantet, a zo gwir ewid ar peb brasañ ag ar gerioù, mez pas ewid an oll ataw. Rag ur skoilh a-bouez a gav an eil reolenn R2 war he hent, ewid d'ar gelennerion he lakaad da arverañ digudenn : problem choaz ar gensonenn dibenn-ger an heni eo.

Skritur 1941 an heni eo ar muiañ implijet hiziw-an-deiz en embannadurioù. Mez gant an 10 den o doa kemeret perzh e emvod Roazon ar bloaz-se ne oa ket bet divizet reizhañ ur poent a-bouez : astenn lezenn an diveradur ewid termeniñ ar gensonenn dibenn-ger en anwioù-gwan hag e rummadoù gerioù arall, tre evel e veze graet gant an anwioù-kadarn. A-gaoz d'ar mank-se e vez diaez-braz, mar n'eo ket dibosubl, kelenn ar yezh en ur mod eeun a-fed sanadur ar vogalenn daol-mouezhiet gant he hirder reizh. Studïet e vo ar poent-mañ er chabistr 2.3. gouestlet d'an deirved reolenn : neutralizadur ar gensonenn en dibenn absolut (R3).

#### 2.3.8. KLOZADUR

Gwelet e vo er chabistr da heul ar liamm a zo etre ar gensonenn hag ar vogalenn gent, er gerioù unsilabenneg hag er gerioù taol-mouezhiet war ar silabenn ziwezhañ. Gwelet e vo e pesort mod ema daet betegzimp un dibab bet graet e penn an XXved kvd en despet d'e zigempouellded, digempouellded pedagogel, digempouellded c'heriaouegel. Abalamour d'ar gudenn-se ne

---

**feiz.** Setu perag iwe n'eo ket pedagogel, en un doare ledan da gelenn ar brezhoneg, da lakaad klotennoù a-sort gant **Feiz** ha **Breizh** da dalvezoud : ne glotont namaed e leoneg ! Ewid ar memez abegoù e skriver re liez bremañ \***pouezhañ** da skwer (sd. YA / Nn 185, 19.12.2008, p. 1 “*e bouezh-mouezh*”), e-lec'h ma n'eus **h** ebed e W (meskaj gant **poazhañ** e-lec'h m'ema reizh an **h**), pa vez lâret ha skrivet **pouezañ, pouezañtur, pouezerez**....

glazimp ket seder ar pennad 2 amañ : ken stard m'ema arïet an teir reolenn gentañ e c'hellomp soñjal e reno ar gempouellded warne o zeir war-un-dro petramant war heni ebed anezhe.

## **2.4. KALETÂDUR AR GENSONENN EN DIBENN**

### **ABSOLUT**

Termeniñ pesort kensonenn skriv e fin ar gerioù zo unan ag ar problemoù kasausañ a zo bet e skritur ar brezhoneg. Tri zra dishañval o deus lakaet ar yezhourion da dermal aze (ha beteg hiziw c'hoazh) : 1) kaletâdur ar gensonenn en dibenn absolut, 2) an diveradur ha 3) levezon ar lostgerioù kaletauz.

#### **2.4.1. DIVOUEZHIAÑ AR GENSONENN EN DIBENN ABSOLUT**

##### **2.4.1.1. Termenadur**

###### **2.4.1.1.1. An neutralizadur en dibenn absolut :**

Komzet e vez a **zibenn absolut** pa vez graet un arsav bennag e chadenn ar c'homz. Kement-se a zegouezh e fin ur frazenn pe gant un taw bennag, un arsav berr pe verroc'h, un dermadenn didrouz. Notet e vez an degouezh-sen er skrid, herwez reolennoù ar poentadur, gant ur virgulenn, ur pik-virgulenn, ur pik, un daou-bik, ur pik-estlamm, ur pik-goulenn, un tri-fik. Diwezhañ silabenn ur ger pe ur group ritmeg a c'hell en em gavoud evel-se en dibenn-absolut. Ar fenomen a vo studiet amañ a sell douzh ar gensonenn-dibenn en degouezh-se.

Ar gensonenn-dibenn-ger, p'en em gav en dibenn absolut, a goll he zres mouezhiet/divouezh : lâret e vez e vez neutralizet an enebadur etre an daou

dres mouezhiet/divouezh<sup>221</sup>. Ez-pleustreg e vez klewet kentoc’h ur c’haletâdur, ar pezh a verk koll an tres mouezhiet : ne gren ket mui kerdin ar vouezh. Da skwer e c’heller diforc’h an daou c’her **klodoù** ha **klotoù** dre enebañ /ō/ ha /ǒ/ (tres a hirder) diouzh un tu (a verk ar vogalenn) ha /d/ ha /t/ (tres mouezh/divouezh) diouzh an tu arall, a verk ar gensonenn-dibenn. Herwez lezenn an diveradur, a arver amañ e brezhoneg e peb doare-skriv a-vremañ (e Peurunvan-41 iwe, rag anwioù-kadarn int o daou), e skriver ar penngfoù **klod** ha **klot**. P’en em gav ar c’hensonennoù-dibenn **-d** ha **-t** en dibenn absolut e vez neutralizet an enebadur a oa etreze : o daou a vez sanet divouezh : [klo:t̥] ha [klot̥]. Ne chom ket mui ewid o diforc’h namaed un tres : an tres a hirder a verk ar vogalenn **o**.

#### 2.4.1.1.2. Skwerioù diakroneg ha sinkroneg :

E yezhoù zo, evel ar ruseg, an alamaneg, e vez divouezhet kensonenn ziwezhañ ar gerioù en dibenn absolut.

- E ruseg e ta an **d**-dibenn (д) da vout /t/ : **он рад** “*eüruz eo*“ /on ’ra:t/, **Stalingrad** (Сталинград) > /stalin’gra:t/ ; doned a ra **j**-dibenn (ж) da vout /ʃ/ : **garaj** (гараж) > /ga’raʃ/, **Parij** “*Pariz*“ (Париж) > /pa’riʃ/ ; ar **-v** dibenn (в) da vout /f/ : **Aзов** (Азов) > /a’zof/ ; **Ivanov** (Иванов) > /iva’nof/ (anw benel **Ivanoва** Иванова ) ; ar **z** da vout /s/ : **gaz** (газ) > /’ga:s/, **raz** (раз) > /ra:s/ “(un) taol” (mez **razik** “un taol bihan” (разик))<sup>222</sup> ...

- En alamaneg da skwer e vez sanet /lustik/ pe /lustiç/ ar ger **lustig** ; /ludvik/ pe /ludviç/ ar ger **Ludwig**. Heuliañ a ra ar gerioù estren degemeret en alamaneg ar memez reolenn ha kaletañ e vez an dibennoù : **Louis-quatorze** /lü | i kator̥s̥], **Louis-quinze** [lü | i kã̃̃̃s̥]<sup>223</sup>.

- E galleg kozh : Anavezet en deus ar galleg ar fenomen-se en e istor (CHAURAND, 2006 : 11), pa veze neutralizet ewid ar gensonenn-dibenn an

<sup>221</sup> Arabad lâred ez eo ar gensonenn a vez neutralizet : an enebadur an heni eo a vez neutralizet, da lâred eo n’eus ket ag an enebadur kén (CARTON, 1974 : 59).

<sup>222</sup> Herwez A. CHEREL, *Le russe sans peine*, Assimil, Chennevières-sur-Marne, 1990.

<sup>223</sup> Herwez *Großes Neues Fremdwörterbuch*, Kapp-Verlag, Bensheim, 1982 : 256.



enebadur mouezh/divouezh, ha pa ne chome peurliesañ namaed ar gensonenn divouezh en dibenn absolut: *David* sanet “davit” (FRAGONARD & *al.*, 1994 : 31-36).

### 2.4.1.2. Ar fenomen e brezhoneg

#### 2.4.1.2.1. Kensonenn-dibenn dous an anvioù-lec'h hag anvioù-tud :

An anvioù-lec'h e Breizh eh eus bremañ daou sort anezhe : 1) ar re a oa bet skrivet herwez modoù ar galleg, daoust dezhe boud anvioù brezhoneg a-orin : *Plésidy, Plumelec, Quéven* ; 2) ar re vrezhonekaet newez so, da lâred eo skrivet pe adskrivet herwez doare-skriv a-vremañ ar brezhoneg, a zo ar Peurunvan-41 peurvuañ, dreist-oll a-c'houde m'ema Ofis ar Brezhoneg<sup>224</sup> é soursial douzh an afer : **An Oriant, Gwened, Roazhon**. Kement-arall gant an anvioù-tud (**Patrig/Patrick, Nolwenn/Nolvaine, Solenn/Solenne**) a vez skrivet herwez c'hoant an dud, reolennoù modern ar brezhoneg é talvezoud da beb an amzer, dindan levezon levroù bet embannet a-c'houde un tregont vloaz bennag (gant Gwennole AR MENN, Albert DESHAYES, da skwer).

E-mesk an anvioù-lec'h skrivet ataw herwez mod da skriv ar galleg, e kaver lod ur gensonenn zous douzh o dibenn, mez dibaot a-walc'h int : **Arz (Ile d'), Baud, Belz, Douarnenez, Kerlaz, Lanmodez, La Pointe du Raz, La Pointe du Talud, Laz, Pentrez, Plounéour-Ménez, Plounéour-Trêz, Plounevez-(Lochrist...), Plounez, Plouzélambre, Trevarez, Tregourez**<sup>225</sup> ...

Ewid an anvioù-tud : **Saint Maudez**.

Lod ag an anvioù-se, daoust dezhe kavoud un dibenn zous en o stumm gallekaet, n'o deus ket anezhañ e gwirionez : **Saint-Congard Sant-Kongar ; Saint-Gérand Sant-Jelan ; Saint-Guyomard Sant-Gwionvarc'h ; Saint-Servant Sant-Servan...**

---

<sup>224</sup> Ensavadur bet krouet e 1999.

<sup>225</sup> Ewid AR MERSEUR (*Les Graphies du breton*, p. 33) ema bet respetet hirder ar vogalenn en anvioù-lec'h dre an dibennoù, da skwer **Ploneis** (-s goude un **i** berr) mez **Plounez** (-z goude un **e** hir).

Daoust d'an dibennoù dous skrivet e vez sanet, hag e galleg zokén, ur gensonenn galed gant tud ar vro peurliesañ : **l'île d' "Ars", "Bels", "Pentrès", "Trévarès"**. Mez liez a-walc'h ne vez ket sanet an dibenn, da heul reolenn ar galleg na san ket mui ar c'hensonennoù-dibenn a-c'houde mare ar galleg-kozh (CHAURAND, 2006 : 31) : **" à Bau", "La Pointe du Ra", "La Pointe du Talu", "Saint-Géran", "Saint-Guyomar..."**

#### 2.4.1.2.2. Dibennoù kaled an anvioù-lec'h hag an anvioù-tud :

Daoust d'ar rummad anvioù meneget uhelloc'h e vez kavet, ha kalz stankoc'h, anvioù-tud hag anvioù-lec'h un dibenn kaled doute :

- **Annaick, Loic, Patrick, Pierrick, Soizick, Yannick...**

- **Saint Brieuç, saint Caradec, saint Enogaç, saint Goazec, saint Herbot, saint Niç, saint Nicolas, saint Thégonneç...**

- **Belleç, Claudic, Cloareç, Doujet, Hamonic, Jouannic, Kergoaç, Le Dévéhat, Le Gaç, Le Mentec, Le Strat, Magueresse, Thomas...**

- **Bourbriac, Combrit, Daoulaç, Kervignac, Lanleff, Lannilis, Le Folgoët, Le Huelgoat, Mériadec, Ploerduç, Plouaret, Languidic, La Trinité Porhoët, Le Guilvineç, Le Faouet, Plescop, Plouescaç, Saint-Brieuç...**

Ur fenomen kreñv a-walc'h eo enta, heni an divouezhiañ en dibenn absolut, a lakae (hag a laka c'hoazh gwezhave) ar Vretoned da sanañ ar galleg evel ma raent/raont ewid ar brezhoneg : *du vin rouche, un tupe, je m'énerfe, le garache, la taple, Jean-Yf...* Mez estroc'h eged en anvioù (-lec'h pe -tud) e vez gwelet ar c'haletâdur-se, rag e peb ger e tegouezh pa achu gant ur gensonenn geñvereg : **an tad** ['ta :t], **ev !** [e :f], **debr !** ['dɛ:p(r)], **ar sabl** ['sa :p(l)]...

#### 2.4.1.2.3. Skwerioù er yezh komzet :

E tezenn LE PIPEC (2008) e kaver skwerioù ag an neutralizadur e parlant Malgenag (Dep. 56). Gant un nebeud komzerion zo en doa bet tro an enklasker da glewed nawazh gwezh ar gensonenn vouezhiet gwezh an heni divouezh er

memez prezeg, da skwer unan amañ : **rac'h an dud** [ˈra :ən dyd] & [ ˈra-ən dyt] (JoLB 23, stagadenn). Mez gweled a ra LE PIPEC ar c'homzer-se evel unan na gomz ket tre evel ar re arall, a-fed taol-mouezhiañ d'an nebeutañ (p. 339), mez a-fed kensonennoù-dibenn iwe kredabl, rag kaletadurioù a gaver kalz liesoc'h gant an dud arall bet aterset gantañ e 2001 : **ma mammeg** [mə ˈma'mɛk] (JLB 38, stag. p. 73) ; **Mari-Jozeb** [marʒozɛp] (JLP 38, stag. p. 73) ; **ur bochad** [ur ˈbɔʃat] (JLP 40, stag. p. 74) ; **ur feson bennag** [ˈfeˈsõ:benɛk] (stag. p. 9, Nn 22) ; **peus ket klevet komz ?** [ˈkõːs] (p. 120).

#### 2.4.1.2.4. Ar reolenn R3 :

Anavet-mat eo ar fenomen gant ar yezhourion. Dalc'het en deus kont geriadur An Here<sup>226</sup> ag ar fed-se ewid notiñ sanadur ar gerioù gant an API (**pred** notet [ˈpre:t]. E FAV n'eo ket bet graet hañval, roet eo bet an daou soniad a c'hell boud sanet :

" "La neutralisation des finales" a donné lieu à une notation redondante, mais qui se veut pédagogique, c'est-à-dire qu'elle présente des sonores en liaison (vocalique ou consonantique sauf rares exceptions) mais des sourdes correspondantes en finale absolue : ex : **mab** [ma:b-p] = **ma mab** [ma:b] **eo**, **ya mab** [ma:p] !, **ur mab** [ma:p]..." (*Geriadur*, 1992 : XII).

Evel ma skrive Meriadeg HERRIEU (1979 : 24), e fin ar frazenn, pe ewid ur ger en e-hunan, da lâred eo en dibenn absolut, e chom kaled ar c'hensonennoù kaled pa za kaled ar re zous. Setu un daolenn a-gement-se :

An dibennoù-ger	<b>-p</b> <b>-b</b>	<b>-t</b> <b>-d</b>	<b>-k</b> <b>-g</b>	<b>-s</b> <b>-z</b>	<b>-ch</b> <b>-j</b>	<b>-f</b> <b>-v</b>
a vez sanet → en dibenn absolut	/p/	/t/	/k/	/s/	/ʃ/	/f/

**Taolenn 7. An divouezhiañ en dibenn absolut.**

<sup>226</sup> "Treuzskrivet eo bet distagadur pep ger evel pa vefe distilhet e-unan a-gostez ha pouez-mouezhiet-kreñv bewezh ma c'heller e zistagañ evel-se. Divouezh e vez ar c'hensonennoù gourfenn ger en degouezh-se." (*Geriadur Brezhoneg*, An Here, 1995 : X).

### 2.4.1.3. R3 e mod da gomz skolidi ha brazarded a-vremañ

Pa ziskuten gant an dud aterset e seblante din e oa si an nann-vrezhonegerion sanañ blod ar c'hensonennoù en dibenn absolut, kentoc'h eged heni an deskerion. Gant gallegerion é klask lenn brezhoneg dreist-oll em boa an enlouc'hañs da glewed sanadurioù evel “*Soazig*’, *Annaig*’, *fest-noz*’, *Mériadeg*’, *mestrez*’ ” ha kement a zo, ha daoust din boud bet direnket gwezhave, ne seblante ket din e veze ken liez-se gant ar degouezhioù-se.

#### 2.4.1.3.1. R3 en ur ger klewet a-liez :

Klasket em eus gouied hirroc'h nawazh, hag e stern ma enklask em eus labouret war ar poent-se. Diw bazenn zo bet em c'haskerezh : da gentañ em boa labouret war ur ger hebkén, *Annaig*, ger diwezhañ rummad 2 ar fichenn **F2**.

<b>“<u>Annaik</u>”</b>	Tregantad ar sevenidigezhioù kaled (reizh)
Diwan	81%
Kato	51%
Publik	74%
Brazarded	88%
<b>OLLAD</b>	<b>71%</b>

**Taolenn 8. Fichenn F2 Skolidi + Brazarded (B6).**

**Ar ger Annaig : divouezhiadur en dibenn absolut.**

War an item-se e klewer [-k] da zibenn e 71% ag an degouezhioù, ar pezh a glot gant ar reolenn. Ur gwander zo er gwenodoù dre barded, (dreist-oll er skolioù katolik amañ). Mez er skolioù Diwan evel gant ar vrazarded e klewer ur sanadur mad ogozig ataw. Mod da sanañ ar ger *Annaig* a gadarne enta ma santimant : seblantoud a rae d'an tres-se (R3) talañ mad a-walc'h. Mez re vraw e oa ar skeudenn marse...

### 2.4.1.3.2. R3 e gerioù boutin :

Daoust hag-eñv ne vehe ket ar ger *Annaig* unan difer, dre ma veze implijet e galleg iwe, ha skrivet *Annaick* liez ? Da lâred eo gant ur sanadur feal d'ar patrom brezhoneg a-drugarez d'ar mod-se da skriv just a-walc'h ? Kaset em eus larkoc'h ma enklask ha chelaouet douzh mod-sanañ tri ger arall, tennet a vrezhoneg ar pemdez : *noz*, *lod* ha *staj* er fichenn **F1**. Setu ar pezh a zo bet sevenet gant ar skolidi :

Skolidi : Divouezhadur en dibenn absolut							
<b>Da</b> <b>(R3)</b>		<i>Annaig</i>	<i>Noz</i>	<i>Lod</i>	<i>Staj</i>	Ollad	Tregantad PB
		<b>[-ik]</b>	<b>[no:s]</b>	<b>[lo:t]</b>	<b>[sta:f]</b>	PB/degouezhioù	skolidi
CM2	D	13/20	5/20	0/20	7/20	<b>25/80</b>	31%
	K	8/20	5/20	0/20	4/20	<b>17/80</b>	21%
	P	13/20	7/20	1/20	4/20	<b>25/80</b>	31%
5ved	D	13/14	4/15	1/15	2/15	<b>20/59</b>	34%
	K	6/13	2/14	2/14	0/14	<b>10/55</b>	18%
	P	9/14	3/15	1/15	3/15	<b>16/59</b>	27%
3ved	D	14/15	7/15	3/15	5/15	<b>29/60</b>	48%
	K	11/14	3/14	0/14	0/14	<b>14/56</b>	25%
	P	12/15	5/15	1/15	2/15	<b>20/60</b>	33%
Lise	D	5/5	2/5	0/5	1/5	<b>8/20</b>	40%
	K	4/4	2/4	0/4	2/4	<b>8/16</b>	50%
	P	9/9	1/9	1/9	2/9	<b>13/36</b>	36%
<b>OLLAD</b>		<b>117/163</b>	<b>46/166</b>	<b>10/166</b>	<b>32/166</b>	<b>205/661</b>	
<b>%</b>		<b>72%</b>	<b>28%</b>	<b>6%</b>	<b>19%</b>	<b>31%</b>	<b>31%</b>


**Taolenn 9. Fichenn F1/F2 : Skolidi.**

**R3 : Divouezhadur ar gensonenn en dibenn absolut.**

**Dasparzh dre c'her.**

Trompuz eo enta ar ger *Annaig*, sanet gant un divouezhiañ gant an tri-c'hard ag ar skolidi, pa ne gaver namaed 18% a zivouezhiañ gant gerioù boutinnoc'h evel amañ *noz*, *lod* ha *staj*. Ar pezh a vez gwir iwe gant ar liseidi, da lâred eo

tud yaouank sañset graet o yezh gante da fin o skoliadur : gante eh eus un troc'h braz etre sanadur *Annaig* (100% reizh) ha heni ar gerioù *noz*, *lod*, *staj*, pa gouezh feur an divouezhiañ da 22% hebkén.



Grafik 9. Fichenn F1 : Liseidi.

**R3 : Divouezhadur ar gensonenn en dibenn absolut**  
(diwar tri ger : *noz*, *lod*, *staj*).

Remerket em eus e laka liseidi zo ur schwa ([ə]) goude ar gensonenn-dibenn, da skwer goude **pobl** [ˈpo:bl<sup>ə</sup>] (**D5KaGwF1**), goude ar **-z** meur a wezh ([ˈno:z<sup>ə</sup>] (ds. **D5KaAnF1**, **K5LvFrF1**, **P5LnArF1**), dreist-oll goude **-d** : [ˈlo:d<sup>ə</sup>] (ds. **D5KaAdF1**, **K5LvMaF1**, **P5LnEmF1**)<sup>227</sup>. Roiñ a ra ar schwa-se muioc'h a liw d'ar mouezhiadur c'hoazh, ar pezh a vez splann gant ar ger **lod** (94% a zibennoù absolut blod).

#### 2.4.1.3.3. Levezon ar skrid ? :

Seblant a ra ar skritur c'hoari amañ iwe, techet ar liseidi da heuliañ ar pezh a vez skrivet e dibenn ar gerioù ha d'henn sanañ herwez e zalvoud... e galleg. Diaez eo komz amañ a levezon ar galleg nawazh, pandeogwir ne vez ket mui sanet ar c'hensonennoù-dibenn e galleg a-c'houde gwerso. Gwir eo e kaver

<sup>227</sup> Daveañ a ra an anwioù-kod-se d'an enrolladennoù graet ewid an enklask, a vo kavet war ar CD stag douzh an dezenn-mañ.

gerioù zo éc'h achououd gant **-l** sanet (*appel, col, naturel, pull*), **-m** sanet (*rhum, tram*) **-r** sanet (*air, amer, fer, pair, ver,...*), n'eus ket anw enne a neutralizadur pandeogwir n'eus ket enebadur ebed a-sort gant an heni a gaver gant ar c'hensonennoù keñvereg. Un nebeud ag ar re-mañ zo memestra, gant **-c** pe **-q** (*bac, coq, lac,...*), gant **-f** (*pif*), **-p** (*clap, hop, Lip*), **-t** (*tract*) oll kaled dija. Gant dibennoù blod eh eus nebeutoc'h c'hoazh, ur lod braz a-walc'h é toned a yezhoù estren (*erg, gag, gaz, jazz, lad, led, nabab, toubib,...*).

Neuze, pa vez sanet ar gensonenn-dibenn e galleg e vez sanet herwez he dalvoud eeunnañ : *Maghr**e***, *Bagda**d***, *Leningra**d***, *zigzag*, *Ranelagh...* Anad eo kerentiezha *stage* ha **staj**. Ewid ar ger **noz** e vez anavet an dro **fest-noz** estroc'h eged gant ar vrezhonegerion, ar pezh a c'hell degas blotadur ar **-z**-dibenn (sd. galleg *gaz* [gaz]). Ewid **lod** e soñjer e gerioù evel *plaid, Mahmoud, Nemrod*, sanet an **-d** enne.

Re nebeud ag ar gerioù-se zo e-mesk teskad ar gerioù galleg, ewite da bouezañ war sanañ an newezvrezhonegerion, mez, dre ma vez un ollekadur e galleg heuliañ talvoud kentañ ar c'hensonennoù en degouezh-se, e c'hell ar yezh-se pouezañ war ar brezhoneg memestra. Diaez eo da ouied resiz, mez ar pezh a chom d'ober zo ur labour pedagogel a-ratozh ewid diforc'hañ ar brezhoneg diouzh ar galleg war ar poent-se.

#### 2.4.2. AN DIVERADUR

Un tres heverk eo ar c'haletadur enta e diwez ar gerioù. Tu a vehe bet da skriv ar gensonenn-dibenn herwez an tres-se, ar pezh a oa bet graet en anwioù-lec'h, en anwioù-familh evel ma hon eus gwelet. Mez liez-mat eh a ar mod-se d'ober eneb douzh ur lezenn arall : heni an diveradur.

##### 2.4.2.1. Termenadur

Teir elfenn a ya d'ober ar gerioù : ar *pen**n**gef*, ar *raggerioù* hag ar *lostgerioù*. Da skwer ar ger **distummadur** : **stumm** eo ar pen**n**gef, **dis-** ar ragger hag **-adur** ar lostger ; ar ger **ober** a c'hell moned da **adober** pe da **z/dizober** gant ar

raggerioù **ad-** pe **dis-**, mez gelliñ a ra moned iwe da **oberiant, oberer, oberata** gant ar lostgerioù **-iant, -er** pe **-ata**.

E-keñver o stummadur e c'heller termeniñ tri rumm : ar **gerioù-diazez**, ar **gerioù diveret (diveradoù)** hag ar **gerioù kevrenneg**. Boud ema ar gerioù-diazez gerioù nad int ket bet stummet gant ger arall ebed (ds. **stumm**). Un diverad zo ur ger savet diwar ar ger-diazez hag ur lostger (**stumm + -er > stummer**). Boud ema ar ger kevrenneg ur ger stummet diwar daou c'her-diazez (**karr + ti > karrdi**) pe ur ger-diazez hag ur ragger (**soul- + prenañ > soulbrenañ**). Teurel a raimp amañ ur sell war ar lostgerioù, a zo liammet end-eeun gant hon studi.

#### 2.4.2.2. Ar lostgerioù

##### 2.4.2.2.1. Lostger ha lostger zo :

Meur a lostger a gaver e brezhoneg. Lod a ya da sevel anvioù-kadarn (**labour + -er > labourer**), lod arall anvioù-gwan pe adverboù (**trouez + -uz > trouzuz**), pe verboù (**stard + -añ > stardañ**). N'eo ket an urzhiañ-se nawazh a zo pouezuz ewid ar pezh a sell douzh choaz ar gensonenn dibenn-ger. Rag e-mesk ar lostgerioù brezhoneg (doute meur a sinifiañs meur a wezh) eh eus ur rummad anezhe (an heni stankañ) a zo neutr dre ma n'o deus ket levezon ebed war ar gensonenn-dibenn-ger.

##### 2.4.2.2.2. Roll ar lostgerioù neutr :

Setu amañ ur renabl ag ar lostgerioù neutr, diglok sur a-walc'h c'hoazh (ur lod kàer ag ar lostgerioù n'int ket 'maed eilstummoù ag ar memez heni, lod a za ag ar galleg...). Ewid peb unan anezhe em eus klasket roiñ skwerioù enne ur bennrann a achu gant ur gensonenn zous (**b, d, g, z, j** pe **v**), ewid diskoueziñ n'eus ket bet kaletâdur ebed enne, mez n'eo ket bet posubl seul gwezh , pe dre ziuover a skwerioù, pe dre wander ma c'hlaskerezh :

**-abl** (ag) (**jaojabl**), **-ach** (ak) (**trefoedach**), **-ad** (ak) (**bagad**), **-adeg** (ak) (**redadeg**), **-adell** (ak) (**magadell**), **-adenn** (ak) (**enebadenn**), **-adur** (ak)



(*klozadur*), **-adurezh** (ak) (*magadurezh*), **-aduz** (ag) (*trevaduz*), **-ailh** (ak) (*munudailh*), **-ailhez** (ak) (*trenkailhez*), **-aj** (ak) (*koadaj*), **-al** (avb) (*trouzal*), **-amant** (ak) (*diaezamant*), **-an** (st. bih.) (*hunegan*), **-añ** (ag, ak, avb) (*magañ*), **-añs** (ak) (*dismegañs*), **-ant** (ag) (*strivant*), **-antez** (ak) (*karantez*), **-aod** (ag, ak) (*gagaod*), **-aoueg** (< -où + -eg) (ak) (*rodaoueg*), **-aouier** (< -où + -ier) (ak) (*pradaouier*), **-ard** (ak) (*brazard*), **-asenn** (ak) (*treudasenn*), **-asion** (ak) (*meulasion*), **-ata** (avb) (< -ad + ha) (*begata*), **-az** (ak) (*barzhaz*), **-ed** (ls, avb) (*martoloded* ; *kerzhed*), **-edig** (< -ed+ -ig) (ag, ak) (*karedig*), **-edigezh** (ak) (*galvedigezh*), **-eg** (ag, ak, avb) (*troadeg*), **-egell** (< -eg + -ell) (ak) (*krenegell*), **-egezh** (ak) (*talvoudegezh*), **-eiz** (ag, ak) (*gwinteiz, soneiz*), **-ekaad** (< -eg + -aad) (avb) (*talvoudekaad*), **-el** (ag) (*poblel*), **-elezh** (< -el + -ezh) (ak) (*padelezh*), **-ell** (ak) (*stagell*), **-en** (avb) (*dougen*), **-enn** (ak ; un.) (*soubenn* ; *figezenn, lenkrauzenn*), **-entez** (ak) (*largentez*), **-enti** (ak) (*mezventi*), **-er** (ak) (*hader*), **-erell** (< -er + -ell) (ak) (*gwinterell*), **-erez** (< -er + -ez) (ak) (*magerez*), **-erezh** (ak) (*eneberezh*), **-eri** (ak) (*bouloñjeri*), **-eris** (ak) (*tailheris*), **-eriz** (ak) (*maderiz*)<sup>228</sup>, **-euri** (ak) (*mereuri*), **-ez** (ag, ak) (*mezwez* ; *belegez*), **-ezenn** (ak) (*trenkezenn*), **-ezon** (ak) (*komprenezon*), **-ezh** (ak) (*kiriegezh*), **-i** (ls) (*maouezi*), **-iad** (ak) (*loaiad*), **-iadenn** (ak) (*oberiadenn*), **-iadur** (ak) (*geriadur*), **-ian** (ag) (*Parizian*), **-iañs** (ak) (*fiziañs*)<sup>229</sup>, **-iant** (ag) (*oberiant*), **-id** (ak) (*kistinid*), **-idant** (ag) (*berwidant*), **-idell** (ak) (*troidell*), **-idenn** (ak) (*troidenn*), **-idi** (ls) (*skolajidi*), **-idig** (< -ed + -ig) (ag) (*santidig*), **-idigezh** (ak) (*tristidigezh*), **-ieg** (ag) (*mizieg*), **-iegezh** (ak) (*ewezhiegezh*), **-ier** (ak) (*dorier*), **-iezh** (ak) (*belegiezh*), **-ig** (st. bih.) (*levrig, brazig*), **-igan** (< -ig + -an) (ak) (*korrgan*), **-igell** (< -ig + -ell) (ak) (*fentigell*), **-igenn** (< -ig + -enn) (ak) (*roevigenn*), **-igell** (< -ig + -enn) (ak) (*brañsigell*), **-igezh** (ak) (*donedigezh*), **-ijenn** (ak) (*sklaerijenn*), **-ikell** (ak) (*troadikell*), **-ilh** (ak) (*trompilh*), **-ilhaod** (ak) (*gagilhaod*), **-ilhon** (ak) (*morilhon*), **-in** (avb, ak) (*c'hoarzhin* ; *glizin* < *glaz*), **-iñ** (avb) (*debriñ*), **-inti** (ak) (*arouezinti*), **-ion** (ls [& -ien<sup>230</sup>]) (*labourerion*), **-ion** (ak [& -ien<sup>231</sup>]) (*yeinion*), **-iou** (ls) (*taolioù*), -

<sup>228</sup> Herwez HEMON **materiz** f. *bonté*. Herwez FAV **materiss** g. *aloi* (a-w drougvesket gant **materi**) ; *bonasserie* (Bayon)). Ha ne vehe ket aze daou c'her disañval ? Kennig a ra A. BOCHÉ **maderiz** (*bonté*). **Materis** a sinifihe *aloi* (dle. *alliage*, mod. *qualité* (PR)).

<sup>229</sup> En despet ag ar sanadur [ˈfiʃās] klewet iwe (FAV).

<sup>230</sup> Ne vehe ket mui ag an dibenn-liester \*-ien er skritur a-hiziw, keneve choaz personel Fransez KERVELLA (YBAB, 1947), rag **-ion** a oa bet divizet gouarn e 1941 (emglew ewid ar Peurunvan).

**iri** (ak) (*koantiri*), **-is** (ak) (*justis*), **-ision** (ak) (*permission*), **-ite** (ak) (*prosperite*), **-iuz** (ag) (*joaiuz*), **-iz** (ls, ak) (*Breizhiz, frankiz*), **-izenn** (< -iz + -enn) (ak) (*frankizenn*), **-izion** (ls) (*labourizion*), **-izon** (ak) (*c’hwerwizon*), **-lec’h** (ak) (*kreñvlec’h*), **-nez** (ak) (sd. -nezh), **-nezh** (ak) (*hirnezh*), **-niezh** (ak) (*medegniezh*<sup>232</sup>), **-o** (avb) (*debro*), **-od** (ak) (*plañchod*), **-oed** (ak) (*derwoed*), **-on** (ls) (*nàeron*), **-oniezh** (ak) (*steredoniezh*), **-or** (ak) (*gwlebor*), **-orell** (ak) (*sammorell*), **-orz** (ak) (*liorz*), **-ou** (st. bih.) (*Morganou*), **-oud** (avb) (*tapoud*), **-ouer** (ak) (*mouchouer*), **-ouilh** (ag, ak) (*gagouilh*), **-où** (ls) (*tadoù*), **-our** (ak) (*medisinour*), **-ourezh** (< -our + -ezh) (ak) (*marc’hadourezh*), **-ouriezh** (< -our + -iezh) (ak) (*prederouriezh*), **-ozh** (ak) (*ratozh*), **-ur** (ak) (*glazur*), **-uz** (ag) (*dañjeruz*), **-va** (< -ma, ak) (*c’hoariva*), **-van** (< -man, ak) (*tremenvan*), **-ved** (ag, ak) (*degved*), **-vedenn** (ak) (< -ved + -enn) (*degvedenn*), **-vez** (ak) (*glazvez*), **-wezh** (ak) (*dewezh*), **-wezhiad** (< -wezh + -iad) (ak) (*dewezhiad*)...<sup>233</sup>.

#### 2.4.2.2.3. Dasparzh an dibennoù neutr :

Diglok c’hoazh sur a-walc’h e chom ar renabl am eus savet uhelloc’h. Setu memestra penaoz e vez dasparzhet ar lostgerioù-se, herwez o lizherenn-benn :

LOSTGERIOÙ NEUTR	Lostgerioù é krogiñ <b>gant ur vogalenn</b>	Lostgerioù é krogiñ <b>gant ur gensonenn zous (l, n, v)</b>	Lostgerioù é krogiñ <b>gant un hantergensonenn (w)</b>	OLLAD
Niver er renabl	115	12	2	129
Tregantad	89.15%	9.30%	1.55%	100%

**Taolenn 10. Dasparzh ar lostgerioù neutr herwez o bogalenn-penn.**

<sup>231</sup> Sd. an notenn diaraog.

<sup>232</sup> E-lec’h **mezegniezh**, herwez kennig A. BOCHÉ, war batrom **predeg** “*sermon*”.

<sup>233</sup> Roll savet diwar re KERVELLA (1947, ademb. 1976), HEMON (ademb. 1985), FAVEREAU (1997) ha DESHAYES (2003).

Dre m'emaint neutr ne chañchont ket kensonenn dibenn ar ger diveret, ar pezh a ziskwel pesort kensonenn skriv. Da skwer **braz** da heul **brazez** ha **brazig** ; **trouz** da heul **trouzal** ha **trouuz** pe **troad** da heul **troadeg** pe **troadikell**.

#### 2.4.2.2.4. An dibennoù-verb displeget :

Red eo ouzhpenn lakaad a-renk gant rummad ar lostgerioù neutr an dibennoù-verb displeget deuz peb amzer : **-an, -as, -e, -ec'h, -ed, -emp, -en, -ent, -es, -et, -ez, -i, -imp, -in, -int, -is, -it, -je, jec'h, -jed, -jemp, -jen, -jent, -jes, -joc'h, -jod, -jomp, -jont, -jout, -o, -omp, -ont, -or, -ot, -y**<sup>234</sup>. Da skwer e vez skrivet **doug** da heul ar stummoù-verb **dougen** pe **dougiñ, dougont, dougint, dougent** kement ha da heul **douger, dougerrez** pe **dougaduz**...

#### 2.4.2.2.5. Kensonennoù-dibenn dous : un dougañs e brezhoneg :

Herwez lezenn an diveradur enta e vez skrivet ar gerioù e brezhoneg, evel e galleg (*grand* < *grandir* ; *gros* < *grossir* ; *petit* < *petitese*). Kalz muioc'h a c'herioù enne ur gensonenn zous da zibenn a gaver e brezhoneg : tro-dro da 80% a c'herioù rummad ar glotenn **-a** a achu gant ur gensonenn zous<sup>235</sup> : **-aad, -ab, -ad, -aj, -ag, -az, -iad, -alv, -arg, -avr, -abl, , -abr, -ard, -arb, -arz, -añv, -aod, -arw, -av/-aw**. Ur gensonenn galed a vez kavet memestra e dibenn gerioù zo, daoust dezhe boud dibaotoc'h : **respet/respetiñ ; klot/klotenn ; lip/lipad ; ragach/ragachad ; tach/tachou**... Namaed 13% a c'herioù kaled o dibennoù<sup>236</sup> a gaver dindan lizherenn **A-** geriadur FAVEREAU (1992).

<sup>234</sup> Roll savet diwar heni HEMON (*Geriadur*, ademb. 1984).

<sup>235</sup> Diwar *Geriadur klotennoù* ROHAN-CHABOT (1982). N'em eus ket heuliet doare-skriv ar geriadur, mez kontet an oll c'herioù a c'hell boud skrivet gant un dibenn dous, e unan d'an nebeutañ ag an tri doare-skriv. Lakaet 'm eus (ha lakaad a ran ingal) ar gerioù gant un dibenn kaled pa vez akord an tri doare-skriv war-se, da skwer amañ **krak, rat, tretat**... Selloud a ra an tregantad meneget douzh an dibennoù **-ach/-aj, -arch, -af, -ag/-ak, -ac'h, -arc'h, -alc'h, -as/-az, -ad/-at, -iad/-iat, -oad, -ouad, -wad, -alf/-alv, -amp, -ask, -ars/-arz, -arg/-ark, -alt, -avr, -astr, -ast, -askl, -agl/-akl, -abl/-apl, -abr/-apr, -ard/-art, -arb/-arp, -arz/-ars, -añch, -ank, -amps, -amz, -añs, -and/-ant, -añv, -aod/-aot, -ampr, -arv/-arw**. N'em eus ket kontet ar gerioù e **-zh**, rag mard eo dous ar **-z** KLT e vez kaled ennañ an **-h** W (rampo neuze an daou sanadur aze).

<sup>236</sup> Evel en notenn uhelloc'h, kontet hebkén ar gerioù kaled o dibennoù pa vez akord war-se an tri doare-skriv, da skwer **a-dost, a-grip, ahont, ampart, a-skrap**. Er gerioù kaled o dibennoù e kaver ar gerioù dre **-ant, -añs**, a orin galleg, hag ur bern gerioù arall daet ag ar galleg evel **achap, akuit, aplik, arsenik**, pe dre ar galleg evel **apokalips, atlas, aztek, anorak, Afrik, Amerik**...

### 2.4.2.3. Remerkoù a-zivoud dibennoù zo

#### 2.4.2.3.1. An dibennoù **-ad** hag **-at** :

Gerioù brezhoneg zo a gav o far e galleg a-fed dibenn, da skwer ar gerioù galleg a achu gant **-at** (*candidat*) pe **-ate** (*acrobate*). Diskouezañ a ra ar reolenn lakaad un **-t** da glotañ gant un **-ate** galleg hag un **-d** gant un **-at**. Pa achu ar gerioù galleg gant **-ade** e kaver **-ad** e brezhoneg.

Dibennoù galleg	Skwerioù galleg	Dibennoù brezhoneg	Gerioù brezhoneg
-ADE	- camarade - jade - salade	-AD	- <b>kamarad</b> > kamaraded - <b>jad</b> > jad - <b>salad</b> > saladenn
-AT	- chocolat - état - plat	-AD	- <b>chokolad</b> > chokoladenn - <b>stad</b> > stadel - <b>plad</b> > pladad
-ATE	- acrobate - diplomate - tomate	-AT	- <b>akrobat</b> > akrobateg - <b>diplom</b> > diplomateg - <b>tomat</b> (W) > tomatenn

**Taolenn 11. An dibennoù galleg -ade, -at ha -ate keñveriet douzh ar brezhoneg.**

Setu e skriver bremañ, war ar panneloù-hent, **stad** ewid *stade* (e-lec'h **sportva**, a vehe bet gwell aze marse abalamour ma sinifi **stad** *état*). Neuze e ranker skriv **klamad** *climat*<sup>237</sup> (> **klimadel**) hag **osteopat**, **psikopat**, **naturopat**...

#### 2.4.2.3.2. An dibennoù **-en** hag **-enn** :

Dindan an TM e vez notet un diforc'h a hirder gant **-n/-nn** : **sōn/sōnn**. Ne vez ket kavet gwall liez an dilostoù **-en** hag **-enn** dindan an TM, ha diaez eo gouied, e degouezhioù zo, hag-eñv e ranker lakaad un **n** pe zaou.

E gwenedeg, dre ma kouezh an TM war ar silabenn ziwezhañ e yezh ar bobl e vez santet an diforc'h digant daou dres : an tres a hirder diouzh un tu mez ouzhpenn un diston dishañval. Heverk eo an dra-se e kornad Baod/Langidig

<sup>237</sup> Pe **hinad**.

d'an nebeutañ. Da skwer : **amanenn** [amo'nen], **e-menn** [e'men], **merenn** [me'ren], **tenn** ['ten], da geñveriañ douzh **den** ['dɛ:n], **halen** [ha'lɛ:n], **jen** ['ʒɛ:n], **pourmen** [pur'mɛ:n], **raden** [ra'dɛ:n], **termen** [ter'mɛ:n]...

Da reizhañ pe da adstudial d'an nebeutañ e vehe neuze ar gerioù-mañ, da skriv **-enn** enne kentoc'h : **azenn** < [-a'zen] ; **Badenn** ['ba:den] [ba'jen] ; **c'hwenn** [hɥɛn]<sup>238</sup> ; **koavenn** [kwɛɥɛn] ; **kroc'henn** [kro'hen] ; **menn**, **e-menn** ['men] ; **narenn** [na'ren]. Da lakaad gant **-enn** iwe : **e-kichenn**, **kebenn**, **pallenn**, **tevenn** (mez ls. **tevinier**), oll skrivet gwezh gant un **n** gwezh gant daou herwez ar geriadurioù (RH, STS, FAV, AH).

#### 2.4.2.3.3. An dibennoù -aj hag -ach :

Ne vez ket graet ataw an diforc'h etre an daou zilost-se, ar pezh a vehe pinvidig ewid ar yezh nawazh. Rag mard eo **-aj** un dibenn ordinal e vehe kentoc'h **-ach** unan disprizuz.

- gant **-aj** : **debraj**, **evaj**, **garaj**, **legumaj**, **langaj**, **lipaj**, **restaj**, **skolaj**...
- gant **-ach** : **moc'hach**, **restach**, **trefoedach**...

Gant an TM war ar silabenn eil-ziwezhañ e vo kavet an dibennoù **j** pe **ch** er gerioù diveret : **skolājou** / **trefoedächou**... Neuze e c'hell an den kompren eh eus **restajou** mad da ouarn ewid an deiz àr-lerc'h ha **restachou** mad da vout taolet er boubellenn diouzhtu...

#### 2.4.2.3.4. An dibennoù -ted ha -ter :

Prezantet e vez ar lostgerioù-se dindan o stummoù **-ded** (benel) ha **-der** (**gourel**), a ya da **-ted** ha **-ter** dre sandhi (FAVEREAU, 1997 : 75, § 153/154). Ewid BOCHÉ eh eus ur liamm etre ar lostgerioù-se ha re ar latin : **-tâtis** (> **-ted**) ha **-teron** (> **-ter**). Sd. italianeg (**-ta** : **liberta**), spagnoleg (**-tad** : **libertad**), saozneg (**-ty** : **liberty**), galleg (**-té** : **liberté**)... Kentoc'h neuze e vehe **-ted** ha **-ter** o stummoù-diazez. E brezhoneg e vez kemmet **-ted** ha **-ter** dre zousaad er

---

<sup>238</sup> Enebet e vez splann **c'hwenn** (*des puces*) douzh **c'hwen** [hɥ ɛ:n] (*à la renverse*) e Langidig.

ger (**kadarnded**), namaed pa achu ar penngef gant ur gensonenn a barra douzh ar blotâdur, dre sandhi (**dous > douster, bourrabl > bourrapted**).

Neuze e yahe **-ted** ha **-ter** da vlotaad e dibenn ar gerioù, peurged goude ur vogalenn (**duder**) pe goude ar c'hensonennoù linkuz **-l, -ll, (lealder, pellder), -m** pe **-mm (primder, lemmder), -n** pe **-nn (unander, yeinder, splannder), -r** pe **-rr (sklaerder, herrder)**.

Goude ar c'hensonennoù arall e vez klewet ha skrivet **t**, ar pezh a zegouezh goude **-s** pe **-z** (skrivet aliez **s** neuze) : **aested, digasted, douster, glaster, liester** (mez pas ataw : **brazedded, kri(z)der, ru(z)der, dru(z)der** nawazh, RH) ha goude **-k** : **trenkted** (mez **kigder**). Pa achu ar ger gant **-d** pe **-t** e ya an **-d** da **t** ha ne vez ket skrivet namaed un **t** ataw : **bloted (blod+ted), bloter, dreisted, skorted, neted (naeted RH), munuted, puter**. Da notiñ e kaver **-ded/-der** goude **-v** pe **-w** (**skañvder, azwder, c'hwerwded, tanawder**), goude **-c'h** (**sec'hder, trec'hded, balc'hded** mez **gwerc'hted** ), goude **-zh** (**skuizhder**). Mez ne vez ket akord ar geriadurioù gwezhave : **abafded, c'hwekted, gwakted** (RH) hag **abafded, c'hwegded, gwagded** (FAV). Notomp iwe **semplder** (RC), **semplded** (FAV) (Sd. § 2.4.3.3.4., pp. 229).

### 2.4.3. AR LOSTGERIOÙ KALET AUZ

#### 2.4.3.1. Merk un **-h-** kozh war ar yezh

Koulskoude eh eus ur rummad lostgerioù arall, a laka an dibenn termenet uhelloc'h da galetaad. Abalamour d'o stumm kozh enne un **-h-** (é toned ag un **-s-** koshoc'h c'hoazh) ema ar lostgerioù-se kaletauz (FAVEREAU, 1997 : 86, 90, 129, 354). An nerzh rekiz ewid sanañ ar fonem-se a c'houlenn divouezhadur ar gensonenn gent : ur c'haletâdur a verk neuze ar c'hensonennoù-dibenn dirag **h**-kensonenn mard int mouezhiet (/b, d, g, z, ʒ, v/ a ya da /p, t, k, s, ʃ, f/).

### 2.4.3.2. Roll ar lostgerioù kaletauz

Naw lostger kaletauz a gaver e brezhoneg, a zo da renkañ e tri rummad :

- 5 lostger kaletauz verboù pe anwioù-gwan,
- 3 dibenn kaletauz an araogennoù displeget,
- 1 lostger kaletauz muzulioù a hirder.

#### 2.4.3.2.1. Lostgerioù kaletauz verboù zo pe anwioù-gwan :

Boud eh eus pemp anezhe : daou zibenn-verb **-(h)a, -(h)aad** ha tri lostger anw-gwan **-(h)añ, -(h)oc'h, -(h)ad/-(h)ed**.

a) **-A** : Kavet e vez an dibenn **-(h)a** e verboù a-sort gant **pesketa** (< **pesked + -ha**), **kranketa** (< **kranked + -(h)a**), **merc'heta** (< **merc'hed + -(h)a**), **tuta** (< **tud + -(h)a**)... Sinifiañs an dibenn **-(h)a** zo “**klask, moned da glask**” (**klask pesked...**)<sup>239</sup>. Setu perag e vez savet a-liez ar verboù-se diwar un anw-kadarn liester (**pesked, kranked...**) pe stroll : **frouezh + -(h)a > frouesha ; lus + -(h)a > lusa...** mez pas ataw : **boued + -(h)a > boueta ; kig + -(h)a > kika...**

Er verboù-se e c'hell an anw-verb hag ar penngef boud hañval (**boueta/boueta-**) : **pa vouetae, ar vuoc'h a voueta, bemdez e vouetaint ...** En amzer dazont, e-lec'h an dibenn reolieg **-o** e kaver **-y** goude an **-a-** : **hi a vouetay**. Lakaet e vez an dibenn anw-gwan-verb goude ar penngef dre **-a** : **bouetaet**. Mez tu zo da gaoud ur penngef berraet e stumm iwe (**bouet-**). Neuze e vez amreizh ar verb : **pa vouete, ar vuoc'h a voueta, pa voueto, pa vouetint, bouetet he deus, boueta !...** (AH, p.XXVIII). Direizh eo ar verb **tañva**, savet diwar **tañv-** + **-a**, é voud ma ne vez ket kaletet ar **v**-dibenn neblec'h, war a seblant.

Ar gerioù gant **-v**-dibenn eh a hennzh da /f/, mez e L hebkén.

b) **-AAD** : Sinifiañs **-(h)aad** zo “lakaad da voud” pe “doned da voud” : doned da voud braz > **brasaad** ; lakaad da voud blod > **blotaad**. Dirag **-aad** e vez doublet ar c'hensonennoù **l, n** ha **r** er Skolveureg hag en Etrerannyezhel : **uhel > uhellaad ; bihan > bihannaad ; hir > hirraad...** Er verboù dre **-aad** e vez ar penngef dre **-a-** (**brasa-, blota-, uhella-, hirra-...**) ha goude an **-a-**se e kaver

<sup>239</sup> Mez iwe **roiñ**. Da skwer **boueta**, a sinifi klask boued...pe roiñ boued : **boueta ar saout**.

an dibennoù-verb : **Tostait d'an tan ! ; Hiraet en deus e hent ; Pa dostay ar marw** (AH)<sup>240</sup>. En dazont, evel ewid ar verboù dre **-a**, e-lec'h an dibenn reolieg **-o** e kaver **-y** goude an **-a-** : **hi a vrasay, ni a hirray**<sup>241</sup>. Er memez lec'h e kaver merk an anw-gwan-verb : **brasaet, hirraet**. Aliez e vez kavet ar lostgerioù **-adur** (hag **-adurezh**) goude ar verboù-se iwe : **brasadur, brezhonekadur, kaletadur**, da lakaad da grediñ ema an dibenn **-adur** unan kaletauz, ar pezh nad eo ket (sd. **distagadur, louedadur, magadur, plijadur, skubadur...**). E gwirionez e ta an dibenn-se goude ar stumm bet kaletaet e gensonenn dija gant **-a** an dibenn **-aad** : **kaletaad/kaleta-** + **-adur** > **\*kaletaadur** skrivet **kaletadur**. Kennig a ra Albert BOCHÉ merkiñ an diforc'h aze gant un tired-kogneg war an **a**-se : **kaletâdur**. Neuzen e vehe merket kaletâdur an **â** (ha n'eo ket heni **-adur**) e gerioù evel **brezhonekâdur** (= **brezhonekâdurezh**) *brettonnisation*, da geñveriañ douzh **brezhonegadur** *brettonnisme* ; **keltegadur** *celticisme* (RH **keltiegadur**) douzh **keltekâdur** *celtisation* ; **gallekâdur** *francisation* douzh **gallegadur** *gallicisme*<sup>242</sup> h.a... Evel-se e vehe diforc'het iwe **glazadur** *verdure* (*feuillage, salade...*) diouzh **glasâdur** *verdissement*<sup>243</sup>. E ROHAN-CHABOT (1982) eh eus bet renablet 189 verb dre **-aad** mez tu zo da groueñ verboù ag ar rummad-se aez a-walc'h ha da zoubliñ ar roll anezhe (sd. **intellijantaad** (!), FAVEREAU, 1997 : 172).

Ar gerioù gant **-v**-dibenn eh a henezh da /f/, mez e L hebkén : **skañvaad** (L “skañfaad”).

c) **-AÑ** : Kaletauz eo iwe an dibenn **-añ** (merk an derez-uhellañ an anwiou-gwan), é toned ag ur stumm **-hañ** < **ham** (FAVEREAU, 1997 : 90, § 212). Bew eo c'hoazh ar stumm [-hã] e-kostez Sant-Gelven, nepell a Wengamp. Eleze **blotañ, brasañ, kaletañ...** Doublet e vez **l, n** ha **r** dirag **-añ** er

<sup>240</sup> C'hoari a raer gant ar stummoù-verb dre **-aad** hag ar re dre **-añ** : “**Toud e kosaom med marteze ne gozim ket toud**“ *nous vieillissons tous, mais nous n'irons peut-être pas tous vieux*. (herwez FAVEREAU, 1995 : 173).

<sup>241</sup> Liez e kaver ar stumm **-y** e W, astennet d'an oll verboù (“**Tuchant e arruay an hañv / hag e kanay ar bobelan...**“ sonenn) mez tu zo da reoliekaad ar poent-se e yezh ar skol pe e yezh ar media heb bihannaad ar c'hompren : « **Tuchant eh arruo an hañv hag e kano...** »

<sup>242</sup> Tennet a c'heriadur R. HEMON. Ne veneg ket FAVEREAU (1992) ar ger **gallegadur** : dindan **gallekadur** e lenner *gallicisme*. Meneg ebed ag ar gerioù-se e geriadur an Here nag e heni Hor Yezh.

<sup>243</sup> Ne vez ket kavet **glasâdur** nag e RH, nag e AH, nag e HY, nag e FAV, mez tu zo d'implij ar ger memestra, ha sevel gerioù evel **tredanekâdur** *électrification*. A-hend-arall e vez kavet **skweriekadur** *standardisation* (FAV). Gwir a-walc'h eo e c'hell ar brezhoneg ober iwe gant an anw-verb (ar **skweriekaad/ar standardekaad, an tredanekaad...**



Skolveureg hag en Etrerannyezhel (ur c'hennig bet graet e 1929 dija gant François MOISAN : **uhellañ, bihannañ, hirrañ** (namaed er c'houbladoù evel **-pl-, -bl- : simpl/simplañ ; bourrabl/bourraplañ**).

Ar gerioù gant **-v-**dibenn eh a hennezh da /f/, mez e L hebkén : **skañv > skañvañ** (L “skañfa”).

d) **-OC'H** : Ne oa ket **-oc'h**, a verk an derez uhelloc'h, un dibenn kaletauz a-orin, mez “normalizet” eo bet hervez patrom **-(h)añ** dre ma veze implijet liezmat an daou stumm war-un-dro : **brasañ, brasoc'h**. Douzh an derez-uhelloc'h e c'heller kavoud staget ar lostger bihannaad **-ig (brasoc'hig, desketoc'hig)**, a zo kaletauz eveljust. Ne vez kaletet ar **-v** namaed e L : **skañv > “skañfoc'h”, a-hend-all : skañvoc'h**.

e) **-AD** pe **-ED** : Erfin e kaver ar lostger **-ed < -hed -(W)** pe **-ad < -had** (e kornadoù euz TL), a verk an estlamm. Gwezh e vez staget end-eeun ar gerestlamm-se douzh ar ger doareet : **brawad micher !**, gwezh gant ar rannig **a : kaerrad a brezegenn !**, gwezh gant ar gell-mell amstrizh : **tristed un den !** Meur a wezh e vez kavet ar rannig-estlamm **na** en e raog : **na brawed un diamant !** (sonenn a Langidig). Implijet e vez iwe e frammoù-verb : **brasad eo an ti ! pellad eo bet !** Ar lostger **-hed**-sen eo iwe a seblant boud er ger **bennaked (< bennag + -hed)** (FAVEREAU (1997 : 128, § 291).

Ar gerioù gant **-v-**dibenn eh a hennezh da /f/, mez e L hebkén.

#### 2.4.3.2.2. Dibennoù kaletauz an araogennoù displeget :

Tri zo anezhe : **-añ/-oñ, -i, -e/-o**. Pa gaver da skwer **ewidin/ewidon, ewidout/ewidous, ewidimp/ewidomp,ewidoc'h** e vez kaletet an **-d** dibenn e **ewitañ, ewiti, ewite/ewito**<sup>244</sup>. Doned a ra an dibennoù U1, U2, L1 hag L2 a zibennoù ar verb **boud** en amzer-vremañ ewid ar lod strewetañ (**-on, -out, -omp, -oc'h**), hag ewid ar lod arall a zibennoù an amzer-dazont (**-in, -it/-is, -imp, -(e)omp, -oc'h**). Ewid U3 hag L3 ema an dibennoù stummoù ar raganw-

---

<sup>244</sup> E Bro-Dreger (dreist-oll) ne raer namaed gant ar stumm displeget **ewit-** (**ewiton-me...**).

gour-rener<sup>245</sup> : **-hañ/-hoñ** (< (h)eñv) (U3g), **-hi** (U3b), **-hè/(-ho** e KL) (L3) (FAVEREAU, 1997 : 107, § 247). Un **h-** a zo kaoz amañ c'hoazh neuze ag ar c'haletâdur remerket en araogennoù (U3, L3). Kement-arall gant an araogennoù-mañ :

→ **eged** (ger memez orin dezhañ hag **ewid** : br-kr. *eguid*) : **egedin/egedon, egedout/egedous, egedimp/egedomp, egedoc'h** mez **egetañ, egeti, egete/egeto...**

→ **beteg** (h-bg *becet, bicett*, T *beked*) < **bed** (br-kr *bet*) + **ha/hag** (> **beta/betag**) + **he** (> **bete, beteg** 1659). Meur a vod-displeg d'an araogenn : **betegzon, beteg din, beteg ennon, d'am bete...** (FAV).

→ **daved** : **davedon, davedout/davedous, davedimp/davedomp, davedoc'h** mez **davetañ, daveti, davete/daveto**<sup>246</sup> ...

→ **dawid** (< **da** + **ewid**) : **dawidin/dawidon, dawidout/dawidous, dawidimp/dawidomp, dawidoc'h** mez **dawitañ, dawiti, dawite/dawito**.

→ **diged** (sd. *ged*).

→ **dirag** (sd. *rag*).

→ **e-giz**, displeget gant **da** (**e-giz da**) : **egizdon, egizdout, egizdomp, egizdoc'h** mez **egistañ, egisti, egiste/egisto** (gwezhave diwar an diazez **egist-ataw, Ki**).

→ **estreged** (sd. *eged*).

→ **etal**, displeget aliez gant **da** (**etal da**) : **etaldin, etaldous, etaldimp, etaldoc'h** mez **etaltañ, etalti, etalte**<sup>247</sup>.

→ **evel**, displeget aliez gant **da** (**evel da**) : **evelin, evelous, evelimp, eveloc'h** mez **eveltañ, evelti, evelte**.

→ **ged** (kmg *gyd(ag) together with*) (FAV. 1992) : troet eo bet ar stummoù \*gedin/\*gedon... e **genin/genon** (**ganin/ganon**), **genis/genat** (**ganit**), **genimp/genomp** (**ganimp/ganeomp**), **genoc'h** (**ganeoc'h**) mez **getoñ** (**gantañ**), **geti** (**ganti**), **gete** (**gante/ganto**).

→ **heb** (h-br *hep* ; kng *heb*, kmg *heb*). Meur a vod-displeg d'an araogenn-mañ : **hebdon, hebdout, hebdimp/hebdomp, hebdoc'h & heptin/hepton...** //

<sup>245</sup> Ouzhpenn boud implijet evel dibennoù araogennoù emañ waet ar raganw-gour-rener da genger iwe, e troioù evel **he** 'deus-**eñv** gwelet, **me** 'm eus-**hi** laosket ha dreist-oll e troioù-estlamm evel **kemerit-hoñ !, tapit-hi !, taolit-hè !**

<sup>246</sup> E lec'hioù zo e kaver iwe ar stumm **davet-** ewid an oll c'houroù (T, Plougastell...) (FAVEREAU, 1997 : 409, § 737).

<sup>247</sup> Traoù direizh a vez klewet gwezhave : **etaldoñ, etaldi, etalde** (Langidig).

**hebzin/hebzon...** (kmg *hebdi*) hag iwe (Ku) **hebon**, **hebout**, **hebomp**, **heboch** (kmg *hebof...*) mez **hepañ**, **hepi**, **hepe/hepo**.

→ **herwe(z)** : **herwezon**, **herwezout**, **herwezomp**, **herwezoch**. Ne c'hoari ket ar c'haletâdur amañ en U3 nag en L3 : **herwezañ**, **herwezi**, **herweze/herwezo**, ha n'her ra ket en araogennoù ur **-z** en o fennrann displeget : **trema/tremaz-** (**tremazon**, **tremazout**, **tremazañ**, **tremazi...**) ; **dre/drez-** (**drezon/drezin...** **drezañ/drezi...dreze**) ; (Sd. an araogennoù dre **-zh** izelloc'h).

→ **namaed/nemed** (< **nam** + **-ed**) : **namaedin/namaedon** (**nemedon**), **namaedous** (**nemedout**), **namaedimp/namaedomp** (**nemedomp**), **namaedoch** mez **namaetoñ** (**nemetañ**), **namaeti** (**nemeti**), **namaete** (**nemeto**).

→ **paneved** (**paneve**) : **panevedin/panevedon**, **panevedout/panevedous**, **panevedimp/panevedomp**, **panevedoch** mez **panevetañ**, **paneveti**, **panevete/paneveto**.

→ **rag** (kmg *rag*, *rak* ; kmg *rhag*) : meur a vod-displeg : **rahon...**, **razon...** hag iwe unan reolieg **ragon**, **ragout**, **ragomp**, **ragoch** mez **rakañ**, **raki**, **rake/rako**. Amañ e kaver gerioù diveret a laka war-wel ar **-g** dibenn : **perager**, **peragiñ** (RH).

→ **raog** (kmg *rhawg*) : Mod-displeg gant an araogenn **e** : **em raog**, **en az raog**, **en e raog**, **en he raog**, **en hon raog**, **en ho raog**, **en o raog**. Mez gerioù diveret a ziskouez an **-d** dibenn : **araogenn**, **araoger**, **araogiñ**.

→ **hag iwe ar re gant ur -zh-dibenn** (sanadur KLT) : **diouzh**, **douzh** (**ouzh**) : **douzon**, **douzout**, **douzimp/douzomp**, **douzhoch** mez **doutañ/doutoñ**, **douti**, **doute/douto**<sup>248</sup>.

#### 2.4.3.2.3. Lostger kaletauz -(h)ad ar muzulioù a hirder :

Ne vez kavet ar lostger-se namaed e muzulioù hirder na vezont ket mui implijet kalz hiziw. Doned a ra ar c'haletâdur ag an **h-** a zo er ger **hed** a zo aet da lostger edan ar stumm **-(h)ad** : **meud** > **meutad** (**meud** + **hed**) (*pouce*, 2,54 cm) ; **troad** > **troatad** (**troad** + **hed**) (*pied*, 32,4 cm).

<sup>248</sup> Ar pezh a vez klewet e Langidig ([dot̃] [doti] [dote]), mez [doh̃ɛɲ] doh̃əm] [doh̃ɔx] (**doc'hin/dou(z)hin**, **doc'himp/dou(z)himp**, **doc'hoch/dou(z)hoch**).

### 2.4.3.3. Remerkoù diwar-benn lostgerioù kaletauz zo

Traoù direizh zo da venegiñ a-zivoud lostgerioù zo, ewid ar pezh a sell o zres neutr pe galetauz. Daoust da orin an dibennoù-se boud heb **-h-** e tiskouezont gwezh boud neutr, gwezh boud kaletauz (**-eriz**, **-oni**).

#### 2.4.3.3.1. Ar lostger -oni :

E gerioù zo ema aet **-oni** da **-ni** : **kozhni** (W **kohoni**), **krezni**. A-hend-arall ema amreolieg ar lostger **-oni**, gwezh neutr, gwezh kaletauz. Er rummad kentañ (neutr ar lostger-se), e kaver da gentañ gerioù diefed ar lostger war ar gensonenn-dibenn abalamour ma achuont gant un elfenn digemmaduz (ur vogalenn, pe **c'h**, **-f**, **-ll**, **-nn**, **-rr**, **-ilh**, **-s**, **-sk**, **-st**, **-t**, **-v/-w**), da skwer **chifoni**, **deskoni**, **dousoni**, **falloni**, **ferwoni** (RH *feroni*), **gaeoni**, **gloutoni**, **laoskoni**, **mailhoni**, **mestroni**, **sec'honi**, **suroni**, **viloni**...). Mez er gerioù-mañ e chom dous an dibenn : **aezoni**, **amgredoni**, **c'hwewoni**, **diskredoni**, **divezhoni**, **druzoni**, **egroni**, **gouezoni**, **hegredoni**, **lovroni**, **pizhoni**, **rogoni**, **dru(z)oni**.

Nawazh e kaver un nebeud gerioù kaletaet ar gensonenn-dibenn enne gant **-oni**<sup>249</sup> : **brasoni**, **dousoni**, **faosoni**, **kasoni**. Meur a wezh e term ar yezh etre stumm dous ha stumm kaled, da skwer etre **louzoni** ha **lousoni** (FAV, 1992). E **lousteri/loustoni** n'eus ket ag ur penngef **\*loust** mez implij un **t** ouzhpenn ar lostgerioù **-eri/-oni** (marse dindan levezon stummoù evel **lousted/louster** ?). Roiñ a ra DESHAYES **lous + t + eri** pe **+ oni**.

#### 2.4.3.3.2. Ar lostger -eriz :

Notet en deus R. HEMON **ma<sub>ter</sub>eriz** (levezon **ma<sub>ter</sub>eri** ?), ar pezh a vehe kentoc'h **\*ma<sub>der</sub>eriz**, herwez BOCHÉ, é voud ma n'eo ket **-eriz** ur lostger kaletauz a-hend-arall. Da notiñ : **plañcheriz** (**plañcherizou** Pourlet ha W, **-is** ewid RH).

---

<sup>249</sup> Marse dre levezon gerioù evel **gouestoni** (< **gouest + oni**) e-lec'h ma vez santet an **t** evel unan kaletaet ?

#### 2.4.3.3.3. Dibennoù-verb an doare-divizoud :

E KLT e krog dibennoù an doare-divizoud gant un f- : **-fen, -fes, -fe, -femp, -fec'h, -fent, -fed**. Degas a ra an f-se kaletâdur ar gensonenn gent, pa vez dous : **pouezfen** [ˈpweʃfɛn] ; **lidfes** [ˈliːtʃfɛs] ; **padfe** [ˈpaːtʃfɛ] ; **magfemp** [ˈmaːkʃfɛm] ; **treuzfec'h** [ˈtrøːʃfɛx] ; **sujfent** [ˈsyːʃfɛnt] ; **savfed** [ˈsaːf fɛt]. Mez ne vez ket dalc'het kont ag an dra-se er skritur. Er verboù dre **-a** hag **-aad**, kaletaet ar gensonenn-dibenn gant **-(h)a** ha **-(h)aad** ataw, e vo skrivet gensonenn galed-se eveljust : **boued** > **boueta** > **bouetfen** ; **braz** > **brazaad** > **brasfent**.

E W e krog an dibennoù-verb-se gant **h-**. Mez peurliesañ ne c'hoari ket ar c'haletâdur evel e KLT : gant diaez m'ema sanañ **kensonenn + h** e vez lakaet, ur vogalenn (**a** pe **e**)<sup>250</sup> etre an diw gensonenn,<sup>251</sup> kement er skrid hag er gomz : **\*pouezhen** > **pouezhen/pouezahen** [ˈpwezehɛn] ; **\*lidhes** > **lidehes** [ˈliːdehes] ; **\*padhe** > **padehe** [ˈpaːdehe] ; **\*maghemp** > **magehemp** [ˈmaːgehɛm] ; **\*treuzhoc'h** > **treuzehec'h** [ˈtrøːzehɛx] ; **\*sujhent** > **sujhent** [ˈsyːzehɛnt] ; **\*savhed** > **savehed** [ˈsaːvehɛt]. Nawazh, er verboù dre **-a** hag **-aad**, kaletaaet ar gensonenn-dibenn gant **-(h)a** ha **-(h)aad** ataw, e chomo ar gensonenn galed-se er skrid kement hag er gomz en doare-divizoud : **boued** > **boueta** > **bouetehe** ; **braz** > **brazaad** > **brasehent**. N'eo ket abalamour e vehe kaletauz an dibennoù a-sort gant **-ehen, -ehes...**, rag neutr int, mez a-gaoz m'ema **bouet-** ha **bras-** ar penngefoù aze.

#### 2.4.3.3.4. An dilostgerioù -ted ha -ter<sup>252</sup> :

Ur lostger gourel eo **-ter**, ha tu d'henn lakaad d'al liester (**sklaer, sklaerder, sklaerderioù**), pa vez abstretoc'h **-ted** hag implijet namaed d'an unander hebkén (**sklaer, sklaerded**).

<sup>250</sup> A-zivoud choaz ar vogalenn-ouzhpenn-se e vehe lojikoc'h skriv un **a**, rag ma vez implijet **-a** liéz dija evel dibenn-verb (er verboù dre **-aad** ez-reizh, mez iwe, e yezh ar bobl, e W dreist-oll, dre astenn d'an oll verboù : **hi a laboura...**).

<sup>251</sup> “Treuzskrivet eo bet distagadur pep ger evel pa vefe distilhet e-unan a-gostez ha pouez-mouezhiet-kreñv bewezh ma c'heller e zistagañ evel-se. Divouezh e vez ar c'hensonennoù gourfenn ger en degouezh-se.” (*Geriadur Brezhoneg*, 1995 : X).

<sup>252</sup> Sd. § 2.4.2.3.4. p.221.

Blotaet e vez ar lostgerioù **-ted** ha **-ter** er gerioù diveret (**gaeded**, **c'hwegded**, **sioulded**, **tommder**, **donder**, **hirder**, **berrder**, **skañvder**, **brawder**...) mez dalc'het e vez an **-t** goude **-k**, **-s**, **-t** : **klokted**, **freskter**, **trenkted** / **douster** (< **dous**), **fetisted** (< **fetis**), **nested** (< **nes**) / **dranted** (< **drant**), **skorted** (< **skort**), **ruster** (< **rust**).

Dalc'het e vez douzh an **-t** kentoc'h iwe er lostger goude **-z** : **braz** > **brasted** / **eüruz** > **eürusted** / **liez** > **liester** (STS, RH, FAV, AH, HY) ... mez pas goude ur **-z leoneg** : **dru(z)** > **druzder** / **kri(z)** > **krizder**. Nawazh e vez termet goude **-g** : **c'hweg** > **c'hwekted** (RH) / **c'hwegded** (FAV), goude **-b** : **heveleb** > **hevelepted** (AH), **hevelebded** (FAV) / **gwleb** > **gwlebded** (FAV), goude **-z** gwezhave (**brazder**, **liesder**<sup>253</sup>). N'em eus ket kavet skwer ebed goude **-d**.

Er gerioù a achu gant **-bl** eh eus diw feson d'ober. E gwenedeg hengounel eh a ar **-bl**-dibenn da **-p** (**bourrapted**<sup>254</sup>, **dijapted**, **nopted**). E FAV e kaver **bourrapted**, **amiapted**, mez **noblded**, **possublded**, **semplded**, **terrublded**. Daou sanadur enta é klask o lec'h aze c'hoazh, dre /pt/ pe dre /bd/<sup>255</sup>. Ha ne vehe ket gwell reoliekaad amañ iwe (ur simplaad d'ar skritur ha d'ar sanadur graet war ar memez tro) : **nopted**, **posupted**, **posupter**, **sempted**, **simpted**, **terraptured** ha kement a zo ?

Goude **-c'h** e term pe e terme ar yezh iwe. Menegañ a rae LE BAYON (1878 : 5) e veze kavet **-ter** ha **-ted** pa achu ar pennged gant **s** pe gant **h** : “**guerhtet**” (modern **gwerc'hted**). Seblant a ra ar yezh degemer aze ar stumm dre **-ded** pe dre **-der** da batrom. E FAV e kaver ataw ar stummoù evel **balc'hder**, **gwerc'hded**, **kabac'hded**, ha daoust da **gwerc'hted** boud meneget e vez kaset d'ar stumm arall (**gwerc'hded**), lakaet evel-se da furm reizh.

Gant **-zh**-dibenn e vez skrivet **-ded** / **-der** : **pizhder**, **reizhder**, **skuizhder**, mez daou sanadur a vez klewet, dre /zd/ pe dre /st/ e KLT ha dre /hd/ pe /xt/ e W (Sd. FAV). Seblant a ra boud bastuz a-walc'h chomel gant ar skriturioù-se, da

<sup>253</sup> Ar ger-mañ dindan pluenn Loeiz HERRIEU : **liesdér** (Sd. FAVEREAU, 2003 : 260).

<sup>254</sup> Sd. Titl oberenn JM HENEU : *Bourrapted en tiegeh*.

<sup>255</sup> A-liez e brezhoneg ne vez ket sanet kensonenn-dibenn ur strollad-kensonennoù e fin ar gerioù (**kouevr** > [kwe:f], **oabl** > [wa:p], **paotr** > [powt]) (Sd. FAV, AH).

lâred eo stummoù dre **-ded/-der** (sd. MH *skuihded*). Tu zo da weled ar fenomen-se evel ur sandhi diabarzh, ar pezh a zegouez e meur a yezh, da skwer e galleg (*absolu* [apsoly], *observer* [opsêrve]), e brezhoneg (*absolut* [apsolyt]), e kembraeg (*ysgol* [ə'skol])...

#### 2.4.4. DASPARCH AR LOSTGERIOÙ

Roiñ a ran amañ renabl an dibennoù kaletauz dindan un daolenn : un deg hebkén zo anezhe, aesoc'h da zerc'hel soñj anezhe enta eged a roll ar re neutr (ouzhpenn 130).

Lostgerioù kaletauz	Lostgerioù boutin	Lostgerioù an araogennoù displeget	Lostger ar muzulioù	lostger amreolieg
<b>Niver</b>	5	3	1	1
Un <b>h</b> kozh zo kaoz ag o efed kaletaad : -(h)A...	- <b>A</b> (pesketa) - <b>AAD</b> (brasaad) - <b>AÑ</b> (brasañ) - <b>OC'H</b> (brasoc'h) - <b>AD/-ED</b> (brased ti !)	- <b>AÑ</b> (-oñ W) (ewitañ) - <b>I</b> (ewiti) - <b>E/-O</b> (ewite / ewito)	- <b>AD</b> (meutad)	- <b>ONI</b> ( <i>amgredoni / kasoni</i> )

**Taolenn 12. An dibennoù kaletauz.**

Setu bremañ dasparzh ar lostgerioù brezhoneg, etre ar re neutr hag ar re galetauz. Kontet em eus **-oni** ur wezh e peb rummad, é voud ma vez gwezh kaletauz, gwezh neutr.

Lostgerioù	Lostgerioù neutr	Lostgerioù kaletauz	OLLAD
Niver	130	10	140
Tregantad	93%	7%	100%

**Taolenn 13. Dasparzh ar lostgerioù brezhoneg : kaletauz pe neutr.**

## 2.4.5. LEVEZON AR SANADUR WAR AR MOD DA SKRIV

### 2.4.5.1. Stad an traoù

#### 2.4.5.1.1. Traoù luziet :

Tri fed a lakae diaez enta choaz ar gensonenn e dibenn ar gerioù, a-gaoz ma veze klewet gwezh ur vouezhiañ, gwezh un divouezhañ :

1. liested divouezhadur ar gensonenn-dibenn en anwioù-gwan (**blot** gant un **-t**, abalamour da **blotañ**, **blotoc'h**, en despet d'an diverad **blodenn** ; **bras** gant un **-s**, abalamour da **brasañ**, **brasoc'h**, **brasaad**, en despet da **brazig**) ;
2. kaletâdur ar gensonenn en dibenn absolut (**noz** sanet /no :s/ ; **bag** sanet /ba:k/), ar pezh a sell amañ douzh ar reolenn R3 ;
3. ar liammadurioù, a heuli ur reolenn arall c'hoazh : R4, a vo studiet er § 4.

Setu amañ un taolennaouiñ a gement-se. N'em eus ket lakaet enne ar liammadurioù, a zegas un trubuilh ouzhpenn<sup>256</sup> (da skwer :[bra:ze] > **braz eo** ha [braʃkenã] > **bras-kenañ**). Rag, din da ouied, n'eo ket bet diazezet gwall-liez ar mod da skriv war ar liammadurioù, nag e brezhoneg (e-kontrol diouzh ar c'hemmadurioù) nag e galleg d'an nebeutañ<sup>257</sup>.

En taolenoù e tiskouezo ar sin (\*) un opSION nad eo ket bet dalc'het er yezh skrivet a-hiziw, e mod ebed. Diskouezñ a ra ar sifr 1 eh eus bet staget un dibenn neutr douzh ar penngef, hag ar sifr 2 un dibenn kaletauz :

---

<sup>256</sup> Liez e vez meneget ar liammadurioù gant an deskarded pa vez goulennet gante penaoz skriv kensonenn dibenn ur ger bennag petramant perag e vez skrivet evel-se. Perag e vez skrivet **tad** gant un **-d** ? Ouzhpenn ur wezh (gant skolaerion pe stajidi zo) em eus bet tro da glewed "**abalamour ma vez lâret "ma zadé"** !

<sup>257</sup> An Ao. BAYON nawazh (1878 : 5) a skrive kement-mañ : "Les finales fortes se changent en douces devant une voyelle initiale, mais non devant H. On dit et il serait mieux d'écrire : **peb unan**, *chacun*, et non pas **pep** ; **ped œr é ? quelle heure est-il ?** et non **pet** ; **deg œr**, *dix heures*, et non **dek** ; **ged e zorn**, *avec la main*, et non **get** ; **aveid-omb**, *pour nous*, et non **aveit**. Mais il faut écrire comme l'on prononce **get-hoñ**, *avec lui* ; **get-hi**, *avec elle* (...). »



A. ANW-KADARN	TAd/t	PESKEd/t	RESPEd/t
Dibenn absolut	[ˈta:t] > *tat	[ˈpesket]	[ˈrespet] > respet
Anw-verb 1	∅	∅	respetiñ > respet
Anw-verb 2	∅	pesketa > *pesket	∅
Diveradur 1	tadik, tadelezh > tad	peskedenn, peskeduz > pesked	respetuz > respet
Diveradur 2	∅	pesketauz, pesketaer > *pesket	∅

B. ANW-GWAN	SOD/t	GLAs/z	DOUs/z
Dibenn absolut	[ˈso:t] > sot	[ˈgla:s] > glas	[ˈdus] > dous
Anw-verb1	sodañ, sodiñ > sod	glazañ, glaziñ, glazo > glaz	∅
Anw-verb 2	sotaat > sot	glasaat > glas	doušaot > dous
Diveradur 1	sodell, sodes > sod	glazadur > glaz	dousezik, douserus > dous
Diveradur 2	sotañ, sotoc'h, sotat/sotet > sot	glasâdur > glas	dousâdur > dous

C. GERIOÛ ALL	EGEd/t	NEMEd/t	PERAg/k
Dibenn absolut	[egət] > eget	[nemet] > nemet	[peˈra:k] > perak
Anw-verb 1	∅	∅	peragiñ > perag
Anw-verb 2	∅	∅	∅
Diveradur 1	egedin, egedout, egedimp, egedoc'h > eged	nemedin, nemedout, nemedimp, nemedoc'h > nemed	perager > perag
Diveradur 2	egetañ, egeti, egete/- to > eget	nemetañ, nemei, nemele/-to > nemet	∅

#### 2.4.5.1.2. Un dibab diaez mez un diviz d'ober :

En daolenn *A* (anw-kadarn), ne vez ket kavet gerioù diveret ha kaletet ar gensonenn-dibenn dirag an dilost. N'eus ket ag ar verb \***tata** (**tad** + **-(h)a**) er geriadurioù<sup>258</sup>. Naturel e seblant neuze skriv **tad** gant **-d**, herwez an diveradurioù boutinnañ (**tadeg**, **tadegezh**, **tadel**, **tadelezh**, **tadelour**). Nawazh, perag na zerc'hel kont a sanadur ar gensonenn en dibenn absolut ? An dra-se an heni eo ar pezh a oa bet graet en anwioù-lec'h gant ar Stad gall : *Bannalec*, *Ploerdut*, *Pierrick*. Mez penaoz ober ewid **pesked/t** peogwir e kaver war-un-dro **peskedenn** ha **pesketa** ? Ewid gerioù evel **respet** ema sklaerroc'h rag ma tiskouez an diveradoù un **-t** ataw e fin ar ger, zoken gant dilostgerioù neutr (vb. **respetiñ**).

E gwirionez, mar behe bet divizet skriv ar gensonenn dibenn-ger diwar an neutralizadur e vehe bet gwelet an traoù en ur mod dishañval. Mar behe bet skrivet **Ar Strat**, **Jegous** (sd. *Jégousse*), **Kergoañ**, **Nikolas**, **Tomas** e vehe bet kavet ar stummoù diveret **Ar Stradik** (sd. *Le Stradic*), **Jegouzo**, **Koadik** (sd. *Coadic*), **Nikolazik** (sd. *Nicolazic*), **Tomazo**... ha neuze e vehe bet disklaeriet an dibennoù-se (**-ik**, **-o**,...) dibennoù dousauz<sup>259</sup>... Mez é voud m'ema stankoc'h ar stummoù neutr (sd. **Taolenn 12**, p. 231) ema bet skrivet kentoc'h ar gensonenn a veze klewet en o raog... ewid an anwioù-kadarn.

Rag ewid an anwioù-gwan avad (**Taolenn B**, p. 233) e vez luziet-mat an traoù. Lïezikoc'h e tegouezh ar c'haletadur-dibenn enne marse, rag ma tegemeront an dilostoù boutin **-añ/-oc'h** an derezioù uhellañ pe uhelloc'h hag an dilost estlamm **-ad/-ed**. Ewid ar gerioù arall (T. C) n'eo ket gwall aesoc'h da ouied.

Setu neuze un diviz d'ober, pandeogwir e tiskouez lezenn an diveradur boud forc'helleg e-keñver gerioù zo, ha dreist-oll an anwioù-gwan.

<sup>258</sup> Tu a vehe d'henn ijinañ nawazh : **tata**, *klask un tad*. Just ha pa vezan é skriv ar pennad-mañ e vez an oll journalioù é komz a grouadur newez-ganet Rachida Dati, ministrerez ar Justis, heb d'an dud gouied piw eo an tad. Hag an oll dud é \***tata** neuze, journalisted ha rac'h ! **Tata**, a-hend-arall, anw gourel, a sinifi "*papa*", *tadig* (FAV).

<sup>259</sup> Ar pezh a zo bet graet siwazh, gant R. HEMON : "Tout adjectif peut avoir un diminutif. On l'obtient à l'aide de la terminaison **ik**. Dans ce cas, si l'adjectif se termine par une des consonnes **p**, **t**, **k** ou **s**, précédée d'une voyelle, la consonne s'adoucit respectivement en **b**, **d**, **g** ou **z**. Ex. : **bihan**, **bihanik** ; **bras**, **brazik**. Cependant, **s** ne s'adoucit pas toujours : **dous**, **dousik**." (*Grammaire bretonne*, emb. 1975 : 31).

### 2.4.5.2. Diviz AR GONIDEG

E 1807 (hag en e c'heriadur diwezhatoc'h, e 1821) e voe embannet ewid ar wezh kentañ adkempenn AR GONIDEG a-zivoud an doare-skriv. Santoud a rae an oberour unded ar yezh a-dreñv diforc'hioù ar sanadurioù<sup>260</sup> ha daet e oa ar soñj dezhañ sevel un doare-skriv newez "toute philosophique", abalamour d'an dizurzh a oa e fesonoù da skriv e amzer (diouwer a bennreolennoù stabil ha modoù dishañval d'ober a zen da zen).

Diazezet war ar leoneg e chomas kennigoù AR GONIDEG re bell dez fesonoù-skriv ar Wenedourion. Nawazh ne chomas ket heb levezoniñ skrivagnerion zo ag ar c'hevred, evel ma henn ansave GUYOT-JOMARD e penn kentañ e « *Manuel breton-français* »(1863) « le système que nous avons préféré étant celui de Le Gonidec déjà employé en partie par M. l'abbé Le Joubioux... ». *En partie* a vern kalz amañ rag pell-mat e chomas an daou zoare-ober. Da heul AR GONIDEG en doa GUYOT-JOMARD implijet K ha G mez en ur mod laosk a-walc'h (*corv*, *scorn*, *sucr*, *skriw* ha *scriw*) ha graet frank a-walc'h gant an **w** (« ewid berraad » ar stumm kozh dre *-hue* : *dihue* > *diw* ; *pihue* > *piw*). Mez e-keñver ar c'hensonennoù-dibenn nen doa ket sklaerraet an traoù ha meskaj a vez kavet helaezh (*get/ged* ; *fang e zou / hou pek* ; *aes*, *truek*, *dewéhad*, *pegehed*, *ped aer*, *huinek aer*, *noz*, *plous*, *koguss*, *kik*, *tamik*, *benak*, *perak*, *red é...*). Dilojik braz e chom e intrudu.

Ne wele ket an dud d'an termen-se petra oa kaoz e tegase an diveradur gwezh ur gensonenn galed gwezh unan zous. Da skwer A.E. TROUDE, a skrive e ragskrid e c'heriadur (1876, ademb. 1979), e-lec'h ma en doa heuliet pennreolennoù AR GONIDEG :

« Dire maintenant pourquoi les dérivés des mots ci-dessus ne se forment pas sur le radical actuel **evez**, **braz**, **deiz**, et pourquoi on ne dit pas *evezaat*, *brazoc'h*, *deiziou*<sup>261</sup> ? L'usage seul peut répondre. » (p. XVI).

<sup>260</sup> "Les racines sont les mêmes, les noms, les verbes et la syntaxe suivent les mêmes règles, et toutes les différences se réduisent à un petit nombre de termes usités dans certains cantons et inconnus ou légèrement changés ailleurs". LE GONIDEG, Préface, *Grammaire celto-bretonne* (p. IX).

<sup>261</sup> Kuriuz eo kavoud ar ger **deiziou** amañ, rag n'eo ket an dibenn **-ioù** unan kaletauz. War a seblant, herwez TROUDE e veze sanet ['dejsju] e Bro-Leon. Daoust ha n'eo ket levezonet

Gouied a raomp hiziw eh eus ur rezon-yezh d'ar sanadurioù-se (**eweshaad**, **brasoc'h**) : ar fonem [h] a oa en dibennoù **-aad** pe **-oc'h** hag en un nebeud arall. TROUDE en doa termet ewid skriv ar gerioù, anwioù-kadarn hag anwioù-gwan, peogwir e kennig aliez an daou stumm : **bras/braz**, **nos/noz**, **mab/map** (pl. **mipien** !), **mad/mat** (o daou anw-gwan pe *ak*), **rous/rouz**, **maneg/manek**, **mab/map**, **peb/pep**, **peg/pek**... Mar eneb **palad** (*ak*) douzh **palat** (*vb*) ha mar skriv **paotrik** ha **pennduik**, e skriv iwe **euruz**, **maguz**, **peguz**. Mar ali kentoc'h **evit** (e-lec'h **evid**), **rak** (e-lec'h **rag**), **ruz** (e-lec'h **ru**) e ali kentoc'h **glaz** e-lec'h **glas** ha skriv a ra **penaoz/penauz/penoz** ha **dru/druz** a wezh da wezh. N'eo ket kempouell-groñs e sistem enta, en desped d'e strivoù ewid sevel un oberenn bleustreg. Ne lam ket ar remerk-mañ talvoudegezh labour TROUDE en doa kendalc'het heni AR GONIDEG, hag en doa henn gwellaet ha klokaet war meur a boent. (Sd. ragskrid Loeiz Ar Floc'h er levrenn F/B).

### 2.4.5.3. Diviz ar Wenedourion

An diveradur gant un lostgerioù neutr zo bet mestr, war a seblant enta, war ar mod da skriv an anwioù-kadarn. Daoust da **pesketa**, **peketaer** e oa bet divizet skriv **pesked** gant an oll, abalamour da **beskedenn**, **peskeduz**<sup>262</sup>.

Mez ma jaoje well-wazh d'an anwioù-kadarn, ne seblante ket satisfiuz ewid ar gerioù arall : **braz** gant ur **-z** abalamour da **brazez/brazig**... mez kavet e vez iwe **brasaad/brasañ/brasoc'h/brased** ! **Sod** gant un **-d** abalamour da

---

gant ar skritur kozh a veneg uhelloc'h en e ragskrid, heni ar c'hrennvrezhoneg, pa veze skrivet un **-s** dibenn e-lec'h ar **-z** modernoc'h ? Rag skriv a ra TROUDE : « La lettre **z**, à la fin des mots, est nouvellement introduite en Léon (XVI<sup>e</sup> siècle), à la place de la lettre **s** [quelques mots en **-z** cependant dans le Catholicon, 1499, notenn]. Autrefois, en effet, on écrivait **eves**, **attention**, **bras**, **grand**, **deis**, **jour**, et l'on prononçait comme en français : *évesse*, *brasse*, *déisse*. »

<sup>262</sup> Sd. lat. *piscis*. E kernoweg *pysk/pyskes/pyskesen /pyskessa/pyscajor*. E *pyskessa* e verk an **ss** kaletadur an **-s**. E kembraeg e vez skrivet *pysg/pyskod/pysgodyn/pysgota/pysgotwr (& pysgodwr)*. E sistem ar c'hembraeg e talv *sb*, *sg* kement a */spl/*, */sk/* e brezhoneg : *ospital/ysbyty*, *skol/ysgol*.

**sodell/sodez/sodiñ**... mez kavet e vez iwe **sotaad/sotañ/sotoc'h/sotad**... Petra ober ?

#### 2.4.5.3.1. Yezhadur AR BAYON (1878) :

En XIX<sup>ved</sup> kvd, en e *Grammaire bretonne du dialecte de Vannes* (p. 4) en doa A.M. LE BAYON renablet lostgerioù a galetae an dibennoù, a pezh a veze diskouezet en doare-skriv herwez daou vod :

- « en changeant les lettres douces en leurs fortes correspondantes.
  - en doublant les autres lettres, sauf les fortes.
- Lorsque le positif se termine par une voyelle, on peut intercaler un H. »

Heb komz ag an **-a** (aet da **-at** e W) e veneg LE BAYON an dilostoù **-at**, **-oh**, **-añ**, **-et** evel kaletauz, mez menegañ a ra iwe er memez rummad **-ik**. Setu amañ ar skwerioù roet gantañ :

<i>ber</i>	<i>lard</i>	<i>bras</i>	<i>du</i>
<i>berrat</i>	<i>lartat</i>	<i>brassat</i>	<i>duhat/duat</i>
<i>berroh</i>	<i>lartoh</i>	<i>brassoh</i>	<i>duhoh/duoh</i>
<i>berrañ</i>	<i>lartañ</i>	<i>brassañ</i>	<i>duhañ/duañ</i>
<i>berrik</i>	<i>lartik</i>	<i>brassik</i>	<i>duhik/duik</i>
<i>berret !</i>	<i>lartet !</i>	<i>brasset !</i>	<i>duhet/duet !</i>

**Taolenn 14. Dibennoù an anw-gwan herwez LE BAYON.**

Kuriuz eo ar skwerioù **\*lartik** ha **\*brassik** en e daolenn rag, mar n'int ket bet ijinet gantañ, ne ziskouezont ket d'an nebeutañ boud stummoù strewet kalz (n'int ket meneget er geriadurioù, e-lec'h ma vez meneget **lardig/k** ha

**brazig/k**<sup>263</sup>. E Langidig nawazh e vez lâret **brazig** [ˈbra:zik] mez \***brasikoc’h** [ˈbrasətʃox] ).

Ewid ar pezh a sell douzh an **-ik** e lenner (p. 5) e vlota an dibenn **-t** dirag an dilostoù **-ek** ha **-ik**, ar pezh a sinifi e vehe dousauz an dilostger. D’o zro eh a **-ek** ha **-ik** da **-eg** ha **-ig** dirag an dilostoù “**eah**“ (modern **-ezh**), “**es**“ (**-ez**), “**ed**“, “**i**“, “**eu**“ (modern **-où**). Setu renket ar skwerioù roet gantañ :

<i><u>gañet</u></i>	<i>genedik</i>	<i>gañedigeah</i>	
<i><u>talwet</u></i>	<i>talwedek</i>	<i>talvedigeah</i>	
<i><u>ti</u></i>	<i>tiék</i>	<i>tieges</i>	<i>tiegeah</i>
<i><u>tossek</u></i>	<i>tosseged</i>		
<i><u>lannek</u></i>	<i>lannegi</i>		
<i><u>tokik</u></i>	<i>tokigeu</i>		

Taolenn 15. Diveradur hervez LE BAYON (a).

Gant ar memez spered eh a iwe an dibenn **-s** da **-z**, dirag un dilostger é krogiñ gant ur vogalenn :

<i>inis</i>	<i>inizen</i>	<i>inizi</i>
<i>mis</i>	<i>mizieu</i>	
<i>bugulès</i>	<i>bugulezed</i>	
<i>Nikolas</i>	<i>Nikolazik</i>	
<i>Bras</i>	<i>Brazidek</i>	

Taolenn 16. Diveradur hervez LE BAYON (b).

N’heller ket lâred e oa kempouell an Ao. BAYON en e yezhadur. Poaniet en doa é klask kaoud reolennoù-skriv heb doned da benn a gavoud simpted ar

<sup>263</sup> Hervez FAVEREAU e kaver nawazh, evel **mat** [mat] ha **mad** [ma:t] an daou stumm enebet **bras** [bras] ha **braz** [bra:s]. Mard eo frank a-walc’h er vro an tachad e-lec’h ma raer an diforc’h **mat/mad** (bro-Wened beteg ar Vro Bourlet, ha kreiz-Breizh) ne ziskouez ket heni **bras/braz** boud ken ledan (kornad Karaez/Poher). Hervez PLOURIN (2000 : 12-13), e kaver e kreiz-Breizh meur a skwer a goubladoù a-sort-se, gant anwioù-gwan (**lous/louz**) mez anwioù-kadarn zokén (**gwaz/gwas**).

yezh e meur a zegouezh. Pa skrive, kempouell aze, e vez savet ar liester gant an dilost **-eu** pe **-ieu** peurvuiañ « *selon la finale du singulier* » (p. 17) (*skerb/skerbeu, tok/tokeu*), e skrive a-hend-arall *tokik/tokigeu, bis/bizied, nies/niezed, eauk/eauged, eskop/eskobed, ged/geted, aveit/eid/eit, peb, pet* (heb kontiñ *goas/goassed*, a zo souezhuz).

Da lâred eo ne oa ket bet diskloumet an afer c'hoazh.

#### 2.4.5.3.2. Intrudu an abad JEGOUZO :

Rekiz e oa bet gortoz fin an XIX<sup>ved</sup> kvd ewid d'an Ao. JEGOUZO, vikel braz eskopti Gwened, sevel un doare-skriv é kemer ar beb brasañ a dresoù doare-skriv daou skrivagner vrudet ag ar Morbihan : an Ao. Yann-Vari JOUBIOUS saver *Doue ha mem bro* (1848) hag an Ao. Joachim GWILHOM (*Livr el labourer*, 1849). GWILHOM en doa skrivet ur yezhadur e 1836, “*contenant tout ce qui est nécessaire pour apprendre la langue bretonne de l’idiome de Vannes*”.

Pal JEGOUZO a oa simplaad labour ar skriverion, lakaad dindan daoulagad ar Gristenion ar memez gerioù, skrivet ataw en ur mod stabillaet, ha kennig dezhe ar gwenedeg klasel « *parfaitement compris dans toutes les paroisses.*<sup>264</sup> » Diwar an intrudu-se e labouras an Aotrouion Aogust GUILHEVIG ha Pier ar GOW ewid esplegañ ar reolennoù en o yezhadur gwenedeg (1901).

#### 2.4.5.3.3. Levezon LOTH :

A-benn ar fin, stadiad displann an anwioù-gwan an heni eo a lakaas GUILLEVIC ha LE GOFF d’ober ur choaz meur : sevel daou glasad gerioù, an heni kentañ (anwioù-kadarn) é heuliañ rik reolenn an diveradur gant dilostoù neutr hag an eil (an oll c’herioù arall) staget doute ur gensonenn-dibenn galed.

---

<sup>264</sup> *Liher da aozerion ar yehadur brehoneg*, bet embannet e yezhadur GUILLEVIC/LE GOFF.

Kemeret o doa harp<sup>265</sup> dreist-oll war kuzulioù ha labourioù Joseph LOTH (*Chrestomathie bretonne*, 1890), en doa displeget ar feson hengounel d'ober diwar-benn ar poent-se. Daoust d'an oberourion boud akord war reizhted ar mod-skriv-se e-keñver "lezennoù ar fonetik gant ma vehe kemeret ar gerioù a-hunan", e ansavont ne vez ket aez an arver (*Grammaire bretonne*, p. 149). Ewid diazezañ mat o divizoù e roont da anavoud en-dro ar feson hengounel da skriv ("usage ancien"), ha zo ur menier simplaad ag ar pezh hon eus kavet e yezhadur an Ao. BAYON uhelloc'h :

« Sont terminées par une douce les syllabes finales accentuées à voyelle longue : **tad, mab, stag, bed, blod, kloz, braz, divag, didrouz, jaujabl, ivaj.**

En dehors de ces conditions, le mot se termine par la forte : **eskop, eskobet, tach, kartat, tammik, Kadik, Mellak, Bellek.** » (p. 149).

Ewid o yezhadur o doa degemeret GUILLEVIC ha LE GOFF, goude kuzulioù LOTH enta, ur sistem tost a-walc'h douzh an heni kozh, mez spisoc'h ha klokikoc'h ar reolenn, dreist-oll ewid ar c'hensonennoù-dibenn<sup>266</sup>. Kavoud a ran a-bouez roiñ amañ o arguzennoù :

« Les substantifs, et les infinitifs sans suffixe verbal, se terminent par la lettre qui apparaît devant les suffixes de flexion : **dornadeu, dornad, poignée ; teilegi, teileg, fumier ; henteu, hent, chemin ; pigoseu, pigos, bec d'oiseau ; predeget, predeg, prêcher ; ambruget, ambrug, conduire.**

Pour les autres espèces de mots, on est convenu de préférer dans l'écriture une finale forte à une finale douce : **mat, bon ; genit, avec toi ; benak, quelque ; ridek, courir.**

On excepte de ces deux règles 1° certains adjectifs peu usités au comparatif et certaines expressions composées : **stag, distag, dispieg, a drez** ; 2) les formes en **mb, bl** : **karamb, d'emb** (mais **pemp**), **jaujabl** ; 3) le premier élément d'un mot composé : **aveid-onn, peb-unan, eskopti** ; 4) quelques mots isolés : **ind, ag, hag.** » (p. 6).

Rag abalamour da frekañs *istimet* an derez uhellañ pe uhelloc'h kavet en anvioù-gwan eh eus bet « kavet gwell » (« *on est convenu de préférer* ») skriv

<sup>265</sup> Hervez Augustin GUILLEVIC, « [le manuscrit de la Grammaire bretonne de M. Le Goff] vu d'abord par M. Jégouzo, commença à circuler dans les mains de tous les collaborateurs bénévoles : MM. Vallée, Ernault, Loth, etc., qui chargeaient le texte de notes, de remarques, d'additions ou de corrections, suivant le cas et les préférences de chacun. Les annotations de M. Loth nous ont été particulièrement précieuses... » *Le dialecte de Vannes*, 1927.

<sup>266</sup> "Les consonnes finales, qu'aucune règle, avant 1901, n'empêchait de faire fortes ou douces à volonté" (Louis Le Clerc, *Grammaire*, 1908, Préface).



ar gerioù-se gant ur gensonenn galed, un arguzenn n'eo ket bet dikriet kalz goude.

E-lec'h sevel daou glasad gerioù e vehe bet tu da selled douzh ar yezh evel m'ema, ha da dermeniñ resiz an daou glasad lostgerioù a zo anezhe heb mar ebed : ar re neutr hag ar re galetauz. Rag anavet e oa<sup>267</sup> efed kaletauz an dilostgerioù « **-oh** (*comparatif*), **-an** (*superlatif*), **-et** (*exclamatif*) et **-at** (*suffixe verbal*)» (p. 6). Unan zo bet ankouaet er roll-se gant GUILLEVIC ha LE GOFF, an dibenn anw-verb **-a**, meneget gante nawazh e fin o yezhadur abalamour ma oa aet da **-at** e W, ar pezh a zegas kemmesk er yezh herweze (**pisketat, logotat, énéta** e-lec'h **pisketa, logota, énéta**, p. 157).

E gwirionez ne oa ket ken anad-se c'hoazh analiz ar yezh a-zivoud ar gudenn-se rag, mar komzont ag ar lizherennoù kaletaet (« *lettres renforcées* »), ne gomzont ket ag ar lostgerioù kaletauz (na muioc'h ag ar re neutr).

#### 2.4.5.4. War dachenn ar KLT

##### 2.4.5.4.1. VALLEE hag Emgleo ar Skrivagnerien :

E 1907 e oa bet krouet gant François VALLÉE hag Emile ERNAULT Emgleo ar Skrivagnerien (*Union des Ecrivains de langue bretonne*<sup>268</sup>), ennañ tud ag an teir rannyezh tostañ : kerneweg, leoneg ha tregereg (« [qui] ont le plus d'affinités entre eux » hervez ERNAULT<sup>269</sup>). Ne oa ket bet lakaet ar gwenedeg ba'n taol.

---

<sup>267</sup> Kuriuz memestra ar frazenn-mañ gant an Ao. GUILLEVIC, pa justifie mod da skriv ar yezhadur gwenedeg : « On a donc convenu de donner comme finales aux mots simples la lettre qu'ils conservent devant leur désinence : *tad, tadeu ; eskob, eskobed ; sant, santéz, santézed ; predeg, predegeu ; kloz, klozein ; bras, brasoni*, etc... Cela revient à terminer les substantifs par des douces, et les autres espèces de mots par des fortes... », in *Le dialecte de Vannes*, 1927, p. 5. Perag menegañ **brasoni** (direizh eo an dibenn **-oni** a-fed kaletaad, mez kaletauz eo er ger-mañ !) ha chom heb menegañ **brazig** pe **brazez** ???

<sup>268</sup> Bet sinet gant : "MM Ernault, Abbé Le Clerc, Abbé Perrot, Vallée, Coroller, Le Moal, Bocher (Ar Yeodet), Caurel, Klaoda Le Prat, Le Bras (Dirlem)" (Yezhadur LE CLERC, p. 226).

<sup>269</sup> Introduction (*Grammaire bretonne du dialecte de Vannes*), *opus cit.*, p. XI.

Pal an *Emgleo*-se a oa roiñ d'ar skrivagnerion un doare da skriv newez, dreist da vod an XIX<sup>ved</sup> kvd (a veze skrivañ herwez giz peb bro) ha roiñ dezhe ar gerioù brezhoneg modern a rae diouwer dezhe ewid komz ag o amzer. Evel-se e oa bet savet ar *KLT*, an doare-skriv a gaver e geriadur VALLÉE (bet embannet e 1931 hebkén), mez iwe en *Notennou diwar-benn ar Gelted koz*, 12 levrig etre 1911 ha 1923, hag iwe e 3 levrenn *Sketla Segobrani* sinet X3 (dle. F. VALLÉE, E. ERNAULT, M. MORDIERN).

#### 2.4.5.4.2. Yezhadur Louis Le Clerc :

E 1908 e embannas an Ao. KLERG ur yezhadur rannyezhel : *Grammaire bretonne du dialecte de Tréguier*. Gwir eo e oa bet é heuliañ kentelioù LOTH e skol-veur Roazon (FAVEREAU, 2001 : 330). Diwar batrom heni Aogust GUILHEVIG ha Pier ar GOW e oa bet savet :

"Je m'y suis attaché (...) à suivre de très près la Grammaire du Vannetais de MM Guillevic et Le Goff : même plan (...), mêmes règles (...), mêmes exemples, mêmes dispositions typographiques (...)" (p. 11).

A-zivoud problem ar c'hensonennoù-dibenn n'o doa ket na Loeiz KLERG na skrivagnerion an *Emgleo* diskloumet a-newez an traoù. Kemeret o doa oll skwer war ar Wenedourion, da lâred eo war yezhadur GUILLEVIC/LE GOFF. Ne oa ket variadur ar c'hensonennoù-dibenn ken pouezuz ewite eged ar c'hemmadurioù ("Ce point [les consonnes finales] a relativement peu d'importance", e raglavar yezhadur KLERG). Seblant a rae dezhe e oa bet kavet un diskloum deread e-kostez Gwened, ha pandeogwir e klaske an dud unvaniñ an doareioù da skriv o doa gwelet aze ur feson da blaennaad ur poent d'an nebeutañ. Heuliañ neuze skwer ar Wenedourion a oa trawalc'h aze. Setu kadarnaet da vad un diviz a-bouez braz ewidimp hiziw c'hoazh, setu perag e talv ar boan kompren mat ar choazoù graet e 1908 hag an abegoù a oa dindane (izlinennet em eus ar frazennoù a-bouez) :

« La variation des consonnes finales n'est point, comme les mutations initiales, un procédé essentiel de la grammaire, soumis à des lois rigoureuses. Pour arriver à une certaine unité dans chaque mot, et aussi à un complet accord des écrivains en une

matière où l'uniformité est désirable et facile, il n'y a qu'à suivre le procédé du Vannetais, qui consiste à consulter la dérivation tout en favorisant les consonnes fortes en dehors des substantifs. On sait que la forte est obligatoire dans les comparatifs et superlatifs : **kaletoc'h**, **kaleta** justifient le choix de **kalet** au positif, sans tenir compte des cas où le **t** est adouci en un **d** par l'initiale du mot suivant. Inversement on généralisera dans l'écriture le **d** de **mad le bien**, qui parfois est renforcé en **t** dans la prononciation, mais qui se montre seul dans le pluriel **madou**, etc.

Ceci permet des distinctions comme **mad le bien**, **mat bon** (adj.), **bien** (adv) ; **galleg le français**, **gallek français** (adj.) ; **galloud le pouvoir**, **gallout pouvoir** (verbe), etc. Dans les cas comme **strak**, **pesk**, il n'y a pas à adoucir la finale, puisque l'adoucissement n'a lieu dans aucun dérivé. »<sup>270</sup>

Perag ne oa ket bet gwelet afer ar c'hensonnoù-dibenn ken siriuz evel heni ar c'hemmadurioù a sko war ar c'hensonnoù deraou-ger, ha perag n'eo ket pe ne vehe ket reoliekaet ar poent-se ("soumis à des lois rigoureuses") ? Un treuzkompren zo kaoz a gement-se.

"Les substantifs se terminent par la lettre qui apparaît dans les suffixes de flexion (**o**, **i**, **ed**... terminaison du pluriel) ou de dérivation (**ad**, **ig**... pour les substantifs ; **ek**, **us**... pour les adjectifs ; **a**, **an**... pour les infinitifs).

Les adjectifs demandent plutôt une finale forte, parce que les suffixes qui les suivent le plus souvent, à savoir **oc'h** (comparatif), **an** (superlatif), **at** (exclamatif), **aat** (suffixe verbal) doivent toujours être précédés d'une forte : **lart** < **lartoc'h**, < **ar lartan**, < **lartat**, < **lartaat**.

Cependant si l'adjectif se lie dans la prononciation avec un mot suivant qui commence par une voyelle, sa finale forte s'adoucit : **lard eo**." (p. 11).

Pouez ar gomz zo aze pennkaoz an dibennoù-kaled lakaet da fin an anwioù-gwan : *goulenn* a raont un dibenn kaled ! Ne *c'houlennont* ket netra, mez gwir eo e kaver liezig a-walc'h dibennoù kaletauz é labourad da heul an anwioù-gwan. Ne oa ket bet meneget rol an **h-** en dibennoù-se.

Ewid tostaad ar skrid douzh ar gomz e kennige LE CLERC ur sistem fonografeg aze (**un den lart/lard eo**), mez n'eo ket bet heuliet diwezhatoc'h.

---

<sup>270</sup> Meneget gant Hervé LE BIHAN, *Littérature*, SUEDE, Rennes, 200-2001.

#### 2.4.5.5. GWALARN : Meurzh 1925

Ewid Roparz HEMON, ganet e 1900, e oa mall da Vreizh kaoud ur yezh vodern, gouest da lâred peb tra ag ar bed en-dro dezhi ; dober iwe ag ur lizheradur a-feson, par da re ar broioù modern arall. Mall-braz ewitañ neuze govelliñ ur benveg deread ewid kas ar palioù-se da benn. Gant kamaraded e kroueas HEMON ar gelaouenn *Gwalarn* ha heb koll amzer e savas ur yezhadur (1928, bet adembannet liëz goude), ennañ reolennoù an doare-skriv diazezet war heni Emgleo ar Skrivagnerien. Herwez manifest Gwalarn e oa c'hoant an daou siner, HEMON ha MORDREL, kaoud un doare-skriv digemm groñs (« rigoureusement unique »), da heul an heni implijet er *Sketla Segobrani*<sup>271</sup>. Ne reas ket ar skritur-se bec'h diouzhtu, ha deg vloaz goude-se e rankas R. HEMON sevel ur barzhoneg flemmuz e kelaouenn *Gwalarn* e-lec'h ma rebeche d'ar bismigerion lazhañ ar yezh<sup>272</sup>. François MOISAN, da skwer, e dibenn-skrid e bezh-c'hoari *Hellena* (1929) ne oa ket akord gant kemer harp war an derez uhelloc'h (**matoc'h**) ewid justifiañ **mat**<sup>273</sup>. Daoust da se e talc'has ar gelaouenn *Gwalarn* da zoned er-maez beb miz ingal, war-bouez un nebeud mizioù ag ar *brezel diot*<sup>274</sup>, dle. 165 niverenn beteg 1944. Ur bern skridoù bet embannet enta hag un anrod don a-walc'h treset e douar-atil ar brezhoneg.

#### 2.4.5.6. Emglew Roazon 1941 : ar Peurunvan

Ne jaoje ket da spered ar vroadelourion leuskel a-gostez ur lod-kàer ag ar vro, da lâred eo ar Wenedourion hag ar gwenedeg. Derc'hel a rae ar re-mañ gant o skritur dezhe, kaset war-raog dreist-oll gant ar gelaouenn *Dihunamb* renet gant Loeiz HERRIEU. A-benn ar fin, pandeogwir ne dostae ket kalz tud Gwened douzh skritur Gwalarn, e kennigas R. HEMON ur gwellaad douzh hennañ, ar pezh a zegouezhas d'an 8 a viz Gourhelen 1941, akord war-se ar Wenedourion o doa kemeret perzh en emvod gante<sup>275</sup>. Ur gomision a oa bet karget a resisaad

<sup>271</sup> Sd. FAVEREAU, L-2, 2003, p. 239.

<sup>272</sup> *An doare-skriva ne blij ken*, Gwalarn, Nn 98, 1938 : 5.

<sup>273</sup> LE BIHAN, *Littérature*, SUED, Roazon, 2000-2001 : 14.

<sup>274</sup> *La drôle de guerre*, « **ar brezel diot** » herwez Abeozen, ez-istorel etre an 3 a viz gwengolo 1939 (disklaeriadur-brezel d'an Alamagn gant ar Frañs ha Bro-Saoz) hag an 10 a viz mae 1940 (aloubidigezh ar Frañs, ar Beljik, ar Luksambourg hag an Izelvroioù gant an Alamagn). (sd. FAVEREAU, L-2, 2003 : 238).

<sup>275</sup> Setu amañ roll ar re o doa sinet (a-unvouezh) : **Abeozen** (yezhour), **L. Andouard** (kazetenn *Arvor*), **G. Berthou** (skrivagner), **Konan Kongar** ha **Marc'harid Gourlaouen** (*Skol Ober*), **A.**

ar munudoù a chome. Setu aze ganet ar *Peurunvan*, graet ar **ZH** pe *zedacheg* anezhañ e-pad pell, daoust ma ne oa ket HEMON tre a-du ewid degemer an digramm-se er skritur<sup>276</sup>.

Un tostaad interesuz en doa graet an emglew-se douzh ar gwenedeg, da skwer dilezel stummoù **eul**, **eun**, **eur** ar ger-mell ewid degemer ar stummoù gwenedeg, "kosoc'h" : **ul**, **un**, **ur**. Hag iwe "dreist-oll", heuliañ giz ar gwenedeg e-keñver al liesterioù e **-ion**" ("kosoc'h" iwe eged **-ien**), ur reolenn a oa bet torret nebeud goude, red eo henn lâred, gant Fransez KERVELLA e-hunan en e *Yezhadur Bras*<sup>277</sup>.

Mez ne voe ket bet emglew Roazon tre an heni esperet, daoust da santimant Roparz HEMON a grede dezhañ e voe an deiz-se, « dre eur baperenn sinet gant an holl, (...) siellet peurunvanidigez ar brezhoneg<sup>278</sup>. » Mar oa daet strivoù Emsaverion penn kentañ ar c'hantvloazad tremenet trec'h war dizurzh an traoù boulc'het en XVIIIved, peb skrivagner ag an amzer-hont-se é skriv en e rannyezh, ne oa ket bet ar Peurunvan an taol-mestr a oa an dud é c'hortoz. Ne reas ABEOZEN (1957) namaed henn ansav pa skrive-eñv, dipitet, a-zivoud embannadur *An Had*, ar gelaouenn daouvizieg savet e 1951 ewid ar Wenedourion gant Sten KIDNA: « Kement-se a oa eveljust reiñ da anavezout nen doa ket emglev 1941 reizhet pep tra. Hag e gwirionez n'hon eus ket kredet pell amzer e oa deuet an taol da vad »... daoust da strivoù ar Gwenedour Roperzh ar MASON en doa degaset e bouez en afer gant ur levrig esleguz (*Le Vannetais unifié*, 1943) hag ur romant er skritur newez (*Evit ket ha netra*, 1951).

Komprenabl eo neuze e oa bet graet strivoù diwezhatoc'h ewid an heveleb pal.

---

**Coulouarn** (kelaouenn *Sav*), an abad **L. Le Floc'h** (kelaouenn *Studi hag Ober*), **Yann Fouéré** (*Ar Brezhoneg er Skol*), **R. Hemon** (kelaouenn *Gwalarn*), **L. Herrieu** (kelaouenn *Dihunamb*), **X. de Langlais** (kazetenn *La Bretagne*), an abad **Le Marouille** (yezhour), **P. Mocaer** (skrivagner ha « *propagandiste breton* »), an abad **JM. Perrot** (ewid *Feiz ha Breiz* hag ar *Bleun-Brug*), **F. Uguen** (kensaver *Me a zesk brezoneg*).

<sup>276</sup> Sd. AR MERSER, *Les graphies du breton*, 1980 : 5-13.

<sup>277</sup> "Kendalc'het em eus koulskoude da ober kentoc'h gant **-IEN** eget gant **-ION** evit dibenn al liester (dreist-holl diwar un abeg kelenn : aesoc'h eo keñveriañ **-ier** an anvioù-traoù ouzh **-ien** an anvioù-tud en **-er** pe **-eg** eget na ve hen ober ma ve **-ion**)".

<sup>278</sup> R. HEMON, *An doare-skriva nevez*, 1942, p. 4.

#### 2.4.5.7. FALC'HUN hag ar Skolveurieg : 1953

E 1953 a reas ar Chaloni FALC'HUN un taol kempenn d'ar c'hKLT, mez heb enkorfiñ ar gwenedeg en ur sistem unvan. Setu aze neuze ganet ar *Skolveurieg*<sup>279</sup>, a laoske ar yezh gant daou sistem dishanval emren : KLT ha W.

Ewid ar pezh a sell douzh an dezenn-mañ e vern lâred e oa bet sklaerraet-mat an traoù gant François FALC'HUN diwar-benn ar c'hensonennoù-dibenn. Ne oa, ewid skriv ar re-se, namaed ur lezenn : heni an diveradur, ewid kement ger a zo, anw-kadarn pe ged. Sklaer e oa bet resisaet gantañ rol an dibennoù kaletauz. Divizet e oa bet doubliñ ar c'hensonennoù linkuz **l**, **m**, **n**, **r** dirag an dislostoù kaletauz, ar pezh en doa dalc'het iwe Meriadeg HERRIEU (1979 : 84).

Dilezet da vad neuze gant ar Skolveureg ar reolenn *didel*<sup>280</sup> he doa degaset an diforc'h etre **brezonek** ha **brezoneg** er skrid<sup>281</sup>. Degemeret e oa bet ar sistem-se ez-ofisiel gant ar skol-veur, eleze e anw, hag heuliet gant meur a geveladur (Ar Falz...).

Mez n'helle ket ar Vretoned chomel ataw gant tri doare-skriv : ar Peurunvan-41 hag ar Skolveureg daoubenneg (KLT dispartiet a-zoc'h W).

#### 2.4.5.8. MORVANNOU hag an Etrerannyezhel : 1975

Etre 1971 ha 1976, diwar intrudu Ar Falz hag e brezidant Pêr HONORÉ, ewid moned pelloc'h hag unvaniñ an traoù da vad ar wezh-mañ, e krogas an dud d'en em vodañ en-dro ewid tostaad Peurunvan-41 ha Skolveureg. Mez en aner iwe evel ma ouier. Afer an **daou s** a oa bet aze e-kreiz an tabut : embannet e oa bet *Le breton sans peine* (Assimil, 1975) gant Fanch MORVANNOU hag a zegase, ouzhpenn an traoù studiet da vad, an **daou s** er skritur heb emglew an oll war ar poent-se. Setu e pesort mod e taas an *Etrerannyezhel* dindan an heol:

---

<sup>279</sup> **Skolveureg** a vehe reishoc'h, herwez A. BOCHÉ. N'eus rezon ebed da skriv un **i** aze. Memes tra er ger **kelteg** (= **kelt**) (e-lec'h \***keltieg**, a vehe diazezet war ar stumm latin *Celtia*).

<sup>280</sup> "Règle arbitraire", A. AR MERSER (1993 : 8).

<sup>281</sup> "Différence purement conventionnelle, et parfois bien subtile..." STS, *Lexique*, p. 8.

ne oa ket falloc'h degouezh. Ar pezh a lakaas war-wel dizemglew ar perzhidi marse, mez dreist-oll ar pezh a voe kaoz a dorridigezh ar labour boulc'het e-korf meur a emvod<sup>282</sup>.

Ar pezh a chom sklaer, n'eus ket graet berzh an Etrerannyezhel gant e **zaou s** e-mesk ar Vretoned. Goude ma oa bet heuliet ar skritur newez gant ur lod ag an Emsav (an UDB ha keveladurioù evel Ar Falz, Skol an Emsav, Brezhoneg Yezh Vew, un nebeud kelaouennoù<sup>283</sup>), mez ged ur lod hebkén<sup>284</sup>, e tilezas an darn vuiañ ag an aduerion-se ar sistem newez tamm ha tamm. N'en doa ket Skol an Emsav dalc'het pell gant an **daou s** (daoust ma oa bet kenniget ar sistem-se ganti!<sup>285</sup>) ; dilezet ogozig lâred an Etrerannyezhel gant *Pobl Vreizh* goude arsav embannadur ar gelaouenn e 1982 (hag e 1984 goude adsav ar gelaouenn -skañvaet- e kaver enni pennadoù e Peurunvan-41 kentoc'h, daoust ma c'hell peb unan skriv enni gant e skritur ordinel<sup>286</sup>), hag a-c'houde ar bloazioù 1990 e ra tud Ar Falz - Skol Vreizh evel ma santont, lod feal d'an Etrerannyezhel, lod peurunvanerion, rik pe dirik<sup>287</sup>.

Tra heverk, diskouezin a ra an **daou s** enderc'hel rac'h ar pezh a yae d'ober an Etrerannyezhel, evel ma ne vehe ket bet namaed ar c'hennig newez-se (**ss, s, z** ha **zh**) er sistem-se. Nawazh e kaver ennañ kalzig a ziskloumoù arall araokauz memestra. Rag n'eo ket an **daou s** namaed un elfenn hebkén ag an newezioù adoptet gant an Etrerannyezhel. War a seblant o deus an **daou s** masket ar poentoù arall, an darn vuiañ anezhe akord warne perzhidi ar bodadegoù memestra, ha da gentañ hennañ : arrest a ober un diforc'h etre an anw-kadarn hag an anw-gwan a-fed skritur ar gensonenn dibenn-ger. Rac'hwiz an **daou s**, ha chom heb derc'hel kont ag an oll draoù arall a-du an dud gante, a oa en ur

---

<sup>282</sup> Herwez dielloù Pêr HONORE.

<sup>283</sup> Kelaouennoù evel *Evid ar brezhoneg* (5500 sk.), *Pobl Vreizh* (2000 sk.), *Yod Kerc'h* (1000 sk.), herwez Lukian KERGOAT (*Reolennoù an doare skrivañ nevez*, Skol an Emsav, e HONORE, teuliad 12.04.1975).

<sup>284</sup> Diwan (kentañ skol e Lampaol-Gwitalmeze, 1977), da gomañs ataw, en doa gwraet gant ar sistem newez. War kentañ peg-sun Diwan e oa skrivet : "*Diwan, ewid ar skolioù brezhoneg*." Mez hebdale e oa bet degemeret ar Peurunvan-41 gant Diwan.

<sup>285</sup> "*Ur c'hinnig nevez a oa bet graet gant tud Skol an Emsav : klask dirouestlañ kement S, Z ha ZH a zo en brezhoneg*." *Pobl Vreizh*, Nn 61, 15.03.1975.

<sup>286</sup> Sd. *Le Peuple Breton*, Nn 537, Here 2008 : 34.

<sup>287</sup> Da skwer e oa bet embannet *Geriadur ar brezhoneg a-vremañ* (FAVEREAU) en etrerannyezhel (+ meneg ag ar Peurunvan-41 hag euz ar Skolveureg) e 1992. Mez herwez diazezoù ar Peurunvan-41 eo e oa bet embannet ar geriadurioù arall bet savet gant an oberour goude hennezh... mez gant frankiz memestra.

mod “teurel an amanenn ged ar laezh-ribot“. Mar treuzvew an Etrerannyezhel c’hoazh, red eo ansav n’eo ket daet ar maout gantañ, pell a-vaze, daoust dezhañ boud ledan a spered : etrerannyezhel memestra, evel ma lârer etrevroadel !

#### 2.4.5.9. Ar Peurunvan-41, mestr war an dachenn

Torret an emvodoù enta, ha sellet da heul evel traoù null ar poentoù-emglew a oa bet kavet. Dreist-oll ar poent kentañ, “*point capital*“ nawazh<sup>288</sup>, heni skritur ar gensonenn dibenn-ger. Setu perag e kaver c’hoazh e Peurunvan-41 koubladoù a-sort gant **sot/ur sod, braz/ar braz**, ha kement a zo. Diaez lakaad an deskarded da sanañ reizh traoù kemmesket evel **bras eo, ar braz eo, bras eo** [’bra:ze], [ar ’bra:ze], [’braze], sanadurioù a glotahe gwell gant ar stummoù lojikoc’h **braz eo, ar braz eo, bras eo** (ar skwer diwezhañ-mañ, gant un **a** berr, é sinifioud “*c’est de la pâte à crêpe*” !, enebet sklaer bremañ douzh **braz eo**, gant un **a** hir : “*il est grand*”).

Ewid an araogennoù displeget, daoust d’ar stummoù gant ur gensonenn vlod boud stankoc’h eged ar re gant ur gensonenn galed (**ewidin, ewidout, ewidimp, ewidoc’h** hag **ewitañ, ewiti, ewite**, da lâred eo 4/3, (sd. § 2.4.3.2.2., p. 225) eh eus bet dalc’het ar re-mañ da batrom (**eget, evit, rak, perak, pet...**).

Tra kuriuz, daoust d’an anwioù-verb boud anwioù-kadarn iwe, ne oant ket bet lakaet a-orin e klasad ar re-mañ mez dindan mod da skriv an anwioù-gwan (**kaout, lakaat**), ha setu c’hoazh enebadurioù a-sort gant **gounit** (vb)/**ur gounid** (ak), **kousket** (vb)/**ar c’housed** (av = ak)... Gwelet e vo penaoz e c’hoari an oll fedoù-se war sanadur ar brezhoneg a-vremañ, dreist-oll heni ar liammadurioù.

---

<sup>288</sup> A. AR MERSER, 1980 : 21.



## 2.4.6. DIGEMPOUELLDED DIVIZ 1901

### 2.4.6.1. Arguzenn ar yezhadur

Graet an diforc'h enta etre anw-kadarn hag anw-gwan dre ar gensonenn-dibenn e vez klewet skolaerion zo, bremañ c'hoazh, kemer harp war an diforc'h-se ewid sikour o skolidi da ouied anwiñ peb unan ag an daou rummad gerioù-se. Etre **braz** ha **bras** enta e vehe anw-kadarn ar ger ur gensonenn vouezhiet en e zibenn hag anw-gwan an heni ennañ ur gensonenn vouezhiet ! Kamm eo an arguzenn, rag penaoz dibab dre an diforc'h-skritur hebkén pandeogwir n'eus ket anezhañ seul gwezh : peheni an anw-gwan etre **toull** ha **toull** (**toull eo ma sac'h / stankiñ an toull**) ? nag etre **roz** ha **roz** (**roz eo ar roz douzh tor ar roz**<sup>289</sup>) ?

Mez daoust dezhi boud kamm, n'eo ket newez an arguzenn nawazh, peogwir e oa bet geriet e 1908 dija pa oa bet krouet ar KLT (Sd. § 2.4.5.4.1., p. 242) :

« Ceci permet des distinctions comme **mad** *le bien*, **mat** *bon* (adj.), *bien* (adv) ; **galleg** *le français*, **gallek** *français* (adj.) ; **galloud** *le pouvoir*, **gallout** *pouvoir* (verbe), etc. »

Goulenn a ra termenañ natur ar gerioù un tamm preder da gentañ, ha n'eo ket ar mod-ober meneget uhelloc'h an heni spleitusañ. Etre ar gerioù e vez diaez meur a wezh termenañ ur ger bennag evel anw-kadarn, anw-gwan, ger-goulennata... E galleg e vez lâret *manger* (vb)/*le manger* (ak) ; *pourquoi* (adv. goulenn)/*le pourquoi* (ak) ; *beau* (ag)/*le beau* (ak)... E brezhoneg iwe e kaver sort degouezhioù : **melen** (ag)/**ar melen** (ak) ; **skuizh** (ag)/**Ar Skuizh**<sup>290</sup> (ak) ; **un toull** (ak)/**toull eo** (ag). En troioù-se ne raer ket diforc'h-skritur ebed, petra bennag e ve natur ar ger. Perag enta ober unan er c'houbladoù evel **bras** (ag)/**ar braz** (ak) ; **kousket** (vb)/**kousket** (ag)/**ar c'houked** (ak) ; **perak** (adv. goulenn)/**ar perag** (ak) ? Perag na skriv **\*skuish** abalamour da **skuishoc'h**, **\*uhell** abalamour d'an estlamm **uhellad !**, **ros** abalamour da **rosañ** ?...

<sup>289</sup> Kavoud a raer **roz** evel anw-gwan e HY, mez narenn e RH, a verk **damruz** ewid ar liw.

<sup>290</sup> **Ar Skuizh** [ər 'ʃuɛx] a oa lesanw un den a Bluwigner 'm eus anavezet.

N'eo ket an dra-se a zo bet divizet ober, ha gant rezon. Rag mar geller gouied e vo **mad** un anw-kadarn ha **mat** un anw-gwan ne ouioc'h ket diwar ar skrid penaoz o sanañ, hag aze ema an dalc'h : ar memez sanadur o dez, peurliesañ<sup>291</sup>. Ha ne vehe ket kalz pouezusoc'h roiñ dorn d'an deskidi war ar poent-se, heni ar sanadur reizh, kentoc'h eged roiñ dezhe dre ar skrid da ouied hag-eñv ema ger-mañ-ger anw-kadarn pe anw-gwan ?

#### 2.4.6.2. Torridigezh ar liamm etre kod ha diskodañ

##### 2.4.6.2.1. Ur reolenn a zegas diaezamantoù da lenn :

Ewid ar pezh a sell an anwioù-kadarn e vez kempouell an traoù e peb doare-skriv. Aze ema sklaer ha kompezet an traoù, d'an nebeutañ.

Ewid ar gerioù arall e chom digor-kàer ar gudenn... mez e Peurunvan-41 hebkén. Rag diskloumet eo bet reizh-mat gant ar Skolveureg. Diskloumet iwe gant an Etrerannyezhel, war-bouez un dra : afer an **s** hag an **daou s** a vo studiet er L2, § 5.1.1).

Setu ur bomm-skrid e Peurunvan-41 : **bras eo e glas / n'eo ket glas ar bras**. Penaoz d'ur lenner bennag henn sanañ reizh heb analizañ ar gerioù ? Un taol-chañs a vo dezhañ degouezhoud war ar sanadur mad mar n'anav ket mat ar brezhoneg. Hag anavoud a ra ar Beurunvanerion si-se o doare-skriv, evel ma ansave L. KERGOAT e kentelioù ar SUED (2000-2001) :

« Evezhiadennoù : Abalamour da reolennoù diazez an doare-skrivañ evit aroueziañ ar c'hensonennoù dibenn e c'haller bezañ lakaet diaes gant ar skritur evit distagañ reizh un nebeud gerioù : ur vogalenn hir a ranker distagañ er gerioù **pet, glas...**» (p. 19).

Skrivomp ar skwer-se bremañ dindan lezenn an diveradur (herwez ar Skolveureg hag ar sistem a implijan amañ) :

**Braz eo e glas** (*sa classe est bleue*).

**N'eo ket glaz ar bras** (*la pâte à crêpes n'est pas bleue*).

---

<sup>291</sup> War-bouez un nebeud anezhe : **mat** a c'hell boud sanet gant un **a hir** pe gant un **a berr** gwezhave, penaoz henn gouied ?

Tu zo amañ da ziskodañ hirder ar vogalenn adal ma vo bet desket ar reolenn (hir dirag **-z**, berr dirag **-s**) : [’bra: ze e ’glas / neke’gla: zar’bras].

#### 2.4.6.2.2. Ur rummad gerioù stank a-walc’h :

Lâred a ray an den e vez kavet ar gudenn er gerioù unsilabenneg dreist-oll, hag er gerioù taolmouezhiet war ar silabenn ziwezhañ, ha tu zo da lâred, evel GUILLEVIC ha LE GOFF, e vo desket dre gomz (“par l’usage“) hirded ar bogalennoù (*Grammaire bretonne*, p. 2). Mez ur bern ag ar gerioù-se zo boutin a-walc’h. Renablet em eus amañ ar gerioù, ur gensonenn galed douzh o dibenn. Diaez e vo da veur a unan o sanañ reizh, a-gaoz ma kaver er roll-se anwioù-gwan mesket gant anwioù-kadarn. Evel ma ouier e verk ur gensonenn-dibenn galed ur vogalenn verr en anwioù-kadarn, mez n’eus talvoudegezh ebed ar reolenn sklaer-se en anwioù-gwan, peogwir ema bet torret ar c’hod-se er rummad gerioù-se gant diviz 1901. N’eo ket souezhuz enta klewed an danvez-kelennerion souten e vez sanet “blott’ “ ar ger **blot** abalamour d’an **-t**, tre evel e **klöt**, **Spöt** ha kement a zo, e-kontrel douzh **klöd**, **löd**, **pöd**. Setu amañ ur roll diglok ag ar gerioù-se, skrivet e Peurunvan-41 :

**bas, blod, blot, bod, bok, bos, bot, boud, bouf, bout, bras, braz, bres, broud, brout, bruch, c’hwek, chag, chak, chik, chip, choug, chouk, dik, dous, dres, drez, feuk, flak, gak, glas, glaz, glout, gopr, god, got, gras, gres, grez, gris, gros, gup, gwag, gwak, gwifl, hak, hakr, hed, het, heud, heut, hik, hop, huk, jot, kab, kap, ket, klas, klaz, kled, klet, kleuk, klok, klos, kloz, klod, klot, kluch, koch, kof, kog, kop, kos, kozh, kouch, krag, krak, kras, krop, krot, kuch, lik, libr, lip, lis, liz, loch, loj, lop, lod, lous, luch, lud, lus, lut, luz, mad, mat, mik, mod, mot, mouch, moug, mouk, mous, mus, mut, muz, nak, nifl, of, ouf, pech, pej, peuk, pig, pik, poch, pog, pok, pouch, pout, pres, prof, puch, put, rat, red, ret, reud, reut, rik, rip, riz, rog, rok, rous, ruz, sklas, skob, skop, skos, skout, skrab, skrap, sod, sot, souk, sout, spes, spis, splet, spot, stek, stok, stouf, stouk, stoup,**

**strob, strop, tas, tek, teuk, tog, tok, tos, toud, tous, tout, touz, tres, trok, trot, truk, trut, tuf, uz, vak**<sup>292</sup>...

Daoust ha gwir eo e vez kavet ur vogalenn verr en oll c'herioù-se ? Daoust hag-eñv e ranker kelenn “c’hwèkk“, “glass“, “rouss” pe “sott“ ? Daoust hag-eñv eh eus ag un enebadur-sanañ merket dre tres hir/berr ar vogalenn er c’houbladoù **blod/blot, bod/bot, chag/chak, klaz/klas, rouz/rous, spis** (= *sklaer*) ha **spis** (*épices*) ? Penaoz gouied ? N'eus ket tu da vous sur, namaed moned da furchal en ur geriadur a verk ar fonetik.

#### 2.4.6.2.3. Hag ur reolenn amreolieg ! :

Mar behe bet c’hoazh reolieg ar reolenn, war-bouez nebeud, evel ma tere d’ar reolennoù, e-lec’h ma rank an namaedennoù chomel dibaot a-walc’h (*l’exception qui confirme la règle !*) e vehe degemeraduz marse, mez ur bern anwioù-gwan ne vezont ket skrivet gant ur gensonenn galed e Peurunvan-41. Setu amañ ur roll anezhe, a chom diglok-mat iwe :

**abred, ac’hub, adkrog, a-led, amc’hiz, amgriz, amguzh, amneuz, amreizh, arnevez, a-raz, arruz, a-skej, a-stlej, a-souz, a-strob, a-struj, a-zibrad, beiz, berrbad, beuz, blej, boud, brazez, brizh, chag, damc’hleb, damc’houez, damguzh, damruz, diabeg, diampled, diaoz, diaviz, diazez, dibab, dibikouz, dibistig, didad, dideod, didouz, didrouz, didruez, dieub, difeiz, digarg, dinobl, diskloz, dismeg, distag, doubl, doug, druz, gleb, gouez, goustad, jog, kleiz, kleuz, kloz, kozh, kren, krog, kuzh, libr, lug, moug, nobl, pil, plom,**

---

<sup>292</sup> Setu ar gerioù-se skrivet oll herwez an diveradur, aez da ziskodiñ an hirder enne bremañ : **bas, blod, blod, bod, bok, bos, bot, boud, bouf, boud, braz, braz, bres, broud, broud, bruch, c’hweg, chag, chak, chik, chip, souk, chouk, dik, dous, dres, drez, feuk, flak, gag, glaz, glaz, glout, gopr, god, got, gras, gres, grez, griz, groz, gup, gwag, gwag, gwifl, hak, hagr, hed, het, heud, heud, hik, hop, huk, jot, kab, kap, ket, klas, klaz, kled, kled, kleuk, klok, klos, kloz, klod, klot, kluch, koch, kof, kog, kop, kos, kozh, kouch, krag, krak, kras, krop, krot, kuch, lik, libr, lip, lis, liz, loch, loj, lop, lod, louz, luch, lud, lus, lut, luz, mad, mat, mik, mod, mot, mouch, moug, mouk, mous, mus, mud, muz, nak, nifl, of, ouf, pech, pej, peuk, pig, pik, poch, pog, pok, pouch, poud, pres, prof, puch, put, rat, red, red, reud, reud, rik, rip, riz, rog, rog, rouz, ruz, sklas, skob, skop, skos, skout, skrab, skrap, sod, sod, souk, sout, spes, spiz, splet, spot, stek, stok, stouf, stouk, stoup, strob, strop, tas, tek, teuk, tog, tok, tos, toud, tous, toud, touz, tres, trok, trot, truk, trut, tuf, uz, vak.**

**reizh, rez, roz, ruz, serzh, skerb, skord, soubl, speg, stag, strizh<sup>293</sup>,  
suj, teuz, touz, yud...**

Tu zo da gompren ema bet gouarnet kensonenn-dibenn an diverad er gerioù kevrenneg, evel er re dre **a-**, **ad-**, **am-**, **di-** ha **dis-**... : **di-/dis-** da skwer a sinifi “**heb**” : **direspet** = **heb respet** (< **respetiñ**), **didrouz** = **heb trouz** (< **trouzal**), **dismeg** = **heb meg<sup>294</sup>** (< **dismegañs**). Komprenabl eo iwe an diforc’h a c’heller ober etre **dizroug** (heb **droug**, *indemne*) ha **dizrouk** (nad eo ket **drouk**, nad eo ket fall, *sans méchanceté, sans colère*, RH) ; etre **divis** (heb **vis**, heb **si**, *sans vice*) ha **diviz** (heb **miz sans frais, peu coûteux**)<sup>295</sup>. Tu a vehe bet da astenn ar jest ha diforc’hañ **diglet** (*non abrité*) diouzh \***digled** (*sans abri*) (e-tal **digledour** (*un*) *sans-abri* RH).

Mez pesort justifiañs d’an diforc’h bet lakaet dre skrid etre **divlas** (*terrible, horrible, odieux, infâme*) ha **divlaz** (*insipide, fade*), é toned ag ar memez ger ? Ha kempouell eo skriv **dame’hleb** diouzh un tu ha **dame’hlas, damlouet** diouzh an tu arall ? **Abred**, **a-led**, **a-stlej** mez **alies**, **a-raok**, **a-zirak** ? Perag skriv **dirout**, **diskoupl** pa ne gaver namaed **roud**, **koubl** er geriadur ?

Perag ober un diforc’h etre **besteot** (ag) ha **besteod** (ak) pa na raer ket etre **beskorn** (ag) ha **beskorn** (ak) ?

Perag ouzhpenn skriv **nobl** pa vez lâret **noplaat**, **noplañ**, **noploc’h** ha pa vez lakaet ur vogalenn verr er ger-se gant geriadur AH [’nop(l)] kement hag e heni FAV<sup>296</sup> ? Perag leuskel aze an diveradur gant ar lostgerioù neutr c’hoari (**noblañs**, **nobliñ**) ? Ewid an heni a soursi douzh kelenn ur sanadur reizh d’e skolidi, setu aze ur problem kasauz, na n’ema...

---

<sup>293</sup> Perag na skriv **-sh** er gerioù-se, diwar batrom **strizh/strishaat** ? Kempouell e vehe gant ar stumm **bras** abalamour da **brasaad**...

<sup>294</sup> Pennef ag ar br.-kozh, **mec**, **mic**, a sinifi *skediñ* (DESHAYES, 2003 : 189).

<sup>295</sup> Mez iwe heb **biz sans doigts** (sd. **divlev sans cheveux, diskorn sans cornes, diskouarn sans oreilles**, RH).

<sup>296</sup> Mez hir gant HY [’no:pl] !

### 2.4.6.3. Farioù yezhouriezh

Souezhuz eo lenn dindan pluenn Roparz HEMON, ken lemm ma oa e spered war ar yezh, ema **-ig** (gantañ **-ik**) ur lostger dousauz a laka an dibennoù kaled da vlotaad : n'eus aze namaed ur justifiañ goude d'ar reolenn doare-skriv boud degaset ar redi-se. Anavezoud a rae sklaer HEMON kudenn an dibennoù, ha kredabl ne oa ket a-du gant an dibab bet graet (“kalz da lavarout a-enep [d'ar reolenn-se]”, 2008, 52). Mez selled a rae douzh an doare-skriv evel douzh un dra a rank boud unvan<sup>297</sup> ha chomel stabil<sup>298</sup>. Neuze, na boud e vehe bet fallskrivet ur ger bennag pe fallsavet ur reolenn bennag, e rank an doare-skriv chomel er stad m'ema bet savet hag embannet evel-se da heul er geriadur-dave. Ewid-se e oa anaoudeg da VALLEE, “da vezañ bodet skrivagnerion en ur sal evit sinañ un emglev met ivez, ha muioc'h, da vezañ o lakaet da zerc'hel d'an emglev goude” (2008 : 52). Peogwir ne oa ket bet rebechet choaz 1901 gant an dud, nag e 1907 nag e 1925, e oa red heuliañ digemm ar reolennoù en arver gant an oll.

N'eo ket **-ig** ur lostger kaletauz, evel ma lâre AR BAYON (sd. § 2.4.5.3.1. p 237), n'eo ket muioc'h ur lostger dousauz, evel ma lâre HEMON, a-sort gant **-a**, **-aad**, **-añ**, **-oc'h**, **-ad/-ed**, rag n'eus ket bet biskoazh **h**- ebed ennañ. Ur lostger neutr eo, na c'hell ket chañch kalite ar gensonenn, hag he lakaad da goll he zres a vouezh. Mar da da **bras** moned da **brazig**, n'eo ket abalamour m'ema dousauz an **-ig**, mez kentoc'h abalamour m'ema bet fallskrivet ar gensonenn-dibenn er ger **bras**, a vehe da voud skrivet **braz** (< **brazez**, **brazentez**...).

Ar pezh a vez kadarnaet e gerioù evel **dous**, un s-kaled ennañ (skrivet gant **-ss** en Etrerannyezhel), a ya da **dousig**. Mar behe bet **-ig** un dibenn dousauz e vehe bet aet da **\*dousig**, ar pezh nad eo ket. Ne galeta ket na ne zousa ket **-ig** kensonenn ebed : **bos** (ak) > **bosig** / **fas** (ak) > **fasig** / **mous** (ak) > **mousig** / **droch** (ag) > **drochig** / **klok** (ag) > **klokig** / **prop** (ag) > **propig** / **tort** > **tortig**...

<sup>297</sup> "Eur yez trec'h a rank beza eur yez unvan", *An doare-skriva nevez*, 1942 : 4.

<sup>298</sup> "Une orthographe rigoureusement unique", *Manifest Gwalarn*, 1925.

Un dra vad e vehe reizhañ neuze ar pezh a lenner e geriadur HY c'hoazh, da heul ar pezh en doa skrivet R. HEMON en e yezhadur :

« La terminaison **-ik** voise généralement la consonne finale du mot. Ainsi **k, t, p, s** deviennent **g, d, b, z** : **mat** (*bon*), **madik** (*assez bon*), **alies** (*souvent*), **aliezik** (*plutôt souvent*). Mais il existe certaines exceptions : **dous** > **dousik**. » (HY, p. 219).

Rag an namaedennoù ne vez ket mui anezhe pa vez heuliet lezenn an diveradur e peb ger : **aliez** > **aliezig** / **braz** > **brazig** / **dous** > **dousig** / **mad** > **madig** / ...

#### 2.4.7. KLOZADUR

« Lavaret e vo e vez neutralizet an enebadur mouezhiet/divouezh e fin ar gerioù brezhonek : ne vez na “**t**” na “**d**”, na “**k**” na “**g**”... ken, met un dra a c'hall bezañ an daou. Abalamour da se en deus termet ar skritur evit gouzout petra skrivañ : *mat/mad...*» (KERGOAT, SUED, 2000-2001).

Termet en deus ar skritur enta. Ha termal a ra c'hoazh ? Ya, pa geñverier an tri sistem etreze. Teir feson a vez diskouezet : unan gant ar Peurunvan-41, unan gant ar Skolveureg, un arall gant an Etrerannyezhel, a vehe hañval-fasibl douzh ar Skolveureg war ar poent-se paneve an -s (**bras, douss**).

Gwelet hon eus penaoz en deus fenomen an neutralizadur ha levezon ar lostgerioù kaletauz degaset un diaezamant braz ewid termenañ kensonenn-dibenn ar gerioù. Gwelet hon eus e pesort mod ema daet choaz ar Wenedourion GUILLEVIC ha LE GOFF betegzimp er bloazioù 1901, 1908, 1925, 1941. Gouied a raomp iwe nend eus ket ar Skolveureg nag an Etrerannyezhel nebeutoc'h c'hoazh graet berzh er vro, nag e-mesk ar skrivagnerion kement-se<sup>299</sup>, nag er skolioù, na bremañ war ar panneloù-hent a vez gwelet é paotaad a-

---

<sup>299</sup> Herwez Envel KERVOAS, diwar ar 48 romant ewid ar grennarded bet embannet etre 1995 ha 2005 eh eus bet 47 e Peurunvan, 1 e Skolveureg ha 0 en Etrerannyezhel (2009 : 288).

hed an hentoù hag er c'hêrioù. Termal ne ra ket mui ar skritur en ur mod neuze, pa za pe pand eo daet ar Peurunvan-41 da vout mestr war an dachenn. Klask a raimp gweled bremañ n'eo ket diefed an dibab-se, dre studial er chabistroù 3 ha 4 problem ar liammadurioù, a zo kalon an dezenn-mañ.

## 2.5. KLOZADUR AR PENNAD 2

N'eus netra newez gant an teir reolenn bet studiet amañ, namaed boud o lakaet en ur bloc'h kempouell a vehe, d'am soñj, da zerc'hel kont anezhañ e didaktik kelenn ar sanadur. Eveljust n'hell ar c'hennig-se talvoud namaed gant komprenidigezh hag aduadur an oll ewid henn lakaad e pleustr. Rekiz e vehe d'ar Wenedourion degemer an taol-mouezhiañ standard da batrom iwe, d'an nebeutañ er skol hag er radio ha skwinwel, ha d'an oll lakaad da bal o mod da gomz *boud komprenet gant ar muiañ niver*. Kaoud ur yezh kumun enta, plas e-barzh ewid liwoù disañval memestra (Sd. korpus § 2.2.5.5.3. p. 168 ha CD : **Korpus standard KLT-W**).

Ur bederved reolenn nawazh zo da stagañ douzh bloc'h an teir em eus komzet diwar o fennoù uhelloc'h, hag a denn douzh ar gerioù o hunan : reolenn ar liammadurioù. Bremañ ema mall dimp en em c'houlenn penaoz e tremen an traoù e brezhoneg e juntadur daou c'her, pe er juntadur a zegouezh e diabarzh a gerioù.



## RENABL AN TAOLENNOÙ

Taolenn 1. Framm ar silabenn e yezhoù zo .....	116
Taolenn 2. Brezhoneg : Pad ar vogalenn dindan an TM. ....	117
Taolenn 3. Groupoù ritmeg ha gerioù ritmeg .....	120
Taolenn 4. An TM e brezhoneg Ar Gemene. ....	138
Taolenn 5. Chema an TM standard herwez Ken GEORGE. ....	157
Taolenn 6. Dasparzh an TM standard.....	190
Taolenn 7. An divouezhiañ en dibenn absolut.....	211
Taolenn 8. Fichenn F2 Skolidi + Brazarded (B6). ....	212
Taolenn 9. Fichenn F1/F2 : Skolidi. ....	213
Taolenn 10. Dasparzh ar lostgerioù neutr herwez o bogalenn-penn. ....	218
Taolenn 11. An dibennoù galleg <i>-ade</i> , <i>-at</i> ha <i>-ate</i> keñveriet douzh ar brezhoneg.....	220
Taolenn 12. An dibennoù kaletauz. ....	231
Taolenn 13. Dasparzh ar lostgerioù brezhoneg : kaletauz pe neutr.....	231
Taolenn 14. Dibennoù an anw-gwan herwez LE BAYON. ....	237
Taolenn 15. Diveradur herwez LE BAYON (a). ....	238
Taolenn 16. Diveradur herwez LE BAYON (b). ....	238

## RENABL AR GRAFIKOÙ

<b>Grafik 1.</b> Fichenn F2 : Skolidi (CM2, 5ved, Lise). An Taol-Mouezh standard war ar silabenn eil-ziwezhañ.....	147
<b>Grafik 2.</b> Fichenn F2 : Skolidi (CM2, 5ved ha Lise). An TM standard e peb sistem-kelenn.....	149
<b>Grafik 3.</b> Fichenn F1 : Skolidi (ag ar CM2 d'ar Lise). Lod an hirder sevenet kentoc'h reizh er gerioù unsilabenneg .....	185
<b>Grafik 4.</b> Fichenn F2 : Skolidi (ag ar CM2 d'ar Lise). Lod an hirder sevenet kentoc'h reizh er gerioù liessilabenneg.....	186
<b>Grafik 5.</b> Fichenn F1 : Skolidi (3ved ha Lise). Keñveriañ Soubidigezh ha Parded a-fed hirder.....	187
<b>Grafik 6.</b> Fichenn F2 : Skolidi (ag ar CM2 d'ar Lise). An hirder er gerioù liessilabenneg : Soubidigezh ha Parded.....	188
<b>Grafik 7.</b> Fichenn F2 : Skolidi (ag ar CM2 d'ar Lise). Hirder : keñveriañ Soubidigezh (Diwan) ha Parded.....	188
<b>Grafik 8.</b> Fichenn F2 : Skolidi (ag ar CM2 d'ar Lise). Keñver etre TM ha hirder ar vogalenn.....	189
<b>Grafik 9.</b> Fichenn F1 : Liseidi. R3 : divouezhadur ar gensonenn en dibenn absolut (diwar tri ger : <i>noz</i> , <i>lod</i> , <i>staj</i> ) .....	214



**UNIVERSITÉ EUROPEENNE DE BRETAGNE**  
**UNIVERSITÉ RENNES II**

Ecole Doctorale Humanités et Sciences de l'Homme  
Centre de Recherche Bretonne et Celtique (CRBC)  
FRE 3055

**ENSEIGNEMENT DU BRETON**  
**PAROLE, LIAISON et NORME**

Etude présentée dans le cadre  
de quatre règles de prononciation  
pour le breton des écoles

**Thèse de Doctorat en Celtique**

**Volume 2**

**Présentée par Jean-Claude LE RUYET**

Directeur de thèse : M. Francis FAVEREAU

Soutenue le 18 Décembre 2009

Jury :

M. Rhisiart HINCKS, Senior lecturer, University of Wales, Aberystwyth,  
(Rapporteur)

M. Pierre-Yves LAMBERT, Directeur de Recherche, EPHE, Sorbonne,  
(Rapporteur)

M. Hervé LE BIHAN, Professeur, Université de Rennes II

M. Francis FAVEREAU, Professeur, Université de Rennes II

**SKOL-VEUR EUROPEAN BREIZH**

**SKOL-VEUR ROAZON II**

Skol Doktorad Denezhioù ha Gouiañsoù Mabden  
Kreizenn Glaskerezh Breizheg ha Kelteg (CRBC)  
FRE 3055

**KELENN AR BREZHONEG**  
**KOMZ, LIAMM ha NORM**  
prezantet e stern peder reolenn-sañ  
ewid brezhoneg ar skolioù

**Tezenn Doktorad Kelteg**

**Levrenn 2**

**Prezantet gant Jean-Claude LE RUYET**

Rener-tezenn : Francis FAVEREAU

Difennet d'an 18 a viz KERZU 2009

Juri :

Rhisiart HINCKS, Senior lecturer, University of Wales, Aberystwyth,  
(Dezrevellour).

Pierre-Yves LAMBERT, Rener-Klaskerezh, EPHE, Sorbonne, (Dezrevellour).

Hervé LE BIHAN, Kelenner, Skol-Veur Roazon II.

Francis FAVEREAU, Kelenner, Skol-Veur Roazon II.

KELENN AR BREZHONEG  
**KOMZ, LIAMM ha NORM**  
prezantet e stern peder reolenn-sanañ  
ewid brezhoneg ar skolioù



3.3.2.2.1. Ar liammadurioù red :	296
3.3.2.2.2. Ar liammadurioù berzet :	297
3.3.2.2.3. Ar liammadurioù dired :	297
3.3.2.3. Liammadur hag <i>e-dibenn</i> ( <i>e caduc</i> )	298
3.3.2.4. Liammadur gant <i>h-</i>	298
3.3.2.5. Emdroâdur ar liammañ e galleg	299
3.3.3. AR LIAMMADUR E BREZHONEG	299
3.3.3.1. Liammadur bogalenn#kensonenn (1B#K2)	299
3.3.3.1.1. Degouezhioù boutin :	299
3.3.3.1.2. Kudenn an <b>h</b> -kensonenn :	300
3.3.3.2. Liammadur kensonenn#bogalenn (1K#B2) (+ <i>h</i> mud ; + <i>l</i> , m, n, r)	301
3.3.3.2.1. Ur reolenn simpl, ur reolenn olleg :	301
3.3.3.2.2. Liammadur gant un <b>h-</b> mud :	304
3.3.3.2.3. Liammadur gant <b>l, m, n, r</b> :	304
3.3.3.3. Liammadur 1KK#B2	305
3.3.3.4. Liammadur gant ur rannig-termal	306
3.3.3.4.1. Skritur ar rannig-termal :	306
3.3.3.4.2. Liammadur gant ar rannig-termal :	307
3.3.3.5. Liammadur gant un hantergensonenn (HK)	308
3.3.3.5.1. Liammadur 1B#HK2 :	308
3.3.3.5.2. Liammadur 1HK#B2 :	308
3.3.3.5.3. Liammadur 1K#HK2 :	308
3.3.3.5.4. Liammadur 1HK#K2 :	309
3.3.3.5.5. Liammadur 1HK#HK2 :	309
3.3.3.6. Liammadur ha yezh skrivet	309
3.3.4. SANDHI 1K#K2	310
3.3.4.1. Sandhi : kaletâdur 1K e juntadur 1K#K2	311
3.3.4.1.1. Degouezh olleg :	311
3.3.4.1.2. Kensonenn 1K dirag an <b>h</b> -deroù-ger :	312
3.3.4.1.3. Kensonenn 1K dirag <b>l, m, n, r</b> (1K#KL2) :	313
3.3.4.1.4. Kensonenn 1K dirag KH2 ( <b>y</b> ha <b>w</b> ) :	313
3.3.4.1.5. Kensonenn 1KL dirag K2 :	313
3.3.4.2. Sandhi : kaletâdur K2 er juntadur 1K#K2	314
3.3.4.2.1. Degouezhioù boutinnañ :	314
3.3.4.2.2. Rentusted ar sistem :	315
3.3.4.2.3. Sandhi ha koazhadur 1K :	317
3.3.4.2.4. Rol fonologel ar sandhi :	317
3.3.4.2.5. Ar sandhi, harz douzh ar c'hemmadur :	317
3.3.4.3. Pa vez hep koret ar stok etre diw gensonenn	317
3.3.4.4. Sandhi kensonennel ha yezh skrivet	318
3.3.4.4.1. Ar sandhi : un tres dizgwel er skridoù :	318
3.3.4.4.2. Kemmadurioù ha sandhi :	318
3.3.4.5. KLOZADUR	319
3.4. AR JUNTADUR DIABARZH	321
3.4.1. AR HIATUS DIABARZH (1B+B2)	322
3.4.1.1. Goude ur ragger é achuoud gant ur vogalenn	322
3.4.1.2. Goude ur z leoneg diabarzh	322
3.4.1.3. Goude un -d- steuziet	322
3.4.1.4. Goude ur -g- steuziet	323

3.4.1.5. Goude v pe w steuziet.....	323
3.4.1.6. Gant lostgerioù é krogiñ gant ur vogalenn .....	324
3.4.1.7. Hiatus vs diftoñgenn .....	324
3.4.1.8. Hiatus e topolektoù zo .....	325
3.4.1.9. Klozadur .....	325
3.4.2. JUNTADUR DIABARZH HEB KUDENN SANANÑ EBED .....	326
3.4.2.1. Juntadur diabarzh fonografeg gant ur vogalenn (B).....	326
3.4.2.1.1. 1B+K2 : .....	326
3.4.2.1.2. 1HK+B2 : .....	326
3.4.2.2. Juntadur diabarzh gant un hantergenonenn (HK) .....	326
3.4.2.2.1. 1HK+K2 : .....	326
3.4.2.2.2. 1HK+HK2 : .....	326
3.4.2.2. Juntadur diabarzh K+B (bogalenn pe h-mud pe lmnr pe y ha w) .....	327
3.4.2.2.1. Juntadur diabarzh 1K+B2 (bogalenn) : .....	327
3.4.2.2.2. Juntadurioù diabarzh 1K dirag h mud) :.....	330
3.4.2.2.4. Juntadur diabarzh 1K+HK2 (w ha y) : .....	333
3.4.3. JUNTADUR DIABARZH GANT 1K+K2-dous .....	335
3.4.3.1. Taolenn .....	335
3.4.3.2. Skritur ha sanadur .....	335
3.4.3.2.1. Juntadur 1K-dous+K2-dous : .....	335
3.4.3.2.2. Juntadur 1K-kaled+K2-dous : .....	336
3.4.3.3. Remerkoù.....	337
3.4.3.3.1. Rakger ha rakkêr : .....	337
3.4.3.3.2. <b>Addant ; rakedant</b> : .....	337
3.4.4. JUNTADUR DIABARZH 1K+K2-kaled .....	338
3.4.4.1. Levezon 1K-dous war K2-kaled (1K⇒K2) .....	338
3.4.4.2. 1K-dous levezonet gant K2-kaled (1K⇐K2).....	338
3.4.4.2.1. Skwerioù e yezhoù arall : .....	338
3.4.4.2.2. Skwerioù e brezhoneg : .....	339
3.4.4.3. Penaoz skriv 1K dirag K2 = p, t, k, s, ch, f ?.....	339
3.4.4.4. Juntadur diabarzh 1K + K2(=h-kensonenn pe c'h) .....	342
3.4.4.4.1. Juntadur gant h-kensonenn : .....	342
3.4.4.4.2. Juntadur gant K2 = <b>c'h</b> - : .....	344
3.4.5. REIZHANÑ HA SIMPLAAD.....	345
3.4.5.1. Simplâdur er gerioù kevrenneg gant -ti, -ki, -pred .....	345
3.4.5.2. Simplâdur er gerioù gant ar lostgerioù -ted ha -ter.....	346
3.4.5.2.1. Blotâdur pe kaletâdur : ar reolenn : .....	346
3.4.5.2.2. Stummoù diasur : .....	347
3.4.5.2.3. Diforc'h gerioù dre ar skrid : .....	349
3.4.5.2.4. Simplaad ar stumm skrivet : .....	349
3.4.6. KLOZADUR .....	350
3.5. KEÑVERIAÑ BREZHONEG-GALLEG .....	351
3.5.1. UR SELL WAR ISTOER AR GALLEG .....	352
3.5.1.1. Kensonenn-dibenn : sanet pe vud .....	352
3.5.1.2. Emdroâdur an -s-dibenn .....	354
3.5.1.3. Fatadur an e-dibenn .....	354
3.5.1.3. Liessorted fenomenoù ar juntañ e galleg.....	354
3.5.2. AR LIAMMADURIOÙ E GALLEG .....	355



3.5.2.1. Ur sistem kempleg .....	355
3.5.2.2. Farioù a-fed liammadurioù .....	357
3.5.2.3. Ar liammadurioù e galleg : bernusted ar c'hontekst.....	357
3.5.2.4. Ar liammadurioù e galleg : merk ar statud sokial .....	357
3.5.2.5. Emdroâdur ar galleg war dachenn ar liammadurioù.....	358
3.5.3. KENVERIAÑ AR LIAMMAÑ E GALLEG HAG E BREZHONEG .....	358
3.5.3.1. Gerioù gant ur gensonenn (pe un hantergensonenn)- dibenn sanet en o stummoù absolut .....	359
3.5.3.1.1. Kensonennoù sanet ataw : .....	359
3.5.3.1.2. Hantergensonennoù sanet ataw : .....	359
3.5.3.1.3. Reolenn : .....	359
3.5.3.2. Gerioù gant ur gensonenn (pe un hantergensonenn)-dibenn vud en o stummoù absolut .....	359
3.5.3.2.1. Kensonennoù mud : .....	359
3.5.3.2.2. Hantergensonennoù mud : .....	360
3.5.3.2.3. Reolenn : .....	360
3.5.3.3. Sistem ar liammañ e galleg.....	360
3.5.3.3.1. Galleg : chadennadur : .....	360
3.5.3.3.2. Galleg : liammadur : .....	362
3.5.3.4. Sistem liammañ ar brezhoneg 1K#B2 .....	363
3.6. KLOZADUR AR PENNAD 3 .....	364
4. AN ENKLASK HAG AR REZULTADOÙ .....	366
4.1. PRIENTIÑ AN ENKLASK .....	366
4.1.1. KENT AN ENKLASK .....	366
4.1.1.1. Ar fichenoù A1 hag A2 .....	367
4.1.1.2. Ar fichenoù B1 ha B2 .....	369
4.1.1.3. Ar fichenn Ey .....	369
4.1.1.4. Ar fichenoù C1 ha C2 .....	370
4.1.1.5. Ar fichenn Dx .....	371
4.1.1.6. Ar fichenoù JDK ha JDD .....	372
4.1.1.7. Ar fichenoù Sx ha Sy .....	372
4.1.2. TERMENIÑ TACHENN MA LABOUR .....	373
4.1.3. DAREMPREDOÙ GANT AR SKOLIOÙ .....	374
4.1.4. VALIDAÑ AR REZULTADOÙ : Test ar Khi-daou ( $\chi^2$ )... 375	375
4.2. MA MOD-OBER GANT AN ATERSIDI .....	376
4.2.1. CHOAZ AR SKOLIDI ATERSET .....	376
4.2.2. AN ATERSADENNOÙ .....	377
4.2.2.1. Ar protokol-atersiñ .....	377
4.2.2.2. Emzalc'h an atersidi .....	378
4.2.2.3. Tu teknikel an enklask .....	379
4.2.2.3.1. An enrollañ : .....	379
4.2.2.3.2. An enkodañ : .....	379
4.2.2.3.3. Treuzskrivañ ar sevenidigezhioù : .....	380
4.2.2.4. Taolenn an enklask .....	380
4.2.2.4.1. Taolenn ar skolidi hag ar fichennaouegoù enrollet : .....	380
4.2.2.4.2. Taolenn ar vrazarded hag ar fichennaouegoù enrollet : .....	382
4.2.2.4.2. Taolenn ar fichenoù roet : .....	383

4.3. REZULTADOÙ : AR SKOLIDI.....	384
4.3.1. FICHENNOÙ <b>A1/A2</b> : LIAMMADUR G'UR VOGALENN (- K <sup>⌢</sup> B-)	384
4.3.1.1. Rezultad ar c'hlaskerezh (Fichenn A1/Fichenn A2) .....	384
4.3.1.1.1. Levezon ar skritur war ar liammadur gant ur vogalenn :	385
4.3.1.1.2. N'eo ket kollet ar patrom brezhoneg (liammadur gant ur vogalenn) :.....	387
4.3.1.1.2. Talañ a ra gwell ar PB en troioù-lavar boutin : ...	387
4.3.1.1.4. Levezon ar skritur a vez kreñvaet pa glot gant heni ar galleg (?) :.....	389
4.3.1.2. Deskamantoù arall .....	390
4.3.1.3. Levezon an urzh-lenn .....	390
4.3.1.3.1. An urzh-lenn er CM2 :.....	391
4.3.1.3.2. An urzh-lenn en 3ved : .....	392
4.3.2. VALIDAÑ REZULTADOÙ <b>A1/A2</b> .....	393
4.3.2.1. Validañ war ar chifroù olleg.....	393
4.3.2.1.1. Jediñ olleg (rezultad ag ar CE2 d'ar Lise) :.....	393
4.3.2.1.2. Validañ rezultadoù peb live :.....	394
4.3.2.2. Test ar Khi-2 war ar rezultadoù heb ar liamm gant s ....	396
4.3.2.3. Keñveriañ ar liveioù (liammadurioù sevenet dous gant A1/A2).....	397
4.3.2.3.1. Keñveriañ Skol gentar ha Skolaj : .....	397
4.3.2.3.2. Keñveriañ Skolaj ha Lise :.....	397
4.3.2.3.3. Keñveriañ Skol gentar ha Lise :.....	398
4.3.2.4. Keñveriañ ar liveioù (liammoù dous vs liammoù kaled gant A1/A2).....	398
4.3.2.4.1. Keñveriañ Skol gentar ha Skolaj : .....	398
4.3.2.4.2. Keñveriañ Skolaj ha Lise :.....	399
Ollad liammadurioù <b>dous</b> gant <b>A1+A2</b> .....	399
Ollad liammadurioù <b>kaled</b> gant <b>A1+A2</b> .....	399
4.3.2.4.3. Keñveriañ Skol gentar ha Lise :.....	399
Ollad liammadurioù <b>dous</b> gant <b>A1+A2</b> .....	399
Ollad liammadurioù <b>kaled</b> gant <b>A1+A2</b> .....	399
4.3.2.5. Klozadur .....	399
4.3.3. FICHENNOÙ <b>B1/B2</b> : LIAMMADUR GANT <b>I-, m-, n-, r-</b> (-1K <sup>⌢</sup> KL2-)	400
4.3.3.1. Damorantoù ar patrom brezhoneg.....	401
4.3.3.2. Levezon ar skrid .....	401
4.3.3.3. Levezon ar mod da gas an diwyezhegezh.....	402
4.3.4. FICHENNOÙ <b>C1/C2</b> : LIAMMADUR GANT <b>h-</b> (-1K <sup>⌢</sup> K2-, [K2 = h-]).....	403
4.3.4.1. Dalc'husted an h-kensonenn.....	405
4.3.4.2. Levezon ar skrid .....	405
4.....	405
4.3.4.4. Levezon ar mod da gas an diwyezhegezh.....	406
4.3.4.5. Klozadur .....	407
4.3.5. FICHENN <b>Ey</b> : LIAMMADURIOÙ EN UN DESTENN....	407
4.3.5.1. Remerkoù diwar-benn an enklask .....	407
4.3.5.1.1. A-zivoud komprenidigezh an destenn : .....	407

4.3.5.1.2. A-zivoud mod da skriv testenn ar fichenn <b>Ey</b> : .....	408
4.3.5.2. Rezultad olleg ar c'hlaskerezh.....	408
4.3.5.3. Levezon ar skrid .....	409
4.3.5.4. Keñveriañ Soubidigezh ha Paridigezh.....	410
4.3.5.5. Emdroâdur an traoù a-hed ar c'hursus-skol.....	410
4.3.6. FICHENN <b>Dx</b> : AR SANDHI KENSONENNEL (-K <sup>^</sup> K-) 411	
4.3.6.1. Ar sandhi kensonennel hiziw.....	411
4.3.6.2. A-zivoud itemoù ar fichenn <b>Dx</b> .....	412
4.3.6.3. Ar rezultad .....	413
4.4. REZULTADOÙ : AR VRAZARDED .....	416
4.4.1. YEZH, FAMILH HA SKOL .....	416
4.4.2. AR VRAZARDED HAG AN ENKLASK.....	418
4.4.2.1. Ar vrazarded hag ar liammadurioù .....	419
4.4.2.1.1. Liammadurioù gant ur vogalenn (Fichennoù <b>A1/A2</b> ) :	
.....	419
4.4.2.1.2. Liammadurioù gant ur gensonenn linkuz (Fichennoù <b>B1/B2</b> , gant <b>l, m, n</b> , pe <b>r</b> ) :	
.....	420
4.4.2.1.3. Liammadurioù gant <b>h-</b> (Fichennoù <b>C1/C2</b> ) :.....	421
4.4.2.2. Ar sandhi.....	423
4.4.2.3. Ar vrazarded hag ar juntadurioù diabarzh .....	424
4.4.2.3.1. Kent an enklask : .....	424
4.4.2.3.2. Rezultadoù ar c'hlaskerezh :.....	424
4.4.2.4. Ar vrazarded hag an teir reolenn arall .....	429
4.4.2.4.1. R1 :An taol-mouezh : .....	429
4.4.2.4.2. R2 : Hirder ar vogalenn dindan an TM :.....	430
4.4.2.4.3. R3 : Sanadur ar gensonenn en dibenn absolut :.....	431
4.4.2.5. Klozadur .....	432
4.4.3. AR SKOL HA PROBLEM AR LIAMMADURIOÙ .....	433
4.4.3.1. Roll ar levroù-keleñn .....	433
4.4.3.2. Keleñn ewid komz pe keleñn ewid skriv ?.....	435
4.4.3.3. Rol TES (Ti-Embann ar Skolioù).....	437
4.4.3.4. Prederiadenn .....	439
4.5. DESKAMANTOÙ AR C'HLASKEREZH.....	441
4.5.1. LEVEZON AR GALLEG KOMZET WAR SANADUR AR BREZHONEG : UN DRA ANAD .....	441
4.5.1.1. Stad olleg an traoù a-fed liammadurioù gant ar skolidi. 441	
4.5.1.2. Dasparzh ar patromoù (skolidi) .....	442
4.5.1.2.1. An emzalc'hoù heniennel : .....	443
4.5.1.2.2. Levezon ar sistem-skol : Soubidigezh vs Paridigezh :	
.....	444
4.5.1.2.3. Disparidigezh etre ar c'hlasoù : .....	445
4.5.1.3. Stad an traoù gant ar vrazarded ( <b>B6</b> ) .....	447
4.5.1.4. Klozadur .....	448
4.5.2. GWELLAENN PE GED A-HED AR C'HURSUS-SKOL ?449	
4.5.1.1. Un hipotezenn na vehe ket gwir .....	449
4.5.1.2. Reolenn R4 : Emdroâdur sevenidigezh ar liammadurioù er skol.....	449
4.5.1.3. Reolenn R1 : Emdroâdur sevenidigezh an Taol-Mouezh er skol.....	450

4.5.1.4. Reolenn R2 : Emdroâdur sevenidigezh an Hirder er skol	452
4.5.1.5. Reolenn R3 : Emdroâdur an divouezhiañ en dibenn absolut er skol	453
4.5.1.4.1. Gant ar ger <i>Annaig</i> :	453
4.5.1.4.2. Gant an tri ger <i>noz, lod</i> ha <i>staj</i> :	454
4.5.1.5. Klozadur	454
4.5.3. ANAVOUD AR REOLENN NE SPIR KET D'AN DEN EWID CHAÑCH E SANADUR	455
4.5.3.1. An emskiant hag ar c'hemm	455
4.5.3.2. Ur labour war an hirdermen	456
4.5.3.2.1. Soubidigezh a-vihanig :	456
4.5.3.2.2. Kelenn an eil yezh diwezhad :	457
4.5.3.3. “Stummadur uhel “ Stumdi	457
4.5.3.4. An enklask gant stajidi Stumdi	458
4.5.3.4.1. Arselladennoù diwar ar fichenoù <b>A2, B2</b> ha <b>C1</b> :	458
4.5.3.4.2. Arselladennoù diwar ar fichenoù <b>A1, B1</b> ha <b>C2</b> :	460
4.5.3.5. Arselladennoù da fin ar “stummadur uhel” (B7)	460
4.5.3.5.1. Remerkoù diwar-benn ar fichenoù <b>Sx</b> hag <b>Sy</b> : ....	460
4.5.3.5.2. Keñveriañ ar rezultadoù tennet ag <b>Sx</b> hag <b>Sy</b> : .....	461
4.5.3.5.3. Kenveriañ stadiad an traoù e deroù hag e fin ar “Stummadur uhel” :	462
4.5.3.5.4. Titouroù arall tennet ag an enklask gant <b>Sx/Sy</b> : ....	464
4.5.3.6. Klozadur	466
4.5.4. LEVEZON AR SKRID WAR AR SANADUR	466
4.5.4.1. Liammet e vez sanadur ha doare-skriv	466
4.5.4.1.1. Ur gudenn ledan :	466
4.5.4.1.2. Ur gudenn e brezhoneg iwe :	467
4.5.4.2. Levezon ar skrid war ar sanadur herwez an enklask	469
4.5.4.2.1. Skrid ha liammadurioù dirag ur vogalenn (R4) : ....	469
4.5.4.2.2. Skrid ha liammadurioù dirag <b>l, m, n, r</b> (R4) : .....	472
4.5.4.2.3. Skrid ha sandhi dirag <b>h-</b> :	473
4.5.4.4. Klozadur	474
4.6. AR 4 reolenn DIAZEZ HAG AR C'HELENN	475
4.6.1. KELENN AR SANADUR	475
4.6.1.1. Ur preder dister	475
4.6.1.2. Un dober e brezhoneg	475
4.6.1.3. Ar peder reolenn : ur stern diazez	476
4.6.2. REOLENN 1 : AN TAOL-MOUEZH STANDARD	477
4.6.3. REOLENN 2 : HIRDER AR VOGALENN DINDAN AN TAOL-MOUEZH	477
4.6.2.1. Gerioù liessilabenneg (TM war ar silabenn eil-ziwezhañ)	478
4.6.2.2. Anwioù-kadarn unsilabenneg pe liessilabenneg gant an TM war ar silabenn ziwezhañ	478
4.6.2.3. Anwioù-gwan, adverboù, araogennoù, stagelloù, anwioù-verb	478
4.6.4. REOLENN 3 : DIVOUEZHADUR AR GENSONENN EN DIBENN ABSOLUT	479
4.6.5. REOLENN 4 : LIAMMADURIOÙ	480

4.6.6. PLEUSTRIÑ WAR AR SANADUR .....	481
4.6.6.1. Kelenn d'an estranjourion.....	481
4.6.6.2. Drevezañ ar skolaer .....	482
4.6.6.3. Choaz testennoù.....	482
4.7. KLOZADUR AR PENNAD 4 .....	484
5. KLASKEREZH A-ZIVOUD AN DOAREIOÙ-SKRIVANÑ.....	485
5.1. PALIOÙ AN ENKLASK .....	486
5.2. AOZAN AN ENKLASK.....	487
5.3. AR REZULTADOÙ.....	490
5.4. UR GOUNID OUZHPENN .....	495
5.4.1. GOUNID ER GERIOÙ UNSILABENNEG .....	495
5.4.2. GOUNID ER GERIOÙ, TM WAR AR SILABENN ZIWEZHANÑ .....	497
5.5. KLOZADUR AR PENNAD 5 .....	498
KENGLOZAD.....	501
LEVRENNADUR.....	507
TAOLENN AR GRAFIKOÙ .....	526
GERIAOUEG .....	528
STAGADENNOÙ .....	537
1. ROLL AR SKOLIOÙ.....	538
2. ROLL AN ATERSIDI HAG AR FICHENNOÙ ROET .....	539
3. KORPUS FICHENNOÙ AN ENKLASK .....	547
4. TAOLENNOÙ EXCEL.....	557
5. KRESK AN NIVERAD DIWYEZHEG .....	564

### 3. AR LIAMMADURIOÙ

En ur geriadur kozh galleg/saozneg ha saozneg/galleg, er pennad « *The french sounds explained to english-speaking people* » e c’heller lenn dindan ar ger “*Liaison*”:

"In most cases, when a word begins with a vowel (or a mute **h**), it is joined with the last consonant of the preceding word, even when the consonant is followed by a mute **e**. Ex. : *sept heures* (sètœr), *cette âme* (sètâm). In such cases, final **c** and **g** are pronounced as **k** [*avec elle* (avèkèl)] ; final **s** and **x** as **z** : [*six années* (sizané)] ; final **d** as **t** [*grand homme* (grantòm)]. The liaison only occurs when the two words are intimately connected and pronounced with one breath." (*Dict. Français/Anglais*, Louis CHAUFFURIN, Larousse, 1928).

Mez ne. veneg ket an oberour un heveleb esplegadenn er pennad « *Les sons de la langue anglaise expliqués aux Français* », rag ema ar liammadurioù ur fenomen a zo perzh ar galleg dreist-oll<sup>1</sup>. E gwirionez, e saozneg e tegouezh kentoc’h ar pezh a raer anezhe *chadennadurioù* (*it t is ; I think k it is*), a c’hell boud kemmet en amerikaneg : *a lot d of people ; what d else ?*

Pal ma studi amañ zo klask kompren ar pezh a zegouezh e limit ar gerioù, ha kentoc’h c’hoazh ar pezh a zegouezh etre daou c’her e chadenn ar c’homz, en o c’hejoù. Kalz muioc’h eh eus bet pleustret war ar c’hemmadurioù eged mand eo bet war ar liammadurioù. N’eus ket hentenn brezhoneg ebed chomet heb komz ag ar c’hemmadurioù, a vez prezantet evel un tres difer ag ar brezhoneg ha deuz ar yezhoù kelteg, un tres na vez ket kavet e galleg. Ha nawazh eh eus tu da selled douzh ar c’hemmadurioù evel douzh fenomenoù-juntañ iwe (RAUDE, 1980). Un diforc’h etre an daou dra nawazh : mar chañch ar c’hemmadurioù natur ar lizherennoù (**tad**, **ma zad**, **e dad**), n’henn gra ket ar liammadurioù : o sanadur eo a vez chañchet gante hebkén (**prop**, **prop b eo** [’pro**b**e]).

<sup>1</sup> In *Dictionnaire de linguistique et des sciences du langage*, Article *Liaisons*, Larousse, 1999.

Tro hon eus bet da weled penaoz e c'hoari an dibenn absolut war ar c'hensonennoù, a vez divouezhiet e yezhoù zo evel e brezhoneg. Na boud e vern kalz an endro ewid ar reolennoù R1, R2 hag R3, e c'hell an teir reolenn-se, am eus prezantet uhelloc'h, c'hoari e diabarzh ur ger e-hunan, daoust d'ar ger-se boud unsilabenneg : er ger **tad** sanet a-hunan e ranker lakaad an TM ennañ (R1), sanañ hir an **-a-** (R2) ha distagañ un /t/ en dibenn (R3). Gwelet e vo bremañ fenomenoù a zegouezh etre daou c'her e red ar c'homz, da lâred eo er juntadurioù etre ar gerioù, a-fed sanañ. Diwar-benn ar poent-se e vo komzet ag ar bederved reolenn (R4).

## 3.1. DIAZEOÙ MA STUDIADENN

### 3.1.1. AR STUDIOÙ A-ZIVOUD AR GALLEG

Herwez Henriette WALTER ne vez ket pouezet kalz war sanadur ar galleg er levroù a denn douzh istoer ar yezh hag er geriadurioù. Mar not *Le Petit Robert* peb ger-enmont gant notadur an API, n'her gra ket ar *Larousse*, namaed ewid degouezhioù zo. Er-maez ag un nebeud geriadurioù-sanañ (WARRANTS, LEON) n'eo ket soursi mod-sanañ ar galleg unan siriuz d'an darn vuiañ ag ar yezhourion ha difennerion ar galleg<sup>2</sup>. Ha nebeud a dra ouzhpenn en tele pe er radio ewid kelenn ar yezh a-vraz, dreist-oll ewid resisaad poentoù zo.

Aze ne gomzen ket 'maed ag ar gerioù. Mez e-keñver ar liammadurioù e vez hañval. En e bikol levr diwar-benn *Le bon usage* en doa gouestlet GREVISSE peder fajennad hebkén diwar 1768 d'ar liammadurioù (pp. 49-53, dle. 0.23%). Ne vez ket kavet kalz a studiadennoù diwar-benn ar fenomenoù-se, nag e galleg nag e brezhoneg. Mard eo an dra-se komprenabl e brezhoneg, kement a labour a chom d'ober, ema souezhusoc'h e galleg, e-lec'h ma tiskouez ar liammadurioù boud ur fed a-bouez, ur fed a zegouezh da beb termen er yezh.

---

<sup>2</sup> H. WALTER, *Le français tel qu'on le prononce*, in *Le français, des mots de chacun, une langue pour tous*, 2007 : 25-31.

Er levroù diwar-benn ar galleg kozh pe ar galleg-krenn em eus bet tro da furchal enne, daoust d'an titl boud resiz gwezhave (“*Comment lire le vieux français ?*”), pe er pennadoù bet savet gwezhave diwar-benn ar sanadur, ne gaver ogozig netra a-zivoud ar feson da seveniñ ar liammadurioù. Netra da skwer e “*Petit traité de langue médiévale*“ Nelly ANDRIEUX-REIX & al (2000), nag e levr Henri BONNARD ha Claude REGNIER (*Petite grammaire de l'ancien français*, 1989), na zokén e heni Guy RAYNAUD DE LAGE, maen-bonn ar galleg kozh (*Introduction à l'ancien français*, [1958], ademb. 2004). Gwezh e kaver un notenn diwar-benn an -s, mez narenn diwar-benn ar c'hensonennoù arall.

War a seblant e vehe tommoc'h ar gudenn bremañ ha labourioù a vez gwelet stankikoc'h eged ur prantad zo bet, dreist-oll a-c'houde studiadenñ John ÄGREN (1973).

### 3.1.2. AR STUDIOÙ A-ZIVOUD AR BREZHONEG

N'eo ket bet gouestlet oberenn difer ebed da gudenn ar liammadurioù e brezhoneg beteg bremañ. Daoust da venegoù dister pe disterroc'h e levroù zo, n'eo ket bet gwelet an dodenn-se evel unan siriuz a-walc'h ewid dedenniñ kuriusted studierion ar yezh. Ewid klask gouied hirroc'h e taolennin amañ daou brantad : adal AR GONIDEG beteg *Gwalarn* diouzh un tu ha goude *Gwalarn*, é voud ma verk 1925 un diviz splann ewid lakaad ar brezhoneg da c'hoari e barti kàer er vuhez vodern.

#### 3.1.2.1. XIXved kvd beteg *Gwalarn* 1925

Ne roin amañ namaed un damsell ag oberennoù ar prantad-se. Peadra da weled bernusted\* ar liammadurioù e soñjoù pedagogel ar yezhourion pe ar saverion-levroù ewid kelenn ar yezh.



### 3.1.2.1.1 An oberennoù bet analizet :

- **1807** : **LE GONIDEG, Jean-François**, *Grammaire celto-bretonne, contenant les principes de l'orthographe, de la construction des mots et des phrases, selon le génie de la langue bretonne* : Netra dwb. ar liammadurioù.

- **1863** : **GUYOT-JOMARD, A.**, *Manuel breton-français* : Meneg ebed ag ar liammadurioù. Gwezh e sikour e skritur gant ar sanadur (**ped ær é ?**, **dek ha puar uigent**, **red é d'ein**, **nozeoh vad t'oh**), gwezh ne ra ket (**dek linsel**, **douget on**, **chiffet bras on**).

- **1878** : **LE BAYON, A-M.**, *Grammaire bretonne du dialecte de Vannes* (ademb. Hor Yezh, 1986) : meneget en doa an oberour ar fenomen, graet anezhañ gantañ « Rencontre de deux mots » ha roet en doa skwerioù da heul na venegin ket amañ (p. 5) :

« 1) Permutation de la finale du 1<sup>er</sup> mot.- Les finales fortes se changent en douces devant voyelle initiale, mais non devant H. On dit et il serait mieux d'écrire : **peb unan**, et non **pep** (...).

2) Permutation de l'initiale du 2<sup>ème</sup> mot. – Après une finale forte, l'initiale douce devient forte (...). »

- **1901** : **GUILLEVIC, Auguste, LE GOFF, Pierre**, *Grammaire Bretonne du Dialecte de Vannes* : En digoradur d'o yezhadur en doa Emile ERNAULT roet un tañwa ag an topolektoù dishañval kavet er brezhonegva. Ewid-se en doa kemeret ur bomm a barabolenn ar Mab Prodig tennet ag ar Bibl hag henn prezantiñ edan 13 furm brezhoneg mui unan e kembraeg (pp. X-XIII). Mar diskoueze variadur diston ar bogalennoù a parlant da parlant (**e > i ; i > ei**), pe kemmoù ar vorfologiezh pe re ar c'heriaoueg (**i hoskor/i oaziet ; mède/meïd/hogen**) ne ziskoueze ket penaoz e vez liammet ar gerioù kenetreze na penaoz e vez tretet ar gensonenn en dibenn absolut. : **digasit i vraùan sé** (2, Rewiz) ; **mès en tad e laras** (6, Groe) ; **gusket hi dehou / lakeit ur bizeu / e dreid** (9, gwenedeg klasel)...

Diouzh o zu e komz an daou oberour, dindan an titl « Lettres renforcées », a galletadur dibenn dous ar penngef dirag ar lostgerioù **oh** (*comparatif*), **an**

(*superlatif*), **et** (*exclamatif*) hag **at** (*suffixe verbal*) (p. 6), ar pezh a zo komz ag ar sandhi diabarzh. Mez ne vez ket anw ebed ag ar reolennoù R3 (dibenn absolut) ha R4 (liammadurioù), ar pezh a zo souezhuz braz pandeogwir e oa bet sinalet ar fed gant LE BAYON un ugent vloaz bennag e-raog.

- **1902** : **NORMANT, J.-M.**, *Lexique breton-français & Nouvelle méthode pour Faciliter aux Comménçants l'Etude de la Langue bretonne* : netra.

- **1907** : **MALMANCHE, Tanguy**, *Le Memento du Bretonnant, manuel élémentaire et pratique* : Netra. Ne ziskoueze ket diwall douzh ar gudenn. Dindan *Exercice de lecture et de prononciation* (pp. 3-4) e ro, en un doare fonetikel dezhañ, ar mod da sanañ frazennoù an destenn-skwer : "**gwechall-goz e oa**" oa bet notet "guéchalle-gausse é oa" / "**evit ne doa bet araok**" > "évite né doa bette araoque" / "**o doa truez out-hi**" > o doa truesse oute-hi. Engorto e vehemp aze kentoc'h ag ar sanadurioù "gauze", "bèdde", ha "truèze" dirag ar bogalennoù a za do heul.

- **1908** : **LE CLERC, Louis**, *Grammaire bretonne du dialecte de Tréguier* : savet e oa bet e yezhadur diwar batrom heni Gwened.

- **1909** : **VALLEE, François**, *Le breton en 40 leçons* : Netra. Mez diwar-benn R3 en doa skrivet **mar plich** nawazh, a glot gant sanadur **plij** en dibenn absolut (p. 3).

#### 3.1.2.1.2. Klozadur :

Ne ziskouez ket ar pezh a vez kavet er prantad-se teurel pled douzh problem ar liammadurioù. Mez en oll e komzer ag ar c'hemmadurioù. Gant SOMMERFELT nawazh (1920, *Le breton parlé à St Pol de Léon*) e kaver meneget resiz a-walc'h ar pezh a zigouezh er juntadur, gant un notadur fonetikel, pp. 85-88.

### 3.1.2.2. Adal 1925 da 2005

Renablet em eus amañ, a-c'houde krouidigezh Gwalarn (1925), ne lâran ket e vo peurglok, roll ledan-mat yezhadurioù hag hentennoù-deskiñ o deus merket istoer kentaouel\* ar brezhoneg modern, da heul ar c'hentañ anezhe, heni Roparz HEMON. Evel uhelloc'h e roan da ouied pesort stad a ra peb unan anezhe a broblem ar liammadurioù.

- **1928** : HEMON, Roparz, *Grammaire bretonne, suivie de la Prononciation du breton* : ur bajennad hanter (pp.90-91 e ademb. 1975).

- **1932** : HEMON, Roparz, *Cours élémentaire de breton* : notet ar c'hemmadurioù gant ur gensonenn skrivet ouzhpenn (ds. **an d-tiretenn**), ha sinalet ar gerioù enne an TM war ar silabenn ziwezhañ a-hed ar levr, mez pas ar liammadurioù. Un notenn nawazh p. 28 : "**dek eur** se prononce **deg eur**", ha kas a ra ar lenner d'ar levrig *Prononciation*, pp. 18-19.

- **1941** : SOHIER, Yann, *Me a lenno* (kentañ levr bet embannet e Peurunvan) : netra.

- **1942** : HEMON, Roparz, *Méthode rapide de breton* : netra, mez kas a rae d'ar levrig *Prononciation*.

- **1947** : KERVELLA, Fransez, *Yezhadur bras ar brezhoneg* : En daolenn ne gaver netra dindan *liamm, ere*, pe *kevreadurezh*, anwioù a glot gant *liaison* e geriadur RH. Gouestlet e oa bet nawazh ur pennad douzh "An distagadur keñveriet ouzh ar reizhskrivadur" (pp. 21-47). Titouroù a vez kavet ennañ, mez amsklaer (pp. 27, 34-36, 40). Keñveriañ douzh 27 pajennad dwb. ar c'hemmadurioù (pp. 75-102).

- **1954** : HEMON, Roparz, *Cours élémentaire de breton* : netra.

- **1957** : TREPOS, Pierre, *Grammaire bretonne* : netra, namaed ur remerk dwb ar sandhi p. 57 : **seis kwech, pet kwech...**

- **1963** : **TRICOIRE, Dr Jean**, *Komzom, lennom, ha skrivom brezoneg*, T2. Meneget e oa bet ar reolennoù R1, R2, R3 hag R4 er pennad *Prononciation* pp. VIII-X (gant un urzh dishañval). Mez n'eus namaed 3 linennad a-zivoud ar liammadurioù p. IX.
  
- **1964** : **AN DIUZET, Alan**, *Yannig a oar lenn* : netra.
  
- **1971** : **DENEZ, Per**, *Kentelioù brezhoneg* : netra.
  
- **1972** : **DENEZ, Per**, *Brezhoneg... buan hag aes* : netra.
  
- **1974** : **HERRIEU, Meriadeg**, *Le breton du Morbihan* : netra.
  
- **1975** : **MORVANNOU, Fanch**, *Le breton sans peine* (Assimil) : notadurioù stank a-hed an hentenn (e treuzskrivadur fonetikel ar gerioù ha da beb an amzer gant esplegadennoù).
  
- **1979** : **HEMON, Roparz**, *Yezhadur berr ar brezhoneg* : netra.
  
- **1979** : **AR C'HALVEZ, Armañs**, *Herve ha Nora* : netra.
  
- **1979** : **DESHAYES, Albert**, *Le breton à l'école* (Skol Vreizh) : notadurioù-yezh beb eil pajenn, enne paot a remerkoù diwar-benn ar liammadurioù.
  
- **1979** : **MERSER, Andreo**, *Précis de grammaire bretonne* : netra.
  
- **1980** : **HERRIEU, Meriadeg**, *Le breton parlé (vannetais)* : komz zo ag ar liammadurioù pp. 24-25 ha deuz ar c'hensonennoù-dibenn pp. 35-37. Mez notadenn ebed goude-se.
  
- **1980** : **AR MERSER, Andreo**, *Les graphies du breton* : ur pennad hir ha resiz a-walc'h (pp. 25-40) dwb. « le traitement des consonnes finales en dérivation et en liaison ».

- **1980** : **MORVANNOU, Fanch**, *Initiation au breton sans peine* : notadurioù stank a-walc'h (e treuzskrivadur fonetikel ar gerioù ha da beb an amzer a-hed an hentenn).
- **1981** : **CORBEL, Jos**, *Ober gant ar brezhoneg*, bet meneget ar peder reolenn (en dizurzh), e-barzh an digoradur (pp. 12-13 hag er bilan pp.11-16). Dwb. ar liammadurioù : 4 linennad ; dwb. ar c'hensonennoù-dibenn : 6 linennad.
- **1981** : **HERRIEU, Meriadeg**, *Dictionnaire français-breton vannetais* : netra dwb. ar liammadurioù er pennad yezhadur.
- **1982** : **CORNEC, André**, *Liorzh ar brezhoneg* (hentenn gant an daolenn-feltr) : esplegadenn sklaer ebed, namaed un nebeud notadurioù fonetikel é terc'hel kont ag ar liammadur.
- **1982** : **STEPHAN, Laurent, SEITE, Visant**, *Lexique français-breton et breton-français* (20ved emb.) : pp. 8-10 dwb. ar c'hensonennoù-dibenn mez 4 linennad hebkén dwb. ar liammadurioù.
- **1983** : **DESBORDES, Yann**, *Petite grammaire du breton moderne* (Hor Yezh) : netra.
- **1983** : **PLONEIS, Jean-Marie**, *Le parler de Berrien* : pennad ebed dwb. ar liammadurioù.
- **1984** : **KERVELLA, Fransez**, *Nouvelle méthode de breton* : netra dwb ar liammadurioù. Pa vez roet ar fonetik e sell douzh ar gerioù a-hunan hebkén.
- **1984** : **JOUIN, Beatris**, *Petite grammaire du breton* : Ne gaver ar ger *liaison* namaed pa gomz a « *mutations de liaison* » (p. 17).
- **1987** : **FAVEREAU, Francis**, *Ar brezhoneg er skolaj : etre dec'h hag àrc'hoazh* : meneg ebed ag ar liammadurioù, namaed ewid sinalañ juntadurioù dre galetaad (p. 8 : **ed-du** ; p.14 : **bezañ zo** /bé 'so/ ; p. 23 **pemzegtez, eishtez**).

- **1990** : **TRICOIRE, J.**, *Me a gomzo brezoneg* (Brest) : kavet e vez notennoù dwb. ar sanadur hag ar fonologiezh, mez nebeud a dra dwb. ar liammadurioù (ewezhiadennoù meur a wezh e fin ar c’hentelioù newez ; pa vez notadurioù fonetikel e vez notet ar blotâdur enne). Mez p.5 (L.1) en hanter bajennad gouestlet d’ar sanadur n’eus netra a-zivoud ar liammañ.
  
- **1990** : **AR MERSER, Andreo**, *Précis de grammaire bretonne* : netra.
  
- **1994** : **Geriadur HOR YEZH** : 7 linennad (p. 214) dwb. “la prononciation des consonnes finales”, enkontet 4 linennad dwb ar liammadurioù.
  
- **1994** : **ROLLAND, Pascal**, *Atlas linguistique de la région de Pontivi* : netra (labour dwb. ar gerioù hebkén).
  
- **1994** : **TREPOS, Pierre**, *Grammaire bretonne* : netra (sandhi meneget gant un nebeud skwerioù : **seis kwech...** p. 57).
  
- **1996** : **SEITE, Visant, STEPHAN, Laurent**, *Deskom brezoneg* : diw linennad gant ur skwer p. 6.
  
- **1997** : **FAVEREAU, Francis**, *Grammaire du breton contemporain* : Ne gaver ket pennad ebed dindan an anw *liaisons*, mez e diabarzh ar pennad gouestlet d’ar c’hemmadurioù (pp. 146-164) dindan *sandhi* (§343, pp. 163-164). *Lénition* eo ar ger implijet ewid **liammadur** (17 linennad war-se). Mez ouzhpenn-se e kaver helaezh a notennoù dwb ar liammadurioù hag ar sandhi a-hed ar levr.
  
- **1997** : **LE BESCO, Patrick**, *Parlons breton (langue et culture)* : ur meneg skañv pp.184-185.
  
- **1997** : **KERRAIN, Mark**, *Ni a gomz brezhoneg* : menegoù stank diwar-benn ar sanañ en notennoù-yezh, e lec’h ma vez sachet ewezh an deskerion war an diforc’h a zo etre ar skritur hag ar sanadur. Da skwer p. 16 : « Attention aux liaisons adoucies : **dit[d] ivez** ; p.186 : Adoucissement : **t[d] (kerc’hat**

**arc'hant**) ; **k[g]** (betek ar beure) ; **p[b]** (e oamp aet) / renforcement : **d[t]** (dec'h da noz, chomet da gousket). »

- **1998** : **DAVALAN, Nikolaz**, *Brezhoneg, hentenn Oulpan* : er pennad unneg pajennad « Prononciation du breton » e rae evel « 1<sup>ère</sup> règle : Neutralisation des finales » ha « 2<sup>ème</sup> règle : Les liaisons ». Notadennoù fonetikel (reizh, mez re laosk un tamm) a vez kavet ouzhpenn a-hed an hentenn, mez kentoc'h ewid gerioù a-hunan, namaed e degouezhioù zo, re zibaot : **mat ar jeu** [ma.də 'ʒø], **deus ar c'hentañ** [dəzə'hentã]...

- **1998** : **WMFFRE, Iwan**, *Central Breton* : netra, namaed dalc'het kont ag ar liammadurioù en notadurioù fonetikel [ma ked ãm<sup>ə</sup>].

- **2001** : **KERVELLA, Divi**, *Le breton de poche* : naw linennad dwb. « liaisons/neutralisations » pp. 11-12. Gant ur meneg a ziskouez pouezusted ar sujet ewid an oberour : « Attention aux liaisons ! »

- **2001** : **HEMON, Roparz**, (ademb.) *Alc'hwez ar brezhoneg eeun* : netra (hag ur pennad nawazh : "Comment lire un texte breton", p. 75).

- **2002** : **KEMENER, Yann-Bêr** : *Brezhoneg prim ha dillo* : sinalet e vez sanadur peb kensonenn, peurged ar re geñvereg, herwez o lec'hioù er ger pe er frazenn (pp. 12-14). Meneget ouzhpenn ar liammadurioù e testenn-diazev peb kentel dre lakaad da esponant ar gensonenn glewet : **Kontant<sup>d</sup> omp**.

- **2002** : **BOUZEC-CASSAGNOU, Mona, BOSSÉ, Dominik**, *Selaou, selaou* (+ CD) : notet ar liammadurioù er c'hentelioù : **bras[z] ê 'n den / ul lapous[z] ê... / pet[d] eur...**

- **2004** : **QUELLIEN, Narcisse, ERNAULT, Emile, LE DIUZET, Alain, LE BARZIC, Ernest**, *Un exemple d'argot breton : le tunodo* : pennad ebed, mez meur a wezh e talc'h kont an doare-skriv ag ar sanadur : **Doe ewid an oll** (p.

78) / **Tremened e lost ë le buo hi c'heno** (p. 148) / **Kouer deuz ë jour** (p. 168)... Mez ne vez ket gouiet penaoz e veze sanet **Rup ar griped**...

- **2005** : **PLOURIN, Jean-Yves**, *Tammoù gwaskin* : pennad pp. 27-28 a-zivoud ar sandhi (**kozh-dotu** : « kostotu ») hag ar sandhi dre zousaad.

- **2008** : **CHALM, Eujen**, *La grammaire bretonne pour tous* : meneg ebed dwb. ar liammadurioù ...mez 18 pajennad dwb ar c'hemmadurioù !!!

Un analiz ag ar roll-se a vo kavet pelloc'h er § 4.4.3.1. p. 433-434.

### 3.2. TERMENADUR

Ewid sklaerraad an dachenn e rankan da gentañ termeniñ un nebeud gerioù a vo implijet ganin a-hed an destenn. Fenomenoù ar **juntañ** (*jonction*) a vo studïet. Gwelet e vo ne c'hoarvez ket ataw ar memez fenomenoù ag ur yezh d'an arall. Kemplegetoc'h eo an afer eged ma kreden da gentañ, ha krogiñ a ra an diaezamant gant termeniñ ar c'heriaoueg adaz.

Gant ma vez kavet meur a dres hañval e galleg hag e brezhoneg, gant ma vez levezonet an eil yezh gant heben, ha gant ma soñjañ e rank an den anavoud mat ar pezh a zle-eñv talañ doutañ, e tiazezin ma labour-termeniñ war an termenadur implijet ewid ar galleg.

E galleg e ra an den gant ar ger *liaison* ; ha gant *sandhi* pe *liaison* e ra ar yezhourion. E brezhoneg, er geriadur, dindan ar ger *liaison* n'eo ket bet resisaet peheni a jaoj d'ar yezhadur : **strob**, **strobadenn**, **stagadur**, **ere**, **eread**, **poellenn**, pe c'hoazh **kej**, **liamm**, **poell(er)**... (FAV, 1992). E heni HEMON (1985) e kaver **liamm** hag **ere**, heb meneg resiz gant ar yezhadur, na muioc'h e geriadur AN HERE (1995) gant **ere** ha **liamm**. Mez gerioù arall a denn douzh hon sujed a vo rekiz dibab ha resisaad iwe : **harz**, **kevre**, **kevreadur**, **kevreañ**, **koazh**, **koazhadur**, **chadennadur**, **hiatus**, **paouez**.



### 3.2.1. TERMENADUR AR JUNTAÑ

#### 3.2.1.1. Ar juntadur

Boud ema ar *juntañ*, pe ar *juntadur*, ar pezh a zegouezh etre daou unander a chadenn ar c'homz. En un heuliad fonemoù a-sort gant [ta] e wel tud zo n'eo ket an [t] namaed anadiñ ur perzh difer a gentañ lodenn ar vogalenn [a] (FAURE). Daoust m'ema an [t] ur fonem gwirion (*un unander gourspiz\**, *unité discrète*), n'em em gav ket e-hunan er c'homz (namaed e estlammadelloù evel *psst !* pe *t't't't't'* !). N'eo ket emren enta. Setu perag e lâr MALMBERG e vez kendeuzet an elfennoù e seveniñ ar silabenn. Da lâred eo e vez diaez da ouied resiz e-menn e achu ur fonem hag e-menn e krog an eil. Ne c'hell ar benveg-sonanalizañ namaed lec'hiañ ur c'houlzadig e-lec'h m'ema an talvoud gwir (CARTON, 1974 : 73). Kudennoù a-sort-se a c'hell boud re ar juntadur iwe, mez n'eo ket pal an dezenn-mañ moned pell war an dachenn-se, daoust d'ar benvegoù a-vremañ boud resisoc'h eged re daou-ugent vloaz so<sup>3</sup>.

Ewid CARTON ema ar juntadur ar pezh a zegouezh etre diw silabenn ur ger pe etre daou unander ledannoc'h e chadenn ar c'homz (daou c'her, daou stroll taol-mouezh, daou stroll ritmeg, daou stroll-c'hwezhañ).

Etre diw silabenn ur ger, kreñv ar liamm etreze, e komzer a *juntadur diabarzh* (*jointure interne*, notet gant ar sin < + >). Da skwer :

- morfem + leksem : fr. *désordre* [dez + ɔrdʁ] ; alam. *Einatmen*  
**tennañ e anal** : [ajn + atmən] ; bzg. **ragsoñjal** [rag + sōjal].

Etre daou stroll bennag sanet da heul e vez komzet a *juntadur diavaez* (*jointure externe*, notet < # >). Da skwer :

- sintagm : fr. *une affaire # incroyable !* gant ur paouez goude *affaire* hag un TM-pouezañ war silabenn gentañ *incroyable* ; bzg.  
**braz # spontuz !**

Dre ar juntadur e c'heller resisaad enoñsiadoù zo :

---

<sup>3</sup> Tu zo bremañ da droc'hañ resiz-braz red ar c'homz dre vrasaad ar sinal-son gant ar zoomiñ (AUBRY, 2004 : 56).

- *le papa # dit ⇔ le pape # a dit ; c'est leur # tour ⇔ c'est # le r'tour.*

Herwez meur a vod e vez sevenet ar juntadurioù, ar modoù-se é c'hoari a-gevred liezig a-walc'h : dre un troc'h er melodi, dre un hirraad d'ar vogalenn, dre ur paouez, dre heñvellaad...

### 3.2.1.2. An harz

Boud ema an *harz* (*frontière*) etre daou c'her un arrest, ur paouez, un taw a vez graet en ur mod bennag etreze hag a ziskouez diouzh un tu fin ar ger kentañ hag ouzhpenn-se deroù an eil. Derezh 0 ar juntadur eo an harz. Gant < // > e vo notet ganin : **chelaouit tudoù :// ur pimperig é kanal !//**

Klotañ a ra an harz gant an dibenn absolut, da lâred eo pa ne vez ket liamm ebed, e mod ebed, a-fed sanadur, etre ar ger kentañ hag an eil. Tu zo d'an harz, en e ster ledan enta, boud sevenet gant un arrest bennag e red ar c'homz : a-gaoz d'un termal, ewid tennañ e anal, goude un aters, un estlamm, da fin ur lavarenn. Merket e vez er skrid gant ar virgulenn, ar pik, ar pik-virgulenn, an daou bik, ar pik-goulenn, ar pik-estlamm, ar c'hrommelloù, un tired, krochedoù gwezhave. E galleg hag e brezhoneg e vez staget a-liez ar gerioù kenetreze, mez e yezhoù arall e vez lakaet un harz etreze kentoc'h, evel en alamaneg. Er yezh-se e vez roet *un taol-tarzh* (*coup de glotte*, merket < ? >) kent bogalenn gentañ an anw-kadarn pe ar verb.

Er c'homz e vez santet an harz dre veur a vod :

- dre an *taol-mouezh*, ur foñksion *disverkaduz* dezhañ, dreist-oll e fin ar ger, evel e galleg, pe e penn kentañ ar ger (*TM-pouezañ accent d'insistance*) (MARTINET). E galleg ne gouezh an TM namaed e fin ar group ritmeg. Nawazh ne zegouezh ket un harz goude peb TM.
- dre an *taol-tarzh*.
- dre un arrest er gomz.

Ar pezh a denn douzh an harz (dibenn absolut) e brezhoneg zo bet gwelet en dezenn dindan an teirved reolenn (R3, e L1, p. 207).

Gelliñ a ra an harz moned da netra, ewid leuskel e lec'h da fenomenoù arall.

### 3.2.1.3. Ar hiatus

Boud ema ar *hiatus*<sup>4</sup> (ger latin a sinifie da gentañ *digoradur*, kent kaoud ar ster anavezet dezhañ hiziw) an *troc'h* etre bogalennoù (FAV), un *emgav* etre diw vogalenn (PR), daoust d'an enebadur a seblant boud etre an daou c'her « troc'h » hag « emgav »! Gant an arouez < \_ > e vo merket ar hiatus en dezenn.

Daoust ma c'hell diw vogalenn en em gavoud lerc'h-ouzh-lerc'h e-kreiz ur ger (*a\_érer, cha\_os, gé\_ant ; bro\_ad, gae\_oni, pe\_aj*) e vez komzet ez-pleustreg a hiatus pa vez diw vogalenn a-skoazañs na aparchont ket d'ar memez silabenn (*il a\_été, il a\_omis ; a\_eneb, hi 'lakae\_anezhañ, tri\_abad*) (herwez TADDEI, 2000). Amañ e komzin a hiatus ewid ar pezh a zegouezh e diabarzh ar gerioù kement hag etreze.

Dishañval eo ar hiatus diouzh an diftongenn, a glewer ur c'hemm-diston en he fad. Lîez e weler ar c'hemm-diston-se merket er skrid (gant diw vogalenn a-heul-da-heul), mez meur a wezh e kemm diston ur vogalenn namaeti. Tu zo da weled an diftongenn evel pa vehe savet diwar ur vogalenn mui un hanter-vogalenn. Gelloud a raer kavoud ar vogalenn e-raog an hanter-vogalenn (*lui* ['lɥi] ; *gwenn* ['gɥen]) pe goude (sng *take* ['tejk] ; W *kejañ* ['kejʒɛ̃ɲ]). Mard eh eus un diftongenn er ger *diaz* ['dja:s] eh eus ur hiatus e *diaez* ['di\_es] (≠ fr. *dièze* [dʒez]) hag e *liez* ['li\_es] (≠ fr. *liesse* [ljɛs]).

Berr-mat e vez an tremen etre an daou son (dibosubl d'henn merzoud peurliesañ). Mez mar da dezhañ boud difonn e c'hell un hanter-vogalenn en em lakaad etreze, ha ne vo ket hiatus ebed kén : galleg *Louis* [luwi], *crier* [krije] (CARTON, 1974), *bio* [bijo]. E brezhoneg e kaver ar fenomen-se pa dremener ag ur rannyezh d'an arall : *diaez* [die :s] ha Ph ['dijɛs]; *douar* W [dwa:r], Ku ['duwar] ; *Doue* W [dwe], Ph ['duwə] (FAV). Kavet e vez ar fenomen iwe

<sup>4</sup> Mud eo an **h**- e galleg er ger *hiatus* ha kement-arall e brezhoneg, ha krogiñ a ra neuze gant un hanter-vogalenn ['jatys], ar pezh a c'houlenn implij ar gerioù-mell **ar/ur** ha n'eo ket **an/un** (Sd. **ar yar**).

goude fatadur ur gensonenn diabarzh : **sadorn** > **sa'orn** [sa'wɔrn] (NAL, kartenn *samedi*). Ma mamm, liez ha pa wel he merc'h vihan goude pell amzer, ur menier d'ober cher dezhi : « **Ha setu Soazig !** », raganw estren d'he brezhoneg, a vez sanet [so'wa:zik] ganti en degouezh-se. Etre daou c'her e remerker kement-arall : **setu ma oll danvez** (sonenn<sup>5</sup>), sanet [ʃɛty mə wɔl dāne] ; **hi zo aet** a vez sanet [hizowajt] e W, beteg henn skriv zokén : **hi zo waet** (bet skrivet **oaet** da gentañ en Etrerannyezhel). E kreoleg ar Martinik ema daet ar ger galleg *dehors* da voud sanet [də'wɔ] (“*Les Fwansè dewo !*”).

Aliezic iwe e klask ar galleg chomel heb ober ar hiatus ha lakaet e vez ur gensonenn-harp ewid henn torriñ (*mange ! manges-en ! ; il va ! va-t-il ?*). Stourmet he deus iwe ar varzhoniezh c'hall douzh ar hiatus, a veze da hepkoriñ groñs en amzer glasel. Er galleg pemdezieg e vez stank nawazh. Ewid CARTON e tremener aez ag ur vogalenn d'an arall, zokén etre bogalennoù hañval : n'eus namaed lakaad an nerzh da chañch un nebeud ha komprenet e vez. Da skwer : *Papa a à aller à Arles* > *Papa\_a\_à\_alle(r)\_à\_Arles*.

#### 3.2.1.4. Ar c'hoazhadur

E galleg ema ar *c'hoazhadur* fatadur ur vogalenn-dibenn didaolmouezh dirag ur vogalenn pe un **h**-mud a za da heul (WARNANT, 1996 : 31). Ewid ma sujed e kemerin *koazhadur*, ger gourel (*élision*), kentoc'h eged **koazh**, tre evel ma rin iwe gant *liammadur*.

Sinalet e vez ar c'hoazhadur gant ur skrabig < ' >. E meur a yezh e vez anavezet ar fenomen : sng *I don't* ; it. *l'olio*. E galleg e veneg ar skrabig fatadur-dibenn ur ger dirag bogalenn deroù an eil ger : *l'opération, l'autre, l'homme, qu'on, s'il*. Ne vez ket graet seul gwezh : *s'il veut / si\_elle veut*. Kement-arall a vez graet e brezhoneg : **d'o zud, g'an droug**.

Ne vez ket sinalet ar c'hoazhadur ataw er skrid : *une auto* [yn oto], *petite amie* [ptitami] ; **kavet em eus** ['ka:vomes], **hi a ray** ['hi raj].

<sup>5</sup> Pa vez kanet gant « Les Ramoneurs de Menhirs » (08.08.2009).

Er varzhoniezh iwe e tegouezh ar fenomen-se, a c'hell boud sinalet gant skrabigoù pe ged. C'hoarvezoud a ra pa gonter niver an treid pe niver ar silabennoù er gwerzennoù. Setu amañ, notet er skwer, ar c'hoazhadurioù etre krommelloù (pa n'int ket bet merket er skrid gant ur skrabig dija) hag izlinennet an -e-dibenn a vez rekiz sanañ ewid respetiñ hirder peb gwerzenn (7 troad e peb unan anezhe). Taolomp ewezh e ranker lakaad 4 silabenn er ger *mystérieuse* (**diwsilabennañ**, *diérèze*) ha n'eo ket 3 evel er yezh ordinel :

« Jette-moi tes présents, lune mystéri-eus(e),  
De mon front qui pâlit ranimel les couleurs ;  
J'ai perdu ma couronn(e) et j'ai trouvé des pleurs ... »

Marceline Desbordes Valmore.

Ne chom ket ar brezhoneg er-maez war ar mod-ober-se. Da skwer e kemeran amañ teir gwerzenn distag kavet er barzhoneg *Kiriegezh* (PIRIOU<sup>6</sup>) :

- “Kalz a gavas oa arabat“ /
- “E oa reuz bras ’barzh an arme“ /
- “Lod gavas-se dibalamour“.

Ewid doujañ d’e voull-gwerzennoù 8 troad en deus ar barzh gwezh laosket (izlinennet genin amañ dindan) ha gwezh lamet (etre krommelloù) rannigoù, herwez dober kont ar silabennoù : **Kalz a gavas (e) oa arabat / E oa reuz bras (e)-barzh an arme / Lod (a) gavas-se dibalamour**. Notit n’eo ket bet lakaet skrabig ebed gant Yann-Bêr PIRIOU er gwerzennoù-se ewid divankañ ar rannigoù nann-skrivet (un dougañs a vez remerket er brezhoneg skrivet, pa fell d’an den lakaad ar skrid da dostaad ar muiañ ma c'hell douzh ar pezh a vez sanet, berroc’h a-liez eged ar furmoù skrivet standard).

### 3.2.1.5. Ar chadennañ

Daoust d’ur lod vat a gensonnoù-dibenn boud waet da netra er c’homz, e galleg, hag a-c’houde ar Grenn-Amzer, e kaver gerioù e-lec’h e vez klewet ar gensonenn-dibenn memestra. Da skwer e gerioù evel *bac*, *bloc*, *Cantal*, *cap*,

---

<sup>6</sup> PIRIOU, Yann-Ber, *Kestell traezh evit kezeg ar mor*, Montroulez, Skol Vreizh, 2001.

*hamac, lac, mer, pic, sac...* hag ar gerioù enne un **e**-mud (enne e vo klewet talvoud ar gensonenn a za kent an **e**-se). Neuze e komzer a **chadennadur**, pa vez liammet kensonenn-dibenn ar ger kentañ (1K) gant bogalenn-benn ar ger da heul (B2). E galleg (LEON, 1978 : 118) ne gemm biskoazh ur gensonenn-chadennañ : *un fils↗s ingrat ; le bus↗s arrive* (namaed *neuf↗v heures, neuf↗v ans*). Merket e vo ar chadennadur gant an arouez < ↗ > en dezenn.

Da skwer : *un bac↗k à fleurs ; la mer↗r est calme*. Ar gerioù *bac* ha *mer* ne vez ket kemmet o sanañ er juntadur ([bak] & [bakafloer]) evel ma c'hoarvez gant *pot* en dro *pot-à-eau* ([po:] & [potao]) : sanet e vez ar **-c** ataw en heni kentañ [bak] hag an **-r** ataw iwe en eil [mer], pa vez mud an **-t** er ger *pot* en e-hunan [po]. Chadennadur zo iwe e galleg e troioù evel *une bonne amie* pe *un câble électrique*, é vout ma vez mud an **-e**-dibenn er gerioù *bonne* ([bonami]) ha *câble* ([kablelektrik]). Ha komzet e vo a chadennadur c'hoazh e troioù evel *cette âme* ([seta :m]) pe *sept heures* ([setœ :r]) pandeogwir e vez ataw klewet an **t** er gerioù *cette* [set] ha *sept* [set].

E galleg enta e vez graet un diforc'h etre **chadennañ** (**chadennadur**) ha **liammadur**<sup>7</sup>. Perzh ar galleg eo ar liammadur, pa vez kavet chadennadur gant meur a yezh<sup>8</sup>. Ur ster difer a rin en dezenn-mañ d'ar gerioù-se.

### 3.2.1.6. Sandhi ha liammadur

Doned a ra ar ger **sandhi** ag ar sanskriteg **sandhih unvanadur ; liammadur**. Hañval eo an daou c'her (sandhi ha liammadur) ewid yezhourion zo. Ewid AUROUX (1994 : 55) ema ar sandhi ur reolenn-gensonèrezh (*règle euphonique*) a c'hoari e juntadur ar gerioù hag a laka o harzoù da steuziañ. Abalamour d'e frekañs e sanskriteg e oa bet kemeret an anw *sandhi* ewid henn termeniñ.

<sup>7</sup> Ewid ober an diforc'h etre *lien* (**liamm**) ha *liaison* e kennig A. BOCHÉ ar ger **liammadur** (sd. an diforc'h etre **ere** *lien* hag **ereadur** *lien ; ligature* (RH). Mard eo ar liammadur ur liamm, ne vez ket an oll liammoù liammadurioù.

<sup>8</sup> *Dictionnaire de linguistique*, Larousse, 1999.

Diskwel a ra ar c'hemmoù a c'hell merkañ kensonenn-dibenn pe gensonenn-benn ur ger er juntadur dre levezon ar gerioù tost (CARTON, 1974). Komzet e vez a *sandhi kensonennel* pa dermen ur stok etre diw gensonenn hag a *sandhi bogalennel* p'en em gav a-stok ur gensonenn hag ur vogalenn. Er yezh komzet dreist-oll e vez merket ar fenomen-se.

Daou sort sandhi zo : ar *sandhi diavaez* hag ar *sandhi diabarzh*. Merket e vo liammadur ha sandhi diavaez en dezenn gant an arouez <  $\overset{\frown}{}$  > (tennet euz ar polis Marlett) heuliet gant ar mod ma vo sanet ar gensonenn : *deux $\overset{\frown}{z}$  enfants*, *grand $\overset{\frown}{t}$  enfant*, *petit $\overset{\frown}{t}$  enfant*, *trop $\overset{\frown}{p}$  aimable*.

#### 3.2.1.6.1. Ar sandhi diavaez :

E limit ar gerioù e tegouezh ar sandhi diavaez. Da skwer, e brezhoneg : **savet eo** [ˈsa:væde]. E galleg : *les enfants* [lezãfã], *cinq amis* [sëkãmi]. En alamaneg : *was ist das ?* [vasiz'das/vasis'tas]. E saozneg : *is'nt it ?* [ˈezən'tet]. Gwelet e vo e c'hell ar skritur derc'hel kont ag ar sandhi diavaez meur a wezh.

#### 3.2.1.6.2. Ar sandhi diabarzh :

Gelloud a ra ar sandhi degouezhoud e diabarzh ar ger iwe, e limit ar morfemoù a za da stummañ ar gêr-se. Merket e vo gant sin ar juntadur diabarzh : < + >.

Da skwer : bzg **kemper** (< **ken+ber**, stêrioù “a ver asambl“, *confluent* ) ; diw elfenn zo bet kemmet : **-n**, a zo aet da **m** ha **b-** aet da **p-**.

Er yezh skrivet e vez dalc'het kont gwezhave ag ar sandhi diabarzh, evel amañ er ger brezhoneg **kemper**. Mez ne vez ket gwir ataw, evel e galleg *bonbon* [bõbõ] e galleg an nord ha [bõ**m**bõ] er c'hreizteiz, *absolu* [ap**s**oly], *observer* [õp**s**erve], ar saozneg *absolut* [ˈʌp**s**olyt], *to observe* [ob'z**æ**:v] ; ar c'hembraeg *ysgol* [əs'k**o**:l], ar brezhoneg **absolut** [ap'p**s**olyt], **raklavar** (doare-skriv RH, AH, HY + FAV 2005, mez **raglavar** gant FAV 1992) < **rag+lavar** [rag'la:var], **hebkén/ /hepken** (FAV 1992/2005) < **heb+kén** [hep'ke:n].

### 3.2.1.6.3. Chadennadur, liammadur ha sandhi en dezenn-mañ :

Daoust d'an daou c'her *sandhi* ha *liammadur* sinifioud ar memez tra er pezh am eus espleget uhelloc'h, e vo dishañvallaet an daou c'her en dezenn.

Chadennadur : Ober a rin gant ar ger *chadennadur* pa ne vo ket kemm heverk ebed etre ar sanadur en dibenn absolut hag a sanadur er juntadur. Ar pezh a zegouezh e brezhoneg gant **l, m, n, r** hebkén e fin ar ger (**fol** > **fol** → **l** an den ; **tamm** > **un tamm** → **m** amanenn ; **leun** > **leun** → **n** a voued ; **berr** > **e berr** → **r** amzer).

Liammadur : Mar ne zegas ar chadennadur kudenn ebed e sanadur ar brezhoneg, tu zo, e-kontrel, d'ar c'hensonennoù arall (**p, t, k, s, ch, f**) kemm ha moned da [b, d, g, z, ʒ, v]. Ewite e komzin a *liammadur*. Degouezhoud a ray ar fenomen-se er juntadur etre ur gensonenn hag ur vogalenn, mez iwe etre ar gensonenn hag ur gensonenn linkuz (**l, m, n, r**) pe un hantergensoenn (**w, y**). Klotañ a ra ar liammadur gant ur blotâdur. Da skwer : **kousket** <sup>˘</sup>**d** **eo** [ˈkuskə:**d**e], amañ e vez sanet [d] an **t**-dibenn. Meur a wezh ne vez ket gwelet ar blotâdur er skrid : **ma zad** <sup>˘</sup>**d** **eo**. Nawazh eh eus bet ur blotâdur pa geñverier an dro-se gant **ma zad** : en dibenn absolut e saner [ma'za:t].

Sandhi : Evel gant FAVEREAU (1997 : 163) e vo gouarnet ar ger *sandhi* amañ ewid ar juntadur etre diw gensonenn, pa zegas ar liamm etreze ur c'haletâdur (*provection par sandhi*) : **salud** <sup>˘</sup>**t** **deoc'h** [salytɔx], a skrivan iwe **salud** <sup>˘</sup>**teoc'h** er levroù-keleenn.

## 3.2.2. TAOLENNOÙ KODIÑ

### 3.2.2.1. An taolennoù-kodiñ

Setu amañ an daolenn a ziskouez ar mod em eus kodet ar lizherennoù en em gav e limit ar gerioù, da lâred eo ar re a vez e fin ar ger kentañ (ger 1) hag ar re en em gav e deroù an eil ger (ger 2) :



a) E juntadur ar **gerioù** :

1 <b>LIZHERENN-DIBENN AR GER KENTAÑ</b>	2 <b>KENTAÑ LIZHERENN AN EIL GER</b>
<b><u>1B</u></b> Bogalenn-dibenn ar ger kentañ. <u>Skwer</u> : <b>ma c'hi # eo.</b>	<b><u>B2</u></b> Bogalenn-benn an eil ger. <u>Skwer</u> : <b>ur pod # eo.</b>
<b><u>1K</u></b> Kensonenn-dibenn ar ger kentañ. <u>Skwer</u> : <b>ur pod # eo.</b>	<b><u>K2</u></b> - <b><u>K2</u></b> : Kensonenn-benn an eil ger. <u>Skwer</u> : <b>dait # bremañ !</b> - <b><u>KL2</u></b> : Kensonenn-benn <i>linkuz</i> an eil ger : <b>l, m, n</b> pe <b>r</b> . <u>Skwer</u> : <b>un tok # ruz.</b>
<b><u>1HK</u></b> Hantergensonenn-dibenn ar ger kentañ : <b>y</b> pe <b>w</b> . <u>Skwer</u> : <b>Sod-nay # eo, daou # arkul</b> [daw'arkyl].	<b><u>HK2</u></b> Hantergensonenn-benn an eil ger : <b>y</b> pe <b>w</b> . <u>Skwer</u> : <b>Tad # Yann, ar giez #</b> <b>wenn.</b>

**Taolenn 1. Taolenn-godiñ lizherennoù a-stok er juntadur.**

b) E harz ar **morfemoù** :

1 <b>LIZHERENN-DIBENN AR MORFEM KENTAÑ</b>	2 <b>KENTAÑ LIZHERENN AN EIL MORFEM</b>
<b><u>1B</u></b> Bogalenn-dibenn ar morfem kentañ. <u>Skwer</u> : <b>gwele+ioù.</b>	<b><u>B2</u></b> Bogalenn-benn an eil morfem. <u>Skwer</u> : <b>ad+ober, c'hoariva+our.</b>

<b><u>1K</u></b>	<b><u>K2</u></b>
Kensonenn-dibenn ar morfem kentañ. <u>Skwer</u> : <b>ad+ober, desk+oni,</b> <b>*frank+embregañ<sup>9</sup>, *is+douarel.</b>	<b>- <u>K2</u></b> : Kensonenn-benn an eil morfem. <u>Skwer</u> : <b>lous+kenn.</b> <b>- <u>KL2</u></b> : <i>Linkuz</i> kensonenn-benn an eil morfem : <b>l, m, n, r</b> ). <u>Skwer</u> : <b>(rak) rag+lavar.</b>
<b><u>1HK</u></b>	<b><u>HK2</u></b>
Hantergensonenn-dibenn ar morfem kentañ. <u>Skwer</u> : <b>daou+hanteriñ, diw+askell.</b>	Hantergensonenn-benn an eil morfem. <u>Skwer</u> : <b>dir+yaou, gou+yein, ad+weloud.</b>

**Taolenn 2. Taolenn-godiñ lizherennoù a-stok e harz ar morfemoù.**

### 3.2.2.2. Taolenn ar degouezhioù posubl

#### 3.2.2.2.1. Stern ar studi :

Ne vo studïet en dezenn namaed ar pezh a zegouezh gant *ar c'hensonennoù keñvereg* (*consonnes corrélatives*) : **p/b, t/d, k/g, s/z, ch/j, f/v**. Gwelet hon eus n'eus namaete a valigañs e dibenn ar gerioù : neutralizet o enebadur en dibenn absolut, ha kreñvaet ar re vlod dirag ar lostgerioù kaletauz. Er liammadurioù e c'hoariont iwe.

#### 3.2.2.2.2. : Tro ar c'houblad [x/h] :

Leuskel a rin a-gostez ar c'houblad **[x/h]** enta. Merket e vez er skritur gant **c'h, rc'h<sup>10</sup>** pe **(z)h**. Pa gaver [x] en dibenn absolut (**ur plac'h** [plax], **ur sac'h**

<sup>9</sup> \*Frankembregañ *liberté d'entreprise*, IMBOURC'H, 1983 : 134.

<sup>10</sup> « La perte du r apical ([= roulé]) entraîne la réduction de **rc'h** à **c'h**, comme partout ailleurs, quand cette évolution se produit : **bourc'h** passe à **bouc'h**, **derc'h** à **dec'h**, **war-lerc'h** à **war-lec'h** etc. Au NO, le groupe **lc'h** se maintient mieux. » PLOURIN, 2005 : 21.

[sax]), **lorc'h** [lɔrx] eh a hennezh da [h] e-kreiz ar gerioù : **plac'hig** ['plahik], **sac'had** ['sahat], **lorc'huz** ['lɔrhys] (Sd. AH).

Er juntadurioù e c'hell kouezhel er yezh-pobl, evel remerket gant LE PIPEC e brezhoneg Malgenag (**ur yoc'h tud** [ur 'jɔ 'tyt]) ha mem moned da [h] dirag un harz (**pinvidikoc'h** / py'i'cɔh...#/). Peurliesañ e vez dousaet er liammadurioù dre voned da [ɣ], da [fi] pe da [h], zokén da [r]. Setu skwerioù c'hoazh tennet ag ar memez korpus :

- dirag ur vogalenn : **c'hwec'h àrnugent** /ʔe<sup>h</sup>arn i'ʝen/ ; **àrlerc'h on aet** /ar'lefi<sup>h</sup>waj/ (Nn 9, p.6).
- dirag un hantergenonenn : **àrlerc'h oamp daet** / ar'ler'wem dəj/ (Nn 9, p. 6).
- dirag m : **àrlerc'h 'm boa desket** /ar'leħ mwe diʃkə/ (Nn 11, p.7) ; **lec'h ma karomp** /lefi mi 'ka: rɔm/ (Nn 16, p.8).
- dirag h- : **eizh ha daou-ugent** /'aɣa dəɥ e'ʝen/ (Nn 26, p.11).

Ne gaver ket ar c'houblad-se e galleg ha ne za ket ar galleg da levezoniñ e sanadur gant e dresoù, namaed henn reduziñ da [r] gwezhave (**mor** ≠ **moc'h**). Gant an newezvrezhonegerion ne vez ket notet ataw ar blotâdur a zegouezh e-kreiz ar gerioù : e W, **skui(z)huz** sanet “chuirus” ha **nec'huz** sanet evel **nerzhus** : “nerhus” pe zokén, gwazh c'hoazh, “nerus” !

### 3.2.2.2.3. Taolenn ar juntadurioù :

Setu amañ taolenn an emgavioù a c'hell degouezhoud er sintagmoù pe er frazennoù :

	DEGOUEZHIOÙ	SKWERIOÙ
1	1B – B2	Ur gwele # a-blom.
2	1B – K2	Maouezi # Kamorzh.
3	1B – KL2	Kranketa # liez.
4	1B – HK2	Gwele # Yannig.
5	1K – B2	Ma zad # eo.
6	1K – K2	Un tok # cheuc'h.
7	1K – KL2	Konk- # Leon.
8	1K – HK2	Ur yar # wenn.
9	1HK – B2	Daou # intañv.
10	1HK – K2	Hi a ray # boued.
11	1HK – KL2	Daou # labous.
12	1HK – HK2	N'eo ket nay # Yann.

Taolenn 3. Taolenn ar juntadurioù herwez ar lizherennoù a-stok.

### 3.3. AR JUNTADUR DIAVAEZ

Ewid moned ba problem ar juntadur e rankan lâred e vo diazezet ma studi war ar yezh komzet. N'heller ket termeniñ netra sur diwar an doareoù-skriv abalamour ma ta ar skrid goude ar c'homz er yezh. Ouzhpenn-se ne ver ket sur en deus ar skrid dalc'het kont a fenomenoù an harzoù. Hag e brezhoneg d'an nebeutañ eh eus ur gudenn arall : liested an doareoù-skriv a vez kavet war ar marc'had, ha na soursiont ket toud douzh ar fenomenoù-se.

#### 3.3.1. AR HIATUS 1B/B2

##### 3.3.1.1. Ar hiatus ordinel

Ne barra ket ar brezhoneg douzh ar hiatus, a vez kavet stank er yezh. Gelloud a ra ar gerioù brezhoneg achuoud gant ar bogalennoù **a, e, i, o, u, ou**, hag ar bogalennoù-fri **añ, eñ, iñ, oñ**. Ne gaver ket **uñ** e fin ar gerioù<sup>11</sup>.

<sup>11</sup> Ur gensonenn a vez ataw goude **-uñ** er gerioù dibaot-se : **kuñv, pluñv, puñs**. E diabarzh anezhe e kaver nawazh **\*huñvre** (< **hun+bre**) e geriadur RH, (+ diveredoù **\*huñvreadenn**,

### 3.3.1.1.1. Hiatus goude ur vogalenn simpl :

Skwerioù :

- **é** pesketa\_ah on ; bara\_o do ; er sinema\_ema.
- **o** vale\_ema ; bugale\_inosant ; ur mare\_aweleg, Chloe\_eo.
- maouezi\_alaman ; un ali\_a-feson ; ki\_Olier.
- ur piano\_uhelbriz ; ni hor bo\_unan ; piw en do\_eizh ?
- ur ru\_izel ; awel-fu\_aze ; fru\_an aot.

### 3.3.1.1.2. Hiatus goude ur vogalenn-fri :

- **-AÑ** : ar brasañ\_ospital ; koshañ\_orjal ar bed ; an diwezhañ\_impalaer. N'heller ket lakaad amañ an anvioù-verb dre -añ a vez sanet e meur a vod (daoust d'ar sanadurioù L & K leuskel hent d'ar hiatus : **maga(ñ) an dud** > [ˈma :ga\_ãn'dyt]).
- **-EÑ** : dibaot e brezhoneg (**poëñson**). N'em eus kavet namaed ur skwer gant ur hiatus posubl : **ur freñ\_all**.
- **-IÑ** : a vez kavet e diabarzh ar gerioù (**fiñval, liñsel, priñsez**) mez n'her c'haver ket evel-se e fin anezhe, namaed stag ur gensonenn doute (-s pe -v) : **biñs, diñs, priñs, sfiñs ; fiñv, diliñv, niñv**. An dibenn-verb -**iñ** ne c'hell ket boud lakaet er memez rummad, rag ne vez ket sanet er memez mod e peb topolekt ([-i], [-î], [-ẽɲ]). Da lâred eo ne gaver ket hiatus diavaez ebed gant **-iñ**.
- **-OÑ** a vez kavet evel lostger meur a wezh : **kreoñ, skaoñ, steoñ, stlaoñ, traoñ : e traoñ\_ar prad**. A-gaoz d'ar -v-dibenn ne vo ket hiatus ebed gant **doñv** ha **fraoñv**.

### 3.3.1.2. **Ar hiatus e rannyezhoù zo : fatadur ur gensonenn**

Meur a wezh e vez kavet ur hiatus e topolektoù zo, e gerioù e-lec'h ma ne vez ket heni ebed peurvuiñ. Fatadur ur gensonenn pe un hantergensonenn bennag a zo kaoz a gement-se : **d, g, v** pe **w** peurvuiñ.

---

\***huñvreal, \*huñvreek...**) : mez ne ra ar stumm-se namaed treuskriver ur sanadur lec'hel ha n'eo ket standard (Sd. **hun, hune, huneal, dihun** / FAV : **hunvre**).

### 3.3.1.2.1. Fatadur un -d :

E Wum e fat an **-d**-dibenn

- **mad > ma'** : mad eo > ma' eo [ˈma:ɫe].-
- **amoed < amoe'** : un amoed eo > un amoe' eo [yn ˈamwɛɫe].
- **tad < ta'** : ma zad eo > ma za' eo [ma ˈza:ɫe].

Er yezh lennegel eh eus bet degemeret stumm heb **-d** ar ger **sud** : **su**. Ur hiatus zo er frazenn “**ar su\_ɫeo**” enta<sup>12</sup>.

Ne c’hoari ket ar fatadur-se evel heni an **-t** e galleg : pa ne vez ket klewet a-c’houde gwerso an **-t** dibenn er ger *petit* sanet a-hunan, e vez klewet en-dro er liammadur (*un petit <sup>ˈ</sup>t enfant*). E brezhoneg (Wum) n’eus ket liammadur ebed goude fatadur an **-d**, mez hiatus : **ma' eo** [ˈma:ɫe].

### 3.3.1.2.2. Fatadur ur -v pe ur -w :

Er Vro Bourlet hag e Kernew da skwer e kouezh ar **-w**-dibenn er gerioù evel **ataw** (\***atav**), **glaw** (\***glav**), ... sanet [aˈta:], [gla:] pe [ˈato], [glo:]. Ar pezh a laosk hent d’ar hiatus er parlantoù-se : « **Glo\_ato !** ».

### 3.3.1.2.3. Fatadur kensonennoù arall :

Er yezh komzet e kouezh meur a wezh kensonennoù arall, pe e fin ar gerioù, pe en deroù anezhe : an **-r** (“**Ma breu**”<sup>13</sup>T), an **-n** (W [tã] ewid **tan**, W [lã] ewid **leun**, W [grã] ewid **greun**)... Lîez ne vez ket mui sanet an **h**- (L, kornadoù W) : \*’**ir**, \*’**ent**, \*’**ouarn**, \*’**ardizh**. Ne ra ar fed-se namaed liesaad degouezhioù ar hiatus.

<sup>12</sup> Kennig a ra Albert Boché ober gant ar stumm **sud** iwe, da skwer ewid er gerioù **Sudist**, **Sudisted** vs **Nordist(-ed)** (e brezel an Digevrediñ).

<sup>13</sup> Titl romant F. FAVEREAU, Montroulez, Skol Vreizh, 2005.

#### 3.3.1.2.4. Ar -z-dibenn mud (-z « leoneg ») :

Ur **z**, mud peurliesañ, a vez kavet en ur bern gerioù. Pa ne vez ket kavet hiatus ebed e leoneg gant ar gerioù-se e kaver anezhañ e KTW : **karante(z)\_eo, ur mene(z)\_uhel, ur bloa(z)\_ouzhpenn.**

#### 3.3.1.2.5. Fatadur meur a soniadoù :

Gant an newezvrezhonegerion e vez diaez derc'hel douzh ar brezhoneg evel ma oa, gant soniadoù estren diouzh re ar galleg. Lïez e klewer komz bremañ ag ar skolioù “di-iek”, da lâred eo ar skolioù **diwyezheg**.

### 3.3.1.3. Pa vez hepkoret ar hiatus

#### 3.3.1.3.1. Ar c'hoazhadur :

Lïez a-walc'h e vez lamet unan ag an diw vogalenn a ya d'ober ar hiatus. Komzet e vez neuze a **goazhadur**, sinalet gant ur skrabig. An elfennoù didaolmouezh a fat peurliesañ.

Klotiñ a ra termenadur ar ger e brezhoneg tre evel ma talvez e galleg<sup>14</sup> : **ba'n ti ; d'an termen-se ; d'am soñj ; er lec'h m'ema, n'em bo ket, p'am bo naon ; ma'z eus ; na wid-se ; Doue r'ho pennigo !**

E-kontrel douzh ar liammadur, ne vez ket kemmet natur ar gensonenn a chom a-stok gant ar vogalenn pa vez koazhadur<sup>15</sup>.

---

<sup>14</sup> Mez kalz liesoc'h e vez *lonket* bogalennoù ha zokén strolloù BK (bogalenn+kensonenn) e brezhoneg, er-maez ag ar hiatus. Ledannoc'h eo sterva ar c'hoazhadur er yezh-mañ enta : **g'an dud** (< **gant an dud**) ; **d'ont 'tram'** Koad Frew (< **da zont etrameg** Koad Frew) (FAV, 1997).

<sup>15</sup> Arabad kemmeskañ koazhadur hag *arbouell* (*ellipse*) : termen a ra an arbouell mank ur ger bennag (pe ouzhpenn unan) en ur gomz bennag. Da skwer, arbouell ar verb : **peb unan d'e dro** (= **da beb unan da gomz pa vo arruet e dro**) ; arbouell ar ger-mell : **fallañ amzer am eus gwelet biskoazh** ; arbouell ar rannig oc'h ober **olé** (**Perpinyà ma oamp 'vakañsiñ**), ar rannigoù-verb a pe e (**me 'yay ; gwezhall 'arrue abretoc'h...**) (FAV, 1997).

### 3.3.1.3.2. Rol ar gensonenn ouzhpenn :

Meur a wezh, ewid aesaad ar sanadur e vez ouzhpennet ur gensonenn, ar pezh a zegouezh iwe ewid hepkoriñ ur hiatus. Sed aze rol ar -g er gerioù **ha>hag** ha **na>nag** : **ki ha kazh** mez **frank hag uhel** ; **na bihan na braz** mez **nag izel nag uhel**.

Er yezhadurioù e vez lâret<sup>16</sup> e vez lakaet -g dirag ur vogalenn goude **ha** ha **na**, ar pezh a vez graet ingal a-walc’h. Tu zo nawazh da glewed ur hiatus en degouezh-se : **ae-menn e taent** ? (LE PIPEC, 2008, korpus, Nn 22, p.9) ; **unan haunan** (Langidig)<sup>17</sup>.

### 3.3.1.3.3. Juntadur gant un hantergensonenn :

Ne vez ket komzet a hiatus pa vez kavet un hantergensonenn er stroll : **pa zay unan** [pa zaj’ynãn] ; **daou Afrikan** [dawa’frikãn] ; **un \*ta’ yaouank** [yn ta’jawãnk].

## 3.3.2. LIAMMADUR : SKWER AR GALLEG

Gwelet hon eus e ra ar galleg an diforc’h etre *chadennadur* ha *liammadur*. Diaezamant a vez degaset e galleg gant ar c’hensonennoù dibenn-ger, gwezh sanet en dibenn absolut (dirag un harz), gwezh mud ; diaezamant degaset iwe gant an **e**-dibenn mud, rol henezh roiñ he son naturel d’ar gensonenn a zo en e raog. Nend an ket amañ da sevel ur studi glok a sistem ar liammadurioù e galleg<sup>18</sup>, mez a-bouez eo kompren ar sistem-se, gant tost m’ema an diw yezh, é vould m’ema ar galleg bremañ ar substrad ewid an darn vuiañ ag an newezvrezhonegerion. Setu amañ enta ar peb brasañ ag ur sistem kempleg-braz en deus nawazh poentoù kumun gant heni ar brezhoneg.

<sup>16</sup> Da skwer CHALM, 2008 : 196.

<sup>17</sup> Namaed hag e vehe **unan ha hunan**... (?).

<sup>18</sup> Sd. LEON (1966), DELATTRE (1966), ÅGREN (1973), CAPELOVICI (1992), DELATTRE (1996), ENCREVÉ...



### 3.3.2.1. Ar chadennadur e galleg

#### 3.3.2.1.1. Tro IK dirag B2 :

Ur chadennadur a vez remerket er c'homz pa vez heuliet ur ger, ennañ ur gensonenn-dibenn sanet ataw, gant un eil ger e penn anezhañ ur vogalenn pe un **h**-mud. Herwez DELATTRE (1966 : 39) e vez kreñvoc'h an unvaniezh kensonenn/bogalenn er liammadur eged m'ema er chadennadur. Mez ar pezh a gont ewitañ eo gouied e vez lodeg ar gensonenn (1K) e silabenn gentañ ar ger a za da heul hag a grog gant B2 : *un bel arbre* ("un-bè-**l**arbr") ; *mourir un peu* ("mou-ri-**r**un-peu") ; *un triste hôpital* ("un-tris-**t**ô-pi-tal") ; *cinq heures* ("cin-**q**heures") ; *sept euros* (se(p)-**t**eu-ros").

#### 3.3.2.1.2. Tro IK + un l pe un r dirag B2 :

Er strolloù 1K+l hag 1K+r e chom 1K stag douzh **l** pe **r** pa ya ar c'hensonennoù-mañ da enkorfiañ silabenn gentañ an eil ger.

Da skwer : *une bible ancienne* ("un'-bi-**b**lan-cienn' ") ; *quatre à quatre* ("qua-**t**ra-quatr' ").

Ar pezh na zegouezh ket dirag K2 pa vez honnañ **l** pe **r** : *le pape Léon XIII* ("le-pap-**p**-**L**é-on-treiz' ") ; *la mer lointaine* ("la-mer-**r**-**l**oin-tain' ").

#### 3.3.2.1.3. Digemm e chom IK er chadennadur :

Ne gemm ket jamez (e galleg !) kensonenn ar chadennadur (LEON, [1966], 1978 : 118) : *fil**s** # ingrat* >>> *un fil**s** <sup>^</sup>s ingrat* ; *bac # à sable* >>> *bac <sup>^</sup>k à sable* ; *sept # à huit* >>> *sept <sup>^</sup>t à huit*. Namaedenn : *neuf* ; er ger-mañ eh a an -**f** da [v] dirag *heure* hag *an* (*neuf <sup>^</sup>v heures* ; *dix-neuf <sup>^</sup>v ans*).

Pa vez un **e**-mud-dibenn e vez hañval : *grand**e** # amie* >>> *grand**e** <sup>^</sup>d amie* ; *tap**e** # amicale* >>> *tap**e** <sup>^</sup>p amicale*. Mez rekiz e vehe nawazh resisaad asuradenn LEON : pa gomzer ag an **s** n'eo ket *natur* ar gensonenn 1K eo na gemm ket er chadennadur mez he *z**al**voud* : *laisse # aller* [*l**e**s # ale*]>>>

*laisse<sup>˘</sup>s aller ; un vase # étrusque [vaz # etrysk] >>> un vase<sup>˘</sup>z étrusque ; la crise # immobilière [kri<sup>˘</sup>z # imobiljɛr] >>> la crise<sup>˘</sup>z immobilière.*

### 3.3.2.2. Ar liammadurioù e galleg

Ur wir gudenn eo heni ar liammadurioù e galleg, a laka diaez an estranjerion pa glaskont henn deskiñ. E gwirionez e c'hell diaezamantoù doned iwe a-fed chadennadur goude dibennoù zo, evel an -s er ger *plus* na vez ket sanet ataw :

- *j'en veux plus<sup>˘</sup>s aujourd'hui / je n'en veux plu(s)<sup>˘</sup> ∅ aujourd'hui.*

Teir rumm liammadurioù a ver kustum da dermeniñ amañ : ar liammadurioù **red**, ar liammadurioù **dired** hag ar liammadurioù **berzet** (DELATTRE, LEON).

#### 3.3.2.2.1. Ar liammadurioù red :

Renket e vez amañ ar liammadurioù a ranker ober ewid komz evel ar c'hallegerion a-vihanig. Ne vehe ket tu d'un den da chom heb o seveniñ, heb diskoueziñ war-un-dro e orin estren pe e vod kuriuz da gomz : *les amis* [lezami], *le Second Empire* [səgɔ̃tāpir], *des autres* [de'zo:tr], *trois enfants* [trwazāfā], *les Champs-Élysées* [fāzelize]... Lîez e kaver sort liammadurioù red en troioù-lavar boutin pe riellet, a-sort gant *plus<sup>˘</sup>z ou moins, c'est<sup>˘</sup>t -à-dire, tant<sup>˘</sup>t et plus ; un pied<sup>˘</sup>t -à-terre ; le tout<sup>˘</sup>t -à-l'égout, mot<sup>˘</sup>t à mot ; pas<sup>˘</sup>z à pas ; petit<sup>˘</sup>t à petit ; nuit<sup>˘</sup>t et jour ; monts<sup>˘</sup>z et merveilles ; de gros<sup>˘</sup>z ennuis...*

Un difriadur a zegouezh en anwioù-gwan e-liamm gant ar ger da heul : *un bon<sup>˘</sup>n élève / une bonne<sup>˘</sup>n élève ; en plein<sup>˘</sup>n hiver / en pleine<sup>˘</sup>n action.*

Hervez TRITTER (2003 : 129) e parra ar liammadurioù dre red douzh ar hiatus, santet divalaw c'hoazh (« répugnance originelle du français envers l'hiatus ») : *deux<sup>˘</sup>z euros ; trois<sup>˘</sup>z élèves ; les<sup>˘</sup>z enfants ; des<sup>˘</sup>z amis ; ainsi soit<sup>˘</sup>t -il ; quant<sup>˘</sup>t à elle ; vingt<sup>˘</sup>t -et-un ; sans<sup>˘</sup>z histoires.*

### 3.3.2.2.2. Ar liammadurioù berzet :

Ne gomzan ket amañ ag ar liammadurioù faos, a c'hell degouezhoud iwe evel *le \*noiseau, un \*tâne, un grand \*d enfant, toi \*z et moi* : liammadurioù andegemeraduz herwez ar yezhadur jenerativel.

Komz a raer a liammadurioù berzet pa ne vezont ket graet biken gant an dud. Sort liammadurioù a c'hell boud displejuz da glewed, ha da hepkoriñ groñs ez int er yezh standard. Liammadurioù andegemeraduz int c'hoazh.

Da skwer : *le solda(t) ∅ inconnu ; un pon(t) ∅ incroyable ; des fon(ds) ∅ importants ; dans l'éta(t) ∅ où je suis ; un puits ∅ artésien ; des fonds ∅ importants ; un étang ∅ immense ; un froid ∅ hivernal ; un toit ∅ ouvrant ; une forêt ∅ en feu ; des logis ∅ insalubres, e(t) ∅ alors ?... Ne vez ket liammet an -n-dibenn pa verk friadur ar vogalenn gent en un anw-kadarn : *un chemin ∅ agréable ; un plan ∅ absurde ; un ballon ∅ énorme ; le ban ∅ et l'arrière ban. Mez nawazh : en n un jour.**

### 3.3.2.2.3. Ar liammadurioù dired :

E degouezhioù arall e c'hell an den seveniñ ar liammadur pe chomel heb henn ober. Liammadurioù dired a vez kavet da skwer en troioù-mañ : *vous avez entendu* ("vous zavé-entendu" pe "vous zavez-zentendu") ; *au cas z où* pe *au cas ∅ où* ; *Bourg k en Bresse* pe *Bourg ∅ en Bresse* ; *pris z au piège* pe *pris ∅ au piège* ; *les uns z et les autres* pe *les uns ∅ et les autres*.

Kavoud a ra da DELATTRE e vez diaesoc'h d'an estranjerion gouied ober gant ar liammadurioù **dired** eged gant ar re **red** pe ar re **berzet**, rag rekiz e vez amañ ober ur choaz, hag ewid-se gouied e pesort degouezh ober hennañ pe hennezh. Un urzhaz braz a-walc'h zo e galleg er mod d'ober gant ar liammadurioù dired, rag depantoud a raont ag ar live-yezh : seul uhelloc'h ar live-yezh seul vuic'h a liammadurioù. Da skwer ne vez ket sevenet ar liammadurioù er werzenn-mañ, namaed pa vez resitet :

"Le soldat, en riant, parlait à la bergère." (Vigny).

Tachenn un emdroâdur a-bouez zo aze e galleg.

### 3.3.2.3. Liammadur hag e-dibenn (e *caduc*)

Un torr-penn eo an **e** mud e galleg ewid ar yezhourion. An **e**-se a vez kavet e-kreiz ar gerioù (*retour*, *petit*, *enterrement*, *heureusement*) pe en o dibennoù (*table*, *boîte*, *règle*). Er sintagmoù e koazh liez a-walc'h : *je te dis* ("jtëdis") ; *je te regarde* ("jtërgard' ").

Ewidimp amañ n'eus namaed an **e**-dibenn a sacho hon ewezh, pandeogwir en em gav er juntadurioù. Ez-pleustreg e lârimp hebkén e vez e rol lakaad ar gensonenn gent da voud sanet : *peti(t)* [pəti] > *petit(e)* [pəti]. Gant an **e**-dibenn enta ne gomzer ket mui ez-resiz a liammadur mez a chadennadur : *une grand(e) <sup>ˆ</sup>d armée* ; *quatr(e) <sup>ˆ</sup>tr euros* ; *une tabl(e) <sup>ˆ</sup>bl en fer*. (Sd. § 3.3.2.1.3., p. 295).

### 3.3.2.4. Liammadur gant h-

Ne vez ket mui sanet an **h** e galleg : kroget en doa an **h**- da fatañ e penn ar gerioù é toned ag ar germaneg adal penn kentañ an XIIIved kvd (" 'ardi, 'ache"). Klasket o devoa yezhadurourion an amzer-se talañ douzh e fatadur mez en aner, ha daet e oa an **h**- da voud un arouez disjuntuz hebkén adal 1670 (MARCHELLO-NIZIA, 1992 : 89).

Daou sort **h**- zo (CARTON) : an **h** *nanndisjuntuz* e-lec'h ma koazh ar vogalenn (GREVISSE, 1986 : 42-43) (ds. *l'haleine*, *l'hameçon*, *j'honore*) hag an **h** *disjuntuz* : *la # hache*, *le # homard*, *la # hernie*. Gant an **h** kentañ e vez chadennet (*une <sup>ˆ</sup>n haleine*, *cinq <sup>ˆ</sup>k hameçons*) pe graet ar liammadur : *des <sup>ˆ</sup>z haleines*, *trois <sup>ˆ</sup>z hameçons*. Gant an eil ne vez na chadennañ na liammañ : *des # haches*, *trois # homards*.

### 3.3.2.5. Emdroâdur ar liammañ e galleg

War a seblant e remerker un emdroâdur buan a-fed liammadurioù er galleg a-vremañ, ar pezh a zo bet sinalet gant MARTINET, WALTER, ENCREVÉ. Klewoud a raer tud tregont vloaz é lâred forzh aez hiziw-an-deiz "troi' euros", "di' euros". Biskoazh ne oa ket bet lâret ar c'homzoù-se kent ar bloaz 2002, bloaz ma oa bet lakaet an euro da vout moneiz an Europ. Un ijinadenn-yezh eo enta, a ziskouez marse dougañs ar remziadoù yaouankañ da nebeutaad niver ar liammadurioù ha da zegemer a-vraz ar hiatus ken dikriet gwezhall.

### 3.3.3. AR LIAMMADUR E BREZHONEG

Bernoud a ra kalz ar liammadurioù e brezhoneg, mez ne vezont ket meret gant ar memez reolennoù ha re ar galleg. Degas a ran da soñj e komzin amañ a liammadurioù ewid ar brezhoneg e-lec'h komz a chadennadur : pa ne chañch ket ar gensonenn c'halleg er chadennadur n'heller ket lâred hañvaltra ewid ar brezhoneg (Sd. § 3.2.1.6.3., p. 286).

E-keñver re ar galleg, n'eo ket fenomenoù ar juntadur ken luziet e brezhoneg. Gwelet e vo nawazh n'eo ket neutr ur sistem e-keñver egile.

#### 3.3.3.1. Liammadur bogalenn#kensonenn (1B#K2)

##### 3.3.3.1.1. Degouezhioù boutin :

Gelloud a ra ar gerioù brezhoneg achuoud gant ar bogalennoù simpl **a, e, i, o, u** hag ar re friet **añ, eñ, oñ**. Er juntadur gant ne vern pesort kensonenn deroù-ger (K2) ne sav kudenn-sanañ difer ebed : **bara#mad** ; **bugale#baour** ; **maouezi#Kamorzh** ; **piw a zebro#riz ? er ru#-se** ; **ar brasañ#ti** ; **ur freñ#stardet mot** ; **kreoñ#kozh**.

### 3.3.3.1.2. Kudenn an h-kensonenn :

Ur 1000 ger bennag a grog gant un **h**- e brezhoneg (FAV 1992). Tro-dro da 88% anezhe a grog gant un **h**-kensonenn, da lâred eo un **h** c’hwezhadennet : [h-]. Er peurrest (12%) e vez mud an **h** peurliesañ (e gerioù boutin evel **ho**<sup>19</sup>, **hon**, (**h**)oll, **he**, **henn** peurged, ha gerioù arall, (**h**)ogoz, **Houad**, lod daet ag ar galleg : **hektar**, **helis**, **heriter**, **heroin**...).

Ur lizherenn vud e galleg eo an **h** bremañ<sup>20</sup>, mez iwe da lod ag ar vrezhonegerion (sd. FALC’HUN, 1951, *Figures*, Kartenn 22, p. 26). E leoneg da skwer e vez mud peurvuiañ (‘**ir**, ‘**ent**, ‘**ed**, \*‘**icho**...) pa vez sanet kreñv er Vro-Bourlet, da skwer. Diskoueziñ a ra an NAL (LE DU, 2001) e vez sanet an **h** ogozig e peb lec’h namaed e Bro-Leon dre vraz, war vord ar mor er Vro Vigouden ha war vord ar mor iwe e Wu (kartenn 44). Eveljust e vez techet an newezvrezhonegerion, dindan levezon ar galleg, da chomel heb sanañ an **h**-bremañ.

Peurliesañ e klot an **h** brezhoneg gant un **h** e kembraeg pe e kernoweg iwe : ur c’herentiaj kelteg é c’hoari aze neuze : **had** (kmg *had*), **hambroug** (kmg *hebrwng* mez RH \**ambroug*<sup>21</sup>), **hañv** (kng *haf*), **henn** (kmg *hinn*), daoust da lod doned ag ar frankeg : **hach** (fkg *hâppja*), **hanaf** (fkg *hnapp*).

Divizet en deus an Emsav lakaad an **h**-kensonenn da skwer nawazh, herwez an notadurioù fonetikel a gaver e geriadur An Here. N’eo ket bet aze heuliet sanadurioù Bro-Leon, ha skrivet eo bet an **h** fonetikel ewid ar peb brasañ ag ar gerioù gant **h**-, evel e **haleg** [’hɑːlek], **hanter** [’hānter], **hed** [’heːt], **hent** [’hēnt], **heol** [’hɛːl], **hir** [’hiːr], **hun** [’hyːn], ha zokén e **hidrogen**. Dibaot ar gerioù un **h**-mud enne, evel **he**, **herr**, **heskinañ**, **ho**, \***hogos**, \***holl**, **hon**... Meur a wezh e chom AH en entremar ha kennig a ra an **h** sanet pe ged etre krommelloù : **harzhal** [’(h)arzal], **hik** [(h)ik].

<sup>19</sup> Sinaliñ a ra AR MERSER nawazh un **h**-kensonenn er ger **ho** iwe : **gant** *˘* **ho pugale**, **serrit** *˘* **ho kenou** ! (1988 : 32).

<sup>20</sup> Klewet e vez c’hoazh, nawazh, Brezhonegerion a-vihanig, oadet bremañ, é lâred *une# hache*, *des# haricots* gant un **h**- sanet kreñv, pa gomzont galleg (ds. Henriette JULÉ, a Langidig) (Sd. § 3.3.2.4., p. 298).

<sup>21</sup> Er vro Bourlet e klaver an **h** spiz : [hāmbruk] (A. BOCHÉ).

Un choaz simplaad zo bet graet aze enta, peadra da roiñ ur patrom aez da ziskodañ... ha da gelenn : war-bouez un nebeud anezhe e vez sanet an **h**-deroù-ger e brezhoneg. Dirag un **h**-kensonenn e vez graet un troc'h, un harz : **netra#hañval, da#heul, ur gwele#hir, maouezi#Henbont, ur c'hilo#had, ur ru#hir, Mene(z)#-Houarn.**

Meur a wezh e talv ar **c'h** un **h**. Da skwer **c'hwi**, gwezhave [xwi], gwezhave [hwi] pe [hʷi]. **Ho tad-c'hwi** a vo neuze sanet “ho tat<sup>h</sup>-hwi” ([o'ta:tʷi]). Hañvaltra gant **ho pag-c'hwi** (“ho pa:k<sup>h</sup>hwi”[o 'pa:kʷi]), **deg c'hoari** “dek<sup>h</sup>hoari”, **un dibenn-pred c'hweg** “un dibenn-pret<sup>h</sup>hweg”. Heuliañ a ra neuze ar **c'h**, en degouezh-se, reolenn an **h**-kensonenn. (Sd. LE PIPEC, 2008 : 80).

### 3.3.3.2. Liammadur kensonenn#bogaenn (1K#B2) (+ h mud ; + l, m, n, r)

#### 3.3.3.2.1. Ur reolenn simpl, ur reolenn olleg :

Braz eo frekañs an degouezhioù 1K#B2 e brezhoneg. Evel bet lâret uhelloc'h ne gemm ket natur ar c'hensonennoù sonuz **l, m, n, r** er juntadur : **fall#amzer, un tamm#irvin** (Sd. § 3.2.1.6.3., p. 286). Mez ewid ar c'hensonennoù keñvereg ne vez namaed ur feson reizh d'o seveniñ : ar blotâdur (*lénition*). Direizh eo peb feson arall d'ober (AR BAYON, HEMON, KERVELLA, MERSER...). Menegiñ a ran amañ soñj F. FAVEREAU, na c'heller ket lakaad e-mesk ar yezhourion normativel, diwar-benn ar poent war studi :

« La lénition par sandhi (ex. **deut eo** [dø.'de] ou **daet eo** [dajde]), s'étend à l'ensemble du domaine bretonnant, où elle n'a pas d'alternative correcte ; celle-ci correspond à la réalisation phonétique la plus élémentaire du breton dans son ensemble. Des fautes comme **mad/t eo** prononcé [ma'teo] pour [ma :de(w)] ou **red/t e vez** prononcé \*[rete'vèz] pour [rede'v'.(z)], que l'on entend souvent chez les apprenants, ce qui est inévitable, au vu de l'orthographe, seront toujours à corriger ; mais on les repère aussi – hélas – dans la bouche de « bretonnants » confirmés (du moins à leurs propres yeux)

(...). Ce sont là autant de vices phonétiques particulièrement rédhitoires, qui non seulement choquent et hérissent tout authentique bretonnant, d'où qu'il soit, mais qui devraient alerter tout pédagogue, fût-il en herbe ! (1997 : 163). »

Tu am bo da zoned war ar pezh a veneg F. FAVEREAU aze : rol an doare-skriv er sanadurioù direizh a glewer stank hiziw-an-deiz. Un dra nawazh n'eo ket bet meneget gant rener ma zezenn er bomm-skrud-se : levezon ar galleg. Ewidin eh eus meur a abeg douzh diaezamant ar gomzerion newez da sanañ reizh ar poent-se, abegoù pedagogel, abegoù fonetikel, liammet oll gant tresoù ar substrad galleg.

Setu an daolenn a ziskouez ar sistem, a zo **blotaad** dirag ar bogalennoù, dirag an **h-** mud ha dirag **l, m, n, r** :

An dibennoù	-b	-d	-g	-z	-j	-v
	-p	-t	-k	-s	-ch	-f
a vo sevenet	[b]	[d]	[g]	[z]	[ʒ]	[v]

Taolenn 4. Taolenn ar liammadurioù e brezhoneg.

Skwerioù :

- **P/B** >  $\overset{\frown}{b}$  : **pab**  $\overset{\frown}{b}$  e Roma ; **prop**  $\overset{\frown}{b}$  eo ; **lip**  $\overset{\frown}{b}$  e baw ; **tap**  $\overset{\frown}{b}$  e lost ; war **gap**<sup>22</sup>  $\overset{\frown}{b}$  e revr<sup>23</sup>.
- **T/D** >  $\overset{\frown}{d}$  : **tad**  $\overset{\frown}{d}$  Elen ; **daet**  $\overset{\frown}{d}$  eo ; **red**  $\overset{\frown}{d}$  eo ; **Helmut**  $\overset{\frown}{d}$  eo ; **ma zicheurt**  $\overset{\frown}{d}$  eo.

<sup>22</sup> Ger skrivet **kab** gant RH. Ewid FAV eh eus bet kemmesk aze etre daou c'her : **kab** *b* -où *cape*, *par-dessus* dit **kabig**, ha **kap** *g* -où *cap* (**Kaper**, *habitant du Cap-Sizun*)...

<sup>23</sup> Gant AR MERSEUR e lenner kement-mañ : « Les mots d'une syllabe, lorsque la voyelle est brève, se terminent toujours par la consonne dure (en général ils viennent du français et se terminent par s, p, k : **tap**  $\overset{\frown}{p}$  *an dra-se* ; **kas**  $\overset{\frown}{s}$  *an dra-se* ; **chas**  $\overset{\frown}{s}$  *ar chaseour* ; **pak**  $\overset{\frown}{k}$  *ar zah*. » (1988 : 33). Ne vez ket gwir ataw, da skwer e W, er vro Bourlet : **kas**  $\overset{\frown}{z}$  *a-barzh*, **tap**  $\overset{\frown}{b}$  e lost... (bet kadarnaet gant BOCHÉ). Somploc'h enta e vehe aze astenn ar reolenn er skol.



- **K/G > ɡ** : ur vag ɡ a-ouel ; klok ɡ e oa ; ur pik ɡ estlamm ; un tok ɡ uzet, heb ankouaad, e adresoù an Internet @xxx.fr an dilost .fr da sanañ “pik ɡ efer“ (ha narenn “\*pikèfèr” !), pe e frekañs ar radioioù xx.unan, da sanañ “pik ɡ unan” (ha narenn “\*pikunan” !) <sup>24</sup>.
- **S/Z > z** : kloz z eo an ti ; Dous z an Onnenn <sup>25</sup> ; klas z Andreo; lus z ar c’hoad <sup>26</sup>.
- **CH/J > j** : chañch j ar bed ; ur mañch j uzet <sup>27</sup> ; un tach j eo; staj j Ar Falz <sup>28</sup>.
- **F/V > v** : ur sklav v é labourad ; sav v alese ! ; draf v ar jardin ; kof v an den ; ur prof v ewite ; ma c’horf v a rouzo ; ur stouf v a rekan <sup>29</sup> ; er c’hef v ema an argant ; ur c’hatastrof v eo.

Goude -p, -t, -k hag -s ne vez ket divouezhet /p, t, k, s/ er strolloù-mañ :

- **-sp** : da hesp p ema aet ar vammenn.
- **-kt** : un akt t a feiz ; un akt t a werzh.
- **-st** : prest t on ; trist t e oa.
- **-sk** : ur pesk k-ebrel ; un den laosk k abominabl.
- **-ps** (< -bs) : en Nouvel Obs s ema <sup>30</sup>.

Douget e vez ar vrezhonegerion a-vihanig da sanañ ar galleg gant reolennoù ar brezhoneg, ha tro ‘m eus bet da glewed *le 5 août* distaget ogozig evel *le sein*

<sup>24</sup> Un namaedenn zo da sinaliñ memestra : **lak k ar soubenn war an tan** (MORVANNOU, 1979 : 15) : chomel a ra ar k er liammadur dirag ur vogalenn, é voud ma vez goulakaet an -a er verb (penngef : **laka**).

<sup>25</sup> **Dous-an-Onnenn**, anw ur sort avaloù (Langidig).

<sup>26</sup> Er Porze (mez iwe e Plozeved, herwez Gilles GOYAT) e vez klewet **dous s eo**, kaled ar liammadur. Gelloud a ra ar c’haletâdur-se doned a sanadur ar rannig-verb da heul **eh** (pe **ec’h**, KERVELLA, *YBAB* : 162) : **dous h eo** (A. BOCHÉ). Klotañ a ra an dro-se gant un dro arall a vez klewet iwe e W : **dous ema**, e-lec’h ma vez blotaet an -s [‘duze’ma].

<sup>27</sup> Eveljust e kaver iwe liammoù kaled er brezhoneg pobl. Keñveriañ da skwer e MADEG : **Fanch ar Gurun** [fãfar’gy:rÿn] (Loktudi, 2005 : 104) ha **Roc’h Fench Yann Goz** [rox’fëjzãn’go :s] (er Vro Bagan, 2000 : 150).

<sup>28</sup> Gelloud a raer renkañ amañ ar ger **chas**, sanet “chach” e W. Klewet e vez neuze “chach”, “chachigoù”, a glot gant **chasigoù**, mez **chas j arajet** : [ʃaʒa’ra:ʒæt], standard [ʃaʒa’ra:ʒæt].

<sup>29</sup> Skrivet a-liez **stouv** (RH, AH, FAV). A-orin galleg (*estofer* XIII<sup>o</sup>, *étouffer*, DESH.).

<sup>30</sup> Er yezh a-vremañ... namaed hag e vehe sanet “**en Nouvel Obs z ema**” gant tud zo (n’eo ket bet klewet ganin biskoazh c’hoazh). Gant an eskemmoù etrevroadel e vo red d’ar brezhoneg *lonkiñ* soniadoù newez : lod a vo sanet herwez patrom ar brezhoneg, lod ne vint ket.

*goutte* [lə'sɛ :gut], ha kement-arall *le 28 août* evel *le vingt-huit d'août*, e-lec'h ne verke ket an **d'** an araogenn c'halleg *de* mez ur liammadur brezhoneg gant **-t** dibenn ar ger *huit*. (Langidig). Roiñ a ra PICHAVANT (1978) skwerioù hañval e galleg Douarnenez : “*J'ai torré mon boutou koade avec un choutte.*” An anvioù-tud iwe a vez sanet c'hoazh gant tud oadet<sup>32</sup> herwez sistem ar brezhoneg : **Marc** **g** **Le Salle** ; **Jacques** **g** **Audo** ; **Yannick** **g** **Avry**, **Caradec** **g** **ar C'hloñs** [kardægərlō :s]<sup>33</sup>.

### 3.3.3.2.2. Liammadur gant un h- mud :

Ne gemm ket ar reolenn gant an **h- mud** a vez kavet e meur a c'her : **ho/hoc'h, he/hec'h, hon/hor/hol, henn** (\*en, \*hen), \*holl (oll). Ar pezh a gont enne eo ar vogalenn a za da heul an **h-** : ewid **d** **h** **ti** ; penaoz **z** **h** **anavoud ? perag** **g** **hon** **argant ? eged** **d** **henn** **taoliñ, a-greiz** **z** **(h)oll**. (Sd. § 3.3.3.1.2., p. 300).

### 3.3.3.2.3. Liammadur gant l, m, n, r :

Etre 1K ha KL2 (da lâred eo ar c'hensonennoù **l, m, n, r**) e tegouezh stok iwe. Mar ne gaver ket diforc'h ebed etre ar c'hensonennoù-se hag ar re arall e galleg, eh eus aze un dra heverk e brezhoneg : arabad selloud douzh **l, m, n, r** evel douzh kensonennoù mez evel douzh bogalennoù, rag blotâdur a zegouezh diragze iwe. Setu perag e talvez an emgav 1K#KL2 kement hag 1K#B2.

Da skwer : **bod# -lore** [bod'lo:re] ; **kof#leun** [koy'lā:n], [koy'lø:n] ; **Konk# -Leon** [kõgleõ], **Park# -Lann** [parg'lan] ; **Tad#Mona** [tad'mo:na], **Lok# -Maria** [log'marja]<sup>34</sup> ; **brug#naturel** [bryg'na'ty:rel] ; **tok#ruz** [tõg'ry], **lip# -revr** ['librɛr], **ur c'houef#ruz** [yrhwev'ry].

Beteg an troioù estren, a c'hell plegañ d'ar memez arver : **pik# -nik** [pignik], da skriv marse **pig-nik...**

<sup>32</sup> Mez perag gant tud oadet hepken ?

<sup>33</sup> Ar skwer diwezhañ-mañ bet roet din gant Camille Ollivier, a Verne (Morbihan).

<sup>34</sup> **Lokmaria** a vez skrivet war ar panelloù hent... mez **Logunec'h**. Herwez A. BOCHÉ e vehe gwell reoliekaad : **Logmaria, Logmenec'h**.

Ur poent eo, a vehe red d'ar skolaerion teurel ewezh warnañ c'hoazh, dre mand eo dishañval diouzh patrom ar substrad galleg.

### 3.3.3.3. Liammadur 1KK#B2

Pa vez ur stroll kensonennoù e dibenn ar ger kentañ e vez douget ar yezh da simplaad ar sanañ liez dre fatadur unan anezhe<sup>35</sup>, liez an **r** : **ur paotr** <sup>g</sup> **eo** > [yr 'pawde] ; **mestr** <sup>t</sup> **an ti** > [mɛʃtataɥ] ; **ur lestr** <sup>t</sup> **amerikan** ; **un tamm kouevr** <sup>v</sup> **eo** [yn tam 'kwe :ve] ; **ur gampr** <sup>b</sup> **izel** ; **titl** <sup>d</sup> **ar levr** ; **levr** <sup>v</sup> **ar plac'h**<sup>36</sup>.

Er strolloù *kensonenn linkuz + unan ag ar c'hensonennoù keñvereg* e arver er re-mañ reolenn ar blotâdur : **A Velz** <sup>z</sup> **ema** ; **Pont** <sup>d</sup> **-Aven** (Sd. af. **Pondaven** mez iwe **Pondi** < **Pondivi** : **Pont-Ivi**) ; **pemp** <sup>b</sup> **eur** ; **un olifant** <sup>d</sup> **eo** ; **yaouank** <sup>g</sup> **e oa** ; **ur sport** <sup>d</sup> **interesuz** ; **KLT un urz(h)** <sup>z</sup> **a berzh Pêr**.

En dibennoù-verb 3L dre **-mp** kement hag en araogennoù displeget (3L : **dimp/deomp**, **ewidimp/ewideomp**...) ne vez ket klewet ar **-p** dibenn peurliesañ (ne vez ket skrivet zokén er Skolveureg) : **daom(p)** <sup>m</sup> **asambl** [damasãmp] ; **an tamm douar-se zo dim(p)** <sup>m</sup> **ataw**. Mar behe sanet ar **-p** (ar pezh a zegouezh liezig a-walc'h bremañ gant an newezvrezhonegerion a-gaoz da levezon ar skritur) e vehe reizh lakaad ar reolenn da arveriñ iwe dre vlotaad anezhañ : **daomp** <sup>b</sup> **ataw** (Sd. **pemp** <sup>b</sup> **eur**).

(Ewid an namaedennoù, goude **sk**, **sp**, **st**..., sd. § 3.3.3.2., p. 301).

<sup>35</sup> Lâred a ra A. BOCHÉ e vez "allergeg" ar brezhoneg douzh ar strolloù-kensonennoù.

<sup>36</sup> Ur mod da sanañ eo hebkén, é vould ma vez kavet meur a sanadur d'ar **v** e brezhoneg : [le<sup>ɹ</sup>] da skwer a laosko an **-r** da vould klewet er liammadur.

### 3.3.3.4. Liammadur gant ur rannig-termal

Dedennet e vo hon ewezh gant un degouezh : implij ar rannig-termal “**eu(h)**“, ken stank er paouezoù graet a-hed ar c’homz, a zegas meur a liammadur heverk<sup>37</sup>.

#### 3.3.3.4.1. Skritur ar rannig-termal :

E galleg e vez skrivet *euh !*, heb talvoud ebed d’an **-h** [ø] evel e *ah* [a], *eh* [e], *oh* [o]. E-kontrel e c’heller kaoud un [h] pe netra e *ha* [’a, ha], *hé* [’e, he], *ho* [’o, ho] (PR). E galleg e verk an *euh !* pewart zra dishañval : 1) **ar jen** (*l’embarras*), 2) **an doutañs** (*le doute*), 3) **ar souezh** (*l’étonnement*), 4) **an termal** (pe **an entremar**, **an etredaouiñ** : *l’hésitation*).

E brezhoneg ne glot ket an *euh*-se tre gant sterva\* ar ger e galleg. Ne glot ket da skwer gant an estlammadell a vez kavet e FAV : **u !**, **uc’hu !**, **uche !** (en Oriant **uch !** Langidig **ich !**, **ich’ta !**). An **eu(h)**... a gomzan anezhañ amañ a vez sanet liez a-walc’h, ewid merkañ un termal pe un etredaouiñ bennag, petramant ewid boud kuit a respont ya pe nann douzh un aters bennag. N’eo ket un estlammadell enta, mez kentoc’h **ur rannig-termal** (*particule d’hésitation*)<sup>38</sup>.

N’em eus ket kavet an **eu(h)**...-se e geriadur ebed, ha nawazh e ranker henn kavoud e brezhoneg iwe, rag ar soniad /ø/ pe /œ/ (ha liesoc’h /ø:/ pe /œ:/) a vez klewet gant ar vrezhonegerion, tre evel e galleg. War a seblant e kaver ar rannig-termal-se e meur a yezh, sanet pe /ø/, /œ/ pe /ʌ/ kentoc’h hir (alamaneg, saozneg), pa chelaouer douzh an dud é komz.

Diw gudenn zo ewid skriv **eu(h)!** e brezhoneg : an **-h**-dibenn hag ar pik-estlamm. Dre ma ne verk ket ar rannig-se un estlamm e brezhoneg mez un termal, ne ranker ket skriv ar pik-estlamm. Ewid an **-h**, pandeogwir ne vez ket sanet, n’eus rezon ebed d’henn skriv. Diouzh an tu arall e vehe gwell marse

<sup>37</sup> E-lec’h **eu**... e klewer a-liez ur rannig-termal arall : **beñ**... (Sd. LE PIPEC, 2008, Korpus, p. 26 ha goude).

<sup>38</sup> Evel m’ema ar ger *oui* “une particule d’affirmation“ (PR), a c’hell boud adverb pe anw-kadarn.

henn gouarn ewid “skeudenn“ ar ger : **eu**... enta, e-lec’h **eu**... ? A-stur gant ar galleg *Ah !* pe *Oh !* e skriver **A !** pe **O !** e brezhoneg, ar pezh a zo reizh (geriadurioù FAV, AH). Mar grae Yeun ar Gow gant **A !** (*E skeud tour-braz Sant-Jermen*) e ra Gege Gwenn gant **Ah !** (*An deiz hirgortozet*, 2008 : 141). En e dezenn en deus LE PIPEC treuskrevet **eu** pe **eu** ar rannig-termal (**betek eu**... /be'tag œ.../ , Korpus, Nn 5, p.12 ; **betek eu**... /bø'reʃ œ.../, Nn 17, p.16). Ober a rin-me gant **eu**... amañ.

#### 3.3.3.4.2. Liammadur gant ar rannig-termal :

Dirag ar rannig-termal **eu**... e vez blotaet ar gensonenn dibenn-ger evel dirag ur vogalenn... peogwir e krog gant ur vogalenn ! Lîez e vez kavet ar rannig **eu**... goude an adverboù, araogennoù pe stagelloù evel **ewid**, **penaoz**, **rag**, **perag**, **eged**, **ged/gant/digant**, **euz/deuz**, **douzh/ouzh/diouzh**, **a-raog/e-raog**. Goude ar stagell **ha** e laka ar gomzerion digudenn ar stumm a vez kavet da gustum dirag ur vogalenn : **hag**. Rankoud a raer sanañ enta **hag** <sup>˘</sup>**g** **eu**... / **ewid** <sup>˘</sup>**d** **eu**... / **penaoz** <sup>˘</sup>**z** **eu**... / **rag** <sup>˘</sup>**g** **eu**... / **perag** <sup>˘</sup>**g** **eu**... / **eged** <sup>˘</sup>**d** **eu**... / **euz** pe **deuz** <sup>˘</sup>**z** **eu**... / **e-raog** <sup>˘</sup>**g** **eu**... / **pegoulz** <sup>˘</sup>**z** **eu**... / **pesort** <sup>˘</sup>**d** **eu**... hag e KLT **douzh(h)** <sup>˘</sup>**z** **eu**... Eveljust eh eus d'en em c'houlenn hag-eñv ne vo ket enebet douzh ar sanadur reizh-se gant doare-skriv an araogennoù e Peurunvan-41, a laka peurluviañ ur gensonenn divouezh en dibenn anezhe : **\*evit**, **\*penaos**, **\*rak**, **\*perak**, **\*eget**, **\*eus**, namaed **hag** ha **nag** eveljust. N'eus namaed **pegoulz** hag **ouzh/douzh** (a-drugarez d'ar **zh**), a brezant ur **z** er skritur. Degas a ray an enklask sklaerijenn dimp war-se.

Mez gelloud a ra an den boud en entremar goude ne vern pesort ger er yezh komzet : **Me** ‘**m** **boa soñjet** <sup>˘</sup>**d** **eu**... / **Ne ouian ket** <sup>˘</sup>**d** **eu**... / **Prop** <sup>˘</sup>**b** **eu**... **prop** evel <sup>˘</sup>**l** **eu**... Da lâred eo e rank ar brezhoneger mestroniañ mat ar yezh war ar poent-se e ne vern pesort degouezh.

Diskoueziñ a ra tezenn LE PIPEC meur a skwer a gement-se e brezhoneg Malgenag : **oa daet eu**... /we 'dɛj dœ.../ (Korpus, Nn 16, p.14) ; **'m eus soñj eu**... /me ʃɔ'ʒœ.../ Nn 14, p.14) ; **ma zad eu**... /mə 'zɑ:d ə.../ (Nn 9, p.28) ; **oa ket eu**... /wɛ'cəɖ ə.../ (Nn 16, p.31).

Roudoù ag ar patrom brezhoneg a chom e galleg gant Bretoned c'hoazh : *avec g euh...*<sup>39</sup> (Langidig).

### 3.3.3.5. Liammadur gant un hantergenonenn (HK)

Evel gant bogalennoù hag evel gant **l, m, n, r** e tremen an traoù e brezhoneg gant an hantergenonennoù **y** [j] ha **w** ([w], [ɥ]). Setu un nebeud skwerioù a gement-se.

#### 3.3.3.5.1. Liammadur 1B#HK2 :

Diaezamant-sanañ ebed : **Setu#Yann** ; **pa#yae** kuit ; **ur live#yezh** ; **ar bleiz a#yud** ; **daet eo Mari#yac'h en-dro**.

#### 3.3.3.5.2. Liammadur 1HK#B2 :

- Goude [w] : Ewid ar **-w**-dibenn, meur a sanadur dezhañ, ne jaojo ket ar skwerioù-mañ namaed pa vo sanet [w] pe [ɥ] : **naw#Italian** [naɥi'taljã]; **ur yaw#ankouaet** [yrjaw'ãkwajt].

- Goude [j] : Ewid [j] n'eus namaed ur sanadur standard, namaed pa vez war e lec'h ur **z** leoneg : **nay#abominabl** ['najabo'minap] ; KTW **ur blei(z)#italian** [bleji'taljã] pe [blezi'taljã].

- Dirag **l, m, n, r** : Ne zegas **l, m, n, r** kemm ebed e natur an hantergenonennoù : **eñv a dostay#laouen** [dostaj'lawen] ; **hennezh zo nay#mik** [naj'mik] ; **naw loar** ['naɥlwe :r], ['nawlwa :r].

#### 3.3.3.5.3. Liammadur 1K#HK2 :

- Goude **-l, -m, -n, -r** : Ar chadennadur gant **-l, -m, -n, -r** ne za ket problem ebed d'e heul dirag un hantergenonenn : **ar#Yeun-Elez** ; **unan#wan** ; **war#yun, ar#yaou**.

---

<sup>39</sup> Bet klewet digant Albert GUILLEMOT, ganet e 1937.

- Dirag [j] pe [w] : Goude ar c'hensonennoù keñvereg e arver reolenn ordinel ar liammadurioù, da lâred eo e vo klewet ar gensonenn divouezh pe divouezhiet : **tad<sup>ˈ</sup>d Yann** ; **debrit<sup>ˈ</sup>d youd !** ; **galvit<sup>ˈ</sup>d Yann !** ; **David<sup>ˈ</sup>d 'ouie** ; **Mark<sup>ˈ</sup>g 'ouie** [marg'wie] ; **deg<sup>ˈ</sup>g Wallon** ; **ur goaf<sup>ˈ</sup>v 'oa gantañ** [ yr'gwaywagãn'tã].

- Dirag un h- mud : Tu zo d'en em gavoud en degouezh-se (1K#HK2) dirag un h- mud petramant pa ne san ket ar c'homzer an h-deroù-ger pe ar c'h-deroù-ger : **ewid#Houad (evit (H)ouad) (h mud, FAV)** [eʷidwat], **deg#c'hoari (dek c'hoari)** \*[deg'wa:ri] (W) ewid [dek'hwa:ri].

#### 3.3.3.5.4. Liammadur 1HK#K2 :

Ne gaver diaezamant ebed p'en em gav ur gensonenn bennag goude [j] pe [w], rag chomel a ra digemm ar gensonenn : **daou#yugel** ; **daou#chomlec'h** ; **diw#blac'h** ; **diw#loa** ; **hi a ray#boued** ; **ur yaw#braz** ; KTW **ur blei(z)#fall** ; **ne ouie ket piw#klask**.

#### 3.3.3.5.5. Liammadur 1HK#HK2 :

- Goude [j] : Diaezamant ebed gant [j] : **mamm a ray#youd** [raj'ju:t] ; KTW **ur blei(z)#yaouank** [yrblej'jawãŋk].

- Goude [w] : Ewid ar -w-dibenn, evel uhelloc'h, meur a sanadur dezhañ, ne jaojo ket ar skwerioù-mañ namaed pa vo sanet [w] pe [ʷ] :

**Diw#yezh** ['diʷjɛx] ; **taw#Yudaz** ; **ur paw# -yar** ; **ur Yudew#yaouank** ; **diw#yeinerez** ; **ur yaw#yein**.

#### 3.3.3.6. Liammadur ha yezh skrivet

Roudoù ag ar liammadurioù a vez kavet e brezhoneg skrivet, anwioù-lec'h, anwioù-tud dreist-oll. Da skwer :

- Anwioù-lec'h : **Pondi/Pondivi** (< **Pont-Ivi**), \**Saint-Durlo* (< **Sant-Urlo** ['sãdyrlow], 56).

- Anwioù-tud : **Abegile**, **Abolivier**, **Abautret** (< **mab#egile**, **mab#olivier...**) ; **Poézevara** (< **pouez#e vara**) ; **Pondaven** (< **Pont-Aven**) ; **Saindrenan** (< *Sa(i)nt-Renan* > [sād'rənān]).

Gwelet e vo ne sikour ket ataw ar skritur da gavoud sanadur reizh ar gerioù brezhoneg : fr. *Guiclan* (br. **Gwiglann**) ; fr. *Pont-Aven* br. [põn'daven]...

Er Peurunvan-41 e kaver un nebeud skwerioù er yezh ordinel e-lec'h ma heuli ar skrid ar gomz : \***a-hent# -all** [ahen'dal] skrivet **a-hend-all** (RH) ; \***kement# -all** [kemendal] > **kemend-all** (RH) ; \***ent#-eeun** [endeø̃n] > **end-eeun** (RH) ; \***ent#eo** [en'dew] > **endeo** (RH), ha c'hoazh **peb-all** (en despet da \***pep**, RH), **pebeil**, **pebeilañ**. E skolveureg e kaver ouzhpenn \***int# -i** [indi] > **ind-i** ha ba yezhadur FAV **gand-aon** (< **gant aon**). Tu zo da venegañ iwe **hag** ha **nag** a vez skrivet fasibl evel ma vezont sanet : **hag<sup>g</sup> an dud**, **nag<sup>g</sup> an dud**. Ne oa ket ar soursi “lakaad da sanañ reizh“ e-maez a soñjoù saverion ar Peurunvan, ha kavet e vo skwerioù arall a gement-se. Mez da ouied ha kaset e oa bet an taol da benn hor bo tro da respont pelloc'h. Gwelet e vo iwe ne zegas ket ataw ar brezhonekâdur foran a-vremañ sanadurioù reizh hebkén d'ar brezhoneg.

### 3.3.4. SANDHI 1K#K2

Stok 1K gant kensonenn-benn ar ger da heul (K2) a vo graet sandhi anezhañ amañ, sandhi kensonennel ez-resiz evel m'am eus henn termenet uhelloc'h. Sevenet e vez ar sandhi gant ur **c'haletâdur** (divouezhadur) : da lâred eo, un tres ag ur gensonenn bennag ar ar juntadur a ya da verkañ heben. Tu zo da lâred e tenn ar sandhi douzh *lezenn ar bihannañ striv* : en troioù-lavar pemdezieg ne sant ket mui ar gomzerion e rankont derc'hel douzh resisted ar gerioù, douzh natur ar c'hensonennoù en c'hoari, ha leuskel a raont ar yezh da heuliañ he lezenn dezhi. Evel-se e tremen tres an divouezhañ, a zo perzh da unan a gensonennoù ar juntadur, war an arall. Pa vez sandhi e vez ataw kaled an diw gensonenn ag ar c'houblad.



Tu zo da weled ar liammadur (*sandhi bogalennel*) evel renet gant ur reolenn olleg n'eus dezhi namaedenn ebed, ur reolenn a vez sinalet gant ur blotâdur. Ar *sandhi kensonennel*, e-kontrel, zo ur fed a c'hell degouezhoud heb redi ebed er yezh standard. Adal bremañ n'implijin amañ ar ger *sandhi* namaed pa sinifio *sandhi kensonennel*.

Ne c'hoarvez ket ar sandhi ataw<sup>40</sup>, zokén e parlantoù zo a vez kustum dezhañ, mez kentoc'h e troioù-lavar sourimplijet : **lârit#dîn** > **lârit** <sup>ˆ</sup>**î**n ; **dait#bremañ** > **dait** <sup>ˆ</sup>**p**remañ ; **gwinizh# -du** > **gwinizh** <sup>ˆ</sup>**t**u ; **kit#du-se** > **kit** <sup>ˆ</sup>**t**uze.

Mez un tres ag ar brezhoneg eo, a vez kavet stank e topolektoù zo, evel e Bro-Wened hag e Kreiz-Breizh. Nawazh, zokén e tachadoù e-lec'h ma ne vez ket mui kavet stank, e chom damorantoù anezhañ en anwioù-lec'h, da skwer **Loperhet** (< **log#Berc'hed**), a vez kavet war-un-dro e-tal Brest hag e-tal Gwened, pe en anwioù-tud : **Lagatu** (< **lagad#du**). Aze iwe e c'hello an den en em c'houlenn penaoz ober er skol gant ar gudenn-se : kelenn ar sanadurioù gant sandhi pe ged.

### 3.3.4.1. Sandhi : kaletâdur 1K e juntadur 1K#K2

#### 3.3.4.1.1. Degouezh olleg :

E sintagmoù evel **alej#koan**, **mud#peurliesañ**, **kaled#poazh**, **ur brog#sâpin**, **mab#Tomaz**, **niez#Fanch** da skwer ne vo ket klewet ar strolloù **j#k**, **d#p**, **g#s**, **b#t** pe **z#f** mez [**jk**], [**tp**], [**ks**], [**pt**], ha [**sf**]. En ur stroll kensonennoù n'heller ket sanañ unan vouezhiet hag unan divouezh : red dezhe boud sanet oll mouezhiet pe oll divouezh. Sed aze perag e vez notet trouzioù evel heni ar

<sup>40</sup> En desped ag ar pezh en doa skrivet R. HEMON : « *Le résultat de la rencontre de deux consonnes interchangeables identiques ou correspondantes (corrélatives, JCLR) est toujours une sourde, même si la seconde est sonore : bloaz 'zo (blwas so) ; dek gwele (dek kwe:le)* », ne vez ket gwir e peb degouezh ha nebutoc'h-nebeud er yezh komzet hiziv, evel ma vo diskouezet gant an enklask.

wenanenn “bzz...” pe ar galv “psst !”, da skwer, pe c’hoazh perag eh a an **x** galleg pe da [ks] (*taxi*, bzg **taksi**) pe da [gz] (*examen*, bzg **egzamin**).

Er skwer **alej#koan** [alefkwã:n] e vez divouezhet ar gensonenn dibenn-ger evel ataw e brezhoneg ([alef//]), ha chomel a ra divouezh er juntadur amañ dirag ar gensonenn da heul. Tu zo da weled an dra-se iwe evel un heñvellaad àr-gil (*assimilation régressive*). Ur fenomen naturel eo, na c’houlen ket ma vo anavezet ar reolenn gant ar gomzerion, rag n’eus ket tu d’ober a-hend-arall, herwez « **mont war-raog ar c’hemmoù-yezh** » (« *économie des changements linguistiques* », MARTINET) !

Pa vez sandhi enta e vez divouezh 1K ataw. Rekiz nawazh diwall douzh an ewezhiadennoù-mañ da heul.

#### 3.3.4.1.2. Kensonenn 1K dirag an h-deroù-ger :

Gwelet hon eus ar gudenn a sav gant an **h-deroù-ger**, a-gaoz ma ne vez ket sanet ataw, nag e peb lec’h, er brezhonegva. Ewid yezh ar skol, evel m’hon eus henn gwelet uhelloc’h (sd. § 3.3.3.1.2. p. 300) e heuliin amañ kennigoù AH, da lâred eo kemer an **h-** evel kensonenn da sanañ. Sandhi a zegouezh gant an **h-kensonenn-se**. Ez-pleustreg, a-hend-arall, e arvero reolenn ar liammadurioù bet gwelet uhelloc’h gant un **h-** mud a gaver e gerioù zo (**\*holl, henn, he...**).

Daoust ma vez ataw divouezh/divouezhet 1K er sandhi, peurvuiañ ne vez ket remerket divouezhadur 1K gant ar gomzerion. Dibaot a c’hallegerion a oui reizhmad e sanont ur [p] er ger *observer* pa ouiont sklaer e vez sanet [z] er ger *subsides*. Nawazh e vez boutin a-walc’h ar fenomen-se e galleg : *Ouvre ton livre page trois* : [uftõlifpaʃtrwa] (POTHIER, 1996) . Kalz anatoc’h e vo kaletâdur K2, evel m’henn gwelimp pelloc’h (Sd. § 3.3.4.2., p. 314).

E-kontrel, dirag un **h-kensonenn** pe **c’h-** (sanet [h]) e vez santet kaletâdur 1K : merkañ a ray an arouez (  $\overset{\frown}{\text{C}}$  ) kemm 1K neuze amañ, dirag ar soniad [h] : **miz  $\overset{\frown}{\text{C}}$ s here**.

Gant an **h**-kensonenn e vez kaletañ 1K ataw. Setu skwerioù arall :

- Gant ar stagell ha : ar pab **ᵑ** hag e eskobed ; Bob **ᵑ** ha me ; bod **ᵑ** ha boued ; desket **ᵑ** ha rac'h ; glaz **ᵑ** ha ruz ; hed **ᵑ**-ha-hed ; kig **ᵑ**-ha-fars<sup>41</sup> ; mab **ᵑ** ha merc'h ; noz **ᵑ** ha deiz ; plouz **ᵑ** ha foenn ;
- A beb sort : beteg **ᵑ** Henbont ; bod **ᵑ** haleg ; gwelet 'm eus **ᵑ**-hi ; hent **ᵑ** houarn ; Loeiz **ᵑ** Herrieu ; pod **ᵑ** houarn ; Sant-**ᵑ** Herbod ; Sant-**ᵑ** Hernin ; Sant-**ᵑ** Houarne.

#### 3.3.4.1.3. Kensonenn 1K dirag l, m, n, r (1K#KL2) :

Ne gomzin ket pell amañ ag ar c'hensonennoù linkuz goude boud lâret dija e vezont er yezh evel bogalennoù. Ne vo ket kaletadur 1K enta dirag KL2, mez **blotadur** : tok **ᵑ** ruz, lip **ᵑ** revr.

#### 3.3.4.1.4. Kensonenn 1K dirag KH2 (y ha w) :

É vout ma c'hoari an hantergensonennoù evel bogalennoù e brezhoneg, e kasan ar lenner d'ar pennad a-zivoud ar liammadurioù. Ne vo ket kaletadur 1K enta dirag KH2, mez **blotadur** c'hoazh : tok **ᵑ** Yannig (Sd. § 3.3.3.5., p. 308).

Meur a wezh e kouezh 1K dirag KH2 : Sant-Wazheg > “San' **ᵑ**-Wazheg“ ; Sant-Yagud > “San' **ᵑ**-Yagud“ ; Sant-Yec'han > “San' **ᵑ**-Yec'han“ ; sant Yann > “San' **ᵑ**Yann.”

#### 3.3.4.1.5. Kensonenn 1KL dirag K2 :

Goude ur gensonenn linkuz (1KL, dle. l, m, n pe r) e chom digemm peb kensonenn, da lâred eo ne vo ket klewet na kaletadur na blotadur gant K2. Da skwer :

- [lb] : ur bol#braz, kaol#bleuñv.

<sup>41</sup> Roet da skwer gant GARN, p. 11.

- [mb] : **mamm#-baeron** ; **tamm#bihan**.
- [mg] : **mamm#Gwenn**.
- [nb] : **Lann-Blaen**.
- [ng] : **Youn#Gwernig**.
- [rb] : **ar mor#bihan**.
- [rd] : **kar#deoc'h, lârdin**.

### 3.3.4.2. Sandhi : kaletâdur K2 er juntadur 1K#K2

#### 3.3.4.2.1. Degouezhioù boutinnañ :

Peurliesañ e vez divouezhiet **b**, **d**, **g**, an **d** an heni liesañ kemmet, kalz nebeutoc'h **z**, **j** ha **v**. Ar gerioù implijetañ a vez merket liez (mez pas ataw naket) gant ar sandhi. Liez e tegouezh ar sandhi :

- Goude verboù en doare-gourc'hemenn : **dait** <sup>˘</sup>**tu-mañ**!<sup>42</sup> ; **kit** <sup>˘</sup>**tu-se** ! ; **dait** <sup>˘</sup>**premañ** ! ; **daomp** <sup>˘</sup>**premañ** ! ; **kit** <sup>˘</sup>**toc'htu** ! ; **dait** <sup>˘</sup>**touzh taol**!<sup>43</sup>
- Goude gerioù evel : **beteg** (**beteg** <sup>˘</sup>**premañ**) ; **gwinizh** (**gwinizh** <sup>˘</sup>**tu**) ; **mallozh** (**mallozh** <sup>˘</sup>**Toue**) ; **sant** (**sant** <sup>˘</sup>**Kirin**).
- Dirag DA : **roit** (\*rait) **din** ; **roit** <sup>˘</sup>**imp** ; **komzit** <sup>˘</sup>**imp** ; lâret 'm eus <sup>˘</sup>**teoc'h** ; **hi** **doa** lâret <sup>˘</sup>**tezhe** ; **daet** **soñj** <sup>˘</sup>**tehoñ** ; **ur** **levr** **skrivet** <sup>˘</sup>**tehoñ** ; **roet** **en** **doa** **ur** **pawad** <sup>˘</sup>**tehi** ; **lârit** <sup>˘</sup>**tehe** ; **komz** <sup>˘</sup>**ta** **Job** ; **me** **a** **gav** <sup>˘</sup>**tin** ; lâret 'm eus <sup>˘</sup>**t'unan** ; **salud** <sup>˘</sup>**teoc'h**.
- Dirag GANT/GED : **an** **dra-se** **zo** **aet** <sup>˘</sup>**ketoñ** ; **dañsit** <sup>˘</sup>**keti** ; **kit** <sup>˘</sup>**kete**.
- Dirag DIOUZHTU/DOC'HTU : **aet** **kuit** <sup>˘</sup>**toc'htu** ; **krevet** **e** **lagad** <sup>˘</sup>**toc'htu**; **goude-se** **e** **oa** **waet** **da** **labourad** <sup>˘</sup>**toc'htu**.

Er skwer **roit#dimp** [ˈrojtim] e vez divouezhiet an **d-** (K2) dre hañvalidigezh war-raog (*provection*). Mez er skwer **salud#deoc'h** [ˈsa:lytɔx] e weler an daou fenomen sklaerroc'h c'hoazh : divouezhadur **-d** dibenn **salud** [ˈsa:lyt] ha divouezhadur **d-** deroù-ger **deoc'h** [tɔx]. Amañ eh a an daou **t** d'ober unan er c'homz.

<sup>42</sup> En dro-se e vez santet ar sandhi a-gaoz mand eo **du-mañ** (< ba du-mañ) an dro-orin, ha n'eo ket **tu-mañ** end-eeun.

<sup>43</sup> Aet eo ar stumm-orin **ouzh** da **douzh** er yezh-pobl, namaed e-kostez Kastell-Paol, dindan stummoù liessort : **dac'h**, **dec'h**, **deus**, **dous**, **doc'h**. Daet eo ar stummoù-se dre **d-** gant ar liammadur, da skwer **dait** <sup>˘</sup>**douzh taol**. E-lec'h liammadur (**peget** <sup>˘</sup>**douzh ar vur**) e kaver sandhi, da lâred eo kaletâdur : **peget** <sup>˘</sup>**touzh ar vur**).

### 3.3.4.2.2. Rentusted ar sistem :

Gelloud a ra fenomen ar sandhi degouezhoud p'en em gav diw gensonenn vlod er juntadur, pe unan galed dirag unan vlod, mez ne zegouezh ket seul taol. Setu amañ, skeudennaouet gant ur c'horpus bihan, bet klewet pe ijinet ganin, ar re voutinnañ ag ar juntadurioù a zegas aez ur sandhi (un tregont bennag) :

- B#B : ma mab # bihan > “ma mab <sup>ˆ</sup>pihan.”
- P#B : hi zo prop # bremañ > “hi zo prop <sup>ˆ</sup>premañ.”
- D#B : red eo kousked # bremañ ! > “red eo kousked <sup>ˆ</sup>premañ !”
- T#B : dait # bremañ ! > “dait <sup>ˆ</sup>premañ !”
- G#B : beteg # bremañ > “beteg <sup>ˆ</sup>premañ.”
- K#B : lakit ho tok # bremañ > “lakit ho tok <sup>ˆ</sup>premañ.”
- Z#B : setu-me diaez # bremañ > “diaez <sup>ˆ</sup>premañ.”
- S#B : droug 'm eus # bet > “droug 'm eus <sup>ˆ</sup>pet.”
- F#B : kouef # bihan > “koupihan” (Pourl).
- C'H#B : setu gwerzhet e voc'h # bremañ > “setu gwerzhet e voc'h <sup>ˆ</sup>premañ.”
- (Z)H#B : ur wezh # bennag > “ur we(z)h <sup>ˆ</sup>pennag.”
- B#D : ur mab # dezhañ > “ur mab <sup>ˆ</sup>tezhañ.”
- P#D : prenet ur Jeep # dezhe > “prenet ur Jeep <sup>ˆ</sup>tehe.”
- D#D : dait da gousked # du-mañ ! > “dait da gousked <sup>ˆ</sup>tu-mañ !”
- T#D : roit # din ! > “roit <sup>ˆ</sup>tin (\*rait <sup>ˆ</sup>tin) !”
- G#D : roit (\*rait) ma bag # din en-dro ! > “roit ma bag <sup>ˆ</sup>tin en-dro !”
- K#D : evel-se e oa bet roet e vac # dezhi (= bachelouriezh) > “evel-se e oa bet roet e vac <sup>ˆ</sup>tehoñ.”
- Z#D : eh an da gomz # dezhi > “eh an da gomz <sup>ˆ</sup>tehi” ; gwiniz(h) # du > gwiniz(h)- <sup>ˆ</sup>tu.”
- S#D : lâret 'm eus # deoc'h > “lâret 'm eus <sup>ˆ</sup>teoch.”
- J#D : ar pezh a blij # din > “ar pezh a blij <sup>ˆ</sup>tin.”
- CH#D : karget he foch # dezhi > “karget he foch <sup>ˆ</sup>tehi.”

- V#D : me ‘gav # din > “me ‘gav <sup>ˆ</sup>tin<sup>44</sup>.”
- F#D : klaskit he c’houef # dezhi > “klaskit he c’houef <sup>ˆ</sup>tehi.”
- C’H#D : degasit ma sac’h # din ! > “degasit ma sac’h <sup>ˆ</sup>tin !”
- (Z)H#D e W : mallo(z)h- # Doue ! > “mallo(z)h- <sup>ˆ</sup>Toue !” ;  
mallo(z)h- # du ! > “mallo(z)h- <sup>ˆ</sup>tu !” ; ober me(z)h # dehi > “ober  
me(z)h- <sup>ˆ</sup>tehi” ; gwini(z)h # du > “gwini(z)h- <sup>ˆ</sup>tu.”
- B#G : ema he mab # geti > “ema he mab <sup>ˆ</sup>keti.”
- P#G : hi ‘dap # getoñ > “hi a dap <sup>ˆ</sup>ketoñ.”
- D#G : waet he flad # geti > “waet he flad <sup>ˆ</sup>keti.”
- T#G : dansit # geti ! > “dañsit <sup>ˆ</sup>keti !” Sant # Girin >  
“sant <sup>ˆ</sup>Kirin.”
- G#G : deg # gwenneg (\*dek gwenneg) > “deg <sup>ˆ</sup>kwenneg” ; droug-  
goûg > “droug <sup>ˆ</sup>koûg.”
- K#G : (\*dek gwenneg) > “dek <sup>ˆ</sup>kwenneg.”
- Z#G : ur vaouez # goz(h) > “ur vaouez <sup>ˆ</sup>koz(h).”
- S#G : waet e das # getoñ > “waet e das <sup>ˆ</sup>ketoñ.”
- J#G : mar plij # genoc’h > “mar plij <sup>ˆ</sup>kenoc’h.”
- CH#G : torret e vroch # getoñ > “torret e vroch <sup>ˆ</sup>ketoñ.”
- V#G : me ‘gav # genin > “me ‘gav <sup>ˆ</sup>kenin<sup>45</sup>.”
- F#G : waet he c’houef # geti > “waet he c’houef <sup>ˆ</sup>keti.”
- C’H#D : deoc’h # da ganal ! > “deoc’h <sup>ˆ</sup>ta ganal !” W Roit ho  
ka(z)h # d’ho mamm ! > “roit ho ka(z)h <sup>ˆ</sup>t’ho mamm !”
- C’H#G : pa weloc’h # getoñ... > “pa weloc’h <sup>ˆ</sup>ketoñ...”
- (Z)H#G : hi ‘deus bet me(z)h # getoñ > “hi ‘deus bet  
me(z)h <sup>ˆ</sup>ketoñ.”

Daoust d’ar skwerioù-se boud stank a-walc’h e degouezhioù kavet liez er c’homz, ne zegouezh ket ar sandhi en troioù digustum pe santet digustum : **red eo lâred#bepred** [db] ; **kousked#bemnoz** [db] ; **nen doa ket gwelet#den ebed** [dd] ; **hastit#buan** [db] ! **un deiz bennag e vo red#gober ‘vel-se** [dg] (sd. **red <sup>ˆ</sup>tehoñ**)...

<sup>44</sup> Reishoc’h e vehe lâred **me e kav <sup>ˆ</sup>tin** (Sd. *Grammaire*, RH, pp. 61 & 63).

<sup>45</sup> Ez-reizh e vehe kentoc’h **me (e) kav genin = kavoud a ra ganin**, da geñveriañ douzh **me a gav = kavoud a ran** (A. BOCHÉ) (Sd. notenn e-raog).

### 3.3.4.2.3. Sandhi ha koazhadur 1K :

Liez e noter koazhadur 1K er sandhi, tre evel dirag **l, m, n, r** (**bod+lore** > *af. Bolloré* ; **bod+calper** > *al. Bocalper*). Koulskoude ne vez ket kollet ewid-se kaletadur K2, chomet evel roud an 1K koazhet. Da skwer : **mouched#-goûg** > “**mouche**’  $\overset{\curvearrowright}{k}oûg$ ” ; **dait#bremañ** > **dai**’  $\overset{\curvearrowright}{p}remañ$ .”

Zokén p’en em gav diw gensonenn hañval er memez juntadur : **bod#drein** > **Botrain** *al.* ; **demad#deoc’h** > “**dema**’  $\overset{\curvearrowright}{t}eoc’h$ ” ; **salud#deoc’h** > “**salu**’  $\overset{\curvearrowright}{t}eoc’h$ ” ; **eh an da lâred#dezhi** > “**eh an da lâre**’  $\overset{\curvearrowright}{t}ehi$ ” ; **pemp#ploaz** > “**pem**’  $\overset{\curvearrowright}{p}loaz$ .”

### 3.3.4.2.4. Rol fonologel ar sandhi :

Daoust din chomel heb boud remerket rol fonologel ar sandhi e gwenedeg, e vez kavet meur a wezh skwerioù a gement-se. Sinaliñ a ra PLOURIN (2000 : 13) an diw feson da sanañ **kazh#bihan** e-kostez Langoned : 1) **kaz(h)**  $\overset{\curvearrowright}{z}$  **bihan** (*petit chat*) ha 2) **kaz(h)**  $\overset{\curvearrowright}{p}$  **bihan** a sinifi *mon p’tit chat, mon p’tit lapin* pe, en dro-lavar **hennezh eo ar c’haz(h)**  $\overset{\curvearrowright}{p}$  **bihan**, ar **gourig** ag ar familh.

### 3.3.4.2.5. Ar sandhi, harz douzh ar c’hemmadur :

Meur a wezh, er juntadur gant ur sandhi galluz, e remerker ne vez ket graet ar c’hemmadur gortozet : KLT **ur vaouez**  $\overset{\curvearrowright}{s}$  **koz(h)**, e-lec’h ma lâr ar W **ur vaouez**  $\overset{\curvearrowright}{z}$  **go(z)h**. Un efed sandhi eo, en deus kaletadur ar **g-** ha roet dezhañ e dres divouezh a-orin. Skwerioù arall : **yezh-pobl** ; **ar wezh kentañ**...

### 3.3.4.3. **Pa vez hepkoret ar stok etre diw gensonenn**

An emgav a zegouezh etre diw vogalenn a c’hell degouezhoud iwe etre diw gensonenn pe ouzhpenn. Meur a wezh, dreist-oll pa vez teir c’hensonenn en emgav, e vez diaez sanañ ha lakaet e vez ur vogalenn er gomz<sup>46</sup> (**Brno** [bərno],

<sup>46</sup> Komzet e vez neuze a bl’*“paragoue”*, sommadur ur fonem e dibenn ur ger, pe ouzhpennañ ur grafem pe sanañ a-newez ur lizherenn vud : « *Sion jusques au ciel...* » (Racine) ; *cueilles-*

**srpski** [sərpski]). E galleg e vez lâret liez *Le Parc-ë-des Princes, Ouest-ë-France, match-ë-nul, fest-ë-noz*<sup>47</sup>, hag e brezhoneg **Sant-ë-Kroaz** (*Sainte-Croix* Gwengamp, FAV), **Pont-ë-Kroaz**<sup>48</sup>, rag diaez e seblant d'an dud sanañ diw gensonenn war-un-dro, ha teir pe peder gwashoc'h c'hoazh, evel er skwerioù amañ [stfr], [tfn], [stn] pe [ntkr]. Ur mod-ober arall zo ewid hepkoriñ an diaezamant-se : chomel heb sanañ lod ag ar c'hensonennoù : **paotr** [pawt] (mez **paotrig** [ˈpawtrik]), **debrñ** [ˈdɛ:bɛɲ], [dibi]...

### 3.3.4.4. Sandhi kensonennel ha yezh skrivet

#### 3.3.4.4.1. Ar sandhi : un tres dizgwel er skridoù :

Un amzer zo bet e veze skrivet ar sandhi kensonennel er yezh skrivet, e W d'an nebeutañ e-lec'h mand eo chomet bew-mat. E dornlevr GUYOT-JOMARD (1867), e yezhadur LE BAYON (1878) hag en un nebeud oberennoù relijiel ag an amzer-se e kaver skwerioù a gement-se : \***discoeit ṭ'ein** (< **diskouezit din**) ; \***laret ṭ'oh** (< **lâred deoc'h**) ; \***é oent toh taul** (< **e oant douzh taol**) ; \***fachet toh-emb** (< **fachet douzhimp**) ; \***prest te monnet** (< **prest da voned**). Tu a vehe bet da verkañ ar fed-yezh-se er skrid, evel ar c'hemmadurioù, na vezent ket skrivet kent an Tad MANER. Mez, e-kontrel diouzh ar c'hemmadurioù, ne vez ket sevenet ar sandhi bepred, nag e peb parlant : setu perag n'eo ket bet dalc'het nag heuliet intrudu ar Wenedourion gant ar brezhoneg a-vremañ.

#### 3.3.4.4.2. Kemmadurioù ha sandhi :

Ewid Alan RAUDE<sup>49</sup> eh eus ur liamm anad etre ar c'hemmadurioù hag ar liammadurioù. An diforc'h etreze zo ar pezh a vez graet gante er skritur : skrivet e vez ar c'hemmadurioù (**ṭad** < **ma ẓad**, **e ḍad**) mez ne vez ket skrivet

---

*en* ; adlakadur dibenn zo er XVIIved kvd : « mouchoi+ṭ », « tiroi+ṭ ». (Sd. lec'had : <http://monsu.desiderio.free.fr/curiosités/paragogue.html>.)

<sup>47</sup> Diw silabenn gentañ an dro *Fest-ë-noz* a son e W evel re **fest-an-hoc'h**.

<sup>48</sup> Ur hipotezenn savet gant A. BOCHÉ : ha ne vehe ket \***Pontig-Kroaz** ar ger-orin ?

<sup>49</sup> RAUDE (1954 ? : 26, oberenn fotokopiet).



ar liammadurioù (sandhi bogalennel pe sandhi kensonennel) : ne vez ket hewel ar re-mañ enta.

Ewitañ ema kemmadurioù deroù-ger ar brezhoneg “fossilizadur” liammadurioù ar c’helteg-kozh. Kozh ha stabil eo ar c’hemmadurioù diabarzh, kemmadurioù istorel int : **magonos** > **mabon** / **abona** > **ayon**. Ar c’hemmadurioù deroù-ger, e-kontrel, (**Brethien** > **Vrethien**) zo kemmadurioù a-vremañ, a verk daou stumm ar memez ger modern.

Neuze e tahe ar c’hemmadurioù dre vlotaad a-vremañ a liammadurioù (sandhi bogalennel, blotauz) ar c’helteg-kozh. Doned a ra ar c’hensonennoù kreñv (hir) P, T, K, M da voud B, D, G, V, nag ar c’hensonennoù dous (berr) B, D, G da voud V, Z, GH. Hag e tahe ar c’hemmadurioù dre c’hwezhañ modern a sandhi kensonennel ar c’helteg-kozh : P > F ; T > TH ; K > CH (mod. **C’h**).

Esplegiñ a ra da skwer ar c’hemmadur dre galetaad a za goude ar raganw-gour L2 **ho** dre ma oa e stumm-kozh **oh** : **oh#bag** > **oh** <sup>^</sup>**pag** (mod. **ho pag**); **oh#gar** > **oh** <sup>^</sup>**kar** (mod. **ho kar**). Goude **eh** (mod. **he**) ema daet ar c’hemmadur dre c’hwezhañ kreñv : **eh fenn**, **eh thad** (mod. **he fenn**, **he zad**) ha goude **oth** (mod. **o/é**, **oc’h/éc’h**) ar c’hemmadur dre c’hwezhañ dous : **oth vewa** sanet “**oth fewa**“ (o “**fewañ**“). Ne vez ket mui sanet an **h** dirag **o** (**ho**) pe **e** (**he**) hiziw er gerioù-se.

#### 3.3.4.5. KLOZADUR

Ewid klozañ e roan amañ taolenn ar fenomenoù a gaver e brezhoneg, herwez ar yezhadur jenerativel (CARTON, 1974 : 67) :

Taolenn ar JUNTAÑ	#B2 (bogalenn)	#K2 (kensonenn)	#KL2 (kens. linkuz)	#HK2 (hantergens.)
<b>1K#</b> (kensonenn)	<i>Kit<sup>ˆ</sup>d eno !</i> <i>Lip<sup>ˆ</sup>b e bav</i> <i>Chañch<sup>ˆ</sup>j</i> <i>unan</i>	1) <i>Ur pod<sup>ˆ</sup>d braz</i> 1) <i>Kit<sup>ˆ</sup>d buan !</i> 2) <i>Komz<sup>ˆ</sup>s kreñv</i> 3) <i>Lâred<sup>ˆ</sup>teoc'h</i> 3) <i>Kit<sup>ˆ</sup>tu-se !</i>	<i>Kit<sup>ˆ</sup>d</i> <i>Ronan !</i> <i>Konk-<sup>ˆ</sup>g Leon</i>	<i>Kit<sup>ˆ</sup>d Yann !</i>
<b>1B#</b> (bogalenn)	<i>Kere<sup>ˆ</sup> Elen</i>	<i>Herve<sup>ˆ</sup> braz</i>	<i>Pa yae<sup>ˆ</sup> Ron</i>	<i>Pa yae<sup>ˆ</sup> Yann</i>
<b>1KL#</b> (kens. Linkuz)	<i>Koll<sup>ˆ</sup>l eno</i>	<i>Koll<sup>ˆ</sup>l bara</i>	<i>koll<sup>ˆ</sup>l Ronan</i>	<i>koll<sup>ˆ</sup>l Yann</i>
<b>1HK#</b> (hantergens.)	<i>Diw<sup>ˆ</sup> q eno</i>	<i>Er c'haw<sup>ˆ</sup> q buan</i>	<i>Diw<sup>ˆ</sup> q rod</i>	<i>Daou<sup>ˆ</sup> q</i> <i>wenn-ui</i>

Taolenn 5. Ar juntadurioù e brezhoneg.

Setu e c'heller lâred kement-mañ :

1. Blotaet e vez ar c'hensonenoù-dibenn **p, t, k, s, ch, f** dirag bogalenn, kensonenn zous b, d, g, z, j, v (sd. 1, kolonenn 3), kensonenn linkuz ha hantergensonenn. Dirag K2 kaled e kaleta 1K dous (2). Meur a wezh e vez kaletaet K2, sandhi kensonennel en troioù-lavar liezimplied (3).
2. Sanet e vez ogozig ataw ar vogalenn-dibenn, ne vern pesort lizherenn a za da heul.
3. Sanet e vez ar c'hensonennoù linkuz ogozig ataw, ne vern pesort lizherenn a za da heul.
4. Sanet e vez an hantergensonennoù ogozig ataw, ne vern pesort lizherenn a za da heul.

Dre ma ne gemm ket netra goude ur vogalenn, goude ur gensonenn linkuz ha goude un hantergensonenn e c'hellomp lâred n'eo ket diforc'huz an troioù-se. Tu a vehe da chom heb menegañ an teir linenn izellañ enta. Goude ur gensonenn-dibenn hebkén (1K#) e c'hell fenomenoù degouezhoud : blotâdur pe kaletâdur.

### 3.4. AR JUNTADUR DIABARZH

Kemeret eo bet ar pleg mad da notiñ bremañ er geriadurioù, ha gant an API, sanadur-patrom (HY, AH) pe sanadurioù testeniekaet (ledan gant FAV 1992) ar gerioù brezhoneg. Ewid an desker perwezh pe aketuz e vo kavet enta ar skeudenn fonetikel ag ar gerioù diaezig da anavoud resiz o sanadur : pa ne gav ket an desker a-vremañ kalz a vrezhonegerion a-vihanig d'henn gourdoniñ d'ar brezhoneg, e rank d'ar benvegoù boud resisoc'h c'hoazh eged a-gent. Nawazh e vo gwelet e vehe tu da lakaad diouzhtu ar vrezhonegerion war hent ar sanadurioù mad, heb treisañ spered ar yezh.

Ar fenomenoù a c'hell degouezhoud e diabarzh ar gerioù, ouzhpenn ar c'hemmadurioù (a vez graet pe ged), zo ar re a zo bet gwelet etre ar gerioù, er juntadurioù diavaez : hiatus, liammadur pe sandhi. Ar blotâdur a vo remerket dirag ar bogalennoù a vo kavet iwe dirag **l, m, n, r**, dirag an hantergensonennoù **y** ha **w** ha dirag an **h**-mud. Mez ar sandhi (s. kensonennel), hag a oa ur fenomen dired etre ar gerioù, a c'hell moned da reolenn en o diabarzh. Setu perag e vo ur soursi-kenteliañ\* gant ar pennad-mañ : roiñ harp d'ar sanadur pe ged ; roiñ harp d'an desker/lenner pe henn leuskel gant ar skrid, pa vo diaez dezhañ marse kavoud ur c'homzer a-vihannig ewid henn henchañ. Setu aze an dalc'h.

Herwez HEMON e arver reolenn ar juntañ e diabarzh ar gerioù iwe (*Grammaire bretonne*, p. 91). Roet en doa KERVELLA ar reolennoù arveret gantañ en e yezhadur ewid ar raggerioù daou zoare d'o skriv, evel **as/az, das/daz, drouk/droug...**

“Lakaet e vez ar gensonenn vouezhiet dirak ur vogalenn (**drougober, ragistor**), hag ar gensonenn zivouezh dirag ur gensonenn zivouez all : **aspediñ, daspreñañ, droukkinnig, rakkeltiek**. Dirak ur gensonenn vouezhiet e reer hini pe hini : **azginivelezh** pe **asginivelezh, azlavarout** pe **aslavarout**.” (1947, ademb. 1976 : 40).

Gwelet e vo petra a dalv ar reolennoù-se er geriadurioù hiziw, ha mard int un harp d'ar sanañ reizh.

Herwez ar pezh lâret uhelloc'h e vo notet ar juntadur diabarzh gant ( + ), ha gant ( \_ ) pa vo ur hiatus.

#### 3.4.1. AR HIATUS DIABARZH (1B+B2)

Evel e galleg (*la\_ïc, a\_érien, pu\_er*) eh eus ag ar hiatus e diabarzh ar gerioù brezhoneg, liez dindan an TM. E meur a zegouezh e kaver ar hiatus. Setu amañ un alberzh a gement-se.

##### 3.4.1.1. Goude ur ragger é achuoud gant ur vogalenn

Kavet e vez un nebeud gerioù é krogñ gant **di-** (n'em eus kavet skwer ebed gant **de-**, **etre-**, **gou-**, **he-**). Da skwer : **di\_eub** ['di:øp] (AH) ; **di\_implij** [di'implif] ; pe gant **etre-** : **etre\_ad** [etreat] (FAV).

##### 3.4.1.2. Goude ur z leoneg diabarzh

Da skwer : **aze(z)et** [aze\_æt] ; **dime(z)et** [dime\_æt] ; **e(z)om** [e\_om] ; **go(z)ed** [go\_æt].

##### 3.4.1.3. Goude un -d- steuziet

E Wum, tre evel an **-d-**dibenn, e fat an **-d-** etrebogalennel : **Badenn** > **Ba'enn** ['ba\_en], ['ba:jen] ; **kadoer** > **ka'oer** ['ka:øer], **sadorn** > **sa'orn** [sa\_orn]. Mez fatadur a vez kavet e rannyezhoù arall iwe : **bloue(d)** (*peloton de fil*) ; **andre(d)ad** (*endroit*) ; **flo(d)ad** (*flotte de... Ku*) (FAV), diabaot ar skwerioù anezhe koulskoude. Ur hiatus a zegouezh neuze e-kreiz ar gerioù. Dre m'ema minorel ar stummoù-se e tiskouez boud anad kelenn ar re glok, an **d** enne (**Badenn, kadoer, flodad...**), ar pezh na vir ket a sinalañ ar stummoù heb **d**, dreist-oll en tachad ma kaver (ma kaved, d'an nebeutañ) an tres-se.

Da zirouestlañ e vehe, war a seblant, an daou goublad e-lec'h ma vez termet etre daou stumm, gant un **d** etrevogalennel pe ged : **gweladenn/gwelaenn** ha

**gwelladenn/gwellaenn.** **Gweladenn** a vehe da ouarn, kentoc'h, er c'houblad kentañ (*entrevue ; revue d'inventaire...*) ha **gwellaenn** (*amélioration*), hennañ diazezet war ar verb **gwellaad** (penrann **gwella** + **enn**).

#### 3.4.1.4. Goude ur -g- steuziet

Un nebeud skwerioù a fatadur ar -g- etre diw vogalenn a gaver er yezh. Da skwer ar pezh a vez kavet ingal e liester an anvioù-tud a achu gant -eg, ha dalc'het er skritur : **beleg** > **beleion** [be'lejɔ̃n] ; **lenneg** > **lenneion** [lenejɔ̃n] ; **marc'heg** > **marc'heion** [mar'hejɔ̃n]. Kement-arall er yezh komzet gant **eged**, a ya da "e'id" [ejt-d] e W.

Mez skwerioù arall a c'heller kavoud da beb an amzer : **bugadenn** ("bu\_adenn" e Eusa). Nawazh ne sinifiont ket ar memez tra : neuze e vehe tu d'o gouarn o daou er yezh kumun gant daou ster dishañval: **bugadenn** *petite lessive* ha **buadenn** *cuisson à la vapeur* (FAV).

Fatadur ar g-orin iwe a vez kavet e \***fiez** (RH, AH, [fi\_ɛs] HY) da skwer, ar g-se bet dalc'het e W : **figez**<sup>50</sup> (< fr. *figues*). Memestra en anw-lec'h **Begar** (**Begard**) > **Bear** "Be\_ar"<sup>51</sup>.

#### 3.4.1.5. Goude v pe w steuziet

Meur a wezh e kouezh ar v pe an w etrebogalennel er yezh komzet, da skwer er gerioù **iwe**, a ya da **i'e** [i\_e], ['ije] (KT) hag **ewid** (> e'id)<sup>52</sup>.

Un nebeud gerioù bet skrivet gant ur hiatus enne pe un hantergenonenn (e Peurunvan-41 da skwer) a vez kavet gant o stummoù hir e kornadoù zo ag ar brezhonegva. Setu amañ un nebeud anezhe :

- RH \***diouer** (sanet [diw:ɛr] pe [di'u:ɛr] herwez AH) > W \***diover**. Standard : **diouwer** [di'u:ver].

<sup>50</sup> Sañset e skriver ar gerioù brezhoneg en o stummoù ledannañ : **figez** ar stumm standard enta.

<sup>51</sup> Erwan VALLERIE, *Diazezoù studi istorel an anvioù-parrez, Corpus*, An Here, 1995, p. 22.

<sup>52</sup> Kennig a ra A. BOCHÉ notañ un diforc'h dre skrid er stummoù berraet, pa vehe dober anezhe : skriv "**e'id**" ewid **eged** ha "**wid**" ewid **ewid**.

- RH \***eon** (FAV [ewn] da lâred eo evel ar ger **evn** ; AH [ɛ̃<sup>o</sup>n]), > W (ha standard) **ewon** ['ewon] (kmg *ewyn*).
- RH \***gouer** (FAV [guɛr], ['guvɛr], [guver]) > W \***gover** (al. En Aradon : *rue du goverich*). Standard : **gouver** ['gu:ver].

Er c'hontrel eh eus gerioù skrivet en o stummoù hir gant **v** pe **w** hag a vez sanet hebte e lec'hioù zo : **awel** (**avel**) sanet \***a\_el** (≠ **ael** *ange*).

### 3.4.1.6. Gant lostgerioù é krogiñ gant ur vogalenn

An darn vuiañ ag ar lostgerioù a grog gant ur vogalenn. P'en em gavont staget douzh gerioù éc'h achuoud gant ur vogalenn e sav ar hiatus. Da skwer : **kerse\_üz**, **fazi\_añ**, **goullou\_adur**, **gwennili\_enn**.

### 3.4.1.7. Hiatus vs diftoñgenn

**ali\_où** [a'li:u], **a\_ortenn** [aorten] (AH), **bambou\_eg** [bãm'bu:ek], **bara\_er** [ba'ra:er], **bro\_âd** ['bro:at], **deltu\_ekaad** [delye'ka:t], **dî\_aez** ['di:es], **dî\_enn** ['di:en] (AH), **e\_al** ['e:al] (AH), **e\_ürusted** [ɛy'rystet] (AH), **go\_âdur** [go'a:dyr], **gwele\_ad** [gwe'le:at], **kaoze\_al** [ko'ze:al] (AH), **kerse\_enn** [kɛr'se:en] (AH), **li\_en** ['li:en] (AH), **li\_ez** ['li:es] (AH), **studi\_añ** [sty'di:ã], **trede\_og/trede\_eg** [tre'de:ɔk/-ek].

Liesoc'h c'hoazh eh a an diw vogalenn a-stok da ziftoñgenn (**gaou** ['gɔ<sup>u</sup>] (AH), **geot** [gɛ<sup>o</sup>t] (AH), **kaol** ['kawl] (FAV), **kleiz** ['klɛ<sup>i</sup>(s)] (AH), **koad** ['kɔ<sup>a</sup>:t] (AH), **poent** [p<sup>o</sup>ɛnt] (AH)... petramant e steuz ur vogalenn : **aez** ['ɛ:s] (AH), **sae** ['sɛ:] (AH), **kaol** ['ko:l] (AH), mez pas ataw : ['kawl]<sup>53</sup>...

Gant an newezvrezhonegerion e vez klewet meur a wezh un diftoñgenn e-lec'h diw silabenn, da skwer **diaez** evel ar galleg *dièze*, **studioù** ogozig evel *studio* (levezon ar galleg marse aze iwe)<sup>54</sup>. Mez kavet e vez iwe sanadurioù dishañval etre KLT ha W, a-gaoz d'an TM hengounel, ar pezh a vez skeudennaouet gant

<sup>53</sup> E Langidig e vez graet an diforc'h etre **kaol** ['kawl] ha **kol** ['ko:l] (= **peg**, ag ar galleg *colle*).

<sup>54</sup> Un harp a vehe skriv un ( " ) war an -i aze : **alioù**, **studioù**, **kïez**... Sd. KERVILLA : **douarouriezh**, **sklaerien**, **mision**, **prosesion**... (1976 : 442-443).

un diw silabenn e KLT pa ne gaver namaed unan e W : **douar** [ˈdu:ar] pe [ˈdwa:r] ; **Doue** [ˈdu:e] pe [ˈdwe] ; **toenn** [ˈto:ɛn] pe [twɛn].

Ur gudenn a c'hell sevel aze : mar n'eo ket kudenn an etrekomprenadur ([ˈdwa:r / ˈdu-ar]), e c'hell boud heni ar c'henurzhierzh a vez rekiz kaoud en ur laz-kanañ, da skwer. Ar pezh a c'hell boud libr er yezh-pemdez a c'houlen emglew e degouezhoù zo : en ur laz-kanañ, en ur c'hor, e tegaso ar frankiz diston, ar pezh a ranko boud plaennaet gant ar penn-kor, en ur mod bennag !<sup>55</sup>

#### 3.4.1.8. Hiatus e topolektoù zo

Gerioù zo, ha hiatus diabarh ebed enne er yezh standard, o deus un eilstumm ur hiatus ennañ e rannyezhoù zo. Fatadur ur gensonenn pe un hantergensonenn bennag a zo kaoz a gement-se : **d, g, v** pe **w** peurvuiañ.

#### 3.4.1.9. Klozadur

Ne sav diaezamant ebed e kelenn nag e deskiñ ar brezhoneg gant seveniñ ar hiatus. Mar kaver ur gudenn bennag e vehe en dibab d'ober er skol etre ar stummoù standard hag ar stummoù lec'hel : **Badenn/\*Ba'ienn, kadoer/\*ka'oer, glaw/\*glo, ma zad eo/ma \*za'eo...** Anad eo e ranker favorekaad kentoc'h ar stummoù standard.

N'hellimp ket lâred kement-se gant ar pezh a zegouezh p'en em gav ur gensonenn er juntadur, a-stok gant un elfenn arall, e harz ur morfem bennag gant ur penngef. Meur a wezh ne sav diaezamant ebed a-fed lenn ha sanañ.

Meur a wezh, geo. Amañ e vo gwelet pouezusted ar skrid en diskodañ.

---

<sup>55</sup> Da skwer er c'hantik "**Peh trouz zo war an douar** ", ur silabenn aze er ger **douar** e W... (Sd. Levrenn 1, § 2.2.5.4.3., pp. 164-166).

### 3.4.2. JUNTADUR DIABARZH HEB KUDENN SANAÑ EBED

#### 3.4.2.1. Juntadur diabarzh fonografeg gant ur vogalenn (B)

Gwelet hon eus ar hiatus uhelloc'h (1B+B2), na sav kudenn-sanañ ebed gantañ. N'eus diaezamant-sanañ ebed naket ewid ar juntadur 1B+K2 nag ewid ar juntadurioù enne un hantergensonenn (1HK+B2), evel eh an d'henn diskoueziñ bremañ :

##### 3.4.2.1.1. 1B+K2 :

Pa achu an elfenn gentañ gant ur vogalenn ne sav problem sanadur ebed, ha pa vehe an elfenn-se ragger, penngef, pe lostger.

Skwerioù : **bro+garour**, **de+gemer**, **de+redeg**, **di+stankañ**, **di+wall**, **etre+karg**, **he+lavar**, **gou+boazh**, **tri+ved**, **tro+droc'hañ**...

##### 3.4.2.1.2. 1HK+B2 :

Hañval an traoù pa vez un hantergensonenn a-stok gant ur vogalenn.

Skwerioù : **daou+ad** ['dawat], **daou+arn** ['dawarn], **diw+arzh** ['diwars], **diw+askell** [di'waskel]...

#### 3.4.2.2. Juntadur diabarzh gant un hantergensonenn (HK)

Ne sav problem sanadur ebed naket er juntadurioù diabarzh, o frammoù 1HK+K2 pe 1HK+HK2.

##### 3.4.2.2.1. 1HK+K2 :

Skwerioù : **daou+farzh** ['dawfars], **daou+vizieg** [daw'vi:zjek], **daou+zeg** ['dawzek], **diw+silabenn** [diɥsi'la:ben], **diw+vogalenn** [diɥvo'ga:len], **diw+vrec'h** ['diɥvrex],...

##### 3.4.2.2.2. 1HK+HK2 :

Skwerioù : **daou+wenneg**, **diw+yezh**, **diw+wern**... Pa vez remerket ur gudenn amañ e ta peurliesañ ag an diaezamant da zistagañ ar soniad [ɥ] en elfenn **diw-**,



gant an newezvrezhonegerion. Ar pezh a vez remerket re liez er ger **diwyezheg** sanet “\*di’yezheg“ ha zokén “di’yek”. Gwell e vehe kennig d’ar skolidi tremen marse da gentañ dre ar stumm [div’jezek]/[div’jehek], kuit a sanañ un dra direizh : n’eo ket ag an **di-yezh** a gomzomp amañ mez ag an **diw-yezh** !

### 3.4.3. JUNTADURIOÙ DIABARZH KUDENNEG

#### 3.4.2.2. Juntadur diabarzh K+B (bogalenn pe h-mud pe lmnr pe y ha w)

N’eo ket ken splann an traoù gant 1K+B2, 1K+KL2, 1K+HK2, e-lec’h ma savo diaezamantoù-lenn. Ur wir gudenn zo amañ, na oa ket bet dirouestlet gant ar Peurunvan-41, ur gudenn a denn douzh ar liamm anad etre doare-skriv ha sanadur. Gwiwoc’h eo ar gudenn-se e geriadur R. HEMON, rag ne gaver ket ennañ an notadurioù fonetikel a vez kavet bremañ er geriadurioù newez (FAV, HY, AH), hag a c’hell roiñ ar sanadur mad d’ar lennerion kustum d’an API, daoust ma n’eo ket un dra anad d’an oll nawazh, zokén e-mesk ar skoliataerion nad int ket rac’h duac’h d’ar c’hod-fonetik.

##### 3.4.2.2.1. Juntadur diabarzh 1K+B2 (bogalenn) :

Renablet em eus amañ un nebeud skwerioù e Peurunvan tennet a c’heriadur HEMON ha merket ar fonetik tennet a c’heriadurioù HY pe AH. Sinalet em eus gant ( \* ) ar gerioù e-lec’h ma kaver ur gudenn ewid lenn. Edan “Remerkoù“ em eus lakaet, pa vezent kavet, ha pa vez heverk o doare-skriv, ar gerioù tennet a FAV, FAV.2 ha GARN.

Peurunvan-1941 Geriadur R. HEMON	Fonetik API Geriadurioù HY pe AH	Remerkoù
<b>diz+ingal</b>	[di'zɪŋgal] (AH)	<b>dizingal</b> (FAV.2)
<b>diz+ober</b>	[di'zo:ber] (AH)	<b>dizober</b> (FAV.2)
<b>*is+emskiant</b>	∅ (HY, AH)	[i'zɛmskjãnt] (jclr)
<b>*is+ofiser</b>	[,izɔ'fisɛr] (HY)	<b>isofiser</b> [izɔ'fisɛr] (FAV.2) <b>iz-ofiser</b> (GARN)

<b>droug+avel</b>	[dru'gɑ w: ɛl] (AH)	<b>drougavel</b> (FAV.2)
<b>droug+implijout</b>	[drugim'pli :ʒut] (AH)	« Kavet e vez <b>droug-</b> dirak ur vogalenn » (AH, p.341).
<b>droug+ober</b>	[dru'gɔ :bɛr] (HY)	<b>drougober</b> (FAV.2)
<b>*drouk+anv</b>	∅ (HY, AH)	<b>drouganw</b> (FAV)[dru'gɑnw] <b>drouganv</b> (-iñ) (FAV.2)
<b>{*kent+ac'hoez}</b>	∅ (HY, AH)	<b>kendahe(z)</b> (FAV.2) [kɛn'dæ] [cɛndahwɛ]
<b>*krak+aotrou</b>	[kra'gɔtru] (AH)	<b>krak-aotrou</b> (FAV) <b>krag-aotrou</b> (GARN)
<b>les+anv</b>	[lɛ'sɑnw] (HY) [lɛ'sɑ: no] (AH)	<b>lesano</b> (GARN) <b>les(h)anw</b> (FAV) <b>lesanv</b> (FAV.2) [lɛ'sɑnw]
<b>*lies+adur</b>	[liɛ'ʒɑ:dyr] (AH)	<b>liezadur</b> [liɛ'ʒɑ:dyr] (FAV.2)
<b>*lies+ek</b>	« S.o. <b>liezek</b> » (AH). [liɛ'zɛ:ek] (AH)	<b>liezeg</b> (FAV.2)
<b>neb+aon !</b>	[nɛ'hɑ̃ <sup>o</sup> n] (AH)	<b>nebaon !</b> (FAV)
<b>rag+istor</b>	[ra'gɪstɔr] (AH)	<b>ragistor</b> (FAV.2)
<b>treuz+atlantek</b>	∅ (HY, AH)	[trøzɑt'lɑntɛk] (jclr)

**Taolenn 6. Juntadur diabarzh 1K+B2 (skwerioù).**

Remerket e vez daou rummad gerioù : ar re o skritur fonografeg hag ar re a ziskouez un diaezamant enne a-fed lenn. Tu zo d'en em c'houlenn perag leuskel diaezamantoù a-sort gant **\*isemskiant**, **\*isofiser**, **\*isurzhañ** pa vezont da vout sanet gant [iz-] dirag ur vogalenn, ha pa vez kavet an **iz-se** er ger **izel**, memez orin dezhañ. **Is**, anv-gwan, adverb hag araogenn e-raog boud ragger (FAV) a gaver daou sanadur dezhañ : [is] pe [i :s], ar stumm diwezhañ-mañ é jaojiñ gant ar stumm **iz-**. Da geñveriañ e vehe gant an daou adstumm ouzhpenn a vez kavet d'ur ragger arall, ar ragger **di-** : (**digoust**), mez gwezh **dis-** (**diskarg**) ha gwezh **diz-** (**dizober**), herwez ar lizherenn a za d'o heul. Kennigskriv : **izemskiant**, **izofiser**, **isurzhañ**...

Perag skriv **\*krakaotrou** a zo da sanañ « kragaotrou » ? Diw feson zo aze d'ober : pe skriv **kragaotrou**, da heul **drougavel**, **drougimplij**, **drougober**, ha **ragenez**, **ragistor** ; pe skriv evel ma ra FAV **krak-aotrou**, a zo ur mod arall d'ober, a c'houlenn nawazh ma anavezo ar lenner reolennoù ar liammañ e

brezhoneg (evel ewid ar gerioù **Konk-Leon, Stank-an-Ter...**). Ha direizh eo selled douzh an elfenn **krak-** evel douzh ur ragger, tre evel **droug-, liez-...** ?

Un araokâdenn zo bet graet gant AH a guzulia **liezek** kentoc'h eged stumm \***lieşek** R. HEMON (**liezeg** gant FAV.2). A-hend-arall eh eus ur gudenn gant ar ger **liesadur**, sanet pe da sanañ [lie'sa:dyr] herwez AH ha [lie'za:dyr] herwez FAV. Herwez reolenn an diveradur ema **liez** ar stumm standard (**aliezig**). Gouied a raomp e c'heller kaoud ar verb **liesaad** (gant ar lostger kaletauz **-(h)aad**) ha d'e heul an diverad **liesadur** (a vehe gwell skriv **liesâdur**, herwez kennig A. BOCHÉ). Diouzh an tu arall iwe, par da **liesaad**, eh eus tu da gaoud ar verb \***liezañ**, hag an diverad **liezadur** (Sd. **gwannaad/gwanañ** ; **paotaad/paotañ** ha dreist-oll **glasaad/glazañ** a zegas d'o heul **glasâdur** (*verdissement*) ha **glazadur** (*verdure*)). Na boud ne gaver ket **liezañ** er geriadurioù ne vehe ket ur fari-yezh kaoud neuze ur stumm **liezadur** (degemeret e FAV.2).

A-hend-arall eh eus un direizhter er ger **lesanv**, a vez sanet gant un [s] en despet d'ar vogalenn a za d'e heul : levezon un **h-** er ger (**h)anw** (sd. FAV, C. **leshanu** < **hanu**), un **h** a vez klewet e topoloektoù zo (W da skwer : **ma hanw** [mə'hã] Langidig). E kembraeg e vez kavet an daou stumm skrivet : **enw&henw** > **llysenw** ; e kernoweg **hanow**. Ne vehe ket an **h-**se etimologel (< kelteg **an-men**, DESH)<sup>56</sup>. Kavet e vez ar c'haletâdur en ur ger arall : **kentanv** (< **kent+(h)anv**) [kēn'tā:no] (AH). Mez ar stumm dre **-d-** a vez kavet er geriadurioù ewid an diverad **adanv** (**adanv** RH, FAV.2 ; **adano** GARN, **adanw** FAV [a'dānw] ; kmg **adenw**) ha **raganv** a vez roet gant an oll c'heriadurioù. Amañ neuze he deus ar yezh diw feson d'ober : pe ober gant ar stumm **-anw**, pe gant ar stumm **-hanw**. Evel-se ema, mez n'eus rezon ebed da skriv \***droukanv** mard eo ar ger da vout sanet [dru'gānw] ! **Kennig** : ha ne vehe ket gwell gouarn amañ **droukanw** ( pe **droukanv**), evel mand eo bet dalc'het **lesanw/lesanv** ? Un direizhter a c'heller gwiriekad gant an etimologiezh.

---

<sup>56</sup> Hervez KERVELLA (*YBAB* : 36), “ lezenn ar c'haletaat he deus roet tu da spisaat orin gerioù a zo : evelse skrivañ ha distagañ **lesanv**, **lesenvel** gant **s** kaled a verk e vefe gwelloc'h skrivañ **hanv**, **henvel**, **leshanv**, **leshenvel**.” Ar pezh a oa bet graet ged FAV (1992) : **hanw**.

Blotâdur c'hoazh, heni an **-t**, a vez gwelet er skritur er ger **kent+ahe(z)** / **kent+ac'ho(z)** (sd. RH **ec'hoaz**), sanet [tʃenda:hwe] e W (Langidig), [ken'daε] er Vro-Vigoudenn ha skrivet **kendahe(z)** gant FAV, tre evel ma tegouezh iwe en troioù bet meneget gant KERVELLA, a-sort gant **\*kement-all**, skrivet **kemend-all** pe **\*a-hent-all** skrivet **a-hend-all** (RH, GARN, FAV, HY, AH) dre soursi fonografeg. Perag chomel hanter-hent nawazh, ha skriv **\*kent+arouez** (RH) e-lec'h **kendarouez**, **\*kent+ouiziegezh** (RH) e-lec'h **kendouiegezh** ? Krediñ e ouio an deskerion dielfenniñ diouzhtu ar gerioù-se, p'o c'havint (daoust pegen dibaot e vez ar gerioù-se er skridoù !), ha da heul seveniñ ar liammadur deread er juntadurioù diabarzh-se, setu aze un hipotezenn diasur d'an nebeutañ...

#### 3.4.2.2.2. Juntadurioù diabarzh 1K dirag **h** mud :

N'eo ket afer an **h** aez da zirouestlañ : e kornadoù zo e vez sanet evel ur gensonenn, e kornadoù zo e vez mud. Gwell e vehe deskiñ sanañ an **h**, evel ma kennig AH, ar pleg degemeret war a seblant gant Ofis ar Brezhoneg a laka da skriv **kroashent**, an **s** é verkañ levezon kaletauz an **h** war ar **z**. War ar batrom-se e vehe kempouell neuze chañch mod da skriv gerioù zo (ar pezh a vo gwelet er § 3.4.3.3. p. 337). Neuze e chom nebeud-tre a c'herioù gant un **h** mud, dreist-oll e gerioù gouest da voned da eil elfenn gerioù kevrenneg : gant an dibab-se n'em eus kavet skwer ebed.

#### 3.4.2.2.3. Juntadur diabarzh 1K+KL2 (**l, m, n, r**) :

Dirag KL2 (**l, m, n, r**) e vez blotaet ar gensonenn e brezhoneg<sup>57</sup>. Tu a vehe da c'hortoz an hevelep mod-ober neuze evel dirag B2. En daolenn-mañ e welimp n'eo ket anad an traoù.

---

<sup>57</sup> Ar pezh a zegas sanadurioù hañval e galleg Bretoned zo : *nettement* sanet [nedmã] (sinalet gant Camille Ollivier).

Peurunvan-1941 Geriadur R. HEMON	Geriadurioù HY pe AH Fonetik API	Remerkoù
<b>dis+leal</b>	[diʒ'leal] (HY)	<b>disleal</b> (GARN) [diʒ'leal] (FAV.2)
<b>dis+megañs</b>	[diʒ'me:gās] (HY)	<b>dismegañs</b> (GARN) [diʒ'me:gās] (FAV.2)
<b>dis+neuz</b>	[ 'diʒnœs] (HY) [ 'diʒnø(s)] (AH)	<b>disneuz</b> (GARN) <b>disneuz</b> [diʒnø(s)] (FAV)
<b>dis+rann</b>	[diʒrān] (AH)	<b>disrann</b> (GARN) <b>disrann</b> [diʒrān] (FAV.2)
[dreklakaet] Ø	[drekla'ka <sup>ε</sup> t] (AH)	mez <b>raklakaet</b> notet [ragla'ka <sup>ε</sup> t] (AH)
<b>*drouk+laouen</b>	[drug'lowen] (HY)	<b>drouglaouen</b> (FAV)
<b>*drouk+lavar</b>	[drug'la :var] (AH)	<b>drouglavar</b> (FAV) <b>drouklavar</b> (FAV.2)
<b>*drouk+rañs</b>	<b>droukrañs</b> [ 'drukrās] (AH) <b>droukrañs</b> [drugrās] (HY)	<b>drougrañs</b> (FAV) mez <b>droukrañs</b> (FAV.2) [drugrās]
<b>*enep+raktres</b>	Ø (HY, AH)	[ene <sup>h</sup> 'ragtres] (jclr)
<b>*enep+relijiel</b>	Ø (HY, AH)	[,ene <sup>h</sup> brø'li:ʒjel] (jclr)
<b>*hepmuiken</b>	<b>hepmuiken</b> [hepmu <sup>i</sup> 'kē:n] (AH)	<b>hebmuiken</b> (FAV) <b>hepmui(ken)</b> (FAV.2) [he <sup>b</sup> 'mu <sup>i</sup> ]
<b>is+lavarenn</b> <b>islonk</b>	[izla'va:ren] (AH) [ 'izlɔŋk] (AH) *[ 'izlɔŋk] (HY)	<b>islavarenn</b> [izla'va:ren] FAV <b>islonk</b> [ 'izlɔŋk] (FAV, GARN)
<b>*is+modoù</b>	Ø (HY, AH)	<b>ismodoù</b> [iz' mo:du] (FAV)
<b>is+rener</b>	<b>isrener</b> [iz' rē:ner] (AH)	<b>isrener</b> [iz' re:nər] (FAV.2) <b>iz-rener</b> (GARN)
<b>*is+ruz</b>	<b>isruz</b> [ 'izry(s)] (AH)	<b>isruz</b> (FAV.2)
<b>*kent+lavar</b>	Ø (HY, AH)	<b>kentlavar</b> *[ken'tlavar] (FAV.2)
<b>krag+raden</b> (ø RH) (Y.Drezen /FAV)	Ø (HY, AH)	<b>krak-raden</b> (FAV) [krag'ra:den] (jclr) sd. <b>krouglasa</b> (GARN)
<b>*lies+liv</b>	<b>liesliv</b> [li'εzliw] (HY) <b>liesliv</b> [li'εzliw] (AH)	Ne ro ket FAV ar fonetik. [li'εzliw] (jclr)
<b>*lies+rann</b>	Ø (HY, AH)	Ø (FAV)

<b>neb+lec'h</b>	<b>neblec'h</b> [ne'blɛ:x] (HY)	<b>neblec'h</b> (FAV + FAV.2) [ne'blɛx]
<b>*nep+reizh</b>	∅ (HY, AH)	<b>nebreizh</b> (FAV) <b>nepreizh</b> (FAV.2) [ne'brejs]
<b>*rak+lavar</b>	∅ (HY, AH)	<b>raglavar</b> (GARN, FAV) [rag'la:var] (FAV) <b>raklavar</b> (FAV.2)
<b>*rak+reder</b>	∅ (HY, AH)	Sd. <b>ragretred</b> (FAV) [rag're:trət]
<b>treuz+lec'hiañ</b>	<b>treuzlec'hiañ</b> [trøz'leɥjã] (HY)	Ne ro ket FAV.2 ar ger-se, mez roiñ a ra <b>treuzlatiñ</b> [trøz'latiɲ]

**Taolenn 7. Juntadur diabarzh 1K+KL2 (skwerioù).**

Dre he notadur fonetikel e tiskouez an daolenn dimp e vez mouezhiet 1K (kensonennoù keñvereg) dirag **l**, **m**, **n**, **r**. Un dizemglew nawazh a gaver dirag **l** (**\*liesliv**), **m** (**\*hepmuiken**) ha **n** (**\*disneuz**) e geriadur AH, a ro [li'ɛsliw], [hepmɥi'kɛ:n] ha [diɣnø(s)] e-lec'h ma not HY ar sanadur gortozet [li'ɛzliw] ha [diɣnɔs] pe [diɣnø], [heb'mɥi] (FAV.2)... mez [iɣlɔŋk] (HY) ha [iɣlɔŋk] (AH) skrivet **islonk** ! Uioù-koukou pe farioù ? Da soñjal n'eo ket anavezet-mat ar reolenn gant lod ag ar saverion geriadurioù, alese marse notadurioù digempouell evel [**\*dre**kla'ka<sup>ɛ</sup>t] (**\*dreklakaet**), sanadur direizh, da geñveriañ douzh [ragla'ka<sup>ɛ</sup>t] (**\*raklakaet**), sanadur reizh (AH) : skriv **dreglakaet** ha **raglakaet** a lakahe diouzhtu ar lenner war hent ar sanadur reizh.

Dizemglew zo iwe ewid sanadur ha skritur ar ger **droukrañs** [ˈdrukrãs] (AH), [ˈdrugrãs] (HY), skrivet **drougrañs** er Skolveureg hag en Etrerannyezhel ([drugrãs] FAV), ...mez **droukrañs** en-dro e FAV.2<sup>58</sup>.

<sup>58</sup> Herwez DESHAYES e ta ar ger a **droug** + **rañs** (< fr. *race*). **Drougrañs** *b malveillance* ; **drougrañsus** *ag malveillant*. Ha ne vehe ket kentoc'h ar furm simplec'h **drougañs**, dle. **droug+añs**, a zo trawalc'h ewid roiñ da gompren ar ster (ar pezh a zo diaesoc'h gant **drougrañs** (ha displijuz da sanañ gant **droukrañs**) ? (Sd. **dismegañs**, **nec'hañs**...).

Hañval tra amañ : perag skriv **neblec'h, treuzlec'hiañ**, a zo fonografeg, ha derc'hel da stummoù trubuilhuz evel **\*disleal, \*disrann, \*drouklaouen, \*enepmennad, \*enepreizh, \*hepmuiken, \*isletanant, \*nepliv, \*nepreizh, \*raklavar** ? Dirag **l** e vlota an **s** e brezhoneg, zokén er gerioù estren : **Islam** notet [ˈizlam], **Israel** notet [izˈraɛl] (FAV), pa chom kaled e galleg : [iʒlam], [iʒraɛl] (PR). Perag na heuliañ skwer Youen Drezen, a skrive **kragraden** pe heni GARN a gennig **drouglaza** (= **drouglazhañ**), ha skriv neuze **dizleal, dizrann, drouglaouen, enebmennad, enebreizh, hepmuiken, izletanant, izlinennañ, izlonk, kendlavar, kendredi, nebreizh, raglavar**... ?

Rag penaoz e c'hell ar lenner nad eo ket duac'h d'ar brezhoneg a-vihanig (dle. an darn vuiañ anezhe hiziv-an-deiz), gouied e-menn ema ar juntadur diabarzh, mard eus unan, e gerioù a-sort gant **\*raklavar, rakler, \*raklun, \*rakteur, rakled, raklenn, raklenner** ? Ha ne vehe ket kalz simploc'h (heb droug ebed d'ar yezh, namaed ur muioc'h a sklaereded !) skriv **raglun, rakteur**, abalamour da **rag+lun, rag+leur** e-tal **rakled, rakler, raklenn** ha **raklenner**, ur gwir soniad [kl] er rummad diwezhañ-mañ (pennrann **rakl-**)<sup>59</sup> ? Ha pelloc'h **eneblavar**, evel **enebrann, enebragtres, enebreizh** (**eneb+reizh**, ha n'eo ket **\*ene+Breizh** pe **\*ene+preizh** herwez skritur RH **\*enepreizh** !)...

#### 3.4.2.2.4. Juntadur diabarzh 1K+HK2 (w ha y) :

Gweled a rin amañ ar juntadurioù 1K+HK2 ha 1HK+HK2, e-lec'h ma kaver iwe displannderioù e-keñver ar c'hod fonografek. Blotaet e vez ar gensonenn 1K er c'homz dirag an hantergensonennoù **w** ha **y**, ar pezh na vez ket diskouezet gant ar skritur ataw, zokén an notadur fonetikel :

<sup>59</sup> Gwell e vehe aze ober un diforc'h etre **raklenner** (= **randoner, ravoder**) [raˈklener] ha **raglenner** (an heni a lenn kent un arall) [ragˈlener].

Peurunvan-1941 Geriadur R. HEMON	Geriadurioù HY pe AH Fonetik API	Remerkoù
<b>dir+iaou</b>	<b>diriaou</b> [di'ʀjɔw] (HY)	<b>diryaou</b> > <b>diriaou</b> (FAV, FAV.2)
<b>*dis+wriat</b>	*[di'ʃwriat] (HY)	<b>disw-</b> > <b>dis(g)w-</b> (FAV, FAV.2) <b>disgwri</b> ['dizgwri] [dizwri]
<b>*drouk+wiskañ</b>	*[dru'kwiskā] (HY)	<b>drougwiska</b> (GARN) <b>drougwiskañ</b> (FAV) <b>droukwiskañ</b> (FAV.2) [drug'wiskā]
<b>*enepyec'hed</b>	∅ (HY, AH)	∅ (FAV)
<b>*enepyuzev</b>	∅ (HY, AH)	<b>eneb-yuzew</b> (FAV)
<b>glaz+wenn</b>	∅ (HY, AH)	<b>glaswenn</b> ['glazwen] (FAV) <b>glazwenn</b> (FAV.2...mar behe e-barzh)
<b>Ker+Yann...</b>	∅ (HY, AH)	Sd. " <b>Kampus Keryann</b> " (panell e Roazon II)
<b>*lies&gt;wreg</b>	∅ (HY, AH)	[liezwrek] (jclr)
<b>*lies+yezh</b>	∅ (HY, AH)	[liez'jɛx] [liez'je:s] (jclr)
<b>*rak+welet vb</b>	[rag'wɛ:let] (HY) [ra'gwɛ:let] (AH)	<b>ragweled</b> (FAV) [ra'gwɛ:lət] (FAV) <b>rakwelet</b> (FAV.2)
<b>treuz+wiskañ</b>	[trøz'wiskā] (HY)	<b>treuswiskañ</b> (FAV) <b>treuzwiskañ</b> (FAV.2)

**Taolenn 8. Juntadur diabarzh 1K+HK2 (skwerioù).**

Ur fari kredabl zo bet e skritur fonetikel **droukwiskañ** gant HY [\*dru'kwiskā], pa verk ar geriadur-se ataw ar blotâdur dirag **w** (sd. **rakwelet** [rag'wɛ:let]). Mez ar memez diaezamantoù amañ a gaver c'hoazh er gerioù merket gant un (\*) en daolenn, abalamour ma chom ar gensonenn galed merket er skrid, pa vez (pa vehe da voud) blotaet er c'homz, evel er ger **treuzwiskañ**. Kennig-skriv : **drougwiskañ**, **enebyezh**, **enebyudew**, **liezwreg**, **liezyezh**, **ragweled**,...



### 3.4.3. JUNTADUR DIABARZH GANT 1K+K2-dous

Sellomp bremañ douzh ar sanadur a zegouezh pa dalv K2 **b, d, g, z, j** pe **v**.

#### 3.4.3.1. Taolenn

Peurunvan-1941 Geriadur R. HEMON	Fonetik API Geriadurioù HY pe AH	Remerkoù
<b>*dis+glavenn</b>	[di <u>z</u> 'gla:vɛn] (HY)	sd. <b>disglavier</b> (GARN)
<b>*krak+vevañ,</b>	[krag' <u>v</u> e:vã] (HY) [kra' <u>g</u> yew:ã] (AH)	<b>krak-vevañ</b> (FAV) <b>krak-vevañ</b> (FAV.2)
<b>*krak+vezv,</b>	[ <u>'</u> krag <u>v</u> ew] (AH)	<b>krak-vezv</b> (FAV)
<b>krak+vouc'h</b>	∅ (HY, AH)	<b>krak-vouc'h</b> (FAV) [ <u>'</u> kra:gvux] (jclr)
<b>*lies+doare</b>	[,liez' <u>d</u> 'are] (AH)	<b>liesdoare</b> (FAV <sup>60</sup> /FAV.2) <b>liezdoare</b> (GARN)
<b>{*rak+dant}</b>	<b>*rakedant</b> (AH) [rak <u>t</u> ãnt] [rag <u>d</u> ãnt]	<b>ragdant</b> (FAV) [ <u>'</u> ragdãnt] <b>rakdant</b> (FAV.2)
<b>*rak+ger</b>	[ <u>'</u> ra <u>k</u> er] (HY) [ <u>'</u> ra <u>k</u> :er] (AH)	<b>rakger</b> [ <u>'</u> ra <u>k</u> er], [rak' <u>g</u> er] (FAV/FAV.2)
<b>*rak+varn</b>	∅ (HY, AH)	<b>ragvarn</b> (FAV, GARN) <b>rakvarn</b> (FAV.2) [ragvarn]
<b>*rak+verb</b>	∅ (HY, AH)	<b>ragverb</b> (FAV, GARN) <b>rakverb</b> (FAV.2) [ <u>'</u> ragverb]
<b>treuz+vevañ</b>	[trø <u>z</u> 'vew :ã] (AH)	<b>treusveviñ</b> (FAV <sup>61</sup> ) <b>treuzveviñ</b> (FAV.2)

Taolenn 9. Juntadur diabarzh 1K+K2 dous (skwerioù).

#### 3.4.3.2. Skritur ha sanadur

##### 3.4.3.2.1. Juntadur 1K-dous+K2-dous :

P'en em gav er skritur 1K-dous dirag K2-dous ne sav diaezamant-sanañ ebed.

Da skwer er gerioù (RH) **kragvouc'h**<sup>62</sup> ([**krak+bouc'h**] > [gv] ha **treuzvevañ**

<sup>60</sup> Er geriadur FAV, skrivet en Etrerannyezhel, e talv an -s dibenn kement hag un -s dous, da lâred eo ur [z], etre diw vogalenn, dirag **l, m, n, r**, dirag an hantergensonennoù ha dirag kensonennoù mouezhiet.

<sup>61</sup> Sd. notenn 217.

<sup>62</sup> Ewid **kragvouc'h**, selloud ouzhpenn douzh § 34322 da heul.

[**treuz+bevañ**] > [zv]) ez eo sklaer ar liamm etre ar pezh a vez skrivet hag ar pezh a vez da sanañ.

#### 3.4.3.2.2. Juntadur 1K-kaled+K2-dous :

Ha p'en em gav er skritur 1K-kaled dirag K2-dous ne sav diaezamant ebed naket<sup>63</sup> : **disglavenn** [zg], **liesdoare** [zd], **rakvarn** [gv], **rakverb** [gv]. C'hoari a ra aze an heñvellaad àr-gil a laka kensonenn gentañ ar stroll (1K-kaled) d'en em liwañ gant tres-mouezh an eil kensonenn (K2-dous). Lakaad a ray an ekonomiezh-yezh da sanañ diw gensonenn vouezhiet aze c'hoazh. Da lâred eo ne vern ket enta ar mod da skriv war ar sanadur : **rakvarn** pe **ragvarn** a vo sanet ataw [ragvarn] (ne sinal ket FAV sanadur [rakfarn] ebed).

Mar behe unan da zibab e vehe gwell, d'am soñj, kennig skriv an elfenn gentañ hervez an diveradur : **liezdoare**, **ragvarn**, hag astenn d'an oll elfennoù pa ne weler skoilh ebed da se : **azgoulenn**, **enebbroadel**, **enebbevenn**, **enebbreizhad**, **enebdroug**, **dizglavenn**, **hebdale**, **liezdouead**, **ragdeiziañ**, **ragdiviz**, **ragdiwall**, **raggedlec'h**, **ragjed**...

E raggerioù zo eh eus enne un dibenn kaled hervez o diveradur : **fals-** (< **falsañ**), **kent-** (< **kentelezh**, **kentidig**), **krak-**<sup>64</sup> (< **krakiñ**, **krakouz**)... Tu zo d'o lezel digemm iwe dirag ur gensonenn zous (**falsvarch**, **kentger**) : neuze e c'hoario an heñvellaad war-gil ha klewet e vo [zv] ha [ndg] : “falzvarch”, “kendger”. An hevelep tra a zegouezh gant ar ragger **krak-**. Neuze e chomehe digemm e **krakdevodez**, **krakvewañ** pe **krakvouc'h** : mouezhiadur a vo klewet ataw (-gd- pe -gv)... Mod da skriv FAV (**krak-vouc'h**) ne chañch ket

---

<sup>63</sup> E kembraeg e vez skrivet **sb** ewid [sp] ha **sg** ewid [sk] (heñvellaad war-gresk enta) : **dysgu** [dæski] (**deskiñ**), **ysbryd** [æsprət] (**spered**, **tasmant**), **ysbyty** [æspətə] (**ospital**), **ysgol** [æs'ko:l] (**skol**), **ysgum** [æskym] (**skumm**), **ysgwâr** [æskwa:r] (**square**) (hervez Humphrey L. Humphreys) . Setu perag marse e tegas ar skritur-se kemm er yezh-se : santet e vehe ar sanadur [sk] pe [sp] evel heni ar re gozh hiziv e Bro-Gembre, hervez Gaetan DUVAL ! Dre levezon ar skritur e vehe klewet kentoc'h [zb] ha [zg] gant ar re yaouank bremañ (fed bet kadarnaet ged A. DESHAYES, en dehe klewet kentoc'h eno [æzbətə], [æz'go:l])... Mez n'eus ket anw amañ a juntadurioù diabarzh, namaed a strolloù-kensonennoù.

<sup>64</sup> **Krak** ['krak]eo stumm reizh ar ger-se (*petit, courtaud; catégorique...*), (stumm bihannaad **krakig**) a ya da ragger er skwerioù-se ; da ziforc'h diouzh **krag g -où** (*grès*) ['kra:k] : **Menez Kragoù**.

netra : troiñ a ra ar juntadur diabarzh da juntadur diavaez ha bloataad a ray **-k** dirag **v-**, evel bet gwelet uhelloc'h.

### 3.4.3.3. Remerkoù

#### 3.4.3.3.1. Rakger ha rakkêr :

Daou sanadur a vez kavet ewid **\*rakger** : gant ur sandhi pe ged. Gelloud a ra ar sanadur [raker] klotañ gant daou c'her dishañval : **rakger** [**rag+ger**] (*préfixe*) ha **rakkêr** [**rag+kêr**] (*faubourg*). Ur sanadur sinalet e FAV zo nawazh ewid **rakger** : [rak'ger], a vehe kentoc'h [rag'ger], ar pezh a ziskouez ne c'hoari ket ar sandhi ataw aze, pa klewer ataw [k] e **rakkêr**. Ken sklaer e vehe skriv **ragger** ['ragge:r] (*préfixe*) e-tal **rakkêr** (pe **ragkêr**) ['raker] (*faubourg* ; *entrée de village*) (**rag** eo ar stumm a glot gant an diveradur : sd. **peragiñ** e RH).

#### 3.4.3.3.2. Addant ; raktant :

Kement-arall a zegouezh gant [atãnt], sanadur a c'hell klotañ gant **addant** [**ad+dant**] (*surdent*) pe **atant** (*ferme*). Ewid **addant** e ro FAV daou sanadur, gant ur sandhi pe heb sandhi : [atãnt] pe [adãnt]. N'eo ket ar ger **addant** ur ger liezimplijet, gant-se ne c'hoari ket ar sandhi en ur mod sur ennañ. Tu a vehe da gennig [ad'dãnt] ewid **addant** ha leuskel ['atãnt] da ger **atant**.

Ewid **raktant** e kaver iwe [ragdãnt], ha daoust da [raktãnt] boud roet da gentañ gant AH ne ziskouez ket boud testeniekat gant F. FAVEREAU (FAV ?[-kt-]), na ro namaed [ragdãnt] e FAV.2. Ne vehe ket distreset ar brezhoneg gant ar stumm **ragdant**.

Rag n'eo ket ar sandhi kensonennel ur reolenn olleg evel m'ema ar liammadurioù (n'eo ket bet renablet, war a seblant, ewid **\*rakverb**, ar sanadur ['rakferp], na ['lesfap] ewid **lezvab**<sup>65</sup>). Fonologel neuze e vehe ar sandhi er ger **rakkêr** (pe **ragkêr**) ['raker], enebet douzh **ragger** e-lec'h ma ne vehe

---

<sup>65</sup> E diabarzh ar gerioù nawazh e c'heller kavoud [sf] ewid **zv** pe **zw**. Roiñ a ra KERVELLA [mesfez] ewid **mezvez** da skwer (L) (*YBAB* : 36).

kaletâdur ebed [ˈragger]<sup>66</sup>. Fonologel iwe ar sanadur [adˈdãnt] enebet douzh [ˈatãnt].

#### 3.4.4. JUNTADUR DIABARZH 1K+K2-kaled

##### 3.4.4.1. Levezon 1K-dous war K2-kaled (1K⇒K2)

En ur stroll diw gensonenn e c'hell an heni gentañ roiñ he zresoù, pe unan anezhe, d'an heni a za d'he heul, dre *heñvellaad war-gresk* (*assimilation progressive*, MARTINET). Da skwer e c'hell tres-mouezh ar gensonenn gentañ mouezhiañ an eil kensonenn. Skwerioù : e saozneg *to observe* [bz], en alamaneg *Absage* [bz] (**diskemenn**), *Absicht* [bz] (**mennozh**). E galleg e c'hellomp menegiñ *subsistance*, *subsister* [bz], mez ewid *subsidaire* e ro PR ar choaz etre [ps] ha [bz]) (pa ne ro namaed [ps] hebkén ewid *subside*<sup>67</sup>).

War a seblant ne gaver ket skwer ebed a gement-se e brezhoneg.

##### 3.4.4.2. 1K-dous levezonet gant K2-kaled (1K⇐K2)

###### 3.4.4.2.1. Skwerioù e yezhoù arall :

Er c'hontrel e vez kavet skwerioù a henvellâdur àr-gil e meur a yezh, brezhoneg enkontet : ar gensonenn gentañ kentoc'h a vez heñvellaet gant an eil (1K⇐K2). Da skwer : sng *abscess* [ps] ; alam. *Abplatten* [pp] (= **plataad**), *Abschlag* [pf] (= **rac'hwiz**) ; fr. *absinthe*, *absolu*, *observer*, *subséquent* [ps] ; *obtenir*, *subtil* [pt]. En degouezh-se, daoust da zistagadur ur [p] er c'homz, ne vez ket kemmet er skritur kensonenn-dibenn an elfenn gentañ, ar pezh nad eo ket ur skoilh douzh ar sanadur : n'eo ket emskianteg an dud, pa vezont aterset, e vez sevenet ur [p] gante er gerioù-se.

---

<sup>66</sup> Ur frankiz zo aze er yezh, notet gant KERVELLA : “Pa vez c'hoant reiñ da gompren orin ur ger ne vez ket heuliet ken pizh lezenn ar c'haletaat. Evelse **addont**, **rakdiazezañ** a c'hello bezañ distaget : [ˈad-do<sup>n</sup>t], [ˈra:ɡ-diaˈzé:za<sup>n</sup>]” (YBAB : 36).

<sup>67</sup> Ewidin n'anavezan namaed ar sanadur dre [bz] en daou c'her-se : [sub**z**id], [sub**z**idjer]. Marse dre levezon *subsister*...

### 3.4.4.2.2. Skwerioù e brezhoneg :

Setu perag e skriv RH/HY/AH **treuz+kiz**, ha **treuz+plueg** ; setu perag e skriv FAV **absolut**, **absolvenn** [ps], **heb+kén**, **neb+tu**, e-lec'h ma klewer nawazh [sk], [sp], [pk] ha [pt]. Daoust ha lakaet e vo diaez ar lenner brezhoneg a-fed sanañ etre **treuskiz** ha **treuzkiz**, etre **neptu** ha **nebtu**, **hepken** pe **hebken** ? Ne vo ket, peogwir ne gaver ket e juntadurioù diabarzh namaed strolloù divouezh dirag **p, t, k, s, ch, f**, zokén goude **b, d, g, z, da skwer** :

- goude **-b** (pe **-p** e Peurunvan-41) : **bepred** [(p)p] (<beb+pred), **hebkén** [pk] (<heb+kén), **nebtu** [pt] (<neb+tu), **nepell** (<neb+pell), **nepred** (<neb+pred).
- goude **-d** : **adchom** [tʃ], **adfoar** [tʃ], **adkoan** [tk], **adpardon** [tp], **adsell** [ts], **adtad** [tt > t], **adtorr** [tt > t] (FAV2 ator).
- goude **-g** (pe **-k** e Peurunvan-41) : **drougchañs** [kʃ], **drougfiziañs** [kf], **drougkomz** [(k)k], **drougpleg** [kp], **drougsoñj** [ks], **drougtamall** [kt].
- goude **-z** : **treuzplueg** [sp], **treuzkiz** [sk], **tazkagnad** [sk] (**taskagnad**, RH).
- goude **-j** : **stlejprennoù**<sup>68</sup> [ʃp].

### 3.4.4.3. **Penaoz skriv 1K dirag K2 = p, t, k, s, ch, f ?**

War a seblant n'eo ket bet stabillaet ar feson da skriv ar gensonenn 1K pa gaver K2 = **p-, t-, k-, s-, ch-, f-**. N'eus ket problem ebed goude ar raggerioù a achu gant ur gensonenn galed, dreist-oll gant groupoù a-sort gant **nt, st, ls,...** : **kent-**, **dreist-** pe **fals-**. Kavet e vez ar gudenn-se peurged goude ar raggerioù **ad-, az-, braz-, daz-, diz-, droug-, eneb-, heb-, iz-, krag-, liez-, neb-, nevez-, peuz-, rag-, treuz-**.

En daolenn-mañ e vo gwelet e skriv ar Peurunvan-41 un 1K kaled kentoc'h dirag ur K2 divouezh, ar pezh a glot gant ar sanadur :

---

<sup>68</sup> Ar skwer namaetañ am eus kavet ! (*travois*, herwez Vallée, e FAV).

	Peurunvan-1941 Geriadur RH	Geriadurioù HY pe AH gant ar fonetik API	Ger. GARN	Ger. FAV(F), FAV.2 (F2) gant ar fonetik API pa vez dishañval
AD-	<b>adkarr</b>	<b>adkarr</b> [ˈatkar] HY	<b>adkarr</b>	F <b>adkarr</b> [ˈatkar]
	<b>adsked</b>	<b>adsked</b> [ˈatsket]	<b>adsked</b>	F <b>adsked</b> [ˈatsket]
AT-	<b>atfer</b>	∅	∅	F <b>atfer</b> [ˈatfer]
AZ-	∅	∅	∅	∅
AS-	<b>aspediñ</b>	[aˈspe:di] (HY)	<b>aspedi</b>	<b>aspediñ</b>
BRAZ-	∅	∅	∅	∅
BRAS-	<b>brastresañ</b>	<b>brastresañ</b> (HY,AH)	∅	<b>brastresañ</b> (F2)
DAZ-	∅	∅	∅	F <b>dazkor</b>
DAS-	<b>daskor</b> , <b>daspreñañ</b>	[ˈdaskor] [dasˈpre:nã] (HY)	<b>daskor</b> <b>dasprena</b>	F2 <b>daskor</b> [dakor]W <b>daspreñañ</b>
DIZ-	∅	∅	∅	∅
DIS-	<b>dispac’h</b> , <b>dispar</b>	[ˈdispax] (HY) [dispar] (HY)	<b>dispah</b> , <b>dispar</b>	<b>dispac’h</b> , <b>dispar</b>
DROUG	∅	∅	<b>drougkomz</b>	F <b>drou(g)komz</b>
-			<b>drougspered</b>	<b>drougspered</b> [sp]
DROUK	<b>droukkomz</b> <b>droukspered</b>	[druˈkːspe:ret] HY	∅ ∅	F2 <b>drou(k)komz</b> <b>Droukspered</b> [ks]
ENEB-	∅	∅	∅	∅
ENEP-	<b>eneptaol</b> , <b>eneppouez</b>	∅ ∅	∅ ∅	∅ ∅
HEB-	∅	∅	<b>hebdale</b>	F <b>hebkén</b> , <b>hebtí</b> [pk]
HEP-	<b>hepken</b> , <b>hepti</b>	[hepˈkɛ:n] (HY) <b>hepti</b>	<b>hepken</b>	<b>hepken</b> <b>hepti</b> [pt]
IZ-	∅	∅	∅	∅
IS-	<b>isframmadur</b> <b>isprefed</b>	<b>isframm</b> [sf](HY) <b>istitlañ</b> [st] (HY)	∅ ∅	<b>isfont</b> [sf] (FAV.2) ∅
KRAG-	∅	∅	∅	∅
KRAK-	<b>krakperoked</b> , <b>kraksivolez</b>	∅ ∅	∅ ∅	∅ ∅
LIEZ-	∅	∅	∅	∅
LIES-	<b>lieskementiñ</b> <b>liesseurt</b>	[,lieskeˈmenti], [liˈesœrt] (HY)	<b>lieskementi</b> <b>liesseurt</b>	F-F2 <b>lieskementiñ</b> <b>liesseurt</b>
NEB-	∅	∅	∅	F <b>nebtu</b> [pt]

NEP-	<b>neptu</b>	[nep'ty :] (AH)	<b>neptu</b>	F2 <b>neptu</b>
PEUZ-	∅	∅	∅	∅
PEUS-	∅	∅	∅	∅
RAG-	∅	∅	∅	∅
RAK-	<b>rakkemenn,</b> <b>rakskrid,</b> <b>raktres</b>	[rak'kemen] (HY) [ˈrakskrit], [raktres] (HY)	<b>rakprena</b>  <b>raktres</b>	F-F2 <b>rakkemenn</b> <b>rakskrid</b> <b>raktres</b> (F raktress)
TREUZ-	<b>treuzkas</b>	<b>treuzkas</b> (HY, AH) [ˈtrøskas] (HY)	∅	F2 <b>treuzkas</b>
TREUS-	∅	∅	∅	F <b>treuskass</b>

**Taolenn 10. Penaoz skriv 1K dirag K2 kaled.**

Gant K2 = **p-**, **t-**, **k-**, **s-**, **ch-**, **f-** e tiskouez an daolenn-se ar mod ingal d'ober peurliesañ gant **as-** (narenn gant **az-**), **dis-** (narenn gant **diz-**), **enep-** (narenn gant **eneb-**), **krak-** (e-lec'h **krag-**), **lies-** ha **rak-** (e-lec'h **rag-**), da lâred eo kentoc'h gant 1K kaled dirag ur genonenn divouezh diouzh un tu. Mez termet e vez etre **droug-** ha **drouk-**, **heb-** ha **hep-**, un tammig iwe etre **daz-** ha **das-** pe **neb-** ha **nep-**. Tra souezhuz, gouarnet eo bet **ad-**, **peuz-** ha **treuz-** gant 1K blod, e-tal raggerioù arall kaled o c'hensonennoù-dibenn, ar pezh a ziskouez un diouwer a gempouellded. E gwirionez, diwar ur sav-boent fonografeg, ne vern ket kalz ha pa vehe skrivet **peuzkozh** pe **peuskozh**, **treuzfurmiñ** pe **treusfurmiñ**, **ragtres** pe **raktres**, **nebtu** pe **neptu** ha kement a zo, pa vez kaled K2, an heñvellaad àr-gil é c'hoari amañ dre zivouezhiañ 1K. Tu a vehe da zegemer an daou stumm skrivet enta.

Mez simplaad a vehe c'hoazh ober ewid an oll raggerioù evel ar pezh a zo bet graet gant **ad-**, **peuz-**, **treuz-**, **nevez-**, da lâred eo ober gant ar stumm ennañ ar genonenn a vez klewet en diveradur dirag ur vogalenn (gant ur lostger neutr) : **droug-** (< **drougoù**), **eneb** (< **enebiñ**), **liez-** (< **liezig**), **rag-** (< **peragiñ**)... Neuze e kavhemp **drougkomz**, **drougpleg**, **enebtaol**, **hebkén**, **hebtañ/hebti**, **liezkement**, **ragkemenn**, **ragskrid**, **ragtres** ha kement a zo.... Ewid ar raggerioù diaez da gavoud un diverad dezhe (**ad-/at-**, **daz-/das-**, **heb-/hep-**, **neb-/nep-**) eh eus tu d'o lakaad da heuliañ ar reolenn olleg, da lâred eo gant ur

gensonenn vlod kentoc'h, evel ma tere peurvuañ d'ar gerioù brezhoneg : **adsevel, dazkrenañ, hebkén, peuzkozh, treuzfurmiñ...**

Gant 1K-st ne vo ket bloataet bikén : **dreistamzer, dreistden, dreistlabour, dreistmagañ, dreist-oll...**

Dirag -s e vehe gouarnet **das-** : **dasskeud, dason** (kentoc'h eged **\*dazskeud, \*dazson**).

### 3.4.4.4. Juntadur diabarzh 1K + K2(=h-kensonenn pe c'h)

#### 3.4.4.4.1. Juntadur gant h-kensonenn :

En un nebeud gerioù e vo kavet juntadurioù, enne ar gensonenn **h-** evel K2. Ar gudenn a gavomp amañ zo heni ar sanadur ataw. Termal a ra ar skritur c'hoazh, an tu fonografeg é c'hoari peurvuañ, hag é c'hounid tachenn pe é kilañ.

Geriadur RH 1985	Geriadur HY 1994	Geriadur AH 1995	Ger. FAV 1992	Ger. FAV.2 2005
<b>*adh</b> enchañ [at'hɛnfã] (jclr)	Ø	Ø	Ø <b>adhadañ</b> [at'ha:də]	Ø <b>adhadañ</b> [at'ha:də]
	<b>dishadennañ</b> , [,disa'dɛnã]	Ø	Ø <b>dishegar</b> [di'se:gar]	<b>dishegar</b> [di'se:gar]
<b>disheñvel</b>	<b>disheñvel</b> [di'sɛ:vɛl]	<b>disheñvel</b> [di'sɛ:vɛl]	<b>disheñvel</b> [disê:vɛl]	<b>disheñvel</b> [disê:vɛl]
<b>disheol</b>	<b>disheol</b> [di'sɛwɛl]	<b>disheol</b> [di'sɛ:wɛl]	<b>disheol</b> [di'sɛwɛl]	<b>disheol</b> [di'sɛwɛl]
<b>dishual</b>	<b>dishual</b> [di'syɑl]	<b>dishual</b> [di'sy:ɑl]	<b>dishual</b> [di'syɑl]	<b>dishual</b> [di'syɑl]
<b>droukhoaladur</b>	Ø	Ø	Ø	Ø
Ø	Ø	Ø	<b>droughañval</b> [dru'kɑvɑl]	<b>droukhañval</b> [dru'kɑvɑl]



<b>krakhouad</b>	Ø	Ø	<b>droughirnezh</b> >droug-hirnezh	Ø
<b>*kroazhent</b>	<b>*kroazhent</b> sd. <b>kroashent</b> [ˈkrwasɛnt]	<b>kroazhent</b> [ˈkr <sup>o</sup> as :ɛ̃nt]	<b>kroashent</b> [ˈkrwasɛnt]	<b>kroazhent</b> [ˈkrwasɛnt]
<b>*lidambroug</b>	Ø	Ø	Ø (hambroug W, kmg <i>hebrwng</i> ).	Ø (ambroug)
<b>*peuzheñvel</b>	Ø	Ø	<b>peushañval</b>	<b>peuzhañval</b> [pøʰhã:val]
{ <b>pod-houarn</b> }	<b>pothouarn</b> [poˈtuarn]	<b>pothouarn</b> [poˈtu :arn]	<b>potarn</b> (pod- houarn)	<b>pod-houarn</b> & <b>potouarn</b>
<b>rakharpell</b>	Ø	Ø	Ø	Ø
<b>tokarn</b> & <b>tog-houarn</b>	<b>tokarn</b> [ˈtokarn]	<b>tokarn</b> [ˈtokarn]	<b>tokarn</b> (tok-houarn)	<b>tokarn</b> (tok-houarn)
<b>*toghouarnañ</b>	Ø	Ø	Ø	Ø
<b>*treuzhent</b>	Ø	Ø	[trøˈshɛnt] (jclr) <b>treushual</b> [trøˈsyal]	Ø <b>treuzhual</b> [trøˈsyal]

**Taolenn 11. Juntadur diabarzh dirag h-kensonenn.**

Kenteliuz eo tro ar ger **kroaz+hent**. Red eo da gentañ gouied n'eus ket **zh** ebed er ger-se, evel er ger kazhig (a verk daou sanadur ag ar memez ger [ˈka:zik] pe [ˈkahik]), mez ur juntadur **-z + h-**. Ur sandhi a gaver er ger, gwiriektaet gant an anvioù-lec'h stankig a-walc'h « *Le Croissant/Le Croissen* ». Abalamour d'ar skritur e klewer re liez [<sup>\*</sup>kroazent] bremañ. Aliañ a rae HY skriv **kroashent** kentoc'h (1994), evel FAV 1992, mez **kroazhent** a vez kavet en-dro e 1995 ha 2005. Daoust ha drohoc'h e vehe skriv **kroashent**, **peushañval/peusheñvel** eged **dیشهñvel**<sup>69</sup> ? War a seblant e vez skrivet **kroashent-tro** gant *Ofis ar Brezhoneg* (ds. war panneloù-hent en Alrae, en Oriant, e Karaez). Ha ne vehe

<sup>69</sup> Digempouellded zo e GARN iwe, a skriv **dیشهñvel**...mez **\*dizharp**, **\*drougheñvel** !

ket gwell iwe skriv **treushent** ha **treushual**, ar pezh a ziskouezfe n'eus ket **zh** ebed aze ? Tu a vehe da skriv neuze **athadañ**, **athenchañ**, **droukheñvel**, **lithambroug** (kmg **hebrwng**), war batrom **droukc'hoant**, **droukc'hraer**, **droukhañval**, **droukhoalañ**, **kenthed**, **krakhouad**, **pothouarn**, **rakc'hoari** [rak'hwa:ri] (FAV.2), ha **rakharpell** ? Un afer a goñvañsion eo, astennet amañ ewid surraad ar sanadur.

#### 3.4.4.4.2. Juntadur gant K2 = c'h- :

Ewid AH e chom digemm **k**, **t** ha **p** e deroù an elfenn a lakaer goude **drouk-** (p.341), mez meneg ebed a **c'h-**. Dirag **-c'h** e term ar yezh, gwezh [ɣ], [h], gwezh [x] :

- **adc'hoar** ([ 'adywar], [ 'athwar] ), **adc'hoari** ([ad'ɣwa:ri], [at'hwa:ri] (FAV).
- **adc'hwezo** : [ 'at'hwew] (FAV).
- **adc'hra-** : (dvb **adober**) [ 'adyra] (HY) ; **adc'hraet** : [a'txre :t] (AH), [ 'adyret] [adwrejd]) (FAV.2).
- **dazc'hoari** [z'ɣ] (RH), a vehe bet tu da skriv **dasc'hoari** [sh] (**das-** evel e **daskren**, **dastroc'hañ...**).
- **droukc'hoant** (RH), **drougc'hoant** [ 'drukhwãnt] (FAV) ; **droukc'hoant** (FAV2).
- **droukc'hra-** : (dvb **drougober**), agv. **droukc'hraet** (RH, HY heb ar fonetik), mez **drougra-** e FAV.2, agv. **drougraet** ; **drougraer** [drugraer] (mez **adc'hraet** ! [ 'adyret] [adwrejd]).
- **droukc'hras** (RH), **drougc'hras** (FAV) : [ 'drukhras] mez **droukc'hras** (FAV.2).

Un digempouellded zo amañ, etre **adc'hraet**, **drougraet/droukc'hraet**, **droukc'hras** : ha ne vehe ket da verkañ aze ur c'haletâdur dirag **c'h**, evel e **droukc'hras** [ 'drukhras], e-lec'h ma ro ar **k** un harp d'ar sanañ ? Da lâred eo skriv **droukc'hraet** [ 'drukhrajt], **droukc'hraer** [ 'drukhraer] ha zokén **atc'hraet**<sup>70</sup> [ 'athrajt] ? Ha pelloc'h **droukc'hoant** [ 'drukhwãnt], **atc'hoar**

<sup>70</sup> Ha souezhusoc'h e vehe kaoud **ad-/at-** eged **az-/as-**, **droug-/drouk-**... ?

[ˈathwar], **atc'hoari** [at'hwa:ri], **atc'hwezo** [ˈat'hwew]<sup>71</sup>... ? Setu aze ataw choazoù d'ober.

### 3.4.5. REIZHAÑ HA SIMPLAAD

Mar klaskomp lakaad un tammig urzh en doare-skriv e rankomp teurel ur sell iwe douzh daou dra a zo bet kaset hanter-hent beteg bremañ, hag a c'hell degas aezamant e lenn ar brezhoneg en ur c'henarroud diaez. Diw gudenn zo : simplaad ar skritur (pe ged) ha merkañ ar sandhi er skrid (pe ged). E gerioù zo e c'heller kavoud unan pe heben, e gerioù arall unan hag heben.

Gwelet hon eus e fat ur gensonenn pe ziw ag ar strolloù-kensonennoù, er c'homz, e fin ar gerioù (**bourrab(l)**, **gwineg(r)**, **kouev(r)**, **paot(r)**), ur fenomen a gaver iwe er juntadurioù diavaez : **mestr-skol** [mɛ'sko:l] (FAV), **dreistnatur** [dʁɛjs(t)'nat:yr] (AH). Ewid-se ne vez ket skrivet \***bourrab**, \***gwineg**, \***kouev**, \***dreis**, \***mest** pe \***paot**. Mez e diabarzh ar gerioù, meur a wezh, e talc'h kont ar skritur ag ar fenomen-se pa zegouezh.

#### 3.4.5.1. Simplâdur er gerioù kevrenneg gant -ti, -ki, -pred

A-hengoun e klask ar skritur simplaad er juntadur ha gouarn ur gensonenn hebkén e degouezhioù zo, goude heñvellaad 1K gant K2. Er yezh standard e kaver skwerioù a gement-se e gerioù kevrenneg zo, e-lec'h ma kaver dre sandhi ur skoilh douzh kemmadur dre vlotaad an eil ger : **mirdi** (< **mir+ti**) gant ur blotâdur mez **abañti** (< **abad+ti**) ; **manañti** (< **manac'h+ti**) ; **preñti** (< **pred+ti**). Goude un termal gant R. HEMON, a gennige kentoc'h ar stumm \***prefeddi** (< **prefed+ti**), e skriver **prefeti** bremañ, evel a-gent er memez degouezh.

Memez mod-ober er gerioù kevrenneg savet war an elfenn -pred : **beb+pred > bepred** ; **neb+ pred > nepred**.

---

<sup>71</sup> FAV : **adc'hwezo** *vb regonfler*.

Mar parra 1K douzh blotâdur ar lostger **-ti** ha douzh heni ar lostger **-pred**, eh eus da c'hortoz hañval tra ewid ar lostger **-ki** ha skriv **gwadki** (< **gwad** + **ki**) e-lec'h **\*gwadgi** RH, pa skriver **gwadkaser** dija.

Seblant a ra spleitabl a-walc'h an doare-se d'ober, dre ma simpla an traoù en ur roiñ ur sanadur reizh. Ned ay ket ez-naturel an dud newezvrezhonegerion da lâred “\*prefedi” pa vez skrivet **prefeti** pe “\*bebred” pa vez skrivet **bepred**.

### 3.4.5.2. Simplâdur er gerioù gant ar lostgerioù **-ted** ha **-ter**

Herwez ar geriadurioù e valigañs an traoù da-geñver ar lostgerioù-mañ, ha kement-se war zaou live : blotâdur pe galetâdur diouzh un tu, ha simplaad ar mod da skriv diouzh an tu arall.

#### 3.4.5.2.1. Blotâdur pe kaletâdur : ar reolenn :

Ur c'hemmadur dre vlotaad a sko war ar lostgerioù-se, pa ne sav ket ur skoilh enebtañ. Blotâdur neuze goude ur vogalenn (**duder** < **du+ter**), daoust dezhi boud friet (**henañded**, **nesañded**) ; goude **-gn** (**magnded**, **skragnded**) ; goude **-ilh** (**mailhded**, **puilhded**) ; goude **-l** ha **-ll** (**uhelded**, **pellder**) ; goude **-m/-mm** (**tommder**) ; goude **-n** ha **-nn** (**bihanded**, **splannder**, **kadarnded**) ; goude **-r** (**berrder**, **hirder**, **klouarded**) ; goude **-v** (**kuñvded**, **skañvder**) pe **-w**<sup>72</sup> (**azwded**, **brawder**, **c'hwerwder**, **tanawder**). Blotâdur c'hoazh goude ur **-z** leoneg : **krizder** (**kri(z)der**).

Mez chomel a ra **-ted** ha **-ter** digemm goude **-k** (**krakted**, **enkted**), goude **-t**, gant koazhadur un **t** (**dreisted**, **diseblanted**, **puter**), goude **-s** (**digasted**, **douster**, **nested**), goude **-z**, a vez skrivet **s** neuze (**brasted**, **spisted**). Tu a vehe d'ober evel-se goude **p** iwe (**propted**<sup>73</sup>).

<sup>72</sup> Herwez an doare-skriv. Degas a ran da soñj e oa bet akord an dud, da-geñver komision an doare-skriv etre 1971 ha 1976 ewid lakaad **-w** e fin ar gerioù : **barw**, **braw**, **kaw**, **rew**, **tanaw**... mez **v** en diabarzh : **bew** mez **bevañ** (Skol-Vreizh).

<sup>73</sup> Nad eo ket ba geriadur ebed c'hoazh, evel ur yuc'h gerioù arall a vehe tu da c'hortoz gant ar lostgerioù **-ted** pe **-ter** : **ambashted**, **bleupted**...

Meur a wezh e kaver **-ed** e-lec'h **-ted** : **amiabled, ampled/ampler, kleñved** (ur lostger neutr eo **-ed** aze).

#### 3.4.5.2.2. Stummoù diasur :

Evel ewid an **x** a c'hell boud sanet divouezh [ks] pe vouezhiet [gz] e c'hell ar brezhoneg termal e gerioù zo gant ar lostgerioù **-ted/-ter** enne. Gwezh e vo ur sandhi, gwezh ne vo ket. Pa ro ur geriadur ur mod da skriv e c'hell an eil roiñ ur mod arall. Meur a wezh e vez kenniget daou vod da sanañ pa ne vez ket daou vod da skriv. Kavet e vez an termal-se goude **c'h, g, zh**.

	RH	FAV	FAV.2	Remerkoù
<b>-c'h</b>	<b>balc'hder</b>	<b>balc'hder</b>	<b>balc'hder</b>	Akord (blotâdur)
<b>-c'h</b>	<b>sec'hder</b>	<b>sec'hder</b>	<b>sec'hder</b>	Akord (blotâdur)
<b>-c'h</b>	<b>gwalc'hded, -der</b>	<b>gwalc'hded</b> [gwalhdet] & [-xt-]		Blotâdur ged RH Choaz ged FAV
<b>-c'h</b>	<b>gwerc'hded</b>	<b>gwerc'hded</b> pe <b>gwerc'hted</b>	<b>gwerc'hded</b> pe <b>gwerc'hted</b>	Blotâdur ged RH Choaz ged FAV (skritur/sanadur)
<b>-g</b>	<b>kigder</b>	<b>kigder</b>	0	Akord (blotâdur)
<b>-zh</b>	<b>kozhded, -der</b>	0	0	Blotâdur ged RH
<b>-zh</b>	<b>pizhded, -der</b>	<b>pizhder</b> [pizder], [pihder]	<b>pizhder</b> [pizder], [pihder]	Akord (blotâdur)
<b>-zh</b>	<b>reizhded, -der</b>	<b>reizhded</b> & <b>reishted</b>	<b>reizhded</b> & <b>reishted</b>	Blotâdur ged Rh Choaz ged FAV (skritur/sanadur)
<b>-zh</b>	<b>skuizhded, -der</b>	<b>skuizhded, -der</b> [-zd-], [-st] KLT pe [-hd-], [-ht-] W	<b>skuizhded, -der</b> [-zd-], [-st] KLT [-hd-] W	Blotâdur ged Rh Choaz ged FAV (sanadur)

**Taolenn 12. Ar lostgerioù -ted ha -ter goude -c'h, -g, ha -zh**

Termal a ra ar yezh iwe, abalamour d'an doare-skriv marse, goude **b/p**, **d/t**, **g/k**, **s/z** ha **v/f** en anvioù-gwan (skwer ebed kavet ewid **j/ch**<sup>74</sup>).

	RH	FAV	FAV.2	Remerkoù
<b>b/p</b>	<b>Hevelep</b> (ag) : <b>hevelepted</b>	<b>Heveleb</b> (ag) : <b>Hevelebded</b> [bd] pe [pt]	<b>Hevelep, heveleb</b> : ø	Kaletâdur ged RH Daou sanadur ged FAV, <b>-bd-</b> skrivet.
<b>d/t</b>	<b>Naet</b> (ag) : <b>naeted</b>	<b>Net</b> (ag) : <b>Net(d)ed, -(d)er</b> [t]	<b>Nêt, net, naet</b> (ag) : ø	<b>Naetded</b> kavet e RC
<b>g/k</b>	<b>Gwak</b> (ag) : <b>gwakted, -ter</b>	<b>Gwag</b> (ag) : <b>gwagded, -der,</b> <b>gwakted, -ter</b>	<b>Gwak</b> (ag) : <b>gwagded, -der,</b> <b>gwakted, -ter</b>	kaletâdur ged RH choaz ged FAV (skritur/sanadur)
<b>g/k</b>	<b>C'hwek</b> (ag) : <b>c'hwekted</b>	<b>C'hweg</b> (ag) : <b>c'hwegded</b>	<b>C'hwek/ c'hweg</b> : <b>c'hwekted, -ter</b> [-gd-] & [-kt-]	Kaletâdur ged RH Daou sanadur ged FAV
<b>z/s</b>	<b>Rous</b> (ag) : <b>rouster</b>	<b>Rous</b> (ag) : <b>rousted, -ter</b> <b>rouded, -der</b>	<b>Rous</b> (ag) : <b>rouzded, -der</b> <b>rousted, -ter</b>	kaletâdur ged RH choaz ged FAV (skritur/sanadur)
<b>z/s</b>	<b>Eürus</b> (ag): <b>eürusted</b>	<b>Eürus</b> (ag) : <b>Eürusted</b> [st] & <i>parf.</i> [zd]	<b>Eürus</b> (ag) : <b>Eürusted</b> [st] & <i>parf.</i> [zd]	Kaletâdur ged RH Daou sanadur ged FAV
<b>j/ch</b>	ø	ø	ø	ø
<b>v/f</b>	<b>Abaf</b> (ag) : <b>abafded</b>	<b>Abaf</b> (ag) : <b>abafded, -ter</b> [-ft-]	<b>Abaf</b> (ag) : <b>abafded, -ter</b> [-ft-]	Blotâdur ged RH Kaletâdur ged FAV
<b>v/f</b>	<b>Hastif</b> (ag) : <b>hastifded</b>	<b>Hastiv</b> (vb <i>hastivad</i> ) : <b>hastivded</b> [-vd-]	<b>Hastiv</b> (ag) : ø (vb <i>hastivad</i> )	Kaletâdur ged RH Blotâdur ged FAV
<b>v/f</b>	<b>Jolif</b> (ag) : <b>jolifded</b>	<b>Jolif</b> (ag) : <b>Jolifded</b> [-ft-]	<b>Jolif</b> (ag) : ø	Akord (kaletâdur)

**Taolenn 13. Ar lostgerioù -ted ha -ter goude kensonennoù zo.**

N'eo ket stabil enta ar mod da seveniñ ar juntañ gant ar lostgerioù **-ted** ha **-ter**.  
Diwar ar skwerioù hon eus kavet e vehe tu da verkañ an daou dres-se er skrid,

<sup>74</sup> Pe ijinañ **drochter**...

ha degemer **rousted**<sup>75</sup> pe **rouzded**, **hastifted** pe **hastivded** (ur -v dibenn er gerse, herwez ar vb **hastivad**), **c'hwekted** pe **c'hwegded**.

Mez moian a vehe iwe da favorekaad ur stumm hebkén. E W da skwer e santer ar c'haletâdur kentoc'h, dreist-oll er gerioù brazimplijet : **braster**, **douster**, mez iwe **rouster**, **c'hwekted**, **jolifted**, **hastifted**, **rei(s)hted**, **stri(s)hter**... **Brazeadded** a c'hellehe boud **brazested**, diwar skwer **brasted** ha tu a vehe kaoud **pishter** e-lec'h **pizhder** (evel **reishter/reizhder**).

Mez diskoueziñ a ra ar brezhoneg a-vremañ chom heb seveniñ ar sandhi kén, pe nebeud-tre (Sd. § 4.1.1.5., p. 371). Neuze e vo mestr aze levezon an doare-skriv<sup>76</sup> : herwez ma vo skrivet **rouzder** pe **rouster** e vo klewet [-zd-] pe [-st-] e KLT ; herwez ma vo skrivet **reizhder** pe **reishter** e vo klewet [-hd-] pe [-xt-] e W.

#### 3.4.5.2.3. Diforc'h gerioù dre ar skrid :

Dre ar skrid e kennig KERVELLA merkañ an diforc'h etre gerioù damhañval. C'hoari a ra ar yezh neuze etre kaletâdur pe blotâdur. Da skwer etre **divlasted** (*infamie* < **divlaz+ted**) ha **divlazded** (*fadeur* < **divlaz+ted**) ; **ruster** (**rust+ter**) ha **ruzder** (**ru(z)+ter**) (RH) ; etre **gousted** (**gouest+ted**) ha **gouezded** (**goue(z)+ted**) (RH). Ur bosupted eo, peogwir e term ar yezh war ar poent-se. Ewid ma yay an diforc'h er yezh komzet e ranker neuze sanañ herwez ar pezh a zo skrivet : [di'vlazdet] ewid **divlazded**, ha [di'vlastet] ewid **divlasted**, hag evel-se gant kement koublad a-sort-se a vehe.

#### 3.4.5.2.4. Simplaad ar stumm skrivet :

Kavet e vez gerioù kevrenneg strolloù teir, peder kensonenn da heul enne. Lod a rank o gouarn oll ewid roiñ da gompren aez o ster. Da skwer ar gerioù gant **dreist-** : **dreistberr**, **dreistdlead**, **dreistlabour**, **dreistmuzul**, **dreistnatur**,

<sup>75</sup> Tu a vehe iwe da skriv **rouzter** (< **rouz**, **rouzig**) ewid henn diforc'hiñ diouzh **douster** (< **dous**, **dousig**). Kement arall da heul ged **brazted**, **brazeadded**, **c'hwegted**, **hastivded**...

<sup>76</sup> Gwelet e vo pelloc'h gant rezultadoù an enklask pouez an doare-skrivañ war ar mod da sanañ.

**dreistprizañ, dreiststegnadur, dreisttudañ** hag e gerioù arall evel **freskted** ; **habaskted** ; **oueskter** ; **trenkted** ; **yaouankted**.

Mechal mar ne vehe ket gwell, e degouezhioù zo, heuliañ ar gwenedeg a simpla ar strolloù **-bl-**dibenn : **bourrapted, amiapted**. Ha neuze skriv **humpted** *humilité* (< **humbl+ted**)<sup>77</sup>, **kapapted** *capacité* (< **kapabl+ted**) ; **minkted** *tiédeur* (< **mingl+ted**), **nopted** *noblesse* (< **nobl+ted**), **posupter** (*une*) *possibilité* (< **posubl+ter**), **sempted** *faiblesse, délicatesse* (< **sempl+ted**), **simpted** *simplicité* (< **simpl+ted**), **soupted** *souplesse* (< **soupl+ted**), **sinkted** *svelte* (< **sinkl+ted**). Tu a vehe da astenn ar mod-simplaad-se da **hakted** *hideur* (< **hagr+ted**) e-lec'h **\*hagrded** ; **misted** *élégance, finesse* (< **mistr+ted**), e-lec'h **\*mistrded**...

Ansav a ran n'eo ket ar simplaad ur gudenn aez da dermeniñ. Mar kavan reizh skriv **Frañmason** e kavan gwell pa vez skrivet (FAV) **skañvbenn, skañboellig**, evel **skañvaad, skañvouez**, gant ar **v** a gaver er ger **skañv**, e-lec'h **\*skañbenn, \*skañboellig** bet dalc'het gant R. HEMON, a skrive nawazh **skañvded**.

#### 3.4.6. KLOZADUR

Gwelet hon eus pegen stard eo ar liamm a zo aze, er juntadurioù diabarzh, etre ar pezh a vez skrivet hag ar sanadur a c'hell doned da heul. Skrivet en doa KERVELLA (*YBAB*, p. 40) e vez merket kemm al lizherenn-zibenn pa vez ereet diw rann ur ger kevrenneg gant ur varennig-stagañ : **a-hend-all, kemend-all** (e-lec'h **\*a-hent-all, \*kement-all**). Ar pezh na vez ket graet ma vez skrivet heb barrennig : **kement all**.

Tu zo d'henn heuliañ seul gwezh ma tegaso ar reolenn-se un harp d'an deskerion a-vremañ. Gwelet hon eus siwazh ne vez ket ataw kempouell ar pezh a vez roet da lenn ewid aesaad o labour d'ar re o deus c'hoant da grogiñ er

<sup>77</sup> Tu zo da gavoud gwell implij **uvelded**.



brezhoneg. Mar soursiomp un tamm d’ar gevredi-se e rankehemp chañch un tammig hon mod da skriv : evel ma vez dousaet ar c’hammdroioù dañjeruz war an hentoù, e rankehemp iwe plaennaad hon doare-skriv e-lec’h ma chom pejoù-sanañ c’hoazh... a greñva levezon ar galleg war ar brezhoneg !

### 3.5. KEÑVERIAÑ BREZHONEG-GALLEG

Pell amzer em boa prederiet ewid gouied perag e veze sevenet ken direizh ar liammadurioù gant an deskarded. Levezon ar galleg a seblante boud é c’hoari aze. Mez ne gaven ket an tu d’en em zizober anezhi. Beteg kompren n’anavezen ket mad reolennoù ar galleg a-fed liammadurioù. Ha gwir eo n’eo ket un dra a vez studiet er skol: war an tach eo e vez desket ar mod-sanañ (“*on dit un nâne, deux zânes, un petit tâne, neuf vânes...* ; “*on dit les zenfants*“ ; “*on dit le Second Tempire, quand til vient*“...) heb esplegadenn olleg : dre soubidigezh e tesk ar vugale o yezh-vamm. Mez rekiz e oa d’ar c’heleñner klask pelloc’h.

Klasket em eus kompren e pesort mod e yae ar galleg war-raog war an dachenn-se, ha soñjal a ran bremañ ema ur lod ag an diskloum d’an nebeutañ en anaoudegezh-se. Dre m’ema bremañ ar galleg yezh-vamm ogozig an oll dud a zesk brezhoneg hiziw-an-deiz, skolidi pe vrazarded, e rankont gouied war pesort sichenn e teskint ar brezhoneg, da lâred eo lakaad splannder war sistem-liammañ ar galleg, ar substrad amañ, ewid tizhoud ar pal a zo komz brezhoneg gant reolennoù ar brezhoneg... ha n’eo ket re ar galleg.

En em c’houlenn a rae John ÅGREN (1973) perag e oa bet laosket ar liammadur a-gostez e galleg (p.1 : liaison, “*domaine négligé par les linguistes*”). Menegañ a rae ur studiadenñ e 1928 (H. ANGLARD) ha notennoù diwar o fenn gant DELATTRE pe LEON. Bremañ e kaver studiadennoù stankoc’h, da skwer gant Pierre ENCREVE (1988).

Ne glaskin ket amañ ober ur studiadenn diwar-benn ar liammadurioù e galleg, namaed divraziñ ar studi, ha dreist-oll diskoueziñ ar pezh a zo hañval pe kentoc'h dishañval en diw yezh, galleg ha brezhoneg.

Degas a ran da soñj e komzer a liammadur e galleg (*liaison*) pa gomzer ag ur fonem a vez klewet e juntadur daou c'her, dirag ur vogalenn, pa ne vez ket klewet ar fonem-se er ger sanet a-hunan, en e stumm absolut : *petit* [pəti], *petit*<sup>ˈ</sup>*t enfant* [pətiˈtɑ̃fɑ̃]. A-hend-arall, pa vez klewet ar fonem er ger kentañ sanet a-hunan ha klewet iwe er juntadur gant un eil ger, e komzer neuze a chadennadur (*enchânement*), a zo ur fenomen naturel e red ar gomz : *la mer*↗*r est belle* ; *tous*↗*s ensemble* ; *une petite*↗*t histoire* ; *neuf*↗*v heures*. Ne gomzer ket a *liaison* enta (WALTER) ewid gerioù evel *bac*, *péril*, *bonheur*, *nef* hiziw, rag ma vez sanet ataw an dibenn enne : chadennadur a za d'o heul, narenn liammadur. E-kontrel e komzer a *liaison* e gerioù a-sort gant *trop*, *heureux*, *tout*, *petit*, pa zay ar gensonenn-dibenn vud da voud klewet er juntadur : « *j'en ai* *tro* » « mez « *trop*<sup>ˈ</sup>*p heureux* ».

Tu zo d'ar fonemoù kemm er juntadur. Setu perag e ranker komz ag ar c'hensonennoù-dibenn herwez ar c'hontekst : en em gavoud a raont pe e *furm absolut* ar ger (ar ger sanet a-hunan : /tro/) pe en e *furm sandhi* (e chadenn ar c'homz : /trop/).

### 3.5.1. UR SELL WAR ISTOER AR GALLEG

#### 3.5.1.1. Kensonenn-dibenn : sanet pe vud

Troioù achuamant an XIIIved kvd o devoa an dud arrestet a sanañ ar c'hensonennoù dibenn-ger e galleg<sup>78</sup>. E fin an XIIved kvd e veze sanet peb kensonenn dibenn-ger dirag ur vogalenn (1K#B2), mez biken dirag ur

---

<sup>78</sup> Herwez Edith TADDEI (2000 : 34), nad eo ket a-du gant LEON en doa meneget an XI-XIIved kvd (LEON, 1996 : 151).

gensonenn (1K#K2). Setu aze orin ar liammadur, en deus padet beteg an XVIved kvd. E 1531 en doa roet SYLVIUS (Jacques DUBOIS) ar reolenn :

« A la fin du mot nous écrivons mais nous ne prononçons pas l's ou les autres consonnes, excepté lorsqu'elles sont suivies d'une voyelle, ou placées à la fin d'une phrase, ainsi nous écrivons *les femmes sont bonnes* mais nous prononçons *les* avec un son élidé, *femme* sans *s*, *son* sans *t*, *bones*. »

Ha skriv a rae Henri ESTIENNE (1582) en ur mod kazi-fonetikel « ... que nou ne vivon depui troi mois en cete ville. » N'eus namaed er ger *mois* e kaved ur gensonenn-dibenn skrivet ha sanet c'hoazh er liammadur gant bogalenn ar ger da heul.

War a seblant, herwez H. WALTER, a implij ar gerioù *désordre* pe *valse-hésitation* a-fed kensonennoù-dibenn, e kemm an traoù adal kreiz an XVIved kvd. E galleg krenn e oa aet [r] da netra en dibennoù dre **-er** (verboù), **-ier**, **-ir**, **-eur**, **-oir**, ha sanet e veze “*aimé*“ (*aimer*), “*dernié*“ (*dernier*), “*plaisi*“ (*plaisir*), “*menteu*“ (*menteur*), “*terroi*“ [tɛrwe] (*terroir*). Mez stourm oa bet douzh ar fenomen hag adsavet e oa bet an [r]. Dindan levezon ar yezhadurourion an heni eo, ewid un darn anezhe ataw, o doa kroget an dud da sanañ en-dro ar c'hensonennoù-dibenn. Mez en ur mod dizurzh, rag ne veze ket an oll yezhadurourion a-du war peb tra. Kennig a rae VAUGELAS ar stumm « couri » (*courir*) hag « i faut » (*il faut*). En XVIIIved kvd e tikrie yezhadurourion zo « tiroi » (*tiroir*), stumm trefod ewite. Er mare-se iwe e oa daet en-dro ar sanadur **-eur** (e-lec'h **-eu** : « un menteu ») (chomet merkoù ag ar sanadur kozh er galleg a-vremañ : *monsieu(r)*, *boueux* (> *éboueurs*)). E deroù an XIX ved kvd e veze lâret « peri » c'hoazh, e-lec'h *péril*.

Ouzhpenn-se, dindan levezon ar skritur (DELATTRE, 1966 : 56) a zalc'he kont ag an etimologiezh dre skriv lizherennoù na vezent ket sanet, tamm-ha-tamm o doa an dud en em lakaet da sanañ ar lizherennoù-se, dreist-oll adal penn kentañ an XIXved kvd : ours, moeurs, aspect, e-kontrel douzh a reolenn<sup>79</sup> a veze en arver e-raog (TRITTER, 2003 : 88). Kadarnaet e oa bet an dougañs-

<sup>79</sup> Beteg neuze, e galleg, ne veze ket sanet ar c'hensonennoù-dibenn p'en em gavent pe en dibenn absolut pe en ur stadiad entarzh\*.

se gant ar pouez a oa bet lakaet gant ar skolaerion war ar liammadurioù e fin ar c’hantvlead, goude lezennoù Jules Ferry.

### 3.5.1.2. Emdroâdur an -s-dibenn

Er XVved hag en XVIved kved e fatas an -s er yezh uhel. Ewid ar mare-se eh eus bet remerket e fate an s liëz dirag ur gensonenn benn-ger ([s] > ø). Chomel a rae digemm en harzoù ([s] > [s]), ha moned a rae da vouezhekaad dirag ur vogalenn benn-ger ([s] > [z]) (TADDEI, 2000 : 34). Setu aze orin ar liammadur dous ewid an -s-dibenn galleg, na heulia ket modell an oll gensonennoù arall a chom kaled er liammadur.

### 3.5.1.3. Fatadur an e-dibenn

Adal an XVIved kvd e krog an e-dibenn da fatañ, fenomen strewet a-vraz hag ogozig peurachuet e deroù an XVIIIved. Ar pezh a laka ar gensonenn gent da zoned da zibenn sanet enta. Meur a fed a zegouezhe war-un-dro. Da skwer e oa aet [r] da [z] (*mèze, pèze*), fenomen a zegase kemm er chadennadur. Daoust da stourm ar yezhourion douzh ar “tech“-se, stourm efeduz ewid ar peb brasañ, e kaver roudoù a-gement-se er galleg a-vremañ c’hoazh : *chaise ≠ chaire* (PIERRET, 1994 : 179).

Setu an e-mud (“*e muet*”, pe “*e caduc*”) daet da vout unan a broblemoù pennañ skritur ha sanadur ar galleg. Gelloud a raer lâred e verk an e-dibenn ur chadennadur dre red gant ar gensonenn a zo en e raog : *grande* >> *grande* ➔ *d* amie ; *petite* >> *petite* ➔ *ouverture*.

### 3.5.1.3. Liessorted fenomenoù ar juntañ e galleg

Daoust da steuziadur ar gensonenn-dibenn, a zegouezh er ger sanet a-hunan ([grã], [po], [pɥi]) e chom ar gensonenn-dibenn (ha meur a unan gwezhave) er skrid (*grand, pot, puits*) mez chomel a ra iwe er c’homz, er gerioù diveret diouzh un tu (*grandeur* [grãdœr], *potier* [potje], *puisatier* [pɥizatje]), hag iwe, meur a wezh mez pas ataw, e red ar c’homz, evel ur skeudenn ag an amzer a-

gent : *un grand* <sup>ˈ</sup>t *amour...* mez *un pot* <sup>ˈ</sup>ø *à fleurs*, *un puits* <sup>ˈ</sup>ø *artésien*, an arouez < <sup>ˈ</sup>ø > é notiñ ne vez ket liammadur ebed, mez hiatus amañ : [po\_ˈafløer], [pwi\_ˈartezjɛ].

Pa vez sanet ar gensonenn-dibenn e vez-hi chadennet ez-naturel gant bogalennbenn ar ger da-heul. Herwez PIERRET (1994 : 98-101) e vez distaget ar gensonenn-liamm diouzh he c’her-orin ewid sevel silabenn gant bogalenn an eil ger : *des hommes* > [de-zɔm] (Sd. § 3.3.2.1.1., p. 295).

A-bouez eo fenomen ar silabadur-digor-se (da lâred eo gant ur vogalenn) ewid ar galleg. Dirag K2, da lâred eo dirag ur gensonenn arall, e oa aet ar gensonenn-dibenn 1K da ged, ar pezh a zo gwir hiziw c’hoazh (“*un peti(t) car*“). Mez dirag B2, e-kontrel, ne oa ket degouezhet an heveleb tra abalamour ma yae 1K da voud kensonenn gentañ penn-silabenn an eil ger (moned a rae 1K da K2 er c’homz) : “*peti-tenfant*“, rag ne fat ket kensonenn gentañ ar ger (PIERRET, 1994 : 98-101).

### 3.5.2. AR LIAMMADURIOÙ E GALLEG

Studiñ eo bet pegoulz e tegouezh ar liammadurioù, pegoulz e vez anezhe dre red, pegoulz e vezont dired pe berzet (DELATTRE, CARTON, LEON, ÅGREN...) (Sd. § 3.3.2., p. 286). Ne roiñ amañ namaed skwerioù da ziskoueziñ pegen liessort eo sistem ar liammadurioù e galleg d’an heni a glask henn kompren en e bezh.

#### 3.5.2.1. Ur sistem kempleg

Herwez LEON (1996 :152) e kaver ar liammadur e diabarzh ar group ritmeg, da lâred eo ne gaver liammadur ebed goude ur silabenn daol-mouezhiet. Peurliesañ, er liammadur, e klewer ar gensonenn skrivet e dibenn ar ger : *tout* <sup>ˈ</sup>t *à coup*, *trop* <sup>ˈ</sup>p *aimer*, *premier* <sup>ˈ</sup>r *enfant*. Meur a wezh n’eo ket kensonenn ziwezhañ ar ger a vez klewet, mez an eil-ziwezhañ : *respec(t)* <sup>ˈ</sup>k

*humain, des arcs k en ciel, des guets t apens. Mez kemm a ra 1K meur a wezh er liammadur (les z enfants, un grand t homme, six z heures, neuf v ans). Meur a wezh e remerker un difriadur ag an -n dibenn : mon bon n ami [mɔ̃bonami], le divin n enfant (divinãfã).*

Ne laka ket ar galleg harz etre ar gerioù, ha ne vez ket lakaet da santoud ar juntadur namaed pa sant ar c'homzer e rank henn ober ewid boud komprenet. Na ober ar liammadur neuze a c'hell boud diforc'huz : *l'autre est ø ouvert ; l'autre est tout vert ; il [par] avec moi ≠ il [part] avec moi.*

Gwelet hon eus e oa bet termenet tri sort liammadur e galleg, herwez DELATTRE<sup>80</sup> : ar liammadurioù berzet (*liaisons interdites*), ar liammadurioù dired (*liaisons facultatives*), ar liammadurioù dre red (*liaisons obligatoires*). Mez ne vez ket sklaer ataw ar limit etre ar rummadoù, ar pezh a zegas un diaezamant braz d'ar estranjerion a glask deskiñ ar galleg, pa ne vez ket d'ar C'hallegerion zokén : komzet e vez a *liaisons mal-tà-propos*.

Setu amañ un daolenn é tiskoueziñ penaoz e c'hoari liammadur ha koazhadur e galleg, herwez ar yezhadur jenerativel (keñveriañ gant an **Daolenn 5**, p. 320 : ar juntadurioù e brezhoneg) :

	# Kensonenn	# Bogalenn	# K. linkuz	# Hanter-gens.
Kensonenn #	<i>Peti(t) camarade</i>	<i>Petit t ami</i>	<i>Peti(t) rabbin</i>	<i>Petit t oiseau</i>
Bogalenn #	<i>Admirable camarade</i>	<i>Admirabl(e) ami</i>	<i>Admirable rabbin</i>	<i>Admirabl(e) oiseau</i>
K. linkuz #	<i>Cher camarade</i>	<i>Cher ami</i>	<i>Cher rabbin</i>	<i>Cher oiseau</i>
Hanter-gens. #	<i>Pareil camarade</i>	<i>Pareil ami</i>	<i>Pareil rabbin</i>	<i>Pareil oiseau</i>

**Taolenn 14. Ar juntadurioù e galleg.**

Tennet e vez kement-mañ ag an daolenn :

- Fatiñ a ra ar gensonenn-dibenn dirag ur gensonenn, enkontet ar c'hensonennoù linkuz.

<sup>80</sup> In *Studies in French and Comparative phonetics* (1966 : 43...) (meneget gant PIERRET, *op. cit.*). Sd. § 3.3.2., p. 286.

- Ne vez ket sanet an **e**-dibenn dirag ur vogalenn na dirag un hantergenonenn.
- Ne vez ket biken lamet ar c'hensonennoù linkuz nag an hantervogalennoù : n'eo ket diforc'huz ar c'hoazhadur enta, ha tu a vehe da lemel an diw linennad izellañ ag an daolenn.

### 3.5.2.2. Farioù a-fed liammadurioù

Tri sort farioù a vez kavet a-fed liammadurioù e galleg (CARTON) :

- ar pezh a vez graet “*cuir*” anezhañ, da lâred eo pa vez ouzhpennet un **t** e-lec'h n'eus ket anezhañ : *va-t-en guerre*<sup>81</sup>.
- ar pezh a vez graet “*velours*” anezhañ, pa vez ouzhpennet ur **z** : *entre quat-z-yeux*.
- ar “*pataquès*”, a zo ur c'hemmesk liammadur : *ce n'est pa(s)-t-à toi*.

Ne zegouezh ket kement-se pa vez anw a chadennadur : ar gensonenn sanet e fin ar ger an heni eo ez-naturel a ya d'ober liamm gant ar vogalenn da heul (*sac* [sak] > *sac* <sup>◌</sup>*k* à main). Setu perag iwe ne gaver ket sort farioù e brezhoneg (din da ouied ataw), e-lec'h ma vez “chadennet” ar gerioù.

### 3.5.2.3. Ar liammadurioù e galleg : bernusted ar c'hontekst

Ne vez ket sevenet ar liammadurioù en ur mod ingal ataw gant ar memez den. C'hoari a ra kalzig ar c'hontekst hag ar stil (DELATTRE, 1966 : 40). An nebeutañ a liammadurioù a vez remerket er lavar boutin, mez kresk a vez notet er prezegenoù, er lenn a vouezh uhel. Er barzhonegoù e vez klewet ar muiañ a liammadurioù.

### 3.5.2.4. Ar liammadurioù e galleg : merk ar statud sokial

Ewid tapoud ur statud sokial uhel e rank an den, dre heg pe dre gær, kaoud ur sanadur standard, heni ar mediaoù (TRITTER). Seul uhelloc'h ar statud sokial, seul stankoc'h ar liammadurioù sevenet<sup>82</sup>.

<sup>81</sup> Stumm kozh ar verb a oa *vat* : sd. an dro à *Dieu vat* (PR). Neuze, ez-resiz, ne vehe en dro *va-t-en guerre* namaed ur liammadur, pe kentoc'h c'hoazh ur chadennadur (\**vat-en-guerre*).

### 3.5.2.5. Emdroâdur ar galleg war dachenn ar liammadurioù.

Kalz a bouez en doa roet skol Jules Ferry d'ar liammadurioù (TRITTER, 2003 : 129). Herwez MARTINET e kemm ar galleg buan e-keñver ar liammadurioù. Tuet eo an dud d'o seveniñ nebeutoc'h-nebeud, dreist-oll ar re yaouank ("di-euros"). A-c'houde ar bloazioù 1970 e noter fesonoù newez d'o seveniñ, peurged gant ar bolitikourion hag an animatourion radio/tele : sanet e vez ar gensonenn-dibenn (mud er stumm absolut) heb ma heuli ar chadennañ gant B2 (*liaisons sans enchaînement*, ENCREVE, 1988) : *j'avais un rêve* > [ʒa-vez # œ-rɛv] e-lec'h [ʒa-vɛ # zœ-rɛv]. Meur a wezh e vez distaget net ar gensonenn-dibenn diouzh ar ger kentañ ha lakaet d'ober K2 goude un harz : *totalement ... erroné* [totalmã #...tɛrone]<sup>83</sup>.

### 3.5.3. KEÑVERIAÑ AR LIAMMAÑ E GALLEG HAG E BREZHONEG

Gwelet hon eus e vez sanet ar c'hensonennoù-dibenn e brezhoneg, war-bouez direizhterioù iz-rannyezhel, da skwer pa fat an **-d** e Wum : [ma:] ewid **mad**, [ta:] ewid **tad**. Daoust da-se ne ziskouez ket ar brezhoneg boud war hent steuziadur e gensonennoù-dibenn. Neuze ne vimp intereset gant ar galleg amañ namaed ewid ar pezh a c'hell doned a-stok gant sistem ar brezhoneg, ha da heul boud gouest da levezoniñ an deskerion pa vez ar galleg o yezh-vamm, ogozig ar reolenn bremañ.

Dilezel a raimp neuze ar liammadurioù berzet, dilezel iwe ar re dired mar n'int ket sevenet. Ar pezh a vern amañ zo analizañ en ur mod simpl sistem ar galleg pa vez graet ar liammadurioù.

---

<sup>82</sup> Beteg ober farioù (« *Cents euros* » gant ministr an deskadurezh, France Inter, Daniel MERMET, *Là-bas si j'y suis*, 2008).

<sup>83</sup> Digant kentañ prezidant lez-galv Pariz, Europe 1, 01/04/2009, 18H14.



### 3.5.3.1. Gerioù gant ur gensonenn (pe un hantergensonenn)-dibenn sanet en o stummoù absolut

#### 3.5.3.1.1. Kensonennoù sanet ataw :

Skwerioù : *toubib* [tubib], *bac* [bak], *bagad* [bagad], *nef* [nɛf], *gag* [gag], *match* [matʃ]; *cash* [kaʃ], *yack* pe *yak* [jak], *bol* [bɔl], *Tom* [tɔm], *jean* [dʒin], *slip* [slip], *coq* [kɔk], *mer* [mɛr], *bus* [bys], *smart* [smart], *dix* [dis], *gaz* [gaz].

#### 3.5.3.1.2. Hantergensonennoù sanet ataw :

Skwerioù : *pareil* [parɛj] ; *fille* [fij] ; *paille* [paj] ; *paye* [pɛj], *cow-boy* [kobɔj].  
N'em eus ket kavet skwerioù gant [tʃ] pe [w] evel kensonenn-dibenn (1K).

#### 3.5.3.1.3. Reolenn :

Goude ar gerioù-se, kemeret e yezhoù arall aliez, e ta chadennadur : *un toubib* ➔ *b* *anglais* ; *Mohamed* ➔ *d* *Ali* ; *un gag* ➔ *g* *énorme* ; *un match* ➔ *[ʃ]* *important* ; *du haschisch* ➔ *[ʃ]* *afgan* ; *le bac* ➔ *k* *assuré* ; *un slip* ➔ *p* *usé* ; *Reims* ➔ *s* *est une belle ville* ; *le bus* ➔ *s* *arrive* ; *tous* ➔ *s* *ensemble* ; *du pareil* ➔ *[j]* *au même*.

Peurliesañ e chom digemm talvoud ar gensonenn er chadennadur, evel er skwerioù a-uz. Meur a wezh e kemm nawazh : *six* [dis] mez *six* ➔ *z* *ampoules* ; *dix* [dis] mez *dix* ➔ *z* *abeilles* ; *neuf* [nœf] mez *neuf* ➔ *v* *heures*.

### 3.5.3.2. Gerioù gant ur gensonenn (pe un hantergensonenn)-dibenn yud en o stummoù absolut

#### 3.5.3.2.1. Kensonennoù mud :

Da skwer : *tabac* [taba], *lard* [lar], *clef* [kle], *coing* [kwɛ̃], *fusil* [fyzi], *beaucoup* [boku], *premier* [prəmje], *bras* [bra], *muret* [myrɛ], *perdrix* [pɛrdri], *riz* [ri]. Meur a wezh e verk ar gensonenn-dibenn (-**m** pe -**n**) ur friadur-bogalenn : *Riom* [rjɔ̃], *divin* [divɛ̃].

### 3.5.3.2.2. Hantergensonennoù mud :

Da skwer : *bungalow* [bœgalo], *slow* [slo], *squaw* [skwo].

Ne gaver ket skwerioù gant [ɥ] pe [w]-dibenn e galleg.

### 3.5.3.2.3. Reolenn :

Amañ, er juntadur 1K#B2, pa vez 1K mud e stumm absolut ar ger, e vez luzietoc'h an traoù.

Aliéz e vo kavet ur hiatus : *du taba(c)\_à priser* ; *un fusi(l)\_à lunette* ; *du ri(z)\_africain* ; *un slo(w)\_interminable*. E gerioù evel *luth*, un **-h** dibenn enne, dre ma vez mud an **h**-se, e vo klewet chadennadur gant ar gensonenn eil-ziwezhañ (*un luth* ➔ *ancien*). Er gerioù un **r** er stroll-dibenn e vo chadennet ar gerioù gant an **r**-se : *sport* [spɔr] > *un sport* ➔ *intéressant* ; *part* [par] > *de part* ➔ *en part* ; *corps* [kɔr] > *un corps* ➔ *-à-corps* ; *du lard* ➔ *ou du cochon*. Meur a wezh e vez difriet ar vogalenn ha chadennet an **-n** : *le divin* ➔ *enfant* ; *un bon* ➔ *élève*.

### 3.5.3.3. **Sistem ar liammañ e galleg**

Daoust pegen diaez eo termenañ en ur mod simpl patrom-liammañ ar galleg e roan amañ ur skeudenn sklaer a-walc'h anezhañ. Ewid-se ne vo gouarnet amañ namaed an degouezhioù gouest da zoned da gengejañ gant heni ar brezhoneg.

#### 3.5.3.3.1. Galleg : chadennadur :

Reolieg a-walc'h eo ar chadennadur dre ma vez klewet ar gensonenn-dibenn ennañ, gant he zalvoudegezh er stumm absolut : *gag* [gag] > *gag* ➔ *idiot* ; *coq* [kɔk] > *coq* ➔ *en pâte*. Da ziwall zo nawazh douzh an dibenn **-x** a ya gwezh da [s] gwezh da [z], gwezh da netra : *six* [sis] ; *six* ➔ *élèves* ; *si(x)* ➔ *gosses*. (Sd. § 3.5.3.1.3., p. 359).

Er gerioù a achu gant un -e dibenn mud e vez chadennadur iwe, mez gant ar gensonenn a zo e-raog an e-se. Klewet e vez neuze talvoud fonetikel ar gensonenn-se evel ma vez sanet :

- [b/p] : amibes [amib] > *des amibes* ↪ **b** *en nombre* ; pape [pap] > *le pape* ↪ **p** *a dit*.
- [d/t] : grande {grãd} > *grande* ↪ **d** *image* ; pâte [pat] > *pâte* ↪ **t** *à bois*.
- [g/k] : mangue [mãg] > *une mangue* ↪ **g** *énorme* ; manque [mãk] > *un manque* ↪ **k** *à gagner*.
- [z/s] : rose [roz] > *rose* ↪ **z** *et bleu* ; grosse [gros] , *une grosse* ↪ **s** *aiguille*.
- [ʒ/ʃ] : rouge [ruʒ] > *rouge* ↪ [ʒ] *et noir* ; mouches [muʃ] > *mouches* ↪ [ʃ] *à miel*.
- [v/f] : veuve [vœv] > *veuve* ↪ **v** *inconsolable* ; veuf [vœf] > *voeuf* ↪ **f** *inconsolable* ; girafe [ʒiraf] < *girafe* ↪ **f** *adulte* ; neuf [nœf] > *neuf* ↪ **f** *euros*. Namaedenn : *neuf* ↪ **v** *heures*.

War-bouez an -x enta e vez heverk ne zegouezh ket kemm ebed etre sanadur ar gensonenn en dibenn absolut hag an heni a vez klewet er chadennadur. Pa vez chadennadur e c'heller klevoud neuze an oll gensonennoù keñvereg, tres ar vouezh enne pe ged :

GALLEG : TAOLENN AR CHADENNAÑ						
1K ↪ B2						
1K sanet kaled en dibenn absolut	/p/	/t/	/k/	/s/	/ch [ʃ]/	/f/
<b>chadennadur</b> >	/p/	/t/	/k/	/s/	/ch [ʃ]/	/f/
1K sanet dous en dibenn absolut	/b/	/d/	/g/	/z/	/j [ʒ]/	/v/
<b>chadennadur</b> >	/b/	/d/	/g/	/z/	/j [ʒ]/	/v/

Taolenn 15. Taolenn ar chadennañ e galleg (1K ↪ B2).

### 3.5.3.3.2. Galleg : liammadur :

Pa zigouezh ar liammadur (da lâred eo pa vez klewet er juntadur ur gensonenn vud e stumm absolut ar ger) ne glot ket mui ar patrom a jaoj d'ar chadennadur. En e lec'h e kaver hennañ :

GALLEG : TAOLENN AR LIAMMAÑ						
1K <sup>∘</sup> B2						
1K mud skrivet	<b>-p</b>	<b>-d pe -t</b>	<b>-g</b>		<b>∅</b>	<b>∅</b>
<b>Liammadur &gt;</b>	<b>[p]</b>	<b>[t]</b>	<b>[k]</b>		<b>[ʃ]</b>	<b>[f]</b>
1K mud skrivet				<b>-s pe -z</b>		
<b>Liammadur &gt;</b>				<b>[z]</b>		

Taolenn 16. Taolenn ar liammañ e galleg (1K <sup>∘</sup> B2).

Ewid skeudennaouiñ an daolenn, setu amañ skwerioù dre goubladoù kensonennoù, herwez an tres mouezhiet/divouezh. Ne ziskouez ket ar galleg skwerioù ewid an oll soniadoù. Etre krommelloù em eus lakaet an elfennoù n'em eus kavet skwer ebed dezhe :

- (B)/**P** : trop [tro] > *trop* <sup>∘</sup> **p** *important* ; beaucoup [boku] > *beaucoup* <sup>∘</sup> **p** *aimé*.
- **D/T** : second [segõ] > *le Second* <sup>∘</sup> **t** *Empire* ; pied [pje] > *pied* <sup>∘</sup> **t** *-à-terre* ; grand [grã] > *grand* <sup>∘</sup> **t** *homme* ; petit [pøti] > *petit* <sup>∘</sup> **t** *enfant*.
- **G**/(K) : bourg [bur] > *Bourg* <sup>∘</sup> **k** *-en-Bresse*, *Bourg* <sup>∘</sup> **k** *-Achard*.
- **Z/S** : chez [ʃe] > *chez* <sup>∘</sup> **z** *elle* ; les [le], [lɛ] > *les* <sup>∘</sup> **z** *enfants* ; toutes [tut] > *toutes* <sup>∘</sup> **z** *ensemble* ; grands [grã] > *grands* <sup>∘</sup> **z** *hommes* ; très [trɛ] > *très* <sup>∘</sup> **z** *occupé* ; trois [trwa] > *trois* <sup>∘</sup> **z** *étoiles*.
- (J/CH) : skwer ebed.
- (V/F) : skwer ebed.

Ewid kompren an daolenn-se e ranker gouied reizhmat n'eo ket bet dalc'het kont enni namaed ag ar gerioù mud ar gensonenn-dibenn enne, hag a vo klewet er liammadur. Ur bern gerioù a achu gant kensonennoù n'int ket bet notet en daolenn abalamour da zaou dra : sanet e vezont e furm absolut ar ger (*toubib* ; *sac*, *coq*, *krak* ; *six*, *gaz* ; *cash* ; *zef*) (selloud neuze douzh taolenn ar chadennañ (Taolenn 15). Gerioù arall a ziskouez ur gensonenn-dibenn na vez ket klewet er juntadur (liam. berzet) : *tabac* ; *clef*, *cerf*).

Diskoueziñ a ra an daolenn a-uz **kaletâdur** ar liammañ e galleg, namaed ewid **s/z** a laka da klewed an elfenn vouezhiet [z]. Direizh eo ar sistem war ar poent-se enta.

### 3.5.3.4. Sistem liammañ ar brezhoneg 1K#B2

Reishoc'h eo sistem ar brezhoneg, da-geñver ar juntadur 1K#B2 eged m'ema heni ar galleg. E galleg ne gemm ket ar gensonenn-dibenn er chadennadur ha kaletaad a ra kentoc'h pa zigouezh ur liammadur, evel ma hon eus henn gwelet uhelloc'h. E brezhoneg, e-kontrel, e tegouezh ur blotâdur en ur mod reizh hag olleg, herwez an daolenn-mañ :

<b>BREZHONEG : TAOLENN AR LIAMMAÑ</b>						
<b>1K#B2</b>						
Kens.-dibenn divouezh						
Kens.-dibenn vouezhiet	[b]	[d]	[g]	[z]	[ʒ]	[v]

**Taolenn 17. Sistem ar liammadurioù e brezhoneg.**

Tu zo neuze da lakaad tal-ouzh-tal an daou sistem, evel-mañ :

LIAMMAÑ : keñveriañ GALLEG ha BREZHONEG						
Liammañ GALLEG (liaisons)	[p]	[t]	[k]	[z]	[ʃ]	[f]
Liammañ BREZHONEG	[b]	[d]	[g]	[z]	[ʒ]	[v]

Taolenn 18. Liammañ : keñveriañ galleg ha brezhoneg.  
Roll ar c'hensonnoù a vo klewet er juntadurioù.

### 3.6. KLOZADUR AR PENNAD 3

Mar laoskomp a-gostez ar chadennadur galleg (a-gaoz ma c'heller klewoud an oll gensonnoù keñvereg, mouezhiet pe divouezh) ha mar kemeromp ar pezh a denn douzh ar liammadur hebkén (*liaison*) e remerker dreist-oll an enebadur etre an daou sistem. Pa lâr ar galleg *un petit t enfant*, *un grand t enfant*, *Pont t -Ivy* e lâr ar brezhoneg *distaget d eo*, *droed d en deus*, *Pont d Ivi*.

N'eus namaed ar [z] a zo hañval (diwar -s, -x pe -z skrivet) : fr. *les z enfants*, *trois z épis*, *chez z eux* ; bzg. *deus z amañ*, *braz z oc'h* (\**bras z oc'h*)<sup>84</sup>, *dous z eo*<sup>85</sup>.

Mar goulakaomp e c'hell ar galleg levezoniñ ar brezhoneg war dachenn ar liammadurioù (juntadur 1K#B2), e c'hellomp soñjal e vo dre zegas kaletâdur en ur sistem na ziskoueze beteg bremañ namaed blotâdur. Er levezon-se e klaskin muzuliañ pesort pouez a c'heller roiñ d'ar mod da skriv, dreist-oll mod da skriv ar c'hensonnoù dibenn-ger, ar re en em gav er juntadur, lec'h

<sup>84</sup> Da enebañ douzh *brasoc'h* [ˈbrasɔx], derez uhelloc'h.

<sup>85</sup> E kornadoù zo e klewer un /s/ aze, abalamour moarvad e ta ar ger-se ag ar galleg, ha n'eo ket bet brezhonekaet kant dre gant c'hoazh. (Sd. E W : *kas z abarzh*). Un espegadenn arall zo (Sd. notenn 26, p. 303).

kizidig ar c'hemmoù, a zo bet dilezet re liez gant ar c'heleñn, hervez analiz ar levroù-skol.

Gwelet e vo bremañ just a-walc'h, dre ar c'hlaskerezh bet kaset e-tal ar skolidi hag e-tal un nebeud brazarded iwe, mar gellomp notiñ ur levezon a-sort-se, ha beteg pesort poent e c'hoari ar levezon-se bremañ e brezhoneg ar skolioù.

## 4. AN ENKLASK HAG AR REZULTADOÙ

Evel bet lavaret uhelloc'h em boa termenet seizh hipotezenn d'an dezenn-mañ (sd. p. 19). Pal ma c'hlaskerezh neuze a oa dastumm roennoù gouest da gadarnaad ar pezh am boa damsantet, a-benn lâred er fin hag-eñv e oa gwir pe faos ma santimant. Setu bremañ neuze taolennadur an enklask : mod-ober, rezultadoù ha prederiadennoù pedagogel da heul.

### 4.1. PRIENTIÑ AN ENKLASK

#### 4.1.1. KENT AN ENKLASK

Lakaet em boa da gomañs “ne veze ket heuliet kén ar liammadurioù e brezhoneg evel ma vezent sevenet a-gent” (dle. gant ar boblañs bet desavet e brezhoneg, aet da gozh bremañ), evel termenet iwe er yezhadurioù, gant Roparz HEMON, Fransez KERVELLA, Andreo AR MERSER, Fanch MORVANNOU, Albert DESHAYES, Francis FAVEREAU da skwer, mar ne oa ket gant kement yezhour a zo. Ouzhpenn-se e soñjen e oa ur liamm etre an doare da skriv ar c'hensonennoù-dibenn ha sevenidigezh ar liammadurioù. Ha pandeogwir em boa remerket e veze dishañval ar galleg diouzh ar brezhoneg war an dachenn-se, em boa soñjet roiñ da lenn itemoù, lod skrivet dous o c'hensonennoù-dibenn, lod skrivet kaled. Dre geñveriañ sanañ ar skolidi dirag peb rummad itemoù e soñjen e vehe tu din da dennañ titouroù priziuz ewid reteriñ labour ar gelennerion. Ar pezh 'm eus graet enta : savet em eus fichenoù gouestlet d'ar liammadur, pal kentañ ar c'hlaskerezh : ar fichenoù **A1/A2, B1/B2** (blotâdur gortozet).

Ar fichenn **Ey** erfin zo bet savet ewid torriñ mod-sevel ar rummadoù **A/B/C**, da lâred eo ewid roiñ d'an atersidi un destenn a-sort gant ar pezh a vez kavet e darn vrasañ ar stadiadoù-lenn, liammadurioù ha sandhioù kavet kej-mej.




Ouzhpenn-se em eus soñjet gouestliñ diw fichenn (C1/C2) douzh ar juntadurioù pa veze an **h**- eil elfenn hennañ (kaletâdur gortozet). Ar sandhi em eus savet dezhañ diw fichenn iwe (**fichennoù Dx/Dy**).

Tro 'm eus bet da genlabourad gant daou staj “Stummadur uhel” aozet gant Stumdi. Oll ar stajidi enskrivet a oa bet aterset genin e penn kentañ ar staj. Savet em eus diw fichenn ouzhpenn, o fal ma lakaad da weled mar gell an den degas un tamm kemm er mod da sanañ ar liammadurioù gant an newezvrezhonegerion goude tri miziad-labour (**fichennoù S1/S2**).

War-un-dro, peogwir ema sujed ar liammadurioù e roll ar peder reolenn diazez sanadur ar brezhoneg, em eus savet fichennoù arall ewid gweled penaoz e vez heuliet ar reolennoù R1, R2 ha R3 : fichenn F1, gerioù unsilabenneg / fichenn F2, gerioù liessilabenneg). Enkorfet eo bet uhelloc'h ar pezh 'm eus tennet digante er pennadoù a denn douzh studi an teir reolenn-se (Sd. L1, § II).

#### **4.1.1.1. Ar fichennoù A1 hag A2**

Da gentañ em boa savet diw fichenn ewid muzuliañ feur-sevenidigezh ar liammadurioù **dirag ar bogalennoù** : ar **fichenn A1** gant dibennoù dous hag ar **fichenn A2** gant dibennoù kaled. E oa ma soñj gweled mar kemmehe an traoù herwez urzh ar lenn, soñj bet kadarnaet gant Thierry DHORNE (**A1** kent **A2**, pe **A2** kent **A1**). Ewid boud sur ne vehe ket ur skoilh dic'hortoz bennag e endalc'h ar fichennoù em boa graet taolioù-añsi e peder skol (en Oriant / Langidig / Logmenec'h / Pluwigner) kent krogñ ganti da vad.

Ma soñj kentañ a oa bet, zokén ewid ar fichennoù **A1/A2**, roiñ da lenn daou rummad itemoù, un tres a ziforc'h enne hebkén : heni skritur ar gensonenn-dibenn. Labouret em boa gant ar rummad-se (memez itemoù enta) ag an 12.06.2007 betek ar 05.07.2007. Kenniget e oa bet ar fichennoù-se d'an oll CM2. Setu ar fichennoù-se (sinaliñ a ra an arouez ““ lec'h gortozet ar liammadur hag an heni a oa lakaet e-kont, pa'n em gave ouzhpenn ur liammadur en dro-lavar. Ne oa ket merket an arouez-se e fichenn roet d'an atersidi) :

**Fichenn A1xy** (*dibennoù dous*) : 1) Deuz amañ ! 2) Unneg eur.  
3) Pond-Ivi. 4) Klewed em eus. 5) Evid an dud. 6) Prob eo.  
7) Tamm droug ebet. 8) Dañjeruz e oa. 9) Chañj ar bed. 10)  
Sand Erwan.

**Fichenn A2xy** (*dibennoù kaled*) : 1) Deus amañ ! 2) Unnek eur.  
3) Pont-Ivi. 4) Klewet em eus. 5) Evit an dud. 6) Prop eo.  
7) Tamm drouk ebet. 8) Dañjeruz e oa. 9) Chañch ar bed.  
10) Sant Erwan.

Aez e vo anavezoud an enrolladennoù-se war ar CD : goude an oll anvioù-kod a grog gant D2, K2 ha P2 (dle. an oll CM2) em eus lakaet ar lizherenn a ouzhpenn da heul (ds. **D2GgMeA1 a**).

Goude boud bet kenniget an diw fichenn-se d'an atersidi em boa divizet kemm ma mod ober, ha heb chañch natur an dibennoù, roiñ frazennoù pe troioù dishañval war an eil fichenn : seblantoud a rae din e oa re drubuilhet ar skolidi gant an diforc'hioù skritur hag aon am boa e vehe bet liwet ar rezultadoù gant-se, dreist-oll war an diw fichenn-se a oa o fal klask gouied emzalc'h ar skolidi er juntadur 1K#B2 (padal n'em boa ket chañchet netra war ar fichenoù arall).

Setu amañ endalc'h an diw fichenn newez (**xyN**) evel bet roet da lenn d'an atersidi goude ar 5/07/2007 :

**Fichenn A1(xyN)** (*dibennoù dous*) : 1) Deuz amañ ! 2) Ped eur eo?  
3) Unneg eur. 4) Yannig eo. 5) Mad a-walc'h. 6) N'eo ket ar  
mestr. 7) Pond-Ivi. 8) Kousked a ra. 9) Evid an dud. 10)  
Lakaad a ran.

**Fichenn A2 (xyN)** (*dibennoù kaled*) : 1) Un ti bras eo. 2) Deus An  
Orient e oa. 3) Ne oa ket aze. 4) Prop eo. 5) Tamm drouk ebet.  
6) Dañjeruz e oa. 7) Chañch ar bed. 8) Ret eo ober sport. 9)  
N'eus den ebet amañ. 10) Sant Erwan.

#### 4.1.1.2. Ar fichennoù B1 ha B2

Kement arall 'm eus graet ewid klask gouied penaoz e veze sevenet ar liammadur dirag **l, m, n, r** (**fichenn B1**, dibennoù dous / **fichenn B2**, dibennoù kaled) gant ar vrezhonegerion newez. Gwelet hon eus e vez dousaet ar gensonenn-dibenn e brezhoneg dirag **l, m, n, r** e penn ar gerioù da heul, tre evel dirag ur vogalenn, ar pezh na vez ket kavet e galleg. Mez ar wezh-mañ, é vould m'ema kalz rouesoc'h an degouezh dirag ar c'hensonennoù linkuz-se em eus dalc'het ar memez itemoù en diw fichenn. N'eus namaed ar gensonenn-dibenn a ra an diforc'h etre an diw fichenn : dibennoù dous war **B1** ha dibennoù kaled war **B2**.

**Fichenn B1** (*dibennoù dous*) : 1) E peb<sup>ˆ</sup> lec'h. / 2) Un tog<sup>ˆ</sup> ruz. / 3) Parg-<sup>ˆ</sup>Lann. / 4) Kong-<sup>ˆ</sup>Leon. / 5) Deg<sup>ˆ</sup> notenn. / 6) Ma dousig<sup>ˆ</sup> Liza. / 7) Un tog<sup>ˆ</sup> melen. / 8) Ur beg<sup>ˆ</sup> lous. / 9) Peb<sup>ˆ</sup> rummad. / 10) An heveleb<sup>ˆ</sup> levr.

**Fichenn B2** (*dibennoù kaled*) : 1) E pep<sup>ˆ</sup> lec'h. / 2) Un tok<sup>ˆ</sup> ruz. / 3) Park-<sup>ˆ</sup>Lann. / 4) Konk-<sup>ˆ</sup>Leon. / 5) Dek<sup>ˆ</sup> notenn. / 6) Ma dousik<sup>ˆ</sup> Liza. / 7) Un tok<sup>ˆ</sup> melen. / 8) Ur bek<sup>ˆ</sup> lous. / 9) Pep<sup>ˆ</sup> rummad. / 10) An hevelep<sup>ˆ</sup> levr.

#### 4.1.1.3. Ar fichenn Ey

Soñjet em boa e vehe re hañval ma mod-ober : listennadoù-itemoù da lenn. Ewid roiñ un draig ouzhpenn em eus savet ar **fichennad Ey**, un destennig warni, ewid gweled penaoz e yae an traoù war-raog a-fed liammañ er skrid-plaen, pa ne vez ket sachet ewezh an atersad war ar bouelladenn hag he fejoù potañsiel, mez war danvez an destenn. Setu perag em boa savet un destennig aez da gompren (**fichenn Ey**), enni 10 liamm muzuliet (9 dous hag unan kaled, goude **-sk**), strewet e degouezhioù dishañval, gwezh gant dibennoù dous, gwezh gant dibennoù kaled : interesuz e seblante din gweled penaoz e rahe an atersidi gant ur skrid mesket, ennañ « diaezamantoù » hag « aezamantoù ».

Da gentañ em boa soñjet roiñ an destenn gant daou zoare-skriv, Peurunvan-41 (**Ex**) diouzh un tu hag Etrerannyezhel klasel (**Ey**). Goude boud roet an diw fichenn da skolidi ar CM2 em eus dalc’het an eil gwersion hebkén da gennig d’an oll liveioù arall. Setu amañ an diw fichenn memestra :

**Fichenn Ex** : Mat an traoù ! Kousket eo ar babig. Kountant eo e vamm. Serret eo bet dor ar gampr ganti.

Perak e teu bremañ betek ar gegin ? Evit ober kafe da Janig Konan. Degas a ra tasoù ganti. Prop eo an daol. O klask achu ar c’hoari kartoù emaint.

**Fichenn Ey** : Mad an traoù ! Kousket eo ar babig. Kountant eo e vamm. Serret eo bet dor ar gampr ganti.

Perak e teu bremañ betek ar gegin ? Ewid ober kafe da Janig Konan. Degass a ra tassou ganti. Prop eo an daol. O klask achu ar c’hoari kartoù emaint.

#### 4.1.1.4. Ar fichenoù C1 ha C2

Interesuz a gaven iwe muzuliañ talvoudusted an **h**-kensonenn e deroù ar gerioù (an **h** c’hwezhet), hag ewid-se savet ar fichenoù **C1** ha **C2** ewid gweloud seveniñ ar liammadur diragtañ e troioù boutiñ a-walc’h evel **kig-ha-farz** pe **hed-ha-hed**.

Rag setu aze un degouezh a c’hell degas trubuilh c’hoazh e sistem ar liammadurioù, é voud ma vez an **h**-se gwezh mud ha gwezh gant talvoud ur gensonenn (**h** c’hwezhet). Depantoud a ra an dra-se ag ar gerioù : **h**- mud e **ho**, **henn** (skrivet **en** e Peurunvan-41), **hon**, **hol**, **hor**<sup>86</sup>, e **oll** (**holl** e Peurunvan-41). Depantoud a ra iwe deuz ar rannyezhoù, da skwer **hir** : [’i:r] pe [’hi:r] (FAVEREAU, 1992), pa vez c’hwezhet a-hend-arall, pe pa chom roud anezhañ c’hwezhet, evel en dro **kig-*k* ha-farz** e Bro-Leon, daoust d’an **h**- boud aet da netra er rannyezh-se peurvuiañ. (Sd. § 3.3.3.1.2., p. 300).

<sup>86</sup> Mez **h**- kensonenn e parlantoù zo d’an nebeutañ e **henn**, **hi**, **hon-hol-hor** (FAV).

Eveljust n'eo ket bet skrivet disjuntet diw elfenn ar ger **disheñvel** (pe **dishañval**) er fichenn roet da lenn.

**Fichenn C1** (*dibennoù dous*) : 1) Kig ha farz. 2) Glaz ha melen. 3) Hed-ha-hed. 4) Dizheñvel, dishañval. 5) Koad haleg. 6) Kroaz-hent. 7) Un hend hir. 8) Ur pod houarn. 9) An hend houarn. 10) Deg hunvre.

**Fichenn C2** (*dibennoù kaled*) : 1) Kik ha farz. 2) Glas ha melen. 3) Het-ha-hed. 4) Disheñvel, dishañval. 5) Koat haleg. 6) Kroas-hent. 7) Un hent hir. 8) Ur pot houarn. 9) An hent houarn. 10) Dek hunvre.

#### 4.1.1.5. Ar fichenn Dx

Klasket 'm eus iwe gouied pesort roudoù a chome ag ar sandhi kensonennel (**Fichenn Dx**). Evel m'hon eus gwelet eh eus iwe ag ar sandhi dre galetaad p'en em gav diw gensonenn a-stok e limit ar gerioù. N'eo ket ar fenomen-se ken olleg eged ar liammadur vogalennel, ha n'eo ket santet evel ur reolenn. E kornadoù-bro zo e vez bew c'hoazh koulskoude, mez kentoc'h e troioù-lavar boutin. (Bro-Wened ha kreiz-Breizh da skwer). Daoust d'ar sandhi-se boud bet kollet e meur a lec'h e chom roudoù anezhañ c'hoazh e anwioù-lec'h zo (ds. **Loperhet** en dep. 29 ha 56).

Dre skiant-prenet e ouien ne vez ket dalc'het kont ag an sandhi-se er c'helenn brezhoneg, war-bouez nebeud. Setu perag em eus savet ar **fichenn Dx** a-ratozh, 20 item enni, skrivet e Peurunvan-41, gant troioù-lavar pemdezieg a-walc'h e-lec'h ma vez sevenet ar liammadur-se dre galetaad. Soñjet em eus e oa trawalc'h muzuliañ ar poent-se e live uhellañ ar skol, da lâred eo ar lise.

**Fichenn Dx** : 1) Demat deoc'h. 2) Salud deoc'h. 3) Kit du-se ! 4) Evit lâret deoc'h. 5) Deuit bremañ / Dait bremañ ! 6) Komzit din ! 7) Pemp bloaz. 8) Prest da achap. 9) Kaset

d'ar skol. 10) Aes d'ober. 11) Ar pezh a blij din. 12) Me 'm eus lâret dezhi. 13) Ma mab bihan. 14) An hent-bras. 15) Betek bremañ. 16) Dek gwenneg. 17) Mizer 'm eus geti. 18) Chañs 'm eus bet. 19) Me 'gav din / Me 'gav genin. 20) A-gaos da Yann.

#### 4.1.1.6. Ar fichennoù JDK ha JDD

Goude boud kaset ma enklask er skolioù ha kent henn kas pelloc'h gant ar vrazarded, em eus savet diw fichenn arall a-benn gweled levezon ar skritur e diabarzh ar gerioù. Setu renablet din gerioù a-sort gant **raklavar/raglavar** enta, herwez ar mod da skriv ar juntadur diabarzh : pe ewid roiñ harp d'ar lenn pe heb ar soursi-se (Fichenn JDK ha fichenn JDD).

**Fichenn JDK** (*dibenn kaled er juntadur diabarzh*) : 1) **Raklavar** (*préface*) 2) **Isofiser** (*sous-officier*). 3) **Drouklaouen** (*mécontent*). 4) **Neplec'h** (*nulle part*). 5) **Rakleur** (*avant-scène*). 6) **Drouklavar** (*médisance*). 7) **Kentarouez** (*présage*). 8) **Raklun** (*croquis, projet*). 9) **Spiswel** (*voyant*). 10) **Krakaotrou** (*petit monsieur*).

**Fichenn JDD** (*dibenn dous er juntadur diabarzh*) : 1) **Raglavar** (*préface*) 2) **Izofiser** (*sous-officier*). 3) **Drouglaouen** (*mécontent*). 4) **Neblec'h** (*nulle part*). 5) **Ragleur** (*avant-scène*). 6) **Drouglavar** (*médisance*). 7) **Kendarouez** (*présage*). 8) **Raglun** (*croquis, projet*). 9) **Spizwel** (*voyant*). 10) **Kragotrou** (*petit monsieur*).

#### 4.1.1.7. Ar fichennoù Sx ha Sy<sup>87</sup>

Ataw ewid gweled hag-eñv e remerker ur c'hemm goude tri miz labour war dem ar liammadurioù gant stajidi Stumdi, em eus savet erfin ar fichennoù Sx (Peurunvan-41) ha Sy (Kendod\* = Etrerannyezhel heb an daou s<sup>88</sup>).

<sup>87</sup> Pe **S2x** ha **S2y** evel e oant bet anwet da gomañs. Peurliesañ e vo graet **Sx** hag **Sy** anezhe.

<sup>88</sup> Sd. § 5, p. 485.

**Fichenn Sx** (Peurunvan-41) : 1) Hed-<sup>h</sup>ha-hed<sup>h</sup> ar ganol eh eus<sup>h</sup> ur c'hoad<sup>h</sup> haleg. 2) Mar n'eo ket prop<sup>h</sup> e vo ret<sup>h</sup> ober tout<sup>h</sup> en-dro. 3) Ret<sup>h</sup> e vo netaat<sup>h</sup> e pep<sup>h</sup> lec'h. 4) Da bet<sup>h</sup> eur e vo prest<sup>h</sup> Annaig<sup>h</sup> hag Erik<sup>h</sup> en-dro ? 5) Labouret mat<sup>h</sup> en deus<sup>h</sup> Yannick<sup>h</sup> Autret. 6) Kig-<sup>h</sup>ha-farz<sup>h</sup> hon eus<sup>h</sup> holl alejet<sup>h</sup> e Konk-<sup>h</sup>Leon. 7) Grevus<sup>h</sup> e oa bet<sup>h</sup> an aksidant<sup>h</sup> er c'hroazhent. 8) Skrivet<sup>h</sup> e vo ar raklavar evit<sup>h</sup> an dud-se. 9) Perak<sup>h</sup> e vo mat<sup>h</sup> a-walc'h da unnek<sup>h</sup> eur ? 10) Penaos<sup>h</sup> ober evit<sup>h</sup> magañ ar loened<sup>h</sup> yaouank ? 11) He zok<sup>h</sup> roz a oa bet<sup>h</sup> adkavet<sup>h</sup> edan ar bank<sup>h</sup> izel gant<sup>h</sup> Enora.

**Fichenn Sy** (Kendod) : 1) Hed-<sup>h</sup>ha-hed<sup>h</sup> ar ganol eh eus<sup>h</sup> ur c'hoad<sup>h</sup> haleg. 2) Mar n'eo ket prop<sup>h</sup> e vo red<sup>h</sup> ober toud<sup>h</sup> en-dro. 3) Red<sup>h</sup> e vo netaad<sup>h</sup> e peb<sup>h</sup> lec'h. 4) Da bed<sup>h</sup> eur e vo prest<sup>h</sup> Annaig<sup>h</sup> hag Erik<sup>h</sup> en-dro ? 5) Labouret mat<sup>h</sup> en deus<sup>h</sup> Yannick<sup>h</sup> Autret. 6) Kig-<sup>h</sup>ha-farz<sup>h</sup> hon eus<sup>h</sup> holl alejet<sup>h</sup> e Konk-<sup>h</sup>Leon. 7) Grevuz<sup>h</sup> e oa bet<sup>h</sup> an aksidant<sup>h</sup> er c'hroashent. 8) Skrivet<sup>h</sup> e vo ar raglavar evid<sup>h</sup> an dud-se. 9) Perag<sup>h</sup> e vo mat<sup>h</sup> a-walc'h da unneg<sup>h</sup> eur ? 10) Penaoz<sup>h</sup> ober evid<sup>h</sup> magañ ar loened<sup>h</sup> yaouank ? 11) He zok<sup>h</sup> roz a oa bet<sup>h</sup> adkavet<sup>h</sup> edan ar bank<sup>h</sup> izel gant<sup>h</sup> Enora.

War-un-dro em boa roet da lenn diw ficehnn ouzhpenn, na oant ket stag douzh dodenn ar liammadurioù, mez douzh heni an teir reolenn arall : an taol-mouezh, hirder ar vogalenn ha divouezhadur ar gensonenn en dibenn absolut : ar fichennoù **F1** ha **F2** a zo bet komzet anezhe uhelloc'h er chabistr 2.

#### 4.1.2. TERMENIÑ TACHENN MA LABOUR

Rekiz e oa bet din iwe termeniñ niver ar sujedoù ha niver ar skolioù, ha penaoz o ingaliñ. Priziuz e oa bet ewidin alioù Michel MERMET ha Thierry DHORNE ewid-se. Goude boud chelaouet doute em eus termenet niver ar skolioù, niver ar skolidi, ha penaoz ober gant ar fichennoù, da skwer derc'hel

kont a urzh ar lenn (pebeilañ an urzh : **A1** lennet kent **A2** mez **A2** kent **A1** iwe).

A-benn ar fin e voe savet steuñvenn an enklask ewid ar skolidi :

1. E peb gwenod diwyezheg eo e yahan da sontañ : er skolioù **Diwan** ewid ar Soubidigezh ; er **skolioù-Stad** hag er **skolioù katolik** ewid ar Baridigezh-amzer.
2. E peb gwenod e vehe dalc’het : **4** skol kentañ-derez + **3** skolaj + **1** lise.  
En oll : 12 skol + 9 skolaj + 3 lise.
3. 5 live a vehe sontet : CE2, CM2 / 5ved, 3ved / Lise (1<sup>añ</sup> pe term).
4. 5 skoliad a vehe aterset e peb klasad.

Ewid ar vrazarded em eus aterset stajidi Stumdi (stajoù “Stummadur uhel”). Da-geñver an eil staj hebkén em boa savet ar fichennoù **Sx** hag **Sy** : ewid andiw fichenn-se em eus dalc’het namaed 13 atersad diwar 14 (unan klañv). Ouzhpenn-se em eus aterset iwe 3 frezanterez-radio, bet é labourad gante gant an heveleb mod-ober ha staj Stumdi (un atersadeg kent ar stummadur hag un eil goude : amañ ne oa ket e-korf ur staj, mez etre daou benn-dewezh furmadur a oa bet goulennet ganin kas war-raog gante d’ar 14/05/09 ha d’an 18/06/09).

#### 4.1.3. DAREMPREDOÙ GANT AR SKOLIOÙ

Un degemer mad ’m eus bet gant pennensellerion an Akademioù (Aotoù-an-Arvor, Ill-ha-Gwilun, Morbihan, Penn-ar-Bed), ha gant renerezh Diwan ha heni ar skolioù katolik (CAEC). Ur skolaer hebkén en deus rac’hwizet din ma gweladenn. Intereset e tiskoueze boud an darn vuiañ ag ar skolaerion ha kelennerion ewid sujed ma labour. Liez e wel ar re-mañ levezon ar galleg éc’h ober he reuz e brezhoneg o skolidi, heb gouied ataw penaoz ober ewid talañ douti. Mez pa anzavont ar fed-se e soñjont kentoc’h en heni a bouez war ar sintaks (ereadur), pe war ar c’heriaoueg (troioù-lavar, gerioù). Ne welont ket ataw e labour iwe war ar sanadur, ha war an dachenn-se war heni ar liammadurioù. Arabad boud souezhet gant ar poent-se : gwelet hon eus (Sd. §



3.1.2., pp. 270) n'eo ket ar liammadurioù ur sujed a-bouez ewid lod ag an hentennoù brezhoneg, ha zokén ag ar yezhadurioù.

#### 4.1.4. VALIDAÑ AR REZULTADOÙ : Test ar Khi-daou ( $\chi^2$ )

Ewid validañ ar statistikoù e ranker gouied hag-eñv e ta ar resultat ag an dargouez pe ged. Ewid-se e c'heller ober gant test ar *Khi-daou* (pe *Khi-2* pe  $\chi^2$ ) a saver diwar daolenn groazet ar rezultadoù<sup>89</sup>. Dalc'het e vez kont ag an *ddl* (*degré de liberté*), a zepant a niver linennoù ha kolonnennoù an daolenn (diw linenn ha diw golonenn a ro *ddl* = 1). Talvoud *p* a ziskouez niver ar risikoù a fariañ pa lârer ne vez ket dizepant an diw variantenn groazet.

Ema bet lakaet *diazeez ar sinifiusted\** (*seuil de significativité*) da 5%, dle. 0.05, pe 5 chañs diwar 100 a en em drompañ. Pa vez *p* uhelloc'h eged an diazeze-se e ranker selloud douzh ar resultat evel *nann-sinifiuz* (*ns*) : dizepantiz a vehe gant an diw variantenn (dle. ne c'hoari ket unan war heben). A-hend-arall, seul vihannoc'h *p* eged 0.05, seul sinifiuz ar resultat, dle. seul surroc'h hipotezenn an depantiz etre an diw variantenn. Neuze e c'heller lâred eh eus ur liamm etreze (ur variantenn a c'hell pouezañ war an arall enta, ar pezh a glaskañ lâred en dezenn : pouezañ a ra ar mod da skriv war ar mod da sanañ).

Ne dalv ar jediñ namaed gant 5 item d'an nebeutañ. Mez kizidig braz eo ar *Khi-2* douzh an niver kontet : seul vrasoc'h an niver, seul vihannoc'h ar risk a fari pa rac'hwizer hipotezenn an dizepantiz, ha seul vihannoc'h neuze e vo talvoud *p*. Gant niver uhel atersidi ma enklask em eus surraet hipotezenn an depantiz.

Kavet e vo resultat ar validañ ewid ar fichennoù **A1/A2** er § 4.3.2., p. 393.

---

<sup>89</sup> Herwez Julien BARNIER, *Tout ce que vous n'avez jamais voulu savoir sur le  $\chi^2$  sans jamais avoir eu envie de le demander*, Groupe de recherche sur la socialisation, CNRS – UMR 5040 : [jbarnier@ens-lsh.fr](mailto:jbarnier@ens-lsh.fr), 2008, 36 p. Labouret 'm eus iwe gant tri lec'had arall : [www.aly-abara.com](http://www.aly-abara.com), [www.stadon.kokoom.com/tables](http://www.stadon.kokoom.com/tables) ha <http://geai.univ-brest/~carpent/statistiques/khi-deux/>.

## 4.2. MA MOD-OBER GANT AN ATERSIDI

### 4.2.1. CHOAZ AR SKOLIDI ATERSET

Meur a vod zo bet ewidin da gavoud pemp skoliad e peb klas. Setu ar fesonoù dishañval a zo bet, ataw gant akord ar c'helenner, goude un esplegadenn roet genin peurliesañ (diw pe deir gwezh gant ar c'helenner) :

- goulenn g'ar skolidi a-du sevel o biz : neuze e veze choazet ar 5 skoliad petramant genin pe gant kelenner ar c'hlas.
- choazet e veze ar 5 skoliad gant ar mestr, heb goulenn o c'hoant gante.
- choazet e veze ar 5 skoliad ganin, heb goulenn o c'hoant gante.
- herwez an urzh alfabeteg (ar 5 kentañ).

Gant ar feson-se d'ober e oan sur da gavoud ur standilhon liessort, da lâred eo skolidi varreg ha skolidi wannoc'h e brezhoneg ; merc'hed ha paotred ; skolidi youleg prest da zoned ganin ha skolidi leuret.

Ne oan ket re chalet gant live ar skolidi e brezhoneg. Afer ar liammadurioù, war am boa remerket, n'eo ket un afer a live-yezh. Anavoud a raen brazarded barreg a-walc'h e brezhoneg ha liw ar galleg war o liammadurioù<sup>90</sup> en despet dezhe. Daoust da se em eus klasket selloud douzh ar live-yezh memestra, dre atersiñ ar 5 live-skol ag ar CE2 d'ar lise.

Ma soñj a oa iwe atersiñ un nebeud brazarded, en o mesk kelennerion, animatourion-radio, ha tud a beb sort, oll newez-vrezhonegerion, desket ar yezh gante dre gentelioù-noz, dre stajoù, dre levroù pe gant ur skol-veur bennag.

---

<sup>90</sup> Tro am eus bet da remerkiñ iwe, daoust pegen reizh e vez sevenet ar liammadurioù gant lod, e chom roudoù a levezon ar galleg (pe ag ur mod kaled da seveniñ ar liammadurioù, nad eo ket ar mod brezhoneg) gant implij ar rannig-termal "...eu...". Bremañ e ouian e c'heller divinoud penaoz en deus ar c'homzer desket brezhoneg : ogozig sur eo n'eo ket war varlenn e vamm brezhonegerez a-vihanig mar lâr "**penaoz...** *ĉ*\***s** eu..." ; "**ewid...** *ĉ*\***t** eu..." ; dre levroù ne lâran ket !

## 4.2.2. AN ATERSADENNOÙ

### 4.2.2.1. Ar protokol-atersiñ

A-bouez braz e oa lakaad peb krouadur (bugel pe grennard), ha peb brazard zokén, da vout en e aez gant ar labour am boa goulennet gantañ ober. Rag ankeniuz e vez ataw ar sort goulennaouegoù, a c'hell boud kemeret evel un egzamin pe ur barn bennag.

Setu perag e veze kroget ataw gant ur prantadig ewid en em anavoud, ennañ atersoù a-sort gant : “Penaos ema kont ? Pesort anw ho peus ? Ha moned a ra mad er skol ? Ha koutant oc’h é teskiñ brezhoneg ?...”

Goude-sen e lâren da beb unan e oan éc’h ober ur studiadenn a-vraz er skolioù diwyezheg, a-benn gouied *pesort sanadurioù (fesonoù da gomz) a veze kavet hiziv gant an deskerion yaouank* (ha re vraz iwe). O lakaad a raen da *ziwall douzh ar feson ma oa bet skrivet gerioù zo, peadra aze marse d’o souezhañ, mez ne oa ket bil ebed d’ober rag espres-kàer e oant bet skrivet evel-se ganin, ewid an enklask, hag ar pezh a veze goulennet gante e oa lenn peb bomm-lavar er feson ma vezent kustum d’o lâred er skol, er gêr pe en o buhez pemdezieg.*

Ouzpenn-se e lâren dezhe o dehe *amzer a-walc’h da lenn didrouz peb fichenn, ha droed dezhe da c’houlenn ganin sinifiañs ar pezh na vehe ket bet komprenet aez gante* (gerioù, troioù-lavar). Rag *ne oan ket-me intereset d’o enrolliñ kent ma vehe bet sklaer peb tra ewite. Erfin, kent enrolliñ da vad e c’houlennen gante hag-eñv e oant prest pe ged, ha ne vezent ket enrollet biskoazh e-raog boud klewet o respont pozitivel.*

Ewid kas ma labour da benn e c’houlennen ur lec’h distro (ur c’hlas goulle pe ur burew bennag). Goude fin an atersadenn e yae an heni achu ar labour gantañ d’e glas en-dro, da lâred d’ur c’hamarad arall da zoned. Un ugent munud bennag e pade peb atersadenn (namaed gant ar CE2 : 5 mn hebkén a veze trawalc’h, rag ne oa namaed diw fichenn da lenn : **A1** hag **A2**).

Ewid ar fichenn **Ey** e laosken amzer gant peb unan da lenn an destenn didrouz ewid klask he c'hompren, evel ewid an oll fichenoù. Goude-se e lakaen un nebeud atersoù a-benn gouied hag-eñv e oa bet komprenet-mat an istoer :

- *Ped den zo en istoer-se ? Piv ?*
- *Menn (pelec'h) ema ar bebig ? Perag ?*
- *Perag e oa daet Janig Konan da di ar vamm ?*
- *Petra he deus profet ar vamm da Janig Konan ?*

#### **4.2.2.2. Emzalc'h an atersidi**

Red eo gouied n'eo ket ar re vrasañ ar re zinec'hetañ dirag un atersadeg evel honnezh : ar c'hontrel-bew eo. Daoust d'o youl vad ne ziskoueze ket an oll boud didrabas aze. Santoud a raent o diasurded e-keñver ar brezhoneg, ha chalet kentoc'h, daoust dezhe boud respontet *ya* douzh ma goulenn. Koulskoude n'em eus ket bet problem ebed e-pad an atersadennoù : goude an termal kentañ e yae peb unan beteg ar fin heb klemm na rac'hwiziñ biskoazh.

Ar pezh 'm eus remerket, dreist-oll gant ar skolidi mez iwe gant ar skolajidi ha zokén ar liseidi (nebeud-tre gant ar vrazarded), pa o doa bet oll kemeret an amzer da lenn didrouz ar fichenoù, n'o doa ket oll kredet pe soñjet goulenn ster resiz peb item, rag da beb an amzer e c'houlennen gante hag-eñv e ouient petra a oa ster ger-mañ-ger, ha ne ouient ket. Ewid lod e oa sklaer peb tra, n'o doa netra da c'houlenn (padal e chome displann meur a dra), ha lod, daoust dezhe boud goulennet sinifiañs un item pe zaou, a chome heb goulenn ster itemoù arall a oa chomet displann dezhe koulskoude (aez din d'henn remerkiñ diouzh o feson d'o lenn dirag ar mikro).

Daoust da-se, n'em eus ket klasket moned en tu arall ag o goulennoù, daoust ma soñjen a-liez ne oa ket bet komprenet peb tra gante : laosket em boa peb unan gant e respontegezh dirag ar labour, evel er vuhez en ur mod.

#### **4.2.2.3. Tu teknikel an enklask**

##### 4.2.2.3.1. An enrollañ :

Enrollet eo bet peb kendiviz war ur sonenroller nivereg **Olympus VN-2100PC** ha treuskaset war an urzhiataer.

##### 4.2.2.3.2. An enkodañ :

Ur fichennaoueg a veze digoret war ar sonenroller ewid peb fichenn, da lâred eo etre diw hag unneg fichennaoueg ewid peb sujed : 2 ewid ar CE2, 9 ewid ar CM2, 5ved ha 3ved, 11 ewid ar Lise hag ar vrazarded ; ewid ar vrazarded em eus savet daou enklask da heul, tri miz etreze (stajidi “Stummadur uhel” Stumdi).

Da beb fichennaoueg e veze lakaet un anw-kod gant ar mekanik, mez un anw-kod dall ewidin : er gêr e veze rekiz din chelaou peb fichennaoueg a-benn roiñ dezhi un anw-kod sinifiuz, ennañ pemp merk a-ratozh : a) ewid ar sistem (**D** = Diwan, **K** = deskadurezh katolik, **P** = deskadurezh publik) ; b) ewid ar live (**1** = CE2, **2** = CM2, **3** = 5ved, **4** = 3ved, **5** = lise, **6** = brazard, **7** = brazard eil atersadenn) ; c) ewid ar skol (ds. **Ke, Ka, Lu, Li...**) ; d) ur c'hod ewid anw an heni aterset (ds. **Ma, Mx...**) ; e) ha niverenn ar fichenn (ds. **A1, Ey**).

Da skwer : **D5KaMaDx** ; **K3GwLuA1** ; **P4LuMoB2** ; **B6RaCaSx** ;  
**B7StDaJD**.

#### 4.2.2.3.3. Treuzskripañ ar sevenidigezhioù :

Goude boud roet un anw sklaer da beb fichennaoueg e veze rekiz chelaou peb atersad ewid kargañ taolennoù ar chifroù (Excel)<sup>91</sup>, a-benn gelloud, da heul, anavezoud an tregantadoù ha sevel ar grafikoù.

Soñjet em boa da gentañ tremen dre un analiz mekanik ewid lenn ar rezultadoù, mez re hir e vehe bet ar labour-se da gas da benn. Diouzh an tu arall, dre m'ema ar yezh un dra glewet ha diskodet em eus notet an itemoù herwez ma c'hlewed-me : subjektivel-kenañ enta ar pezh 'm eus treuzskrivet. Gwanded ar mod-ober-se nawazh n'eo ket unan e gwirionez, e-sell douzh ar problematik a zo a-dreñv sujed an dezenn : ur strategiezh bedagogel a vo da sevel, da'm soñj, ewid kelenn ar yezh war ziazez ar beder reolenn, ha mestr e vo ar gelennerion war an dachenn-se. Merzoud heniennel ar gelennerion an heni eo enta o lakay da notiñ mankoù o skolidi, da notiñ da skwer e lâront “\**evitandud*“ kentoc'h eged “*evidandud*“. Ne vo aze namaed subjektivezh. Mez war dachenn ar pleustr, war ar pemdez, n'eo ket ar yezh namaed subjektivezh.

#### 4.2.2.4. **Taolenn an enklask**

##### 4.2.2.4.1. Taolenn ar skolidi hag ar fichennaouegoù enrollet :

En daolenn-mañ em eus dalc'het kont ag an atersadennoù aet d'ober danvez an enklask (*statistikoù* pe *stadegoù*). Ouzhpenn-se e oa bet atersadennoù arall bet graet ganin da gomañs, ha dilezet goude, abalamour da veur a abeg : nebeud a interest war an tach petramant ponnerded an enklask ewid ar skolidi. Ar pezh zo degouezhet da skwer gant ar fichenn **Ex**, bet roet er CM2 hebkén ha dilezet goude.

---

<sup>91</sup> Inès BIENVENU he deus gouestlet un amzer hir-braz da sevel an taolennoù-se, ewidin goude da dennañ sav anezhe.

<b>ENKLASK SKOLIDI Enrolliñ</b>		Niver klasoù	Niver atersidi	<b>Ollad skolidi</b>	Fichennoù roet	Enroll.	<b>Ollad ENR.</b>	<b>ENR. war ar CD</b>
CE2	D	4	20	<b>60</b>	2	40	<b>120</b>	<b>120</b>
	K	4	20		2	40		
	P	4	20		2	40		
CM2*	D	4	20	<b>60</b>	5	100	<b>300</b>	<b>301</b>
	K	4	20		5	100		
	P	4	20		5	100		
5ved**	D	3	15	<b>44</b>	9	135	<b>396</b>	<b>393</b>
	K	3	14		9	126		
	P	3	15		9	135		
3ved***	D	3	15	<b>44</b>	9	135	<b>396</b>	<b>351</b>
	K	3	14		9	126		
	P	3	15		9	135		
LISE****	D	1	5	<b>18</b>	10	50	<b>180</b>	<b>176</b>
	K	1	4		10	40		
	P	2	9		10	90		
<b>OLLAD</b>		<b>46</b>	<b>226</b>	<b>226</b>		<b>1392</b>	<b>1392</b>	<b>1341</b>

**Taolenn 19. An enklask er skolioù :**  
**niver an atersidi, niver ar fichennoù roet, niver an enrolladennoù.**

\* Er CM2 e oa bet roet 6 fichenn e gwirionez, ar fichenn **Ex** ouzhpenn, bet dilezet genin goude (dle. 60 fichennaoueg ouzhpenn nad int ket bet kontet en daolenn-mañ, mez kavet e vint en teuliad “OUZHPENN” war ar CD). Ur fichennaoueg ouzhpenn zo (301 e-lec’h 300), a-gaoz ma oa bet savet diw enrolladenn e-lec’h unan ewid ur fichenn **F1** (rummad 1 + rummad 2) : **K2HbEnF1xr1 & K2HbEnF1xr2**.

\*\* Er 5ved e vank 1 enrolladenn, a zo bet kollet (bet analizet nawazh). A-hend-arall ne oa ket bet roet ar fichennoù **F1/F2** d’ur skoliad (diaezamantoù lenn).

\*\*\* En 3ved , daoust dezhe boud bet analizet ganin, e vank fichennaouegoù ur c’hlasad a-bezh, heni **K4Gw**, bet kollet ganin da-geñver ur gudenn urzhiataerezh e deroù 2008).

\*\*\*\* Er Lise, ne glot ket an niver teorikel gant an niver gwirion a-gaoz ma ne oa ket bet roet ar fichenn **Dx** d’ar c’hlasad **K5Lv** (diouwer a amzer an deiz-se).

En oll e vank 51 enrolladenn, a zo bet kollet goude boud bet analizet, da lâred eo ur c’hall a 3% ag an dielloù-son. N’em eus ket o lammet ag ar c’hontoù memestra, daoust din boud bet gellet divankañ 45 anezhe (3ved) aez a-walc’h gant un enrolladenn ouzhpenn bet graet en ur skolaj Diwan (ha renablet en teul “Ouzhpenn” war ar CD. Ewidiñ, daoust n’em boa ket gellet gwiriañ ma analiz gentañ, e oa-hi asur a-walc’h ewid na c’hoari war ar rezultat olleg.

#### 4.2.2.4.2. Taolenn ar vrazarded hag ar fichennaouegoù enrollet :

<b>ENKLASK BRAZARDED Enrolliñ</b>	Fichenoù roet	Niv. Fich.	Niv. Braz.	Niver ENR.
Brazarded <b>B6</b>	<b>A1/A2</b>			
	<b>B1/B2</b>			
	<b>C1/C2</b>	8	28	224
	<b>F2/Dx</b>			
	<b>Ey F1</b>	2	14	28
	<b>JDD/JDK</b>	2	17	34
OLLAD B6				<b>286</b>
Brazarded <b>B7</b>	<b>Sx/Sy</b>	2	13	<b>26</b>
OLLAD B6+B7				<b>312</b>

**Taolenn 20. An enklask gant ar vrazarded :  
niver an atersidi, niver ar fichenoù roet, niver an enrolladennoù.**



Ewid meur a abeg n'eus ket bet ataw ar memez niver a vrazarded aterset pe dalc'het e-kont war an taolennoù Excel war ar live B6. Setu amañ, fichenn ha fichenn, niver an enrolladennoù bet dalc'het kont anezhe : **A1** : 26/28 ; **A2** : 25/28 ; **B1** : 20/28 ; **B2** : 20/28 ; **C1** : 20/28 ; **C2** : 20/28 ; **Ey** : 13/14 ; **F1** : 14/14 ; **F2** : 20/28 ; **Dx** : 20/28 ; **JDD** : 17/17 ; **JDK** : 17/17 ; **Sx** : 13/13 ; **Sy** : 13/13 = 258 en oll. Mez tu a vo da gavoud an oll enrolladennoù (286) en teuliad “**ENR Live VI BRAZARDED**” war ar CD stag.

An 13 brazard bet aterset er live B7 a oa bet aterset dija, tri miz e-raog, (B6).

#### 4.2.2.4.2. Taolenn ar fichenoù roet :

<b>FICHENNOÙ</b>	Niver	Anwioù
CE2	2	<b>A1/A2.</b>
CM2*	5	<b>A1/A2. Ex/Ey. F1. F2.</b>
5ved	9	<b>A1/A2. B1/B2. C1/C2. Ey. F1. F2.</b>
3ved	9	<b>A1/A2. B1/B2. C1/C2. Ey. F1. F2.</b>
LISE	10	<b>A1/A2. B1/B2. C1/C2. Ey. F1. F2. Dx.</b>
Brazarded B6**	12	<b>A1/A2. B1/B2. C1/C2. Ey. F1. F2. Dx. JDK/JDD.</b>
Brazarded B7	2	<b>Sx/Sy.</b>

**Taolenn 21. Dasparzh ar fichenoù roet dre live.**

\* CM2 : sd. remerk (\*) edan an daolenn uhelloc'h (**Taolenn 19**, p. 381).

\*\* B6 : 12 fichenn d'ar muiañ. Sd. an daolenn a-uz ewid kaoud resisted (**Taolenn 20** p. 382).


### 4.3. REZULTADOÙ : AR SKOLIDI

Kentañ tra d'ober e oa sevel ur rummad testoù gouest da roiñ din da weled e pesort mod e veze tretet ar liammadurioù gant ar sujedoù. Diwar ar galleg an heni eo e krog, peurvuiañ d'an nebeutañ, an dud gant ar brezhoneg. Ha dirag daou sistem dishañval en em gav peb deskard pe dost er vro : unan a vez douget da galetaad (ar galleg) hag egile da zousaad (ar brezhoneg).

#### 4.3.1. FICHENNOÙ A1/A2 : LIAMMADUR G'UR VOGALENN (-K B-)

##### 4.3.1.1. Rezultad ar c'hlaskerezh (Fichenn A1/Fichenn A2)

Diskoueziñ a ra ar **Grafik 1** rezultadoù ar c'hlaskerezh diwar-benn ar liammadurioù (kensonenn#vogalenn : 1K B2). A-gleiz e keñveria an diw golonenn sevenidigezh ar liammadur etre ur gensonenn zous hag ur vogalenn (fichenn A1). A-zehoù sevenidigezh ar liammadur etre ur gensonenn galed hag ur vogalenn (fichenn A2) : PB = patrom brezhoneg (liammañ dre vlotaad), PG = patrom galleg (liammañ dre galetaad).



**Grafik. 1. Fichennoù A1/A2 : Skolidi.**


**Levezon skritur ar gensonenn-dibenn war ar liammadur gant ur vogalenn.**

$$(\chi^2 = 435.47 (ddl. 1) ; p < 0.0001)$$


4.3.1.1.1. Levezon ar skritur war ar liammadur gant ur vogalenn :

Splann eo n'eo ket bet sevenet ar liammadurioù en heveleb feson war an diw fichenn. Gant ar fichenn **A1** e ta ar skolidi da seveniñ ar liammadurioù herwez patrom ar brezhoneg (PB ouzhpenn 60%) pa ne chom ket mui namaed 32% gant ar fichenn **A2**. Ar pezh a ziskouez levezon ar skritur war ar sanadur, war boent ar liammadurioù d'an nebeutañ : douget e vez ar skolidi, ha zokén ar liseidi, da zerc'hel kont ag ar pezh a vez skrivet : pa welont un **-t**-dibenn e sanont kentoc'h un [t] er liammadur. Pa vez skrivet un **-d**-dibenn e vezont douget da sanañ un [d].

Setu amañ daou c'hrafik arall tennet ewid ar fichenoù **A1** hag **A2** :



**Grafik. 2. Fichenn A1 : Skolidi (ag ar CE2 d'ar Lise).**  
**Lod ar patrom brezhoneg er liammadur gant ur vogalenn**  
**pa vez skrivet dous ar c'hensonenoù-dibenn (61%).**



**Grafik. 3. Fichenn A2 : Skolidi (ag ar CE2 d'ar Lise).**

**Ar pezh a chom ag ar patrom brezhoneg er liammaduriòù gant ur vogalenn pa vez skrivet kaled ar c'hensonennoù-dibenn (30%).**

Gant **A1** e tiskouez ar PB boud yac'h c'hoazh (un 60% bennag + PB2). Ne gontan ket an Harzoù evel farioù : gelloud a ra ar c'homzer stagañ e c'herioù pe ged. Mez artifisiel un tamm ar rezultad dre ma lenner kensonennoù-dibenn dous ataw war ar fichenn-se (ne vez ket skrivet evel-se er skridoù boutin ha gelloud a ra an atersad tennañ ur mod-ober newez a gement-se).

Pa sellomp douzh ar pezh a zegouezh pa vez skrivet kensonennoù kaled e-lec'h ar re zous e kemm kalz an traoù : ne chom namaed damorantoù ag ar PB, pa vez trec'h sistem ar galleg gant 61%. Levezon ar skrid (amañ dres heni ar gensonenn-dibenn-ger) a vern kalz enta pa vez anw ag ar liammaduriòù.

4.3.1.1.2. N'eo ket kollet ar patrom brezhoneg (liammadur gant ur vogalenn) :

Daoust da bouez ar sistem galleg war ar liammadurioù e chom bew memestra sistem ar brezhoneg : troioù 30% en degouezh diaesañ (gant ar fichenn **A2**). Ar pezh a sinifi n'eo ket daet levezon ar skritur war ar feson da gomz beteg penn c'hoazh : ur levezon eo, ne oa ket ur lezenn absolut e 2007/2008, da dermen an enklask. Padal, pa gouezh ur vodell hengounel d'un drederenn hebkén, daoust ha tu zo c'hoazh da gomz anezhañ evel ag ar patrom brezhoneg ?

4.3.1.1.3. Talañ a ra gwell ar PB en troioù-lavar boutin :

Setu un dra a-bouez, a ziskouez pouez ar patrom klewet en endro. Herwez ma lâr CHEVROT (1999) :

“Le lien entre une signification et certaines unités phonologiques sera plus fort s'il a été souvent mobilisé, en réception ou en production, dans l'histoire langagière du locuteur.”

Daoust ha ne vehe ket tu da astenn ar remerk-se d'ar sanadurioù ? War a seblant geo, da heul rezultadoù an enklask. N'eo ket dister choaz ar skwerioù er fichenoù **A1/A2** (ha kredabl n'henn bo ket muioc'h er fichenoù arall), é voud m'ema an darn vuiañ anezhe troioù boutin a-walc'h, da lâred eo klewet aliez er skol : aesoc'h sanañ mat an troioù boutin... mez adal ma vezont sanet-mat gant an endro, kelennerion ha rac'h ! Setu amañ skwer an troioù-lavar boutinnañ ar fichenoù **A1/A2** :

A1 Dibennoù dous TROIOÙ LÏEZ					
Troioù		<i>Ped eur eo ?</i>		<i>Unneg eur.</i>	
Rezultadoù		SOUB.	PARID.	SOUB.	PARID.
	<b>CE2</b>	19/20 95%	37/40 92.5%	17/20 85%	25/40 62.5%
	<b>CM2<sup>92</sup></b>			20/20 100%	37/40 92.5%
	<b>5ved</b>	15/15 100%	28/29 97%	15/15 100%	26/29 90%
	<b>3ved</b>	15/15 100%	28/29 97%	15/15 100%	29/29 100%
	<b>Lise</b>	5/5 100%	13/13 100%	5/5 100%	13/13 100%
<b>Ollad</b>		<b>98%</b>	<b>95%</b>	<b>96%</b>	<b>86%</b>

**Taolenn 22. Fichenn A1 : Skolidi (ag ar CE2 d'ar Lise).**

**Liammadur dous hervez ar PB e troioù-lavar boutin-braz.**

Setu amañ mestr war e dachenn mod-liammañ ar brezhoneg, na n'ema ! Gant an aters **Ped eur eo ?**, a vez savet noused gwezh e-korf an dewezh gant an oll, re gozh kement ha re yaouank, ema chomet bew ar liammañ dous, beteg er respont : **Unneg eur**. Santet e vez un tammig brall er respontoù nawazh, dreist-oll er gwenodoù dre baridigezh, a c'hell derc'hel douzh ar frekañs vihannoc'h ma tegouezh. Rag eveljust e vehe tu da respont **un, diw, teir eur** ha kement a zo, pa ne vez ket namaed un tu boutin da c'houlenn an eur<sup>93</sup>.

E-kontrel, pa ne vez ket ken liezimplijet an troioù, e vez kollet ar PB a galz. Setu, gant ar memez fichenn **A1** ar pezh a zegouezh gant **Deuz amañ !** ha **Pond-Ivi**, daoust d'ar mod ma oan bet skrivet er fichenn-se :

<sup>92</sup> Kroget em boa an atersadeg gant ar CM2 ha gant ar fichenoù **A1xy** hag **A2xy** e-lec'h ne oa ket bet skrivet an item **Ped eur eo?**. Hañval e oa itemoù an diw fichenn, war-bouez mod da skriv an dibennoù. Goude, enkontet ar CE2, em boa kavet gwell kennig daou roll-itemoù dishañval (fichenoù **A1xyCE2** hag **A2xyCE2**) a oa bet gouarnet da vad beteg fin an enklask.

<sup>93</sup> Troioù arall zo eveljust, na vezont ket klewet ken stank, evel **Pe termen eo ?**

A1					
Dibennoù dous TROIOÙ DIBAOT					
Troioù		<i>Deuz amañ !</i>		<i>Pond-Ivi.</i>	
Rezultadoù		SOUB.	PARID.	SOUB.	PARID.
	<b>CE2</b>	12/20 60%	24/40 60%	6/20 30%	25/40 62.5%
	<b>CM2</b>	8/20 40%	16/40 40%	6/20 30%	11/40 27.5%
	<b>5ved</b>	9/15 60%	17/39 43.5%	8/15 53.5%	15/39 38.5%
	<b>3ved</b>	9/15 60%	20/39 51.5%	8/15 53.5%	23/39 59%
	<b>Lise</b>	4/5 80%	4/13 31%	4/5 80%	9/13 69%
<b>Ollad</b>		<b>56%</b>	<b>47.5%</b>	<b>42.5%</b>	<b>48.5%</b>

**Taolenn 23. Fichenn A1 : Skolidi (ag ar CE2 d'ar Lise).  
Liammadur dous hervez ar PB e troioù-lavar dibaot.**

Ur c'holl ag an hanter a vez gwelet gant ar PB. **Deuz amañ !** a c'hell boud gwelet evel un dro voutin nawazh. Koulskoude ne vez ket implijet e peb lec'h e Breizh gant ar bobl, peogwir ne ra kreiz ar vro namaed gant L2 (**c'hwi : Dait amañ !** pe **Deuit amañ !**, sd. FALC'HUN, 1951, *Figures*, kartennoù 48-49, pp. 52-53). Hervez ar pezh 'm eus remerket e seblant an dro dre **te** en em strewiñ a-vraz er skolioù, zokén en tachadoù e-lec'h ne ra ket an dud gant an dro-se. Ouzhpenn-se em eus bet tu da glewed, ha liez, gant ar skolaerion zokén, pa yaen a skol da skol ewid ma micher margodenner ha goude kuzulier, ur liammadur kaled er frazenn-se (\*[døsamã]).

#### 4.3.1.1.4. Levezon ar skritur a vez kreñvaet pa glot gant heni ar galleg (?) :

Santet e vez kreñvoc'h ar patrom galleg (PG 69%) gant ar fichenn **A2** eged m'ema ar patrom brezhoneg (PB 67%) gant ar fichenn **A1**. Da lâred eo, pa sav an dibennoù a-du gant ar mod galleg da seveniñ ar liammadurioù

(liammadurioù kaled, skrivet **-p, -t, -k, -s, -ch, -f**) e vehe kentoc'h douget ar skolidi da ouarn tres divouezh ar gensonenn-dibenn ha sanañ [p, t, k, s, ʃ, f] . E-kontrel, pellaad diouzh patrom ar galleg a c'houlenn ur striv brasoc'h, ha daoust d'an dibennoù dous, ne za ket ar PB tre a-live gant ar PG hag e zibennoù kaled.

Nawazh, gant dister m'ema an diforc'h (2% hebkén), eh eus tu da selled douzh ar fed-se evel **nann-sinifiuz** amañ.

#### **4.3.1.2. Deskamantoù arall**

Tresoù arall a c'heller tennañ ag an enrolladennoù ha nad int ket diskouezet gant ar **Grafik 1**. Tro am boa bet, da beb an amzer, da c'houlenn gant an atersidi mar soñjent en-devoud lennet an diw fichenn (**A1/A2**) er memez mod (ar pezh a oa d'ober, pandeogwir em boa lâret dezhe lenn e brezhoneg, evel ma vezent kustum da gomz, heb derc'hel kont ag ar skritur). Aliez ne ouient ket re mar o doa lennet hañval an diw fichenn, mez ogozig ataw e respontent e oant bet levezonet gant ar skritur, techet da sanañ ar pezh a oa skrivet, rag n'anavezent ket mat ar reolennoù. Da skwer ur skoliad CM2 en doa lâret e sane “Sanderwan” pa wele un **-d** ha “Santerwan” pa wele un **-t**.

#### **4.3.1.3. Levezon an urzh-lenn**


P'am boa lâret da d/Thierry DHORNE em boa savet ar fichenoù dre goubladoù, unan gant kensonennoù-dibenn kaled hag heben gant kensonennoù dous, eñv en doa kenniget din pebeilañ urzh diw fichenn peb koublad ewid gweled mar ne vehe ket aze ur faktor gouest da lakaad ar rezultadoù da gemm. Ar pezh a zo bet graet ganin.

E peb rummad skolidi aterset em boa notet piw en doa kroget gant ar fichenn **A1**, piw en doa kroget gant ar fichenn **A2**. Ha kement-se gant **B1/B2** ha **C1/C2**.

Setu amañ an disorc'h am eus tennet a zaou live-skol : CM2 ha 3ved.




#### 4.3.1.3.1. An urzh-lenn er CM2 :



**Grafik. 4. G4Fichenn A1 : Skolidi ar CM2.  
Levezon ar urzh-lenn (A1 kent A2 hag A1 goude A2).**


Ne vez merzet diforc'h ebed pe dost etre an daou rummad fichennoù. War a seblant ne ra efed ebed war ar skolidi aterset boud lennet ar fichenn **A1** (dibennoù dous) goude ar fichenn **A2** (dibennoù kaled). Kentoc'h em behe gortaet ur c'hemm en o emzalc'h-lenn, goude boud gwelet e oa bet skrivet dishañval ar c'hensonennoù-dibenn, ar pezh na seblant ket boud bet. Un dra a c'hell boud kaoz a gement-se : ne oa ket ar memez itemoù a oa bet skrivet war an diw fichenn, ar pezh a zo gouest da veuziñ kemm an dibennoù dre sachañ ewezh skolidi ar CM2 pell a-zoc'h ar soursi-se.

4.3.1.3.2. An urzh-lenn en 3ved :



**Grafik. 5. Fichenn A2 : Skolidi (3ved).  
Levezon an urzh-lenn (A2 kent A1 pe A2 goude A1).**

Amañ, **Grafik 5**, gant atersidi vrasoc'h (skolajidi 3ved), e noter kemm : nebeutoc'h a ziforc'h etre PB ha PG goude boud lennet **A2** goude **A1**. Daoust hag-eñv eh eus tu da weloud aze ur preder daet d'ar skolajidi goude boud merzet ar c'hemm e skritur an dibennoù ? Neuze o dehe taolet muioc'h a bled douzh ar juntadurioù ha reizhet o mod da lenn ha da sanañ. Ne chom amañ namaed un hipotezenn. Ewid kas an traoù pelloc'h em eus klasket gouied pesort emzalc'h a oa bet gant ar skolajidi gant ar fichenn **B2** (liammadurioù gant **l, m, n, r**).



**Grafik. 6. Fichenn B2 : Skolidi (3ved).  
Levezon an urzh-lenn (B2 kent B1 pe B2 goude B1).**

Un dougañs vihan a c'hell hon lakaad da grediñ e c'hell ar skolajidi en em c'houlenñ a-gaoz da berag e vez roet diw fichenn hañval dezhe da lenn, pa ne vez namaed ar c'hensonennoù-dibenn hag a gemm : peadra marse d'o lakaad da brederiañ ha marse da zegas un tamm kemm en o doare da sanañ. Nend in ket pelloc'h gant an hipotezenn-se en dezenn-mañ, namaed goulakaad ne vehe ket diseblant ar skolajidi douzh an diskodañ. Gouest e vehent da dennañ muioc'h eged ma kredomp marse ag ar mod da skriv. Rag n'eus namaed o freder-gi en c'hoari aze, é voud ma n'em boa ket-me sachet o ewezh war-se.

#### 4.3.2. VALIDAÑ REZULTADOÙ A1/A2

##### 4.3.2.1. Validañ war ar chifrou olleg

###### 4.3.2.1.1. Jediñ olleg (rezultad ag ar CE2 d'ar Lise) :

Da gentañ em eus jedet ***Khi-daou*** ar rezultadoù olleg ewid ar fichennoù **A1/A2** ag ar CE2 d'ar Lise, a-benn gouied ma oa sur hipotezenn an depantiz

skrid/sanañ er liammadur 1K  $\hat{C}$ B2. Diwar an daolenn-mañ em eus gwiriet ar rezultadoù :

Niver an atersidi	Live	Fichenn A1 (dibennoù skrivet <b>dous</b> )		Fichenn A2 (dibennoù skrivet <b>kaled</b> )	
		Liamm dous	Liamm kaled	Liamm dous	Liamm kaled
60	CE2	331	224	129	351
60	CM2	331	203	161	391
45	5ved	272	142	135	280
45	3ved	334	98	186	232
18	Lise	133	46	77	90
Ollad		<b>1401</b>	<b>713</b>	<b>688</b>	<b>1344</b>

Ewid jediñ ar  $\chi^2$  em eus savet an daolenn groazet-mañ :

	Liammadurioù <b>dous</b>	Liammadurioù <b>kaled</b>
<b>A1</b>	1401	713
<b>A2</b>	688	1344

Rezultad olleg :  $\chi^2 = 435.47$  (ddl. 1) ;  $p < 0.001$ .

Ewid an oll atersidi eh eus ur liamm kreñv etre ar mod da skriv ar gensonenn dibenn-ger hag ar mod da seveniñ ar liammadurioù en degouezh 1K  $\hat{C}$ B2.

4.3.2.1.2. Validañ rezultadoù peb live :

- **CE2** :

	Liamm <b>dous</b>	Liamm <b>kaled</b>
<b>A1</b>	331	224
<b>A2</b>	129	351

Rezultad CE2 :  $\chi^2 = 111.91$  (ddl. 1) ;  $p < 0.001$ .

- **CM2** :

	Liamm <b>dous</b>	Liamm <b>kaled</b>
<b>A1</b>	331	203
<b>A2</b>	161	391

Rezultad CM2 :  $\chi^2 = 117.98$  (*ddl.* 1) ;  $p < 0.001$ .

- **5ved** :

	Liamm <b>dous</b>	Liamm <b>kaled</b>
<b>A1</b>	272	142
<b>A2</b>	135	280

Rezultad 5ved :  $\chi^2 = 91.24$  (*ddl.* 1) ;  $p < 0.001$ .

- **3ved** :

	Liamm <b>dous</b>	Liamm <b>kaled</b>
<b>A1</b>	334	98
<b>A2</b>	186	232

Rezultad 3ved :  $\chi^2 = 96.33$  (*ddl.* 1) ;  $p < 0.001$ .

- **Lise** :

	Liamm <b>dous</b>	Liamm <b>kaled</b>
<b>A1</b>	334	98
<b>A2</b>	186	232

Rezultad Lise :  $\chi^2 = 28.79$  (*ddl.* 1) ;  $p < 0.001$ .

Hipotezenn an departiz etre mod da skriv ha mod da sanañ zo **sinifiuz** enta e peb live an deskadurezh da geñver ar liamm 1K  $\hat{C}$  B2. Levezonet e vez sanadur

an oll atersidi (a-fed liammadurioù) gant ar mod da skriv ar gensonenn dibenn-ger (1K).

#### 4.3.2.2. Test ar Khi-2 war ar rezultadoù heb ar liamm gant s

Gwelet hon eus e oa reolieg ar liammadurioù e brezhoneg dirag ar vogalenn, dirag **l, m, n, r** ha dirag **w/y**. E-kontrel n'eo ket reolieg-groñs sistem ar galleg : mar kaver liammadurioù kaled ewid pezh a sell douzh **p, t, k, ch**, hag **f**, moned a ra **s** (+ **z** ha **x**) da [z]. Ewid lemel ar roenn-se, kumun etre galleg ha brezhoneg, em eus lamet ag ar c'hont an itemoù e-lec'h e c'hortozer ur liammadur dre [z] war ar fichenoù **A1** (item 1) hag **A2** (itemoù 1, 2 ha 6). Mez gouarnet eo bet an eil patrom brezhoneg evel respont mad (PB2).

Niver an atersidi	Live	Fichenn <b>A1</b> (dibennoù skrivet <b>dous</b> ) Heb kontañ an item 1		Fichenn <b>A2</b> (dibennoù skrivet <b>kaled</b> ) Heb an itemoù 1, 2 ha 6	
		Liamm <b>dous</b>	Liamm <b>kaled</b>	Liamm <b>dous</b>	Liamm <b>kaled</b>
60	CE2	294	203	60	265
60	CM2	285	192	88	293
44	5ved	243	131	66	222
44	3ved	299	84	120	178
18	Lise	125	36	47	67
226	<b>Ollad</b>	<b>1246</b>	<b>646</b>	<b>381</b>	<b>1019</b>

Rezultad olleg :

	Liammadurioù <b>dous</b>	Liammadurioù <b>kaled</b>
<b>A1</b> (9 item)	1246	646
<b>A2</b> (7 item)	381	1019

$$\chi^2 = 480.65 \text{ (ddl. 1) ; } p < 0.001.$$

Sinifiuz-braz eo ar liamm etre an diw roenn er liammadur 1K  $\hat{C}$ B2, pa vez dalc'het kont ag ar liammadurioù e-lec'h ma vo klewet /b, d, g, z, v/ hebkén, heb kontiñ ar liamm dre /s/ a vez kumun d'ar galleg ha d'ar brezhoneg.

#### 4.3.2.3. Keñveriañ ar liveioù (liammadurioù sevenet dous gant A1/A2)

Seblantoud a rae din e vehe interesuz keñveriañ ar liveioù, ar pezh am eus graet, ewid gouied hag-eñv e oa sinifiuz ar rezultadoù etre ar skol gentar (kentañ derez), ar skolaj hag ar lise.

##### 4.3.2.3.1. Keñveriañ Skol gentar ha Skolaj :

	Liammadurioù <b>dous</b> gant ar fichenn <b>A1</b>	Liammadurioù <b>dous</b> gant ar fichenn <b>A2</b>
Skol gentar	1246	646
Skolaj	381	1019

$$\chi^2 = 3.71 \text{ (ddl. 1) ; ns (nann sinifiuz).}$$

##### 4.3.2.3.2. Keñveriañ Skolaj ha Lise :

	Liammadurioù <b>dous</b> gant ar fichenn <b>A1</b>	Liammadurioù <b>dous</b> gant ar fichenn <b>A2</b>
Skolaj	606	321
Lise	133	77

$$\chi^2 = 0.31 \text{ (ddl.1) ; ns (nann sinifiuz a-grenn).}$$

#### 4.3.2.3.3. Keñveriañ Skol gentar ha Lise :

	Liammadurioù <b><u>dous</u></b> gant ar fichenn <b>A1</b>	Liammadurioù <b><u>dous</u></b> gant ar fichenn <b>A2</b>
Skol gentar	662	290
Lise	133	77

$$\chi^2 = 3.07 (ddl.1) ; ns.$$

A gement-se e c'hellomp lâred n'eo ket sinifiuz ar rezultadoù etre ar liveioù : n'eus liamm ebed sur etre ar liveioù war gementad ar liammadurioù sevenet dous hervez an diw fichenn **A1/A2**. En ur mod arall, ne seblant ket an traoù kemm etre ar liveioù, dle. ne zepant ket levezon ar skrid (war seveniñ ar liammadurioù dous) ag ar live-skol.

#### 4.3.2.4. **Keñveriañ ar liveioù (liammoù dous vs liammoù kaled gant A1/A2)**

Klasket em eus gouied ouzhpenn ma oa dishañval ar mod da seveniñ ar liammadurioù etre ar Skol gentar, ar Skolaj hag ar Lise. Ewid-se em eus dalc'het kont ag ollad ar liammadurioù dous gant **A1/A2** diouzh un tu vs ollad ar liammadurioù kaled gant **A1/A2**.

##### 4.3.2.4.1. Keñveriañ Skol gentar ha Skolaj :

	Ollad liammadurioù <b><u>dous</u></b> gant <b>A1+A2</b>	Ollad liammadurioù <b><u>kaled</u></b> gant <b>A1+A2</b>
Skol gentar	952	1169
Skolaj	927	752

$$\chi^2 = 39.98 (ddl.1) ; p < 0.001$$

Gelloud a raomp lâred e ra ar skolidi, en desped ag ar mod da skriv, nebeutoc'h a liammadurioù dous eged a liammadurioù kaled : patrom ar galleg a vez kentoc'h gante.



Ar skolajidi e-kontrel, en desped ag ar mod da skriv, a ra un tammig muioc'h a liammadurioù dous eged a liammadurioù kaled.

#### 4.3.2.4.2. Keñveriañ Skolaj ha Lise :

	Ollad liammadurioù <b><u>dous</u></b> gant <b>A1+A2</b>	Ollad liammadurioù <b><u>kaled</u></b> gant <b>A1+A2</b>
Skolaj	927	752
Lise	210	136

$$\chi^2 = 3.5 (ddl.1) ; ns.$$

N'heller ket lâred amañ e vez un diforc'h sinifiuz etre mod-seveniñ ar liammadurioù etres ar skolajidi hag ar liseidi.

#### 4.3.2.4.3. Keñveriañ Skol gentar ha Lise :

	Ollad liammadurioù <b><u>dous</u></b> gant <b>A1+A2</b>	Ollad liammadurioù <b><u>kaled</u></b> gant <b>A1+A2</b>
Skol gentar	952	1169
Lise	210	136

$$\chi^2 = 29.84 (ddl.1) ; p < 0.001$$

Tu zo d'ober ar memez remerkoù amañ eged ar re em eus graet etre ar skolidi hag ar skolajidi.

#### 4.3.2.5. **Klozadur**


Gant ar fichenoù **A1/A2**, a oa o fal taolenniñ stad an traoù e-keñver ar liammadurioù dirag ur vogalenn, eh eus tu da dennañ kement-mañ :

- Anad eo levezon ar skrid war ar mod da seveniñ ar liammadurioù, ar pezh a zo gwir hed-ha-hed ar red-skol (un 30% a bouez war ar mod-sanañ).

- Talañ a ra gwell ar patrom brezhoneg en troioù-lavar a vez klewet liez gant ar skolidi.
- Gelloud a ra an urzh-lenn c'hoari mez nend eus ket kalz a bouez en afer.
- Kreñvoc'h eo pouez ar patrom galleg gant ar skolidi (kentañ derez).
- Liveioù dishañval a vez kavet etre ar skolidi, mez iwe etre ar c'hlasoù, ar pezh a ziskouez war un dro mod da sanañ ar gelennerion hag o freder e-keñver kudenn ar c'hemmadurioù.

#### 4.3.3. FICHENNOÙ **B1/B2** : LIAMMADUR GANT **l-, m-, n-, r-** (-1K( KL2-))

Dirag ar c'hensonennoù linkuz e vo remerket, war ar **Grafik 7**, ur fenomen hañval douzh an heni bet gwelet dirag ar bogalennoù (kensonennoù dous gant **B1** ha laked gant **B2**) :



**Grafik. 7. Fichennoù B1/B2 : Skolidi (ag ar 5ved d'ar Lise).  
Levezon skritur ar gensonenn-dibenn war ar liammadur dirag l, m, n, r.**

#### 4.3.3.1. Damorantoù ar patrom brezhoneg

Amañ c'hoazh e c'heller lâred n'eo ket kollet ar patrom brezhoneg, peogwir e chom, zokén en dro ziaesañ (fichenn **B2** gant dibennoù kaled) ur c'hard (26%) a sevenidigezhioù "brezhoneg", da lâred eo blotaet dirag **l-**, **m-**, **n-**, **r-**. Mez n'eo ket mui namad un damorant ag ar sistem, aloubet stard gant patrom ar galleg : *avec k Léon*, e-lec'h ma san (sane) ar brezhoneg *Konk g-Leon*.

#### 4.3.3.2. Levezon ar skrid


Mez ouzhpenn-se e vez anad levezon ar skritur c'hoazh : pa vez dous ar c'hensonennoù-dibenn (**Fichenn B1**) e vez klewet tost da 60% a sevenidigezhioù dous (reizh herwez PB), mez 26% anezhe hebkén gant dibennoù kaled (**Fichenn B2**).

Ur mod arall da lenn zo iwe : gant dibennoù kaled e ta trec'h ar sanadur mod galleg (74%), a renk gant ar pezh hon eus remerket uhelloc'h dirag ar bogalennoù : ne rahe skrivañ beteg re kensonennoù kaled namaed digoriñ brasoc'h an nor c'hoazh d'ar mod-sanañ galleg.

Diskoueziñ a ra ar **Grafik 7** n'eus norm ebed da glask aze e stad m'ema an traoù, namaed c'hoari daou sistem war an dachenn, unan (heni ar galleg) edan boud ar mestr pa vez roet skridoù da lenn a denn douzh e vod-ober.

Goulennet em boa gant lod ag an atersidi ma o doa lennet hañval an diw fichenn (a oa sañset boud graet, evel ewid **A1/A2** ha **C1/C2**). Lïez ne vezent gouest da lâred hag-eñv o doa graet un diforc'h pe ged, da skwer **D4ArJaB**. Meur a wezh e ansavent n'anavezent ket ar reolenn hag ewid-se heuliet ar skrid, ar pezh en doa lâret din Etienne (3ved). Klewet e vez splann an diforc'h en doa graet en e ziw enrolladenn (**P4LuEtB1** & **P4LuEtB2**).

### 4.3.3.3. Levezon ar mod da gas an diwyezhegezh




**Grafik. 8. Fichenn B1 : Skolidi (ag ar 5ved d'ar Lise).**  
**Liammadur dirag l, m, n, r gant kensonennoù-dibenn dous.**  
**Keñveriañ Soubidigezh ha Paridigezh.**

Un diforc'h a remerker, a ro d'ar Soubidigezh (Diwan) un efedusted un tammig brasoc'h eged ar Baridigezh. N'eo ket a-gefeur gant an amzer o deus tremenet ar skolidi gant ar brezhoneg er skol<sup>94</sup> : tu a vehe bet da c'hortoz un diforc'h netoc'h etre an daou sistem, mez n'eo ket evel-se e kerzh an traoù gant ar yezh. Tro hor bo d'henn remerkiñ c'hoazh. Pa vez skrivet dous ar c'hensonennoù-dibenn e vez klewet ouzhpenn 50% a liammadurioù dous.

Pa gav ar skolidi kensonennoù-dibenn kaled dindan o daoulagad (fichenn **B2**) e c'hoari an traoù evel-mañ (**Grafik 9**) :

<sup>94</sup> Eveljust e tremen skolidi Diwan muioc'h a amzer gant ar brezhoneg eged re ar gwenodoù diwyezheg a vez dindan sistem ar Baridigezh. Hanter-hanter sañset amañ. Mez liez, war an dachenn, e vez roet muioc'h a amzer d'ar galleg ewid meur a abeg : an diduadennoù, an darvoudoù-skol a beb sort e-lec'h e vez mesket brezhonegerion ha gallegerion (er poull-neuñval, en emgavioù-sport...).




**Grafik. 9. Fichenn B2 : Skolidi (ag ar 5ved d’ar Lise).**  
**Liammadur dirag l, m, n, r gant kensonennoù-dibenn kaled.**  
**Keñveriañ Soubidigezh ha Paridigezh.**

Chomel a ra un diforc’h etre Diwan hag ar gwenodoù dre Baridigezh, staget muioc’h skolidi Diwan douzh ar PB, mez an daou sistem a gil kalz pa ne vez ket santet<sup>95</sup> harp ar skrid gant an atersidi (fichenn B2, **Grafik 9**), ur sin a levezon ar skrid war ar Soubidigezh kement ha war ar Baridigezh.


4.3.4. FICHENNOÙ C1/C2 : LIAMMADUR GANT h- (-1K  $\hat{C}$  K2-, [K2 = h-])  
É klask gouied pesort talvoud a chom gant an h- brezhoneg c’hwezhet e oan gant an diw fichenn C1/C2, bet roet adal ar 5ved hebkén. E-kontrel douzh ar liammadurioù dirag ur vogalenn pe dirag l, m, n, r, gant h- e vehe red kaletaad ar liammadur (ds. C1 : kig-  $\hat{C}$  k ha-farz). DIWALL : klotañ a ra ar PB amañ gant ur sevenidigezh kaled ag ar liammadurioù, hag ar PG gant ur sevenidigezh dous, da lâred eo ar c’hontrel ag ar pezh a zegouezh gant ar fichenoù A1/A2 ha B1/B2. Red eo derc’hel soñj n’eo ket un tres olleg er brezhoneg-pobl (Dwb. an h-kensonenn, sd. § 3.3.3.1.2., p. 300). Notet ‘m eus gant ar meneg “ARALL” ar liammadurioù nad int ket bet sevenet dre un divouezhiañ, peurliesañ a-gaoz ma ne oa ket bet dalc’het kont e neb feson ag an h-.

<sup>95</sup> Santet, marse en ur mod diemskiant. Ewid CHEVROT eh eus da ziforc’hañ etre ewezh hag emskiant. Tu zo d’an ewezh boud diemskiant (in *Langue Française*, Vol. 124, N° 1, 1999, pp. 104-125).



**Grafik. 10. Fichenn C1 : Skolidi (ag ar 5ved d'ar Lise).**

**Levezon skritur ar gensonenn-dibenn dous war ar liammadur dirag h-.**



**Grafik. 11. Fichenn C2 : Skolidi (ag ar 5ved d'ar Lise).**

**Levezon skritur ar gensonenn-dibenn galed war ar liammadur dirag h-.**

#### 4.3.4.1. Dalc'husted an h-kensonenn

Estonuz eo gweled e chom bew an **h**-kensonenn e brezhoneg ewid daou abeg : kentañ tra a-gaoz ma ne vez ket klewet e galleg kén ; eil tra rag ma ne vez ket un tres olleg ag ar brezhoneg-pobl evel ma lâren uhelloc'h c'hoazh.

Diaez e c'hell boud d'ar skolidi gouied hag-eñv e vez sanet an **h**-, ha pegoulz. Roiñ a ra ar galleg aze ur patrom dishañval a-grenn (dousâdur pe harz en un nebeud degouezhioù) : *des<sup>z</sup> hommes, des<sup>z</sup> hélices, des<sup>z</sup> hélicoptères, les<sup>z</sup> hémophiles*. Klewet e vez c'hoazh *les<sup>∅</sup> haches, les<sup>∅</sup> Hollandais, les<sup>∅</sup> haricots*, mez liesoc'h-liez *les<sup>\*z</sup> haricots, les<sup>\*z</sup> Hollandais*.

Ne vez ket sanet an oll **h**-où gant ar memez den :

- **D5KaAnC1** : an (h)en(t) # 'hir.

#### 4.3.4.2. Levezon ar skrid

Levezon ar skritur a zo anad amañ c'hoazh (**Grafik 10** ha **Grafik 11**) : gant dibennoù kaled (**C2** : **kik-ha-farz**), ar pezh a ya a-du gant ar sandhi gortozet, e vez klewet ur sevenidigezh kentoc'h kaled (40%) ; mez nebeutoc'h ag ar sevenidigezhioù kaled-se (28%) gant dibennoù dous (**C1** : **kig-ha-farz**) : douget e vez an atersidi da heuliañ ar pezh a vez skrivet amañ c'hoazh.

#### 4.3.4.3. Pouezusted an harzoù

Brasted kementad an harzoù (disjuntadurioù) a vez klewet dirag an **h**- a ziskouez peurliesañ un emzalc'h difer dirag ar gensonenn-se : ne vez ket merzet evel unan vud, ha liez e vez klewet ur c'hwezhadenniñ goude an harz.

Mez meur a emzalc'h-sanañ 'm eus notet :

- Disjuntadur heb sanañ an **h**- : **D4ArFIC1** : koad # '(h)aleg, un (h)en # '(h)ir, ar pod # '(h)ou-arn ; **K4KaKaC1** : un (h)ent # '(h)ir ; **P4LuEIC2** : deg # '(h)unvre.

- Disjuntadur + sanañ an **h**- : **D4KeMaC2** : koad # 'haleg, ur pod # 'hou-arn.

- Kensonenn-dibenn vouezhiet dirag an harz, **h-** mud goude pe pas :  
**K4KaKaC1 : ur c'hroaz # '(h)ent ; D5KaAnC1 : koad # 'haleg.**


- Kensonenn-dibenn divouezh dirag an harz, **h-** sanet goude :  
**D5KaAdC2 : koat # 'haleg.**

Meur a wezh e ra an atersad un harz kent kensonenn-dibenn ar ger kentañ. Honnezh a ya neuze d'ober kentañ lizherenn an eil ger. Kavet e vez ar fenomen-se e galleg iwe, ar pezh a vez graet anezhañ *liammadur heb chadennadur* (*liaison sans enchaînement*) gant ENCREVÉ : *je vou...zaimé !*

- **P4LnAxC1 : koa # taleg.**

#### 4.3.4.4. Levezon ar mod da gas an diwezhegezh


Amañ em eus keñveriet c'hoazh Soubidigezh ha Paridigezh ewid peb fichenn C1 ha C2 :



**Grafik. 12. Fichennoù C1 : Skolidi (ag ar 5ved d'ar Lise).  
Sandhi gant h-kensonenn (C1: kensonennoù-dibenn dous).  
Keñveriañ Soubidigezh ha Paridigezh.**

Prezantet e oa bet ar lenn diaesañ gant ar fichenn C1, pandeogwir e oa bet skrivet dous ar c'hensonennoù-dibenn warni, ar pezh a sache ewezh ar skolidi douzh an tu kontrol diouzh ar sandhi gortozet. Gant ar fichenn C2 hag he dibennoù kaled e oa douget ar skolidi da seveniñ ar sandhi aesoc'h, ha diskoueziñ a ra ar **Grafik 13** realded an hipotezenn-se :





**Grafik. 13. Fichenn C2 : Skolidi (ag ar 5ved d'ar Lise).  
Sandhi gant h-kensonenn (C2 : kensonennoù-dibenn kaled).  
Keñveriañ Soubidigezh ha Paridigezh.**

#### 4.3.4.5. Klozadur

Tu zo da lâred ne vez ket anavezet-mat ar reolenn gant an darn vrasañ ag ar skolidi ha chomel a raont diasur, etre levezon ar galleg ha levezon ar skrid.

### 4.3.5. FICHENN Ey : LIAMMADURIOÙ EN UN DESTENN

#### 4.3.5.1. Remerkoù diwar-benn an enklask

##### 4.3.5.1.1. A-zivoud komprenidigezh an destenn :

Peurliesañ e veze komprenet a-feson an destenn lennet didrouz (**Ey**). Nawazh, zokén gant liseidi, ne veze ket kavet seul gwezh e oa tri den en istoer (*ar bebig, ar vamm, Janig*). Lod a lakae *ar c'honter* ouzhpenn, lod (nebeud e gwirionez) tud arall c'hoazh. Lod a grede e oa Janig Konan eo he doa klasket an tasoù ha kenniget kafe d'ar vamm. Ne oa ket koll amzer enta gwiriañ komprenidigezh an destenn-se kent an enrollañ. Daoust da-se ne veze ket komprenet-mat ar frazenn gentañ, a veze sanet liez evel un aters, an ton anezhi é krapañ d'an diwez, tre evel er frazenn-saludiñ a lâr an dud ewid moned é darempred gant unan bennag : **Mad an traoù ?**


#### 4.3.5.1.2. A-zivoud mod da skriv testenn ar fichenn Ey :

A-hend-arall e prezante an destenn 10 juntadur, gortozet en o mesk 9 liammadur dous ( $1K \cap B2$ ) hag unan kaled ( $1KK \cap B2$ ) goude -sk (**o klask achu**).

En Etrerannyezhel *klassel* e oa bet skrivet an destenn-se, a c'helle sikour ar skolidi da sanañ liammadurioù dous e 4 degouezh muioc'h eged ar Peurunvan-41 : **mañ an traoù, perag e teu, beteg ar gegin, ewid ober kafe** (vs **mañ an traoù, perak e teu, betek ar gegin, evit ober kafe**). Mez ne blaenna ket an Etrerannyezhel oll an diazamantoù a c'hell en em gavoud er juntadurioù : **kountañ eo, serret eo bet, degass a ra, prop eo**. En despet da-se, gant ar pezh hon eus desket beteg bremañ diwar-benn levezon ar skritur war ar sanañ, e c'hellomp soñjal ne vehe ket bet ken braz lod ar PB en degouezh arall.

#### 4.3.5.2. Rezultad olleg ar c'hlaskerezh


Ataw e vo remerket daou sistem en c'hoari c'hoazh, kempouez a-walc'h war ar **Grafik 14 :**



**Grafik. 14. Fichenn Ey : Skolidi (ag ar CM2 d'ar Lise).  
Sevenidigezh ar liammadurioù.**

### 4.3.5.3. Levezon ar skrid

Soñjet em boa da gentañ kennig amañ iwe diw fichenn disañval gant an dibennoù, mez tost douzh ar mod da skriv a c'helle ar skolidi kavoud er skolioù, setu perag em boa savet ar fichenn **Ey** (Etrerannyezhel *klassel*) hag **Ex** (Peurunvan), ar pezh am boa roet da lenn er CM2 hag er 5ved. Mez gant ar ponner e seblante d'an atersidi lenn an oll fichennoù em boa divizet lemel ar fichenn **Ex** ag ar roll. Setu amañ nawazh, da ziskoueziñ e c'hoari an doare-skriv amañ iwe, rezultadoù an enklask darnel bet kaset diglok e pewar CM2 Diwan.




**Grafik. 15. Fichennoù Ex/Ey : Soubidigezh (CM2).**

**Keñveriañ ar mod da skriv war sevenidigezh ar liammadurioù.**

Degas a ra ar pewar item a gemm etre **Ex** hag **Ey** (Peurunvan-41 >>> Etrerannyezhel *klassel*) un diforc'h a dost 10%, ewid gounid an destenn **Ey**. Pa vez mesket an dibennoù (ar re a denn douzh ar liammañ dous hag ar re kontrol) evel ma tegouezh er skridoù ordinal, ne vern pere, e vez santet levezon ar skritur memestra.

#### 4.3.5.4. Keñveriañ Soubidigezh ha Paridigezh



**Grafik. 16. Fichenn Ey (Etrerannyezhel) : ag ar CM2 d’ar Lise.  
Sevenadur ar liammadurioù en un destenn komz-plaen.  
Keñveriañ Soubidigezh ha Paridigezh.**

Gant ar **Grafik 16** e welomp un diforc’h brazig a-walc’h etre Soubidigezh ha Paridigezh, tost da 20% gwell ewid skolidi Diwan, nebeud a bouez warne gant ar sistem galleg, tra ma vez mestr hennezh (tost da 60%) er gwenodoù diwyezheg dre Baridigezh.

#### 4.3.5.5. Emdroâdur an traoù a-hed ar c’hursus-skol

Klasket ‘m eus gouied ouzhpenn penaoz e troe an traoù gant ar skolidi a-hed o zremen dre liveoù heuliuz er skol. Setu un daolenn é tiskouez progresadur ar patrom brezhoneg ag ar CM2 d’ar Lise (**Taolenn 24**) :

<b>Lod ar PB (PB + PB2)</b>	<b>CM2</b>	<b>5ved</b>	<b>3ved</b>	<b>Lise</b>	<b>GOUNID</b>
Soubidigezh	52	59	67	74	+22%
Paridigezh	36	36	45	56	+20%
<b>Krennenn</b>	<b>42</b>	<b>43</b>	<b>52</b>	<b>61</b>	<b>+19%</b>

**Taolenn 24. Fichenn Ey : Skolidi (ag ar CM2 d'ar Lise).**

**Emdroâdur sevenidigezh ar liammadurioù hervez ar patrom brezhoneg  
a-hed ar c'hursus-skol.**

Diskoueziñ a ra ar skol kaoud un tamm efed memestra war he skolidi war ar mod da seveniñ ar liammadurioù. Mez diaez eo komz a efedusted amañ, pa ne remerkomp namaed 20% a wellaad e-korf 6 pe 7 vloaziad-skol. Kredabl e vehe brasoc'h ar gounid mar behe pledet muioc'h war an afer-se. Diaez eo komz iwe a brogresadur, peogwir ne gomzomp ket ag ar memez atersidi a live da live. Ar pezh a c'hell an den lâred eo kement-mañ : diskoueziñ a ra ar liseidi, hiziw, seveniñ muioc'h a liammadurioù dous eged skolajidi an 3ved ; ar re-mañ muioc'h eged skolajidi ar 5ved ; ar re-mañ muioc'h iwe eged skolidi ar CM2. Tu a vehe da gomz a brogresadur pa vehe savet un enklask gant ar memez rummad skolidi ag ar CM2 heuliet hag aterset er 5ved, en 3ved hag er Lise.

#### 4.3.6. FICHENN Dx : AR SANDHI KENSONENNEL (-K<sup>^</sup>K-)

##### 4.3.6.1. Ar sandhi kensonennel hiziw

Gouied a raen ne vez ket klewet kalz ar sandhi kensonennel e brezhoneg hiziw an deiz. Ogozig kollet ema ar fenomen e brezhoneg ar skol evel ma vo gwelet. Nawazh e chom liseidi duac'h d'ar sanadurioù-se e troioù-lavar zo. War am eus gouiet gante, dre ziskutal un tamm, e vezent kentoc'h neuze a Vro-Wened, petramant gi o doa desket komz pe kavet tro da gomz gant ur vamm-gozh ag ar vro-se, pe gant tud Kreiz-Breizh.

Mez zokén en tachadoù e-lec'h ma vez bew ar sandhi c'hoazh ne vez ket klewet kén, pe dost, e komzoù ar liseidi a-vremañ. Kavet e vez meur a wezh nawazh liseidi kustum douzh ar sandhi er-maez ag o bro-orin (ur Gwenedour e lise Diwan Karaez, da skwer).


#### 4.3.6.2. A-zivoud itemoù ar fichenn Dx

E Peurunvan-41 em boa skrivet an oll itemoù (20 anezhe), doare-skriv a favoreka, er juntadurioù, koubladoù e-lec'h ma vez kaled 1K peurvuiñ :

- **-p#b-** : 1 wezh (**pemp bloaz**).
- **-t#b-** : 1 wezh (**deuit bremañ**).
- **-t#d-** : 7 gwezh (ds. **demat deoc'h**).
- **-k#b-** : 1 wezh (**betek bremañ**).
- **-k#g-** : 1 wezh (**dek gwenneg**).
- **-s#b-** : 1 wezh (**chañs 'm eus bet**).
- **-s#d-** : 2 wezh (ds. **aes d'ober**).
- **-s#g-** : 1 wezh (**mizer 'm eus geti**).

N'eus namaed pewar item e-lec'h ma en em gaver gant koubladoù kaled an diw gensonenn enne : **-b#b-** (**ma mab** <sup>◌</sup> **bihan**), **-d#d-** (2 item, ds. **salud** <sup>◌</sup> **deoc'h**), **-j#d-** (**ar pezh a blij** <sup>◌</sup> **din**), ha **-v#d-** pe **-v#g-** (**me 'gav** <sup>◌</sup> **din** pe **me 'gav** <sup>◌</sup> **genin**). Evel-se e lakaen an nebeutañ a skoilhoù ewid d'an atersidi boud douget d'ar mouezhiañ.

### 4.3.6.3. Ar rezultad



**Grafik. 17. Fichenn Dx : Liseidi.**

**Sevenidigezh ar sandhi kensonennel e troioù-lavar boutin a-walc'h.**

**Keñveriañ Soubidigezh ha Paridigezh.**

Tro-dro da 9% hebkén a sandhioù zo bet renablet gant ar liseidi aterset. Gouied a raer n'eo ket ar sandhi un tres strewet e peb kornad ag ar vro. N'eo ket ur reolenn olleg ouzhpenn-se. Setu amañ dasparzh ar rezultadoù herwez ar Lise :

<b>SANDHI (taolenn 1/3)</b>	Niver ar liseidi aterset	Ollad ar sandhioù posubl	Niver ar sandhioù renablet	Performañs uhellañ
KARAEZ	5	100	8	6
LANESTER	5	100	12	4
LANNUON	4	80	5	5
<b>Ollad</b>	<b>14</b>	<b>280</b>	<b>25</b>	

**Taolenn 25. Fichenn Dx : Liseidi.**

**Renabl ar sandhioù renablet gant an enklask.**

Diskoueziñ a ra an **Daolenn 25** e kaver ar muiañ a sandhioù e Lise Lanester, en ur vro e-lec'h e vez bew c'hoazh. Diouzh an tu arall nend eo ket braz er Lise-se ar berformañs vrasañ, pa gaver 6 e Karaez. Mez e Karaez e oa daet 6 sandhi diwar 8 gant ar memez lisead (**D5KaDeDx**), genedig ag ar Morbihan (n'on ket ewid lâred orin heni Lannuon en doa sanet 5 sandhi diwar 5).

Ne oa ket bet klewet ur sandhi ewid peb item. Setu roll an itemoù o doa bet unan d'an nebeutañ :

<b>SANDHI (taolenn 2/3)</b>	Troioù	Sandhioù sevenet	Dasparzh dre Lise
Item 1	<b>Demat <sup>^</sup>deoc'h.</b>	4	Ka 1, Ln 2, Lu 1
Item 2	<b>Salud <sup>^</sup>deoc'h.</b>	7	Ka 2, Ln 4, Lu 1
Item 3	<b>Kit <sup>^</sup>du-se !</b>	1	Ln 1
Item 4	<b>Evit lâret <sup>^</sup>deoc'h.</b>	3	Ka 1, Ln 2
Item 6	<b>Komzit <sup>^</sup>din !</b>	2	Ka 1, Lu 1
Item 7	<b>Pemp <sup>^</sup>bloaz.</b>	2	Ln 2
Item 8	<b>Prest <sup>^</sup>da achap.</b>	1	Ln 1
Item 9	<b>Kaset <sup>^</sup>d'ar skol.</b>	1	Ka 1
Item 12	<b>Me 'm eus lâret <sup>^</sup>dezhi.</b>	1	Ka 1
Item 14	<b>An hent <sup>^</sup>-bras.</b>	1	Ka 1
Item 17	<b>Mizer 'm eus <sup>^</sup>geti.</b>	1	Lu 1
Item 18	<b>Chañs 'm eus <sup>^</sup>bet.</b>	1	Lu 1

**Taolenn 26. Fichenn Dx : Liseidi.**

**Dasparzh ar sandhioù sevenet e-pad an enklask.**

Gant an daolenn-mañ erfin e vo gwelet e pesort degouezhioù e oa bet graet ur sandhi gant ar liseidi aterset :



<b>SANDHI taolenn 3/3</b>	Degouezhioù posubl	Sevenidigezhioù
Sandhi goude - <b>P</b> #	1 x 14 = <b>14</b>	2
Sandhi goude - <b>T</b> #	9 x 14 = <b>126</b>	14
Sandhi goude - <b>K</b> #	2 x 14 = <b>28</b>	0
Sandhi goude - <b>S</b> #	4 x 14 = <b>56</b>	2
Sandhi goude - <b>B</b> #	1 x 14 = <b>14</b>	0
Sandhi goude - <b>D</b> #	1 x 14 = <b>14</b>	7
Sandhi goude - <b>J</b> #	1 x 14 = <b>14</b>	0
Sandhi goude - <b>V</b> #	1 x 14 = <b>14</b>	0
<b>OLLAD</b>	<b>280</b>	<b>25</b>

**Taolenn 27. Fichenn Dx : Liseidi.  
Dasparzh ar sandhioù herwez natur 1K#.**

Kenkoulz lâred n'eus ket mui ag ar fenomen-se e brezhoneg ar liseidi a-hiziw, ne chom namaed roudoù anezhañ.

#### 4.3.7. KLOZADUR

Gant an taolenniñ em eus graet uhelloc'h e welomp resisoc'h penaoz e tremen an traoù e parlant ar skolidi hiziw an deiz pa vez anw a liammadurioù. Setu ar pezh a c'hellomp tennañ ag an enklask :

- 1) Daou sistem a-stur a vez gwelet er skolioù : sistem hengounel ar brezhoneg, bew c'hoazh, mez é koll tachenn dirag pouez an arall, heni ar galleg.
- 2) Levezonet e vez ar lennerion, bihan ha braz, gant ar mod da skriv, dreist-oll amañ mod da skriv ar c'hensonennoù-dibenn, ar pezh a zo gwir hed-ha-hed ar red-skol (un 30% a bouez war ar mod-sanañ).
- 3) Ne vez ket anavezet (mat) reolenn ar blotaad er juntadurioù diavaez ha diabarzh : a) dirag **ur vogalenn** ; b) dirag **l, m, n, r** ; c) dirag an hantergensonennoù **y** ha **w**.
- 4) Gwannoc'h eo ar sistem brezhoneg e-mesk ar skolidi yaouankañ, ar pezh a c'hell sinifioud : a) eh eus ur brouenn aze a levezon ar skol ewid roiñ buhez d'ar reolennoù brezhoneg en-dro, pe, e-kontrel b) e vo muioc'h-mui ag ar mod-se d'ober, a-vuzul ma vrasay ar skolidi-se.

- 5) Derc'hel a ra an deskerion muioc'h douzh ar patrom brezhoneg en troioù-lavar implijet a-liez gant ar bobl e yezh ar pemdez.
- 6) Edan boud kollet ema ar sandhi kensonennel gant ar liseidi.
- 7) Gelloud a ra an urzh-lenn c'hoari mez nend eus ket kalz a bouez en afer.
- 8) Dirag ar gerioù gant **h-**, pa ne vez ket mud hennañ evel e galleg, e vez remerket pe ur c'haletâdur pe ur frekañs war-gresk ag an harzoù.
- 9) Ur liamm stard a ziskouez boud e sanadur an deskerion etre lec'h reizh an taol-mouezh ha reizhted hirder ar vogalenn.
- 10) Nebeud a efed he deus ar skol war emdroâdur sevenidigezh ar liammadurioù (20% gwellaad ag ar CM2 d'ar Lise).
- 11) Diskoueziñ a ra skolidi Diwan (Soubidigezh) derc'hel muioc'h douzh ar patrom brezhoneg eged skolidi ar gwenodoù diwyezheg dre Baridigezh.
- 12) Disparidigezh a vez remerket etre ar skolidi mez etre ar c'hlasadoù iwe. Peadra da roiñ d'an den da soñjal ne vez ket kavet ar memez feson da gomz gant ar skoliataerion a-fed liammadurioù, nag ar memez preder pedagogel. Ouzhpenn-se e c'hell mod-sanañ ar skolidi doned a belloc'h, dle. kent ar CE2.

## 4.4. REZULTADOÙ : AR VRAZARDED

### 4.4.1. YEZH, FAMILH HA SKOL

N'eo ket hañval statud ar brezhoneg douzh heni ar galleg pe douzh heni ne vern pesort yezh brasstrewet. Hiziw, pa arruont er skol-vamm, e anav bugaligoù Frañs, re Vreizh enkontet, ar galleg dija<sup>96</sup>. Ha n'eo ket henn kompren hebkén a raont. Gouest int d'henn komz iwe, ha daoust pegen braz e vo levezon ar vestrez pe ar mestr warne, ne vo en c'hoari, e penn peb krouadur,

---

<sup>96</sup> Ne gomzan ket a vugale an envroïdi a vez gwelet, gwir eo, stankoc'h-stank bremañ, ha n'eo ket er c'herioù braz hebkén, hag a laka ar skolaerion dirag ur gudenn newez, pa vez arabeg, turkeg, ruseg (...) yezh-vamm ar skolidi-se. Skolidi saoznegerion a vez gwelet iwe, aesoc'h gante dre ma anav ar skolaerion ar yezh-se un tamm mat bremañ, dre red.

namaed variantennoù ag ar memez yezh, ar galleg, en ur monedone plaen etre yezh ar gêr, yezh ar gevredigezh, yezh ar skol : daoust pegen dishañval e c'hellhe ar liveioù-yezh boud, e vo implijet ar memez gerioùeg, war-bouez nebeud, ag unan d'an arall : *chaise, table, maison, manger, dormir, beaucoup, grand,...* hag ar memez frammoù-yezh, ha daoust ma vo rekiz sur a-walc'h reizhañ skoliad-mañ-skoliad, ne vo ket trejeboulet ar sintaks penn-da-benn : pinvidikaet e vo galleg ar skolidi gant ar skol goude d'ar galleg-se boud bet pasket gant ar familh endew.

Ewid ar peb brasañ a skolidi ar skolioù diwyezheg (paridigezh pe soubidigezh ne chañch ket kalz a dra aze), e vo diw yezh é c'hoari en un taol adal ma o do lakaet o zreid er skol : yezh ar gêr, ar galleg ogozig ataw, ha yezhoù ar skol, galleg ha brezhoneg. Mez daoust d'ar galleg kaoud nebeutoc'h a amzer ewitañ er c'hlasoù diwyezheg (an hanter-nebeutoc'h sañset er skolioù-Stad pe er skolioù katolik) ne goll ket eno e renk a yezh veur. Ar brezhoneg avad, daoust dezhañ boud tapet ar statud enorabl a *yezh-skol* er c'hlasoù-se, n'eo ket ewid-se ema daet ar maout gantañ da vad. Yezh newez peurvuiañ ewid ar skolidi, yezh ar skol hag ar skol namaeti, ha liesoc'h c'hoazh, e meur a skol-Stad pe a skol gatolik, yezh ar c'hlas, ha yezh ar c'hlas hebkén ! Da lâred eo yezh un den re liez, ar vestrez pe ar mestr. Er-maez ag ar c'hlas e komzer galleg en-dro, e kourt ar skol, er c'hantin, er poull-neuñvial, er c'harr-boutin. Ne ziskouez ket an endro tost liw ar brezhoneg d'ar skolidi : piw en deus muzuliet pouez anwioù-lec'h ar panneloù-hent pe pouez an anwioù-familh war emskiant brezhoneg ar vugale e Breizh<sup>97</sup> ?

Er-maez ag ar pezh a vo klewet gantañ er skol nen do ar c'hrouadur, re liez, namaed un den-dave ewid ar brezhoneg : ar skolaer(ez). Diwan, dre ma sav

---

<sup>97</sup> Tennaet e vez arguzenn aliez ag ar fed-se gant ar skolaerion pe stourmerion ar brezhoneg, pa vez anw a zigoriñ ur gwenod diwyezheg en ur skol bennag, ewid degas soñj d'ar gerent n'int ket e Bro-C'hall : an anwioù-familh (**Creachcadec, Bihannic, Le Braz**) hag an anwioù-lec'h (**Lann-Menhir, Penhouet, Ploumagoar**). Skañved un arguzenn ewid ar vugale ! Setu perag da skwer e klask Ofis ar Brezhoneg lakaad ar brezhoneg muioc'h war-wel er vuhez foran ; setu perag e klask keveladurioù zo sevel stajoù ha kampoù-vakañs e brezhoneg ; setu perag e embanner kazetennoù e brezhoneg ewid ar vugale, perag e c'houlenner iwe radioioù ha chadennoù-tele e brezhoneg : a-benn lakaad da vad ar yezh, dre weled ha dre glewed, e endro pemdezieg peb unan.

*skolioù* brezhoneg ha n'eo ket gwenodoù e diabarzh skolioù galleg, a glask kroueñ un endro stankoc'h ar brezhoneg enni.

Er c'henarroud-sen eo e klask ar vistri kelenn ar brezhoneg. Gelloud a raomp soñjal eh eus ur liamm stard a-walc'h etre sanadur ar skolidi ha sanadur ar vistri er yezh-se, gant dibaot a gomzerion vrezhoneg a vez kavet e endro ar re gentañ. Gwazh, dre skiant-prenet war an dachenn e ouian iwe pegen rouez e vez an darempredoù etre ar skolaerion ha brezhonegerion a-vihannig<sup>98</sup>. Rekiz eo dimp gouied enta penaoz e vez anavezet gant ar skolaerion ar reolennoù a ren ar liammadurioù. Setu perag em eus astennet an enklask da vrazarded zo, enne skolaerion, danvez skolaerion ha tud arall bed desket ar brezhoneg gante en ur skol bennag (skol-veur, kentelioù-noz, stajoù...), e-lec'h e vez ponner a-walc'h ar skrid : mar n'eo ket gant levroù e vez gant fotokopioù, evel ma vez graet ingal bremañ un tammig e peb lec'h.

#### 4.4.2. AR VRAZARDED HAG AN ENKLASK

Ar memez enklask zo bet kaset ganin e-tal ar vrazarded. Dreist-oll em eus aterset stajidi Stumdi, re ar "Stummadur uhel" a zo bet savet newez so. Ar re-se o doa heuliet ur staj 6 miz dija, un nebeud bloazioù e-raog. Ur staj kentañ tri miz a oa bet e Plañvour e mizioù Here, Du ha Kerzu 2008 gant 6 stajiad. Un eil staj e Ebrel, Mae, ha Mezheven 2009 gant 14 stajiad. En oll 20 stajiad, en o mesk 15 skolaer pe skolaerez bet war ar vicher dija. Aterset em eus iwe, ouzhpenn, teir c'hazetenneres radio hag un nebeud tud arall.


Diw fichenn newez zo bet roet dezhe (**JDD** ha **JDK**) ewid gouied penn d'ar mod da seveniñ ar juntadurioù diabarzh. Diw arall c'hoazh ewid klask gouied stad o sanadur da fin ar staj, goude din boud sachet o ewezh war ar poent-se, fichenoù-kendod en ur mod, 40 item e peb unan anezhe (**S2x/S2y**).

---

<sup>98</sup> Ar pezh en doa Kuzul Departamant Penn-ar-Bed klasket gwellaad gant e ragtres « Quêteurs de mémoire » er bloazioù 2005 ha goude.

#### 4.4.2.1. Ar vrazarded hag ar liammadurioù

##### 4.4.2.1.1. Liammadurioù gant ur vogalenn (Fichennoù A1/A2) :



**Grafik. 18. Fichennoù A1/A2 : Brazarded (B6).**

**Sevenidigezh ar liammadurioù dirag bogalennoù.**

$$\chi^2 = 37.38 \text{ (ddl 1) ; } p < 0.001$$


Daoust ma seblant ar vrazarded aterset boud feal d'ar patrom brezhoneg a-fed liammadurioù dirag bogalennoù, n'heller ket lâred e vez mestroniet ingal ar reolenn gant an oll (90% d'ar muiañ, 70% d'an nebeutañ). Anad eo amañ levezon ar skrid c'hoazh, pandeogwir eh eus 20% a ziforc'h etre an diw fichenn : aesoc'h seveniñ ur liammadur blod pa vez dous ar gensonenn-dibenn.

Pa seller dre ar munud douzh ar fichenn Excel **A1B6** e weler e vez sevenet ataw ur liammadur dous ewid an itemoù 2 ha 5 (**Ped eur eo ? / Mad a-walc'h**), ha memez tra (war-bouez ur respont) ewid an item 3 (**Unneg eur**) hag ewid an itemoù 7 ha 10 (war-bouez daou respont) : **Pond-Ivi / Lakaad a ran**. Ema an oll itemoù-se troioù-lavar pemdezieg anavezet mat gant an dud, kozh ha yaouank. Mez ne vez ket ken unvan ar mod da lâred e troioù arall, zokén **Yannig eo pe N'eo ked ar mestr** (itemoù 4 ha 6), na vezont klewet ken liez.

Diouzhtu pa vez kenniget ar fichenn **A2** da lenn gant dibennoù kaled e vez brallet ar vrazarded iwe. Mar da dous ar liammadur e **Un ti bras eo** (it. 1) pe **Ret eo ober sport** (it. 8) e klewer ogozig liammadurioù kaled en itemoù 4 ha 7 (**Prop eo / Chanch ar bed**). Ewid **Sant-Erwan** (it. 10), mar bez aliez sanet “San-Erwan”, ar pezh a zo reizh iwe (PB2), e klewer gwezh “\*Sand-Erwan” (PB) ha ken liez all “San-Terwan”(PG), da heul mod ar galleg *Saint-Yves*, *Saint-André* ha kement a zo.

4.4.2.1.2. Liammadurioù gant ur gensonenn linkuz (Fichennoù **B1/B2**, gant **l, m, n, pe r**) :

Gant ar vrazarded iwe e vez santet levezon ar skritur er juntadurioù dirag **l, m, n, r**, herwez diskouezet gant ar **Grafik 19** amañ. Mestroni ar sistem galleg zo anad arre (38% a vlotâdurioù gant **B1**), ha gwazh c’hoazh pa vez skrivet kensonennoù dibenn-ger kaled (ne chom mui namaed 18% anezhe gant **B2**).




**Grafik. 19. Fichennoù B1/B2 : Brazarded (B6).**

**Liammadur dirag l, m, n pe r.**

$$\chi^2 = 13.59 \text{ (ddl. 1) ; } p < 0.001$$


Splann eo c’hoazh ne vez ket anavezet ar reolenn gant ar vrazarded.

4.4.2.1.3. Liammadurioù gant h- (Fichennoù C1/C2) :



**Grafik. 20. G20 Fichenn C1 : Brazarded (B6).**

**Liammadur gant ur gensonenn-dibenn dous dirag h-kensonenn.**



**Grafik. 21. Fichenn C2 : Brazarded (B6).**

**Liammadur gant ur gensonenn-dibenn galed dirag h-kensonenn.**

Gortaet e vehe bet kaletâdur dirag un **h**-kensonenn, ar pezh a vez klewet nebeud, zokén pa vez skrivet kaled ar c’hensonennoù-dibenn (engorto e oan a gavoud muioc’h a galetâdurioù reizh gant ar fichenn **C2** a-gaoz ma touge ar skritur trema ur c’haletaad, ds. **het-ha-hed**). Mez a-boan ma vez notet (+ 4% e-keñver ar fichenn **C1**-kensonennoù-dibenn dous). Ar pezh a zo heverk eo an harz a vez remerket (beteg 24%) : disjuntet e vez an daou c’her (ewid keñveriañ gant mod da liammañ ar skolidi war ar poent-mañ, sd. **Grafikou 10** pe **11**, p. 404).

Test ar Khi-daou a ro da weled ur liamm sinifiuz etre ar skrid hag ar mod da sanañ evel diskouezet amañ :

	Sandhi dirag <b>h</b> -	Harz	Arall
C1	74	42	77
C2	85	55	53

$$\chi^2 = 6.93 \text{ (ddl. 2) ; } 0.05 < p < 0.02$$


A-bouez eo remerkañ eh eus ur ger sanet reizh ogozig ataw (dle. kaletâdur dirag **h**-) : **dishañval** pe **disheñvel**. Heb douetañs ebed e ta ar sanadur reizh-se ag implij ledan ar ger-se er yezh, heb dezhañ boud ur ger modern. Anavezet e vez dindan ur stumm pe an arall gant an oll Vrezhonegerion. Mar kav an dro **kig-ha-farz** sevenidigezhioù kaled stank a-walc’h iwe, n’eo ken asur an traoù e peb lec’h, zokén e Bro-Leon. E-kontrel e vez lakaet diaez an dud gant troioù na vezont ket implijet liez, a-sort gant **koad-haleg** pe **pod-houarn**. Ur souezhadenn gant **kroazhent** pe **kroashent**, daoust ma vez liez meneget ar skrid *Croissant*, skeudenn c’hallekaet an anwioù-lec’h tost mat douzh ar sanadur hengounel. War a seblant e tegas ar furm **kroashent** un tamm gwellaad : 6 sanadur gant /s/ pa vez skrivet **kroaz-hent** (**C1**) ha 9 pa vez skrivet **kroas-hent** (**C2**). Peadra da gadarnaad Ofis Ar Brezhoneg (da heul kennig HY, AH) da genderc’hel gant ar furm **kroashent** (**Kroashent-tro**), daoust da RH boud kenniget **kroazhent**. War an hent mad e ver aze ewid



aesaad tennañ son ar yezh diwar ar skrid (par ma c’heller eveljust), ar pezh a vo gwelet larkoc’h bremañ.

#### 4.4.2.2. Ar sandhi

Daoust ha kizidikoc’h e vez ar vrazarded douzh fenomen ar sandhi ? Kenniget e oa bet ar fichenn **Dx** dezhe iwe da lenn, ha setu ar pezh a c’hellomp stadañ : diwar an 20 item kenniget e oa daet un 30% a sandhioù gante (**Grafik 22**), pa ne oa namaed 9% gant ar liseidi (**Grafik 17**, p. 413).



**Grafik. 22. Fichenn Dx : Brazarded (B6).**

**Ar sandhi.**

Pa lenner a-dostoc’h e weler un diforc’h braz etre ar vrazarded aterset, lod duac’h d’ar sandhi, gant 15/20 pe ouzhpenn a itemoù sanet kaled (**B6MoSoDx**, **B6MiHeDx**), lod estren-groñs doutañ, gant 0/20.

War ar 28 brazard em boa bet tro da atersiñ, e-mesk ar re o doa sevenet 7 sandhi d’an nebeutañ diwar an 20 posubl, e konter 9 den, an oll ag ar Morbihan. An item 1 (**Demat** <sup>^</sup> **deoc’h**) a oa bet ar muiañ sevenet (17/28), heuliet gant an item 2 (**Salud** <sup>^</sup> **deoc’h** : 15/28) hag an itemoù 7 ha 14 (**Pemp** <sup>^</sup> **bloaz** ; **An hent** <sup>^</sup> **-bras** : 14/28). An itemoù 17 ha 18 n’o doa ket degaset ur sandhi namaed ur wezh hebkén (**Mizer** ‘**m eus** <sup>^</sup> **geti** ; **Chañs** ‘**m eus** <sup>^</sup> **bet**).


### 4.4.2.3. Ar vrazarded hag ar juntadurioù diabarzh

#### 4.4.2.3.1. Kent an enklask :

N'em boa ket klasket gouied e pesort mod e veze sanet ar gerioù, enne ur juntadur diabarzh, gant ar skolidi. Mez ewid diskoueziñ an diaezamant degaset gant ar skritur aze em eus savet diw fichenn ouzhpenn bet prezantet d'ar vrazarded 'm eus aterset (**fichenoù JDK** -kaled- ha **JDD** -dous-, graet amañ **JK** ha **JD** iwe anezhe). Kavet e vez diaezamant dreist-oll dirag **ur vogalenn**, dirag **l, m, n, r**, dirag **w** ha **y** : ataw ar memez problem.


#### 4.4.2.3.2. Rezultadoù ar c'hlaskerezh :

En diw daolenn-mañ e klot ar meneg "sanadur reizh" gant ar sanadurioù notet evel ar re gortozet pe aliet e brezhoneg gant ar geriadurioù ewid gerioù zo, enne ur juntadur diabarzh (FAV2, HY pe AH).



**Grafik. 23. Fichenn JK : Brazarded (B6).**

**Lenn gerioù enne juntadurioù diabarzh skrivet kaled.**



**Grafik. 24. Fichenn JD : Brazarded (B6).  
enn gerioù enne juntadurioù diabarzh skrivet dous.**

Kadarnaad a ra ar c’hlaskerezh ar remerkoù am boa graet uhelloc’h (sd. § 3.4.3., p. 335). Pa vez skrivet ar gerioù da heul ar c’hod fonografeg e vez sanet reizh ogozig ataw (**Grafik 24** : 80%) ; pa ne vez ket dalc’het kont a gement-se e vez kollet kalz a reizhted pandeogwir ne gaver mui namaed 37% a sanadurioù reizh, herwez ar **Grafik 23**, p.424. Ne ziskouez ket ar vrazarded newezvrezhonegerion boud surroc’h war ar poent-mañ eged ar skolidi enta, ar pezh hon laka da soñjal er mod da gelenn ar yezh : ur gudenn olleg zo dindan ar rezultadoù-mañ.


Anatoc’h amañ c’hoazh levezon ar skrid war ar mod da sanañ, rag diaez-braz eo d’an dud, ha pa vehent brazarded, dielfenniñ ar gerioù en ur gomz ewid gouied penaoz reoliañ o sanadur. Eveljust eh eus un heuliad a-bouez d’ar remerk-se : mar ne anav ket ar vrazarded, en o mesk kalz a gelennerion, ar reolennoù, penaoz gortoz ma vo reizh sanadur ar skolidi ?

Un tamm digarez a c’hellomp roiñ dezhe : red eo ansav ema ar furmoù **kentarouez** pe **raklavar** ur gwir doull-trap pa vez ar gerioù-se da vout lennet “**kendarouez**” pe “**raglavar**”! Ne vehe ket diaesoc’h nawazh skriv **raglavar**, **drouglauenn**, **kendarouez** ha kement a zo, pa skriver dija **a-hend-all**, da

skwer. Rag gwazh c'hoazh marse ar gudenn-glotañ etre komz ha skrid pa zigouezh e-kreiz ar gerioù evel aze.

#### 4.2.2.3.3. Levezon urzh ar lenn :

Beteg bremañ, gant ar skolidi, n'hor boa ket remerket netra heverk. Gant ar vrazarded e seblant d'an traoù fichal muioc'h.




**Grafik. 25. Fichenn JK : Brazarded (B6).**

**Levezon an urzh-lenn.**

$$\chi^2 = 0.917 \text{ (ddl. 1) ; } 0.5 < p < 0.3 \text{ (ns)}$$

**Grafik 25** : Pa vez lennet ar fichenn **JK** (j.d. kaled) da gentañ (Urzh A) ne gaver namaed 30% a sanadurioù reizh, ar pezh a zo “normal” herwez poentoù arall ar c’hlaskerezh pa vez skrivet kaled an dibennoù. Mez n’eo ket uzlakaduz\* an daou c’hrafik Urzh A hag Urzh B : urzh ar lenn é c’hoari un tammig, é roiñ ur lec’h brasoc’h d’ar sanadurioù kaled (“direizh”, + 7%). Da lâred eo, goude boud lennet ar fichenn **JD** da gentañ, gant juntadurioù-diabarzh

dous, e tahe soñj d'an atersidi diwall douzh ar juntadurioù diabarzh er fichenn **JK** ha kemm o mod diemskiant da ziskodañ, daoust d'ar c'hensonennoù kaled. Mez n'hellomp ket boud sur a gement-se peogwir n'eo ket sinifiuz ar  $\chi^2$  !



**Grafik. 26. Fichenn JDD: Brazarded (B6).**

**Levezon urzh ar lenn war ar sanadur.**

$$\chi^2 = 8.02 \text{ (ddl. 1) ; } 0.01 < p < 0.001$$

**Grafik 26** : Amañ e-kontrel, lenn ar fichenn **JD** (j.d. dous) da gentañ (Urzh A) a favoreka ar liamm dous er juntadurioù diabarzh (tost da 90%), ar pezh nad eo ket souezhuz. Padal, pa vez lennet **JD** goude **JK** (Urzh B) e remerker un digresk gant ar sanadurioù dous (- 15%) : trubuilhet e vehe bet an atersidi gant an diw fichenn, rag ne oant ket engorto a gavoud ur gudenn aze. Dalc'homp soñj ne oa ket bet komzet ag ar liammadurioù douzh an dud kent an atersadeg, ha ma oa achapet genin un damc'her bennag, sur on d'an nebeutañ ne oa ket bet anw ag ar liammadurioù diabarzh.

Neuze, setu ma hipotezenn : gant an eil fichenn hebkén e tae ar gudenn-sanañ e emskiant an dud. Lenn a raent ar fichenn gentañ herwez ar skrid : **JK** gant he juntadurioù-diabarzh kaled : 70% a sanadurioù kaled. **JD** gant e juntadurioù-diabarzh dous : 90% a sanadurioù dous.

Dre ma oa bet roet dezhe 10 fichenn da lenn kent **JD** ha **JK** o doa komprenet an atersidi perchañs petra a oa dindan an enklask-se. Moian zo soñjal e oa bet trubuilhet an dud-se pa oa bet kenniget dezhe gerioù da lenn, heb juntadurioù diavaez da ziwall doute, hag int é klask gouied e-menn e oa ar gudenn neuze. N'eo ket asur a-walc'h o brezhoneg komzet nag an anaoudegezh a c'hellont boud tapet ag ar yezhadur ewid c'hoari gant "pejoù" ar skritur. Etre daou c'hoant kontrol gwezhave e oant bet : lakaad ar reolenn (peheni ?) da arverin dre heuliañ ar skrid pe dre en em zizober ag ar skrid, pa ouiont pegen treituz e c'hell boud hennezh d'an daoulagad. Klasket o deus neuze "reizhañ" o sanañ, beteg *rereizhañ*\* gwezhave.

Gwir eo e kaver skwerioù a-sort-se e galleg : *second*, sanet "segond", *alchemille*, *anachorète*, *charisme*, *chélidoine*, da sanañ "alkémille", "anakorète", "karisme", "kélidoine" (PR) e-tal *alchimie*, *chyle*, *chyme* gant [ʃ]. Mar ne sav problem ebed gant *second*, anavezet mat gant an oll, ne lâran ket e vez hañval an traoù ewid ar gerioù arall. A-gaoz d'ar skrid forc'helleg e kaver liez daou sanadur e galleg, degemeret o daou meur a wezh (*monachisme*, *pachyderme* sanet gant [ʃ] pe gant [k]) mez pas ataw (*gageure* a vez da sanañ "gajure", narenn "\*gajure", ar sanadur diwezhañ-se klewet liesoc'h eged "gajure" marse c'hoazh, daoust d'ar geriadurioù roin ar patrom reizh<sup>99</sup>). Ne vez ket an darn vuiañ ag an dud, zokén desket, evel kazetennerion ar radio/tele, é voned plaen da furchal ewid anavoud sanadur "reizh" ar ger-mañ-ger, keneve-se ne vehe ket kement a variezon er yezh ("conchiliculteur", gant ar soniad /ʃ/), a c'heller klewoud bremañ er radio). Daoust d'ar variadur nawazh e vez unvan a-walc'h ar yezh kumun en deskadurezh hag ar mediaoù.

Ewid ENCREVE & al. (2007 : 25) en deus ar skrid, zokén e galleg, ur pouez braz-meurbed bremañ, brasoc'h eged ar pezh a soñje an dud ugent pe tregont vloaz so. Komision Brussels he deus renablet etre 600 000 ha 700 000 ger galleg, ha krouet e vez etre 20 ha 30 000 newez beb bloaz. Pezh a zo : ar peb brasañ ag an oll c'herioù-se zo dianav peurvuiañ gant ar bobl, ha pa vezont dizoloet e vez dre ar skrid kentoc'h.

---


<sup>99</sup> « *Gageure* [gaʒyʁ ; souv. gaʒœʁ, fautif] », PR.

Ewid pezh a sell douzh ar brezhoneg, e vern muioc'h ar skrid eged ar c'homz c'hoazh ewid an deskerion (AR MERSER, CORBEL, TRICOIRE<sup>100</sup>...) ha pouezusoc'h c'hoazh neuze teurel pled douzh ar problem-se mar faota dimp gelloud kelenn aez a-walc'h hor yezh.

#### 4.4.2.4. Ar vrazarded hag an teir reolenn arall

Roiñ a ran amañ ouzhpenn rezultadoù ar vrazarded ewid ar reolennoù R1, R2 ha R3, ewid ma vo tu d'ar lenner gweled diouzhtu ar liamm a c'hell boud etre mod-sanañ ar vrazarded aterset (meur a gelenner en o mesk) ha heni ar skolidi (sd. L1, § 2).

##### 4.4.2.4.1. R1 :An taol-mouezh :




**Grafik. 27. Fichenn F2 : Brazarded (B6).  
An taol-mouezh standard war ar silabenn eil-diwezhañ.**

Gant ar vrazarded aterset genin e chom bewoc'h an TM standard eged ma oa gant ar skolidi (62% amañ e-lec'h 34%).

<sup>100</sup> « Comme (...) les néo-bretonnants vont de l'écriture à la prononciation... », TRICOIRE, *Me a gomzo brezhoneg*, p. 10.

4.4.2.4.2. R2 : Hirder ar vogalenn dindan an TM :


Gerioù unsilabenneg : Er gerioù unsilabenneg e ta an hirder madig a-walc'h gant ar vrazarded (77% pa oa 71% gant ar skolidi) (**Grafik 28**) :



**Grafik. 28. Fichenn F1 : Brazarded (B6).**  
**Hirder ar vogalenn dindan an TM er gerioù unsilabenneg.**

Gerioù liessilabenneg : Mez n'eo ket mui ken splann ar mod da seveniñ an hirder er gerioù liessilabenneg (fichenn **F2**), e-lec'h ma kouezh ar feur da 52% (gant ar skolidi e oa izelloc'h c'hoazh : 23%). Evel-just e vez diaesoc'h, ewid an heni na vez ket gourdon douzh e yezh a vihanig, termeniñ sur lec'h an TM, ha da heul ar lec'h ma c'hoario an hirder. En ur mod naturel a-walc'h e c'hell an TM (hag an hirder) kouezhel war ar gerioù unsilabenneg.





**Grafik. 29. Fichenn F2 : Brazarded (B6).**  
**Hirder ar vogalenn dindan an TM er gerioù liessilabenneg.**

4.4.2.4.3. R3 : Sanadur ar gensonenn en dibenn absolut :

Klasket 'm eus kontañ ar sanadurioù [-ik] er ger *Annaig* (item 20 ar fichenn F2 a oa bet kenniget da 28 brazard). Dalc'het 'm eus kont ag an oll vrazarded bet aterset genin, zokén ar re nad int ket bet dalc'het war ar fichenn Excel B6 (namaed 20 atersad dalc'het, pa'm boa aterset 28).

Ogozig an oll vrazarded a san "reizh" dibenn ar ger *Annaig* (tost da 90%). Mez a-gaoz m'ema anavezet ar ger *Annaig* e galleg iwe (raganw *Annaick*) em eus astennet an enklask d'an tri ger *noz*, *lod* ha *staj*, evel ar pezh am boa graet gant ar skolidi. Ewid an tri ger-se e vez santet ar vrazarded tostoc'h douzh an TM standard eged ar skolidi c'hoazh (64% amañ tra ma ne oa namaed 18% gant ar skolidi mez diasurroc'h o sanañ a-galz eged er ger *Annaig* memestra (Sd. L1 § 2.4.1.3.2., p. 213).

<b>R3 : divouezhadur ar gensonenn en dibenn absolut</b>			
<b>R3 : Da</b>	Ollad degouezhioù	Patrom brezhoneg	%
<b>Brazarded</b>			
<b>Annaig</b> [-ik]	28	25	<b>89%</b>
<b>Noz</b> [no:s]	14	10	<b>71%</b>
<b>Lod</b> [lo:t]	14	8	<b>57%</b>
<b>Staj</b> [sta:f]	14	9	<b>64%</b>
Ollad	70	52	
% olleg		<b>74%</b>	

**Taolenn 28. Fichennoù F1/F2 : Brazarded (B6).**

**Divouezhiadur ar gensonenn en dibenn absolut e pewar ger.**

N'heller ket lâred e vez divouezhiañ ar gensonenn en dibenn absolut ur mestr sur war e dachenn, daoust d'an traoù tennañ kentoc'h douzh an tu-se gant ar vrazarded. Er skol ne lâran ket.

#### **4.4.2.5. Klozadur**

Dre vraz e vez gwelet ar memez diouveroù e brezhoneg ar vrazarded, en o mesk skoliataerion dreist-oll pe tud e darempred gant ur brazniver a chelaouerion (radio). An dud 'm eus aterset zo brazarded bet desket ar brezhoneg gante n'eo ket en ur metoù brezhoneg mez dre stajoù, kentelioù, furmadurioù hir pe hirroc'h, hag ataw digant ur yoc'h traoù skrivet, levroù pe fotokopiënnoù, evel ma raer hiziw-an-deiz. Diskoueziñ a ra ar gudenn doned a belloc'h neuze. Moned da furchal en dafar pedagogel zo d'ober d'ar poent-mañ ag ar c'hlaskerezh : pesort plas zo bet roet d'ar liammadurioù en hentenoù da zeskiñ ar brezhoneg, er yezhadurioù ? Setu bremañ un damsell war ar levroù-keleñ.

#### 4.4.3. AR SKOL HA PROBLEM AR LIAMMADURIOÙ

##### 4.4.3.1. Roll ar levroù-keleñn<sup>101</sup>

War a seblant ne ziskoueze ket an dud boud chalet-braz gant ar liammadurioù a-fed keleñn ar yezh ; ur gudenn arall a seblante sachañ ewezh an oll, skeudennaouet gant ar frazenn-mañ : "La grande difficulté, pour ceux qui commencent l'étude du breton, provient des mutations" (JM. NORMANT, 1902)<sup>102</sup>. Ar c'hemmadurioù : aze lec'h ar stourm, ha n'eo ket heni NORMANT hebkén !

N'eo ket gant ar liammadurioù e oa chalet VALLEE en e hentenn "*Le breton en 40 leçons*" (1909), da skwer : n'eus ket meneg ebed anezhe en e levr. Aliañ a ra an desker da c'houlenn harp ur lenner ha, kentoc'h, un den desket a Vro-Leon pe a vro-Dreger izel, a raio ar sanadur dezhañ<sup>103</sup> ! Ar pezh a veze tu d'ober (marse) e deroù an XXved kvd, daoust hag e talvez hiziw c'hoazh ? Mez a-hend-arall, daoust ha ne oa ket henchañ fall an deskerion pa skrive VALLEE "L's est toujours dur"<sup>104</sup> et ne prend jamais la prononciation du **z** comme en français", ha kement-arall ewid **g** ("le **g** est toujours dur...") ? Ouzhpenn-se ne gomze ket ag an **t**, a c'hell iwe nawazh moned da **d**, ag an **f** a c'hell moned da **v**, ag ar **k** a c'hell moned da **g**, er juntadurioù d'an nebeutañ. Anavoud a rae VALLEE koulskoude an diaezamantoù a c'helle degas ar galleg douzh deskerezh ar brezhoneg, mez doned a raent kentoc'h ewitañ ag an taol-mouezhiañ dishañval hag a soniadoù zo na gaver ket e galleg (**c'h**, **e serr**, **o serr**, **e friet**, **i friet**, **eu friet** hag **u friet**, p. 3).

---

<sup>101</sup> N'eo ket klok ar roll-mañ : savet eo bet gant ar levroù boutinnañ a anavezañ. Ur roll klokoc'h a c'heller kavoud war lec'had "Association Bibliographie de Bretagne" : <http://www.bibliobretagne.com/index.asp>. Pa gaver titloù gouestlet d'ar c'hemmadurioù ne gaver heni ebed gouestlet d'ar liammadurioù.

<sup>102</sup> In *Lexique breton-français & Méthode nouvelle pour faciliter aux commençants l'étude de la langue bretonne* (XLVII p. + 87 p.). Ur beleg euz eskopti Kemper a oa JM. NORMANT.

<sup>103</sup> « Se faire aider au début par un lecteur, autant que possible une personne cultivée du Léon ou du Bas-Tréguier, qui donnera la prononciation ». *Opus cit.* p. 1.

<sup>104</sup> Arvaruz e vez implij ar gerioù "*jamais*" pe "*toujours*" pa gomzer ag ar yezh, ar brezhoneg d'an nebeutañ. Gwelet hon eus da skwer e c'hell an **s** boud sanet /z/ er ger **isofiser** gant ar Peurunvan-41[izo'fiser] (HY).

Un aters : ha tu a vehe da embann ur yezhadur na gomzehe ket tamm ebed ag ar c’hemmadurioù e brezhoneg ? Ur mank kuriuz e vehe. Setu amañ pouez ar c’hemmadurioù e pewar yezhadur dishañval :

<b>KEMMADURIOÙ ha levroù-keleñn</b>	Lod ar c’hemmadurioù	Niver olleg pajennoù ar levr	%
<i>Grammaire bretonne</i> W GUILLEVIC/LE GOFF 1902	8 p (pp. 7-14)	166 p	<b>4.82%</b>
<i>Yezhadur bras ar brezhoneg</i> KERVELLA 1947	27 p (pp. 77-102 + p. 21)	473 p	<b>5.71%</b>
<i>Grammaire du breton contemporain</i> FAVEREAU 1997	19 p (pp. 146-164)	449 p	<b>4.23%</b>
<i>La grammaire bretonne pour tous</i> CHALM 2008	20 p (pp. 20-39 + 1 golo)	219 p	<b>9.13%</b>

**Taolenn 29. Kemmadurioù : o lod e pewar yezhadur.**

Sellomp bremañ douzh pouez ar liammadurioù er levroù-keleñn gant harp an daolenn-mañ, bet savet diwar roll an oberennoù bet renablet er § 3.1.2.2. p. 273 (oberennoù pedagogel goude Gwalarn) :

<b>LIAMMOÙ ha levroù- keleñn</b>	Meneg ebed Ø	Merket en notadur fonetikel hebkén	Anw anezhe en un nebeud linennoù	Anw anezhe war ur bajennad pe nebeutoc'h	Soursi pedagogel anad a-hed ar levr	<b>Ollad</b>
Niver an oberennoù analizet	<b>21</b>	2	5	6	6	<b>40</b>
%	<b>52,5%</b>	5%	12,5%	15%	15%	<b>100%</b>

**Taolenn 30. Pouezusted ar liammadurioù er levroù-keleñn.**

Ouzhpenn an hanter ag ar levroù renablet ne gomzont tamm ebed ag ar liammadurioù. Nawazh e klemm liez ar Vrezhonegerion a-vihanig pa glewont an “ne-o-ed” é komz brezhoneg, pa vez liammet “ ‘vel ma ta e ta” ar gerioù

etreze, ha dreist-oll herwez ur vodell arall, heni ar galleg, a glask a-liez ar memez “ne-o-ed” pellaad a zoutañ par ma c’hellont<sup>105</sup>.

E-mesk an oberennoù a ziskouez un tamm preder siriuz a-walc’h douzh an afer ne gaver namaed 15% hebkén. Un dra ouzhpenn : e-mesk an oberennoù-se, 6 anezhe renablet ganin<sup>106</sup>, e vez kavet 4 a zo bet embannet gant Skol Vreizh pe gant tud o deus bet darempredoù stank gant Skol Vreizh (an Etrerannyezhel en arver gante e-pad pell) ; unan e Skolveureg ; unan e Peurunvan-41 : ha p’o dehe ar “chapelioù-doare-skriv” ur rol bennag en afer-se e c’hellomp lâred n’eo ket kudenn ar liammadurioù un dra stag douzh unan anezhe pe heben, mez kentoc’h douzh soursi peb saver levr-keleñ. Mard eo splann a-walc’h ne oa ket chalet kalzig saverion ar Peurunvan gant ar poent-se, bet sklaerraet da vad gant FALC’HUN, n’eo ket berzet dezhe pledañ warnañ bremañ evel ma en deus graet Mark KERRAIN, rag afer an oll eo eveljust, ha n’eo ket an doare-skriv-mañ-doare-skriv a zo kaoz ag an diseblanted a-zivoud problem ar liammadurioù.

#### 4.4.3.2. Keleñ ewid komz pe keleñ ewid skriv ?

Daoust ha lakaet e vo da vad ar liammadurioù e roll soursioù pedagogel ar gelennerion ha saverioù levroù-skol ? Da hetin n’eo ket oberenn CHALM a vo patrom ar yezhadurioù a zay d’he heul.

Talvoud a ra ar boan ober un arrest a-zivoud ar yezhadur-mañ, arouez un doare difer da goñseviñ ar brezhoneg. Boud eo bet Eugène CHALM (1919-2002), genidig ag ar C’hap, skolaer e departamant ar Mayenne, ha kerreizher e-pad meur a vloaz kentelioù dre lizher Skol Ober. Resisaet ha klokaet eo bet e yezhadur gant ur bare tud arall ha kelennerion ha kerreizherion Skol Ober (roll

---

<sup>105</sup> Da skwer dre implij gerioù na ziskouezont ket merk ar galleg warne, evel **kinnig** (e-lec’h **prezantiñ**), **talvezoud/talvoud** (e-lec’h **sinifiañ**), **dedennus** (e-lec’h **interesus**)... Mez ur sinifiañs arall zo gant ar gerioù ‘m eus izlinennet. Petra a sinifi da skwer : “**Kinnig a ran ma maouez deoc’h**” : “*je te présente mon épouse*” pe “*je te propose mon épouse*” ? Meur a skwer a-sort-se zo bet renablet gant A. BOCHÉ.

<sup>106</sup> 1) 1975 : *Le breton sans peine* (Morvannou/Assimil), 2) 1979 : *Le breton à l’école* (Deshayes/Skol Vreizh), 3) 1980 : *Les graphies du breton* (AR MERSER/Brud Nevez), 4) 1980 : *Initiation au breton sans peine* (Morvannou/Assimil), 5) 1997 : *Ni a gomz brezhoneg* (Kerrain/TES), 6) 2002 : *Brezhoneg prim ha dillo* (Kemener/Skol Vreizh).

p. 4). Ur yezhadur gouestlet d'ar brezhoneg skrivet eo, ha nebeud a soursi douzh ar sanadur (ur bajennad ha kard hebkén diwar-benn *la prononciation*, pp. 10-11). Mez diouzhtu da heul e kaver 6 pajennad gouestlet d'an doare da skriv : “*Conventions orthographiques*” (pp. 13-19) ; *l'orthographe* (7 linennad) ; *l'alphabet breton* (20 linennad) ; *les signes diacritiques* (un tri-c'hard pajennad) ; *le trait d'union* (ur bajennad hanter) ; *la ponctuation* (un hanter-bajennad) ; *emploi de la capitale* (un tri-c'hard pajennad) ; *coupure des mots* (ur bajennad hanter).

Padal ne vez ket kavet kalz a dra diwar-benn ar peder reolenn diazez 'm eus komzet anezhe amañ, hag a denn douzh ar mod da gomz :

- R1 (TM) : 4 linennad, ewid lâred e vez notet ar silabenn daol-mouezhiet gant an arouez [ ' ] pa verk an arouez [ ı ] un eil TM (p. 11).
- R2 (hirder ar vogalenn) : 3 linennad (p. 11) ewid lâred e vez hir ar vogalenn pa za un [ : ] d'he heul ha berr pa ne vez ket gwelet an arouez-se.
- R3 (kaletâdur ar gensonenn en dibenn absolut) : mann ebed.
- R4 (liammadurioù) : ger ebed, ha notadur fonetikel kennebeud.

En despet d'an diskweloù a-zivoud R1 hag R2 (a denn douzh ar skrid c'hoazh) ne vez ket kavet stank an notadurioù fonetikel, a vehe bet tu dezhe da gempoueziñ an diouwer a esplegadennoù. Ouzhpenn sanadur lizherennoù an alfabet (**a** ['a:], **b** ['be:], **c** ['se:], **d** ['de:]...) em eus kavet 7 ger hebkén o deus bet un notadur fonetikel er levr a-bezh, ha n'int ket ar re ziaesañ da sanañ : **hir**, **fall**, **hadañ**, **anavezet** (p. 11) ha **kozh** (“[kɔs] dirag ar verb, [ko:s] goude”, p. 175) !

E-tal ar mank-se, kenteliuz meurbed, e vez kavet 18 pajennad a-zivoud ar c'hemmadurioù : ar re-mañ, perzh ar brezhoneg (ha ked heni ar galleg), e vez roet o flas dezhe er levr. Mez pezh d'ar brezhoneg eo iwe ar peder reolenn (gwelet hon eus pegen dishañval, pegen kontrol zokén ema ar galleg en o c'heñver) ha nebeud-tre a lec'h roet dezhe gant ar yezhourion koulskoude, ha lec'h ebed gant CHALM...

#### 4.4.3.3. Rol TES (Ti-Embann ar Skolioù)

A-c'houde 1977 (kentañ skol Diwan) eh eus skolioù brezhoneg gant ur ragtres diwyezheg, un intrudu bet heuliet gant ar skolioù-Stad hag ar skolioù katolik. Rekiz e oa bet gortoz 1994 nawazh ewid gweloud ar melestradur, a-skoaz gant ar Rannvro hag ar Stad, krogiñ ba krouidigezh an dafarog pedagogel rekiz ewid ar skolioù-se.

Hiziw e embann TES ur bern levrou-skol a vez kaset digoust d'ar gwenodoù diwyezheg : ti ofisiel ar brezhoneg-skol eo enta ! Setu un alberzh ag ar feson ma vez komzet ag ar liammadurioù e oberennoù an ti-embann-se. Renablet em eus amañ ar re heverkañ war dachenn ar yezh.

- **1994** : **Labour stroll** : *Enora*<sup>107</sup> (*Kanaouennoù ha rimadelloù evit ar vugale*) : e roll ar poentoù yezhadur hag er c'heriaoueg savet e fin ar levr ne gaver meneg ebed ag ar sanañ, na deuz ar liammadurioù eveljust.

- **1997** : **Labour-stroll** : *Plouz...Foenn...war an hent* (hentenn brezhoneg evir an deraouidi) : esplegadenn ebed a-zivoud ar liammadurioù, mez ur sin fonetikel e testenn ar gentel, a sach ewezh an desker, da skwer : **mont**<sup>[d]</sup> **a ra / kousket**<sup>[d]</sup> **out ? / penaos**<sup>[z]</sup> **eo an amzer ?** hag a-hed ar levr.

- **1994** : **Labour stroll**. *Bec'h dei !*, yezhadur brezhonek (kelc'hiad III ha skolaj) : bet gouestlet ur pennad a-bezh (pp. 191-225) d'ar c'hemmadurioù mez netra dwb. ar liammadurioù.

- **1997** : **KERRAIN, Mark**, *Ni a gomz brezhoneg* (TES) (+ CD) : meneget ar levr-mañ uhelloc'h. Ur soursi splann a-hed ar levr diwar-benn ar liammadurioù. CD-Rom daet er-maez e 2005. Kennig a ra an oberour “pouezañ war ar yezh komzet” (p.6) ha war ar labour “ selaou hag adlavarout er gêr, gant ar bladenn-argant”. Meneg a ra Mark KERRAIN ar peder reolenn studiet amañ, dindan tri foent :”La prononciation du breton

---

<sup>107</sup> Daoust d'am anw boud skrivet dindan meur a destenn embannet er levr-se n'em eus skrivet heni ebed anezhe ! Dle oa da d/TES embann un errata, sañset...

est caractérisée par 1) l'accentuation générale des mots sur l'avant-dernière syllabe (...), 2) l'opposition des voyelles longues et brèves (...), 3) le principe des liaisons consonantiques adoucissantes et des finales renforcées (p.8). Ewitañ e talv ar boan dilezel un tammig ar c'hemmadurioù ewid poueziñ muioc'h war ar sanadur ("Dre skiant-prenet e ouzer ne dalv ket ar boan lakaat ar gaoz war ar c'hemmadurioù re abred er c'hlas..."p. 6).

- **2002** : **KERRAIN, Mark**, *Erwan Lagadeg* : netra dwb ar liammadurioù.

- **2001** : **LE NABAT, Isabelle, KERVOAS, Envel** : *Biwig (evit ar mestr)* : netra dwb. ar sanadur.

- **2003** : **De PENNART, Geoffroy**, *Ar bleiz tener e galon* (fichennoù-lenn evit skolaerien ar c'helc'hiad 2) : en e ragskriz "Deskiñ lenn e brezhoneg gant un albom er c'helc'hiad II" e meneg an troour "broudiñ ar c'hoant lenn "(p.3) ; poueziñ a ra war ar skrid ("kompren skridoù lennegel", "anavezout gerioù skrivet", "mestroniañ reolennoù ar reizhskrivadur" ha ne gomz ket tamm ebed ag ar sanadur.

- **2004** : **labour-stroll** : *C'hoari e brezhoneg* (dastumadenn c'hoarioù evit ar skolioù) : notenn-sanadur ebed, zokén diwar-benn an tonioù da ganañ.

- **2005** : **AN UHEL, Fanch**, *War al leur-c'hoari* (gant strollad Ar Vro Bagan) : notennoù diwar-benn ar c'heriaoueg, heni ebed dwb. ar sanadur.

Nebeud a soursi douzh ar liammadurioù enta a vez remerket e levroù TES. E levroù zo, embannet gant TES, ne vez ket klasket roiñ pe adroiñ reolennoù ar sanañ, sañset boud anavezet gant an oll, ha da gentañ-rac'h gant ar vistri, ar pezh nad eo ket tre ar wirionez nawazh evel m'hon eus gwelet. Da heul meur a levr nawazh e kaver un enrolladenn (war CD pe CD-Rom), ha warni neuze testenn ar levr bet enrollet gant brezhonegerion vat. Tro a vez evel-se da glewed ur brezhoneg mad, e-keñver ar liammadurioù iwe. Menegañ a ran amañ



da skwer *Ur wezh e oa... (ul levr da selaou)* (2000), ennañ mouezhioù Marsel Gwilhouz, Chañ-Mai Skragh, Daniel Carré... ; *Fantig* (Kristof JEZEGOU, 2006), gant mouezhioù Per-Jakez Helias, Remi Derrien, Nikol ar Vourc'h, Patrick Ewen, Mona Jaouen... ; *Istoriou Rozenn ha Fañch al Laer* (Maryvonne BERTHOU, 2007), gant mouezhioù tud evel Jakez ar Borgn, Naig Rozmor, Sten Charbonneau, Yann-Fañch Kemener, pe *Plac'h an Erc'h* (**Aourel, KORNEG, 2007**), CD gant Roger ha Glaoda An DU (sanadurioù herwez ar PB gante : *dirak Ćg ar stern, neuze e teuas Ćz ar plac'h...*).

Mez n'eo ket trawalc'h d'am soñj : er stad m'ema an traoù ne spir ket an dafarog-se, daoust dezhañ kennig ur patrom "brezhoneg" ag an dibab. War an talbenn pedagogel en e bezh e rankeher lakaad striv da sachañ ewezh peb kelenner ha peb desker. Mechal mar ne vehe ket red, par ma c'heller, degas soñj d'ar skoliataerion kement ha d'ar skolidi e ranker diwall douzh reolennoù-sanañ ar brezhoneg, evel bet graet gant mark KERRAIN. Ha derc'hel ganti ! Rag war an dachenn-se ne spir ket ar menegañ, n'eo ket trawalc'h komz ur wezh ag ar gudenn : daoust d'e soursi ewid ar sanadur e 1997 en doa Mark KERRAIN dilezet e breder e 2002 gant *Erwan Lagadeg* !

Ha n'eus ket dalc'het TES er soursi-se naket : pa oan e adlenn ar labour-mañ em eus bet tro da deurel ur sell war ar *Yezhadur* diwezhañ daet er-maez gant an ti-embann, e 2009, ewid ar liseidi. Daoust d'ur pennad gouestlet d'ar *pouez-mouezh* pe d'an *taol-mouezh* (an daou c'her implijet er memez pajennad, p. 151), daoust da venegoù gouestlet d'an hirder, daoust da ziw bajennad gouestlet douzh an "divouezhiañ dirak un ehan" e fin ar levr (pp. 153-153), daoust erfin ag ur meneg ag an dibennoù kaletauz ewid klozañ ar yezhadur (un notennig 7 linennad p. 154) ne lenner netra diwar-benn ar liammadurioù. N'eus ket ag ar gudenn-se e brezhoneg !

#### **4.4.3.4. Prederiadenn**

Euruzamant, er-maez a yezhadur CHALM (a chom talvouduz memestra ewid an titouroù sklaer a gaver e-barzh war an temoù arall), hon eus gwelet strivoù graet war an dachenn... mez heb ur strategiezh splann a-berzh an oll re a glask

kelenn ar yezh, a glask roiñ honnañ d'ar gomzerion newez, d'ar vugale, d'ar skolidi. Heb iwe ma vez santet un dober red, hañval douzh an heni a vez gwelet e-keñver ar c'hemmadurioù. Nawazh, mard eo displijuz klewed e \***ta**d (e-lec'h e **da**d), ha n'eo ket ken displijuz all klewed **kouske-ta** ra (e-lec'h **kouske-da** ra) ?

Mar laoskomp a-gostez levroù MORVANNOU, DESHAYES, KERRAIN, KEMENER, e welomp ingal ar memez mod-ober : pa vez sachet ewezh ar lennerion e vez meneget ar gudenn ur wezh, liez e berrgomzoù (deuz un nebeud linennoù d'un diw bajennad bennag) ha mad pell zo. Ur strategiezh a spirehe marse mar behe sistem ar brezhoneg hañval-mik douzh heni ar galleg. Mez daou sistem dishañval int, kentoc'h kontrol zokén, ez-pleutreg, hag ouzhpenn-se dibaot an degouezhioù ma vo tro d'an deskerion klewet ar brezhoneg komzet ez-naturel en-dro dezhe war ar pemdez. A-dra-sur n'eo ket trawalc'h menegañ ur wezh ar poent-se ewid boud heuliet.

« La pédagogie est l'art de la répétition » a veze lâret dimp e Skol Normal Gwened gwezharall. Lâred hag adlâred, setu sekred an deskiñ, sañset. Ar pezh a rae kredabl an drouided d'o deskerion e-kreiz ar c'hoadoù don en o amzer ! Ar pezh a rae sur ar skolidi pa zeskent lenn, a vouezh uhel hag ar glasad a-bezh war-un-dro : « beu-a ba ; beu-eu beu, ba-beu ; beu-i bi, ba-beu-bi ; beu-o bo, ba-beu-bi-bo ; beu-u bu, ba-beu-bi-bo-bu // keu-a ka ; keu-e keu ka-keu ; keu-i ka-keu ki...<sup>108</sup> » Ar pezh a raent c'hoazh pa zeskent o zaolennoù-liesaad er bloazioù 1950 ha goude.

Kredabl e ranker amañ favorekaad ur labour war an hirdermen : ne vo tu da stourmiñ eneb da batrom ar galleg, a zo en oll bennoù pa grogont gant ar brezhoneg, namaed pa vo pouezet, ha heb arsav, war ar sanadur ewid sachañ ewezh an deskerion war ar gudenn. N'eo ket kollet ar patrom brezhoneg

---

<sup>108</sup> Kanaouenn deskiñ-lenn, bet kanet din gant Georges Binet en doa he desket er skol e Pariz, er bloazioù 1910. Kavet em eus ur skeud ag an dra-se e levr Alan AN DIUZET, *Yannig a oar lenn* (1964), e-lec'h ma kaver traoù a-sort gant : “**p : pa pe pi po pu / t : ta te ti to tu...** ha frazennoù evel **milo a lare : te, malo, a raio rata / pipo a laero rata melani / rene a laro : me a dapo pipo e tu pe du...**“ Ar pezh a denn douzh ar *méthode BOSCHER* en deus graet bec'h er skolioù ewid deskiñ lenn e galleg... hag a vez meneget c'hoazh da skwer vad !

c'hoazh, henn gwelet hon eus, mez kollet e vo hebdale heb ur strivañ pedagogel olleg. Ar pezh a sinifi e vo red furmañ ar gelennerion a-vraz.

## 4.5. DESKAMANTOÙ AR C'HLASKEREZH

### 4.5.1. LEVEZON AR GALLEG KOMZET WAR SANADUR AR BREZHONEG : UN DRA ANAD

#### 4.5.1.1. Stad olleg an traoù a-fed liammadurioù gant ar skolidi

Anavoud a ra ar gelennerion hag ar vrezhonegerion tomm douzh o yezh e vez levezonet kalz ar brezhoneg gant ar galleg, war meur a boent. En dezenn-mañ em eus klasket muzuliañ beteg pesort poent e oa waet ar levezon-se war un dachenn dilezet gant ar skol : heni ar liammadurioù. Ha sklaer a-walc'h eo an traoù : ema ar patrom brezhoneg en arvar a voud aloubet gant ar patrom galleg. Ar pezh a zo, n'eo ket kollet-tre c'hoazh, daoust d'ar laoskentez ogozig olleg. Setu amañ ur grafik a ziskouez lod ar patrom brezhoneg e merañ ar juntadurioù kensonenn-bogalenn. Red eo din lâred em eus savet ar grafik-mañ diwar ar fichenn **Ey**, skrivet en Etrerannyezhel klasel, (gant **ss** ha kensonenn-dibenn herwez an diveradur a-hend-arall). Gwelet e vo pelloc'h n'eo ket ar mod-ober fallañ (mar n'eo ket an heni gwellañ), ha tu zo da soñjal en deus mod da skriv ger-mañ-ger sikouret an atersidi mui pe vui. Roiñ a ran en-dro an destenn-se, gant lec'hioù an 10 liammadur gortaet :


“Mad an traoù ! Kousket eo ar babig. Kountant eo e vamm. Serret eo bet dor ar gampr ganti.

Perag e teu bremañ beteg ar gegin ? Ewid ober kafe da Janig Konan. Degass a ra tassoù ganti. Prop eo an daol. O klask achu ar c'hoari kartoù emaint.”

Roiñ a ra ar **Grafik 30** (p. 442) d'en em soñjal : hanter-hanter e tiskouez an daou batrom boud. Neuze, penaoz analizañ an traoù ? Ne ro ar grafik namaed

ur skeudenn ag ar realded etre mae 2007 hag ebrel 2008, narenn emdroâdur an traoù. Ne lâr ked dimp pesort lusk a zo gant an diw zougañs : kresk gant ar patrom brezhoneg pe kentoc'h kresk gant ar patrom galleg ?

Ema an eil hipotezenn an heni wir : pa vehe bet sevenet ar liammadurioù herwez patrom ar brezhoneg, evel termenet gant ar yezhourion (**sd. § 3.3.3., pp. 299-309**), ne vehe ket bet ken braz heni ar galleg. Ha bremañ, penaoz termeniñ an norm ? Ha petra ober : roiñ ar maout da sistem ar galleg, a zay da vout heni ar brezhoneg en dazont tost pe dostoc'h ? Pe favorekaad ar sistem brezhoneg, *dle.* henn kelenn erfin, peogwir ne vez ket kelennet ?



**Grafik. 30. Fichenn Ey : Skolidi (ag ar CM2 d'ar lise).**

**Taolenn é tiskouez penaoz e vez sevenet ar liammadurioù dirag ur vogalenn gant an oll skolidi aterset.**

#### **4.5.1.2. Dasparzh ar patromoù (skolidi)**

Talvoud a ra ar boan klask kompren penaoz e vew peb modell e-mesk ar skolidi aterset : daoust hag-eñv e vez kavet skolidi ar patrom brezhoneg gante, lod arall ar patrom galleg, ewid an oll liammadurioù, pe ur meskaj ag an daou

emzalc'h gant peb henienn ? Pelloc'h, penaoz eh a an traoù en daou sistem diwyezheg, Soubidigezh diouzh un tu (= Diwan), ha Paridigezh diouzh an tu arall ?

4.5.1.2.1. An emzalc'hoù heniennel :

Setu amañ niver an atersidi o doa sevenet 8 liammadur dous d'an nebeutañ herwez ar patrom brezhoneg (heni anezhe nen deus sevenet 10 dous) :

Ey Skolidi <b>LIAMMADURIOÙ</b> <b>8 liamm dous</b> <b>bet sevenet</b> <b>d'an nebeutañ</b>	Niver ar skolidi			<b>Ollad ar skolidi</b> <b>bet sevenet gante</b> <b>8 liamm dous</b> <b>d'an nebeutañ</b>	Niver olleg ar skolidi aterset
	D	K	P		
CM2	1	0	1	<b>2</b>	60
5ved	4	0	1	<b>5</b>	44
3ved	6	0	0	<b>6</b>	40
LISE	3	2	2	<b>7</b>	18
<b>Ollad</b>	<b>14</b>	<b>2</b>	<b>4</b>	<b>20</b>	<b>162</b>
Niver ar skolidi aterset	55	48	59		162

**Taolenn 31. Fichenn Ey : Skolidi (ag ar CM2 d'ar Lise).**

**Niver an atersidi o doa sevenet 8 liammadur dous pe ouzhpenn (diwar 10 item)  
herwez ar PB.**

Da skwer, 9 PB oa bet sevenet gant : **P2BrViEy, P3RoTrEy, P5LuLiEy.**

Lod ag ar skolidi a ziskouez kaoud ur patrom brezhoneg kempouell a-walc'h, pa en em gav lod arall gant ar patrom galleg kentoc'h. Setu amañ niver an atersidi n'o doa sevenet namaed 2 PB pe nebeutoc'h :

Ey skolidi <b>LIAMMADURIOÙ</b> <b>2 liamm <u>dous</u></b> <b>bet sevenet</b> <b><u>d'ar muiañ</u></b>	Niver ar skolidi			<b>Ollad ar skolidi</b> <b>bet sevenet gante</b> <b>2 liamm dous</b> <b>d'ar muiañ</b>	Niver olleg ar skolidi aterset
	D	K	P		
CM2	1	5	6	<b>12</b>	60
5ved	1	6	4	<b>11</b>	44
3ved	0	2	1	<b>3</b>	40
LISE	0	0	1	<b>1</b>	18
<b>Ollad</b>	<b>2</b>	<b>13</b>	<b>12</b>	<b>27</b>	<b>162</b>
Niver an atersidi	55	48	59		162


**Taolenn 32. Fichenn Ey : Skolidi (ag ar CM2 d'ar Lise).**

**Niver an atersidi n'o doa sevenet namaed 2 liammadur dous pe nebeutoc'h (diwar 10 item) herwez ar PB.**

Da skwer, 1 PB hebkén oa bet sevenet gant : **K3LvYaEy**, **P3LnGwEy**, **K4KaMtEy**. Da lâred eo e kaver un nebeud skolidi a gomz (a-fed liammadurioù) kentoc'h herwez ar PB pa gomz un dregantad arall kentoc'h herwez ar PG. Mez etre an daou e tiskouez an darn vuiañ a vugale ar skolioù diwyezheg meskañ an daou vod-ober.

#### 4.5.1.2.2. Levezon ar sistem-skol : Soubidigezh vs Paridigezh :

Henn spurmantet hon eus en taolenoù uhelloc'h : diskoueziñ a ra ar mod da gas an diwyezhegezh war-raog kaoud ur rol er feson ma vez sevenet ar liammadurioù gant ar skolidi, ar pezh a vo skeudennaouet gant an daou c'hrafik-mañ :



**Grafik. 31. Fichenn Ey : Skolidi (ag ar CM2 d'ar Lise).**

**Keñveriañ Soubidigezh ha Paridigezh  
da-geñver sevenidigezh ar liammadurioù.**

Un diforc'h braz a-walc'h (20%) zo etre Diwan (soubidigezh) ha teskad ar skolioù diwezhveg katolik pe publik. Diskouezhañ a ra iwe an eil sistem un tammig muioc'h a harzoù, a c'hell doned ag un ampartiz diasurroc'h ewid lenn an destenn **Ey**, dreist-oll er liveioù izellañ (ds. **K2GgPoEy** pe **P2PoFrEy**).

4.5.1.2.3. Disparidigezh etre ar c'hlasoù :

N'eo ket ma fal amañ diskar skol-mañ-skol na klas-mañ-klas, mez klask kompren dre ar fedoù e-menn e vo tro da bouezañ diwezhatoc'h mar faota dimp gwellaad efedusted an deskadurezh. A-bouez e seblant din lakaad war-wel, mard eh eus unan, an diforc'h etre ar c'hlasoù, ar pezh a c'hell doned gant meur a faktor : hag-eñv e komz ar vugale brezhoneg er-maez ag ar skol pe ged, ha pegen liez ; pesort live brezhoneg o deus... Mez unan anezhe, nawazh, a rank sachañ hon ewezh : ha ne vehe ket an diforc'hioù-se ur skeudenn deuz pled ar skoliataerion, braz pe vrasoc'h, diwar-benn ar liammadurioù ? Ar pezh na vehe ket souezhuz tamm ebed, da heul an taolenniñ a zo bet graet diwar-benn skañvded ar preder pedagogel war an dachenn studïet.

Ewid lakaad ar lenner d'en em c'houlenn war-se, setu amañ un daolenn é tiskoueziñ an diforc'h etre ar c'hlasoù e peb sistem-keleñn, savet diwar ar

fichenn **Ey**. Kemeret em eus daou glasad seul gwezh e peb sistem-kelenn : an heni gant feur uhellañ ar liammadurioù dous dastumet e-pad an enklask hag an heni gant ar feur izellañ. Seul vrasoc’h an diskart etre an daou feur, seul bouezusoc’h rol ar skoliataerion, setu an hipotezenn. Lakaet em eus ur gwiskad griz seul gwezh ma vez 20% a ziforc’h d’an nebeutañ etre uhellañ hag izellañ tregantad herwez peb gwenod :

<b>Fichenn Ey</b>	<b>Feur ar liammadurioù dous dre glasad</b>	<b>CM2</b>	<b>5ved</b>	<b>3ved</b>
<b>D</b>	Feur uhellañ	<b>64%</b>	<b>76%</b>	68%
	Feur izellañ	<b>48%</b>	<b>44%</b>	64%
<b>K</b>	Feur uhellañ	38%	32%	40%
	Feur izellañ	26%	22%	38%
<b>P</b>	Feur uhellañ	<b>52%</b>	46%	54%
	Feur izellañ	<b>22%</b>	32%	46%

**Taolenn 33. Fichenn Ey : Skolidi.**

**Diforc’h etre ar c’hlasoù**

**a-fed sevenidigezh ar liammadurioù herwez ar patrom brezhoneg (PB)**


Da skwer, mar kemeran e standilhon ar CM2 ag an deskadurezh-Stad ar c’hlasad an uhellañ feur tizhet (52% a liammadurioù “reizh”) hag ar c’hlasad gantañ an izellañ feur (22% a liammadurioù “reizh”) e kontan un diskart a 30% etreze. Diaez eo krediñ e ta an diforc’h ag ar skolidi hebkén. Soñjal a ran kentoc’h eh eus aze merk ur soursi pedagogel. Ewid-se ne zave ket an hipotezenn-se d’ar skolaer pe gelenner gant e glasad da dermen an enklask. Kentoc’h e vehe pouezusted roet da gudenn ar liammadurioù gant an oll re o deus labouret e-raog gant ar skolidi-se, heb kontiñ rol an endro. Ar pezh a c’hell roiñ dimp da soñjal e vehe tu d’ur striv olleg degas un tamm gwellaad d’an traoù, peogwir e remerker feurioù ken dishañval.



### 4.5.1.3. Stad an traoù gant ar vrazarded (B6)


Talvoud a ra ar boan klask gouied penaoz eh a an traoù war ar memez tachenn gant ar vrazarded, ha diouzh o zu gant ar skoliataerion (kavet e vo ar ger **Kelennerion** en taolennoù Excel, a dalv enne ewid **skoliataerion** ez-resiz ; ouzhpenn-se em eus staget douzh ar memez rummad 3 c’hazetennerrez-radio a-gaoz ma en em gavont evel ar skolaerion, kelennerion (an oll anezhe é voned d’ober teskad ar skoliataerion), e darempred gant tud arall gant ur rol beliég.

Degas a ran da soñj e klot an anw **B6** gant an atersadeg bet kaset genin heb m’am boa komzet ag ar liammadurioù douzh ar vrazarded aterset (da geñveriañ e vo pelloc’h gant **B7**).



**Grafik. 32. Fichenn Ey : Brazarded (B6).  
Liammadurioù dous (PB) dirag ur vogalenn  
gant an oll vrazarded aterset ar wezh kentañ.**

Diwar ar **Grafik 32** e c’heller soñjal eh a gwell an traoù gant ar vrazarded, peogwir e kaver ar PB tost gant an tri-c’hard ag an dud aterset (72%). Damhañval eo ar rezultad a vez kavet pa vez inized ar gelennerion a rumm ar vrazarded (**Grafik 33**, p. 448) :



**Grafik. 33. Fichenn Ey : Kelennerion (B6).  
Liammadurioù dous (PB) dirag ur vogalenn  
gant ar gelennerion aterset ar wezh kentañ.**

Doned a ra war-wel sevenidigezhioù PB2 (eil patrom brezhoneg), da lâred eo ur mod arall da seveniñ ar liammadur, a zo ken degemeraduz hag ar pezh a zo bet notet edan PB : da skwer **B6RaCaEy** a san [avaj ober] (item 7 : **ewid ober**) hag [e klax] (item 10 : **é klask**)<sup>109</sup>. Diskoueziñ a ra ar sanadurioù-se boud dibaot-kàer er skolioù hiziv-an-deiz.

#### **4.5.1.4. Klozadur**

Daet eo ar galleg war dachenn ar brezhoneg a-fed liammadurioù enta, mez ne vez ket ingal stad an traoù e peb lec'h na gant peb atersad. Talañ a ra gwell ar PB pa c'hoari ar Soubidigezh kentoc'h eged ar Baridigezh, hag ouzhpenn-se ne vez ket ekwivalent ar rezultadoù e peb klas, ar pezh hon laka da soñjal ne gomz ket pe ne bouez ket hañval ar skoliataerion pa vez anw a liammadurioù.

<sup>109</sup> Degemeraduz ar modoù-se da sanañ, mez n'o lakahent ket da batromoù da gelenn er skolioù, rag komprenaduz a-walc'h eo ar standardoù aze : [evid 'o:ber], [eujid 'o:ber], [ejd 'o:ber] ; [é klask], [o klask], tostoc'h douzh ar skrid ouzhpenn-se.


#### 4.5.2. GWELLAENN PE GED A-HED AR C'HURSUS-SKOL ?

##### 4.5.1.1. Un hipotezenn na vehe ket gwir

Me e kave ganin ne veze ket remerket gwellaenn ebed war dachenn ar liammadurioù a-hed ar c'hursus-skol. Disur e chom an hipotezenn-se. A-hed ma enklask war an dachenn, da lâred eo er skolioù ha zokén gant ar vrazarded, e seblante din ne oa ket gwell an traoù nebtu. Ar pezh a seblante din merzoud a oa un dianaoudegezh ag ar reolennoù, ur sevenidigezh a veze levezonet gant ar skrid, ha mar degouezhe d'an atersidi sanañ herwez sistem ar brezhoneg e oa dre un taol-degouezh kentoc'h eged dre un akt a emskiant.

##### 4.5.1.2. Reolenn R4 : Emdroâdur sevenidigezh ar liammadurioù er skol

Nawazh eh eus tu d'en em c'houlenn mar ne bouez ket ar skol war vod da lâred ar skolidi, ha kentoc'h war-du ur brezhonekaad. Gelloud a raer kompren kement-se diwar lenn ar **Grafik 34** :



**Grafik. 34. Fichenn A2 (dibennoù kaled): Skolidi (ag ar CE2 d'ar Lise). Emdroâdur sevenidigezh ar liammadurioù a-hed ar c'hursus-skol**

Diskoueziñ a ra ar grafiek un araokâdenn reolieg war-du ur mod brezhonekoc'h da sanañ ar liammadurioù (kemm gant sevenidigezh ar blotâdur, R4, a ya wargresk ingal a 25% er CE2 da 45% er Lise ). Aez e vehe tenniñ da wir neuze e pouez ar skol war an tu mad. Diskoueziñ a rahe ar skol aze un tammig


efedusted pedagogel, un efedusted a chom darnel a-walc'h (war-dro +20%), un efedusted na c'hell ket lakaad ar patrom brezhoneg da vout trec'h war heni ar galleg pa arru ar skolidi er Lise. Mez, é vout ma ne vez ket pouezet ingal hag ataw gant ar levroù-keleñn, n'eo ket fall ar wellaenn-se dija. Trawalc'h da c'hortoz muioc'h a c'hounid c'hoazh mar behe roet d'ar skol ur mennozh resiz a-fed sanadur "brezhoneg".

Nawazh, daoust ha n'eus ket un esplegadenn arall ? Rag ur lenn arall a c'heller ober ag ar grafik-se : moian zo kompren ar c'hontrel ag ar pezh 'm eus lakaet uhelloc'h. Ar sistem brezhoneg an heni eo a zo é kilañ dirag heni ar galleg ! Ne vehe ket ur gwellaad d'ar mod da sanañ a ziskouezhe ar **Grafik 34** a-uz mez stad an traoù en amzer da-zont.

Rag gelloud a ra an den kompren e chom bewikoc'h sistem ar brezhoneg gant ar liseidi, abalamour ma o deus klewet muioc'h a vrezhoneg komzet e-pad ar pemzeg pe ugent vloaz tremenet, ha marse iwe abalamour ma teskont gant kelennerion koshoc'h pe gwell furmet. E-kontrel, e vehe skolidi ar CE2 bugale tost kollet gante ar mod brezhoneg da gomz, rag ne vez ket klewet kement a vrezhoneg er familh (tud-kozh ar vugale-se a gomz nebeutoc'h brezhoneg c'hoazh eged re ar liseidi, un deg vloaz bennag a ziforc'h etreze). Ouzhpenn-se e kaver skolaerion stummet war ar prim liesoc'h bremañ, na anavezent mann ebed e brezhoneg kent o stummadur c'hwec'h miziad, ha beuzet dindan levezon ar galleg a-fed komz. Neuze ne ziskouezhe ket an daolenn un araokâdur war dachenn ar liammadurioù (arver ar reolenn R4) mez kentoc'h ur c'holl brasoc'h-braz ha diremed (?).

#### **4.5.1.3. Reolenn R1 : Emdroâdur sevenidigezh an Taol-Mouezh er skol**

E-keñver an TM e c'hellomp sevel diw feson c'hoazh da lenn ar **Grafik 35** (p. 451). Un araokaad a remerkomp (+ 22%), gounid ingal ar patrom brezhoneg diwar-goust heni ar galleg, heb ma vez trec'h ar PB c'hoazh (ewid sevenidigezh an TM standard : 47% hebkén er Lise) :



**Grafik. 35. Fichenn F2 : Skolidi (CM2, 3ved ha Lise).**

**Sevenidigezh an TM ag ar CM2 d’ar Lise (gerioù liessilabenneg).**

Mez gelloud a raomp iwe ober ur lenn kontrol-mik. Kentoc’h eged lenn ur wellaad gant ar PB a-fed Taol-Mouezh e c’hellomp gweled aze un dic’hradañ kentoc’h : ober a rahe ar skolidi yaouankañ gant an TM “modern“ : p’o do ar re goshañ kuitaet ar Lise e vo trec’h da vad an taol-mouezhiañ galleg a zo strewet muioc’h-mui er skolioù, tre evel ar pezh hon eus remerket gant ar liammadurioù.

Lod a lâro ewid farsal ema an TM gwenedeg é aloubiñ an dachenn. Na boud e vehe taol-mouezhiet ar gerioù war ar silabenn ziwezhañ, ne vehe ket anw aze ag an TM gwenedeg e gwirionez, mez a heni ar galleg. Rag mar behe trec’h an TM gwenedeg hengounel (war ar silabenn ziwezhañ a-liez) war an heni lakaet amañ da standard (war ar silabenn eilziwezhañ), e chomehe an namaedennoù a-sort gant **bara, labour, bugale, savet, tadoù** ha kement a zo, taol-mouezhiet war ar silabenn eilziwezhañ, evel m’emaint bremañ e gwenedeg iwe. En doare newez da gomz e vez kemmet mod da sanañ an namaedennoù-se iwe, ar pezh a glewer liez-braz bremañ (**ar vugale a labour gant o zadoù** : “ar vugã’le a lâ’bour gant o zã’doù”). N’eus ket kén anw ag ar brozodiezh wenedeg aze muioc’h .

#### 4.5.1.4. Reolenn R2 : Emdroâdur sevenidigezh an Hirder er skol

Red eo daveañ d'ar fichenoù **F1** hag **F2** ewid teurel ur sell war emdroâdur hirder ar vogalenn dindan an TM gant ar skolidi. Er gerioù unsilabenneg e ta liez-mat ar PB (hirder kentoc'h reizh) gant an oll (71%), ha kompez a-walc'h ar chifroù etre an daou live-se. Mez ne noter ket kalz a gemm etre feur ar PB er CM2 (70%) ha heni ar Lise (80%) : chomel a ra stabil a-walc'h ar mod da verkañ an hirder er gerioù unsilabenneg. Mez deskiñ a ra ar fichenn **F2** dimp ne dremen ket hañval tamm ebed an traoù gant ar gerioù liessilabenneg. Setu un daolenn glok ag an enklask er skolioù :

<b>F2</b>		Hirder kentoc'h reizh	% olleg
CM2	D2	19%	15%
	K2	13%	
	P2	14%	
5ved	D3	45%	25%
	K3	12%	
	P3	17%	
3ved	D4	74%	32%
	K4	13%	
	P4	9%	
Lise	D5	41%	47%
	K5	79%	
	P5	21%	
<b>Ollad Skolidi</b>			<b>30%</b>
<b>Brazarded</b>			<b>51%</b>

**Taolenn 34. Fichenn F2 : Skolidi ha Brazarded (B6).**

**Stad olleg sevenidigezh hirder ar vogalenn dindan an TM (gerioù liessilab.).**


Diskoueziñ a ra an **Daolenn 34** ur c'hresk ingal a-hed ar red-skol : deuz 15% er CM2 eh a betek 47% er Lise. Mez pa sellomp a-dostoc'h e remerkomp chifroù

n'int ket ken reolieg-se, peurged D4 (74%) ha K5 (79%) : gante e vez kresk ingal gant ar grennenn. Diskoueziñ a ra an daou rezultad-se e vez pledet marse muioc'h war afer ar sanañ er gwenodoù-se, heni an hirder mez iwe heni an TM, peogwir e ouiompe e vez liammet an daou dra (Sd. L1, **Grafik 7**, p. 188).

#### 4.5.1.5. Reolenn R3 : Emdroâdur an divouezhiañ en dibenn absolut er skol


##### 4.5.1.4.1. Gant ar ger *Annaig* :

Diskoueziñ a ra grafik-mañ da heul (**Grafik 36**) ur c'hresk ingal ag ar patrom brezhoneg (kaletâdur ar gensonenn en dibenn absolut) a live da live. A-hed ar c'hursus-skol e tesk ar skolidi sanañ mat ar c'hensonennoù-dibenn, a vez divouezhet er lec'h-se e brezhoneg (namaed hag e vehe ar sanadurioù newez é toned gant ar skolidi yaouankañ !) :



**Grafik. 36. Fichenn F2 : Skolidi + Brazarded (B6).  
An divouezhiañ en dibenn absolut (ger : *Annaig*).**

#### 4.5.1.4.2. Gant an tri ger *noz, lod* ha *staj* :



**Grafik. 37. Fichenn F1 : Skolidi (ag ar CM2 d'ar Lise).**

**Emdroâdur sevenidigezh ar gensonenn en dibenn absolut  
a-hed ar c'hursus-skol (gerioù : *noz, lod, stj*).**

Roiñ a ra ar **Grafik 37** da soñjal e chom stabil ar sanadurioù a sell douzh ar reolenn R3 : izel e chom feur an divouezhiañ en dibenn absolut, tro-dro da 20%. Gant ar vrazarded nawazh e chom ar PB hengounel heuliet madig a-walc'h (64%). Ur gwir labour pedagogel a vehe d'ober war an dachenn-se enta mar kred ar skol e talv ar boan henn ober.

#### **4.5.1.5. Klozadur**

Esperoud a raomp e kresk ar patromoù brezhoneg a-hed ar bloawezhioù-skol a dremen peb skoliad. Mez n'hellomp ket boud sur, hag ewid gouied da vad diskloum an afer ha da besort tu eh a an traoù e vehe rekiz sevel un enklask arall a-benn un deg vloaz a-vamañ. Ewidin e talc'han da soñjal e c'hell ar skol chañch penn d'an traoù ha kelenn sanadurioù reizh, gant ma vo spisaet he falioù a-fed sanañ.



#### 4.5.3. ANAVOUD AR REOLENN NE SPIR KET D'AN DEN EWID CHAÑCH E SANADUR

Kent boud soñjet lakaad ar gudenn-mañ da sujed ma zezenn, em boa bet tro, er c'hlasoù diwezheg em boa labouret enne evel skolaer pe diwezhatoc'h evel kuzulier pedagogel, da weled war an dachenn pegen stard ha pegant e oa levezon ar galleg war vod-sanañ ar skolidi. Ouzhpenn-se, estroc'h eged ar skolidi a veze dindan ar levezon-se : kelennerion zo, emsaverion vrudet gwezhave, kasourion ar mediaoù. Un dougañs kreñv ? Un diouwer a ewezh, un diouwer a aket sur a-walc'h, mez un diouevr pedagogel dreist-oll.

##### 4.5.3.1. An emskiant hag ar c'hemm

Ne vehen ket bet chalet gant an tres-se ag ar brezhoneg, mar nen dehe ket Albert BOCHÉ sachet ma ewezh warnañ iwe, e-pad ar stajoù hag an dewezhioù-studi a raemp dindan anw SKAF-Bro-Wened<sup>110</sup>. Rag ne ziwallen ket kalz douzh ar liammadurioù un amzer zo bet : e gwirionez n'em boa ket remerket e oa aze ur gudenn hag a c'helle direnkiñ tud zo, daoust din anavoud an displichañs-se dre ar galleg ha boud lakaet ma skolidi, e galleg da gentañ, a-c'houde 1967, da deurel pled douzh “*un nami, le petit tami, deux zamis, mon nami*” ha kement a zo. Kentizh anwet er skolioù diwezheg (e Pondivi, 1987) em boa klasket lakaad ar reolenn da arverañ e brezhoneg, herwez patrom ar brezhoneg eveljust, ha gwelet pegen diaez e oa d'henn ober.

Kudenn ar liammadurioù, kement ha re an taol-mouezh, an hirder pe an divouezhiañ en dibenn absolut zo tresoù a zon-donnañ ar yezh, a vez tapet a-vihan, pe d'an nebeutañ a-gomañs gant ar yezh. Ewid Jean PETIT (*op. cit.*, p. 8) ema ollvedel ha diemskiant ar mod (ar “strategiezh”) da dapoud ar yezh. Komz a rae aze ag ar yezh pe ar yezhoù desket e oadoù abretañ ar vuhez. Evel-se e vez tapet plegoù a chomo da vad goude, e mod da gomz an den : ar soniadoù a vo bet gourdonet hennezh da broduiñ a-vihanig e vo aez dezhañ o zreuskas er yezhoù a zesko diwezhatoc'h. Mizer en devo ewid ar re arall. A-

---

<sup>110</sup> SKAF Bro-Wened : Skolaerion ha Kelennerion Ar Falz (graet iwe IPLB Bro-Wened : *Instituteurs et Professeurs Laïques Bretons*, ur gevrenn deuz Ar Falz). Savet e oa bet ar gevrenn e 1978 e Gwened.

bouez eo derc'hel kont ag ar ger *diemskiant* amañ : pa gomzer ag ar peder reolenn e ranker o lakaad e-mesk ar fedoù diemskiant a vez tapet a-vihan.

#### 4.5.3.2. Ur labour war an hirdermen

##### 4.5.3.2.1. Soubidigezh a-vihanig :

Setu perag em eus remerket n'eo ket trawalc'h anavezoud ar reolenn ewid chañch diouzhtu ar mod da gomz. Ur labour war an hirdermen eo, ur labour a basianted hir (CORBEL, 1981, pp. 12-13). Doned a-dreñv war ar plegoù tapet a-vihan a c'houlenn kalz a emskiant, a youl, a nerzh, hag a amzer. Rag diaez-braz eo d'an den kontrolliñ an tresoù-se pa gomz<sup>111</sup>.

Ewid PETIT e vez tu da eilpennañ an traoù ewid an eil yezh memestra, hag ar gwellañ sistem ewitañ eo ar Soubidigezh<sup>112</sup>. Ewid ar vugale e vehe an oad a 4 bloaz ar limit etre an diwezhegezh abred hag an diwezegezh diwezhad. Kalz efedusoc'h ema an diwezegezh abred : meret e vez an diw yezh e lec'hioù dishañval parzh Broca (e hanterenn gleiz diaraog an empenn), gant un tachad kumun ledan ewid ur c'homzer diwezegezh abred, pa vez daou dachad disjunt a-grenn ewid an heni diwezegezh diwezhad. En interseksion e c'hoari just awalc'h an tresoù hag an elfennoù fonologel ha yezhadurel a zo kumun d'an diw yezh.

Gant ar Soubidigezh e vehe unan ag an diskloumoù enta. Gwelet hon eus e yae un tammig gwell an traoù ewid skolidi Diwan e-keñver ar reolennoù studiet. Padal ne vez ket mestr ar patrom brezhoneg ataw gante naket. Ur striv a vehe d'ober neuze c'hoazh : roiñ muioc'h a bouez er skol d'ar c'henteliañ war ar sanañ.

---

<sup>111</sup> “In our daily life, *bien sûr et heureusement* (of course and fortunately) we speak without thinking of the grammar rules that structure our speech. » SCHMIDT, 2000 : 23.

<sup>112</sup> War afer an deskiñ lenn e soñj DALGALIAN e vehe gwell deskiñ lenn d'ar skolidi (er skol diwezegezh) er yezh nad eo ket heni an endro, ewid kempoueziñ an diw yezh (2000 : 82-84).

#### 4.5.3.2.2. Keleñn an eil yezh diwezhad :

A-hed ma labour gant ar gelennerion ha gant ar re a veze é teskiñ brezhoneg dre stajoù Stumdi dreist-oll em eus notet kement-mañ :

- Kentañ tra : anavezoud ar reolennoù ha penaoz e vezont dishañval diouzh re ar galleg (pe hañval doutañ a-fed liammadur gant **-s/-z**).
- Eil tra : mennoud “brezhonekaad” e vod da sanañ, rag heb ar youl-se ne zay tamm gwellaad ebed da benn.
- Trived tra : pleustriñ heb arsav, gant pasianted, ewid gounid tachenn tamm ha tamm.

Tro am eus bet da notiñ sanadurioù bet gwellaet a-galz gant skolaerion zo n’o doa ket da gomañs naoutur ebed a ziferded reolennoù-sanañ ar brezhoneg. N’eus namaed tri pe bewar bloaz goude em boa merzet ur c’hemm war wellaad gante.

Setu perag ne vehe ket bet souezhuz din notiñ nebeud a brogres e-korf an tri miz furmadur gant ar vrazarded am boa bet tro da atersiñ diw wezh.

#### **4.5.3.3. “Stummadur uhel “ Stumdi**

Pa oa bet kenniget din kemer perzh er “stummadur uhel” savet ewid ar wezh kentañ gant Stumdi e Plañvour, stummadur tri miziad da fin 2008 ha c’hoazh d’an newez-hañv 2009, em boa soñjet labourad diwar-benn ar sanadur dreist-oll ha lakaad ar stajidi da bleustriñ war ar peder reolenn prezantet uhelloc’h. N’eo ket ur labour teorikell hebkén am boa soñjet ober, mez, goude espozadenn ar stern, implij ar yezh herwez ar pennreolennoù displeget en dezenn-mañ. Ewid danvez da bleustriñ em boa kenniget implij ar margodennoù. Da gentañ, abalamour ma’z int ur benveg pinvidig-braz ewid lakaad deskerion da gomz – ha lïez e ta skoliataerion da stajoù a-sort gant re Stumdi. Iwe a-gaoz mand eo ar margodennoù ur mod fetiz da “douchañ” er yezh : tapoud ur gouvoud-ober gante (penaoz roiñ buhez dezhe) ha dreist-oll o lakaad da gomz...ur brezhoneg temzet-mat. Labourad gant testennoù e oa ma c’hoant iwe, beteg lakaad ar stajidi d’o anavezoud dre vemoer, ewid tremen ar pezh a vez graet gant ar gomedianed ar “*filage à l’italienne*”, da lâred eo

dibuniñ an destenn heb troc'h pe nebeud, a-benn gouied ema-hi gant an den da vad, dezhañ goude da c'houestliñ e oll nerzh d'ar c'hoari. Ar pezh a oa bet graet ar wezh kentañ gant 6 stajiad hag an eil gant 14.


Gellet o doa monitored Stumdi heuliañ un tammig ma labour, war-un-dro gant ar stajidi, hag a-du da gas pelloc'h ar striv goude a-hed ar stummadur, rag n'em boa-me kenlabouret er stajoù-se namaed 5 pe 6 dewezh hebkén. Ewid mad an dezenn em boa kenniget an enklask diw wezh d'ar stajidi : ur wezh e penn kentañ ar staj (notet **B6**), kent boud komzet ag ar reolennoù-sanañ dezhe, hag e fin ar staj, ewid klask gouied hag-eñv e vehe notet kemm pe ged en o mod da lenn (notet **B7**).

#### **4.5.3.4. An enklask gant stajidi Stumdi**

##### **4.5.3.4.1. Arselladennoù diwar ar fichennoù A2, B2 ha C1 :**

Setu da gentañ daou c'hrafik é tiskouezañ emdroâdur sevenidigezh ar liammadurioù etre penn kentañ ar staj tri miz (**B6**) ag an achuamant anezhañ (**B7**). Ewid **B6** em eus kemeret ar fichennoù **A2, B2** enne dibennoù *kaled*, kontrel enta douzh ar liammadurioù dre zousaad gortozet, ha **C1** ewid ar memez abeg (dibennoù *dous*, kontrel douzh ar sandhi dre galetaad gortozet dirag **h-**).


E deroù ar staj ne zae ket ar vrazarded tre da benn a levezon ar galleg ewid ar pezh a sell douzh ar fichennoù **A2** ha **B2** (dle. liamm gant **ur vogalenn** pe **l, m, n, r**), pa oa skrivet kaled an dibennoù war ar fichennoù-se : 46% a liammadurioù reizh hebkén (**Grafik 38**, p. 459).



**Grafik. 38. Fichennoù A2+B2 : Brazarded (B6).**

**Liammadurioù dirag ur vogalenn pe dirag l, m, n, r  
gant dibennoù kaled.**

Ogozig hañval an traoù c'hoazh pa zalc'han kont, er **Grafik 39** da heul, ag ar fichenn **C1** (liammadur dirag **h-** gant dibennoù dous kontrel douzh ar c'haletâdur gortozet). Ar c'hresk notet gant an **harzoù** (+5%) a ziskouez dreist-oll emzalc'h ar vrazarded dirag **h-**.




**Grafik. 39. Fichennoù A2+B2+C1 : Brazarded (B6).**

**Liammadurioù dirag ur vogalenn, l, m, n, r pe h-  
Kensonennoù-dibenn kontrel douzh ar liammadur gortozet.**

#### 4.5.3.4.2. Arselladennoù diwar ar fichenoù A1, B1 ha C2 :

Gant an teir fichenn-mañ en em gavomp gant kensonennoù-dibenn a glot gant ar liammadur gortozet (**Grafik 40**) :



**Grafik. 40. Fichenoù A1+B1+C2: Brazarded (B6).**

**Liammadurioù dirag ur vogalenn, l, m, n, r pe h gant dibennoù é klotiñ gant ar liammadur gortozet.**

$$\chi^2 = 6.55 (ddl.1) ; 0.02 < p < 0.01$$

Aez da weled an diforc'h etre ar **Grafik 40 (A1+B1+C2)** hag ar **Grafik 39 (A2+B2+C1)** : c'hoari a ra ar skrid war ar mod da sanañ (sd.  $\chi^2$ ). Gant an daou c'hrafik-se hon eus ur skeudenn a stad ar sanadurioù e penn kentañ ar staj tri miz. Setu bremañ stad an traoù tri miz goude, é voud ma oa bet titouret ar stajidi war ar c'hudennoù-sanañ ha goude boud pleustret un tammig d'an nebeutañ war o divoud.

#### 4.5.3.5. Arselladennoù da fin ar “stummadur uhel” (B7)

##### 4.5.3.5.1. Remerkoù diwar-benn ar fichenoù Sx hag Sy :


Goude un añsi gant fichenoù arall da fin staj kentañ Stumdi (fin 2008) em boa savet ar fichenoù Sx hag Sy, ar fichenoù namaete a oa bet roet da stajidi an eil “stummadur uhel” (newez-hañv 2009). Fichenoù-kendod e oant ewidin, enne mesket an daou dip kensonennoù, ewid d'ar lennerion en em gavoud en ur stadiad-lenn ordinel. Rekiz eo da gentañ kompren mat petra oa e peb fichenn.

Ma fal oa roiñ d'ar stajidi daou skrid dishañval, mez, gant-se, chomel tost douzh ar realded memestra. Setu perag em eus kenniget dezhe ar fichenn **Sx**, skrivet e Peurunvan-41, a-gaoz ma kaver kalz a gensonennoù-dibenn kaled en doare-skriv-se : diwar 40 juntadur renablet ewid an enklask er fichenn **Sx** e konter 30 gant un dibenn kaled (ds. *Perak e vo*). Nawazh n'eo ket war an dra-se fasibl em eus labouret, mez war ar juntadurioù e-lec'h ma oa kontrel ar gensonenn-dibenn douzh ar liammadur gortozet : ds. *pep lec'h* ; *rak lavar* ; *he zok roz* ; *koad haleg*. Ag an degouezhioù-se e konter 35 dibenn kontrel ha 5 dibenn hebkén é klotiñ gant ar liammadur gortozet, diwar 40.


Gant ar fichenn **Sy** eh on chomet gant un doare-skriv tost douzh ar realded iwe, mez ar wezh-mañ dre heuliañ reolenn an diveradur ewid choaz ar gensonenn-dibenn. Setu ma kaver er fichenn **Sy** 21 dibenn kontrel douzh ar liammadur gortozet ha 19 é klotiñ gantañ.

#### 4.5.3.5.2. Keñveriañ ar rezultadoù tennet ag **Sx** hag **Sy** :

Mar keñveriomp en ur mod olleg an daou c'hrafik savet diwar **Sx** (**Grafik 41**) hag **Sy** (**Grafik 42**) e kavomp nebeud a variadur gant ar PB, a dremen a 53% da 59% hebkén, mez n'eo ket sinifiuz ( $\chi^2 = 0.322$  (*ddl.1*) ;  $0.1 < p < 0.05$  ; **ns**).



**Grafik. 41. Fichenn SxB7 : Brazarded (B7).**  
**Liammadurioù (dirag ur vogalenn, dirag l, m, n, r pe h-)**  
**e diwez ar staj tri miz (skrid : Peurunvan-41).**



**Grafik. 42. Fichenn Sy : Brazarded (B7).**

**Liammadurioù (dirag ur vogalenn, dirag l, m, n, r pe h-) e fin ar staj tri miz, (skrid : Etrerannyezheg heb an daou s).**

4.5.3.5.3. Kenveriañ stadiad an traoù e deroù hag e fin ar “Stummadur uhel” :

Setu amañ emdroâdur an traoù etra deroù ar staj ha tri miz goude :

Stadiad ar PB e deroù hag e fin ar staj tri miz	B6	%	B7	%	Variadur
	A2+B2+C1	45%	Sx	53%	+8%
	A1+B1+C2	61%	Sy	59%	-2%
OLLAD		53%		56%	+3%

**Taolenn 35. Fichennoù A-B-C hagSx-Sy : Brazarded (B6-B7).**

**Stadiad ar PB a-fed liammadurioù e deroù ha goude ar staj tri miz.**

Diskoueziñ a ra an daolenn stabiled kentoc’h eged gwellaad gant sevenidigezh ar patrom brezhoneg. N’ou ket souezhet kement-se gant ar rezultat : gouied a ran ar striv a c’houlenn kemm e vod da sanañ pa vez anw a



dresoù ken munut evel ar liammadurioù, diaez da soñjal enne da beb termen pa gomzer.

Mez ewid moned beteg penn ha keñveriañ ar pezh a zo keñveriaduz c'hoazh em eus graet goude-se daou rummad e-mesk an 40 juntadur : diouzh un tu ar re e-lec'h m'ema kontrol kensonenn-dibenn ha liammadur gortae ha diouzh an tu arall ar re e-lec'h ma klot an eil gant egile. Setu disoc'h ar c'hilask :

<b>Enebadur</b> etre kens.-dib. ha liamm.	<b>B6</b> Patrom brezhoneg	<b>B7</b> Patrom brezhoneg			Variadur
Fichennoù	<b>A2+B2+C1</b>	<b>Sx</b>			
		Ollad itemoù	PB sevenet	%	
	<b>45%</b>	455	247	<b>54%</b>	+9%

<b>Klotâdur</b> etre kens.-dib. ha liamm.	<b>B6</b>	<b>B7</b>			Variadur
Fichennoù	<b>A1+B1+C2</b>	<b>Sy</b>			
		Ollad itemoù	PB sevenet	%	
	<b>61%</b>	247	200	<b>81%</b>	+20%

**Taolenn 36. Fichennoù ABC ha Sx/Sy : Brazarded (B6-B7).**

**Keñveriañ sevenidigezh ar liammadurioù  
da zeraou ha da fin “Stummadur uhel” Stumdi  
(Ebrél-mezheven 2009, Plañvour).**

Daoust d'an traoù boud dizingal e remerker kresk gant ar PB etre deroù ha fin ar stummadur tri miziad : +9% gant ar fichenn **Sx** ha + 20% gant **Sy**, mez n'eo ket sur an traoù gant an daolenn ( $\chi^2 = 0.15$  (ddl.1) ; ns).

Dre m'ema tost da voud kempouez niver an enebadurioù ha re ar c'hlotâdurioù er fichenn **Ey** em eus savet an daolenn-mañ ewid klask gweled emzalc'h ar vrazarded dirag an daou rummad juntadurioù, goude dezhe boud bet titouret war an dodenn :

<b>Sy</b> <b>B7</b>	Enebadur		Klotâdur		Variadur
	Niver an itemoù kontrol	PB	Niver an itemoù klotauz	PB	
	273	107	247	200	
%		<b>39%</b>		<b>81%</b>	<b>+42%</b>

**Taolenn 37. Fichenn Sy : Brazarded (B7).**

**Keñveriañ emzalc'h ar stajidi dirag an daou sort juntadurioù :  
dibennoù kontrol douzh ar liammadur gortozet vs dibennoù a glot gante.**

$$(\chi^2 = 24.203 (ddl.1) ; p < 0.001).$$

Interesuz e kavan rezultad an daolenn-mañ, a verk net ur wezh c'hoazh hag en ur mod sinifiuz levezon ar skrid war vod-sanañ ar lennerion (ha da heul ar gomzerion !). E-korf ar memez testenn, daoust dezhe gouied eh eus da ziwall pa zigouezher gant ar juntadurioù, e strebaot an dud pa vez kontrol ar gensonenn-dibenn douzh ar liammadur “reizh” herwez ar patrom brezhoneg.

#### 4.5.3.5.4. Titouroù arall tennet ag an enklask gant **Sx/Sy** :

Strivañ oa gant ar stajidi : Gant **SxB7** em eus notet ur striv braz graet gant lod ag ar vrazarded ewid klask lakaad ar reolenn da arveriañ, beteg lenn en ur mod difonn, skolel zokén (**B7MiHeSx**, **B7MiKrSx**, skolaerez pe danvez-skolaerez). Diskoueziañ a ra ho strivoù o deus komprenet pal an c'hoari. Mar n'eo ket naturel o mod da lâred c'hoazh, e c'heller soñjal e taint da benn, ha dreist-oll esperoud e vint gouest da lakaad o skolidi da ziwall. Evel ma ne vez ket rekiz

d'ar skolaer<sup>113</sup> boud ur mailh war ar soniñ gant ar fleüt ewid lakaad e skolidi da gaoud plijadur gant ar benveg-se, ha da roiñ c'hoant dezhe da voned pelloc'h, e c'hell iwe, na boud ne vo ket "disi" e mod da sanañ, henchañ e skolidi ewid o lakaad, int, war un "hent eeunnoc'h".

Harzoù : Ur sell douzh an daolenn Excel **SxB7** a ziskouez ne vez ket kavet an harzoù dirag un **h** ataw. Diouzh an tu arall e c'heller remerkañ harzoù e degouezhioù arall (7/13 goude **prop** en dro **Prop# e vo**, da skwer, ha 6/13 goude **adkavet** er frazenn **He zok roz a oa bet adkavet# edan ar bank izel gant Enora**). Degas a ra ar mod skolel da lenn un niver uhel a harzoù (15/40 gant **B7MiKrSx**). Tregantad an harzoù (17% gant **Sx**) a gouezh da 12% gant **Sy**, diaez anavoud ar rezon rik.

Troioù boutin ha reizhted ar liammadurioù : amañ c'hoazh e remerker pouez ar yezh komzet : e troioù-lavar boutin, sanet mat peurliesañ, e vez sevenet mat ar liammadurioù, da skwer e troioù evel **skrivet eo**, ha ne vern ket kalz ar skritur aze, evel ma vo gwelet bremañ en **Daolenn 38** :

<b>PB Troioù-lavar boutin</b>	Niverenn an item en daolenn Excel SxB7	Troioù	PB diwar 13 stajiad	%
<b>Sx</b>	Nn8	<b>Ret e vo</b>	12	92%
<b>Sy</b>	Nn8	<b>Red e vo</b>	12	92%
<b>Sx</b>	Nn11	<b>Da bet eur</b>	13	100%
<b>Sy</b>	Nn11	<b>Da bed eur</b>	13	100%
<b>Sx</b>	Nn31	<b>Mat a-walc'h</b>	12	92%
<b>Sy</b>	Nn31	<b>Mad a-walc'h</b>	11	85%
<b>Sx</b>	Nn32	<b>Unnek eur</b>	13	100%
<b>Sy</b>	Nn32	<b>Unneg eur</b>	13	100%

**Taolenn 38. Fichennoù Sx/Sy : Brazarded (B7).  
Sevenidigezh ar liammadurioù en troioù-lavar boutin.**

<sup>113</sup> Komz a ran amañ ag ar skolaerion. Eveljust n'eo ket tre hañval er skolaj ha nebutoc'h er Lise c'hoazh.

#### 4.5.3.6. Klozadur

Gwelet hon eus ne spir ket anavezoud ar reolennoù ewid dezhe boud lakaet diouzhtu en arver er gomz pemdezieg. Dre ma n'hell ket an den boud war ewezh da beb termen ewid diwall douzh e liammadurioù pa vez é komz, ne ra ar rezultadoù diskouezet uhelloc'h namaed kadarnaad ma santimant eo war an hirdermen hebkén e ranker koñseviñ ar labour-kenteliañ diwar-benn ar liammadurioù.

#### 4.5.4. LEVEZON AR SKRID WAR AR SANADUR

##### 4.5.4.1. Liammet e vez sanadur ha doare-skriv

###### 4.5.4.1.1. Ur gudenn ledan :

Etre komz ha skrid e vrall an traoù a vare da vare, etre un doare-skriv fonetikel hag unan etimologel. Setu aze d'an nebeutañ, e berrgomzoù, ar pezh a skeudennaoua istoer ar galleg (WALTER, 2001 : 207). Ar pezh a c'hell degas diaezamantoù da lenn, dreist-oll ewid an estrajerion hag an deserion ([wazo] > *oiseau*). N'eo ket gwell an traoù e saozneg ewid an den a glask tennañ ar sanadur diwar ar skrid<sup>114</sup>. Yezhoù zo nawazh a c'hell boud fonetikel a-walc'h, evel an italianeg.

Er c'hevredigezhioù hengounel, pa ne vez ket skrid ebed, ne c'hell ar yezh kemm namaed dre hec'h emdroâdur naturel, evel ma en doa MARTINET diskouezet he mod da voned war-raog e "*Economie des changements linguistiques*". Pa vez kavet, a-skoaz gant ar yezh komzet, ur yezh skrivet ha skrivet a-vraz, gant an oll dud bet desket dezhe da lenn ha da skriv gant ar skol, e c'hell ar yezh skrivet-se doned da drubuilhañ emdroiñ naturel ar yezh komzet.

---

<sup>114</sup> Henriette WALTER (2001 : 198) a ro da skwer gerioù enne an digram **-gh cough (pâz), enough (trawalc'h), tough (kaledog)** e-lec'h ma klewer [-f] / **hiccough (hik)** e-lec'h ma klewer [-p] ha **plough (arar), though (ewid da, Петра bennag ma)** ha **trough (dre)** e-lec'h ne vez ket sanet.

Ewid DELATTRE (1966 : 56) n'eo ket bet diefed ar mod da skriv war sanadur ar galleg :

“Ainsi la prononciation [ilzɔ̃] pour *ils ont* était inconnue au XVI<sup>e</sup> siècle. On prononçait soit [ilɔ̃] soit [izɔ̃]. Rappelons qu'au XIII<sup>e</sup> la forme du pronom personnel sujet de la 3P était encore *il* (lat. vulg. *elli*) prononcé [il] devant voyelle et [i] devant consonne. Ce n'est qu'à partir du XIV<sup>e</sup> qu'on a commencé à ajouter un *s*, par analogie avec les noms qui prenaient un *s* au nominatif pluriel sous l'influence des accusatifs pluriels. A la fin du XVII la prononciation [izɔ̃] gagnait du terrain dans la classe cultivée, mais on était encore loin de dire [ilzɔ̃]. (>> Théodore de BEZE, 1584 : "*il ont dit, i disent*").”

Herwez HINDRET<sup>115</sup> (1687) e komze 80% a dud e amzer heb sanañ ar c'hensonennoù-dibenn. Setu perag e alie sanañ *dè jan inconu...* kentoc'h eged ar pezh a veze lâret gant un nebeud a dud (“quelques-uns prononcent...”) *dè janz inconu....*

Tu zo da liammañ ar remerkoù-se, peogwir em eus savet an enklask diwar fichennoù skrivet just a-walc'h, gant ar pezh a skrive DECROLY & *al.* : ema ar fed-lenn ur bouelladenn dre weled, ha gant ar gweled an heni eo ar rol pouezusañ ennañ (in *Revue scientifique*, Mars 1906<sup>116</sup>).

#### 4.5.4.1.2. Ur gudenn e brezhoneg iwe :

Henn gwelet hon eus ouzhpenn ur wezh uhelloc'h : n'eo ket distag a-grenn ar mod da skriv diouzh ar mod da sanañ. Moian zo sur a-walc'h da zeskiñ d'ar gomzerion sanañ kentoc'h [ma:de] na boud e vo skrivet **mat eo**. Ouzhpenn-se ne vo ket tu (diaez-braz ataw e vehe) lakaad an doare-skriv da heuliañ bepred ar sanadur : problemoù arall a savehe, rekiz kavoud meur a “abid” douzh ar gerioù : **hi zo daet / daed eo ; un dra souezhus / souezhuz e oa ; lip ! / ur lib-e-baw...** Ar pezh a vez graet a-c'houde Julian MANER gant notadur ar c'hemmadurioù (**un tad, e dad, he zad / ho ki, ur c'hi, e gi**). Amañ e vehe tri

<sup>115</sup> *L'art de bien prononcer et de bien parler la langue françoise*, 1687, eil emb., p. 71, meneget gant DELATTRE (*opus cit.*, p. 57).

<sup>116</sup> In LOMBARDY, 1967 : 93.

abid ouzhpenn : **un tat** / **un tad-you** ; **e dat** / **e dad a eve** ; **he zat** / **he zad iwe**...Ouzhpenn-se e savehe ur skoilh arall douzh an diskodañ a-fed hirder ar vogalenn dindan an TM : **ur \*vak** [yr 'va:k] / **ma bag eo**... Neuze, torret lezenn an diveradur ewid skriv ar gensonenn dibenn-ger, torret ar liamm etre kensonenn-dibenn ha hirder hag ouzhpenn-se an hanter vuioù ha abidoù d'ar gerioù : un hent-dall eo, m'eus aon.

Lañset eo an traoù a-werso ewid ar pezh a sell douzh ar brezhoneg *arnewez*, ha ne ra ar lañs-se namaed moned war vuannaad bemdez. E Bro-Wened, da skwer, e vez klewet bremañ sanadurioù a veze estren-kàer ugent vloaz so c'hoazh (« **renta-kont** », « **kinnig** », « **brasoc'h-brasañ** », « **echu** », «**erruet** »,...). Siwazh, adoptiñ an troioù-se ne zegas ket pezhioù mad d'ar yezh : perag **\*renta-kont**, leonekâdur ar pezh a zo **rentiñ-kont** e W ; perag **\*kinnig**, pa vez lâret **\*kanig** (**\*kanid** zokén meur a wezh) (>**kennig** a jaoj d'an oll, evel **achu**, **arru**). Ha perag c'hoazh leonekaad gant an dro **brasoc'h-brasañ** ha narenn gouarn an dro **brasoc'h-braz** a zo skañvoc'h ha ken reizh all?... Ha chomel a ra bew ar gudenn :

““La prononciation d'une langue se transmet en général de génération en génération, par le parler environnant. Les conventions orthographiques n'ont alors qu'une importance limitée ; ce n'est pas le cas pour la langue bretonne au cours de ce siècle, car elle se transmet notoirement par l'écrit. (...) L'orthographe influe donc fortement sur la prononciation et transforme à sa façon le son même des phrases.” H. POISSON, in Mona BOUZEC-CASSAGNOU ha Dominik BOSSÉ (2002 : 6).

Ar pezh a zo da lâred ouzhpenn amañ, n'eo ket doare-skriv ar brezhoneg hebkén a vez en c'hoari pa gomzer ag ar brezhoneg hiziw (ha marse ag ar yezhoù bihan p'an em gavont a-skoaz gant ur yezh strewet ledan en-dro dezhi) : skritur ar galleg a c'hoari iwe, hag iwe evel-just soniadoù ar galleg, a c'hell strishaad mod-sanañ an newezvrezhonegerion, pa gomzint brezhoneg gant soniadoù ar galleg, bihannoc'h o niver<sup>117</sup>. Pa venege HINDRET an daou


<sup>117</sup> « Sur le plan consonantique, le breton comble presque toutes les lacunes du français standard. » Jean PETIT, *Avantages du bilinguisme précoce en général et du bilinguisme français-breton en particulier*, teul Dihun, p. 22. Skrivet en deus J. PETIT *Au secours, je suis monolingue et ...francophone*, Presses Universitaires de Reims, 1992. Mez mankoù ar galleg

sanadur “*dè jan inconu*” vs “*dè janz inconu*” e lâre da heul : “De vous dire laquelle des deux prononciations est la meilleure, c'est ce que je n'entreprendrai pas de faire” ! Furnezh an den...a gomze aze a emdroâdur *naturel* ar galleg. Mez pa vez anw a levezon ar skritur e brezhoneg hiziw, daoust ha ni zo gant un emdroâdur naturel ? Ya, diouzh un tu, mez goude ur menier gwallzarvoud : diskar niver ar gomzerion war an daoulamm-ruz ! Diaez eo souteniñ e kemm ar brezhoneg hiziw herwez e “emdroâdur naturel” evel ma komze MARTINET. Ar pezh a zo sur eo e kemm, na ne ra, ha buan. Mez kuit a arguzenniñ heb fin ebed, setu stad an traoù da heul deskamantoù tennet ag an enklask.

#### 4.5.4.2. Levezon ar skrid war ar sanadur herwez an enklask

##### 4.5.4.2.1. Skrid ha liammadurioù dirag ur vogalenn (R4) :

Splann eo levezon ar skrid pa geñverer rezultadoù ar fichenn **A2** gant re ar fichenn **A1**. Setu-gi en-dro amañ :



**Grafik. 43. Fichenn A2 : Skolidi (ag ar CM2 d’ar lise).**


**Emdroâdur sevenidigezh ar liammadurioù.**

**Dibennoù skrivet kaled.**

---

standard n’int ket mankoù ewid ar galleg : mankoù int e-keñver ar yezhoù arall. Hag ur risk zo, pa glask ar galleger komz ur yezh evel ar brezhoneg, enni soniadoù n’int ket re ar galleg, ma vo mankoù er brezhoneg a gomzo.

Gant ar **Grafik 43** (Fichenn **A2**, dibennoù kaled) e welomp ne za ket jamez ar PB da vout trec’h war heni ar galleg a-hed red ar skol. Mez pa vez skrivet dous ar gensonenn-dibenn e vez ar c’hontrel (**Grafik 44**, fichenn **A1**) : +35% er CE2 ha kement en 3<sup>ved</sup> c’hoazh.



**Grafik. 44. Fichenn A1 : Skolidi (ag ar CM2 d’ar lise).  
Emdroâdur sevenidigezh ar liammadurioù.  
Dibennoù skrivet dous.**

Talvoud a ra ar boan selloud a-dost douzh ar rezultadoù, live ha live, ha zokén gwenod ha gwenod, evel ma vo prezantet en daolenn da heul (**Taolenn 39**, p. 471). Renablet em eus feur ar patrom brezhoneg er fichennoù **A2** hag **A1**, keñver ha keñver. N’eo ket dister tamm ebed an diforc’hioù a zo bet lakaet war-wel aze gant an enklask.




<b>A2/A1 Keñveriañ FEUR ar PB e peb live</b>	<b>A2 Kens.-dibenn <u>kaled</u></b>	<b>A1 Kens.-dibenn <u>dous</u></b>	<b>KRESK</b>	<b>KRESK DRE LIVE</b>
D1	17%	56%	+39%	CE2 +34%
K1	25%	64%	+39%	
P1	16%	41%	+25%	
D2	26%	49%	+23%	CM2 +28%
K2	29%	65%	+36%	
P2	23%	48%	+25%	
D3	37%	76%	+39%	5ved +33%
K3	20%	53%	+33%	
P3	29%	57%	+28%	
D4	47%	89%	+42%	3ved +37%
K4	34%	69%	+35%	
P4	31%	66%	+35%	
D5	50%	88%	+38%	Lise +35%
K5	43%	85%	+42%	
P5	36%	61%	+25%	
B6	62%	82%	+20%	
<b>OLLAD</b>	<b>33%</b>	<b>66%</b>	<b>+33%</b>	<b>+33%</b>

**Taolenn 39. Fichennoù A1/A2 : Skolidi + brazarded (B6).**


**Levezon choaz ar gensonenn-dibenn skrivet  
war feur-sevenañ ar liammadurioù dre vlotaad a live da live  
ha herwez peb gwenod diwyezheg.**

A-bouez e tiskouez boud choaz ar gensonenn dibenn-ger war ar sanañ : 33% a ziforc'h olleg. Ewid peb gwenod hag ewid peb live e remerker ar memez efed, a valigañs etre +23% d'an nebeutañ ewid ar skolidi da +42%. Gant ar vrazarded e remerker ar bihannañ kresk (+20%) : gwell e seblant ar yezh boud mestroniet gante, ha nebeud a grog en dehe ar mod da skriv war o sanadur.

4.5.4.2.2. Skrid ha liammadurioù dirag l, m, n, r (R4) :



**Grafik. 45. Fichenn B2 : Skolidi (5ved, 3ved, Lise).**  
**Emdroâdur sevenidigezh ar liammadurioù dirag l, m, n, r.**  
**Dibennoù skrivet kaled.**



**Grafik. 46. Fichenn B1 : Skolidi (5ved, 3ved, Lise).**  
**Emdroâdur sevenidigezh ar liammadurioù dirag l, m, n, r.**  
**Dibennoù skrivet dous.**

N'eo ket uzlakaduz\* an daou c'hrafik (**Grafik 45** ha **Grafik 46**). Un diforc'h-sanañ a za da heul mod da skriv ar c'hensonennoù-dibenn (n'eus namaed an tres-se a gemm etre **B2** ha **B1**) : pa vez skrivet dibennoù dous (Fichenn **B1**) e vez klewet muioc'h a liammadurioù dous dirag **l, m, n, pe r**.

Ur c'hresk bihan a vez remerket gant ar fichenn **B2** etre 5ved ha Lise, pa noter un digresk kentoc'h gant ar fichenn **B1**. Ar memez fenomen a vez gwelet iwe gant ar fichenn **A1** (**Grafik 44**, p. 470). Diaez eo gouied perag. Daoust d'an digresk-se e chom krenvoc'h ar patrom brezhoneg pa vez skrivet dibennoù dous (**B1**). Setu amañ taolenn ar c'hresk etre **B2** ha **B1** :

<b>B1/B2</b> Liammadur dirag <b>l, m, n, r</b>	<b>B2</b> Dibennoù <u>kaled</u> Patrom brezhoneg	<b>B1</b> Dibennoù <u>dous</u> Patrom brezhoneg	KRESK
5ved	23%	60%	+37%
3ved	25%	59%	+34%
Lise	32%	41%	+9%
OLLAD	27%	55%	<b>+28%</b>
BRAZARDED B6	21%	37%	+16%

**Taolenn 40. Fichennoù B1/B2 : Skolidi ha Brazarded (B6).**

**Liammadurioù dirag l, m, n, r a live da live.**

Er skolaj e vez kizidikoc'h ar skolidi douzh ar mod da skriv eged er lise, war a seblant (gant an enklask-mañ ataw). Da notiñ e eus muioc'h a gresk gant ar vrazarded eged gant ar liseidi (sinifiusted rezultat olleg ar skolidi :  $\chi^2 = 16.204$  (*ddl.1*) ;  $p < 0.001$ ).

#### 4.5.4.2.3. Skrid ha sandhi dirag h- :

Titouret e vimp gant ar fichennoù **C1** ha **C2** ewid ar poent-mañ. Kemeret em eus skwer ar skolioù Diwan ewid henn taolenniñ. Da gentañ e vo remerket un dra heverk : pouezusted an harzoù etre 21% hag 31%, a-gempouez gant ar

sandhioù sevenet. Ne vez ket sellet douzh an **h**-lizherenn-benn evel douzh ur lizherenn vud : ouzhpenn an hanter ag ar skolidi Diwan a galeta ar gensonenn dibenn-ger diragtañ pe a verk un harz, evel ma vo tu d'henn gweled gant an daolenn da heul (**Taolenn 41**) :

C1/C2 Sandhi dirag h-	C1 Dibennoù dous <u>kontrel</u> douzh ar sandhi gortozet				C2 Dibennoù kaled <u>a glot gant</u> ar sandhi gortozet		
	DIWAN	PB	Harz		Arall	DIWAN	PB
C1D3	25	25	44	C2D3	31	31	35
C1D4	27	24	47	C2D4	33	21	42
C1D5	22	22	52	C2D5	28	28	42
Ollad	74	71	143	Ollad	92	80	119
%	26%	25%	49%	%	32%	27%	41%
Braz. C1B6	37%	21%	38%	C2B6	42%	27%	27%

**Taolenn 41. Fichennoù C1/C2 : Skolidi Diwan ha Brazarded (B6).**

**Liammadurioù dirag h- a live da live.**

Diouzh an tu arall e chom ouzhpenn 40% na sanont ket an **h**-kensonenn evel kenniget gant geriadur An Here da skwer. Mez n'heller ket lâred e vern kalz ar skritur amañ : nebeud a gemm etre **C1** ha **C2** : + 6% a gresk hebkén gant ar PB (sandhi amañ). N'eo ket gwall sinifiuz enta.

#### 4.5.4.4. Klozadur

N'eo ket choaz ar gensonenn dibenn-ger un dra neutr e-keñver mod da sanañ ar liammadurioù a vo klewet diwar lenn. N'eo ket an dra-se un dizoloadenn, pandeogwir e vez santet an dra-se gant an dud, mez bremañ e c'hellomp lâred e c'hoari ewid 33% dirag ar bogalennoù, 28% dirag **l, m, n, r** ha 6% dirag **h**-.

## 4.6. AR 4 REOLENN DIAZEZ HAG AR C'HELENN

### 4.6.1. KELENN AR SANADUR

#### 4.6.1.1. Ur preder dister

Ne ziskouez ket ar brezhoneg boud e gwell stad eged ar galleg war boent kelenn ar sanadur (Sd. § 3.1.1., p. 269). Daoust hag-eñv ne vehe ket ereet an daou dra ? Levezonet gant ar studioù war ar galleg, na raont ket kaz ag ar liammadurioù, n'o doa ket marse ar yezhourion vrezhoneg santet an dober a selled a-dost douzh ar problem-se en hon yezh. Ar pezh a zo, e-kontrel diouzh ar galleg, hag a vez klewet stank en endro, nen dez an den kalz a chañs da glewed brezhoneg war ar pemdez, mar ne gemer ket ar boan da voned er metoù adaz, ha gwirroc'h an dra-se ewid ar skolidi c'hoazh (JONES)<sup>118</sup>.

Mez n'heller ket distag dodenn ar peder reolenn a-zoc'h ur soursi brasoc'h, a zo lakaad poan da bouezañ war ar pezh a zo kumun kentoc'h war ar pezh a zo dishañval : *esprit d'intercourse* e-lec'h *esprit de clocher* (Sd. L1, § 1.4.3.6., p. 87). Evel ma skrive DALGALIAN (2000 : 144), “à force de nous focaliser sur nos différences, nous en venons à perdre de vue tout ce que nous avons en commun.(..) L'excès de focalisation sur les différences culturelles finit par trouver des relais désastreux dans l'opinion publique et nous contraint désormais à privilégier une vision plus équilibrée des particularités des peuples, des langues, des ethnies.”

#### 4.6.1.2. Un dober e brezhoneg

Setu perag e rankomp studioù ar feson da gas an traoù da benn, mar soñjomp e talv ar boan. Ne vo ket amañ savet ur dra glok war ar sujed, a yahe d'ober ur levr arall, pleustrekoc'h eged an dezenn-mañ. Kentoc'h e klaskin roiñ ur braztres ag ur bedagogiezh difer a-zivoud ar pezh hon eus studioù amañ.

---

<sup>118</sup> « Très souvent, l'école représente le seul point de contact entre les débutants gallois qui habitent des quartiers anglicisés et la langue galloise. En conséquence ils ont une bonne connaissance des termes scolaires mais une faible connaissance de [ce] qui existe à l'extérieur de la salle de classe (maladie, objets...). » (In *La Bretagne Linguistique*, Vol. 10, 1996 : 167).

Mar em eus labouret mat en do komprenet ar lenner e welan kelenn ar liammadurioù (R4) stag douzh un teskad ledannoc'h, ennañ tri foent arall : an taol-mouezh (R1), hirder ar vogalenn dindan an TM (R2) ha sanadur ar gensonenn en dibenn absolut (R3), ar pezh a ya d'ober *ar peder reolenn diazez sanadur ar brezhoneg*, da heul ur c'hennig bet graet gant A. BOCHÉ troioù 1995.

#### 4.6.1.3. Ar peder reolenn : ur stern diazez

Peb reolenn aze a c'houlenn akord an dud warni, ha, pelloc'h, akord an dud iwe war ar pal meur a vehe, er skol, kelenn ur yezh unvan a-walc'h. Ne c'houlennehe ket ar yezh-se, daoust dezhi boud unvan, un *unfurmekâdur* strizh. Plas a c'hell chomel d'ar variezon en ur sistem evel-se : daou sanadur d'ar gerioù gant **zh** : gant **z** pe gant **h** ; an dibenn-liester **-où** sanet [u] pe [-ow] ; **-oa-** sanet [wa] pe [we] ; implij **-fe** pe **-he** en doare-divizoud ; an dibennoù-verb **-añ** hag **-iñ** sanet [ã]/[ĩ] pe [ẽɲ] ; **st** sanet [st] pe [ʃt]<sup>119</sup>... tra ma chomo gwir an etrekompren etre an dud. Ne vehe aze namaed ur benveg ewid moned trema an *arc'hyezh* ("archilangue"), a zo (pe a vehe) anezhi dreist d'an diforc'hioù a beb sort, heniennel pe stroll (CHOMSKY, 1985 : 113), pe trema ar brezhoneg *kengejuz*, ewid ober gant ger A.-M. HOUDEBINE (sd. p. 65).

Mard eo akord ar Vrezhonegerion war ar c'horpus reolennoù-se 'm eus klasket diskoueziñ o fouez er yezh, neuze e chomo daou aters da sevel : 1) Pesort doberoù kenteliañ a vehe rekiz renabliñ ewid doned da benn ag hor pal, ha 2) Pesort benvegoù kenteliañ a vehe rekiz dastum, kempenn pe sevel a-newez ewid aesaad ar c'helell war an dachenn-se ? Red eo studial peb reolenn d'he zro, ha derc'hel kont a liammoù peb unan gant an doare-skrivañ, pandeogwir e vez staget stard pe startoc'h skrid ha sanañ evel m'hon eus henn diskouezet (Sd. § 4.5.4., p. 466 ).

---

<sup>119</sup> Daoust ma vez graet "paotred an tch-tch" ag ar Wenedourion, ne vez ket rekiz staonekaad ken ha ken ewid komz mod Gwened : er-maez ag ar **-st**, sanet [ʃt] ingal, e vez sanet **kemer**, **digor**, **bugale** evel e KLT e-kostez An Alrae.

#### 4.6.2. REOLENN 1 : AN TAOL-MOUEZH STANDARD

Ewid gelloud kelenn sklaer ha kempouell an taol-mouezh standard (war ar silabenn eil-ziwezhañ, sd.L1, § 2.2.5., p. 150) e welan diw bazenn :

1) Astenn ar pleustr d'an oll skolioù, petra bennag ma vo o lec'hioù er vro pe e maez-vro. Ur limit a c'hellomp lakaad, a dalv ewid an oll : na gelenn ur re a daol-mouezhiañ a lakahe ar silabenn ziwezhañ (peurvuañ didaol-mouezh) da steuziañ : kelenn “**öber**”, ha narenn “**ö'r**” !

2) Kelenn roll ar gerioù a resev an TM er-maez ag ar reolenn olleg (**perag, petra...**).

Kennig : heuliañ mod-ober V. SEITE a oa izlinenniñ ar silabennoù taol-mouezhiet er gerioù-se er geriadurioù ha dre vraz er levroù hag er benvegoù kelenn ar yezh : un taol-sell a vo trawalc'h d'o remerkañ er geriadur (a-boan unan da beb diw bajennad).

N'eus, ewid ar Reolenn 1, namaed un diviz d'ober, da lâred eo kelenn ar brezhoneg gant an TM standard. Goulenn a ray an dra-se eveljust ma vo pleustret war-se gant ar skoliataerion da gentañ.

#### 4.6.3. REOLENN 2 : HIRDER AR VOGALENN DINDAN AN TAOL-MOUEZH

Tra ma ne vez ket kavet an enebadur berr/hir e galleg e vern kalz an hirder e brezhoneg ewid diferañ ar gerioù (**son** ≠ **sonn** ha perag pas **tagañ** ≠ **taggañ**<sup>120</sup>).

E-kontrel diouzh ar Reolenn 1, mar fell dimp kavoud ur benveg kempouell ewid R2, e rankahimp ober un taol kempenn d'an doare-skrivañ evel ma welimp.

---

<sup>120</sup> **Zapiñ, zipañ, taggañ...** a vez klewet e brezhoneg bremañ, da heul ar saozneg (dre ar galleg peurvuañ). Mar spir ar **p** e **zapiñ, zipañ** ewid merkañ berrder ar vogalenn diragtañ, e vehe rekiz gouarn daou **g** ar saozneg er ger **täggañ** ewid lakaad da gompren e vez berr an **a** ennañ pa vez hir er ger **tagañ**. A-hengoun ne veze ket implijet an **gg** e brezhoneg.

#### 4.6.2.1. Gerioù liessilabenneg (TM war ar silabenn eil-ziwezhañ)

Gwelet hon eus (sd. L1, § 2.3., p. 170) n'eus kudenn ebed a-fed TM ha hirder ewid ar pezh a sell douzh ar gerioù liessilabenneg, pa zegouezh an TM enne war ar silabenn eil-ziwezhañ : hir e vez ar vogalenn dindan an TM dirag **b, d, g, z, j, v** ha berr dirag **p, t, k, s, ch, f** (**tāgañ, tǎpoud**).

#### 4.6.2.2. Anwioù-kadarn unsilabenneg pe liessilabenneg gant an TM war ar silabenn ziwezhañ

Ewid an anwioù-kadarn e ouiomp e vez heuliet reolenn an diveradur gant an oll ewid skriv ar gensonenn dibenn-ger, zokén e Peurunvan-41. Neuze e vez aez diskodañ hirder ar vogalenn, gant an heveleb reolenn hag er § 4.6.2.1. uhelloc'h, zokén en anwioù-kadarn unsilabenneg hag er re taol-mouezhiet war ar silabenn ziwezhañ : **ar grīp** (ak) ≠ **ho krīb** (ak) ; **ar perāg** (ak). N'eus problem ebed aze neuze<sup>121</sup>. Mez estroc'h eged anwioù-kadarn zo, ha war an dachenn-se e chom digempouellded.

#### 4.6.2.3. Anwioù-gwan, adverbou, araogennoù, stagelloù, anwioù-verb<sup>122</sup>

Amañ e chom bew ar gudenn gant ar Peurunvan-41, nen doa ket reizhet fari 1902 GUILLEVIC ha LE GOFF : abalamour ma ne vez ket mui heuliet reolenn an diveradur ewid skriv kensonenn-dibenn ar gerioù-se, n'heller ket mui diskodañ an hirder er gerioù unsilabenneg nag er re taol-mouezhiet war ar silabenn ziwezhañ : **\*blot** (ag) a rank boud sanet evel **rod** (ak), narenn evel **trot** (ak), hag ar furm **\*perak** (adv) ne ziskouez ket e vez hir an **-a-** er ger-se e gwirionez (sañset berr dirag **-k**) peogwir m'ema e daol-mouezh war an eil

<sup>121</sup> Namaed un dra : rekiz e vehe dilezel an **ss**, intrudu an Etrerannyezhel *klassel* a zegas trubuilh er sistem kempouell-se pa seller douzh ar liammadurioù (Sd. § 5.3., p., 490 ). En anwioù-verb a achu gant **-aat** e vehe trawalc'h an daou **a** ewid sinaliñ an TM war ar silabenn ziwezhañ ha hirder an **a** namaetañ a vez da voud sanet (ds. brasaat > [bra'sa:t]. Mez kennig a ran lakaad un **d**-dibenn memestra (**brasaad**) (un anw-verb eo, ouzhpenn-se, dle. un anw).

<sup>122</sup> E Yezhadur newez TES (2009) ne veneger namaed an anwioù-gwan : « Aes eo kompren petra a soñje hon hendadoù : gwelloc'h e oa gante laoskel war lost an anvioù-gwan ar gensonenn a zeufe war-wel en derezioù uhelloc'h pe uhelañ : **bras** abalamour da **brasoc'h, brasañ** (hag ivez **brasat ! brasaat**). Pezh n'o doa ket gwelet marteze eo ez eus dibennoù kaletaus eus **-oc'h, -añ, -at, -aat**. Padal, kalzik anvioù-gwan zo bet skrivet evel ma teree : gleb en abeg da glebor (en despet da glepoc'h eta), kloz en abeg da klozañ...). p. 154.



silabenn. Abalamour d'an dra-se e vehe red astenn reolenn an diveradur d'an oll c'herioù, evel ma raer dija gant an anwioù-kadarn.

Kennig : dilezel da vad reolenn GUILLEVIC/LE GOFF ha chom heb skriv \***blot**, \***perak**, \***evit**, \***brezhonek** ha kement a zo. Ne zegaso an abandon-se kalz a ziaezamantoù d'ar re gustum douzh ar Peurunvan-41 peogwir e kaver ar furm gant kensonenn an diveradoù e gerioù arall dija : \***blot** >> **BLOD** (**blodenn**, RH) ; \***perak** >> **PERAG** (**perager**, RH) ; \***brezhonek** >> **BREZHONEG** (**brezhoneg**, RH, AH) ; \***evit** >> **EVID** (**evidon**, RH, AH) ; \***bras** >> **BRAZ** (**brazez**, RH, AH)...

Degas a ran da soñj e oa bet divizet ober an dra-se gant ar gomision bodet ewid unvaniñ an doare-skriv er bloazioù 1971-1976 (ar poent-akord kentañ e oa<sup>123</sup>). N'eo ket ar c'hemm-se (heni choaz ar gensonenn-dibenn enta) a-live gant ne vern pesort kemm arall a c'hellahe boud graet en doare-skriv : ne rahe namaed reoliekaad an traoù, pa dorre choaz ar Wenedourion lojik ar sistem brezhoneg. **Blod** (ag) ha **rod** (ak) e vo sanet hir an **o** e peb unan anezhe, ar pezh na vo ket e **Spot** pe e **trot**, e-lec'h ma vo berr. Komprenet e vo e vo **fallagr** da vout sanet gant un eil **a** hir (ger direizh a-fed TM), dirag **-g** (< **fallagriez**h).

#### 4.6.4. REOLENN 3 : DIVOUEZHADUR AR GENSONENN EN DIBENN ABSOLUT

Ur remerk a sav diouzhtu da heul ar c'hennig am eus graet er § 4.6.2.3. (p. 478) : mar skriver an oll c'herioù herwez an diveradur e vo kresk gant ar gerioù a achuo gant ur gensonenn zous. Da skwer e vo skrivet **blod**, **braz**, **perag**... P'en em gavo ar gerioù-se dirag un harz bennag e vehe da zivouezhiañ an **-d**, ar **-z** pe ar **-g** enne : **un dra vlod** ['vlo:t] ; **un den braz** ['bra:s] ; **ar perag** [pe'ra:k]. Ha ne vehe ket gwell gouarn mod da skriv a dalveze e-raog, da lâred eo \***blot**, \***bras** ha \***perak** ? N'eo ket dister ar remerk. Lod ag ar skolidi a

<sup>123</sup> Roll ar c'hinnigou a zo bet emgleo diwar o fenn : « 1. Lakaad **b**, **d**, ha **g** e leh **p**, **t** ha **k** e dibenn ar gerioù, hervez an deveradur, heb diforh ebed etre ano-kadarn hag ano-gwan... » Karaez d'an 22 a viz mevezan (*sic*) 1974, in Skol Vreizh N° 37, Juil-Sept. 1974.

c'hell boud levezonet gant ar gensonenn vlod en dibenn absolut, daoust dezhi boud reizh e-keñver an diveradur. Ur skwer a gement-se a vez roet gant **K3GwAmF2** (rummad 2) e-lec'h ma klewer , e-tal [kalonekat], [ar galek], [taput] sanadurioù stankoc'h c'hoazh mouezhiet an dibenn enne : [yr fanifestadg], [yr laburerez], [yr bagadd], [ar brəzoneg], [anaig].

Ur wir gudenn-genteliañ zo aze iwe. Rag mar bez divouezhiet ar gensonenn en dibenn absolut gant ar peb brasañ ag ar vrezhonegerion e gerioù evel **Annaig**, ne vez ket-tre evel-se ewid gerioù arall a-sort gant **noz**, **lod** pe **staj** (sd. L1, pp. 212-214). Direnkuz e ta da voud ar mouezhiañ en dibenn absolut dreist-oll pa vez pouezet war ar silabenn ziwezhañ gant un hirraad d'ar gensonenn-dibenn : [mes'tre:z]#. Ur pleg eo da dapoud ewid an deserion enta, divouezhiañ ar gensonenn en dibenn-absolut. Rekiz sur a-walc'h gourdoniñ an dud da gement-se, gant skwer an anwioù-lec'h a ziskouez (a ziskoueze) peurvuañ ar mod da sanañ gwirion : **Le Folgoet**, **Le Guilvinec**.<sup>124</sup>

#### 4.6.5. REOLENN 4 : LIAMMADURIOÙ

Diskouezet eo bet en dezenn penaoz eh a war-raog sistem ar liammadurioù e brezhoneg. Dishañval diouzh ar galleg, ogozig ewid peb poent. Bernoud a ra neuze deskiñ ar sistem-se, hag a-stur gant heni ar galleg. Un alc'hwez-kenteliañ eo d'am soñj kemer harp war mod-ober ar galleg a-fed liammadurioù, abalamour ma tesk an darn vuiañ ag an dud (skolidi ha brazarded zokén) diwar o yezh-vamm a zo ar galleg. Mez dober vo ouzhpenn a zisplegañ sistem ar galleg war-un-dro gant heni ar brezhoneg, rag daoust d'an heni kentañ boud heuliet dre vraz gant ar c'hallegerion, ne vez ket aez ataw d'ar re-mañ lâred penaoz eh a war-raog en e bezh : “il n'y a de grammaire que comparée”, herwez ger Evelyne CHARMEUX.

Mez adal ar gentel vrezhoneg kentañ eo e ranker sachañ ewezh an deserion war an dachenn-se. E-kontrel douzh ar c'hemmadurioù, a c'hell boud hag a vez

---

<sup>124</sup> Meneg zo ag an divouezhiañ-se e yezhadur newez TES, pp. 152-153.

ampellaet e progresadurioù an deskiñ, e ranker pouezañ diouzhtu war ar liammadurioù (evel war an teir reolenn-diazez arall). Ur labour a c'houlenn padusted ha strivoù a-ratozh, a rank ar brezhoneger tapoud evel ur refleks naturel.

Ne vo doare-skriv ebed a gloto fasibl, ewid ar pezh a sell douzh ar gensonenn dibenn-ger, gant ar liammadur reizh. Reolenn an diveradur a vo mestr aze. Peurvuiñ e vo kavet ur gensonenn zous e fin ar gerioù brezhoneg, peadra da aesaad an traoù, peogwir e vez douget ar lennerion da heuliañ sinoù ar skrid : surroc'h e vimp da glewed **evit Anna** sanet [evidana] kentoc'h eged gant **\*evit Anna**. Na boud e chomo gerioù gant kensonennoù-dibenn kaled (**respect, dous, plas**, a-liez o toned ag ar galleg pe ag ar yezhoù estren), peurliesañ en em gavo ar lenner gant dibennoù dous memestra.

#### 4.6.6. PLEUSTRIÑ WAR AR SANADUR

##### 4.6.6.1. Kelenn d'an estranjourion

Ne vez ket kemeret ataw an amzer pe ar boan da bleustriñ war ar sanadur. N'eo ket un dra ken pouezuz-se e galleg ewid ar Fransizion : gouied a ra ar vugale komz galleg kent arvu er skol. Ewid ar galleg, kavoud soursi gant ar sanadur a vez kavet gant ar re garget a gelenn ar galleg d'an estrenion.

Ar pezh a lenner dindan pluenn Marguerite PEYROLLAZ ha M.-L. BARA DE TOVAR en o *Manuel de phonétique et de diction française à l'usage des étrangers* (1954) :

« L'étude de la diction (...) accompagnera et complétera de façon vivante l'étude littéraire, grammaticale ou psychologique de notre langue et de notre pensée. Par ailleurs, cet entraînement méthodique à rendre les accents justes, le rythme, l'articulation, sera une excellente discipline. Les élèves lutteront en même temps contre leur propre rythme, leur propre mélodie (...).

La phrase, bien rythmée, décomposée en groupes correspondant à une idée logique qu'on peut isoler, sera travaillée sur le plan auditif et sur le plan de l'expression (...).

Setu aze un nebeud hentoù a c'hell ar skolaer ne lâran ket heuliañ direzon, mez klask arnodiñ ewid santoud ha muzuliañ e efedusted da-geñver pal ar sanañ "brezhoneg". Komz a raont a c'hourdonadur metodeg, gouest da sikour an estranjourion da leuskel plegoù o yezh-vamm a-dreñv. Ha n'eo ket ar brezhoneg er memez stadiad ? Peurliesañ e saver ar brezhoneg evel eil yezh war ur yezh-vamm arall. Ur labour paduz a rank ar gelennerion ober war an dachenn-se enta, ha n'eo ket menegañ ar reolennoù hebkén.

#### **4.6.6.2. Drevezañ ar skolaer**

Herwez Jos CORBEL (1981 : 12-13) ema drevezañ\* ar mestr, gant ma tay ar reizhadennoù rekiz gantañ da heul, ar gwellañ feson da dapoud ur sanadur ag an dibab. Goude an enklask e ouiomp ne gomz ket ar vistri bremañ herwez ar patrom brezhoneg a anaveze Jos CORBEL tregont vloaz so c'hoazh. N'hellor ket doned da benn (mar lakaer ar sanadur da bal), heb soñjal er mod da sachañ ewezh ar vistri war o sanadur dezhe iwe.

#### **4.6.6.3. Choaz testennoù**

Rekiz e vo neuze klask ha kavoud testennoù, mez iwe enrolladennoù, gouest da zegas soñj d'ar vistri ag *ur mod brezhoneg da gomz brezhoneg*. E-mesk produadurioù TES e c'hell an den kavoud un nebeud anezhe dija (komzet em boa a vouezhioù PJ. HELIAS, R. AN DU, da skwer. Roiñ a ra PEYROLLAS & al. da gompren e rank choaz an testennoù boud graet gant aket :

«C'est pourquoi le choix des textes, dans ces cours, est de première importance. En diction, si l'on donne un modèle, il faut que ce modèle soit parfait et que l'écrivain ait su rendre exactement sa pensée, en la soulignant par des sons justes, soutenus par un rythme et une mélodie irréprochables. »

Heb roiñ an dra-se da skwer rik, kredabl e vo rekiz d'ar gelennerion en em c'houlenn e pesort mod kas o c'hevredi taol-mouezhiañ ha liammañ da benn. Hiziw e c'heller kavoud ewid-se benvegoù newez : a-c'houde kreiz ar bloawezhioù 1990 e ya war-raog teknologiezh ar gomz (AUBRY, 2004). Diskouezet en deus MERMET (2002 ; 2006) penaoz implij an urzhiataer er c'hlas. Sintezenn ar gomz a za da vout fealloc'h-feal d'ar realded. Ha kontiñ a ra kalz Nina CATACH war ar benveg-se iwe, enkontet ewid an deskiñ skriv<sup>125</sup>. Herwez ESKENAZY (1998)<sup>126</sup> e c'heller implij an anavoud-komz (*reconnaissance de la parole*) ewid gwellaad kalite lenn an deskerion. Pouezañ a ra AUBRY war ar brozodiezh :

“Si la prosodie n'est pas correctement mise en place dès le début de l'apprentissage, la prononciation des voyelles et des consonnes risque d'être gravement affectée. Loin d'être un phénomène accessoire, elle est une étape fondamentale dans l'apprentissage d'une langue étrangère.” (2004, 11).

Eveljust ema lodeg ar peder reolenn diazez 'm eus prezantet amañ er pezh a ya d'ober prozodiezh ar brezhoneg. E Kan ar Bobl e oa bet krouet ur gevrenn ewid broudañ ar vrezhonegerion braz ha bihan da ezrevell\* o yezh. Mez ne oa ket den ar bloaz-mañ ha n'eo ket sur e vo dalc'het ar c'hennig-se : ha ne vehe ket an intrudu-se ur c'hammed war an hent mad, just a-walc'h ? Gelloud a raomp kompren frazenn Corine ASTESANO (2001 : 45) : « La performance rythmique (*kurenn ritmeg*) peut être vue comme expression de l'esthétique humaine. » Mard a an estetizm a-skoaz ouzhpenn gant un intent brasoc'h, ne vo ket 'maed korvo da dennañ ag ar labour-se...

---

<sup>125</sup> “Je crois profondément que le travail de l'enfant sur ordinateur, s'il est bien compris pour ce qu'il est, peut apporter aux avancées actuelles en didactique l'outil moderne d'aide à la recherche personnelle enfantine dont elles ont besoin, renouveler qualitativement les habitudes, spécialement en orthographe, et il faudra bien y venir. » (In JAFFRE, 1992 : 5).

<sup>126</sup> Meneget gant AUBRY, *op. cit.*, p. 66.

## 4.7. KLOZADUR AR PENNAD 4

Gant an enklask hon eus gellet ober un dro e-mesk sanadurioù ar vrezhonegerion yaouank. Gweled a ra ruz ar pezh a ra Mark KERRAIN anezhe “les caractéristiques du breton” : an taol-mouezhiañ, an enebadur hir/berr gant ar bogalennoù, ar liammadur ha kaletâdur an dibennoù (1997 : 8). A-fed TM standard 34% a zegouezhioù reizh ; a-fed hirder 23% er gerioù liessilabenneg ; a-fed liammadurioù a-boan 30% a vlotâdurioù dirag ur vogalenn. N’eus namaed a-fed divouezhadur ar gensonenn en dibenn absolut e chom ar patrom brezhoneg liwet madig a-walc’h c’hoazh (71%)... en ur ger anavezet mat evel *Annaig*, mez kouezhel a ra ar feur-se etre 6% ha 28% pa vez anw ag anwioù liessilabenneg !

Neuze e vo red d’ar skol en em c’houlenn petra ober : leuskel an traoù da voned pe sevel ur c’henteliañ adaz, e bal stourm douzh an dougañs-se.

Gwelet hon eus pouez ar skrid er mod da sanañ, ur pouez bras aet a-gaoz ma vez “diaez d’ar studierion klevout brezhoneg en-dro dezhe, er brezhonegva zoken”, hag a-gaoz ema “gwall zister lec’h ar yezh er skingomz hag er skinwel ouzhpenn (...). Ouzhpenn-se ne c’heller deskiñ yezh ebet hep he c’hlevout, mar menner he c’homz” (KERRAIN, *op. cit.* p. 6). Braz eo pouez ar skrid e brezhoneg enta, ha treituz war meur a dachad pa glask ar studier en em harpañ warnañ ewid komz. Ha tu a vehe da wellaad ar benveg red-se ? Ha tu a vehe d’henn lemmañ ewid tizhoud hon pal : treuskas ar gwellañ ma c’heller sanadur ar yezh ? Setu an dachenn am eus klasket difraostiñ er studiadenenn da heul.

## 5. KLASKEREZH A-ZIVOUD AN DOAREIOÙ-SKRIVANÑ

Anad eo ema daet ar Peurunvan-41 an doare-skriv muiañ implijet hiziw. Pezhioù mad zo ennañ, da gentañ rag ma vez gwelet evel un doare-skriv unvan, ar pezh a zo gwir abalamour d'ar strivoù bet graet ewid tostaad douzh ar gwenedeg, a zo bet un araokâdenn a-bouez. Chomet eo hanter-hent nawazh, war meur a boent, mez dreist-oll e chom sioù braz ennañ : ur fari pedagogel meur eo boud degemeret evel bara-chuenn skriv ar c'hensonennoù-dibenn hervez reolenn 1901 ar Wenedourion, ha degemeret ataw goude-se. An ansioù graet àr-lerc'h ar brezel 1939-1945 ewid gwellaad an traoù o deus oll afochet, ha n'eo ket ewid mad ar brezhoneg.

Ar reolenn ken splann a gaver en anvioù-kadarn etre **klot** [klot] ha **klod** [klo:t] ne dalv ket mui ewid an anvioù-gwan : **blot** [blo:t]. Ouzhpenn-se, gant pouezuz ema ar skritur war ar sanadur, ar pezh a zo bet diskouezet en dezenn, skriv ar gensonenn-dibenn gant ur gensonenn galed ewid kalz a c'herioù a zegas sevenidigezhioù treuz er liammadurioù (ds. **evit** <sup>ˈ</sup>\*t an dud).

Daoust d'an dra-se n'heller ket lâred e tahe an diskloum gant an doare-skriv hebkén. Komz ag ar liammadurioù, prezantiñ o modoù da c'hoari er yezh (n'eo ket anad), sevel benvegoù gouest da lakaad ar skolidi hag an oll re o deus c'hoant da zeskiñ ar brezhoneg da gomz gant ar patrom brezhoneg kentoc'h eged heni ar galleg, setu aze, d'am soñj, ur pal a c'houlenn un tamm preder, a-live gant heni ar c'hemmadurioù.

Dre ma ranker studiañ an traoù a-gerzh, ha pandeogwir n'heller ket komz ag ar peder reolenn-diazez heb komz a vod da skriv ar c'hensonennoù-dibenn, daet e oa soñj din moned pelloc'h war dachenn an doare-skrivañ. Pandeogwir hon eus komzet ag ar liammadurioù, a zegouezh e juntadur ar gerioù, e-lec'h ma en em gav ar gensonenn dibenn-ger a-stok gant ar lizherenn-benn ar ger da heul (B2, K2 pe HK2), setu em eus soñjet keñveriañ an doareioù-skrivañ kavet war ar marc'had hag ijinañ un astenn zokén dezhe ewid doberoù ar studi.

## 5.1. PALIOÙ AN ENKLASK

Dre forzh en em gavoud dirag ar memez diaezamantoù war an dachenn, e taas soñj din a voned da studial dre ar munud petra a oa kuzhet dindan levezon ken braz ar galleg war sanadur ar gelennerion ha da heul, eveljust, war heni ar skolidi. Levezon ar skrid a zo da lakaad war ar renk aze, dreist-oll amañ ewid daou dra : diskodañ hirder ar vogalenn ha aesaad sevenidigezh ar liammadurioù herwez ar patrom brezhoneg. Setu ar pezh a skrive Andreo AR MERSER e 1980 dija:

"Lorsque le breton était la langue de la société, l'orthographe n'avait pas d'influence sur la prononciation, d'autant plus que l'immense majorité des bretonnants ne savait pas lire. Il n'en est plus de même. Actuellement un nombre de plus en plus grand de gens passent de la lecture à la prononciation, alors que c'est la démarche inverse qui est normale."<sup>127</sup>

Ne lâr ket netra arall Mona BOUZEC-CASSAGNOU ha Dominik BOSSÉ dre venegañ H. POISSON (sd. p. 462). Hiziw, lod ag an dud-se o doa en em lakaet da zeskiñ ar brezhoneg dre ar skridoù, zo daet da vout ar gelennerion a-vremañ. Ra vo sklaer an traoù : n'eo ket ma fal amañ teurel fae war ar re o deus gwraet o seizh gwellañ ewid deskiñ ar brezhoneg war o amzer vak ha liez henn kelenn goude-se, er c'hentelioù-noz pe dre vicher. A-drugarez dezhe ha da dud arall o deus o harpet eh eus 13000 skoliad er skolioù diwezech hiziw, dre Soubidigezh pe dre Baridigezh-amzer. Mez tu zo d'en em c'houlenn memestra penaoz gwellaad an traoù. Ewid gelliñ chañch un dra bennag e ranker analizañ an dachenn da gentañ ha gweled e-menn ema ar skoilhoù.

Klask a ran, gant ma labour-tezenn, studial sistem ar liammadurioù e brezhoneg, ha dre an diskweler-se gweled penaoz e vezont sevenet gant ar skolidi hiziw. Ha daou dra (na vint ket analizet amañ) a zo sklaer : 1) levezon sistem ar galleg a zo re anad war heni ar brezhoneg ; 2) levezon ar skritur war ar sanadur anad iwe, ar pezh a ya eneb d'ar pezh a skrive Per DENEZ : "Bremañ c'hoazh, pa'z eo deut ar gerioù gallek e brezhoneg, eo bet ret dezho plegañ da zegemer stumm ar gerioù brezhoneg" (1974 :12). Gwir e oa an dra-

---

<sup>127</sup> *Op. cit.* p. 37.



se pa oa ar brezhoneg yezh ar gevredigezh, ha prouennoù helaezh a-gement-se zo (fr. *pot* > bzg **pod** ; *plat* > **plad** ; *couple* > **koubl, koublad...**)<sup>128</sup>. Gouied a raomp iwe e veze, hag e vez c'hoazh meur a wezh, sanet ar galleg gant sistem ar brezhoneg, da skwer amañ, ar pezh a denn douzh neutralizadur ar gensonenn en dibenn absolut : *du vin \*rouche, un \*tupe, ça \*m'énerfe, c'est pas \*grafe...* Mez hiziw an deiz ? Ar c'hontrel bew eo a remerker...

## 5.2. AOZAÑ AN ENKLASK

E-keñver ar liammadurioù e c'hellan lâred e tiskouez ar c'hlaskerezh, savet e 2007/2008, levezon ar skritur war ar sanadur, ha neuze, e-keñver ar poent-se, ne oa ket **an daou s**, hag ar pezh a ya da heul e sistem an Etrerannyezhel<sup>129</sup>, un dra ken mad-se. Mar faota dimp chom heb lakaad an deskerion da fallsanañ, dre skriv ar gensonenn vlod e fin ar gerioù, seul gwezh ma klot gant lezenn an diveradur (**tad** gant **-d** abalamour da **tadoù** ; **dous** abalamour da **dousig** ha **rouz** abalamour da **rouzig**), neuze e vo red dimp en em soñjal a-newez.

Ma aters a oa : penaoz ober ewid gweled splann en afer-se ? Remerket em boa e veze graet liammadurioù mad ataw e troioù evel **an noz hag an deiz, ag An Orient, e Gwened ema é chom...** mez faos peurvuiñ e troioù evel **evit an dud, perak ober, penaos eh a...** Ha ne vehe ket ar skritur éc'h ober e reuz aze ? Ha daoust hag-eñv e vehe tu da aesaad an traoù heb trubuilhañ ar sistem-skriv evel ma en deus graet an Etrerannyezhel gant degemer **an daou s** ?

Da gentañ em boa soñjet keñveriañ an tri sistem anavezet (Peurunvan-41, Skolveureg hag Etrerannyezhel) ewid gouied penaoz e sikoure peb sistem da

<sup>128</sup> Heb komz a **boudrailh, ur boudrailh, boudrailhoù** (fr. *boucle d'oreille*), Mari-Jozeb TREHIN (1888-1981), Langidig.

<sup>129</sup> Gant implij an daou s (**plass/plassenn**) e ranker skriv **ros/roseenn, bras/brasig, ruz/ruzig, ruzoc'h...**

seveniñ ar liammadurioù hervez kael ar brezhoneg ha n'eo ket hervez heni ar galleg. A-benn ar fin em eus graet an dibab-mañ :

- **Peurunvan-41** (anwet **Peurunvan-41** en taolenoù).
- **Etrerannyezhel "klasel"**, heni 1975, da lâred eo gant an **ss** (graet anezhañ **Etrerannyezhel** en taolenoù).
- **Etrerannyezhel +**, da lâred eo heb **an daou s** (an doare-skriv a implijan en dezenn-mañ, anwet **Kendod** en taolenoù). Anad eo e tegas dilezel **an daou s** kemmoù er feson da skriv ar fonemoù arall, mar faot dimp boud lojik : astennet em eus d'an oll c'herioù lezenn an diveradur, evel ma ra ar Skolveureg (a gav neuze e lod amañ, war ar poent-se). Setu amañ skwerioù ewid taolenniñ ar c'hemmoù-se :

Etrerannyezhel		Kendod
<b>pl<u>as</u>enn</b>	⇒	<b>pl<u>a</u>senn</b>
<b>ro<u>s</u>enn</b>	⇒	<b>ro<u>z</u>enn</b>
<b>kl<u>as</u>s</b>	⇒	<b>kl<u>a</u>s</b>
<b>do<u>us</u>s</b>	⇒	<b>do<u>u</u>s</b>
<b>br<u>a</u>s</b>	⇒	<b>br<u>z</u>s</b>
<b>gl<u>a</u>s</b>	⇒	<b>gl<u>z</u>s</b>
<b>ru<u>z</u>s</b>	⇒	<sup>o</sup> ru <u>z</u> <sup>130</sup>
<b>dime<u>z</u>iñ</b>	⇒	<sup>o</sup> dime <u>z</u> iñ
<b>fa<u>l</u>z</b>	⇒	<b>fa<u>l</u>z</b>
<b>aze<u>z</u>añ</b>	⇒	<sup>o</sup> aze <u>z</u> añ

**Taolenn 42. Diforc'h etre Etrerannyezhel ha Kendod.**

Tu zo da astenn reolenn ar gensonenn-dibenn d'ar ger **ket**. Meur a wezh e vez skrivet **ked**<sup>131</sup>, ar pezh a glot ged orin ar ger<sup>132</sup>. Klotañ a ra iwe ar stumm **ked**

<sup>130</sup> Er geriadurioù e vehe tu da skriv ar skwerioù-mañ, notet gant ur ( ° ) abalamour ma kaver enne ur **z** leoneg, evel-mañ : **ru(z)**, **dime(z)iñ**, **aze(z)añ**, a sinifihe e ranker skriv ar **z** a zo etre krommelloù heb ma vehe red her sanañ.

<sup>131</sup> Da skwer ged An Tad MEDAR (*An tri Aotrou*, 1981).

gant sanadur ar ger dindan an taol-mouezh, ar pezh a zegouezh pa vez implijet e-hunan, da skwer evel respont : **Braw eo an amzer ? – Ked.** Un e hir a vez klewet neuze [ˈke:t]<sup>133</sup>. Ewid derc’hel kont ag an elfennoù-se em eus astennet ar studi d’ar stumm **ked** enta hag ijinet ewid-se ur **Kendod +** ( a zo **Kendod + ked**).

Ewid moned pelloc’h c’hoazh, é voud ma kennig tud zo<sup>134</sup> skriv an anw-gwan-verb gant **-ed** e-lec’h **-et** (ewid heuliañ reolenn an diveradur ataw) em eus ledannaet ar studiadenn d’an degouezh-se iwe, da weled da venn e yae an traoù (taolenn 5 : **Kendod ++**).

Boud e oa ma soñj kaoud un destenn bennag hag he skriv herwez ar pemp kael-se, ha niveriñ e peb unan anezhe an degouezhioù e-lec’h ma en em gavehe ur gensonenn zous dirag bogalenn ar ger da heul (**a, e, i, o, u**) pe dirag **l, m, n, r**, (a c’hoari e brezhoneg evel bogalennoù), hag iwe dirag an hantergensonennoù **w** hag **y**.

Kemeret em eus ewid diazez-studi pewar levr bet skrivet oll e Peurunvan-41 :

- *Rouzig ar gwiñver*, Añjela DUVAL, An Here, 1989, 58 p.
- *Marc’heger ar Gergoad*, Yeun AR GOW, Hor Yezh, 1994, 94 p.
- *Ar penn-bazh derv*, Erwan AR MOAL, (1902, 1925), An Here, 1991, 69 p.
- *Mab-kaer ar roue*, Ivon KROG, An Here, 1992, 77 p.

Perag ar pewar levr-se ? Da gentañ em boa soñjet labourad war unan hebkén, ha kemeret ogozig an heni kentañ bet kavet edan ma dorn, pas re hir da adskriv memestra, ha kentoc’h ur levr ewid ar vugale peogwir e soñjen e krog ar fall-blegoù e penn kentañ an traoù (*Rouzig an gwiñver* ar levr-se). Mez goude e

---

<sup>132</sup> Dizemglew war an orin : Herwez FAVEREAU (*Geriadur*, 1992) : hbr. **cet & cit**, kmg. **cyd** *although*. Herwez DESHAYES (*Dict.Etymologique du Breton*, 2003) : **quet** (1499), du vxbr. **ced**, *don*, correspond au gallois **ced**.

<sup>133</sup> Sd. *Geriadur Brezhoneg*, An Here, 1995.

<sup>134</sup> Steve HEWITT da skwer (in *La Bretagne Linguistique*, UBO, Vol. 3, 1986-1987 : 41-54). Herwez reolenn an diveradur e vehe daw skriv un **d**-dibenn d’an anw-gwan-verb. Da skwer : **karoud** > **kared** (abalamour da **karedig**) ; **An Doujedig** hag **An Doujedig** (skwer roet din gant Albert BOCHÉ). Ar pezh a oa bet lakaet en arver gant AN TAD MEDAR dija en e levrad danevelloù (*op. cit.*, 1981).

taas soñj din e vehe gwell astenn ar studi da levroù arall, skrivet ged oberourion arall, ewid roiñ muioc’h a bouez d’ar studiadenn. Ar pezh a zo bet gwraet. Skannet e oa bet ar pewar levr enta, ha kopiet pemp gwezh ged ar c’hemmoù rekiz en doare d’o skriv.

Tu a vo da rebech din an dibab-se, ha da grediñ e vehe bet disoc’hoù dishañval gant levroù arall. Marse a-walc’h, mez ne gredan ket e vehe trawalc’h da chañch penn-da-benn ar c’henstad graet amañ. Heb mar ebed e tegas sistem-mañ-sistem un harp kreñv pe greñvoc’h d’an deskerion ewid sanañ reizh, e mod ar brezhoneg a faota din lâred<sup>135</sup>.

### 5.3. AR REZULTADOÙ


Setu amañ an taolennoù a ro ur skeudenn a rentusted peb “sistem” war ar poent-mañ : **ha klotañ a ra ar gensonenn dibenn-ger gant ar liammadur** (sandhi diavaez) pe ne ra ket ? Tu a vo da weloud mard a peb sistem war-du an aesaad pe ged. Kontet em eus niver ar c’hensonennoù-dibenn dous (DD) ha keñveriet douzh niver ar re galed (DK) : seul niverusoc’h ar c’hensonennoù-dibenn dous, seul aesoc’h d’an dud seveniñ ar liammadur herwez sistem ar brezhoneg (hag e-kontrel, seul stankoc’h ar c’hensonennoù-dibenn kaled, seul ziaesoc’h ar seveniñ reizh). Pemp taolenn em eus savet amañ, a ziskouez klotausted peb doare-skriv (implijet pe ijinet) gant ar sanadur gortozet :

- 1) **PEURUNVAN-41** : doare-skriv 1941, evel kavet er pewar levr analizet.
- 2) **ETREERANNYEZHHEL-75** : doare-skriv 1975 (gant **ss**), evel e geriadur FAVEREAU 1992 (graet anezhañ iwe amañ Etrerannyezhel “*klasse*”).
- 3) **KENDOD** : evel en Etrerannyezhel (poent 2 uhelloc’h), mez heb an **ss** ha gant reolenn an diveradur en arver ewid an oll c’herioù (= Skolveureg ewid ar pezh a sell douzh an dibennoù).

---


<sup>135</sup> Anad eo e c’hell ar sanadurioù daet da heul levezon ar galleg boud gwelet evel reizh iwe, hag ar pezh a zo sur, doned a raint da vout ar reolenn mard a ataw an traoù war an hent e tiskouezont o-boud kemeret, herwez enklask-diazez an dezenn-mañ.

- 4) **KENDOD +** : hañval douzh KENDOD, mui ar ger **ked** skrivet gant un **-d**.
- 5) **KENDOD ++** : hañval douzh KENDOD +, mui **-ed** e dibenn an anw-gwan-verb (e-lec'h **-et**). Da skwer : **kousked** eo ar c'hrouadur.




**Grafik. 47. Peurunvan-41.**

**Kenfeur kensonennoù dibenn-ger dous (DD) ha kaled (DK).**




**Grafik. 48. Etrerannyezhel-75 (gant daou s).**


**Kenfeur kensonennoù dibenn-ger dous (DD) ha kaled (DK).**



**Grafik. 49. Kendod (Etrerannyezhel, heb an daou s).**  
**Kenfeur kensonennoù dibenn-ger dous (DD) ha kaled (DK).**



**Grafik. 50. Kendod + ked.**  
**Kenfeur kensonennoù dibenn-ger dous (DD) ha kaled (DK).**



**Grafik. 51. Kendod ++**

(= kendod+, + *ed* da zibenn anw-gwan-verb).

**Kenfeur kensonennoù dibenn-ger dous (DD) ha kaled (DK).**

**Taolenn 1 : PEURUNVAN-41** : Gant ar Peurunvan-41 e kaver nebeud a gensonennoù dous (mouezhiet) e dibenn ar gerioù (38% ag an degouezhioù hebkén). Kensonennoù kaled a gaver peurliesañ : **Evit an dud / labourat a ra / kalet eo / hep ober / rok e komze / e pep lec’h...** Rekiz eo d’ar lenner anavoud mat ar brezhoneg hag e sistem liammañ ewid boud gouest da vlotaad an **t**, ar **p**, ar **k** etc., dirag un item blotauz (**bogalenn**, pe **l**, **m**, **n**, **r**, pe **w**, pe **y**). Ar pezh nad eo ket anad da C’hallegerion, akustumet d’ober liammadurioù kaled kentoc’h er yezh-se (*un peti-tenfant, un gran-tenfant, le Secon-Tempire, Bour-ken-Bresse...*). Gwelet hon eus n’eus rezon yezhoniel ebed da skriv ur gensonenn-dibenn divouezh d’an anvioù-gwan, araogennoù, stagelloù hag anvioù-verb (ar pezh a oa bet “lañset“ gant ar Wenedourion GUILLEVIC ha LE GOFF e 1901 en o yezhadur<sup>136</sup>).

<sup>136</sup> Roiñ a ran en-dro an elfennoù-se : « Les substantifs et les infinitifs sans suffixe verbal, se terminent par la lettre qui apparaît devant les suffixes de flexion : **dornadeu, dornad, poignée ; teilegi, teileg, fumier ; henteu, hent, chemin (...)** **predeget, predeg, prêcher (...)**. Pour les autres espèces de mots, on est convenu de préférer dans l’écriture une finale forte à une finale douce : **mat, bon ; genit, avec toi ; benak, quelque ; ridek, courir.** » A. GUILLEVIC, P. LE GOFF, *Grammaire bretonne du dialecte de Vannes*, [1901], 1912. Daet e oa an oberourion d’ober an diforc’h-se, war a seblant, abalamour ma n’o doa ket muzuliet-mat levezon an 8 dibenn kaletauz (ged an **h**- orin a oa enne) war ar gensonenn dibenn-ger (a-hend-arall e vez neutr an oll dibennoù : **-ad, -enn, -ig, -où...**) : **-a** ⇐ **-ha** : **pesked/peskedenn/pesketa ; -aad** (⇐ **-haad : braz/brazez/brasaad ; -añ** ⇐ **-hañ : blod/blodenn/blotañ ; -oc’h** (heb **h** orin, mez dre hañvaledigezh ged **-añ**) ⇐ **-(h)oc’h : glaz/glazig/glasoc’h ; -ed/-ad** (estlamm) ⇐ **-hed/-had : braz/na brased un ti** ! Selled iwe douzh an dibennoù **-hi, -(h)eñv, -(h)e/-(h)o** : ewid : **ewidin/ewidoc’h** mez **ewiti, ewitañ, ewite/ewito**). (*Grammaire*, FAVEREAU, 1997, § 201, 212, 733).

**Taolenn 2 : ETRERANNYEZHHEL** : Degas a ra an Etrerannyezhel *klassel* (dle. 1975, gant an **ss**) ur welladenn a 10% war ar Peurunvan-41 gant an dibennoù dous : **ewid**, **labourad**, **kaled**, **rog**, **peb**... Mez abalamour d'an **ss** (**douss**, **luss**, **plass**) ha dreist-oll a-gaoz d'ar pezh a za da heul, goude boud graet un diforc'h skritur etre ar **z** leoneg (**menez**) hag ar **z** arall skrivet **s** (**nos**, **bras**), e chom bihan ar gounid e-keñver an harp a c'hell an doare-skriv-se roñ ewid ar liammadurioù. Rag e-lec'h ma skriv ar Peurunvan-41 un **-s** e gerioù evel **aes**, **bras**, **glas**, **penaos**... e ra memez mod an Etrerannyezhel er gerioù-se, mez ouzhpenn-se e skriv bremañ an anwioù-kadarn gant **-s** e-lec'h ma skriv ar Peurunvan-41 **-z** : **bis**, **nos**, **mestres**, **plous**... Da lâred eo, n'eo ket an Etrerannyezhel gwall aesoc'h eged ar Peurunvan-41 war an dachenn-se : ar pezh a zo bet gounidet douzh un tu zo bet kollet douzh an tu arall.

**Taolenn 3 : KENDOD** : Gant an daolenn-mañ, hag a skeudennaoua an Etrerannyezhel bet lamet an **ss** anezhañ ha skrivet da heul an oll c'herioù herwez o diveradur (anwioù-gwan, araogennoù, stagelloù iwe...), e ta brasoc'h niver an degouezhioù aesauz (58%) eged ar re skoilheg. Ur gounid a 6% war an daolenn 2. E-keñver ar c'hensonennoù dibenn-ger e skeudennaoua an daolenn-mañ stad ar Skolveureg dres.

**Taolenn 4 : KENDOD +** : Amañ ema bet analizet ar skrid gant ar ger **ket** skrivet **ked**. Gant niveruz e vez kavet ar ger-se er skridoù e c'hounider c'hoazh 4%. Bremañ e kaver 62% a zegouezioù aesauz.

**Taolenn 5 : KENDOD ++** : Skrivet e vez **-et** e dibenn an anwioù-gwan-verb gant ar Peurunvan-41, an Etrerannyezhel ha zokén gant ar Solveureg, ewid ober un diforc'h etre an anw-verb (*vb*) hag an anw-gwan-verb (*agv*) : **kousked vb # kousket agv**. An diveradur nawazh a ziskouez dimp e vehe tu da skriv **-ed**. Ne vez ket stank ar gerioù diveret ag un anw-gwan-verb, mez tu zo da gavoud un nebeud memestra, trawalc'h ewid testeniekaad an **-d**. Setu amañ skwerioù, ouzhpenn **karedig** hag **An Doujedig** em boa meneget tuchantig :

- **keñvered** g **-idi associé** ; *coéquipier* : FAV.
- **nammed** g **-idi handicapé** : FAV.
- **ranned** g **-où dividende** (*nombre divisé*) : RH, FAV.
- **sklaeried** g **-idi initié**.

Gant ar stank m'ema an anwioù-gwan-verb er gomz, e kresk bremañ d'an tri-c'hard an degouezhioù aesauz er yezh skrivet. Etre ar Peurunvan-41 hag ar feson da skriv analizet er bempved taolenn e welomp ar gounidoù a c'heller ober ewid sikour an deskerion.



## 5.4. UR GOUNID OUZHPENN

E-tal an aezamant e seveniñ ar liammadurioù herwez ar sistem brezhoneg hon eus gwelet uhelloc'h, e rankomp menegiñ amañ un aezamant arall, nad eo ket dister kennebeud, a c'hell doned da heul dilezel an diforc'h anw-gwan/anw-kadarn ewid ar pezh a sell douzh ar gensonenn dibenn-ger.

Rag pa ne vez ket skrivet ar gensonenn-se herwez an diveradur - evel ma ra ar Peurunvan-41 c'hoazh - e tegas an dra-se trubuilhoù lenn ouzhpenn, d'ar bihannañ ewid ar re na vezont ket kustum da glewed brezhoneg komzet... brezhoneg komzet gant brezhonegerion a-vihanig, é voned war nebeutaad, siwazh, evel ma ouier.

Kavet e vez ar gudenn-se diw wezh : 1) er gerioù unsilabenneg ; 2) er gerioù liessilabenneg pa zegouezh an taol-mouezh enne war ar silabenn ziwezhañ.

### 5.4.1. GOUNID ER GERIOÙ UNSILABENNEG

Gouied a raer ne vez ket taol-mouezhiet an oll c'herioù e brezhoneg : stagelloù, araogennoù hag all, da skwer **nag, ne, pa, rag**.... Ha daw e vez diwall c'hoazh. Da skwer, na boud ne vez ket taol-mouezhiet ar ger **ket** ogozig jamez er gomz, e vez taol-mouezhiet memestra pa dalv ur respont : **Braw eo an amzer ? – Ked** ['ke:t], -e- hir ennoñ.

Ouzhpenn-se, er brozodiezh, ne vez ket taol-mouezhiet ar gerioù evel ma c'hellont boud pa vezont sanet a-hunan.

- ur lo'**gō**: denn / ur logo·denn '**zū**.

- un '**tī** : / un ti '**koad** / un ti-koad '**bra:z**.

Er gerioù unsilabenneg taol-mouezhiet a achu gant **p, t, k, s, ch, f** pe **b, d, g, z, j, v** e vez tu da anavezoud hirder ar vogalenn, merk aparchantuz e brezhoneg pandeogwir e vez tu da enebiñ koubladoù gant ar merk a hirder-se, evel er gerioù lec'h ma kaver an enebadur **l/l** pe **n/nn** (n'eo ket ken splann ewid

**r/rr)** : **o fal/fall** [ˈfa :l / ˈfal] ; **e gal/gall** [ˈga :l / ˈgall]; **son/sonn** [ˈsɔ̃ :n / ˈsɔ̃n] ; **ran /rann** [ˈrã :n / rãn]. Gant an dibennoù sinalet uhelloc’h, menegomp : **klod** [ˈklo :t] /**klot** [ˈklot] ; **e grib** [ˈgri :p] /**grip** [ˈgrip]; **blaz** [ˈbla :s] /**e blas** [ˈblas]...

E Peurunvan-41, e-lec’h ma vez kempouell an traoù ewid an anwioù-kadarn, peogwir e klot an dibenn gant an diveradur ha gant hirder ar vogalenn enne, ne vezont ket mui kempouell gant an anwioù-gwan ha torriñ a ra an dra-se simpted an diskodiñ :

<b>Peurunvan-41</b>	Bogalenn sanet <b>hir</b>	Bogalenn sanet <b>berr</b>
Anw-kadarn	<b>Ar Braz</b> [ˈbrã :s] ( <i>af</i> ), <b>ar braz</b> ( <i>majeure partie</i> ) <b>klod</b> [ˈklō:t] <b>klog</b> [ˈklō:k] <b>ur sod</b> [ˈsō:t]	<b>ar bras*</b> [ˈbras] ( <i>pâte à crêpes</i> )  <b>klot</b> [ˈklot]
Anw-gwan	<b>bras</b> [ˈbrã :s] <b>blot</b> [ˈblō:t]  <b>sot</b> [ˈsō:t]	   <b>klok</b> [ˈklok]

**Taolenn 43. Digempouelleded ar Peurunvan-41 a-fed diskodañ an hirder er gerioù unsilabenneg.**

[\* **Bras** [ˈbras], gant un **-a-** berr : e RH ne gaver namaed **bres** (eilstummoù int o daou)].

Mard eo lojik an enebadur hir/berr er c’houbladoù evel **klod/klot**, **ar Braz/bras\***, **klog/klok**, n’eo ket mui lojik tamm ebed pa geñverier **\*blot** ha **klot**, hir ar vogalenn e **\*blot** ha berr e **klot**, hag un **-t** dibenn nawazh enne o daou. Pa vehe skrivet “*blot*” hervez an diveradur e vehe skrivet **blod**, abalamour da **blodenn**, ar pezh a lakahe ar lenner da renkañ ar ger-se e rummad ar gerioù hir ar vogalenn enne evel **bod**, **lod**, **pod**, **rod**... Setu amañ an daolenn gempouell hervez hon drived sistem (**Kendod**) :

<b>Kendod</b> Diforc'h ebed kén etre ar gerioù : an diveradur hebkén a ro ar mod da skriv ar gensonenn dibenn-ger.	Bogalennoù hir	Bogalennoù berr
	<b>Ar Braz</b> ['brā :s] <i>ak</i> , <b>braz</b> ['brā :s] <i>ag</i> <b>blod</b> ['blō:t] <i>ag</i> <b>klod</b> ['klō:t], <b>ar c'hlod</b> <i>ak</i> <b>klog</b> ['klō:k], <b>ar glog</b> <i>ak</i> <b>ur sod</b> ['sō:t] <i>ak</i> , <b>sod</b> ['sō:t] <i>ag</i>	<b>ar bras</b> ['bras]* <i>ak</i> <b>ar blotoù</b> ['blōtow] <i>ak</i> <b>klot</b> ['klōt], <b>ur c'hlot</b> <i>ak</i> <b>klok</b> ['klōk] <i>ag</i>

**Taolenn 44. kempouellded ar C'hendod  
a-fed diskodañ an hirder er gerioù unsilabenneg.**

Simploc'h an traoù abalamour ma ne vez ket mui ouzhpennet un enebadur gramadeg (yezhadurel) **anw-kadarn** vs **anw-gwan** h.a. douzh an heni a sinal ur merk fonologel (**hir/berr**). Un enebadur hebkén a chom, e-lec'h ma veze daou : e gwirionez ne zegas netra d'ar yezh an diforc'h **anw-kadarn** vs **anw-gwan**..., namaed trubuilhoù sanañ. Gwir eo e arguzer meur a wezh e c'heller evel-se, e Peurunvan-41, anavoud *natur* ar gerioù er frazenn, da skwer gouied ema ar ger **braz** un anw-kadarn e "**ar braz ag an dud**" tra m'ema **bras** un anw-gwan e "**bras eo Yann**". Mez ne oa ket waet ar Peurunvan-41 beteg penn war an dachenn-se, ha koll a ra e gorvo pelloc'h peogwir ne ra ket an diforc'h etre an anw-verb (**kerzhet, kousket, lâret**...) hag an anw-gwan-verb (**kerzhet, kousket, lâret**<sup>137</sup>...). Ar pezh a vez gounidet diouzh un tu a vez kollet diouzh an tu arall e peurunvan-41, pandeogwir e c'heller skriv **kerzhed** anw-verb ha **kerzhet** anw-gwan-verb e sistemoù arall (**Kendod** da skwer).

#### 5.4.2. GOUNID ER GERIOÙ, TM WAR AR SILABENN ZIWEZHAÑ

Ar memez tra a remerker er gerioù liessilabenneg pa gouezh an taol-mouezh war ar silabenn ziwezhañ. Neuze en em gavomp c'hoazh gant ar liamm etre

<sup>137</sup> E gwenedeg d'an nebeutañ e vez enebet dre gomz an anw-verb douzh an anw-gwan-verb : **kousked** [kuskɛt] ha **kousket** [kuskɛt].

diveradur, kensonenn-dibenn ha sanadur. Ar ger **perak** a vez taol-mouezhiet war **-rak**, ha hir an **a** er silabenn-se, ar pezh na vez ket diskouezhet gant ar **-k** dibenn. Nawazh e tiskouez an diveradur dimp eh eus ur **-g-dibenn** er ger-se, abalamour d'an anw-verb **peragiñ** ha d'an anw-kadarn **perager** (RH). Memestra gant **fallakr**, taol-mouezhiet war **-lakr**, hir an **a** er silabenn, ar pezh a zo kempouell gant an diverad **fallagrïezh**.

Neuze, skriv ar gensonenn-dibenn herwez an diveradur a zegas un aezamant da seveniñ “mod ar brezhoneg” ar liammadur ewid ur lod kàer a c’herioù, hag ouzhpenn-se, ewid ar gerioù unsilabenneg hag ar gerioù liësilabenneg e-lec’h ma kouezh an taol-mouezh war ar silabenn ziwezhañ, eh aesa ar lenn pa ro da ouied hag-eñv e vez hir pe verr ar vogalenn dindan an taol-mouezh. Ur gounid priziuz eo ewid ar re a gemer poan da gelenn ar yezh vrezhoneg d’an oll dud, yaouankizoù pe vrazarded, o deus c’hoant da dapoud en-dro an hervad darbed dezhe koll.

## 5.5. KLOZADUR AR PENNAD 5

Mar lakaomp ema aesoc’h seveniñ ar liammadur bogalennel pa vez kavet ur gensonenn zous (DD) e dibenn ar gerioù, kentoc’h eged ur gensonenn galed (DK), e c’hellomp lâred ema gant ar Peurunvan-41 e vez kavet ar muiañ a skoilhòu a harz douzh ur sanadur “brezhoneg“. Diouzh an tu arall e ta ar maout gant an daolenn 5, gant ar pezh am eus graet anezhañ KENDOD ++, a ziskouez 73% a gensonennoù-dibenn dous (gant **-ed** d’an anw-gwan-verb). Heb moned ken pell-se marse, mar dilezer an *agv* mez mar lakaer **ked** e-lec’h **ket**, ouzhpenn heuliañ reolenn an diveradur ewid peb ger, e vehe c’hoazh 62% a zibennoù dous.

Ar pezh a zo kenteliuz : ne ziskouez ket an Etrerannyezhel-75 boud ar gwellañ ewid ar pezh hon eus studïet amañ, abalamour d’an **daou s** just a-walc’h, a zegas da heul un **-s** e dibenn-gerioù a vehe skrivet gant ur **z** a-hend-arall.

Brasoc'h eo ar gounid en daolenn 3 (Kendod), e-lec'h mand eo bet lamet an **daou s**, ha da heul skrivet ar **-z** dleet e gerioù evel **braz, glaz, roz, souezhuz**, etc.

Setu aze un abeg, ouzhpenn ar re degaset gant Per DENEZ<sup>138</sup>, ewid chomel heb degemer an **daou s**. Ne oa ket heb rezon enta o doa en em glewet an oll re o doa kemeret perzh e bodadegoù 1971-1975 war ar poent-mañ just a-walc'h, ar c'hentañ ag ar roll : **chom heb ober un diforc'h etre anw-gwan hag anw-kadarn ewid ar pezh a sell douzh ar gensonenn dibenn-ger**.

Herwez ar c'hlaskerezh am eus graet er skolioù diwyezheg, deuz ar CE2 betek ar Lise, e c'heller lâred e vehe bet gwell marse lakaad ar reolenn-se da arverañ e peb sistem, e Peurunvan zokén, peogwir e oa bet an oll berzhidi a-du gant-se. Re wir eo, re anad hiziw levezon ar galleg war ar liammadurioù e brezhoneg, ha n'eo ar levezon hebkén a gont amañ (mar talomp douti), mez an dizalbad he deus graet dija e brezhoneg an dud a-vremañ. N'eo ket sur e oa an dra-se e oamp é klask.

Gouied a raomp e vo diaez talañ douzh an efed-Buben, a c'hoari war ar yezhoù braz evel ar galleg ha muioc'h c'hoazh war ar yezhoù bihan evel ar brezhoneg. Ataw ne vo sistem-skriv parfed ebed, ha herwez Lukian KERGOAT e 1975 :

“Un doare-skrivañ n'hell ket bezañ dres ur skritur fonetek. Bez e c'hell skoazellañ nemedken. Gant ma c'hello ar c'hemmoù bet degemeret aesaat da zarn deskiñ hor yezh hag he distagañ fraez.”<sup>139</sup>

Ur sav-boent a zifenne diouzh e du A. AR MERSER, da heul ar re o doa en em vodet e 1953 en-dro da F. FALC'HUN ewid kempenn an doare-skriv diwar daou bennsoñj :

---

<sup>138</sup> *Hag adarre...an doare-skriva*, 1974.

<sup>139</sup> L. KERGOAT, *Reolennoù an doare skrivañ*, Skol an Emsav, Dielloù HONORE, teuliad an 21<sup>ved</sup> Bodadeg, 12.04.1975.

1- « éviter, dans la majorité des cas, d’inciter à mal prononcer (d’où l’emploi en finale des consonnes sonores (G, D, B, H, etc.)

2 - se rapprocher du vannetais écrit. »<sup>140</sup>

Gouied a raomp, evel Jean PETIT, eh eus gant ar yezhoù naturel “des propriétés communes qui sont automatiquement transférées da la langue maternelle sur la langue seconde par les apprentis de tout âge.” (*op. cit.*, p. 4). Normal eo enta levezon ar galleg war ar brezhoneg. Mez un taol dichañs eo d’ar brezhoneg hiziw boud an eil yezh ewid an darn vrasañ ag an newezvrezhonegerion, pa ouier n’eus ket e galleg an oll dresoù a gaver e brezhoneg (fonemoù diouveruz<sup>141</sup>, prozodiezh dishañval, liammañ dishañval...). Diaesoc’h c’hoazh d’an newezvrezhonegerion, ar galleg gante da yezh-vamm, chom heb treuskas perzhioù ar galleg en o brezhoneg. Muzuliañ an diaezamant-se a rank ar skol ober ewid sevel ur c’henteliañ adaz, ewid roiñ harp dezhe en o strivoù.

---

<sup>140</sup> A. AR MERSER, *op. cit.*, p. 11.

<sup>141</sup> Roiñ a ra PR 40 fonem ewid treuzkrivañ ar gerioù renablet en API. Ewid ar brezhoneg e ro FAV 62 fonem.

# KENGLOZAD

«*Une thèse est un brouillon.  
Elle doit servir à connaître sa propre pensée.* »  
Edgar MORIN.

Kement-mañ en doa skrivet rener ma zezenn en e levr-skol *Etre dec'h hag àrc'hoazh*, bet embannet gant Skol Vreizh e 1987 :

« Meur a zoare zo d'ober gant al levr-mañ eta, ha meur a sort brezhoneg a vo kavet ennañ, **na boud eo dleet deomp kelenn ur yezh eeun awalc'h** d'hon skolidi » (F. Favereau, p. 6).

Ha setu-ni hiziw c'hoazh *etre dec'h hag àrc'hoazh*, gant hon yezh vrezhoneg liessort ha dishañval war veur a boent, ag un tu deuz ar vro d'an arall. **Meur a sort brezhoneg** enta, **meur a zoare d'ober** gantañ (ha gant ar levr, eveljust), **na boud eo dleet deomp kelenn ur yezh eeun awalc'h d'hon skolidi !**

E-korf frazenn Francis FAVEREAU en em gave dija problematik ar brezhoneg er skol hiziw. Penaoz ober ewid derc'hel douzh ar brezhoneg, **teskad displann**, mez bew, liessort pezh a garit, a rankomp kelenn memestra en un doare simpl a-walc'h d'ar skolidi, ha seul simploc'h ha ma vo yaouank ar skolidi-se ?

Penaoz ober ewid simplaad afer an taol-mouezh, teir anezhe d'an nebeutañ ? Peheni roiñ da skwer er skol pa dro ar gelennerion a zepartamant da

zeparlamant, a gorn-bro da gorn-bro ? Pa ya ar vrezhonegerion a-vihanig d'an Anaon stankoc'h-stank ?

Penaos ober ewid roiñ da santoud d'ar vugaligoù aparchantusted an hirder er gerioù brezhoneg, pa vez direizh ha liessort c'hoazh ar modoù d'ober war an dachenn ? Pa ne vez ket mui ag an tres-se, koulz lâred, e galleg ? Pesort skwer derc'hel er skol ?

Penaos ober ewid roiñ d'ar skolidi ar pleg da ziwall douzh ar pezh a vez skrivet, a-fed sanañ ar gensonenn en dibenn absolut pa c'halvont o c'hamaradez : **“Soazig !”** Ha penaos roiñ ur pleg arall dezhe, a zo douasaad ar c'hensonennoù dibenn dirag ur vogalenn pe ur ger é krogiñ gant ur gensonenn linkuz, peb tra aze dishañval e galleg ? **“Soazig eo !”**. Mez kaletaad en-dro dirag **h-**, mez pas an oll : **Soazig hag he c'hoar**.

Setu ar pezh 'm eus klasket sklaerraad amañ. Arabad klask glanded en afer-se, a c'hell boud dañjeruz<sup>142</sup>, akord war-se gant SAUSSURE ha pa lâre ne oa ket rekiz kavoud rikted war dachenn ar fonologiezh pa ne oa ket ewid doberoù ar c'houiañs<sup>143</sup>. Neuze em eus klasket roiñ, mar n'eo ket “ur patrom”, pe “ur vodell” (gerioù a zisplij da lod), d'an nebeutañ ur stern<sup>144</sup> e-lec'h e vo tu, d'am soñj, da beb unan da gavoud un tamm splannder, un tamm simpted war un dachenn ledan a-walc'h.

#### KELENN AR YEZH EVEL M'EMA ?

Hed-ha-hed ar skrid-mañ hon eus en em gavet dirag ar memez kudenn ataw : daoust hag un dra vad eo kelenn ar yezh evel m'ema ?

*Ya !* setu respont ar re a zo o fal **deskripañ** ar yezh en he realded liesstumm. Klask deskripañ ar yezh evel m'ema, netra interesusoc'h ewid ar c'hlasker, pa vo tu dezhañ degas war-wel ur ger dianav, un dro-lavar leun a liw ha saouruz,

---

<sup>142</sup> BH. LEVY, *La pureté dangereuse*, Paris, Grasset, 1994, 303 p.

<sup>143</sup> « En dehors de la science, l'exactitude phonologique n'est pas très désirable. » *CLG*, p. 57.

<sup>144</sup> Stern a zisplij da lod iwe. Rekiz soñjal e c'heller moned er-maez ag ar stern memestra...



pe ur soniad dibaot, an oll draoù dastumet da lakaad e arc'h ar brezhoneg, e-lec'h e vo tu da selloud douzh ar yezh evel m'ema, gant he finvidigezhioù diniver ha souezhuz.

*Ya !* rag tremenet eo amzer an normativelezh. Meur a feson zo da gomz ha red eo o diskoueziñ oll : choaz unan n'hell ket boud namaed un diviz subjektivel, ha boud objektivel eo pal ar c'houiañs.

*Dibosubl !* setu respont ar re a glask kelenn ar yezh. Mez kelenn ar yezh, setu aze un dra dishañval, ur vicher dishañval diouzh heni ar c'hlasker, na c'hoari ket-tre gant ar memez danvez. Ne gomzer ket mui a eostiñ ewid brasaad an teñzor, mez a dreuskas ar surrañ ma c'heller an teñzor-se er lec'h gwellañ dezhañ da vout : spered ha memoer an deskerion.

Ewid-se e ranker lakaad un tamm urzh, ha gouied ar pezh a dalv ar boan da vout gouarnet, ar pezh a c'heller pe a ranker leuskel a-gostez rag re zo re. Pas ewid buhez ar yezh, pinvidig-mor, mez ewid ar skolaer a rank gouied penaoz krogiañ ha war betra pouezañ. Ur savadur eo ar yezh, bew, diaez da zerc'hel stag. Nawazh, mar gell ar skol he c'helenn e sinifi e c'hell treuskas tresoù anezhi, ha tu zo da choaz pere, war veur a boent : daoust hag e vo kelennet **kinnig, kannig pe kennig ? klaoustre, kouchtele pe kaoustle ?**

Goulenn a ra Albert BOCHÉ un termenadur resiz ag ar KLT, ken liessort m'ema ar fesonoù da gomz war e dachenn. Mez un termenadur resiz ag ar W a vehe da c'houlenn iwe, rag diforc'hioù braz a c'heller kavoud etre ar Wi (gwenedeg izel), ar Wu (gwenedeg uhel) hag ar Wum (gwenedeg uhel an arvor). Daoust hag-eñv e vo red roiñ da batrom ar feson-mañ da gomz brezhoneg d'ar skolidi (Porze) : **“Ar rayedenn doa kë kad burk da zèbi pogor oan bë dèp toud gan ur voulac'h hag un drojénell.”**<sup>145</sup> N'eo ket teurel fae war parlant-mañ-parlant (rag skwerioù helaezh a c'heller kavoud e kornbroioù arall), mez diskoueziñ e vehe dibosubl hag « enebproduzuz » choaz ar c'hemplegter ha kelenn an oll fesonoù da gomz a vez kavet er vro.

---

<sup>145</sup> « Ar razhedenn 'doa ket kavet buzhug da zebriñ peogwir e oant bet debret toud gant ur voualc'h hag un durzhunell. » E parlant Plogoneg (Porze), herwez Alan NOAC'H.

Ur labour dibab zo d'ober enta war dachenn ar c'helenn. Mez rekiz eo henn ober en ur mod ledañ a-walc'h memestra, a glasko derc'hel douzh an tresoù pennañ. Ha pouezet em eus em zezenn war ar peder reolenn-se rag ma kredan e talvont ar boan da vout gouarnet e yezh ar skol, pa vez remerket kentoc'h ur skweraj diwar frammoù ha mod-sanañ ar galleg gant ar skolidi a-vremañ.

#### LEMMANÑ AR BENVEGOÙ

Rekiz eo d'ar skol ha d'an oll re o soursi treuskas ar yezh, en em soñjal war ar mod aesañ hag efedusañ d'henn ober, en ur zerc'hel douzh perzhioù pinvidikañ ar yezh, ha sevel benvegoù-kenteliañ adaz ewid kement-se. Beteg kemm ar skrid. Na gaoud aon a gemm ar skrid pa c'hell hennañ degas un harp a-bouez d'ar c'helenn. Rag boud ken reud evel ar galleg war an dachenn-se ne vehe namaed leuskel an nor digor-braz da levezon bonner ar yezh-se war ar brezhoneg. Mard eo komprenabl e tleer moned war an dachenn-se gant ewezh, red eo lâred ema an doare-skriv un dra a c'hell hag a rank boud kempennet da beb an amzer iwe : kemmanñ a ra ar yezh vew, ar yezh komzet a vloaz da vloaz, ha rekiz meur a wezh lakaad ar skrid da chom tost pe dostoc'h douti memestra. Graet eo bet en alamaneg (2005), e portugaleg ar Brezil (2009) hag e meur a yezh. Graet eo bet e galleg zokén<sup>146</sup> ! Ouzhpenn-se e c'heller selled douzh ar mod da skriv evel douzh ur benveg gouest da aesaad sanadur an deskerion, ha perag disprizañ an tu-se ?

Mall eo enta derc'hel kont ag ar fedoù ha boud pragmateg un tamm. Setu ster ar labour-mañ, a zo bet kaset da benn n'eo ket ewid diskar heni pe heni, mez ewid roiñ da soñjal ema mall d'ar Vretoned stagañ bremañ disparl ewid kas da benn ur gwellaad d'o benveg yezhel a zo ar brezhoneg, ha pleustriñ hardizh ewid kavoud ar gwellañ hentenn d'henn kelenn er skolioù, heb ma ve distreset dindan levezon guzh pe diguzh ar substrad galleg.

---

<sup>146</sup> Diaez e tiskouez chañch an traoù e galleg, mez chañchet e vez memestra, a-nebeudigoù : 2000 ger diwar 70 000, da lâred eo 2,85% e Kennigoù 1990 (*Les rectifications de l'orthographe*, Conseil supérieur de la langue française, J.O. N° 100, 6 Déc. 1990). Nawazh n'he doa ket doujet an *Académie* kemm ouzhpenn 25% ag ar gerioù e adkempenn 1740.

Difenn ar brezhoneg, kaoud ar youl d'henn sevel en-dro, ha d'henn kelenn a-vraz<sup>147</sup>, n'heller ket boud akord gant an daou bal-se heb en em c'houlenn pesort brezhoneg kas war-raog. Mar diwallomp douzh ar gerioù, mar diwallomp douzh ar frammoù, perag ne ziwallehemp ket douzh ar sanadur ?

Anad eo n'eus ket graet unvaniñ an doare-skrivañ kalz a araokadennoù a-c'houde 1975 : chomet eo an traoù a-sav. Nawazh en doa respontet **ya** A. MERSER e 1980 d'an aters "*Une entente est-elle encore possible ? Je le crois, à condition d'admettre un très grand nombre de tolérances.* » An oll pe dost a oui e oa ur fari kennig an diforc'h-skrid d'an dibenn hervez natur ar gerioù. D'an oll ahanimp da respont iwe, mar karomp, pe mar vennomp, war un diazez na c'hell ket boud bremañ namaed heni 1941 : evel ma lâr Envel KERVOAS, "l'éventuel problème de la graphie ne se pose pas pour le jeune lecteur bretonnant" (2009 : 288).

Komz a rae Yves LE BERRE ag ar labour-*diouveriñ*<sup>148</sup> pe ag ar labour-distagamant a vehe an interest gwelet hiziv-an-deiz ewid ar brezhoneg<sup>149</sup>. Daveañ a ra da FREUD en doa termenet peder fazenn er labour-se : 1) Pazenn ar realded a ziskouez n'eus ket mui ag an draezenn garet. 2) Ravolt douzh an dober a en em zistagañ a-zoc'h an draezenn-se. 3) Distagamant gwirion, a c'houlenn kalz a amzer hag a nerzh, tra ma vew ataw an draezenn e bred an den. 4) Diwez ar c'hañv, pa za dieub ha dijabl ar *Me* en-dro.

Mard eo bet an dezenn-mañ ar labour-distagamant-se, hag ema bet, en ur mod, dre an dijabliñ 'm eus graet ag ar pezh en doa maget ma interest ewid ar brezhoneg, ema iwe, ha dreist-oll, un digoriñ war un dachenn newez da c'hounid. Ouzhpenn boud ur studiadenenn war an teoriannoù, ur studiadenenn e-kreiz ar lec'h m'ema ar brezhoneg gant e nerzh newez - ar skol -, ema an dezenn ur galv ewid ma pleustro, war ar poent studiet enni, ar gelennerion hag ar re kar d'o yezh vrezhoneg ewid he c'has pelloc'h, gant he liw ha gant he

---

<sup>147</sup> N'eo ket bet biskoazh kelennet ar brezhoneg a-vraz er skolioù. Hiziv n'eus ket c'hoazh 15000 a skolidi er skolioù diwezh.

<sup>148</sup> Komz a ra Yves LE BERRE a « *travail de deuil* ». *Faire son deuil : ober e ziuver ag udb* (FAV).

<sup>149</sup> *L'écriture du breton dans l'histoire*, In La Bretagne Linguistique, Vol. 7, Brest, 1991, pp. 154-176.

mod da ziskriv ar bed. Ne dalv ar labour-mañ e gwirionez namaed ewid an dazont, rag kaoustle eh an e pado ar brezhoneg rag ur prantad hir-mat c'hoazh. Re a-gostez e oa chomet ar sanadur er strivoù graet beteg bremañ ewid kelenn ar yezh. N'eo ket re ziwezhad c'hoazh, a-du on aze gant ar pezh en deus skrivet Erwan LE PIPEC en e dezenn diwar-benn brezhoneg Malgenag : “Ar peb brasañ ag ar gomzerion, pa anavont mat ar yezh dre gomz, a vez gouest-mat da chañch o modoù da brezeg ha da zegemer modoù newez.”<sup>150</sup> Gant ar re vihan e anavezomp rol ar familh ha rol ar skol-vamm, mez n'eo ket kollet ar stourm gant ar vrazarded naket enta. Neuze, digor eo an nor d'ar peder reolenn, da skwer, ewid an oll.

Nawazh, gouied a ran reizhmad iwe n'eo ket an dezenn-mañ namaed ur labour gouestlet douzh ar furm namaeti, douzh ar benveg. Ewid ur benveg nawazh, ar labour a vo graet gant dorn an den eo ar pezh a gont. Ewid ar yezh : liwañ soñjoù an den hag e faltazioù, roiñ ur stumm d'e hunvreoù, lakaad e vouezh da voud klewet e laz-kanañ ar bed.

Ha n'eo ket aze ma lod hebkén.

